



**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodev evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**  
Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brie.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer an

**Alazennou da « Kroaz » ar Vretoned  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

- Loeiz Herrieu..... 10 lur
- E. Daniel, a Wengamp... 20 real
- Eur vignones..... 20 real
- An Dimezell M. ar Floch... 4 real
- An Dimezell al Léz..... 8 real
- Da « Kroaz ar Vretoned »  
evit he derou-mat..... 8 real

Trugarez a greiz kalon d'hon holl vignoned, en o fenn ar Barz mat Loeiz Herrieu, en deus dioueret dek lur da gas « Kroaz » d'ar zoudarded, hag hen e-unan en talben-brezel ! A-unan gant e brof ken madeleuz, en deus digaset d'in al lizer karantezus-man. Trugarez d'ezan !

Bloavez mat d'eoc'h digant Doue, mignon karet !... Sent Breiz da viro ho tiegez hag ar « Groazig » karet a zeu bep sizun da gennerzi ar zoudarded en o buhez leun a anken !

Emomp tost d'an tan adarre. Koulskoude, bennoz da Zoue ! laket omp en eun tachad didrouz ha peuc'hus...

A galon bepred evit Breiz.

L. H.

**Eul levrig nevez**

**evit ar zoudarded !**

Eman hon mignon ker, Fransez Gourvil, o paouez embann eun eil levrig kanaouennou evit ar zoudarded.

Moulet eo bet e Montroulez, e ti Goaziou, ar mouler Breizad; tevoc'h ha bravoc'h eo eget an hini kenta.

Kavet e vo ennan eun dibab, graet eus ar gwella, eus barzonegou ha kanaouennou barzed an XIXvet kantved : « Da Vreiziz-Veur » gant Ledan ; « Mari » gant Brizeux ; « ar Bleiz-mor » gant Kerambur ; « Kilhog ar barroz » ha « Kimiad ar zoudard » gant Prosper Proux ; « Kimiad ar Barz » gant ar Yann ; « Breiz-Izel » « Mervel 'zo red » ha « Kerez sant Per » gant Luzel ; « Avel miz du deus ar c'hoajo » gant Rannou ; « Koulm ar Barz » ha « Soudard Kastel-Paol » gant Milin ; « Noz an Nedeleg » hag « An amzer da zont » gant Kélien ; « An daou vaout » ha « Mathurin an Dall » gant an abad Kere.

Peadra da lenn ha da zidui hoc'h amzer, evel ma welit !

Ar re eus hon c'hevnoù a zo en arme n'o devo, da gaout al levri nevez, nemet e c'houlenn digant Fransez Gourvil, P. G. 2, contrôle postal, Pontarlier (Doubs).

War a glevomp, al levrig e yez Gwened savet gant an aotrou Mellac evit ar zoudarded a zo deut mat-tre ganho, ha kalz a vez digaset d'an talben da zerou-mat d'ar Vretoned, er mare-man eus ar bloaz.

Ar zoudarded o devo anezan evit netra gant goulenn anezan digant André Mellac, 54, rue de la Comédie, Lorient.

D'ar re-all e kousto 4 real an douzen (2 wenneg ouспен evit an timchoù).

**D'am zad ha d'am mamm**

Al lizer-man war rimou a zo bet kaset d'e geront gant eur zoudard a Vreiz-Izel. Ranna a ra ar galon o welet nag a zismantrou en deus graet ar brezel ! Ya, goude lenn an daolen-man eus an dismantrou-ze, sentomp ouz goulenn hor c'hevnoù ha pedomp evit hor zoudarded paour en em gav e-kreiz ar reuz !

C'houi 'zo er gêr o labourat, C'houi, va mam ger, ha c'houi, va zad, Ha me 'zo deuet d'ar brezel, Eur pennad 'zo, diouz Breiz-Izel.

Dreg ar c'hoad doun an heol a guz, Setu mare an Anjeluz : Met kloc'h Trasy ne zono ket, A-nevez-zo eo bet drailhet.

Diouz ar pardaez, e serr an noz, Ar c'halouion spontus a groz ; Pa vez ar stered o para, E vez an douar o krena.

Goude koan, pa 'z it d'an daoulin, Me ho ped, dalc'hit sonj ouzin, Rak ar zoudard kèz er foziou - A zo e-kreiz an danjerioù.

Aet da zellet ouz an iliz, Em eus gwelet eun dra iskiz : He megerioù a zo freuzet, Ar vein tu-man tu-hont ruilhet.

An nor a gaven frank digor, - Pe, mar kirit, n'oa ken a zor ; - Dre eur burzud kroaz hor Zalver 'Oa en he zav ouz ar vogez.

An ti-skol a zo e-kichen 'Oa c'hoaz warnan eun tamm toen... Breman an ti 'zo en e boull, War-dro nemet toennou toull !

Iliz, ti-kêr, ar vourc'h a-bez, O gwelet a zo eun druez ; Ne garfe ket ar paoura den Kasout da gousket eur seurt lochen.

Penaos e vezimp espernet, Ni tud distir, ni soudarded, Ma na zeuit ket d'hor skoazel Dre eur beden e Breiz-Izel.

Ho mab karantezus  
YANN MARI PAUL.

**Hon Eskob karet a Gemper  
o rei e vennoz da « Kroaz  
ar Vretoned »**

En eur respont an hetou doujus a vloavez mat kaset d'ezan, en hano « Kroaz ar Vretoned », gant he « Rener koz » hon eskob karet a Gemper, an aotrou Duparc, en deus teurvezet aotren e vennoz d'hon gazetennig.

Ra vo trugarekaet en hano Breiz-Izel ! Pedomp holl ar « Seiz Sant » o deus savet Breiz-Izel, en o fenn sant Kaourintin, da rei d'ezan skoazel el labour santel ha tenn, — laketa tennoù c'hoaz gant ar brezel-man, — da viret ha da ren hon Bro war an hent sakr merket d'ez gant Doue, hent he Feiz kristen hag he Broadelezh keltiek !

**Taolen ar Brezel**

**Notennoù diwar-benn ar peoc'h.**

Da gloza ar bloavez koz ha da zigeri ar bloavez nevez ez eus bet skrivet-diskrivet gant ar stadou notennoù stank diwar-benn ar peoc'h.

Meneg a zo bet aman, ar zizun dremenet, eus noten an aotrou Wilson, rener-meur ar Stadou-Unanet. Ar Suiz hag ar Suei, ouz he heul an Danmark hag an Norveji, o deus roet o asant d'ezan. Ar Spagn-hi he deus respontet e kave re abred d'ar re er-maez a vrezel dont da hanterouri etre ar vrezelourien.

E-touez ar renerien stadou e brezel impalaer ar Rusi en deus displeget da genta e venoz en eun embann d'e zoudarded. — « Eman nerez an Alaman o koaza, emezan, e lec'h ez a bemdez war griski nerez ar re-Unanet. A-benn nemeur, gant padout c'hoaz gant ar brezel, e c'hall ar re-man seveni o mennad ». — E vennad-hen e vije diframma digant an Alamaned ar Bologna, da renta d'ez he frankiz, ha distanka war e borziou-mor eus ar mor-lou dre lemel diouz kraban an Turked kanol an « Dardanell » gant kêr Konstantinopl.

Da heul, ar re-Unanet o deus savet kenetrezo eun noten hir da zisklêria e kouez war an Alamagn pouez kiriegezh ar brezel hag eman o mennad he lakeat dic'halloud d'ober ken gwazall en amzer-da-zont. Fellout a ra d'ezo ivez daskori o gwirioù d'ar poblou a zo bet gwasket gant an Alamaned, dreist-oll d'ar Veljig.

War eun dro, o deus kaset eun

noten da roue ar C'hres d'ober d'ezan paouez gant e daolion-ynd.

**An Alamaned o kavout harz er Roumani.**

E bro ar Balkanioù eman bepred an oabl tenval a-walc'h gant an Alamaned o skuba ar Roumani ha kinzig mont, da heul, d'hon zoudarded e Monastir, hag ar C'bresianed trubard o'h aoza mestaclioù dre zindan.

Koulskoude, evel m'edod e gortoz, armeoù bras Falkenhayn, — daou vilion a zoudarded ouz pemp kant mil a Roumaned, — o deus kavet harz diak linen stêr Sereth. Gwiteco, goude pemp devez emgann, kêr Rimnicu en a-raok d'al linen-ze, a zo aet ganto, nemet ar c'hêrioù all, Focsani, Braïla ha Galatz, a zaic'h c'hoaz. En a-dreñv, ez eus geunioù ledan a ray d'ar Roumaned eun difenn-natur eus ar gwella, dreist-oll er c'houlz-man bloaz. Emeur e gortoz eus eun emgann bras war al linen-ze.

**An Alamaned dizarbennet en « Den-maro » hag er Champagn.**

War linen ar Veljig ha Bro-C'hall kanoliadeg hag eun nebeut krogadou a nan hag a-hont.

An 29 eus ar miz, goude kanolia stank, an Alamaned o deus argadet war eun talbennad a dri c'hard leo, ouz linen an « Den-maro », er gwalaran-hanternoz da Verdun. N'o deus gallet derc'hel nemet eur pennad foziou.

Er Champagn, en « Auberive », an 31 eus ar miz diweza, e sailhjont, diou wech dioustu, ouz linen hon zoudarded. Dizarbennet int bet da vat a dennou mindrailherezed hag a daolion « grenadeanoù ».

**War vor.**

Ar 27 eus ar miz diweza, al lestr houarnet « Gaulois », p'edo o vont eus enez a zo bet goueledet gant eul lestr-splujer. Nemet, o veza ma c'hellas chom eur pennad, war-dro eun hanter eur, war c'horre an dour, e teuas listriall d'e zikour hag e voe savetaet an holl dud diwar e vourz ; pevar hepken anezo a zo bet kollet.

Ar « Gaulois » a oa bet moret e Brest ar 7 a here 1896. Eul lestr houarnet a eil renk e oa gant 11.300 tonnell hag eun nerez a 15.000 a gezeg war e vekanikou. Armet e oa gant 4 c'hanol 305,





# KROAZ ar VRETONED



IRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodet evit ar brolou estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit,  
St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

## Alouennou da « Kroaz » ar Vretoned d'he c'has da zoudarded ar Vro

Y.-M. Quilfen, soudard micherour  
e Kemper. — eur c'houmanant ha  
4 real.  
Marichal al lojeiz Y.-M. Normand.  
— eur c'houmanant ha 4 real.  
An Tad Trebaol. — eur c'houmanant  
ha 4 real.

Trugarez a greiz kalon d'hon  
mignoned a ro, dre o c'houmanan-  
chou dreist-oll, ar wella skoazel da  
« Groaz ar Vretoned. » Adalek de-  
rou ar brezel ma renk paea frejou  
bras gant ar paper ker-tre hag ar  
vicherourien, a zo dibaot, « Kroaz »  
a zo eun tamm evel ar Voched :  
berr eman ar peuri ganti! Gant-se,  
ar re eus hon mignoned ker o deus  
ar vadelez da zigas d'ezhi koumanan-  
chou a ra d'ezhi eur vad dispar :  
int-i eo a zalc'h anezi e bubez! Mil  
hennoz-Doue d'ezo!

Setu aman eur pennad distaget  
diouz lizer hon lenner mat, Y.-M.  
Normand, hag a zinkouez nag a  
blijadur a ra d'hor zoudarded ker  
lenn kanaouennoù ar Vro :

« Eur blijadur vras ee evidoun  
lenn, etre daou denn karol, ar c'ha-  
naouennoù koz ha ker kaer « Kousk,  
Breiz-Izel », « Sav, Breiz-Izel », evel  
ar gwerziou nevez graet abaoe ar  
brezel ; « Soudard Breiz-Izel » gant  
« Bleiz Nevet » ha dreist-oll « Nede-  
leg Bro-C'hall » gant « Telen Eusa »,  
unan eus va brasa mignoned.... »

Chom a ra c'hoaz ganimp ka-  
naouennoù ha leoriou, dreist-oll eun  
nebeut « Bleuniou Yaouankiz » eus  
an eil dousen kinniget d'e gamaraded  
soudarded gant « Ar Yeodet, » hag  
e vijemp evurus d'o c'has d'hon len-  
nerien vat a zo en « trancheou »  
evit o derou-mat. O goulenn digan-  
nimp, mar plich, an neb en deus  
c'hoant.

## Taolen ar Brezel

### Notennoù hag emglevioù.

An Notennoù stank diwar-benn ar  
peoc'h, skrivet-diskrivet gant ar sta-  
dou da nigeri ar bloaz nevez, n'ez eus  
deut aetra a bouez d'o heul. Meneg a  
zo e savo an aotrou Wilson, rener-  
mer ar Stadou-Unanet, eun notenna  
adarrre. Evit ar « C'haizer », da eilgeria  
ar re-Unanet a damall d'ezan beza  
kirik d'ar brezel, e vije en sell da  
skrivs.... eul levr!

Diwar-benn ar c'hresianed, n'oa  
ket an Itali, da genta, a-unvan penn-

da-benn gant ar re-Unanet. An aotro  
nez Briand ha Lloyd Georges a zo aet  
da Rom, ha bodet eus eur c'hen-  
dalc'h a jeneraled hag a vinistred  
d'en em guzulia. Deut eo an traou  
da vat! Miret e vo ouz ar G'hre-  
sianed da zailhat, evel m'o dije  
c'hoant, ouz hon zoudarded oc'h em-  
ganna en-dro da Zalouik. Eun noten  
nevez tu-pe-du a zo bet kaset d'o  
roue Konstantin, red d'ezan respont  
« ya pe get » a-benn daou devez. Pa  
vo moulet « Kroaz » e vo deut e  
respont.

### Ar brezel er Roumani.

War linen an Dobroujia, ar Rou-  
maned o deus kollet Macin, peun eur  
pont war stêr Danub ; da heul, o  
deus ranket dilezel Braila, eur gêr  
vras en tu-hont d'ar stêr.

Da frankaat eun tamm warno, ar  
Rusianed a reas neuze eur striv eus  
ar starta, en hanternoz da Vraila,  
e-lec'h e kemerjont teir gêriaden,  
hag er menezioù Karpatou e-lec'h e  
voc toullet ganto linen an Alamaned  
ha graet kalz a brizonerien.

Nemet, o trouc'ha war Focsani,  
kreava kêr war linen ar Roumaned,  
ar jeneral alaman Falkenhayn a reas  
d'ar gêr-ze koueza d'he zro. Ha setu  
ar Roumaned berr warno adarre. Kila  
a reont, tamm-ha-tamm hag en eur  
en em zifenn kalonek, war-zu stêr  
Sereth a vo d'ezo, fizians a zo, eun  
difenn-natur eus ar c'hreava.

### Da zizamma ar Roumaned.

Da zizamma ar Roumaned, ar  
Rusianed o deus staget da argadi  
en Hanternoz, tost da Riga, ar porz-  
mor bras war ar mor Baltik.

Eno, eus ar 5 d'an 9 eus ar miz-  
man, o deus kemeret teir linen alaman  
ha kavet enno 21 kanol pounner,  
11 kanol skanv, gant pourvezioù-  
brezel a-leiz ha prizonerien a-ganchou

### War linen ar Veljig hag ar Frans.

Kanoliadeg, dreist-oll e Verdun  
hag en Hanternoz, ha krogadou  
aman hag a-hont.

Ar 5 hag ar 6 eus ar miz, ar  
Zaozon o deus graet argadennoù  
frouezus betek trede linen an Ala-  
maned, a zalc'hont breman er  
c'hreisteiz da Arras, war eun tal-  
benad a eur c'hard leo.

### War vor.

An deiz kenta 'r bloaz eul lestr-  
sann saoz, an « Ivernia », 14.278  
tonnell, a zo bet gouledet er mor  
Kreizdouarek, ha kollet gantan eun  
darp eus ar zoudarded a oa en e  
vourz.

## MARO AR C'HI

Kalz a chas klanv a zo bet evit ar bloaz. Moarvat, e ray plijadur d'hon  
lennerien kavout aman, displeget gant ar barz brudet Per Pronost a Dreflez,  
istor Tomm, ar c'hi mat a oa ted'bet diouz ar gêr ha redet war-lerc'h e vestr  
da foar Lesneven ; hag e voe lazet eno evel eur c'hi klanv.

Eur mintinvez, da foar vras Lesneven.  
Ar paour kêz Tomm a dorras e chaden ;  
Hogen e vestr, adalek ar beure,  
A yeas en hent, gant eul loen, d'ar foar-ze.

Dihun abred, ar c'hi Tomm o gwelas  
O vont er streat etrezeg an hent bras  
Tenva e benn hag e lost war zisken,  
En eur c'houesa setu da Lesneven  
Hen da redek... Buhan en em gavas,  
Lous e vleven gant poultren an hent bras.

Pell e klaskas a-dreuz, a-gleiz, a-zeou,  
E zaoulagad beuzet gant an daerou.  
Pa zeu kercent eur fallakr da grial :  
« Harz ar c'hi klanv ! Bazad d'an aneval ! »  
En eun taol-kont, evel ar chas taget,  
Hailbevodet warnan a zo sailhet.  
Yudal a ra, rak ar bizier, ar mein  
A gouez skrijus a bep tu war e gein.

Gallet en deus evelato tec'het.  
Er-maez a gêr, leun-wad ha mac'hagnet,  
Ec'h en em stlej a-dreuz an tachennou,  
Faoutet e benn, er-maez e vouzellou,  
Gant, war e lerc'h, an holl hailbevodet  
Setu kuz-heol ! en eun dachennad-ed  
Ar paour kêz Tomm a deu d'en em asten,  
Kuzet da vat e touez ar greun melen...

Eun nebeut c'hoaz, ha mui ne vezo klanv !  
Pep tra breman 'zo ruz en-dro d'ezan :  
Ruz-tan ar gwad en-dro d'e vuzellou,  
Ruz ar roz-ki, ruz ouspenn an nenvou...  
En-dro d'ezan pep tra 'zo sioul ivez ;  
Al laboused ne ganont ken en gwez,  
Hag en nenvou, pa zav skedus al loar,  
E-pad ma kousk muntrerien kriz ar foar...  
Ar paour kêz Tomm a zo kousket d'e dro,  
E zaoulagad prenet gant ar maro !

P. PRONOST,

Diwar e levr kaer « Annaig, Lili ha Roz-gouez ».

### En aer.

En noz etre an 3 hag ar 4, ar  
splujerien alaman o deus kaset d'ar  
strad dirak « La Rochelle » 11 lestr-  
pesketer hag eun teir-gwern bras  
o dont eus ar Chili.

Daou vartolod eus an Danmark a  
zo diskennet, nevez zo, e Perroz war  
eur vagig. O lestr a oa bet tarzet e  
mor Breiz hag o doa ranket tremen  
eun devez hag eun nozvez dindan an  
amzer, Skornet e oa daoudroad unan  
hag eun dourn d'egile.

Ar 4 a c'henver, eun nijer alaman  
en deus tizet dont betek a-us da  
« Gompiegue », ugent leo hepten  
diouz Pariz. Leuskel diou vom-  
beuz en deus graet, ha gloaza eur  
plac'h.

Eur taol brabanserez n'eo ken, da  
sponta an dud. Nijecien ar re-Un-  
anet a ra gwelloc'h labour o c'hour-  
nijal bemdez linennou an Alamaned  
hag o leuskel bombezennou, neket  
ouz merc'hed, hogen ouz grignolioù  
ha hanchou-houarn an enehourien.



SANT-EVARZEG

Tan-gwall; pevar den deuet ez veo. En noz, etre an 2 hag an 3 eus ar miz, an tan a grogas en unan eus tiz ar vourc'h, a voe pulluc'het-oll. An holl dud a oa e-barz an ti, pevar anezo, en o zouez eur goziadez a 65 bloaz, a zo bet deuet ez veo. Kavel eo bet o c'horthou luduet, nemet hini ar goziadez ne voe kavel rouden ebet anezan.

TREBOUL

Maro eur gantbloaziadec. — An itron Robert, e Treboul, a zo marvet nevez zo d'an oad a 103 bloaz. Kalz eus he bugale vihan a zo er brezel. E 1870, he doa kollet he zri mab, kouezet holl war an dachen a enor. Doue da vo gant hec'h ene!

BREST

Al « Leon » goueledet. — Al lestr dre dan « Leon », d'an aotrou Chevillote, a zo bet goueledet war hon aochou gant eur splujer alaman, a-unan gant daou lestr dre dan all a Vro-Zaoz. Ar vartoloded diwar o bourz a zo diskennet d'an douar e Trebunden, Tregastel ha Pentoz. E-touez ar verdeidi saoz e oa Sinaiz (Chinois). Kaset int bet da Lannouan ha lojet en hostaleri an aotrou Gall, en gortoz gallout tremen da Vro-Zaoz.

Eul lestr all, « La Madeleine », d'an aotrou Cheyillote ivez, war e veaj eus Brest da Naoned, a zo bet argaset gant listri-splujerien, nemet, evel m'oa armet, an Alamanned ne gradjont ket derc'hel ganti hag e tec'hjont kuit a-benn eur pennad.

MONIROULEZ

Meneg a enor. — Hon gwella gourc'hemennou d'hon c'henvroad, Per Kouim, medesin-skoazeller en deus dellezet ar meneg enorus-man : « Abaoe daou vloaz m'eman er rejimant, a zo bet dalc'hmaz eur skouer a nerz-kalon hag a c'h'rud; an deus graet taoliou kaer meur a wech, dreist-oll en noz etre an 28 hag an 29 a here diweza, pa redas eus e benn e-unan da zikour pevar c'h'hravazater gloazet; savel a reas anezo hag o lakat e surentez en eur c'h'ludour e-kichen. »

HENBONT

Darvoud gant eun ijin-brezel. — Bemdez e klevet komz eus darvoudou c'hoarvezet, dre zievsted, gant ijinou-brezel digaset eus an talben. En eun davarn e kichen Henbont, e oa bet lezet war eun daol eur vombezendourn, pe « grenaden », ha hi karget. Kemeret e voa da c'hoari gant bugale he lezas da goueza. Tarza a reas o wall c'hloaza pemp den.

Diwar-benn « Job an Her »

Tennet eus eul lizer digant an aotrou Bocher :

« Poaniet bras oun bet gant ar c'helou a ro « Kroaz » diwar-benn ar mignon ker, Job an Her, ana-vezet mad ganin aboue ma ris e anaoudegez en Sant-Vouga, an de ma tigouezas ganin, war c'houlen an aotrou abad Perrot, ober eue eur brezejen en eur gouel brezonek.

Kristen ar gwellan, den yaouank a galo hag a zoare, Breizad rik, Job an Her en em roas, korf ha kalon, d'ar Vro, a gare dreis pep tra.

Plijet gant Doue n'ez eus digouezet droug ebet gantan hag eman bepen prizoniet en Alamagn. Setu gwellan hetou e vignoned ha ra vo kement-se ive gwellan frealz e dud hag e gerent!

A. Y.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guilhem L. C.

D'am ferson, an aotrou Gall.

Gouel an Holl-Zent!... Pejec'h ez out, bro ma c'havel, Gant da oueliou ken kaer, gant da lidou santel? Gant ar gouel a garomp ar muian, Bretoned, Holl-Zent hag Anaon, hon c'herent, mignoned?

Me, da vugelig paour, a hirvoud d'it birie, Ha ma spered a nij a-dreuz broiou, du zo .... Oh! bezan divroet!... Gouzout a ran, siouaz! N'eus ket mantrusoc'h tra, met n'ouveun ket c'hoaz Pegen frailhus e oa, en-pad amzer vrezel, Bevan gant ar gouel-man pell diouzit, Breiz-Izel!

Aman netra, netra... Peden na g oferen, Netra nemet dismantr ha dremm douar estren! E lec'h kleier o son levenez ha kanvou, Ar c'hanioliou a groz hag a gresk ar marvou; E lec'h tud o vonet gant fizians da bedi, E welomp loaned goue war var da gounnari; E lec'h peuc'h ha diskuiz, — arouez ar « goz-amzer », — Brezel ha brezel yud, drailhaded ha krizder; E lec'h klevet eur gomz, eur gomz a garante, Kasoni a bep tu ha lazadeg bemde! Heol Doue a zav c'hoaz a-us d'eur seurt taolen, Met, mar kendalc'h ar reuz, hep mar ne zavo ken....

Frealzus evidon e vijes mont d'am Bro Da lida gant ma zud gouel ar Gerent varo; D'ober eun ehanig gante war ar beziou E lec'h ma kousk peuc'h-ludu hon remziou, Hag e lec'h ma tiskuz neb a garempe kement, Ar re a ziskouezas kenkous d'imp ar gwir hent....

Dudiusat bale, ma vijen bet er ger, Ha devez evurus ganeoc'h, Anaon ker! Kercent ma teu ar c'houlis da vont d'ar gousperou, An dud, ar vro ive a gemer ar c'henvou. En ti n'eus mui a vrud, pep-hini a dremen Hep eur gomz, hep eur grig: ar gouel a c'houe'hemen! A boan « Mont a reomp? » ha, bras ha krouadur, A gemer penn an hent war e damm plijadur....

An amzer a zo brao: eun heol sardik a bar Evit distan d'eur rumm re a boan, a c'h'laoc'har; Ar bed a zo sioul: n'eus ket eun ezennig O lakat da grenna zoken eun deliennig; Ar maeziou a zo koant: ar c'hoajou moredet N'o deus ket taolet c'hoaz o mantell alaouret; An evned a richan: kan doanik a garan Pa dosta d'ar zerr-noz, — ha kan an teneran... Evit an Anaon n'eus ket, e gwirione, Amzer hag a zavie uheloc'h hon ene!

Dre-ze, nag e pedomp gant fe grenv evite, Ha nag e ehon hon zontj muioc'h a ze gante!... Aboue tri bloa pe dost, nag a zaerou skuilhet, N'eus ket eun tiegez e lec'h na vez gouelet. Brezel, gwalen, terzien, holl e kouezet warnomp, Ha bepred e talc'hont... Tud kez, pedomp, pedomp! N'ankouomp ket ar re a stourm war an dachen; Pedomp dreist-oll evit ar re na deufont ken. Seul boaniosoc'h eo d'imp sonjal bremen enne Ma n'hallomp ket, siouaz, stoui biken warne; Hag int, eneo paour, a glask hon fedennou... Ne glevit ket dre-oll o mouez, o goulenno? Hon zontj a ehon ganeoc'h, o Anaon karet, Hon feden a zo d'eoc'h: c'houi a vo sikouret!

Da heuith.

AR YEODET.

Da c'hortoz an deiz kaer-ze, m'ho ped da zigas d'io, bep sizan, « Kroaz Vretoned ». Ar gelouen-ze, her gout a ran, am zikouro da zerc'hel va spered ha va c'halon ken uhel ha m'eo red evit ma ehomin atao laouen hag aketus d'am dlead, evit gloc' Doue ha silvidger hor bro-veur Frans, merc'h hena an liz.

Evit bremen, n'em eus ken da ober, — hag a-walc'h eo, — nemet en em emmell eus kement a zell aman ouz vad tud ker (pe diwar-dro) hag ar zoudarded saoz a c'hell beza o chom pe o tremen en o zouz. Labour iskiz a-wechou evit eun beleg. Met petra dalv? Evel-se euan ar stal, ha ne dalv netra en em glemm, n'eo ket gwit?

Ve list da c'houlen diganeoc'h skoazell ho pedennou ba re ho leonerien garantezus, ha kredit e c'ho-man atao ho mignon e Kalonou Jezus ha Mari Zinam.

G.-M. T.

D'an aotrou abab Guillet, e Moellan.

Hon gwella gourc'hemennou a gasomp d'hon c'henlabourer ha mignon ker, Loeiz Gourlet, a zo bet hanvet da vestr-skol e Rosperden. Setu aman eur pezig en deus savet d'ar vugale-skol, displeget brao-tre ennan eur gentel eus an uhela. E gwirionez, bugale Vreiz n'oufent kavout gwelloc'h mestr eget hon mignon!

Bugel bihan, o vont d'ar skol 'N eur gutuilh 'hed an hent bleuniou, An amzer a gazez da goll A zo eul laeraden vadou.

Bugel bihan, bez sonj bepred Eus ar barabolen gaer-man: « Heb ar greum mad, eost mad ebet! » Oh! dalc'h sonj mad eus kement-man.

« Kroaz-Doue », warni ma kouskez, Ar c'hreion du, na garez ket, 'Zo kouskoude ar gwir alc'houez 'Vit digeri dor ar spered.

Bugel bihan, bez war evez! Gra skouarn youzar d'an den gaouiad; Dirazout 'man ar wirionez Digor bepred da ziaoulagad.

Evit beva hirio er bed Eo red ober, gwerza, prena; Ne gonter mui war ar bizied; Gouzout 'zo red evit beva.

Ouz an den « bleiz evit an den », Bugel bihan, penos e ri Diwezatic'h d'en em zifen, Mar na fell d'it breman diski?

P'az kwelint o tiski ervat, Tud a zeuio da lavaret: « Eget lenn gwel eo labourat; Gouzout a rer a-walc'h bepred! »

Bugel kez, hep keuz na glac'har, 'Vit o respont sav soun da benn: « Eur skrid gouiziekl hag helavar 'Zo a-us d'eur goz prezegen!

Lod all ouспен, — tud fall 'r re-man! — Tud lorc'hus, diboeall, digalon, A fello d'ezo diverkan Hano Doue diouz da galon.

Bugel bihan, bez hep enkreuz! Lavar d'ar re ken diskiant se Penos iliz koz ar barrez A zo eur skol uhel ive....

Hennevedigez diouz Paul Déroulède gant Loeiz Gourlet (Bodspenn).

KELBIER EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou a zeu d'imp eus daou eus hon lennerien ha kenlabourerien ger, e oamp chomet pell hep klevet ger dioute.

An Tad Trebaol, a zigase d'imp bep miz gwechall, gant e « Gannad » ben-niget, kelou eus hon breudeur a Vro-Gannbre m'edo o visioni en o zouez, a zo breman jubennour en arme Bro-Zaoz, en eur ger eus talben an Hanternoz. Setu aman e lizer da hett ar bloavez mat. Bloavez mat d'ezan ive! D'ezan gwella menoz « Kroaz », he renerien ha he lennerien!

Aotrou ker,

Digemerit gant va gourc'hemennou va gwella menozioù evit ar bloavez nevez. Evel e leverer e Plabennec, parrez va ginivelez, « eur bloavez mat a rekelan d'eoc'h, yec'hed hag evrussted ha levenez ar Baradoz da ziwec ho pubez! » Ha ra roio Doue d'eomp holl heb dale an trec'h hag ar peoc'h evit ma c'hellimp ni holl, soudarded keiz, dizrei adarre d'ar ger ha d'hon labour, ba beva heb enkreuz e-touez hor c'heavrofiz en eur hor bro ger Breiz-Izel!





IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an ootrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An ootrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

Aluzennoù da « Groaz » ar Vretoned  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro

An ootrou Menguy, medecin skoc'heller. — eur c'houmanant ha 8 real.

« Saik Selaouer ». — eur c'houmanant ha 4 real.

Eul lenneres a Gorie. — 4 real.

A greiz kalon trugarez d'hon mignoned ker a ro skoazell da « Groaz ar Vretoned » gant o aluzennoù ken madeleuz !

A-unan gant e brof « Saik Selaouer » en deus digaset d'imp al lizer kalonek-man. Trugarez d'ezan !

..... Arabat e varvie « Kroaz ar Vretoned » ! En despet d'ar geaouez e rank derc'hel ! Evit se, plijet ganeoc'h digemerout, a-unan gant al lizer-man, an ugent real kinniget a galon vat gant eur mignon neve : eur c'hoareg yaouank a Gemper, gloazet er Champagn, bloaz a vezo d'an 21 a viz Genver..... Diampart, e-pad eun nebeut deizioù c'hoaz, goude pell anzer tremenet e klanv-dioù, e c'hed an breman ar c'hoaz da zistrei d'an omgan.

Hirio, ha, dreist-holl, pa veziu adarre en trancheoù, reseo levriou, kanaouennoù brezonek, ha « Kroaz ar Vretoned », difennouez hor yez c'houek ha kaer, hor gizioù glan ha dispar, hor brud kresket bemdez dre m'omp anavezet gwelloc'h, a raio d'in ar yac'ha plijadur...

..... Breiz da viken ! Ha Breizad bepred ! Rak n'eus bro all ker kaer e bed, rak n'eus pobl all par d'ar Gelted wirion, her gwelet a reomp bemdez abaoe derou an dispac'h, ar rouz-man.

Ra blijje gant Doue kaout digale trouez ouzimp !

Bloavez mat d'eoc'h, ootrou ker, ha da « Groaz ar Vretoned. » Evidoc'h va hetou gwella.

Ganeoc'h a galon.

« Saik Selaouer. »

Evit ar brizonerien

An dimezell Anats Houerou..... 4 real.

Trugarez d'hon lenneres ker evit hec'h aluzen hon eus bet digant eur pennadig a zo ! Gallet hon eus, gant skoazel eun itron vadeleuz ha breuerie « Ar Groaz aour », savet e Sant-Brieg evit ar brizonerien, kas da zezou-mat hon lennerien gez a zo

breman prizonerien, eiz pakadik bevans, enno peba zournadig kanaouennoù ha kantikoù Nedeleg. Ar re-man a vo d'hon c'henvroiz harluet evel eun hekleo eus hon gouelioù Nedeleg aman e Breiz-Izel !

Eus Meschede, e-lec'h m'aman prizoner gant kalz a Vretoned all, hon c'henlabourer Erwan Querou, a Blougenver, a skriv d'imp eur garten da heta ar bloavez mat da « Groaz ar Vretoned ». Bloavez mat ivez d'hon holl genvroiz prizoniet ha ra zeuio heb dale evito, gant an trec'h hag ar peoc'h, eur keit gortozet ar frankiz hag an distro da Vreiz-Izel !

Eus Soltau, e rana-vro Hannover, J. B. ar Page eus ar Merzer en deus digaset d'imp ivez eus e gelou n'eus ket pell. — « Aman, emezan, ez eus kalz a Vretoned, eus Penn-ar-bad an darnvuia anezo. Eur blijadur dispar a gemeromp o lenn al leoriou brezonek hag ar c'hanaouennoù ho peus digaset d'imp... »

Petra a c'heller kas d'ezo.

Breman e wasa kalz war ar brizonerien. An Alamaned a zo mil boan ganto o kavout boued d'ea em vaga ; peno e rotent neuze d'ar brizonerien pa n'o deus ket o-unan ? Kasomp eta d'ar brizonerien pakadou ar muia ar gwella.

Setu aman eur roll eus an traoù a heller kas d'ar brizonerien. Trugarez d'all lenneres vat he deus savet ar roll-ze evit « Kroaz ar Vretoned ».

Magadurez. — Boestou kig-sezon ha pesked a bep seurd (kig-bevin, kig-moc'h, pasteiz, sardined, brizili, toun, hag all). — Anduilh, silzig. — Tablezennoù d'ober souben (« bouillons » pe « potages » comprimés) ; laez kaledet ; « te » pe « kafe » kaledet ; fourmaj kalet. — Chokola, kakao, mel, trouez konfizat ha koufizadur a bep seurd ; gwestel kalet ha krampouez kras-mat ; pastilhez bent ; holen, butun ; soavon ha suke (dre nebeudou). — Tozou a bep seurd (« macaroni, nouilles » hag all). — Fao munut ha piz digloret, pe c'hoaz krazet er torn ha brezonet d'ober souben ; kistin, fizez. — Traou da rei nerz : kina, kola greuniet, gliceriofosfat-raz, fosfatin, malt, hag all.

Dilhad. — Lienach ha gloanach a bep seurd : rochedou, mouchoerou, saeoù-gloan, loerier, advrageier. — Dilhad a ziwar-c'horre (porpanchou, brageier mezer pe voulouz, jiletennou, mantel) ; an dilhad a ziwar-c'horre a die beza oute paraman-

chou melen ouz ar c'holier, penn ar manchoù ha war hed pep bragezen. — Bouteier koad pe goad-ler, chosonou.

Levriou ha paperennoù moulet a bep seurd. — Nemet difenn kas traoù meneg enne eus ar politik pe ar brezel, evel gazetennou. Al levriou brezonek a vez digemeret kerkouls hag ar re c'hallek, nemet mad eo la-kaat warne e galleg, en nebeut gerioù, diwar-benn petra e vez komzet enne.

RIMADEN  
EN ENOR D'AR « PINARD »

Doue a grouas ar winien  
'Vit ar pinvidig, ar bevien ;  
Met an neb n'en deus tamm are'hant  
Ne c'hallfe ket terri e c'hoant.

Gant ar rezin e vez graet gwin,  
Ha neket gant avalou pin ;  
Klaskit dre oll tud a ijin,  
Ha gant pin ne raint 'met rousin !

An evach-man 'zo hanvet gwin,  
Pa 'z eo gwir eo graet gant rezin ;  
Met, 'pad ar brezel, ar zoudard  
'N deus her badezet ar « Pinard ».

Pell-ze dindan ar c'hanoliou,  
Tan da hir, yenien, boulejou,  
Ar Breizad 'van e galon stard,  
Dre vertuz an ootrou « Pinard ».

Ha, pa vez meneg da rei bec'h  
Dindan boulij kras ha sec'h,  
Ar Breizad 'van e galon stard,  
Gantan e vignon « Pinardig ».

Pa deu 'us d'imp da c'hlaoiri,  
Ar Boch 'vez roet war e fri ;  
Mad outan Breiziz a ra gward,  
Gant skoazel an ootrou « Pinard ».

Pa 'z a er-maez 'vid argadi,  
Ar Breizad 'van e Jann-Mari,  
Met dalc'h-mat 'vo taer hag ampart,  
Pa 'n deus eur banneig « Pinard ».

Gant aon e « vidon » zistouefe,  
Morse n'hen lako 'n e c'hourve ;  
'Rabad 'labezfe ar « rozard »,  
Me 'lavar an ootrou « Pinard ».

Pa zistro e « permission »,  
E vez « Pinard » 'leiz 'n e « vidon » ;  
E vamm e gav seder ha lard,  
Hag e lar bennoz d'ar « Pinard ».

Ar bitailh pa vank a-wechou,  
Neuze e sant nec'hamanchou ;  
Ankeniet 'vez 'vel eun deskard  
Pa na vez ket gwelet « Pinard ».

Debret mat dirak ar Voched,  
Eur c'horniad neuze 'vez laket ;  
Ar Breizad 'zo eun tamm kanfard  
Goude sur c'bartad a « Binard ».

'Vit an deiz kenta eus ar bloaz  
'Zo bet « jambon » hag eur test bras,  
Met sur, d'eoc'h me hel lavar stard,  
'C'hoarzen muioe'h ouz ar « Pinard » !

Eun deiz, pa vo fia d'ar brezel,  
Me 'zistroio da Vreiz-Izel ;  
Met ne vin ket kerkouls mailhard,  
Pa n'em bo ken mui a « Binard ».

AR C'HOG  
Eus Plouegat-Moysan.

Taolen ar Brezel

Notennoù.

Meneg a zo bet, ar zizun ziweza, eus noten ar re-Unanet oc'h eilgeria an ootrou Wilson, rener-meur Stadoù-Unanet an Amerik. En notenze, ar re-Unanet a damalle d'an Alamagn beza kiriek d'ar brezel ; en eun adnoten roue ar Veljig a zigase da zont eus sakra gwirioù ar vro reuzeudik-se a oa bet lakaet dindan dreid a-ratoz gant an Alamagn.

Houman, diouz he zu, he deus embannet eun eil noten d'ar stadou er-maez a vrezel, ma klask teurel enni ar bec'h war ar re-Unanet hag, a zo kaeroc'h ! war ar Veljig hec'hunan... An impalaer, en eul lizer d'e zujidi, a glemm dre ma fell d'ar re-Unanet, emezan, flastra an Alamagn ; gervel a ra an holl Alamaned, zoudarded ha nan-zoudarded, da stourm betek ar maro. Roet en deus ivez da c'houzout d'an Amerikaned e vije goueledet hiziviken gant e splujerien an holl listri-kenwerz armet, heb ali ebet na dale d'an dud d'en em zavetei, n'eus fo'z ha pa vije Amerikaned war ar bourz anezo.

Evel m'hen diskouez an ali-ze d'an Amerikaned, n'eo ket ar peoc'h, hogen, en eneb, krisa brezel a voe biskoaz, a zeuio er-maez eus an holl notennoù-ze. Er Suis, emeur o c'hortoz an Alamaned da dreziz harzou ar vro, ha hi er-maez a vrezel, evel m'o deus graet evit ar Veljig.

Evit peza a zell ar C'hres hepken e teuo eus an notennoù eur trouezenn vat bennek : kroeg eo ar roue Konstantin d'an diwez da denna e armead war an a-dreñv, evel ma oa bet goulnnet digantan, bete goût na rofe skoazel d'ar Vulturad da vont d'hon zoudarded e Salonik.

Ar brezel war dalbennoù ar Veljig hag ar Frans. — Trec'hioù ar Zaouzon.

Krogadou a zo bet aman hag a-hont a-bed an holl linen, dreist-oll

er « Somme » hag er « Champagne ». An Alamaned a zo bet dizarbennet bep taol.

Ar Zaizon a ya mat an traou ganto, eur penvad a zo. Da heul eun nebeut krogadougouint er « Somme », o deus astennet o zachennad er vro-ze. Trec'h int bet ivez dirak stêr Strouma, tost da Salonik, a-hed stêr Tigr, en Azi-Vihana, ha, dreist-oll, e bro-Balestin. Gant eur rann-arme digaset ganto eus an Ejipt o deus sourprennet eno an Turked ha, goude eun emgann start, o deus fazet anezo, o kemeret diganto war-dro 2000 a brizonerien, 4 kanol, 1.600 fuzul, 450.000 tenn evit ar fuzulioù ha kalz a gezeg hag a ganvaled.

#### Ar Roumaned o terc'hel penn. — Ar Rusianed trec'h e Riga.

Ar zizun diweza e oa kelou aman o doa ar Roumaned kollet eur gêr a bouez hanvet Focsani, ha ranket d'ezo kila da heul. War eun dro, an Alamaned a c'houneze tachen war-zu Galatz, eur gêr grenv all, er c'hreisteiz da Focsani.

Aboue, gant skoazel ar Rusianed, o deus adkemeret o c'hrenv; dizarbennet o deus, e meur a grogad dreist-oll er menezioù Karpatoù, an Alamaned a zeblant kavout harz da vat ar wech-man.

En Hanternoz, en-dro da Riga, an Alamaned, oc'h ober o mad eus ma oa kleret ar stêrioù, a oa aet d'ar Rusianed. Dizarbennet int bet da vat, hag ar Rusianed o deus gounezet diwar ze eur vras a dachen, betek kinnig kemeret « Mittau », krenva lec'h an Alamaned er c'hornbro-ze.

#### War vor hag en aer.

An 9 eus ar miz, eul lestr houarnet stoz, ar « Cornwallis », a zo bet goueledet gant listri-splujerien an Alamaned. 14.000 tonnel e oa. ha koz : moret e oa bet e 1898. An holl dud war ar bourz azezan a zo bet savetaet, nemet 13 a oa bet lazet war an taol gant nerz an tarzerezed, pe « torpilhoù », losket gant ar splujerien.

Ar Zaizon o deus kollet c'hoaz eul lestr-samm evit an nijerezed-mor, a zo bet kanoliet ha goueledet gant an Alamaned en eur porz-mor eus an Azi-Vihana.

Eul lestr-distrujer saoz, an « Dolfin », en deus talvezet an taol-ze d'an Alamaned o kas d'ar strad dirak sochoù ar Spagn unan eus o listri-splujerien, an U-56.

Ar 14 eus ar miz, eul lestr-splujer gall en deus, diouz e du, goueledet, er mor Adriatik, eul lestr aotrichian, ar « Zagreb », 547 tonnel.

An 11 eus ar miz, e-kreiz noz, e voe sonet « an tan » ha mouget an holl c'houleier e Pariz. Meneg a oa e teuje, en noz-ze, « zeppelinou » da vombeza ar gêr-benn. Gwell a ze, ne zeuas hini !

## KLEBIER EUS HON MIGNONED A ZO KR BREZEL

### Eul lizer kalonek digant « Laouik »

Eus ar c'hamp e-lec'h m'eman o kentelia ar zoudarded yaouank, « Laouik » a skriv d'imp al lizer kalonek-man :

Aotrou ker,

Deus kamp al « Lande d'Oué », e-lec'h ma 'z oun evit pemzek de, e kasan d'ec'h ha da Grouz ar Vretoned ma gourc'hemennoù kalonekan a vloavez mat.

Plijet gant Doue rei d'imp ar peoc'h ar bloavez-man gant an trec'h war

hon enebourien ! War-dro fin ar miz e sonjan mont d'ober eun dro c'hoaz d'o gwelet gant ma soudarded yaouank, hag e refomp hon galloud evit rei eun taol skoaz mat d'o c'has er-maez eus ar vro. Plijadur am be bep sizun o lenn kelou eus ar vignoned a zo er brezel. « Ar Yeodet » ha « Bleimor », petra e teount da vezan ?

Ho kenvroad ha mignon leal.

L. ar M.

Bloavez mat ivez d'hon mignon ker ! « Ar Yeodet » a zo breman en hospital 88 bis, e Nimes. Evit « Bleimor », aboue m'eo bet hanvet da isletanant, n'en deus ket rôet d'imp eus e gelou.

« Klaoda » ivez « Loeiz Herriou » hag an aotrou Erwan ar Moal a zo bet goulenet o chomlec'hoù gant meur a hini. Setu i-aman : C. Le Prêt, 70<sup>e</sup> aéroliers de campagne, secteur 63 ; sergent-fourrier Louis Henrio, 88<sup>e</sup> territorial, 3<sup>e</sup> compagnie, secteur 13 ; Y.-M. Le Moal, 79<sup>e</sup> territorial, 5<sup>e</sup> compagnie, secteur 68.

### Hon c'henvroz e Salonik

Unan eus hon gwella lennerien, F. Barrebar, a skriv d'imp al lizer-man eus Salonik. Trugarez hag hon menoz kalonek d'ezan ! Ha bloavez mat ivez d'hon holl genvroz e Salonik !

### Aotrou ker,

Eun nebeudig gerioù evit rei d'ec'h eus va c'helou, ha lavaret d'ec'h bennoz Doue evit *Kroaz ar Vretoned* en em gav ganin, kouls lavaret, bep sizun.

Wareun dro, e kasan d'ec'h, da Grouz ar Vretoned, ha d'am holl vignoned soudarded Breiz, va gwella menezioù evit ar bloaz nevez, e kavimp ennan, am eus esper, devez an distro, ar peoc'h hag an trec'h.

Ne skrivan ket d'ec'h, met n'ho ankounachan ket evit se. Bemdez va spered a nij war-zu Breiz-Izel. Eur pennadig « zo abaoe m'emoun en em gavet er « Vasedoan », ha kalz plijadur a rafe d'in mont d'ober eun dro d'am bro c'henidik. Met, seul-vui e vemp bet pelloc'h dispartiet, brasoc'h a ze e vo ar blijadur oc'h en em welet adarre.

Aman, n'euz ket re a drouz breman. Er miz tremenet hon eus bet eun amzer sioul. Met, eun nebeubik a zo eo fall an amzer : skorn bemdez ! An avel diwar ar Vardar ha menezioù ar Serbi a zo krenv ha yen.

En devezioù-man em eus bet an eurvad d'en en gavout gant daou Vreizad, o-daou eveldoun eus « Pennar-bed ». Tremenet hon eus asamblez devez diweza ar bloaz koz ha devez kenta ar bloaz nevez hag, evel e c'hellit kredi, em eus dilzet ar galleg evit ar brezoneg ! Lennet hon eus « Kroaz ar Vretoned » plijadur ennomp o kaout keleier eus Breiz.

En eur achui, e lavaran d'ec'h, eur wech all c'hoaz, bennoz-Doue, hag ho pet ar vadelez d'ober va gourc'hemennoù d'an aotrou Picard e lennan gant dudi e werzioù ker kaer. D'eoec'h a wir galon. Ho kenvroad breizad.

F. B.

### Eus kichen Monastir

En eur zigas d'in e bez-larzoniez ken kaer diwar-benn Gouel an Holl-Zent, savet gantan e Brod, e-kichen Monastir, du-hont e bro-Serbi, an aotrou Bocher en deus skrivet da Grouz ar Vretoned al lizer-man, da ziskleria perak na oa ket e bez en em gavet abretoc'h, hag ive da laret d'imp eur gerinnou bennak diwar-benn bro ar Zav-heol a zo ken dis-henvel diouz hon bro-ni.

Trugarez d'ezan ha gwella menoz holl diegezh « Kroaz ar Vretoned », ma pareo buhen er c'hlanvdi, e le'h m'eman dalc'het bepred gant an derzien en deus dastumet er broioù pell-ze.

Nimes, ar 5 a viz Genver, 1916.

Mignon ker,

Setu aman, evit *Kroaz*, eur pezh-barzoniez savet ganin da ouel an Holl-Zent, du-hont en tu-all da Vrod, e bro Monastir.

Koz eo, nemet derec'h el ran d'ezan, rak ma tigas sonj d'in eus poaniansan devez a dremenis er Zav-heol. Devez poanians, neket abalamour d'ar brezel, pa 'z eo gwir, an dez a-raok e oamp diskennet eur c'hard-ko izeloc'h eget al linen-dan da ziskuiza en eun draouien doun, a hed eur wazig dour, met poanians pa zonten er gouel tener a dremene en devez-se en hon bro Breiz-Izel, gouel an Holl-Zent, gouel an Anaon...

Den a gement n'eo ket dispartiet diouz e dud gant kemend all a hent ha war zigarez eur brezel ken euzus, ne oar pegen fraillhus eo. Dreist-oll, pa yud ar maro en-dro d'an den a bep tu ha pa na wel dirazan nemet eur vro noaz, hudur, yen, hep, ti na foz, hep eur c'hrouadur en diavéz brezelourien, hep eun tamm douar labourer, hep zoken eur vleuen an disteran en-kreiz ar bléne pa ouz troad ar menezioù. Petra a laran ? hep eun evnig bihan o teural e ganounen pa darz ar beure.

Tristat bro, ma zud kêz, ha nag e vefe pinvidik panevet ar brezelioù a

zismantr anezi eun nebeut bloavezioù a zo, ha mar karje he zud ive poania eun tamm ousspenn ! Tud ar vro ze a zo soudarded dispar ha, war eun dro, tud didalvez-tre. Souezus !

Eur wech bennak e komzin d'ec'h a gement-se. Kalz a zo da laret diwar-benn broioù ar Zav-heol ha heb a oar dre skiant-prena ar peadra hag ar binvidigezh a heller tennan dioute, n'eo ket souezet en em dagfe ar pobloù diwar o fenn.

An dez-se, eta, devez ar c'haeran, ma spered gant hon Anaon karet ha pell-pell diouz ar Serbi, e savis ar barzoneg a gasan d'ec'h hirie.

Bet ho pijs anezan eur pennad a zo, met ar c'hrogad bras evit Monastir, ar c'hlenved hag an dizro d'ar Frans a viras ouzin e gas d'ec'h kentoc'h.

Ha setu perak en em gavan war-lerc'h...

AR YEODET.

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume

# GOUEL EN HOLL-ZENT

II

D'am ferson, an aotrou Gall.

Bered a garan kalz, bered koant ma farouz,  
Me az kwel a bell-vro ; ha nag ez out didrouz !  
E-leiz a dud ennout o vonet hag o tont,  
Mud o glac'har enne hag a vec'h e ouelont.  
Taolioù ar c'hlaz hepken ha sonj ar Ra-Varo  
A ra d'e difronk hag a denn d'e daero  
Stouet war ar beziou hag o spered pelloc'h,  
O fedennou a zav, ar bloa-man, uheloc'h...  
— « Pelec'h out, ma bugel, a c'houlen ar vamm gêz ? » —  
— « Pelec'h out, ma fried, eme an intañvez ? » —  
— « Pelec'h out, o ma breur ? » a lavar c'hoaz eur c'hoar,  
A ouel muioc'h doudek eus donder he glac'har...

Ya, daoust pelec'h emaint, ar re a zo kouezet  
O stourm evit o zud, evit o bro flastret ?  
Tost, tost emaint ouzoc'h, kerent paour hag a ouel ;  
N'ouvezit ket penôs emañ hirie o gouel ?  
O c'horf a zo du-hont, du-hont ! Met o spered  
A nij hag a darnij a-us d'ec'h er vered.  
Rannet eo ho kalon ? Iut hen goar ha, dre-ze,  
Ne garont ket gwelet anken d'ec'h evel-se.  
En barr goude serc'hoz e teufont c'hoaz d'o zi  
Da zec'ha ho taerou, ouспен d'ho kenerzi,  
Da laret d'ec'h : « Kalon ! war lerc'h berr-gouzanvou,  
Setu kavet ganimp levezeg an Nenvou ;  
Gouelit d'ho dispartii, ni hag en em gure ;  
Gouelit !... Met arabad klemm hiroc'h hon doare.  
Hon maro, a dra zur, a vantras ac'hanoc'h,  
Hag ar sonj anezan a chom loskus ennoe h,  
Ha kalz envorioù all : hon diwezan kimiad,  
Red d'imp en em zifraim ankouaz hon c'halonad ; —  
Ar c'henavo fraillhus laret gant mouezistanket,  
A-raok koll ac'hanoc'h, met c'houi n'hon c'hlevjoc'h ket...  
Meur a lizer goude, da gonta d'ec'h hon foan,  
Lizerou a greske ho uec'h-amant, ho toan ;  
Goude, netra nemet ar c'helou sri ha yen :  
« Maro evit ar Vro », maro war ar bléne...  
Hag ho taerou a ruilh, a ruilh puilhoc'h henoaz ;  
Eun Anaon ousspenn ho peus er bloa-man c'hoaz...  
Koll evidoc'h er bed, gonid er Baradoz  
Rag an Anaon-ze, aman ouz ho kortez,  
A ginnig ho peden, ho klemmou da Zoue,  
Evit tenna warnoc'h frealz, kenerzh true...  
Kalon, eta, kerent, hag ho sellou d'an nec'h :  
Gouelit warnomp, pedit !... Met d'ar reuz bezit trec'h ! » —

Ya, ya, ar c'homzou-ze a glevfet, kerent kêz,  
Gant noz Gouel an Holl-Zent e-barz ho tiagez ;  
Me o c'hlevo ac'han hag a huanado,  
Hag, o sonjal enne, gwelloc'h me a bedo...  
A bedo evidoc'h, evit hon Anaon,  
Rak piou a zikouro kenkouls all ac'hanon ?

Oh ! nag ez eo poanians en-pad amzer-vrezel,  
Bevan gant ar goret-man pell diouzit, Breiz-Izel !

AR YEODET

(A-us da Vrod, 1 viz Du, 1916).





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 37, ball Charner, zigemer ane

**Alozehoù da « Gronz » ar Vretoned  
c'h e c'has da zoudarded ar Vro**

*Guellet.* — 20 real.  
Aotrou person Tredrez. — 5 skoed.  
An aotrou Josse eus Nooned. — eur c'houmanant ha 16 real.  
An itron Damny. — eur c'houmanant ha torziou fourmaj evit hon zoudarded.  
*Pried Job an Her.* — 8 real.  
Trugarez d'hon holl vignoned ! Bennoz-Doue, dreist-oll, d'an itron Damny, he deus bet ar vadelezh da ginnig d'hon lennerien zoudarded fourmaj graet ganti e Lannouan gant laez buoc'henned Breiz-Izel. N'em eus ket etomm da lavaret e vo deut mat he frot gant hon c'henvroiz, duhont en « trancheou ».

**Taolen ar Brezel**

**Notennoù ha mennadoù peoc'h.**

Da harpa respont ar re-Unanet da noten an aotrou Wilson diwar-benn ar peoc'h, an aotrou Balfour, ministr Bro-Zaoz, en deus skrivet eus e beañ e-unan eul lizer da laret n'outed ket ober ar peoc'h ken na vo bet lakaet an Alamagn divatrek da zishadenni adarre gwalen ar brezel war an douar.  
An aotrou Poincaré, diouz e du, en eur gaozeaden gant eun Amerikan hag a zo bet embannet, en deus lavaret an bevelep tra.  
Daoust da ze, an aotrou Wilson a zo distroet d'e vennad a beoc'h en eur brezegen a zo bet lennet gantan dirak sened ar Stadoù-Unanet : displeget en deus el lannaden-ze menozioù uhel, nemet eun tammig luziet, diwar-benn ar peoc'h hag amzer de zont ar stadou.  
Diès e vije gouzout da vat diwar-vremen Petra a zeio er-maez eus an holl eskenn-ze a vennadoù diwar-benn ar brezel hag ar peoc'h. Nemet eun dra a gaver enno holl hag a dle laouennaat pep kalon kristen ha breizad, ar goulen ma vo muioc'h a lealded hizviken o ren war an douar ha na vo ket gwasket ken ar broadeleziou bihan gant ar re vras.  
Ar brezel war dalben ar Veljig ha Bro-C'hall.  
Diouz an daou du e klasker en eun gignat a-hed holl linen ar Veljig ha Bro-C'hall. Da heul, e sav kano-

hadeg hag argadennoù aman hag a-hont : en Hanternoz en-dro da Lens gant ar Zaozon, en « Aisne » dreist-oll gant ar Fransizien, e koad Caurières war glan dehou ar « Meuse » gant an Alamaned, a zo bet dizar-bennet, hag all...  
An nijerezed a labour stard. An Alamaned o deus taolet pemp bombezen war gêr Montdidier ; kollet o deus kalz a nijerezed, darn diskaret gant ar c'hanolijou ha darn en emgannoù ouz an nijerien c'hall. Unan eus ar re-man, al letanant Guynemer, en deus diskaret, an 24 eus ar miz, e 27vet nijerez alaman. Eur « Foker » hag eun nijerez all d'an Alamaned o deus ranket disken e linennon ar Fransizien ; daou ofiser a oa war unan ané a oa dare gant an naon.

**Ar brezel er Roumani ha war dalben ar Rusi.**

Ar Roumaned, skoazellet gant ar Rusianed, o deus roet harz ha darbar da vat d'an Alamaned war linen stêr Sereth. Kemeret ganto dre asailh kêriaden Vadeni er c'hreisteiz da gêr Galatz, ar Rusianed a zo deut a-beñ da frankaat evit eur pennad war ar gêr grenv-ze, ar grevna eus an holl luen, hag a oa war var da veza gronnet gant an Alamaned.  
Nemet n'int ket bet evit miret ouz an Aotrichianed da zigas er Roumani o c'hanolijou pounner A-drugarez d'ar c'hanolijou-ze setu an Alamaned o'h adkemeret o c'hrenv. Kouezet e vije gano Manesti, penn eur pont war stêr Danub, N'eus ket meneg betekhen, koulskoude, e vijent deut a-beñ da dreiza ar stêr.  
En hanternoz eus linen ar Rusi, dirak Riga, porz-mor bras ar mor Baltik, ar Rusianed a zo aet war-raok oa vat, ha rediet ganto an Alamaned da c'hervel en-dro darn eus o zoudarded eus ar Roumani. Eui mat a zizamm evit ar Roumaned !

**War vor**

Eul lestr-brezel alaman, hanvet ar « Vinex » war a greder, en deus tec'het diouz Kiel, porz-repu an Alamaned e-lec'h e vironet o skouadrennad er gwasked ; treizet en deus ar mor Bras ha digouezet war aochou ar Brazil, Amerik ar c'hreisteiz.  
Gouledet en deus eno eur bern listri-keuwerz, saoz an darnvuia anezo, nemet unan a Vro-Japan hag eur pemp bennak a Vro-C'hall. E-touez ar re-man ez eus eul lestr dre lien, an « Nantes », eus Naoned m'her c'hredfe a-walc'h. Lavaret e oa en doa al lestr saez « Glasgow », kaset

ar preizer d'ar strad, nemet n'eo ket gwiriet c'hoaz ar c'helou gant Mer-deadurez Bro-Zaoz.  
An 23 eus ar miz, e-kreiz noz, eur strollad listri skanv alaman, daouzek anezo war a greder, o vont da vombeza aochou Bro-Zaoz, a zo digouezet, dirak aochou an Holland, gant eur skouadrennad listri skanv a Vro-Zaoz. Goude eun emgann start e renkas an Alamaned tec'het. Unan anezo, ar V-59, en deus en em repuet e porz-mor Ymuiden o Bro-Holland, hag hen gwall-aozet ha kollet gantan an hanter eus e vartoloded, 80 den lazet pe c'hloazet war ar 160 a oa en e vourz.  
Diouz o za, ar Zaozon o deus kollet eul lestr enep-tarzer (« contre-torpilleur ») ha 47 eus ar vartoloded war ar bourz anezan.

**KUR C'HORNIG-DOUAR  
WAR AN TALBEN**

Va lochen. — Bered ar zoudarded  
E korn ar c'hoad, war eun dorgen, Eman azezet va lochen, Hanter-guzet gant an deliou, Ar yeot glas hag ar bokedou.  
Aman n'eo ket drailhet ar gwez, Enno e sav deliou nevez : A-gleiz d'imp eman bourc'h Trasy, Ruilhet ar vein, freuzet pep ti.  
Kredi 'hellit n'emomp ket pell Diouz darvoudou kriz ar brezel : Izeloc'h eman ar ved... Diskennit ganen d'he gwelot.  
En douar noaz, tenval ha yen Eo astennet korfoù mibien, Mibien ar Frans ha mibien Breiz... Lanva 'ra d'ezo o zad keiz.  
Bered santel, tachen boanius ! C'houi, kamaraded enorus, Kouezet eur deiz evit ho pro, Repoz d'eo'h !... Deut 'oa ho tro.  
Henvel oc'h ouz bokedou kaer Falc'het en hanv er prajeier ; C'houi 'oa dare evit an Nenv ; Ra vo graet bolontez Doue !  
YANN MARI PAUL.

**KELIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

Hon c'henvroad Jul Gros  
Hon c'henvroad, Jul Gros a Dredrez, hag a oa chomet pell hep rei eus e gelou, en deus kaset d'imp

eur pakad eus ar c'helouennou galleka vez embannet bremen er 41vet rejimant, da zidui ar zoudarded. Kavet en deus an tu da zila eua nebet brezoneg evit hon c'henvroiz e-mesk an holl c'hallegach-ze. Trugarez d'ezan en hano Breiz ! Setu aman eun nebet linennou tennet eus e genta pennad « Salud d'ar Vretoned » :  
« Ar re a zo, tremen daou vloaz 'zo, o ruza o zamm kroc'hen daou-c'hant leo diouz ar gêr, ar re o deus hadet o c'homzou brezonek war vord ar « Sambre » hag ar « Marne », en plénennou Arras, en koajou an « Argoane » ha war doseonnoù Verdun, ar re-ze o deus gwir ma vo graet stad ouz o yez kaer, goude d'ez beza bet keit-all er boan. »  
Bevet ar Vretoned hag ar brezoneg !  
**Kelou mat eus an aotrou abad Perrot**  
Hon mignon ker, an aotrou abad Perrot, rener « Feiz ha-Breiz », a zigas d'imp al lizer-man da heti ar bloavez mat. Bloavez mat d'ezan ivez a greiz kalon, en hano holl lennerien ha mignoned Kroaz ha Feiz ha Breiz !  
Aotrou ker,  
Bloavez mat d'eo'h e-doug 1917, ha gras d'emp pelloc'h da welet ar peoc'h a nevez war an Europ er mi-zioù kenta-man ! Anez, e vo bras c'hoaz ar c'hollou a vo red gouzanv eus an eil tu hag egile...  
Ma 'zo bepred klanvdiour e E... Pemzek miz a zo emoun aman. Daoust peget all c'hoaz e chinon ?  
N'eus ket pell em eus bet kelou eus va mignon mat, Erwan ar Moal, a zo diwallet ha diwallet mat gant Itron Varia a Wir sikour.  
Kenavo, aotrou ker. Bloavez mat d'eo'h ha da Groaz ar Vretoned. A wir galon.  
P.  
**Kelou eus ar 47vet**  
Tennet eus eul lizer digant hon mignon ha lenner ker, an aotrou abad... — Trugarez d'ezan ha bloavez mat d'ar 47vet !  
Ar 14 a viz Genver, 1914.  
Aotrou ker,  
Bremen emomp aboue an deiz kenta a c'henvver pell diouz an trancheou, kuitaet ganemp bro ar « Somme »...  
An amzer a zo gwall-griz ha yen dre aman, e-barz eskopti an aotrou 'n eskob Senne.  
Bloavez mat d'ech ha yec'hed digant Doue. Hagras d'imp da c'hallou,

distrei holl yac'h d'ar Vro er bloavezh-man goude an trec'h hag ar peuc'h !  
D'ec'h a greiz kalon.

P. M. L.

Kelou eus an aotrou Moal. Al levrig « Geriou brezonek ha keumraek » a zo en em gavet re zivrezat.

Tennet eus eul lizer digant an aotrou Moal :

..... Trugarez d'ec'h da veza kaset d'in al levrig nevez « Geriou brezonek ha keumraek ». Me 'garje vije bet diguezet daou viz a-raok, rak ar re a zo deut da gemeret hon lec'h, hag e oamp a-dost d'ê a-raok, a oa eus Skoz, Bro-Geumri hag

Iwerzon, kalz anê. Kaozeet em eus gant unan yaouank eus Cardiff, met ne zeblantet ket gouzout keumraeg. Re-all, avat, hon doa kavet, eur wech, hag hon doa savet kaoz gante o kanaan ar geriou kentan eus « Hen wlad fy Nhadau », « Bro go va Zadou ».

Me 'zo yac'h a-walc'h, a dragarez Doue. Aman ez eus nebeut a erc'h, ha n'eo ket gwall-yen.....

Rei a reomp da zonj penôs e vez roët evit netra al levrig « Geriou brezonek ha keumraek ». d'hou lennerien sou larded, c'hoant d'ê klask en em glevet gant ar Vretoned a Vreiz-Veur.

## CHAPELED AR ZOUDARD

D'an aotrou Vallée.

Setu daou vloaz hanter fin n'eus ket d'ar brezel !  
Ho zoudardig bihan 'zo pell diouz Breiz-Izel...  
Ha c'hoant ho pe gouzout kerent ker, va zud vat,  
Petra 'ro d'am c'halon nerz e-pad ar stourmad ?

Evit ho tizoania ha rei peuc'h d'ho spered,  
Setu aman petra am laka dinec'het :  
Unan am eus kavet, d'in ar gwella mignon,  
Hag a ro er stourmad nerz, frealz d'am c'halon.

Ganet e Breiz-Izel, e parrezig Gwiklan,  
Karan he farkeier, he c'hoajou hag he lann ;  
Met dreisto, e Mari, Gwerc'hez pur ha dinam,  
Lakan ar fizians desket d'in gant va mamm.

« Ni ho salud, Mari » pedennig berr ha c'houek,  
A c'houlzou e latin, e brezoneg, galleg ;  
Va c'hredit 'ta, m'ho ped, e-touez va mignoned  
Ar c'henta, a dra zur, ez eo... va chapeled.

Abaoe va c'havel, e-pad va yaouankiz,  
Karan ar maeziou drant, o feoc'h hag o frankiz ;  
E mesk ar prederiou hag holl safar ar bed,  
E karen lavaret eul loden chapeled.

Ar brezel 'zo deuet, — na pebez rann-galon ! —  
Pep-hini a zilez tad, mamm, gwreg ha mignon...  
Setu int aet war-raok, eta, an holl wazed,  
Ganto, en o godel, medalen, chapeled !

Kaset war an talben, lec'h ma vo ar stourmad,  
E welomp trubuilhou 'leiz-tre hon daoulagad ;  
Evit dere'hel mat penn ouz an Alamaned,  
E lavaromp bemdez, dre-oll, ar chapeled.

E-kreiz an noz, luc'hed ha strak ar c'hanoliou  
A dreuz, en eur freuz d'ouder ar c'hoabrennou !  
'Vit hor miret neuze ouz ar brasa m'orc'hed  
E c'halvomp d'hor skoazel buan ar chapeled.

A-raok mont d'an dachen lec'h ma ruilho ar gwad,  
Pe a-raok lakaat e ganol da greinchat,  
Pep soudard kalonek en devo lavaret  
En doun eus e galon, gant feiz, e chapeled.

Ma vez tizet, glozet gant an enebourien,  
E ray eus e vuhez, 'vel ar wir-Gristenien,  
Ar sakriñs d'ar Mestr, da Grouer mad ar bed,  
En eur starda 'n e zourn atao e chapeled.

Setu penôs e vev, e varv ar zoudardad,  
Gant feiz yac'h en o c'hreiz evel tud vadezet ;  
Pedit 'ta a galon, dalc'hit ganti gant bepred ;  
Lavarit evito n'eus forz ped chapeled !

Ha goude ar maro n'ez aimp ket d'an ifern,  
'Mesk an holl serpatad 'zo eno bern-oc'h-barn ;  
Rak e-touez drain, ardou, hirvoud an drouk-spered  
Ne vez ket kavet lec'h d'ar mistra chapeled.

Evit hor pec'hejou ez aimp d'ar purgator,  
Met warnomp ne gredan e ve serrat an nor,  
Rak hor Patronez dous, sur, a glasko abred  
Hor c'here'hat ac'hano 'vit kaout he chapeled.

Er Baradoz, eta, e vezimp evurus  
Dre ar Werc'hez Vari, en eur joa peurbadus,  
O lavaret eno ha betek fin ar bed,  
Gant ar zent, an élez, hor brava chapeled.

Echu va Rosera, gant he femzek mister,  
— O klask lavaret kalz n'or ket 'vit beza berr ! —  
Chomomp 'ta unanet a feiz hag a spered,  
Ha lavaromp 'vit se bemdez ar chapeled.

YANN MARI NORMAND.

E-kreiz menezioù ar Vosj, e-touez an erc'h,  
d'ar zul 14 a viz Genver 1917.

## AN « DIGREIZENNI »

Eman an aotrou Hennessy o paouez embann eul levrig nevez « Régions de France », hag hen leun, evel e levriou all, a « bromesaou kaer ».

Nemet, mar bez heuilhet, em eus aon, e vo « paeamanchon laosk » !

Setu aman, diwar-benn levrig nevez an aotrou Hennessy, ali hoa mignon Yann Kerpert.

Evit bevaat rann-vroioù ar Frans goude ar brezel, an aotrou Hennessy a fell d'ezan en em harpa war ar « sindikajou » ha war ar bolitikerien.

Hogen, heb drouk-prezeg ouz ar sindikajou, e c'hellomp lavaret ez int dishenvel diouz ar breuzioù-labour (pe « corporations ») gwechall.

Ar re-man a zave, int-i o-unan, reolennoù e sell eus kennerzi ha bevaat ar micherion.

Ar sindikajou a vez savet d'ezo lezennou gant politikerien, hag e tenont da wellat stad al labourerien, ha neket da griski ha da vevaat ar micherion.

En em harpa war ar sindikajou n'hellor bet da ober, eta, heb en em liamma ouz ar bolitikerien veskerien diouz eun tu, heb en em zuja ouz labourerien berr-wel, dispac'herien zoken a-wechou, diouz an tu all.

Gwasa 'zo, evel ez eus bet meneg aman c'hoaz, an aotrou Hennessy a zianzav a-grenn hon broadelez, pa fell d'ezan ranna Breiz en daou damm, unan gant Roazon, egile gant Naoned da gêr-benn. Diverket e vije gantan betek hano Breiz : an taum kenta e vije ar « Rann-vro niveren 2 », an eil taum ar « Rann-vro niveren 6 ».

Dianzavet hon Bro ha kenent a ra he buhez : yez, gizioù, istor, galvedigez pobl, en he fenn politikerien hon reufe a-dreuz, ampallarzet ma vije an hent d'ezo c'hoaz gant dispac'herien war zigarez sindikajou, pell diouz sevel, e koueztemp doueoc'h-douez, hag hor Breiz, — pe gentoc'h ar « Rann niveren 2 » hag ar « Rann niveren 6 » a zalc'he al lec'h anezi, — a dufe da veza gwasaoc'h kaot gwech eget ar gwasa galou, eun ifern e gwirionez !

Doue d'hon miro diouz Hennessy hag e vignonned !

Evel-se bezet graet !

## ROLL-GERIOU

(Kendalc'h)

Geler (gwregel, gant an artikkel « ar c'heler »), catifolique, Lanniliz, Plou-dalmézeau.

Keler (gourell, gant an artikkel « ar c'heler »), feu-follet, Landivisiau, Haut-Léon.

Kiliet, pris par le feu-follet. Kiliet ou, je suis pris par le feu-follet.

Keler, aval-keler (gourel), noix de terre.

Digounet, vorace.

Tourked (gourel), muselière ; tourkedet, muselé.

Klaouïeter (gourel), petite boîte, en bois généralement, et servant à mettre de la toile brûlée à l'usage des fumeurs.

Palimet, durcie, en parlant de la terre. Haut-Léon et Bas-Tréguier.

Famin, puañteur. Eur famin a zo er c'hraou.

Froumal, faire le bruit de la batteuse, de l'automobile, etc. Grand murmure. Haut-Léon. Tréguier, fraonwal.

(Da heuilh).

L. AR FLOC'H.

## Geriou brezonek ha keumraek

Deut eo al levrig nevez er-maez ar wash ! Ennan e vo kavet k'ner-ha-kenver geriou ha frazennou aet e brezoneg Breiz-Izel hag e brezoneg Breiz-Veur.

Roët e vo evit netra d'hou lennerien zoudarded o devo c'hoant da glask en em glevet ha k'ozal gant hon c'henvroù a Vreiz-Veur.

15 gwenneg e vo ar priz evit ar brenerien.

### Eur werz nevez diwar-benn ( Stad ar Brezel )

Barz Gwerliskin Charlez Rolland, en deus savet ha lakaet moula e ti Lajal, Montroulez, eur werz nevez diwar-benn « Stad ar Brezel », hag a blijo sur mat d'ar Vretoned.

Ouspenn disklêria ervat « Stad ar Brezel », Charlez Rolland a ro en e werz alioù ha kentelioù eus ar pouezusa diwar-benn harpa difennerien ar vro dre rei aour ha sikour an « Amprestou ».

Skignet e vez ar werz gant eur strollad, pe « Comité », dindan renadur an aotrou Garrek, ar barz mat. Skriva d'ezan, 21, place St-Martin, Montroulez, heb en deus c'hoant da gaout ar werz-man ha traou all c'hoaz embannet gant ar « Comité ».

Pewar gwenneg eo priz ar werz nevez ; diskenn priz pa brener dre galz.

### La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc.

Buhez hon c'hevroad brudet, an aotrou Lloyd Georges, a vo displeget war « Kroaz ar Vretoned », ar miz a zeu, gant hor mignou ker P. Mocaer.

O respont diweza pennad an aotrou Moal a c'houlenne ma vije displeget aman buhez Lloyd Georges, ho c'henlabourer ker, an aotrou Mocaer, en deus skrivet d'imp eus Cardiff, e-lec'h m'ea em gav breinan e-touez kenvroz ministr bras Breiz-Veur, al lizer mat-nan Beanoz-Doue d'ezan evitan en hano holl lennerien « Kroaz ar Vretoned » !

Keneil ker,

Kalz a blijadur am eus bet o lenn diweza niveren « Kroaz ». Me 'wel e vije eun dra vat, hag a rafé plijadur da galz, displega, evel m'hen goulen an aotrou Moal, buhez Lloyd Georges.

Siouaz, n'em eus ket a amzer breman. Hogen, moarvat, e c'hellio skriva evit « Kroaz » eun nebeut pennadoù berr, ar miz a zeu, diwar-benn ministr bras Breiz-Veur. Pep tra am eus evit ober eul labour a zoare : heuliet em eus e vuhez hag e labourioù ; levriou am eus hag a ra kalz da anaout warnan ; gwelet ha klevet am eus anezan ha zoken komzet ma-unan gantan hag anaout a ran tud hag a zo keneiled d'ezan...

Gant-se, lennerien ger, diwar ar miz a zeu, e kavot aman, displeget gant hon mignon mat, « Buhez Lloyd Georges », ar Brezad brudet, savet eus an izela stad da renk Ministr-meur hag Reaer ar brezel-man.

Ar Reaer-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume





IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bre-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEDET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An sotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

Per Guédès. — eur c'heumanant hag 8 real.

Trugarez a greiz kalon d'ho mignon ha kenlabourer ker, Per Guédès!

**Taolen ar Brezel**

War dalben ar Veljig ha Bro-C'hall

Gwasa krogad an eiz dez tremenet war linen Bro-C'hall a zo bet e-kichen Verdun. An Alamaned o deus asailhet eno, ar yaou 25 eus ar miz diweza, etre koad Avocourt ha krech'hien an Den-Maré. Dizarbennet int bet da vat ha n'o deus gallet derc'hel, war-bouez kollou bras, nemet eur peñnad foziou. Ha c'hoaz e voe diframmet diganto, evit al loden vrasa, en adasilh ar Fransizien, antrouz 26 eus ar miz.

Er « Somme », e talc'h ar Zaozon da grignat linen an enebourien dre argadenn stank-ha-stank. Ar zadorn, 27 eus ar miz diweza, eo eun argadenn evel-se, e teujont a-benn da dapout eun taol 350 Alaman da brizonerien, en o zouez 6 ofiser, ha da zerc'hel da vat eul lec'h emzao a bouez evito.

A-hed an holl linea an nijerien a labour start bepred. An nijer brudet Guyonmer en deus diskaret, ar 26vet a C'henver, e 30vet nijerez alaman.

War linen ar Koumani hag ar Rusi

Torret eo breman o lans d'an Alamaned er Roumani ha ne c'hounezont tachet ebet ken.

En hanternoz d'ar vro, en-dro da gêr Kimpolung, ar Rusianed a zo bet trec'h d'ezo, ar 27 eus ar miz diweza; kemeret o deus da brizonerien eun unnek kant beñnak a zoudarded ha 32 ofiser.

Dirak porz-mor Riga, war ar mor Baltik, ar Rusianed o doa graet eur mat a lamm war-raok, o kinnig kemeret Mitau, kêr greav an Alamaned. Ar re-man o deus ranket digas zoudarded e-leiz hag ez eus savet, da heul, emgannou start hag a bad c'hoaz. Betek-hen ar Rusianed n'o deus ket diskroget diouz an darn o doa dalc'h.

Er C'haliis ivez, e-lec'h ez eus eun armead Turked dindan renader ar prinz Leopold a « Vavier », ar Rusianed o deus asailhet eus ar brava,

o kemeret linennad genta an Turked ha boulc'ha an eil linennad.

Ar Zaozon en Azi-Vihana

En Azi-Vihana, a-hed stêr « Tigr », ar Zaozon o doa kaset, eur peñnad mat a zo, eur rann-arme war-zu Baghdad, kêr-benn ar c'horn-ze eus bro an Turked. Nemet, o veza n'oa ket kreñv a-walc'h, — 3.000 Eorpead a oa enui hepken, — e renkas ar rann-arme-ze en em rei d'an Turked e kêr « Kout-el-Amara ».

E-pad an holl viz tremenet, ar Zaozon o deus poaniet start da zi-c'haoui ar c'holl-ze. Emgannou a zo bet an 13, an 19 hag ar 25 a c'henver, er c'hreisteiz da « Gout-el-Amara » Peñskubet an Turked, setu frankaet an hent a-nevez d'ar Zaozon da vont da « Gout-el-Amara », hag a'haner war-zu Bagdad.

War vor

Ar Zaozon o deus kollet dirak aochou Iwerzou eul lestr-skoazeller, al « Laurentic », 14.892 tonnell. Moret e oa bet e Beldast e 1908 gant ar gompagnonez « Oceanic », he doa savet ivez eo « Titanic » bet kollet er mor Bras a-raok ar brezel, hag ar « Britannic » goueledet er mor Kreizdouarek n'eus ket pell. Eun darn hepken eus ar dud e bourz al « Laurentic » a zo bet savetaet.

Ar 25 eus ar miz diweza, al lestr « Amiral Magon », 5.666 tonnell, p'edo o kas eun 900 beñnak a zoudarded da Zalonik, a zo bet goueledet gant eur splujer alaman. 809 eus an dud er bourz anezan a zo salo.

Notennoù diwar-benn brezel ha peoc'h.

Eman ministr an traou a zivavaez en Alamagn o paouez embann eun noten e respont da hini an sotrou Wilson.

An Alamagn, emezan, a zo tuet da ziazeza ar peoc'h, evel m'her goulenn an sotrou Wilson, war vuoc'h a lealdad etre ar stadoù; rei a rate he frankis d'ar Veljig, nemet e fote Breiz-Zaoz, diouz he zu, hec'h emrenorez da Iwerzou. En gortoz, e kaso war wasaat c'hoaz, diwar ar miz-mañ, mestadolioù he listri-splujerien.

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc.

**AN ERC'H**

Genver 1917

An erc'h a zo war an douar, Rak-se, n'eo na tomm na klouar. Miz Genver, gant e linser wenn, A zigas d'eomp ar yenien. Abaoe deoc'h ar gwez dero A zo louedet o baro. Ar pezh a ra d'ezo tevel Eo ma n'eus ket eur mouch avel; Ar vantel wenn war o diskoaz A vir outo da veza noaz.

Sioul an traou!... En hent o tremen Ne weler ket eur penn kristen, Ha ne glevan ken trouz ar-maez Nemet klemmou eul labour kaer: Dallet ez eo gant erc'h ar goanv A zo ken skedus dirazan.

Pa 'z an er-maez eus va lochen, E kerzan gouestat ha kempen; Me 'gav eo eur blijadur vlin Bale didrouz dre an erc'h fin, Bep an amzer lskat evez Na deufe da drei ar votez.

En eun taol-kont, trouz ar c'hanol A reug ar peoc'h hag a c'hozmol; Ar Voched, hon enebourien, Ne zoujont amzer ebet ken.

En doureier, e traou ar c'hoad, Eo adarre skuilhet ar gwad... Eur c'horf-maro war eur c'hravaz D'ar vered emeur o tigas, Eun den yaouank ar c'hlas c'houezek, Bremaik 'oa c'hoaz beo buhezek! Mervel en hanv a zo garo, Er goanv eo ken trist ar maro. Ha warc'hoaz war ar bez klozet An erc'h gwenn-kann a vo berniet.

Erc'h maout, digatar ha sklér, Bleun skav a droïdell en ér, Goudourit ar c'heuneud dister Hag ed yaouank er parkeier... C'houi 'zo hag a chomo bepred Ar skeuden gaer eus ar c'hlanded!

YANN MARI PAUL.

**KELIER RUS HON MIGNONED**

A ZO ER BREZEL

Kelou eus ar 94vet war droad

Al lizer mat-man a oa en em gavet ganimp ar zizun dremenet, re zivavez evit gallout e voula. Trugarez hag hon gwella menoz d'ho c'henvroad ker J. Omnès, en deus e skrivet!

En talben, 17 a viz Genver 1917.

Aotrou ker,

Dont a ran adarre da skriva d'ec'h eur gir beñnak, rak pell 'zo n'em boa ket gallet kas d'ec'h eus ma c'helou.

Mat ec'h a ganin breman a drugare Doue, goude bezan gouzanvet poaniou er « Somme ». Eno ar c'hanolioù a skoe kalet.

Breman omp digaset er C...., d'ober eun tammig diskuiz. Kavout a ran kalz gratis aboue, rak aman ar Voched n'int ket gwall-zrouk.

Nemet an amzer a zo det da vezan fall; ober a ra skorn hag erc'h. Hon c'henvroad Laouenan, hag a oa ast er « permission », a zo kouezet klanv er gêr gant ar boan-izili... Fizians am eus e c'hellin mont, evit gouel ar Chandelour, d'ober eun tamm tro da Vreiz-lzel...

Ma gwella gourc'hemennou d'ar « Groaz » ha d'ho holl lennerien ha mignoned. Ho kenvroad.

J. O. (94vet rejimant).

Kelou eus an 248vet

Kelou mat a zeu d'imp eus hon mignon F. Goareguer, a Louargat, hag eus an 248vet. Evel re ar 94vet, hon c'henvroiz ker eus an 248vet o deus kalz da c'houzanv gant ar yenien. Pedi a reomp hon lennerezed a hall hen ober da gas gloanach d'ezo eus o gwella.

Ar pemp war-ugent a C'henver.

Aotrou ha mignon ker,

Pell 'zo n'em eus ket gallet kas d'ec'h eus ma c'helou. Mat a-walc'h eman ar bed ganin hag ive gant ma c'henvroiz eus an 248vet, a drugare Doue.

Met kalz hon eus da c'houzanv gant ar gwall-amzer! Dre aman eo gwall-galet ar goanv. Ugent de 'zo ez eus erc'h war an douar, ha breman e ra skorn spontus.

Daou de 'zo emomp er c'hamp, goude daou-ugent devez foziou, n'eus ket bet, e-pad an holl amzer-ze, kalz a zezveziou brao.

Kloza 'ran en eur reketan d'ec'h demat ha d'ho c'henvroiz lennerien « Kroaz ar Vretoned », hag en eur c'houlenn digant Doue digas d'imp amzer vreo hag ar peuc'h da heul.

Ho mignon ha kenvroad leal.  
F. G.

Kelou eus hon c'henvroad ker,  
« Pôtr Goelo ».

Pell 'zo n'ho doa ket bet a gelou eus hon mignon ker, an sotrou Menguy, medesin-skoazeller, a skrivas aman meur a lizer dudius, sinet gantan « Pôtr Goelo ». Bet eo en emgann V... gant e vreur beñnak a zo « telefoner »; gounezet o deus eno bep a groaz-vrezel. D'ezo o daou gwella gourc'hemennou Rener koz hag holl lennerien ha mignoned « Kroaz ar Vretoned! » Hag hon gwella bejou, ivez d'o daou vreur all, rak pevar breur emaint war an talben-brezel.







IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro

Y. M. Normand..... 20 real.

Trugarez d'hon lenner ker, en deus kavet an tu, hag hen soudard, da zioueret peadra d'ober eun aluzen ken madeleuz da « Groaz ar Vretoned »!

Taolen ar Brezel

Da heul an notennoù.

Torridigez daremprejou.

Lavaret e oa bet, ar zizun dremenet, he doa an Alamagn disklêriedre eun noten e vije gwaset war ar brezel dindan-zour gant he splujerien. Goudelet e vo gant ar re-man hiviziken, heb ali na kement, kement lestr a gavint dirak aochou ar re-Unanet, pe vrezelourien e vo al listri-ze pe er-maez a vrezel, Amerikan hag all.

Da heul mestaoliou ar splujerien alaman e derou 1916, an aotrou Wilson, rener-meur ar Stadou-Unanet, en doa ranket c'hoaz sevel e vouez. Gourdroutet en doa, d'ar c'houlz-se, terri en daremprejou ete an diou vro. An Alamagn he doa pleget ha graet promes-ou.

Setu hi breman o teurel d'ar bern ar proceasou-ze! Den d'e c'her, an aotrou Wilson, ar 4 a c'houevrer, en deus torret an daremprejou ete ar Stadou-Unanet hag an Alamagn. Disklêriet n'eo ket ar brezel evit-se, met war-nes beza.

War-lei c'h Stadou-Unanet an Amerik, ar stadou all er-maez a vrezel a zav o mouez. Ar Spagn he deus embannet eun notennig lentik a-walc'h. Lenc'h c'hoaz e vezo, am eus aon, notennoù ar Sois, an Hollaad, an Danmark, hag all, dalc'het ma 'z int gant an aon rag o amezien c'halloudek. Gant stadou Amerik ar C'hreisteiz, ar Breiz en o tenn, e teuto, moarvat, krenvoc'h stourmadeg.

Ne vern ket! pe heuilhet e vo gant ar re-all pe ne vo ket, an aotrou Wilson en deus skodet eno eur brao a laol, a zeuto traou pouezus en e c'houde, sur mat!

War al linennou-brezel.

War linen ar Veljig ha Bro-C'hall kanoladegou hag eun nebeut krogadou aman hag a-hon, beteg el Loren hag en Alzas. Pouezusa taol a vo graet gant ar Zaozon. En noz

etre ar zadorn, tri, hag ar zult, pevar eus ar miz, e kemerjont tost da Beaucourt-war-Ancre, en Hanternoz, eur pennad lozou alaman, war eun douder a 1.200 metr. Da heul, kêriadenn « Grandcourt » a vo bet dalc'het ganto ar 7 eus ar miz.

O nijerien o deus bombezet Zeebruges, porz-mor an Alamanned evit o splujerien, an 2 eus ar miz hag an deiz war-lerc'h. Start e labour bepred an nijerezed.

Krogadou a zo bet er c'hornog da Riga, porz-mor ar Rusianed war ar mor Baltik, e-lec'h o dije c'hoant an Alamanned da zizarben ha da bellaat ar Rusianed a oa aet war-raok ha tostaet ouz Mitau, krenva kêr an Alamagn er c'horn-bro-ze. Betek-heu ar Rusiaad a zalc'h penn ouz o asailhou.

En-dro da Gout-el-Amara, er « Vezopotami », Azi-Vihana, ar Zaozon o deus gouezet tachen adarre. Da gredi eo e kemerint heb dalc'het pell ar gêr-ze digant an Turked.

War vor

Kelou a zo e vije bet goudelet gant ar splujerien alaman, an deiziou diwez-mañ, eun ugent lestr bennak saoz an darnvina anezo.

War al lestr-roueder (« chalutier »), « Yvonne », goudelet ganto, tri den a zo bet laret.

Eul lestr-roueder all, ar « Cobra », taget a-wel da enez Gêr-veur gant eur splujer alaman, en deus kaset hemañ d'ar strad goude eur emgann tenn a badas tri c'hard eur. Kabiten ha martoloded ar « Cobra » a zo bet roet gourc'hemennou d'ezo gant prefed-mor an Orient evit o zaol-kaer.

KREBIER RUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL

Hon Rener mat, an aotrou Bocher, distro d'ar Vro. — Karantez-Vreiz

Setu aman eul lizer mat digant an aotrou Bocher, o paouez distrei d'ar gêr, goude d'ezan klennel e broioù pell ar Zav-heol. D'ezan hon gwella hetou ma pareo buhan, ha sentomp ouz e aliou ken fur ha ken leun a garantez-vo da brienti Amzer-dazont hon Breiz karet goude ar brezel.

Mignon ker,

...Setu me dizro adarre d'am Breiz karet, dizro eur wach ouspenn!

Ken alies e renkan he c'huitat ma kavan eur blijadur dreist he gwelet bep tro. N'eo tamm hevel ouz ar broioù all. Hen gouzout a raen a raok ha breman he gouezan e hoaz gwelloc'h, da laret eo, evit beza gwirion, breman e tanvean muioc'h he c'haerder, he c'hoantiz, he braventez, hag ar c'hrog ken bras he deus war hon c'halonou.

N'eus ket unan eus he bugale ha na zontje ket evel-dou. A-raok ar brezel e oa meur a hini hag he c'haer, a dra zur, met heb beza biskoaz pouezet er garantez-se na heb gouzout ervat petra e oa. Breman pep-hini ac'hanomp a ar pegen frank eo en e galon al lec'h a zo miret, rôet, gouestlet d'ar vro.

Kement-se, a drugarez Doue, a dalvezo d'imp diwezatoe'h.

Rak, kaer am eus klask ha sellet, kaer am eus beza redet ha gwelet broioù estren, kement en Bro-C'hall hag er broioù pell, kaer am eus beza ruilhet ar morioù, biskoaz war ma hent a'em eus kavet na ne gavia eur vro par d'hon hini, na tud evel hon c'henvroiz.

Hon c'henvroiz, hen anzava ran, n'int ket holl sent bihan; met tud ar broioù all a zo pelloc'h c'hoaz diouz ar zantelezh, kredit oc'hanou! N'o deus zoken, an darnvina ané, na furnez na poell. Hag, ouz o gwelet, ouz gwelet o doars-bevan, ouz klevet o c'homzou, en em c'houlomp alies, ni Bretoned: « Penôs e c'hall tud o vrezeli, tud gedet gant ar maro, bevan evel-hen? »

Ha n'eo ket gwir kement-mañ, soudarded ma bro?

Ya, ya, hon Breiz a zo eur vro ar c'haeran, ha huanadi a reomp holl war-lerc'h an dev-z banniget ma tistrofomp d'ez evit mad.

Pegoulz e tarzo evidomp an devez-se? Pegoulz e welfomp dizro hon brezelourien dêr, hon frizonerien baour?

Devez poanuis, rak hon zontj a yelo kerkont war-za ar garent hag ar vignoned kouezet evidomp.

Dre-za devez an distro a chomo ive eun devez a ziouder hag a evursted didrouz. Lavenez eur rumm a vo, evel ouzoc'h, glac'har eur rumm all.

Forz a zo! pegoulz e welfomp bet trec'h d'ar reuzioù gwasan, e ouezfomp ive d'ar-heu penn d'an dristidigez en em lodo, war hon bro war-lerc'h ar walen.

Ha bepred, buhan ar peuc'h! Buhan an distro!

Kalz a vo d'ober goude; kalz, kalz!... Gant skouzel ar Mestr ha dellidou hon faniou e teufomp, a gredan, da drec'hi pep skoiñ.

Bevet Breiz eta, ha ra biñjo gant he bugale sklêrijannet he lakaat uhelloc'h, kaeroc'h c'hoaz ha dishualoc'h goude ar brezel!

AR YEODET.

Kelou eus eur Breizad mat. — Kentelia pobl Breiz!

Hon c'henvroad ker, an aotrou Lautrou, en deus skrivet d'imp eus an talben e-lec'h m'eman medesinskoazeller, al lizer mat-mañ, ennan eun ali eus ar gwella diwar-benn kentelia pobl Breiz-Izel. Goude ar brezel, dreist-ou, mar karomp sevel hon bro hag hec'h eüna da vat war hent an arakaat, e teimp en em harpa war ar skianchou. Dlead ar Varzed e vo skigna an deskadurez-se e-touez ar bobl, da brienti an Amzer-dazont.

Digas a reomp da zont eman eul levrig eus an talvoudusa evit peza zell d'eskadurez ar skianchou o paouez dont er-maez ar wisk: « Ar Qui-ziegezh e-touez ar Gelted koz », ennan eur bern gerioù brezoneg yac'h, o sellet ouz an holl skianchou.

Setu aman pouezusa pennad eus lizer hon mignon:

31 a viz Genver, 1917.

Aotrou ker,

Trugarekaat a ran ac'hanoc'h evit ho kelaouen. Atao e tigemeran anezi gant laouenedigez. Digas a ra d'in sonj, bep sizun, eus al labour a c'hortoz Breiziz bro-garerien goude ar brezel....

Red eo d'ar re ac'hanomp a zo desket a-walc'h skriva evit o c'henvroiz taolennou sklêr ha berr eus skianchou, ijinoù ha deskadurez ar bed en amzer-mañ....

Kavout a ra d'in e tlefe al labour-ze plijout d'ar varzed vat....

D'eoc'h e karantez Breiz.

L...

Hon c'henvroiz ker e kamp M...

Hon gwella trugarez ha menoz d'hon c'henvroad ker, G. Mazeas, ha d'an holl Vretoned vat a zo gantan e kamp M...! Setu aman lizer hon mignon:

An 30 a viz Genver 1917.

Aotrou ha keavroed ker,

Daoust ha n'en em c'houlennit ket c'hoaz ha n'ou ket maro?... Setu eur gwall-bennad abaoe n'em eus ket roet d'eoc'h eus va c'helou. E gwirionez, hon eus a-walc'h da ober gant hon zervich, rak abaoe hon eus kuitet lozioù ar Ch... evit dont da renoz e kamp M... ne chom ket ganeomp kalz amzer da goll.

Evit gwir, n'haller hevel renoz an dervelioù a dremenomp aman; ada-

lek ar mintin beteg an noz emsomp gant hon troiou, hor « manoeuvres ».

An amzer a zo kriz meurhet. An erc'h, kouezet abaoe ugent dervez, a zale da deuzi; deut eo da skorn hag ez eo diès bale dre an henchou. Evit lojeiz ton eus tiz koad, dister ar goudor anezo. Truezi a ran d'ar vignoned a zo breman er foziou.

Rejmant Gwengamp a zo ganeomp. Hon aluzenerien o deus de raouet eur retred, ma klevet enni gwech ha gwech all pizegennou ha kantikou brezonek. Diwezatoch e komzin d'eo'ch eus an doare ma vezo tremenet.

Me 'gred na zaleimp ket da vont ac'halen. . . .

Bepred ho kenvroad leal.

G. M.

Pa guitaint kamp M... marteze hon c'henvroiz a vezo kaset, darn anezo, d'en em unani gant ar Zaouzon. Ar re o dije c'hoant da gaout al levrig « Geriou brezonek ha keumraek », d'en em glevet gant Breiziz Breiz-Vreor, n'o deus nemet goulenn anezan digant Rener koz « Kroaz ar Vretoned ». Kaset e vezo d'ezo evit netra.

**Talvoudege al levrig « Geriou brezonek ha keumraek ».**

En eur zigas d'imp e aluzen ken brokus evit « Groaz ar Vretoned », hon c'henvroad ha mignon ker, Yann Mari Normand, a skriv d'imp al libennou-man diwar-benn talvoudege al levrig « Geriou brezonek ha keumraek » :

..... E-pad daou viz hanter, gwengolo, here, hanter miz du, ez oun bet e-mesk ar Zaouzon war dalben ar « Somme ». Mignoned vat am boa kavet en o zouez. Eur blijadur e oa ganen komz ganto pe e galleg pe eun tammig e yez saonek. Gwelet em eus ive rejmanchoù bro-Skoz hag Iwerzon, gant o zaeou berr.

Al levrig « Geriou brezonek ha keumraek » a ve bet talvoudek d'in er poent-se. Met mont a rin adarre hep mar war-zu an tu-ze; marteze o gwelin a-nevez...

Hon mignon ker, a-unan gant al levrig « Geriou », a c'houlenn ivez diganimp al levrig « Kevrin Barzed Breiz, pe Reizadur ar Werzoniezh brezonek », da zi ski gantan sevel gwerzennou levrig mat. Al levrig-man en em gav diwet ganimp breman, met heb dale pell hon eus lizians da gaout re-all, ha neuze e vezo kaset evit netra d'an talben da neb a c'houlennno.

**BUGALE BREIZ!**

(Henc'hedigez eus de Loprade).

Falc'h an Ankou, va bugale,  
A zo savet us d'am diouksouz,  
Hag am dibanno di ale,  
Hag ho taerou a redo c'hoaz.  
Ha c'hoant ho peus da gaout da viret  
Ar zoug eus ho tad en ho kreiz?  
Karit hor bro 'vel en deus graet,  
Karit hor Breiz!

Labourit ha poagnit dalc'hmad,  
Ar c'hous en o liva ho tal.  
E parkou Breiz skuilhit hoc'h had:  
N ho pezo mui nemet gedal.  
Fizians! hoc'h eost a zarevo!  
Arabad dilezel hor Feiz;  
Evel ho tad harpit ho Pro,  
Servijit Breiz!

Sikourit Breiz, ho pro wirion,  
Eus hoc'h holl c'hallud ha skoazel,  
Evel am eus graet gant kalon;  
Hag enor d'it, Breiz, bro zantel!

En distro eus ho poan, pôtréd,  
Heb goulenn netra diganti,  
Gouzanvit pep tra, mar bez red,  
Holl eviti!

Da Vreiz oc'h dieourien, pôtréd,  
Da gaout eun Trement dinam,  
Ho feiz, ho kiziou, ho spered;  
Breiz 'zo evidoc'h eur wir vamm!  
Evit he renta divarvel,  
Deskit hada, deskit medi,  
Ha deskit, mar bez red, mervel  
Holl eviti.

EOSTIG KERINEK.

**LENNEGEZ AR GELTED**

**Eur c'hennadur eus kenteiiou an  
aotrou Dottin e Skol-veur  
KROAZON**

**SKRAPEREZ SAOUT COULEY**

*Diverradur ar pennad kenta.*

Tabut a oa savet etre Aillill, roue Konnac'h, en Iwerzon, ha Medb, e bried, da c'houzout pehini anezo e oa ar piavidika. Graet ar gont eus o holl binvidegeziou, e voe kavet kement ha kement diouz an eil tu hag egile, nemet eun taro, ar « Gwenn-Korniek », a oa e penn loened-korn ar roue ha n'oa ket e gevatal e-touez chatal ar rouanez. Houman ne vo ganti paouez nag eban ken n'he devo kavet eun taro par d'ar « Gwenn-korniek ».

*Ar rouanez a gas kannaded davei « Dare », da gaout digantan e daro « Donn ».*

Ha hi ha gervel daveti ne c'hannadour-meur, Mac Roth, da glask eun taro henvel ouz hini ar roue. Eun hevelep taro, hanvet « Donn », a oa e ti « Dare », e bro-Ulad, pastelvro Couley.

Kaset e voe kerkent davet Dare nao c'hannad da c'houlenn digantan e daro war an divizou-man : « Roet e vije d'ezan hanter-kant ouenner, eun dachennad douar e Konnac'h kement anezi hag an hini a zalc'he e bro-Ulad, hag, ouspenn, eur c'harr a dalvoudege gant ugeat maouez sklavez. »

An divizou-ze a oa diouz grad Dare hag e oa graet ar marc'had panevet ar kannaded a voe re vresk o zeod.

Eun digemer brokus da vat o doa bet digant Dare. War-bonez dibri hag eva, — eva dreist-oll, — e tis-tagellas d'ezo o zeod hag e teuas ganto komzou dibrenn diwar-benn an aotrou a di. Ar ger a-dreuz-man a loskjont e-touez meur a hini : « Ma n'en dije ket Dare roet e daro dre gaer, e vije deut digantan dre heg. »

Klevet e voe ar gomz gant ar mestr-keginer, a redas, droug ennan, d'he lavaret d'e vestr. Heman a douas an doneou, — d'ar mare-ze Iwerzoniz a oa pagan, — n'o dije ar kannaded e daro digantan na dre gaer na dre heg. Gant-se, antronz-veure, pa zezjont, d'valet-mat ha flour o genou, da c'houlenn an taro. Dare e nac'has outo krak ha krenn. Kaer a voe ganto en em zigarezi, dre deurel ar bec'h war ar bier hag ar cher-mat o doa bet digantan, ne vont ket evit ober d'ezan distrei diouz e venoz, hag e rankjont mont ez c'houlou war o c'hiz.

*Ar brezel dishlêriet, — Brezelourien bro-Ulad war wenklou. — C'c'hulain.*

Rei a rejont kelou eus an drowenn-ze d'ar rouanez Medb. Houman a c'hervas daveti kerkent brezelourien peder rann-vro Iwerzon, evit mont da skrapat taro Couley, ha

**Gwerz Graet d'hon C'hardinal karet,  
an aotrou arc'heskob Dubourg**

War don : Diskennet eus an Nenvou.

Declaratio, Deus, sermonum tuo um  
Illuminat; parvulis dedit intellectum.  
Doue 'barz en pep amzer en deus sklêrinnnet  
Tud da ziskouez e c'halloud d'an holl dud war ar bed.

Gwechall goz ar bobl a oa 'n enn denvalijen vras,  
Done 'barz en pep amzer sklêrijen a rôas  
Dre ar brofeted sanel, 'n eil war-lerc'h egile;  
Buzudou 'raent da ziskouez dre-oll galloud Doue.

E-barz en bro an Ejipt gwechall 'oa pobl Doue  
Gwallgaset gant Faraon, lazet o bugale;  
Daoust d'e grizdet didreuz e vagas, koulskoude,  
An den a dlee tennan pobl Doue ac'hane.

Ar bed a oa sebeliet 'barz an denvalijen,  
Pa zeas Jezuz er bed da rei gwir sklêrijen;  
Gant daouzek den, tud dister, Per en penn ar re-man,  
Ea deus savet war ar bed an Iliz ar gae an.

Eur zantez, Jenovefa, e zibooanias Pariz,  
'N eur ober da Attila en em denn war e gi;  
Pobl ar Frans dre Janed Ark 'voe dibooaniet va.  
Digitus Dei est hic, biz Doue 'zo aze.

Pell amzer 'zo pobl Arvor, hon bro men bet karet,  
'Oa diwag ar poblou all meurbet izellat;  
Doue 'zav eur stereden warni dreist ar re-all  
An ootrou August Dubourg, Arc'heskob, Kardinal.

Eur mad mad n'ankouao ket ti e vamm hag e dad;  
Peania 'ray start d'hen dere'bel 'n e gentan stad dalc'hmad...  
Pedomp-ni holl a galon Doue m'hen bennigo,  
Ma roy d'ezan buhe hic bepred 'vit mad hon Bro.

Gloar da Zone en Nenvou! beanoz Doue e-leiz  
Da vennigan pobl Arvor, dreist-oll Kardinal Breiz!  
Ha c'houi, Kardinal karet, pedet 'vidomp bepred  
Ma vo krenv ar Feiz en Breiz ha ma vemp holl salvet!

JULVAN GODEST.

setu dirollet ar brezel. An holl a ziredas d'he galvaden ha, daoust d'an diouganerezh Fedelen da ziougan drouziwez d'ezo, ez eas an arme war-raok.

Ha mat e oa ar c'houlz e gwirionez d'ez i da vont da Uladiz. Ar re-man a oa, d'ar mare, lakaet dinerz-oll ha dic'halloud e-pad pemp devez ha peder nozvez. Da heul eur malloz a oa bet taolet outo gwechall gant eur vouldig hanvet Macha, e rankent gouzanv e-pad ar pennad amzer-ze an holl wenklou a vez gant ar gwragez p'emaint e poan-vugale. Gant-se n'oant barrek d'ober taot-labour ebet.

Uvan bepnuiken a oa chomet er-maez eus ar malloz, Kuc'hulain, brezellour-meur bro-Ulad, a oa neuze en e zeitek vloaz. Hen eo a gemeras warnan difenn ar vro, e-unan penn, ouz armead ar rouanez Medb.

Da heuilh.

**KELSID EUS AR VRO**

**DOUARNENEZ**

*Fno' d'hor beleien!* — An aotrou abad Kermaal, hag a oa kure e Douarnenez a-raok ar brezel, a zo breman kravazater en 19vet rejimant. Lakaet eo bet, ar miz diweza war an daolenn-ener gant a meneg meuluz-man : « Skouer a c'hred hag a nerz-kalon. Adalek derou ar brezel, prest dalc'hmad da redek el lec'hioù risklusa da zigas d'ar zoudarded, a-unan gant ar zikour d'o c'horf, skoazel komzou mat d'o c'halonekaat. »

**HUELGOAT**

*Beuzet o rikla war ar stank.* — Eur paotr yaouank 15 vloaz, hanvet Hamon, p'edo o rikla war stank Huelgoat zo klereonet oll, a dorras ar skorn dia-

dan an. Eur zoudard, hanvet Picard, a zeuas a-beon d'e zerc'hel a-ere e vleo, hag d'e denna er-maez eus an dour. Dougan a reas anezan eun tregont metrad bennak pa dorras ar skorn adarre. Ar wech-man e voe kollet ar paotr yaouank ha ne voe savetaet ar zoudard nemet gant poan.

**ENEZ-EUSA**

*Kelou eus eur zoudard kollet pell a oa pep rouden anezan.* — Eur zoudard eus ar barroz, Jakez Kloastr, a oa kollet pep rouden anezan pemp miz war-nugent a oa. Prizoner e oa er Veljig ha difennet striz outa skrive. D'an diwez, e voe kaset d'eul lec'h all hag e c'hellas rei eus e gelou d'e wreg ha d'e vugale, a oa deut 'benn neuze da gredi da vat e oa maro.  
Pebez levrenez evito gouzout e oa salo ha yac'h!

**O prouez deut er-maez ar wask :**

« Ar Ouiziegezh e-touez ar Gelted koz »

Roet e vo al levrig nevez evit netra d'ar vignoned en arme, c'hoant d'ezo studia hon Amzer-dremenet en sell da brienti Amzer-da-zont hor Bro garet.  
Evit ar brenerien, 15 gwenneg. Hen goulenn digant an aotrou Vallée, rener koz « Kroaz ar Vretoned. »

**Le Langue Bretonne en 40 Leçons**  
PAR F. VALLÉE  
(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25) Imprimerie Saint Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc.

Ar Rener-Merou; F. VALLÉE.  
St Brieuc, Imp. Maria St-Guilhaume





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourion d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 37, ball Charner, zigemer ane

**Alaxennou da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An dizez Ph. Calvez... 20 real.  
Trugarez a greiz kalon d'ho « C'houmig Arvor » a fell d'ez rei da « Groaz ar Vretoned », ouspenn he zoniou kozant, skoazel hec'h aluzen ken madeleuz !

**Taolen ar Brezel**

**Notennoù digant ar stadou er-maez a vrezel**

Evel ma oa bet lavaret aman, ar zian dremenet, da heul an dorridigez daremprejou etre ar Stadou-Unanet hag an Alamagn, an holl stadou all er-maez a vrezel a zo bet beligenta etrezo da zavel o mouez eneb d'ar brezel diadan-zour, a zo bet disklêriet ken didreuz gant an Alamanned ouz listri-kenwerz ar bed-oll.

Stadou bihan an Europ, Suis, Sued, Danmark, hag all a zeu ganto rebechoù klouarik a-walc'h, en abeg da amezegiez an Alamagn a laka anezo gwall-aoñk.

En eneb, en Amerik ar C'hreisteiz, etrezi hag an Alamagn holl ledander ar mor Bras, ar stadou ar Brezil en o fenn, en em ziskouez her ha taer da vat en o notennoù.

Taeroch c'hoaz eman Bro-Sina (« Chine ») pa ginnig terri an daremprejou evel ar Stadou-Unanet.

Da c'hortoz, eman sellou an holl troet a-bann ouz listri-kenwerz ar Stadou-Unanet en em gav breman o verdei war ar mor Bras, dreist-oll daou anezo, an « Orléans », hag ar « Rochester », nevez aet eus New-York war zu an Europ. Iap int hep marc'hadoù vrezel na dizarn. Pe c'houeledet e vezint, pe ne vezint ket, eno aman an dalc'h ! Diouz ma c'hoarvezo ganto a vo peoc'h pe vrezel etre ar Stadou-Unanet hag an Alamagn.

**War linen ar Veljig ha Bro-C'hall**

En hanternoz, a-hed stêr « Ancre », e talc'h bepred ar Zaon gant o lammou war-raok. An 11 eus ar miz, e kemerjont foziou an Alamanned war eun hed a 1200 metr, e « Serre », en hanternoz da stêr « Ancre », hag en deiziou war-lerc'h o deus dalc'het gant o gounidou.

A-hend all e veneger krogadou aman hag a-hont a hed al linen.

An nijerien a ra nijadennoù stank. Re an Alamanned o deus taolet bombezennoù war Amiens, Dunkerque, Nancy, hep ober re a zismant, a drugarez Doue. Ar Fransizien, diouz

o zu, o deus bombezet diou gêr eus an Alamagn, Fribourg ha Carlsruhe. Guynemer, an nijer brudet, en deus disklêriet e 31vet nijerez alaman.

**War linennoù an Itali, ar Rusi hag ar Roumani**

Adalek an 9 eus ar miz, an Aotrichianed o deus staget da asailhi e sell da adkemer digant an Italianed kêr « Gorizia ». Bepred e pad an emgann en-dro d'ar gêr-se.

War linen ar Rusi hag ar Roumani, krogadou start a zo savet er C'halsi hag e-barz menez Karpas, en-dro da gêr « Kimpolung », en hanternoz d'ar Roumani. Ar Rusianed hag ar Roumaned a zalc'h penn da vat.

**Ar Zaon en Azi-Vihana**

Kelou mat a zeu bepred eus an arme zaon a zo bet kaset war-zu Kout-el-Amara. Kemeret ganto holl zifennou an T rked dirak kêr, e strisaont bamdez d'he c'hasc'h.

Eor wech kemeret ganto Kout-el-Amara, e vo frankaet an hent d'ar Zaon da vont da Vagdad, kêr-benn ar vro-ze.

**Wa vor**

Ar splujerien alaman a zalc'h gant o mestaolion : triz-k lestr o deus gouladet en eur ober tri devez. Etoez al listri-dre-lien gouledet ganto nevez-ze ez eus unan, ar « Guillaume Tell », a Vrest.

Disul diweza, en endervez, eul lestr splijer a zo savet war c'horre an dour a-wel d'an aod, en aber an Adour er c'hreisteiz da Vouldel. Laosket en deus tennou kanol ouz an aochevien. Pemp den a zo bet gijozet.

Daoust hag e lezint da dremen an « Orléans » hag ar « Rochester » ? Gwelet e vo !

**Peden eur vamm a Vreiz-Izel  
d'an Itron Varia Gwir-Vane  
evit he mibion a zo er brezel**

Ar bedon-man ken kaer a zo bet savet d'an Itron Varia Gwir-Vane, a zo he chapel vrudet e patroz Perret, gant an itron Noan, genidik eus ar Perret, ha kanet ganti en eured unan eus he mibien, medesin en arme, gant eun dimezel Galerne a Vinik, ar miz tremenet.

Plijadur a ray, moarvat, d'an holl lennerien, ha, dreist-oll d'an holl vammou a Vreiz-Izel a zo ivez o mibien er brezel.

Hon goure'hemennou d'an oberourez ha da viro an Itron Varia Gwir-Vane he bugale ger, hag hon holl genvroiz a zo gante en talben !

Mari, Itron Gwir-Vane, Chiaouit ar beden Kaset gant humilite Betek lein an dachen Lec'h ho peus eur chapel goant Savet gant hon zid koz. Gant o aour hag o arc hant, D'ho meuli de ha noz.

N eur chomlec'h uhel meurbet 'Peus graet ho temeurans ; A 'hane e ve gwelet Bothoa, Sant-Laurans ; En dro d'ei 'zo eur boked Graet gant gwe derv ha fao... Ken kaer hag hen non eus ket. Na vo biken er vro !

Dai lec'h-ze peus dibabet E bord bro Gwenedour E nij bemde ma spered Da c'houl ganech sikour ; Ma c'halon, leun a anken, Beuvet en he glac'har, A zav da lein ho moten He fedennig klouar.

Plijet ganech, o Mamm ger, Digemer ar beden A gas d'ec'h eus ar peilder Ho merc'hig en anken ; Digorit frank ho mantel War he bugaligo 'Zo war dalben ar brezel, Stallet d'ar maro

Ennoc'h, Gwerc'hez vinniget, Eman ma holl fians ; Diouz ma mibien karet Pellait an drouk-chaes ; Evel gwechall, n'o c'havel, Gwechall pa oant bihan, Digorit hir hoc'h askel Hag o lakit dindan !

**Buhez Lloyd George,  
Ministr bras Breiz-Veur**

**Pennad kenta : E Vro**

Evit intent mat buhez ha labour an aotrou Lloyd George, a zo breman Breton anavezeta ar bed hag a ra kement a enor d'ho gouarnadur, ez eo red-mat gouzout eun dra bennak diwar-benn e vro.

Evel ma ouzoc'h, an dud a veve en amzer wechall e Breiz-Veur a oa Kelted hag an darn-vuia anezo Bretoned. O bro, avat, a oa ken brao ha ken pinvidik ma savas c'hoant e meur a bobl eus an hanternoz d'an Alamagn, en o fenn ar Zaon, d'he aloubi, d'he kemeret dre nerz an armou. Staga a rejont d'ar gwall-labour-ze war-dro ar c'houevret kantved.

N'hellomp ket displega aman istor a'oubaden Breiz-Veur gant ar Zaon. Re hir e vefe. Red eo lavaret, Koulskoude, e berr, n'oa ket bet trec'h an

Alamanned d'hon tadou-ni ken aes-pe pe dre ma oant sevenetoc'h egeto, rak ar c'hontrol eo ar wirionez : Ar Gelled a oa anezo kristenien vat hag an alouberien a ra tud gouez ha divadez. Hogen ar Vretoned a zave re alies tabut ha dizunvaniez etrezo, ha, d'heul, nerz o armeou en em gave distraet. Setu perak an Alamanned a c'houeze meur a wech warno.

Nemet e menezioù da guz-heol an enez, dreist-oll e Bro-Gambre a zo meneziek-tre hag a oa d'an amzer-ze, golost a goajou don, diès da zout ha da dreiza, ar Vretoned o doa kavet repu. Eno eus darn eus ar Gelled o doa gallet miret o dishualded hag, a zo gwell, o sevenadur d'ezo o-unan.

Eun darn all a guiteas ar vro hag a deuzas ar mor evit disken war aochou bro Arvor, a zeuas war-lerc'h da veza Breiz, hag e-lec'h e tigasjont hon broadelez, hon yez vrezonek hag hon feiz kristen.

Istor Breiz a zo bet displeget aliesmat war « Groaz ar Vretoned », ha pennadou-skrid talvoudus a zo bet savet evit he lennerien gant tud desket. Brao e vije ivez gallout lavaret eur ger bennak diwar-benn istor hon breudeur eus an tu-hont d'ar mor. Red eo, avat, hen ober affo.

Da vihana, e tleer gouzout penaos yez Kembreiz — an hano-ze a vez graet eus ar Vretoned a zo chomet du-hont, e Breiz-Veur, — a zo bet karet, pleustret ha kaerret, bed ar c'hanvedou, gant an dud desket ker-kouls ha gant an dud paour ha dizesk. Zoken pa voe bet gounezet ar vro diwezataoc'h gant ar Zaon ha staget ouz Bro-Zaoz, barzed a zavas dre-oll, ha, dre skriva ha kana soniou ha gwerzioù dispar, a viras taer ar garterez-vro beo e kalonou o c'henvroiz, a-unan gant ar spi d'eun amzer-da-zout gwelloc'h. Eur bobl a gar he yez evel-se a vir hec'h ene. En eneb, pa goll eur bobl he yez ha ganti gwir vammien he buhez, e rank dizec'ha war he zreid ha mervel....

Evit ar pezh a zell ar c'hreansou, ar relijion, — ha kement-man a zo a bouez bras, — Bro-Gambre a zo bet katolik e-pad hir amzer. Hogen, pa droas ar Zaon, deat da veza mistri ar vro, o c'hein d'ar feiz koz ha d'ar Pab, madou an liz a voe skrapet diganti hag ar veleien gatolik argaset en eun doare skrijus. Kembreiz a stegas pell ouz o feiz, kement ha keit ha ma c'helljont. Hogen, d'an diwez, n'oa ken a veleien ganto, da gomz ha da brezeg d'ezo en o yez. Setu perak e teujont a-nebeudouigoù da

ankounac'hat ar relijion a oa bet o hini keit-all amzer.

A-hend-all, ne domment ket ne-meur ouz liz Bro-Zaoz, savet gant gouarnamant Londrez, hag a gemeras lec'h an liz katolik. Kalz a uhelidi, a dud eus an noblans, a zersonas ivez neuze ober cherisou d'ar Zaozon ha heuilh o skouer, diouz o galloud, evit beza deut mat gant roue ha lez Bro-Zaoz. Ar bersoned protestant nevez ivez a oa kalz anezho diavezidi troet enep d'ar c'hambreeg, yez ar vro, a zisprizent a greiz o c'halon. En abeg da ze e oa diou bobl er vro. Al loden vuia e oa Bretoned na i-tentent ket yez ar Zaoz. On nag o boaz-manchou kennebeut; gwasket e oant gant al loden all, da lavaret eo gant an uhelidi a-ziavaez bro o doa laeret o douarou diganto, kerkouls ha gant ar bersoned mod nevez.

Eur bobl n'hell ket beva pell er c'hiz-ze, dreist-oll eur bobl ha ganti eun istor, eur yez hag eur lennegezh ken kaer ha hini ar Gelted. Eur seurt pobl n'hall ket beva kennebeut-all hep relijion, ha, pa 'z eo gwir n'oa tu ebet evito da anaout ar relijion gatolik, rak ar veleien a yê di a veze lazat hep truez en amzer drubuilhus-se, Kambreiz, goude en em zistaga diouz liz Bro-Zaoz a daole disnegans war o yez ha war o broadelez, a zavas ilizou diouz ha hervez o spered, o skiant hag o galloud. En ilizou nevez-se e vez graet stad vras eus ar Yez, a vez implijet evit pep tra enno.

E gwirionez, eur rann-galon eo evit Bretoned katolik Breiz-Izel gwelet ar c'hemm etre ar c'hambreeg, a vro-Gambre, hag hon paour kêz-vrezoneg, a zo disprizet ha dilezet e Breiz gant tud diskiant a nac'h ar gwad a red en o gwaziad.

Stad vezus hon yez a ra kalz, siouaz, evit pellast Kambreiz diouz ar feiz katolik rak kridi a reont start ez eo dleet ar stad-ze d' hon relijion. Lavar a reont alies ez ate o yez hag o broadelez da goll pa zeufent da veza katoliked evel-domp-ni! N'eus mar ebet e tenio hon breudeur da zifazia war ar poent-se pa vo gwellaet stad ar brezoneg. Salo ma vo ar c'henta ar gwella!

P. MOCAER.

(An eil bennad e vezo: « Bugalech Llyd George »).

## AN DIGREIZENNI

An aotrou Hennessy a zo deut d'ober eur brezegezh e Roazon, an 12 eus ar miz.

Reuer koz « Broaz ar Vretoned », hag a oa pedet, n'en deus ket gullet mont. Eu em glevet en deus gant e vignoned eus « Unvaniez Arvor », hag holl a-unan a-du gant an holl Vretoned vad, o deus savet d'an aotrou Hennessy eur pennadig respont a zo bet embannet e brasa kelaouennou Breiz.

Disneganeus ouz hon broadelez, an aotrou Hennessy, war zigarez gwellaat ar micherioù ha kriski ar binvidigez, a fellfe d'ezan laza hon Breiz karet dre he disranna etre diou vro dishano beunak: ar rann-vro niveren daou hag ar rann-vro niveren c'houec'h.

Ya, eun dra vad eo, eun dra red e vo zoken, goude ar brezel, kriski ar micherioù ha gwellaat ar binvidigez, nemet ezomm ebet da gaout d'ober evit se gant politikerion, c'hoant d'ezo da laza Breiz! Etre hon daouarn-ni Bretoned en don penn ar Varzed ha kement-hini o deus evelto gouestlet e buhez d'ar Vro, e vo al labour-ze ha neket etre daouarn estren hag euebour!

Evel-se bezet graet!

## Kanaouen da Gardinal

### Breiz-Izel, an Aotrou DUBOURG

Teirvet loden, war don: Ar Chouanted.)

I  
Sav'ta, parouz Logivi, eur gan a drugare,  
Ha diaze ar gan-ze war eskal an awel,  
Rak gant da vogel karet hep digare  
Da emban da levenez dre zouar Breiz-Izel!

II  
Logiviis tremenet, tud aet d'ar Baradoz,  
Logiviis a dremen, bet leun a evrusted,  
Laket ha mouez da gordan evit laret bennoz  
D'an Doue lak da dridal kalon ar Vretoned!

III  
Rak tridal o deus grêt holl, p'o deus bet ar c'helo  
'Oa archeskop Breiz-Izel, gant Beneat pemzek,  
Hanvet da Brinz a liz! Kerket 'klevjomp tro-dro:  
'a Setu d'imp eur c'hardinal a ouve brezoneg!

IV  
A ouve yez koz hon bro, yez an dud kalonek,  
Rak honnez eo a ziskas, war varlen e vamm c'hoaz:  
War varlen ar vamm vad-ze, en eur gomz Brezoneg,  
E pedas hag e reas e gentan zin-ar-groaz.

V  
'Vel Breiz hag he yez n'eus ket neblec'h dre an douar,  
Bro goant, kec'hiet gant ar mor, enni koad, brug ha lann;  
Enni, c'hoaz, e splan ar Fe, bro all 'bet ne denn gloar  
'Velti di-mus he bugale, dispar tre en emgan.

VI  
Eus Rom Vikel Jezuz-Krist, santel, gouizieq ha mad,  
En deus gouveet ar c'houz da zigas betek Breiz  
Testeni e garante: ar *Vente-Ru*, liou-gwad;  
Liou ar gwad skuilhet ken pailh gant Bretoned a leiz!

U. M. G.

## MENGLEUZHIOU BREIZ

Mengleuzioù a hep seurt a zo e Breiz, te houarn evel re ar Pas, e kichen Kintin, a oa brudet gwechall hag emeur o paouez addigeri, re ar c'hant e Raozon, e Kastel Aodren, e Sant-Brieg, e Karnoet, e Huelgoat. — e mengleuzioù Huelgoat o vije aour ouspenn, war a lavarer. Gwazennou glau-douar a zo bet kavet ivez e meur a lec'h. Pa vo digoret anchou da lakat enno kerzennou an aezenn-zevi, pe « gaz », e Kemper, an ijiner karget eus al labourioù, hag a zo breur da Reuer koz *Reuer ar Vretoned*, a voe souezet kavout war e hent eur wazenn c'hlaou-douar. A zo gwel c'hoaz, eun itron eus Gemene-Penfao, o kleuz en he lioz, he dije dizoleet eun eienenn eol-maen, pe « petrol », henvel ouz ar re a zo er Roumani hag a rae pinvidigez ar vroze a-raok ar brezel.

Eur gompagnunez a zo bet krouet e Kemper da zavel enklask war ar pinvidigezioù-ze a chom kuzet e douar Breiz ha d'o lakad da dalvoud.

## LENNEGEZ AR GELTED

Eur c'hennadur eus kentelioù an aotrou Dottin e Skol-veur Roazon

SKRAPEREZ SAOUT COULEY

III  
*Penaos Kuc'hulain, e-unan penn' a harsas ouz an arme da dremen.*

Da genta, e klaskas Kuc'hulain herzel ouz dre droiou-hud (breou, sorserez).

Eur c'helc'h a reas en-dro d'eur peulvan hag e skriyas eun enskrivadur e lizerennou ogamek (seurt lizerennou implijet d'an amez-ze) gant Kelted Iwerzon ha Breiz-Veur, ma tifenne ouzan arme mont e-biou d'ar c'helc'h en noz-se.

Kelennet gant an drouiz ha gant

gwella brezelour Konnaec'h, Fergus, war ar gaou a dennent warno ma torjrent an difenn, an euebourien a chomas a zav.

Antronoz, Kuc'hulain, en eur roudour, a zankas en douar eur forc'h koad pevar-biziek gant eun enskrivadur-berza adarre. Pevar brezelour eus an euebourien a gaskas tremen; Kuc'hulain a droue has d'ezo o fennou hag a lakas peb a benn trouc'bet war vizied ar forc'h koad.

Merket e oa gant enskrivadur Kuc'hulain na dremenfe paotred Iwerzon ken n'en dije unan anezo, gant eun douar hepken diframmet diouz strad ar roudour ar forc'h pevar-biziek.

Seitek gwech dioustu Fergus a strivas da leml ar forc'h o vont a-herr outi war seitek karr-brezel. Bep tro, ar c'harr med' warnan a dorras a dammoù. Dan diwez, Fergus a yeas d'ar forc'h war e garr-hen hag a ziframmas anezi.

Pennou an arme en em guzuliaz neuze da c'houzout piau e oa ar brezelour a stourme outo. Meur a hano a vo lavaret... ha dislavaret ker-keut, ken na zisklerias Fergus n'helle beza ar brezelour-ze, war e veuo, nemet Kuc'hulain bilan, a oa bet diskibl gant an. Ar rounez Medb a ziskoueze beza diskredik a-walc'h. Neuze Fergus ha daou vrezelour all a zisplegas d'ezhi taolioù-kaer ar bugel Kuc'hulain.

(Da heuilh)

## KELTER EUS AN VRO

PONT-AN-ABAD

*Kanc.* — An 8 eus ar miz e voe lidet Pont-an-Abad obidou eur Breizad mat, an aotrou Nicolas. Digemeret e oa bet, e gouelioù Henbont, e 1913, da ziskibl o Gorsedd ar Varzed. Entanet e galon gant karan-ter Breiz, ha speredet-kaer, en defe graet kalz evit ar Vro, mar en dije an Aotrou Doue lezet e vuhez gantau. Kleuvet a reas da heul ar zervij en doa en arme hag a oa re d'e yec'bed

kizidik. Evel kal lies a Vreiziz all, en deus roet e vuhez evit ar Frans. Doue da vo gant e ene! Hon lennegher a gavo war an « Union agricole » ar brezegen vrezonik eus ar c'haera a voe displeget dirak e vez gant hon c'hevreur ha mignon « Abalor » en hano ar « Gorsedd » a zo e varo eur gwall-goll d'ezan ha da Vreiz a-bez.

GWENGAMP

*Enor d'hor a denn-fuzul.* — An aotrou Prigent ar Gall, hostiz e Gwengamp, en deus diskaret gant eun tenn-fuzul, e koad Malane, eur penn-moc'h gouez hag a boueze 250 lur.

*Meneg a enor.* — Paol Rolland, barver er Ristang, a zo bet laket war daolen-enor an arme. Hon gourc'hennou d'ezan!

KEMPER

*Enor d'hor c'henvroiz.* — E-touez ar re a zo bet medalennet nevez-ze war al leur-gêr Laennec, e welomp hanoù ar zoudarded Pichon eus ar 48vet, Cosquer, eus ar 272vet, Jehanno, eus ar 165vet, Masson, eus ar 407vet, Quean eus ar Ijiner, hag ar vartoloded Drean ha Cosquer. Enor d'ar Vretoned!

LANN-URBAN

*Gourc'hennou.* — Hon gwella gourc'hennou a gasomp d'an aotrou a Voisanger, kabiten war vor, en deus bet digant roue an Itali ar vedalen-enor eus ar vro-ze. An aotrou a Voisanger, a zo mab-bihan d'an aotrou Kermarker, oberour brudet ar « Barzaz-Breiz ».

MONTROULEZ

*Decet ez veo.* — An 12 eus ar miz, e-kreiz noz, e krogas an tan en ti eur c'hoziad a 80 vloaz, Fransez Malgorn, e Penn-ar-Prat, parrez Plouenan. Antronoz-veure e voe kavet e gorf maro, aet holl e glau, e dismantrou an ti.

ROSGOF

*Meduennet.* — Hon gwella gourc'hennou da Loëz Talabardon, eus ar 48vet rejimant, a zo bet roet d'ezan, nevez-ze medalen ar zoudarded gant eur meneg eus an enorusa.

LANNUON

*Krona-enor.* — Hon c'hevreur, an aotrou kommandant Pouhaer, gloazet diou wech er brezel, en deus gonezet ar groaz-enor evit e nerz-kalon dispar.

*Kanc.* — Gwall-gwano a goue war diegezh an aotrou Troadec: goude koll unan eus e vibien, setu o tont ar c'hellou e oa bet lazet e vab all a oa nijer. Kas a reomp d'ezan hon gwella gourc'hennou a genganv.

PLOUNEVZ-MOEDER

*Enor d'eur c'henvroad!* — Enor d' hon c'hevreur, Jozef Marsel a Blounevez, a zo bet laket nevez 'zo war daolen ar 47vet rejimant. Kemeret en deus perz en holl emgannou aboue m'eman er brezel, « ha graet dac'h-mat e zlead penn-da-benn! »

LANGOAT

*Kanc.* — Ar pemp eus ar miz ec'h eo bet lidet e Langoat eured an aotrou Le Grand, noter e Landreger, gant an dimezel Jann Le Grand a Langoat. En desped d'ar brezel, kalz a gorent hag a vignoned a oa en em vodet er Goz-ker ha 160 a oa anê holl er pred eured. Hon gwella hetou d'an dud nevez!

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25). Imprimerie Saint Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc.

Ar Reuer-Merour: F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume





# KROAZ ar VRETONED



IRIZ AR CHOUMANANCHOU

10 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

## Alozeunou da « Kroaz ar Vretoned » d'he c'has da zoudarded ar Vro

An aotrou abad Clerc... 20 real.  
Trugarez da « Gloarek ar Wern » !

## Taolen ar Brezel

### Notennoù

E-keit ha m'eman an daou lestr amerikan « Orleans » ha « Rochester » o verdei, a-dreuz d'ar mor Bras, war-zu Bourdel, eman evelto ivez an trsou war vordo e etre an Alamagn hag ar Stadou-Unanet, diës gouzout c'hoaz a be du e treoio an avel : tu ar peoc'h pe hini ar brezel ?

En gortoz, an Amerikaned a ra o fourchas d'ar brezel gwella ma c'hellont. Emaint o paouez stigma dirak o forz-mor New-York hag o terzier bras all rouejou dir ouz al listri-splujerien alaman.

Kaset o deus d'an Aotrich, ar 19 eus ar miz, eun noten diwar-ben ar brezel diadan-zour. N'o deus ket torret c'hoaz an daremprejou ouz an Aotrich, nemet da gredi eo e rankint he ober heb dale. Beza a-walc'h o dije d'ober oustenn ouz an Turked. Brud a zo o deus ar re-man goulelet al lestr kanolier amerikan « Scorpion » dirak Kostantinopl, evel evit lakaat anat eman o menoz heuilh an Alamanned en o mestaolioù ouz al listri er-maez a vrezel.

Ar Breiz, ar stad-ze eus Amerik ar C'hreisteiz en em ziskouez start ha kadarn, a zalc'h da gerzet war roadou ar Stadou-Unanet : kaset en deus, war o lerc'h, notennoù tu-pe-du d'an Alamagn ha d'an Aotrich.

Kelou a zo he deus an Alamagn, en desped d'he brabanserez, pleged da c'hourdrouzou an Amerik diwar-benn eur poent-ze. Lezet he deus da vont en o frankiz 72 martolod amerikan he doa prizoniet diwar vourz al lestr « Yarrowdale » goulelet gant he splujerien. Daoust ha na ranko ket plega ivez war ar poen-chou all ?

### War linen ar Veljig ha Bro-C'hall

E-leiz a grogadou bihan a zo bet a-bed an holl linen adalek ar Veljig betek en Alzas.

En hanternoz e talc'h ar Zaozon da c'hounit tachen. Ar 17 eus ar miz e rejont eul lamm war-raok adarre wa,

dost eul leo hed hag eul c'hard leo dounder.

Ar yaou, 15 eus ar miz, da beder eur eus an endervez, an Alamanned o deus dispennet gant tennou poult eun darn eus hon difennou er Champagn, hag asailhet da heul. Deut int a-benn, war-bouez gouzanv kollou bras, da zerc'hel eur veg en difennou Maisons-Champagne. N'eus ket bet meneg abaoe o dije gallet diboufa ac'hane war-raok.

### En talbennoù all

Krogadou a zo bet er C'halsi ar 15 eus ar miz hag er Roumaniz en deizioù war-lerc'h. Er vro ziwec'h-man, ar Rusianed hag ar Roumaned a zalc'h penn breman eus ar gwella d'an Alamanned.

Ar 15 eus ar miz, en Azi-Vihana, e bro Vezopotami, ar Zaozon, da heul eun emgann-trec'h, o deus gounezet adarre eur vad a dachen dirak Koutel-Amara. Kem-ret o deus, en emgann-ze, war-dro 2.000 prizoner en o zouez 89 ofiser, 2.500 fuzul, 5 mirdrailherez ha kalz a bourveziou-brezel a bep seurd.

### War vor

Daoust da c'hourdrouzou an Alamanned o kinnig goueledi heb ali na ktemen kement lestr a gaviut, niver al listri distrujet ganto a zo bet bihanoch er zizunveziou diweza-man eget e miz kerzu a-raok o notenn-c'hourdrouz. Da gredi eo o deus ar re-Unanet gwellaet kalz war an doareoù d'o diwar-ben. An Italianed o deus evel evit-se bagou bihan dre eol-douar herrus-tre. Seurt bagou a zo gwelloc'h ouz al listri-splujerien eget al listri bras dre n'hellont ket beza tizet gant an tarzerezed (pe « torpilles »).

## AR BLEIZI

Ar re eus hon lennerien a zo deut eun lammig war an oad o deus dalc'het sonj eus ar bleizi a oa kalz anezo e Breiz gwechall.

Emaint o tont en-dro, war-lerc'h brezel ha yenien e broioù-ze eus kreiz an Europ. El Luxembourg ez eus kement a aon raso ken na gred ken paotred al lizerou mont d'ober o zro war ar maez heb beza armet.

Nevez 'zo ez eus bet kelou e vije bet gwelet bleizi e Breiz zoken, en-dro d'eur c'houfle tost da Zinan Salo na ve ket gwir ar gwall-gelou-ze !

## Kardinal ar Vretoned

D'e Veurded, ar C'hardinal Dubourg.

Gouel kaer a zo hirie war zouar sant Divi  
Ha levenez an holl a welomp o virvi ;  
Ar c'hleier a gas pell war eskel an avel  
Brud al lidou dispar a dremen er c'horn-man :  
En hon bro-ni biskoaz n'eus bet gouelioù henvel.  
Ri vo meulet Dode ! Laouenoc'h omp breman.

N'em eus ket da laret lorc'h Logivi-Plougras  
Nag hec'h evurusted, hec'h avurusted vras ;  
Eur barroz hag he deus en-touez he bugale  
Unan deut da veza Arc'heskob Kardinal,  
A c'hall beza lorc'hus, kas he brud da vale !  
Klaskit d'in en hon Breiz evelti unan-all ?

Met lorc'h tud Logivi a zo nebeut a dra,  
Pe a chom, d'hon c'hreden, al lorc'h an distera,  
En-kichen an hini a zo en pep Breizad  
Gant an enor rôet d'Arc'heskob Breiz-Izel,  
A chom muioch a ze hon Pastor mad, hon Tad,  
A vo d'ar Fe, d'ar Yez, d'ar Vro gwelloc'h skoazel.

Rak, — sav da benn, ma Breiz ! — da Fe, da Yez, da Vro  
Eo a zo enoret ar wech-man war an dro ;  
Evit gloar an Arvor an Tad santel ar Pab  
N'halle kavout gwelloc'h eget m'en deus kavet ;  
Hon Arc'heskob karet eo ar gwella dibab  
Evit beza d'imp-ni da Gardinal hanvet.

Ar Fe, en gwirioas, Fe greav hon C'hendadou,  
A bar evel an heol war ar gouel, al lidou.  
Brezel a zo bet greet, ... hag a vo graet d'ei c'hoaz.  
Met, dre boan hon zent k'ez bag o diskibien vad,  
Eman hirie ken krenv, ken krenv evel biskoaz,  
Ha « Fe hon C'hendadou » hi a chomo dalc'hmad !

Ar Yez, ar Brezoneg, miret gant an Drouized,  
Yez sant Gweltaz, Kado, sant Herve, ar Varzed ;  
Yez an dud a galon, ken taer er brezelioù,  
A vez dra-tet ivez. ... Met hi ne varvo ket !  
Rak diwallet e vo ouz droug ha mestaolioù  
Gant sikour he mitemp da veza re wasket.

Ar Vro, gwir berlezen en-touez an holl vroioù,  
Ar Vro, magarez sent, liorz leun a vleuioù,  
Ar Vro, gant he c'hoantiz ha gant he bravente,  
Ar Vro, eur « mor a gan », eur mor a levenez ...  
Pioù a c'houfle senjal e teufe d'ei eun de  
Koll he c'hurunen aour a c'hlanded, a furnez ?

Naa, ze ne deuo ket ! Hon Fe a vo miret,  
Ha Yez ar Vretoned ne vo ket diskaret ;  
Hon Breiz, didrec'husoc'h, a zavo soun he fenn  
Hag a gerzo dispart gant he Galvedigaz !  
Eur C'hardinal ne deus d'ne ra ha d'he difenn,  
Eur C'hardinal a Vreiz, leun a ouiziegez.

Eur C'hardinal a Vreiz ; en Breiz eman ganet,  
Hag, evel eun derven, aman eo diwanet ;  
Derven hag eo tener diskuiza dindani :  
He gwizioù a zo don en douar ar Golted,  
Eved en he skourrou a zeu da richani,  
Ha Breiziz en-dro d'ei a gav evurusted.



Rak-se, Arc'heskob ker, eus Roazon da Naoned,  
 C'houi eo hon C'ardinal, lini ar Vretoned;  
 Ni eo ho pугale, an Arvor eo ho Pro;  
 Lorc'h mad a zo ennomp hag hon holl drugare  
 A zav, gant eur beden, betek troua an Aotro,  
 Ma vevfet pell ganimp, o Breizad a zoare!

Kalz a vezo d'ober war-lerc'h reuz ar brezel  
 Evit derc'hel uhel brud-vad hon Breiz-Izel;  
 War-zu piou e trofomp gant fizians hon zellou?  
 Ouz piou e plijo d'imp mont d'en em erbedi?  
 Da biou e kontfomp-ni hon doan, hon zrubuilhou?  
 Piou a ziskouezo d'imp pe hent darempredi?

Hag e kanomp hirie, o Kardinal gredus,  
 Ho Meurded hag hon joa... Pebez devez skedus!  
 Tridal a reomp holl p'ho kwelomp dre hon Breiz  
 O vont, gant eur mousc'hoarz, a-benn hent d'hon menoz;  
 Levenez, a laran, a zivan en hon c'hreiz  
 Pa stouomp, gant doujans, dindan nerz ho pennoz.

AR YEODET.

Kerbernez, 8 a C'hovevrer 1917.

## KELIER EUS HON MIGNONED

### A ZO ER BREZEL

Kelou eus an aotrou Moal hag hon mignonned all

En gortoz e oamp da welet an aotrou Moal o tigozeout aman war e hent da dremen eun eiz deiz beanak er vro, p'hon eas bet digantan ar pennadig lizer-man:

« E sonj e oan mont e permission ar 15, mes laket 'zo skoilh, hag e renkan chom ac'han d'an dro war-lerc'h, mar be bolante Doue. »

Evrusoc'h eget an aotrou Moal, hon c'henvroad ker, J.-B. Janin, hag a zo er 79vet eveltan, a zo deuet e « permission » hag hon eus bet ar blijadur d'e welet p'en deus tremenet dre am-n. Yach eo bepred a drugarez Doue. Ar yenien, emezan, eo a ra ar muian diés d'ezo; rak, evit d'ar 79vet beza c'henjet lec'h, eman bepred en eur vro a zo gwall-gri an amzer enni. Gwell a ze eman an amzer o klouaraat eun tammig dre-oll.

Lizerou mat hon eus ivez eus hon lenner ker, F. Kerempichon, a oa chomet pell hep rei eis e gelou, eus hon c'henlabourer mat Klaoda, hag eus hon c'henvroad leal Loutrou. Trugarez d'ezo holl!

## Buhez David Lloyd George

Pennad II : Ar bugel hag an den yaouank

N'eo ket bet ganet Lloyd George e bro-Gambre. E dad, hag a oa mestr-skol, hep pinvidigez ebet, en doa ranket, evit gouñt e vuhez, moat da gentelia e Bro-Zaoz, e kêr vras Manchester.

Kalz a dud a Gambre a rank divroa evel-se, dre n'eo ket pinvidik ar vro. Hogen, pa zivroont, Kambreiz a gas ganto daou dra hag e tale'hont d'ezo ken start ha d'o buhez hec'h-unan : o yez hag o c'harantez-vro. E kement kêr vras a Vro-Zaoz pe eus an Amerik, ez eus ilizou savet ganto, e-lec'h ma vez implijet ar yez kambreek, hag e kaver, betek er broiou pella, kalz anezo a zo ganet er-maez a vro-Gambre hag a gomz ar yez eus ar gwella.

Tad Lloyd George a oa dimezet gant eur plac'h yaouank a Llanys-tumdwy. Eur verc'h o doa pa voe ganet David. An tad, siouaz, a oa klanvidik hag e varvas p'edo ar pôtrig en e 4 bloaz. Eun nebeudig goude maro an ozac'h eur bugel all

a zeus er bed, Gwilherm, a reas hen ivez labour vat evit e vro.

Eun taol pounner e voe d'an intanvez maro an hini a veve an holl diad gant e labour. Eur treur he doa, a drugarez Doue, en he c'hêriaden war ar maez, eun den mat, Richard Lloyd. Eur c'hereour paour ne oa ken, nemet leun e oa a galon hag a feiz. Ne zimezas ket evit beza gwell a ze e stad da zevl bugale e c'hoar; rei a reas d'ezo e amzer, e beadra, e garantez. Evit o skoazia da ziski hag o hencha a zoare, en em zeskas e-unan gwella ma c'hellas. Da genta tra, e lakeas evez d'o c'helen hervez e ouiziegezh war lezen Doue hag ar yez kambraek. Paour-raz e oant hag, evel m'en deus disklêriet an aotrou Lloyd George diwezatac'h, ne zebrent kig fresk, kouls lavaret, gwech ebet; eul lipouzer, eur gwir « lip-e-bao » e oa d'ezo kaout peb a hanter-vi d'ar zul.

Eun den all a zo hag en deus graet kalz evit furmi spered Lloyd George, dreist-oll evit peza zell ouz ar politikerezh, Mikael Jones, mestr-kelenner en eur skolach « diasanter », da lavaret eo gant tud n'anavezant ket beli liz Bro-Zaoz, pe liz « Anglikan ».

Lloyd George a welas neuze kalz a draou a yeas down en e spered a vogel ha na dee ankounac'haat biken. Gwelet a eure penaos an dud pinvidik, Saozon pe saoznegaet, o doa laeret o donarou digant tud ar vro hag a zisprize ar bobl, dre ma oa chomet feal d'he c'hendadou ha d'he maeziou. En amzer-ze e oa difennet komz kambraeg e skoliou ar gouarnamant hag an dud a c'houzanve hep kredi ober klemmaden ebet. Hogen, war-dro ar mare-ze ivez, eun nebeut a zeraouas sevel o mouez.

Da stourm ouz an dud e karg, trôet eneb d'ar yez, e savjont kevredigeziou lennegezh, hag a zo eun tarantig henvel ouz hon patronachou Breiz. E kalz a batronachou, avat, n'eus nemet disnegans ouz ar brezoneg, hag e seblant pep tra reizet a-ratoz da zistaga ar baotred yaouank diouz o bro. Goude-ze, e vér souezet ouz o gwelet o trei kein da Vreiz, d'he yez ha d'he c'hreansou! Pa ve hon patronachou an hanter hepken ken tuet d'ar vro ha m'emaint e bro-Gambre, an traou a yafe gwell, moarvat.

An aotrou Lloyd George en deus lavaret e-unan e oa bet d'ezan eur seurt patronach bihan ar wella skol en dije bet biskoaz.

P. MOCAER.

(Da heuilh).

## Eil-hada gwiniz

Ranket e vo eil-hada gwiniz er miz-man hag e miz meurs : re vihan e oa an dachennad lakaet dindan ed er goant hag, ouспен, rouzaet eo bet c'hoaz gant ar skorn.

Argouarnamat a roio eur skoed dre zaou c'hant liur gwiniz eostet, en tu-hont d'an 33 liur ma vo gwerzet an ed. Ar re a hado dindan gwiniz brasoc'h tachen eget warlene o devo c'hoaz 20 liur dre zaou zevz-arrat muioch.

E lec'h gwiniz « Manitoba », a zo bet re vulet, rak « Vel rudel veure hag ali marc'hed » e Gwech e teu da vad, gwech ne deu ket », ober kentoc'h gant ar seurtchou anavezet er vro. Eur seurd mat eo « gwiniz tri miz Kastel-Paol ».

Arabad gortoz ar « stlejerezed » d'ober al labour. Ar « stlejerezed », pe « tracteurs », eo ar mekanikou burzudus-se en doa lavaret ministr al Labour-douar prena milierou anezo eus an Amerik. Ouspenn ma 'z int koustus-bras da breza ha dispignus da gerzet, pa gerzont dre « eol-douar », ne zereont tamn ebet ouz hon parkeier Breiz dizec'hon ha diblên.

## KELIER EUS AN VRO

### BOHARS

Muntret. — Digwener all, an aotrou Sevellec eus Bohars, hag a oa implijet en hent-houarn e Sant Brieg, a zo bet skôet a daolion boutailh gant eur zoudard ha marvet da heul.

Tabut a oa savet etrezo dre ma rebeche ar zoudarded da implijidi an hent houarn n'oant ket en talben-brezel.

Eun den mat e oa an aotrou Sevellec ha n'en doa lezet nemet en vroiu mat en holl lec'hioù ma oa bet o labourat.

### PLOUESKAT

Kengano. — Hon gourc'hemennou a geogant a gasomp a greiz kalon d'hon lenner ker, an aotrou abad Mazaes, ha d'e vreur, a zo bet gwall-c'hlaç'haret, nevez-ze, gant maro o mamm vat. An itron Mazaes a zo bet lidet hec'h obidou e Ploeskaz, e-toue eun engroez a dud, desadorn all. Doue da vo gant hec'h ene!


Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieg. — Imprimerie St-Guillaume

## Galv mesaer menez Are

D'am nizez vihan, Jann Grall.

An ton-man a zo bet dastumet e Kerne-Uhel. Diés e vije kavout bravoc'h eget an! Savet eo war eur skeul-gan (« gamme » e galleg) koz, a veze graet anezi « skeul-gan Lokrian » gant ar C'hresianed. Ar re-man, en o skridou brudet, o deus lezet ganimp disklêriadur diwar-benn ar « skeul Lokrian », nemet skouer ebet anezi ne anavezet betek-hen. Eun enor eo evit hon Breiz-Izel, a zo bet miret ganti en he yez keltiek hag en he zoniou dispar kaera herez an Amzer-goz, kaout e-kreiz he zensur ar berlezen-man. Ar c'homzou a zo war an ton a zo bet savet gant hon mignon Ivonig Picard. Trugarez d'ezan!



O lo le, o lo le, o lo le, o lo le (1).  
 O lo, breudeur, deut d'am c'hichen;  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Selaouit va c'hanaouen.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Er pellder mouez ar gornigal,  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 A c'hournij 'barz an avel.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Va-unan el lann divuzul,  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 'Renkan chom pemde ha sul.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 E-pad ma seblant va ene  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 'N em leda war ar mene.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 En eur welet 'c'h en em asteun,  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Askel ar skoul 'us d'am fenn.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Va-unan el lann divuzul,  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 'Renkan chom pemde ha sul.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Ha klujet ar vran velkonius,  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 D'am c'halon gwall-ankenius.  
 O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 O lo, breudeur, deut d'am c'hichen.  
 O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,  
 Selaouit va c'hanaouen.  
 O lo lo. O!

Ivonig PICARD.

Notennet eo an ton eun tammig izel. Ar re a vez ganto mouezioù skleitr a helle e uhelaat, dre c'henj an noten « re » en noten « la ».

(1) Distagit evel pa ve skrivet e galleg « le ».





**IRIZ AR C'HOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoded evit ar breizou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourion d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

As sotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer aue

**Aluzennou da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An sotrou abad Castres... 20 real.  
An dimezel Corlier... 8 real.  
An Sotrou Berthou... 12 levr  
« Kevrin Barzed Breiz, pe Reizadur ar Werzoniaez vretonek ».

Trugarez a greiz kalon d'hon mignonned ! El levrig « Kevrin Barzed Breiz » e kavor, disklêriet reiz ha traez, reolennoù ar werzoniaez vretonek, da laret eo pebaos en em gemeret evit sevel peziou rimet e brezoneg. Neb en deus c'hoant e-touez hon leuneriez soudarded da zevl gwerziou reiz, goulennoù al levrig-se diganin hag e vo baset d'ezo evit netra.

Digouezet eo ganimp ivez leo fou « Buhez ar pevar mab Emon » eus ar brava gant goloennou kartons. O goulennoù diganimp neb en deus c'hoant.

**Taolen ar Brezel**

**Ar stadou er-maez a vrezel**

Diouz ma c'hoarvezo etre an Alamagn hag ar stadou er-maez a vrezel, en o tenn Stadou-Unanet an Amerik, e vo abretaet pe bellaet fin ar brezel.

Setu an « Orleans », unan eus an daou lestr amerikan a oa o verdei eus New-York da Vourdel, o paouez digouezet er porz hep beza kavet harz ebet war e hent.

Nemet e lavarfed e c'hoanta an Alamaned skrapat gant an eil dourn ar pezh a roont gant an dourn all. Al lestr treuzatlantik « Laconia », 18.000 tonnell, eus ar gompagnonez Cunard, o tont da Vro-Zaoz eus New-York gant treizidi eus ar Stadou-Unanet, a zo bet goueledet, disul diweza, gant ar splujerien alaman, heb ali na kemen, ha daou eus an dreizidi amerikan a zo bet kollet gantan.

A-head-all, an Alamaned o deus taget ha gwall-gaset pe zistrujet seiz lestr-kenwerz eus Bro-Holland, war o hent eus Falmouth Bro-Zaoz da Rotterdam, evito da veza roet en a-raok d'al listri-ze aotreadur da dremen.

Da heul, an sotrou Wilson en deus disklêriet dirak kannaded ar vro e vije armet hiviziken listri an Amerik, d'ezo d'en em zitenn, diouz red, ouz splujeriez an Alamagn. N'eman ket c'hoaz an Amerik e stad a vrezel digoret, hogen, gouez da Wilson, e stad a « zifennerez armet », a zo tostik-tost d'ar brezel.

**Ar Zaozon trec'h en Hanternoz  
hag e Kout-el-Amara**

Ar zizmo dremenet, ar Zaozon o deus gwellaet souezus da gerzet war-raok en Hanternoz. O welet n'oant ken evito, an Alamaned, diwar ar 25 eus ar miz diweza, o deus staget da argila. En argiladen-ze, ar vrasa hini graet ganto abaoe ar « Marne », an enebourien o deus lezet gant ar Zaozon eur vias a dachennad, war eun talben a ouspenn peder leo hed hag eus 3 da 5 kilometr a zouder, gant eun niver a lec'hioù emzao : Pys, Miramont, Serre, ha, dreist-oll, krec'hien Warlencourt a zo eus ar c'hrenva. Ar Zaozon n'int ken breman nemet war-dro eul leo hanter diouz « Bapaume ».

En Azi-Vihana ivez ar Zaozon o deus graet berz. Peurgelc'hiet ganto, Kout-el-Amara a zo kouezet en o daouarn gant 1730 a brizonerien ha pourvezioù-brezel a-leiz. Derc'hel a reont da argas an Turked o kemeret milierou anezo da brizonerien.

**War an talbennoù all.**

War an talbennoù all nemeur a nevezenti. Nemet war linen ar Rusi an Alamaned o deus graet argadennoù gant azeunnoù mougus. Implijet o deus ivez an « tankou », ar c'birritan nevez-se ijinet gant ar Zaozon. En unan eus o argadennoù, e Wilna, an avel o trei a greiz-oll a zizabennas an azeun-voug en o foziou : o klask tapout ar re-all e voent tapet o-unan.

E menez Karpas, en hanternoz d'ar Roumani, an Alamaned, da heul eun asailh, o deus dalc'het eun nebeut krec'hiennou. Ar Rusianed, oc'h eneb asailh, o deus adkemeret eun darn eus an dachen o doa kollet.

**War vor.**

Al lestr « Athos », 12000 tonnell, o tont eus Bro-Sina gant tennaterien eus ar Senegal ha labourerien eus ar Gochinchin, a zo bet goueledet gant ar splujerien er mor Kreizdouarek. Amlrouget e oa gant daou lestr brezel, ar « Mameluck » hag an « Enseigne-Henry » a ziredas da zikour, a-unan gant eul lestr all. Gallet e voe, evel-se, savetei 1.450 den.

En noz etre ar 25 hag ar 26 eus ar miz diweza, ez eus bet eun emgann, e mor Breiz, etre eun distrujer (« destroyer ») saoz ha listri enebtarzerien alaman ; ar re-man o deus tec'het. En hevelep noz, listri alaman o deus losket gant kêriou

**GOUELVAN**

D'ar Barz Hollzent ar Garreg.

War-dro eur pemp kant yez a zo e-barz ar bed  
Da gomz war vuzelloù a zismegans, a bed,  
Pe a anzav a-grenn ar Mestr bras ar c'hrenva :  
Met n'eus nemet eur c'hiz er bed evit lenva !

Hag anavezet eo, diouz ar c'havel d'ar bez,  
Ar c'hiz evit lenva, dre-oll er bed a-bez :  
Evit gouzout gouela, tamm ezomm d'hen deski !  
Gortozit ma teuo ar vuhez d'ho leski.

Evit lenva, an dud bouzet ouz pep mister  
N'int nemet diskibien ouz eur bugel dister,  
Hag ar c'hiz diskiant diouz e lagad a red  
Daelou gwasoc'h eget an uhella spered.

Komz eo ar c'henta tra a zesk an holl boblou ;  
C'hoaz n'em intenter ket a-zindan an cablou,  
Rak rann-yezou ar bed abaoe tour Babel  
A zo aet war greski, ha a bepred, hag a bell.

Met daelou an holl dud pa zavont d'o lagad,  
An holl dud a intent a vagad da vagad.  
Bemdez yezou nevez a zav d'ar rendaelou :  
E-unan e kendalc'h hepen yez an daelou !

Nag a zaelou a ruilh, bero, tamm pe glour,  
Mad voutin da vab den war hon tammig douar !  
Da bep mare, dre-oll, e tiveront ken stank,  
Mar kouesfent a-gavred, e poulladfont eur stank !

Eus holl draou hon tamm pri lenva eo ar c'hosa,  
Rak, pa voent bet barnet dalc'hmata da bigosa  
Evit ma c'hellfont kaout da zibri, da eva,  
Daoust ha ne levent ket, int, Adam hag Eva ?

E skouarn an den bepred avel gastiz a voud,  
Aman bod a gastiz, aze bleun a hirvoud :  
E-barz dounder e greiz an Anken stard a beg,  
Ha da bega startoc'h e kav mat pep abeg.

Anken, keuz ha glac'har, setu hent ar vuez,  
Aman bod a gastiz, aze bleun a druvez :  
Eun hent hag a vije da bignat kalz re denn  
Ma 'n dije gant daelou evel eur freskadenn.

Ha 'velkent ar vuhez pep den keuziet he c'har  
Daoust d'he bec'h ankenioù, ha daoust d'he zamm glac'har.  
An *Esperans*, e-giz en noz eur steredenn,  
A zav 'us d'an daelou 'vel eur ganevedenn !

EOSTIG KERINEK.

Broadstairs ha Margate, war aochou Bro-Zaoz, eun nebeut tennou kanol, o laza pe o c'hloaza eur pemp bennek a dud dinoaz.

**La Langue Bretonne en 40 Leçons**  
PAR F. VALLÉE  
(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25) Imprimerie Saint Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieux.

**KERIBR EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

Kelou mat eus « Klada » ha « Penn-dero »

Trugarez d'hon holl vignoned o deus skrivet d'imp ar zizun dremenet diwar-benn reizha o chomlec'h (o « adres »). Pedit a reomp ar re a zo bet chenjet d'eo « secteur » da gaout ar vadelezh d'ober kemend-all evit ma



tigueuse gante kro = ar Vretoned heb mank na dale.

Setu aman eul lizer mat digant hon mignon ha kenlabourer ker « Penn-dero », a zo bet kaset eun tamm war an adreñv goude d'ezan beza bet « telefeñer » pell amzer war an talben. D'ezan hon gwella menoz ha d'an holl Vretoned vat a Gamper m'en em gav ganto breman.

18 a c'houevrer, 1917.

Aotrou ker,

Trugarez evit *Kroaz ar Vretoned* a zeu d'in bep zizun hag a ra d'in kement a blijadur aman pell diouz ma Bro !

C'houec'h zûn 'zo em eus kuitaet hon mignon Dir-na-dor. N'emomp ken er memes rejimant. Breman ec'h on kaset adreñv (evel tad a bemp buge). Al loden vrasa eus ma c'hom-pagnunez a zo Bretoned eus a gostez Kemper, holl oajet a 47 bloaz. N'em eus ket ezom da laret d'ec'h na vez klevet en pep kambr nemet hon yez karet o vont an-dro. Aman, eta, e komzer brezoneg evel pa vijemp en Breiz.

Ra deurvezo gant an Aotrou Doue lakaat prestik ar reuz-man d'achui evit ma tistrofomp c'hoaz d'hon Bro garet !

D'ec'h a wir galon, mignon ker. en karante Doue ha Breiz.

Loeiz Voris (Penn-dero).

Hon mignon ker Klaoda en deus chenjet chomlec'h ivez. Doue d'e viro bepred en e vicher risklus a « silzigenner » ! Setu aman eur pennadig eus e lizer diweza :

En armeou war an talben,  
22 a c'houevrer.

..... Yac'h onn atao a drugarez Doue, daoust d'ar poaniou hon eus da c'houzanv. .... Tenn hag hir eo ar brezel, siouaz ! Pegouls ec'h echuo ? Fiziñs a zo evelato e vezo er bloaz-man !...

Labour vat evit ar Vro

Loeiz Herrieu, e bro ar Hanternoz, a ra bepred labour vat evit ar Vro : hen eo en deus goulenne diganimp an noten diwar-benn al levriou gallek mat da henchha an dud desket war studi hon yez hag hon istor, a voutimp en niveren genta a *Groaz ar Vretoned*.

E Brest, e-lec'h m'eman bepred, « Eostig Kerinek » a labour start ivez evit ar brezoneg. — « Daut ouñ a-benn, emezan en e zizweza lizer. Da gaout eul levr brezonek bennak evit leordi ar « Foyer » e Brest. Lenne mat e vezont, rak kalz a Vretoned a bleustr ar c'helc'h-ze. » —

Hon prizonerien

Kelou hon eus bet eus an Alamagn digant daou eus hon mignonned ker : Yann Cadoret, breur hon « Koumiz Arvor », hag Arthur Bourdoulous, a oa miherour war ar moulerie a-raok ar brezel. O-daou int yac'h, a drugarez Doue, nemet ez eo deut Bourdoulous a benn, daoust ma vez lennet piz lizerou ar prizonerien gant an Alamagn, da rei da inteñt d'imp e wasa c'hoaz, er mare-man, war ar bevans fall hag ar poaniou o devez da c'houzanv. Lennerien ger, greomp hon gwella da zikour hon prizonerien !

Mignonned all : daou anezo a zo gleset

Kelou mat hon eus bet digant hon mignonned Yann Normand, en deus skrivet aman, n'eus ket pell, « Chapeled ar Zoudard », ha digant « ar C'hog », oberour « Chanson ar Pizard ». Hon c'henveur ker « Yann Kerper » ivez a gas e wella ennoz da « Groaz » ; eman a galon ganimp evit ar pennadou a zo bet savet aman diwar-benn « an digreizenni », daoust n'eman ket evit lakat da redek e bluen ampert, evel ma karfe, da zienn kaoz hon bro garet, dalc'het ma 'z eo gant

dleadou striz e vicher a zoudard. En em zic'haoui a ray diwezatoch !

Hon c'henlabourer ker, Per Guédès, hag a zo bepred klanvdiour war an talben, en deus tapet eur gwall-lamm war ar skorn. — « Ha setu breman liammet-kaer va fenn, emezan... » Fiziñs hon eus n'en devo ket bet re a zroug. Gant hon c'henvroad mat, Fransez Goueguer, a Lounargat, a skrive, n'eus ket pell aman, « gwerz ar 48vet rejimant » eman gwasoc'h ar bed, m'eus aon. Setu aman e lizer, skrivet gant war e wele hospital gant e zorn kleiz, pa n'eman ken evit ober gant e zorn mat. Doue da roio buhan ar pare d'ezan !

Al lun 26 c'houevrer.

Aotrou Rener,

Eur gir hennak evit rei d'ec'h eus ma c'helou, a zo eun tammig gwelloc'h hirie.

Ar c'hoaz 'vo eiz de, ez ouñ bet gwall-c'hlozet gant eun « obus » pa oan o keñser ma repoz er c'hamp. Ma brech deo a zo torret, pezh a laka ac'haon da skriva gant ma dorn klei. Ma gar glei a zo treuzet e meur a lec'h.

Bet ouñ daou devez er c'hlanvdi, e-lec'h em eus bet ar blijadur da gavout an aotrone beleien Leon ha Sieunou, ma c'henvroidi. Karet em bije bezan chomet en o zouez eur pennad.

Ma « C'hroazig » a garjen he c'ha-vout aman da lenn....

Da c'hortoz, de mat d'ec'h ha da holl lennerien « Kroaz ar Vretoned ». Ho mignon leal.

F. G.

## Buhez Lloyd George, Ministr bras Breiz-Veur

TREDE PENNAD : Lloyd George advokad

Pa n'oa ket pinvidik a-walc'h evit mont d'ar skolioù bras, Lloyd George a rankas studia el leordion, e-lec'h e vez kavet da lenn leordion evit netra, gant skoazell e en-tr, ar c'horreou paour. Heman, evit gallout e henchha gwelloc'h a ze, ne varc'hatas ket, hag hen koz ha sammet a labour, da studia e-unan war al latin, ar galleg hag ar Reiz.

Dre forz studia e voe digemeret an den yaouank da vreutaer, pe « advokad ». Neuze ez eas da chom e Porzmadog, eur gêr vihan war ribl ar mor en hanternoz d'ar vro.

Eno ne zaleas ket da veza brudet evel difennour Kambreiz paour, ma rœ skoazell d'ezo en o frouezou ouz ar Zaon hag ouz personed Iliz Bro-Zaoz. Evit ar skoazell-ze d'e genvroiz, evel sant Erwan gweckall pa zifenne ar beorien, ne c'houlenne ket beza paet. Diwar neuze e teskas pobl Bro-Gambre e garout ha lakaat pep fiziñs ennan.

Hogen, d'ar mare-ze, e save a bep tu mouezioù hag a c'houlenne ma vije gwellaet stad ar vro. Eñ den a spered uhel, hag hen ganet en eun tiegezh a goueried war ar maez, T. E. Ellis, a rae prezegennoù hag a skrive pennadou a bouez bras evit se. Kevedigezioù a zave ivez e pep lec'h hag unan eus ar galloudusa eus ar c'hevredigezioù-ze a c'houlenne ma vije desket yez ar vro e skolioù ar vro. Red eo ober meneg aman eus eur gelouen (« journal ») hanvet « Banner ac Amserau Cymru » (Banner hag Amzerioù Bro-Gambre), skrivet e kambreeg penn-da-benn, hag a zifenne gwirioù Kambreiz. Ar gelouen-ze a zo bepred en he zav.

Bez' eo neuze e penn Bro-Gambre kannaded (« deputeed ») ha na zoursie tamm ebet ouz mad ar vro. Ni ivez, aman e Breiz, hon eus aotronez seurt-se, hag a vo red d'ezo trei penn eun

deiz da-zont, rak aman Breiz, evel Kambre, o vont da zihuni.

Eun darn vras eus kannaded Bro-Gambre a oa « liberaled », izili eus eur gevredigez vras a bolitikerian, ar penn hag ar renidar anezo e Bro-Zaoz. E Kaerdiz, e 1890 Lloyd George, en eur brezeged d'al Liberaled, a laras e oa o dlead en em zistaga diouz politikerezh Bro-Zaoz ha labourer evit mad hag « emrenez » Bro-Gambre.

Kalz a vanas batet, abafst-oll, gant ken bras herder, gant kement a hardiziegezh a-berz an advokad yaouank. Kent se, e redas e vennad evel eur flamm-tan dre ar vro a-bez, hag e voe savet diwar-ze eun « Emzao » hanvet « Cymru fydd », da lavaret eo « Bro-Gambre a vezo » dre ma oa trôet hepken da brienti Amzer-dazont ar vro. Lloyd George a felle d'ezan skuba er-maez ar bolitikerien a vicher ha lakaat en o lec'h tud leal en-anes o c'halon gant ar garantez vro.

Daga e venoz da benn e ranke beza digemeret e Kamb ar Gannaded. Stad a vo ennan pa vo hanvet da gannad gant e genvroiz a Gaernarvon, e 1890. Tenn e oa bet d'ezan tremen pa n'en devoa bet nemet 18 mouez oupenn. E brezeged-nou kambreeg ha skoazell ar c'helouennou e yez ar vro, « Y Genedl Gymreig » (ar Vroadelezh Kambreeg) hag « Y Werin » (ar Bobl), a reas kalz evitan.

Evel-se eo e teuas Lloyd George da lakaat e dreid war leür ar Gambre ha da gemer e dammig peurz, evit ar wech kenta, e Gouarnamant Breiz-Veur.

P. MOCAER

Da heñv'h.

\*\*\*

## LENNEGEZ AR GELTED

Eur c'hennad eus kentelioù an  
aotrou Dottin e Skol-veur  
Roazon

SKRAPEREZ SAOUT COULEY

IV

Taoliou-kaer ar bugel Cuc'hulain

Fergus ha daou vrezelour all a zisplegas neuze d'ar rouanez Medb taoliou-kaer ar bugel Cuc'hulain.

Cuc'hulain, emezo, pa n'oa nemet pemp bloaz a heile gouren, e-unan penn, ouz hanter-kant bugel ha rei lamm d'ezo.

P'edo en e c'houec'hvet bloaz, en doa lazet gant eun taol maen eur c'hi fero a vire holl rann-vro Ulad e-pad an noz. Deut d'e reiz vloaz, en doa kemeret an armoù, ha n'en doa kavet skoed, goaf na karr-brezel ebet start a-walc'h evitan, nemet skoed, goatou ha karr ar roue.

Neuze e oa aet d'an argad hag en doa lazet tri mab Necht, a vire an tremen war rann-vro Mag Breg.

Ken tommet e oa bet gant ar c'hro-gad-ze ken na vo ket a re, d'e zistana, gant teir beoliad dour. Taolet er genta beoliad, ez eas ket tomm an dour diwarnna ma reas da duvelennou ha da gela'hioù ar veol strakat, evel ma strak eur gloren-graou. En eil beoliad e savas en dour berennou ken teo ha meilh-dourn eun d'ro. En dre le beoliad e voe an tommder a zeurd a hall tud-ze padout gant na n'eo ket tud all evit e c'houzanv. Neuze e tistanas war vroezh ha taerzien Cuc'hulain hag e stagas da c'hoari ar rod en hevelep doare ma henvelle kaout seiz biz e pep dourn hag e pep troad, seiz ibilh-lagad e p. p lagad hag hanter-kant kizennad bleo melen en e benn.

Kloza a reas an dauevellouriezh dre lavaret : « P'ez eus eur paotrig pemp bloaz rôet lamm da vibien ar vrezelourien hag an dud-veur e toull-

dor ar c'hastel ; p'en deus, deut d'e c'houec'h vloaz, lazet eur c'hi-brezel a zave aon razan ma na grede ket an armeou tostaat d'ar bastel-vro difennet gant ar gwall-loen-ze ; p'en deus, en e zeizvet bloaz, trec'het war ar vrezelourien vras o doa lazet an diou drederien eus tud Bro-Ulad, n'eo ket souez, deut war harzou ar vro, diwezatoch en e zeitekvet bloaz, en dije lazet eno eun den, daou zen, tri pe bevar den, war ho kerzadeg da skrapat saout Couley. »

DA HEULLE.

## Eur s'ol nevez war vicherioù Breiz

Meneg a zo war « Le Breton de Paris » e vo savet heb dale e Breiz eur skol da gentelia deskardet war vicherioù Breiz : kizellerezh koad, benerezh ha kizellerezh maen, pouderezh, hag all. Rener ar skol nevez e vije eil liver brudet hanvet Maxime Maufra.

Eur dra vat e vije ! A-raok ar brezel, hon breuriezou Breiz, « Kevedigezh Breiz » hag « Unvaniezh Arvor » o doa poaniet kalz war an tu-ze, hag eur Breizad gredus, — a zo bet, evel kement a re-all, falc'het gant ar brezel, — Ely-Montbet, en doa digoret an hent eus ar gwella evit ar c'hizellerezh koad gant ar skol-labour en doa savet e Caurel.

Hon rener koz, goude studia adsavidigezh ar micherioù e broiou all, dreist-oll en Iwerzou en deus skrivet eul levrig gallek « Les Petites Industries », a vo rôet evit netra d'ar re eus hon lennerien hen goulenno digantañ e sell da labourat evit Amzerdazont hen Bro garet.

Eun dra vat e vije ivez d'ar re o deus peziou arreboueri koz derc'hel d'ezo gwelloc'h eget ma re int.

Eun druez eo gwelet kement-all a drazou koz eus ar re gaera o vont er maez ar vro ! Diwezatoch, sur mat, e vo santet an diouer anezo pa vo ezom da rei skouerioù kizellerezh kaer diouz giz ar vro d'an holl zekarded-ze a vo bet furmet en hon skolioù-labour. E lec'h lezel hon peziou-arreboueri da vont gant ar varc'hadourien estren, e vije gwel, war hon menno, en em glevet gant an aotrou a Guebriant, mear Kastel-Paol, a zo bet hanvet da rener ti-mirerezh Kastel Keryann, ouz e bedi da rei digemer e Keryann d'ar pep brava eus hon traoù koz. Evel-se, ar re-man a vefe miret er vro 'hag a dalvezfe d'hon miherourien diwezatoch.

## KELEIER EUS AR VRO

TREDREZ

Medulennet. — Hon gwella gourc'hemennou a gasomp da Edouard Ollivier, « aspirant » en « 1<sup>er</sup> bataillon ar chasseurien war droad a zo bet rôet d'ezan nevez 'zo medalen ar brezel gant eur meneg eus an enorosa. Nemet ar deus perz en em-gannou bras diweza en Verdun.

Hon c'henvroad a zo niz d'an aotrou abad Querrec, person Pouldouran, hag unan eus bugale karet an aotrou Durand, person Tredrez.

Chans-vad d'ezan ha d'e dud ! Enor d'ar Vretoned !

EVNIG SANT ERWAN.

ERGE-ARMEL

Gourc'hemennou d'eur mignon ! — Hon gwella gourc'hemennou d'hon renner ha mignon ker, an aotrou abad Talamot, brigader-klanvdiour, a zo bet lakaat diou wech war an daolenner evit ar grad dispar en deus diskouezet o vont da zastum ar c'hlozet dindan tan ar c'hanoùioù.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St-Brieuc. — Imprimerie St-Gallouvie





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar breien estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

**Bluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

Ar Yeudet hag e vreur... 8 real  
hag eur c'houmanant.  
P. Losquin... 20 real  
J. ar Velly... 20 real  
Gueltaz... 4 real  
hag eur c'houmanant.

Trugarez d'hon holl vignoned ! Hon gwella gourc'hemennou d'hon lenner ker, P. Losquin, a zo o paouez beza hanvet « aspirant », goude beza bet, pevar miz, war e studi-ofiser e skol vrudet Sant-Cyr !

**Taolen ar Brezel**

**Ar stadou er-maez a vrezel**

Er stadou-Unanet, an aotrou Wilson, evit ober arma al listri-kenwerz, en deus kavet en e eneb unneg eus izili ar Sened. Ar re-man, dre o eneberezh dibobell, o deus miret ouz ar goulenn da dremen disul diweza. Nemet, evel m'eo bet aotreet gant sinadur 24 secedour war 96, e c'hello an aotrou Wilson derc'hel gant o veanned.

An Alamanned, droug enne, o deus klasket en em glevet gant dispac'herien Bre-Vekjik, Caranza en o fenn, hag ober da heman gounit skoazell Japaniz ouz ar Stadou-Unanet. Dizollet eo bet an holl gavaillhaden, hag e pouezo kalz ar gamm-dro-ze, moarvat, da zistaga c'hoaz ar sperejou en Amerik diouz an Alamagn.

Bro-Sina (Chin) a zalc'h da gerzet war roudou ar Stadou-Unanet. Nemet dizunvaniez a zo savet etre ar renermeur hag ar Gambr : houman a c'houlze ma vo torret an darempredoù ouz an Alamagn hag ar rener ne fell ket d'ezañ hen ober.

**War dalbennou ar C'hornog**

Ar Zaozon o deus dalc'het da gerzet war-raok er « Somme », dreistoll korn kleiz o armed etre « Gommécourt » hag « Irles », er gwalarn-kornog da « Vapeaume ». Ar c'horn dehou ivez, daoust d'an Alamanned da zevl stourm, en deus gounezet tachen en hanternoz da « Sully-Sailly ». Da gredi eo e vo kerc'hiet « Bapeaume » heb dale pell, hag e renko an Alamanned he dizezel evel m'eo devoa dilezet « Péronne ». Ken start eo kanoliadeg ar Zaozon ma klevet anezi e Paris.

War an talbennou all krogadou

aman hag a-hont, ar pouezusa anezo en hanternoz da Verdun. An Alamanned a assailhas eno disul hag e teujont a-beñ da zerc'hel eur pennaadig luenn dirak koad « Caurières ». Hogen n'helljont ket doue e-barz ar c'hoad-ze na kemeret traouie « Bezonvaux », evel m'eo doa c'hoant. Al lua, en eua eneb-assailh, ar Fransizien o deus adkemeret digante ar pep brasa eus o fosioù.

**War talbennou ar Reter hag en Azi-Vihana.**

War linen ar Roumani, e pad bepred an emgann er « C'harpatou koadek » en hanternoz-gwalarn d'ar Roumani. Ar Rusianed hag ar Roumaned a zalc'h penn da vat.

En Azi-Vihana, goude kemeret Kout-el-Amara, ar Zaozon o deus argaset an Turked dindan dec'h ha graet eur vras a gammed war-raok war-zu Bagdad, kêr-beñn ar c'hornbro-ze.

Diouz o zu, e bro-Berz, ar Rusianed o deus kemeret Hamadan, o kinnig adarre astenn dour, dre an hanternoz, d'ar Zaozon o kerzet da Vagdad dre ar c'hreisteiz. An Turked a zo berr warno, taget ma 'z int diouz an daou du.

**Ar brezel war vor hag en aer.**

Evel an « Orleans », al lestr amerikan all « Rochester » a zo digouezet da vad e Bourdel, hep kavout harz war e kent.

An 28 eus ar miz diweza, da eun eur diouz ar beure, e vo goueledet, er mor Kreizdouarek, al lestr eneb-tarzer (« contre-torpilleur ») Cassini, 950 tonnel. Ar c'hsbiten, 6 ofiser ha 100 a is-ofiseria hag a vartoloded a zo bet kollet gantan ; 2 ofiser ha 32 is-ofiser ha martolod a zo bet savetaet. Ar splujer alaman, e-lec'h rei skoazel d'ar benseidi d'en eun zavet, en dije kaoliet ar re anezo a oa war neunv pe o doa en em repuet war radellou. Mantrus eo !

An nijerezed o deus labourer eus ar starta. En noz, etre ar 4 hag ar 5 eus ar miz, nijerezed ar Fransizien a zo aet da vombeza tier an hent-houarn ha kazarnioù Fribourg, en Alamagn. En noz war-lerc'h e loskjont 3.130 kilo bouliji ouz eur c'hamp ha kardiou nijerezed an Alamanned e Varesnes (Oise). Diouz o zu, ar 4 eus ar miz, nijerien ar Zaozon o deus taolet eun niver bouliji ouz teuzerezoù-houarn an Alamanned e Brebach.

**Klemmou ar prizoniet**

D'am breur prizoniet.

WAR DON : *Combien j'ai douce souvenance*

**I**

Evñig bihan a gan ken laouen,  
Noz ha beure, endro d'am lochen ;  
Hirie d'az tro, ehilaou klemmo  
Ma zelen ;  
A denn-askell, te o c'haso  
D'am bro.

**II**

Me a ze eur paour kêz prizoniet,  
Dre ar brezel, a Frans harluet,  
Soudard Breizad, diouz e zever  
Diframmet ;  
War ma diou skoa yeo eur gwasker  
Ponner.

**III**

En bro estren eo rust ar vue  
Hag al lezen garv ha didrue ;  
Pep tra a lesk hag a hual  
Ma ine,  
Sklerder an heol a lak tenval  
Ma zal...

**IV**

Frankiz, frankiz ger meulodius,  
Tensor dispar ar vue peuc'hus,  
Na pegoulz c'hoaz, e c'hallin-me,  
Eyurus,  
Tanva ganit joa, karante,  
Noz, de ?

**V**

O Breiz-Izel, bro muia-karet !  
D'it e fenn ma c'halon glac'haret,  
D'it ma spered, gwinidelig  
Forbannet,  
Bemde, bemnoz, a nij sioulik,  
Sioulik !

**VI**

Hag ec'h adbevan, em bro Gerne,  
C'houez ar balan, er vad ar mene,  
Biniou sklintin, kan alc'houeder,  
Heol-veure  
Toniou lizhin, o nijal sklêr  
Eu é !

**VII**

Me a wel, em zraouennig peuc'hus,  
Ma zi glas, ma zud karantezus ;  
Mignoned deut d'm zaludi  
Niverus,  
Dre-hol eurvad, c'hoarzh, kaniri,  
Dudi !

**VIII**

Siouaz ! sonj peaniz ar wirione  
A deu prestik, 'vel eun tól kleze,  
Da derri, krenn, kerdennigo  
Ma huovre  
Ha da greski samm ma foanio  
Garo.

**IX**

Doze, c'houi 'gley hirvoud ma c'halon,  
Plijet diskar harzou ma frizon  
Ha rei d'ar Frans, gant Fe gristen  
Ha pardon,  
Heol eur Viktor, na vougo ken  
Biken !

Koulmig ARVOR.

**BUHEZ DAVID LLOYD GEORGE**

**Trede pennad : Lloyd George  
e kambr ar Gannaded**

Evel ma oar lennerien *Kroaz ar Vretoned*, eur vro geltiek a zo, hanvet Iwerzon (Irlande, e galleg), hag he deus miret he broadelezh, he feiz katolik hag he ye. Bro-Zaoz he deus aloubet ar vro-ze, ha graet pep tra evit flastra he spered, hogen en aner.

Kannaded Iwerzon o deus savet, pell a zo, eur gevredigez krenv evit difenn o bro hag enebi ouz kement lezen a c'hallje beza douget da nozaout ouz Iwerzoniz. D'ar c'houlz ma voe dibabet Lloyd George da gannad gant e genvroiz n'oa c'hoaz netra a zeurt-se e Bro-Gambr, evel n'ez eus netra e Breiz hizio an deiz. An den yaouank a zisklêrias uhel raktal e vije eun dra vat, eun dra red zoken, ober diouz skouer Iwerzoniz, ha furmi evelto eur gevredigez vroadel. Setu aman ar pez a lavaras war ze en eur brezegenn grot gantan e Kaerdiz :

« Ar broadeleziou keltiek a die poueza war ar gouarnamanchou, hag ar pouezadur-ze, evit dont da vad, a die beza grot war ar Gambr gant holl nerzioù ar vro unanet en eur gevredigez ».

Pa zeuas d'ar Gambr, ar Gouarnamant a oa er penn anezan mirourien, pe « gonservatourien », da livaret eo tud e karg. a-du gant Iliz protestant Bro-Zaoz a-du gant an dud pinvidik, hag a eneb d'ar Gotted. Neuze avat, e voe gwelst eur c'hoari-gaer ! Ar gouarnamant a esas ober tremen lezennou evit rei galloud hag arc'hant d'an Iliz protestant diwar goust ar vro. Bep tro Lloyd George a zavas hag a brezegas en eur mod c'houer hag entanet en o enep. A-wechou bleinour an Eneberez (Opposition) a felle d'ezañ tremen diouz ar gouarnamant e traou a oa. Lloyd George, avat, a stourme hag a lavare heb aon ar pez a oa war e spered. An holl e Breiz-Veur, e Bro-Zaoz kerkouls hag e Bro-Gambr, a zeuas neuze d'e ana-vezout.

Eur votadeg all a voe graet e 1892, hag an dro-man ar baotred a-raok, al « liberal », a voe trec'h d'ar virourien, d'ar « gonservatourien ».

Hogen n'o devoa nemet daou-ugent mouez trac'h war o enebourien hag, evel m'oa unan-ha-tregont anezo a Vro Geumri, ar re-man a helle beza risklus-bras d'ar gouarnamant hag e deurel d'an traou pa garjent Setu perak e vos rôtet gant Lord Rosebery, ministr bras al « liberaled », eul lec'h a enor d'eur C'hembroad yaouank, an aotrou T. Ellis. Koulskoude, Lloyd George a yeaser maez eus kevrardigez al « liberaled », dre ma kave gantan e tismeganse Lord Rosebery tud e vro hag e selle onto evel pa vijent bet gouezidi eus kreiz an Afrik.

P. MOCAER

Da heuilh.

## Truez ha fraa'zidigez !

Tennet eus lizer eur mignon a zo nevez zigouezet en eur c'horn eus ar c'haera a Vro-Leon.

O pegeñ kaer eo ar brezoneg ! Ha, koulskoude, er vro-man ez eo disprizet gant meur a hini. Yez ar van-m, yez ar galon Pebez diskiantegez !

Gwaza 'zo, aman e welan paotredigou diwar ar maeziou o studia ar c'hatekiz gallek war zigarez me eo diaes da intent hini brezonek Kemper.

N'eo ket evel-se e teuo ar brezoneg war wellaat. Nan ! Mad eo gouzout ar galleg, evel just ; mes eur Breizad hep yez e Vro n'eo na kig na pesk. Eun druez eo !

Ya, eun druez eo, nemet, a drugarez da Zoue, evit hon frealzi ha rei d'imp epi en Amzer-lazout hon Bro garet, e welomp, e lec'hioz-zo a Vreiz, Breiziz kalonek o ren hon bugale hag hon tud yaouank war hent ar yez hag ar garantez-vro. Setu aman eur pennad diwar eul lizer digant unan eus ar vistri vat-se. Enor, meuleudi ha mil bennoz-Doue d'ezan !

Eun tammig diskuiz hon eus bet e-pad an deiziou Ened hag hel lakan da dalvezout da skriva d'eo'h. Dife a zo gant al labour aman, evel er skolioù all, e-pad ar brezel. Hogen, ne ankounac'hann ket va Breiz na kement tra a zell outi ; ober a ran ar pez a zo em c'halloud evit he lakaat da vezan anavezet ha karet gant ar vugale a zo endro d'in.

Kalz a lijadur a gavont e traou hor Bro, dreist-oll en he istor. Tamm-ha-tamm e teuo an holl Vietoned, uhel pe izel, da zeski anaout o bro, he braventez, he c'haerder, he c'hardarded, oberioù uhel o zadou hag ar brud dispar a dennjont war an hano a Vreizad.

Kement tra a zell ouz Breiz-Izel hag he Yez karet a gav eul lec'hig brao kenan e-barz kornig tomm va c'halon. « Da genta Doue », « Ha Breiz goude ». An ereou a stag va c'halon ouz Breiz a zeu da veza startoc'h-starta em c'hreiz. Plijet gant Doue rei d'omp eun tammig frankiz evit hor Yez goude ar brezel bir hag euzus-man ! Loden wella gwad Breiz a zo bet skuilhet evit frankiz kement a vroadou-tud ma 'z eo dereat e ve rôtet eun tammig eus ar frankiz-se d'ez i vez. .... »

EVEL-SE BEZET GRAET !

## Pennas studia Istor ha Yez Breiz ?

Hon mignon ha keavreur ker, Loeiz Herriou, a skriv d'imp eus an talben :

« Alies e vez goulennet diganin roll al leoriou da leza war istor, rag-istor yez, furnez Breiz, pe ar Gelled (leoriou gallek). Hizio c'hoaz eun ofiser, hag a zo kentelour, en deus goulennet an dra ze ouzin Evel n'hellan ket, er vicher-man, dougen ma leoriou ganin na zoken kaout ar

# PEDEN AR GEDOUR

Ar skrivagner gallek brudet, René Bazin, war an « Echo de Paris », en deus roet d'ar pez-man eur veuleudi dleet mat. Savet eo bet, war an talben-brezel, gant hon lenner ha mignon ker « Bleimor ». Hon gwella menoz d'ezan ha d'an holl genvroiz a zo gantañ oc'h ober god du-hont war harzou ar Reter !

An tenvalder pouner d'aveas en-dro d'in ;  
War ledanded al lann liou an noz 'n em lede,  
Hag e klevis eur vouez war ar c'hleun o p-din ;  
O peden ar c'hadour (1) pa gouez goulou an de !

— « Heol klavy an nenvou gwany, setu-hen aet da guz !  
Kleier an Anjeluz o deus sonet e Breiz ;  
Marc eo an oaledou, ar stered zo lintrus ;  
Laket eur galon grenv, o ma Doue, em c'hreiz. »

N em erbedi a ran d'Es'h ha d'ho Mamm zantel ;  
Ma diwallet, Doue, ouz spontour an noz dal.  
Rak bras eo ma labour ha pouner ma stagel ;  
Dirak talben ar Frans deut eo ma zro gedal.

Ya pouner ar stagel ! War-drenv d'in e welan  
An arme. Kousket eo. Ha me 'zo he lagad.  
Eur garg divalo eo, her gôut a ret. Aman  
Bet ganin ; ma freder a zeuio da skanvat.

Me a zo em c'harter, 'vel merdead war vor,  
Ar gedour a wel holl, a glev holl ; rag ar Frans  
'Deus ma galvet henez da viret hec'h enor.  
Kemennet he deus d'in kenderc'hel d'he droukrans.

Me 'zo ar c'hadour bras en e zav war ar c'hleun.  
Gôud ouzon Petra ouz, gôud ouzon Petra ran ;  
Dour, ene Kornog, e vech'hed hag e vleun ;  
Hell gened ar Bed eo, en noz-man, a viran.

Ker e paein ar brud marteze. Petra 'vern !  
Havou ar ra gouezet Envor Breiz e miro ;  
Me 'zo ar steren splann war dal Frans a logern,  
Me 'zo ar gedour bras war zav evit e vro.

Kousk, o Frans ; kousk e peneh ! Me 'ray ged war da dro,  
Ha, mar deu da goenvi mor an Alamand  
Breudeur omp d'ar c'herreg a zifean aod hor Bro...  
Kousk, o Frans, ne vi ket, en taol man, stlabezat !

Breman kousk, o ma bro ! Man ma dorn war ma c'huez ;  
Gôut a ran ar vicher ; eur gwaz ouz, me 'zo krenv !  
Dann ar Frans em evez 'n he devo ket diez...  
Petra ouz diragoc'h, o Doue, 'met eur prenv ?

Pa zailhan dreist d'ar c'hleun, eur vouc'hai en em dorn,  
Ma faotred 'lar moarvat : « Arso ! Henez 'zo gour. »  
E teout war ma lerc'h er fank, en tan, er forn...  
Met C'houi, C'houi 'oar a-walc'h ne doun 'met eur pec'hour.

Rak-se, pa strew an noz he spouron dre ar glen (2),  
E groc'hioù ar c'hleuniou pa ziskui dre breuder,  
Ho pet truhe ouzin selouet ma goulou !  
Deut, hag an noz 'vidon a vo leun a splannder.

'Vit bout aman en eus losket ma zi, ma zud ;  
Uheloc'h e lakan ma dlead em c'halon ;  
Na mab, na breur ! Ar gedour ouz hurennek, mud ;  
War harzou ar Reter me 'zo 'r garreg vreton.

'Velkent, lies a wech e renkan hirvoudi ;  
« Pennas emaint ? Siouaz ! paour int, klavy marteze... »  
Ma Doue, pet truhe ouz an ti a zo d'i,  
Rak n'em eus ken er bed 'met ar re 'ouel aze.

Ma Doue, me a zo eur gedour 'n e-unan.  
Ma bro a fiz warnon, ha ma ne doun 'm t pri ;  
Dask-ret d'in henez an nerz a c'houlennan ;  
'N em erbedi a ran d'Es'h ha d'ho Mamm, Mari ?

BLEIMOR.

Kala goanv 1916.

(1) Brez-lour.  
(2) Traouen ar Bed-man.

pez am be ezomm, e teuan d'ho pedi da skriva d'in roll al leoriou a die lann eun den diouizie diwar-benn Breiz hag ar brezoneg evit gouzot, da vithana eun draig bennak diwar-benn hon Bro ha gallout he difenn. »

Da gaout eun daolen eus istor Breiz, ha hi beo ha plijus, kuit da veza sech he treut evel an diverradurioù peurlieas, ar gwella levr, d'am meno, eo « La Bretagne, Résumé du Cours d'histoire professé à la Faculté des Lettres de Rennes, par A. de la Borderie », e peder gevren, e ti Plihon ha Hommay, 5, rue Motte-Fablet, Roazon. Ar priz a die beza en-dro da bemp skoed evit ar pevar levrig.

Ar re a zo anaoudek a-walc'h eus ar yezadur dre genstadi ar yezou (« grammair comparée ») a rafé mat o lenn levr gouie-iek an aotrou Loth « Chrestomathie bretonne », embannet e ti Bouillon, 67, rue Richelieu, Paris. Kavet e vez ivez e ti Plihon, Roazon. Eun daolen glok eo eus hon yez hag eus hon lennegez.

An aotrou Dotin, mestr-kelenner brudet Roazon, en o levr « Manuel pour l'Etude de l'Antiquité celtique », en deus merket piz ha-piz holl vammiou hon anaoudegeziou eus an Hen-amzer geltiek. Kavet e vo al levr-ze ivez e ti Plihon.

Eun daolen dalvoudeus eus ar studiou keltiek a gaver el levr Victor

Tourneur « Esquisse d'une histoire des Etudes celtiques ». Al levr-ze a zo bet embannet e Liège hag e veze gwerzet gant an oberour, rue Defacqz, 98 ; kavet e vije breman marteze e ti Champion, Paris.

Da ziski behin hag heb re a boan eun tammig brezoneg ober gant al levr « La langue Bretonne en 40 Leçons » gant F. Vallée ; priz gant ar frejou-ka 3 25, 27, boulevard Charner, Sant-Brieg.

Ar re a oar ar brezoneg a gavo el leoriou-gou « Notennou diwar-benn ar Gelled koz » ar pep brasa eus an danvez a rank ar c'hallegerien klask el leoriou teo, diés ha koustus.

## Gant piov 'z ay an dollarded ?

Eur Breizad, Gwilherm Costiou, 75 vloaz, a zo marvet o Sant-Jose, bro-Galiforni, o lezel war e lerc'h eun herez a 36,700 dollard ar pez a ra 183.500 lur. Ma vije en-touez hon lennerien unan hag a ve kar d'ezan, skrivet, o rei e hano hag e nester d'an hini maro, da vinistr an traou a ziavaez (« Ministre des Affaires Etrangères ») e Paris.

## KELHER EUS AN VRO

ROAZON

Micheriu Breiz. — Evel ma oa bet lavaret aman eur pennid 'zo, ez eus bet savet e Roazon eur strollad tud desket evit kla k'kriski micheriu ar vro. Nemet ar pep brasa anezo a zo tud e karg... pe Normaned Gwaza 'zo war an « Ouest-Eclair », ar c'henta eur ar miz-man, eur skrivagner akuit, Marius Vachon, en deus disklriet e oa renet an holl strolladou-ze gant « Bureo an Ijinou-kaer » e Paris, ha n'oa ket tre da fiziout eno.

Koulskoude en e gendale'h kenta, ar zizun all, strollad Roazon en deus klasket ober labour vat diwar-benn an deskarded war vicherioù hag an deskadurez vicherel er skolioù. Oc'h ober ze ne ra ken nemet kerzet war roudou hon mignoned eus « Unvaniez Arvor », Yann Kerpert, Ely-Monbet, hag all, o doa diskouezet ha digoret an hent a-raok ar brezel. Salo ma vo dalc'het gant Roazon da heuilh o skouer-vad !

MONTROLEZ

Bandennou skraperien yaouank. — Serret zo bet e Montroulez, ar zizun all, diou vandennad paotred yaouank, eus 14 da 19 vloaz, hag a skrape boutailhou gwinaou fin e tavarriou kêr.

Diwar-benn al laeradennou-ze graet gant paotred yaouank, kalz a zav o mouez, gant gwirionez a-walc'h, ouz ar skudennered nevez « sinema », ez eus breman kement anezo e Breiz.

Moarvat e c'halle dont ganto taolennou kentelius pe skouerius hepken. Nemet, evit pebra an arvest, e tispleger re alies dirak ar zellerien gwall-daoiliou, laeradennou graet gant skraperien yrudet, stourmadou ouz an archerien, muntrou, ha me 'oar !

N'eus ket da veza re zouezet pa weler ar seurt arvestou o tevel frouez fall e-touez hon yaouankizou !

E kêriou-ze, ar marioù a laka evez ouz arvestou ar « sinema », hag a zifean striz outan displega taolennou a wail-skouer. Mat e reont !

Ar Rener-Merour : F. VALLEE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Gallan'ne





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An *itron Blanc* ..... 4 real.  
Trugarez en hano hor zoudarded !  
Da drugarekaat hon eus ivez,  
hano hor zoudarded, an aotrou  
Berthou evit e leoriou « Kevin ar  
Varzel », displeget enno eus ar  
gwella penaos sevel guerzennoù  
brezonek. O goulenn neb en deus  
c'hoant, hag ivez « ar pevar mah  
Emon » !

**Taolen ar Brezel**

**Eun trec'h bras gounezet gant ar  
Zaozon ; Kemeredigez Bagdad**

Goude kemeret Kout-el-Amara,  
evel ma oa bet displeget ar zibun  
dremenet, ar Zaozon o deus argaset  
war laou ribl stêr « Tigr » an Tur-  
ked dismantret-oll, hag, an 11 eus  
ar miz, e kouez ganto en o dalc'h  
ker Vagdad n'oa ken an Turked evit  
he difenn.

Eur gwall-goll eo kemeredigez  
Bagdad evit an Turked. Ouspenn ma  
'z eo eur gêr vras ha brudet kenan,  
eno en em gav kroaz-hent an he-  
chou a ambroug da c'halloudosa ha  
piavi lika broioù ar Zav-heol : bro-  
Indez, an Arabi, ar Syri. An Turked  
a ze lakaat war var da goll an diou  
vro ziweza-man, poblet ma 'z int  
gant Arabed na c'houlennfent ket  
gwell eget adkavout o frankiz : An  
Arabi n'he deus ket zoken gortozet  
kemeredigez Bagdad evit en em zével  
dindan renadur Hussein, unan eus  
pennou bras an Arabed. Evit ar Syri  
hag an Douar-Santel, en em gavout  
muioù-ha ze dindangourdrouz. Saozon  
an Ejipt, a ginig kerzet da Jeruza-  
lem dre vro-Sinai, evel ma klaskas  
ober Napoleon koz gwec'hall.

Eun taol pounner eo ivez d'an Ala-  
mand o doa hunvreet kemeret Bag-  
dad da benn-lien eun hent-houarn  
oc'h unani Anvers, war mor an Han-  
ternoz, da Constantinopel, hag o rei  
ac'hane krog d'ezo, dre Vagdad, war  
holl vroioù ar Zav-heol.

E-keit ha ma kemere ar jeneral  
saos Maude kêr Vagdad, e talc'he ar  
Rusianed, diouz o zu, da gerzet war-  
zu enni dre ar Berz. Tremenet o deus  
Bisotoun, eul lec'h brudet dre ens-  
krivadurioù a zo war rec'hier en enor  
d'eur roue koz eus ar vro. Da gredi  
eo e teuint a-benn da zifurka diouz  
ar monezioù ha da geja gant ar Zaozon

e traouien an « Tigr » ; ha neuze bec'h  
darre war an Turked !  
Betek d'hou zoudarded e Salonik,  
kerkoulz ha d'ar Rusianed ha d'ar  
Roumaned er C'hatali hag er Rou-  
mani, an trec'h-man a ra dizamm, o  
veza m'o doa kaset an Turked er  
broioù-ze kalz a zoudarded, a rankent  
bremen gervel en-dro d'an Azi-Vi-  
hana.

**War linennou ar C'hornog**

Er « Somme », ar Zaozon a zo bre-  
man tostik-tost da gêr « Bapaume ».  
An 10 eus ar miz, e voe kemeret  
gant kêriadenn « Irlis », er c'hornog  
da « Vapeaume » hag e rejont, da  
heul, eur vad a gammed war-raok  
a-hed eun talbennad a bemp-kilometr.

An 12, e voe dalc'het c'hoaz kêria-  
den « Grevillers », a zo a-linen gant  
« Bapaume », war-dro tri c'hard leo  
er c'hornog d'ez, ha koad Loupart,  
eul lec'h eus ar c'hrenvaeta. Abaoe,  
n'o deus ket paouezet da arakaat  
eno hag e « Gommécourt » a zo uhe-  
loc'h er gwalarn.

War an talbennou all krogadou  
aman hag a-hent, dreist-oll er Cham-  
pagn. An 15 a c'houevrer an Ala-  
mand o doa dalc'het eur pennad  
linenn e « Maisons de Champagne ».  
Adkemeret eo bet diganto abaoe, ha,  
da heul, diwar an 8 eus ar miz, e  
voe aet war-raok gant hon zoudarded  
war eun talbennad a 1.500 metr.

**En Amerik. Iwerzon.**

Er Stadou-Unanet, da c'hortoz  
kenta kendalc'h ar Sened er miz a  
zeu, an aotrou Wilson a ra arma al  
listri-kenwerz. Nemet e fell d'ezan  
hen ober didrouz-kaer ha diembann.  
Emeur e sell, ma kredte an Alama-  
ned en em gemeret ouz al listri  
armet-se, e c'hallfe beza brezel da  
vat a-barz nemeur !

O heuilh skouer ar Stadou-Uni-  
anet, eman bro-Sina (Chin) o paouez  
terri an daremprejoù ouz an Alamagn.

Iwerzon, dre vouez he c'hannaded  
e Kamb Londrez, en o fenn an  
aotrou Redmont, he deus goulnnet  
adarre, ar 7 eus ar miz, ma vije  
lakat da ren lezen an « Emrenerz »  
digemeret gant ar gouarnamant pell  
a zo. Siouaz, harz a gav bepred  
a-berz protestanted an Ulster ha  
n'eman ket c'hoaz an aotrou Lloyd  
George a nerz d'en em zibab diouto  
evel ma karte, moarvad !

**War vor hag en aer.**

Eun nevezenti hag a c'helfe kaout  
kalz a bouez : Eul lestr eus ar  
Stadou-Unanet, an « Algonquin ».

1800 tonnel, gant eul lestrad bevans  
evit Ero-Zaoz, hag ben dizamm, a zo  
bet gouledet a dennou kanol ha  
bombezennoù, heb ali ebet, gant  
eur splujer alaman. Daoust hag ar  
brezel eo ar wech-man ?

Ar c'hont « Zeppelin », ijiner al  
listri-aer divent a zoug e hano, ar  
« zeppelinou », a zo marvet gant  
eun danijen-skevent d'an oad a  
79 vloaz. An impalaer Gwilherm  
hag an Alamagn a-bez o deus rentet  
d'ezan enoriou bras, daoust ma n'o  
deus tennet nemet nebeut a frouez  
eus kavaden an ofiser koz-se : ar  
« zeppelinou », kaset ganto da  
lakaat an tan war Londrez, o deus  
graet tro weun bep gwec'h ha dis-  
karet e voe eiz anezo en taolion  
diweza.

Emgannou start a vez bepred etre  
nijerezed. En eur ober eun devez,  
disul diweza, ar Zaozon o deus dis-  
karet betek nao nijerez alaman.

**Distro eus « permission »**

O tistrei eus « permission »,  
Me a oa bihan va c'halon.  
Kimiadi diouz ar gerent,  
Dispenn a roudou war an hent,  
Ober a-nevez ar veach.  
Rae'n 'vit ar bedervez gwec'h,  
Trei kein d'am brasa mignonned,  
An dra-ze a gaven kalet.

Evelato, e kaven gras  
Dre ma tiskorne an hent bras :  
N'em boa ket a riu d'am daouarn,  
N'i kennebeut d'im diskouarn.

Aet oun war-eun beteg ar gar,  
Hep kaout aon da derri va gar ;  
Trezet em eus an Dour-ledan  
Heb neunv hag heb ar vatimant ;  
En em gavet war an dorgen  
A zo hanvet « Maeziou r Gerent »,  
E welen ar vourc'h, an tiez...  
Bet oun enno ken allies !

An tour a welen eus a bell,  
Henvel ouz eun tach kornigell,  
Ha, tro-war-dro, kalz tiegez  
A zo stag holl ouz va farrez :  
Al Langroaz, ar Bugn ha koad-Reun,  
Hadet evel toulladou greun.

Eun tammig muioù-ha war o c'biz  
Eman 'r Ger-rouz hag ar Genkiz.  
Mar kirit, e hanvin d'oc'h c'hoaz  
Lamber, Kree'hiller hag ar Groaz,  
Gerioù savet e brezoneg  
A-raok m'oa ganet ar galleg,  
Hancioù c'houek ha komzoù doan  
A lak da dridal va c'haloun !

Poan a rae d'in distrei va fenn,  
Diwar eun hevepel taolen,

Hag e ranken astenn va gar  
A-benn tizout an trêr er gar.

Prest e tigouezas ar marc'h-du,  
Ha me sevel en trêr dioustu  
Laouen, marteze o c'h arzin...  
Ya, diwar goust eur banne gwinn.

Goude beza bet storloket,  
Eus an eil gar d'eben ruilhet,  
Ha tremenet eun novez weun,  
'Oun en em ren et en talben.

Kecavo, 'ta, pevar miz all,  
Ha chaos-vat d'comp en eur c'headal !

YANN PAUL, telefoner.

**KREMER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

Kelou eus hou mignon G. Mazeas ; eur  
mision gant an 71vet hag an 48vet

Pellig a zo n'hor boa ken a gelou  
eus hor mignon ker, G. Mazeas. Setu  
aman eul lizer mat o paouez digoue-  
zout ganeomp digantan, bennoz-Doue  
d'ezan ! Rei a ra ivez kelou eus an  
71vet hag ar 48vet, a zo o paouez  
kaout eur mision, war an talben-  
brezel. Trugarez d'ar veleien c'hredus o  
deus trezeget anezan !

An unnek a veurz, 1917.

Aotrou ha kenroad ker,

Trugarez evit al leoriou am eus re-  
sevet pell amzer a zo, met, abaoe ma  
redomp dre an hechou, ne chom  
tamm amzer evit skriva.

Kalz frouez a zo da denna anezo.  
« Istor ar Gelted », dreist-oll a zo  
ennan traou a bouez ha talvoudus da  
anaout. Ouspenn e kaver ennan kalz  
gerioù e brezoneg reiz, hag a zo,  
siouaz, dianav kalz anezo. War-bouez  
o lakaat er skijoù e vezint adarre  
anavezet, ha gant an amzer, implijet  
er yez komzet. Goude beza tremenet  
diou ha teir gwec'h dindan an daoula-  
gad, a dra zur an holl a zeuio d'o  
c'hompren hag e kemerint lec'h ar  
gerioù gallekaet implijet gant darn a  
dud...

Eur ger breman diwar-benn hon  
retred e kamp M.

War-bouez rikla ha ruilh war an  
erc'h, adsevel evit ruilh a-nevez, e  
tigouezomp er c'hamp. Met, siouaz,  
krisoc'h buhez a oa eno eget er fosiou  
e camp o paouez kuitaat. An tiez koad  
ne c'houdont ket kerkoulz hag an  
toullou gozed ; ar bara a skourne  
bemnoz, hag e oa red diskourna an  
dorz war an tan evit he boule'ha...  
Digouezet e camp eta o c'houlenn hag  
o hedi kuitaat ar c'henta ar gwella.

An deizioù war-lerc'h holl d'ar







**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar bieuou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Grenz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

Guelvez..... 20 real.  
An iron Auffret..... 4 real.  
Trugarez d hon mignoned !

**Taolen ar Brezel**

**Kiladeg an Alamaned.**

Ar 17 eus ar miz-man ar Zaouzon o deus dalc'het « Bapaume ».  
Da heul, « renkas an Alamaned kila da vad, o lezel da gouza gant ar Zaouzon hag ar Fransizien eur vras a dachen. Krogadou stank a zo bet etre lost an armead alaman o kila hag armeou ar re-Unanet o vont war-raok, en o fenn ar varc'hegerien a oa chomet dilabour, — nemet labour war droad a rajent, — abaoe keit-all amzer !

Kemeret e voe evel-se gant ar Zaouzon « Péronne » hag eur riblennad ec'hon a-walc'h war-zu « Cambrai ». Ar Fransizien, diouz o zu, a gemeras « Nesle », « Roye », « Noyon », « Ham », « Chauny » ha « Tergnier », a zo enni eur c'hroaz-bent eus ar pouezusa evit an bechou-bouara. Digouezet int war-hed eul leo hanter pe dost diouz « Saint-Quentin ». Dirag ar gêr-ze an dachen o deus gounezet a zav da nao leo douder pe dost. Ar Zaouzon-ia zo errou eur pemplo hanter diouz « Cambrai ». Niver ar c'hériadennoù o deus kemeret etrezo, Saouzon ha Fransizien, ne dle ket beza pell breman diouz tri c'hant. Eur c'heer a c'hounid evel ma welit !

An Alamaned a garfe rei da gredi na gilont e lec'hiennoù a zo nemet evit kemeret gwelloc'h a ze o c'hreav e lec'hioù all. Evit gwir, eun argaden bennak o deus klasket o ber war stêr « Meuse », hag a zo bet d'zarbennet kerent. Ne weler ken nemeur pelec'h e c'hallfent klask toulla hiviziken. Er c'hontrol, pep tra a laka anat e rankint diwar vremen d'erc'hel da vont war o c'hiz, a-hed hon linen da vihana,

**Eur gammed war-raok e Monastir.  
An Turked dindan dec'h en Azi-Vihana.**

Ar Fransizien a oa chomet a zav e Monastir, herzet ma oant gant ar menezioù serz a zo dirag ar gêr-ze. Setu emaint o vont war-raok. Kemeret o deus dre asailh, en hanternoz da

Vonastir, eur gêriaden war anu hel, ha hi eus ar c'hreava ; 1.200 a Vulgared a zo bet paket da brizonerien.

En Azi-Vihana ar Zaouzon, kemeret ganto « Bagdad », a zalc'h da argas an Turked a-hed stêr « Tigre ».

Ar Rusianed, diouz o zu, a c'hounid tachen da asten o dourm d'ar Zaouzon gant o armeadon eus ar « Berz » hag eus an « Armeni ». Er vro ziweza-man o deus kemeret « Van » war hent « Mosoul » krenva kêr an Turked er c'horn-bro-ze goude Bagdad.

**War vor hag en aer.**

Eun nebeut listri skanv eus an Alamaned o deus tizet leuskel, e kreiz noz, eun nebeut tennou kanol gant aochou Bro-Zaoz ; goueledet o deus eul lestr enep-tarzer (« contra-torpilleur ») saoz.

Ar 16 eus ar miz, tri « zepelin » o deus klasket darre bombeza Londrez. Aneer e voe d'ezo, hag, o tistrei d'ar gêr antronoz, e voe diskaret unan anezo e « Compiègne ».

Tri lestr-kenwerzar Stadou-Unanet, hagi dizarm a zo bet goueledet heb ali gant ar splujerien alaman, ha beuzet darn eus ar vartoloded anezo : ar « Vigilancia » 4.115 tonnel an « Illinois » 5.225 tonnel, hag ar « City of Memphis » 5.252 tonnel.

An aotrou Wilson en deus galvet ar senedourien d'eur c'hendalc'h abenn an silvet eus ar miz a zeu. Ar wech-man e vezo diskleriet ar brezel hep mar ebet.

**Darvoudoù a-bouez er Rusi.**

Er Rusi, an « Douma », a-unan gant ar bobl, an arme hag ar peb brasa eus an noblans, da heul eun nebeut dispac'h a zo bet e Petrograd, ne deus goulennet digant an impalaer rei e zilez. N'en doa ket a nerz a-walc'h da stourm ouz an Alamaned a vreine ar c'hargou hag ar c'hounarnamant hag a vire da gas ar brezel war-raok da vat.

Setu aet ar gurunen gant an arc'hduc Mikael ha digoret an nor d'eur renadur gwelloc'h d'ar brezel ha, war eun dro, da wellaennou evit ar bobl hag evit ar broioù bihan e dalc'h ar Rusi, evel ar Finland hag ar Bologn. Doue da roy d'an « Douma » poell ha nerz da gas da benn an holl wellaennou-ze !

Er Frans emañ echa gant ministrerezh hon c'henvroed brudet, an aotrou Briand, en deus graet labour vat, ha krog gant eur ministrerezh nevez dindan renadur an aotrou Ribot.

War a welomp dre eur pennad gant « Loeiz Herriou » war an

« Union Agricole », Iwerzoniz o dije hanvet da gannad ar c'hont Plunket. Graet en deus ar c'hont Plunket eur vad dispar d'e vro, dreist-oll e sell eus ar yez, an ijinou-kaer hag ar micherioù. Hon gwella gourc'hemennou d'ezan !

**Kanaouen eur zoudard yaouank  
eus ar bloaveziad 18 o  
vont d'ar brezel**

Setu arru hon zro  
Da vonet d'ar brezel ;  
Kenavo d'it, ma Bro. } diou wech.  
Kenavo Breiz-Izel !

Kenavo d'ec'h, Forjou,  
Ha d'ho traouien koantik ;  
Kenavo d'ho roc'hioù,  
Ha d'ec'h-hu, stêr ar Gwisk !

Red eo d'imp ho kuitat,  
Kerent ha mignoned ;  
Met sonj am bo dalc'hat  
Ac'hanoch, tud karet.

O, n'et ket da grial,  
Rak ni ne reomp ket ;  
N'omp ket arru raktal,  
Met ze n'eo mann ebet !

'C'h omp da vont da lac'ha,  
Pe da vezan lac'het,  
Met a-rôk, memes tra,  
Ni a fonto Boched.

Hon breudeur 'zo du-hont,  
O c'houl ganimp sikour ;  
Deut prim ; ya, hastomp mont  
'Trezek an enebour !

**Ma c'hompagnuned.**

Deus kostez Kereven  
Eun toullad « konskrived »  
'Zo faro ha laouen  
O vont da zoudarded.

Holl zent ha santezed,  
Rôet d'in sklêrijen  
Ma c'hallin lavaret  
Piou ec'h int penn-da-benn.

Me 'laro da genta  
'C'h oum mab hena a nao ;  
Ze n'eo ket kalz, kuita ;  
Met ze c'hoaz a zo brao.

Me a zo miliner,  
Me a zo pesketer ;  
Me a zo c'hoaz skoler,  
Ha memes bachoer.

Deus kostez Kerbastad  
Eun tamm foaltrun pezh den  
'Vo eur zoudard gwel-vad,  
Mar tro ze en e benn.

Ha, d'ober d'imp toulo  
Pa vefomp 'kreiz ar bec'h,  
Ganimp e vo daou « C'hô »,  
Daou « C'hô » deus Penn-an-Nec'h.

Hag eun « ajournaden »,  
Havet Santik Jegou,  
N'eo ket deus Kereven,  
Met deus Kermahieu.

Santik a vo tapet,  
Kenta kuzul a vo ;  
Eun tammig 'vo kresket,  
E « gantik » e pouezo.

**Ar c'hrogadou hag an distro.**

Itron santez Anna,  
Ha c'houi, Gwerc'hez Vari,  
Ec'h eomp d'en em ganua ;  
Pedit evidomp-ni !

Evel gwir Fransizien,  
Ni 'raio hon dever,  
Hon dever penn-da-benn,  
'V m'eo dleet ober.

Ar Boch kri ha treitour  
Warnomp 'zo dirollet ;  
Bec'h 'ta d'an enebour,  
Hag e vo distoket !

Deomp a-rôk, tud laouen,  
Deomp ha tagomp Boched !  
Ni 'ouio 'n em zifenn  
Evel gwir Vretoned.

Skrijal 'ra 'r c'hanoliou,  
Nan eus neb lec'h hep tan ;  
Youc'hal 'ra 'r boulejou...  
Ha Yann Zoudard a gan !

Allas ! falc'h an Anko,  
Lemmet gant ar Voched,  
Warnomp a dremenno ;  
Kalz a vo dic'houget.

Gant an tennou draillhet,  
Mar digoue d'imp kouean,  
Kerent ha mignoned,  
Nan aet ket da ouelian.

Mar deo trist ha garo  
Mervel da ugent vloa,  
Mervel evit ar Vro  
'C'h eo ar maro kaera !

Lazet gant ar Voched  
War dachen ar brezel,  
Raktal ni vo venjet  
Gant paotred Breiz-Izel.

P'hon devo distrujet  
Bro ar Voched digar,  
Neuze, hon mignoned,  
'Po peuc'h war an douar.

Ha, mar plich gant Doue,  
Ar peuc'h en berr-amzer,  
Mar bemp c'hoaz 'n hon buhe,  
Hon digaso d'ar gêr.

Gwell-laouen ha gwell-her (1)  
Karget, bec'hiet a c'hoar,  
Ni 'zistroio d'ar gêr,  
D'ar gêr gant ar viktour.

(1) Gwe l hardiz.

Keno d'ec'h, mignoned,  
Kenavo, kenavo !  
Rak ni gant ar Voched  
Ya da c'hoari'n Anko.

Kerent kèz glac'haret,  
Kenavo, kenavo !  
Mar na vomp ket lazet,  
Ni c'hoaz d'ec'h a boko.

AR FORJOU.

Sant-Brieg an 20 a viz C'houvervrer.

## Buhez David Lloyd George

Trede pennad (kendalo'h) : Lloyd George  
e Kamb ar Gannaded.

Ar voterez war-lerc'h hini 1892 a  
roas ar galloud en-dro d'ar virouien  
(pe « konservatourien »), a oa en o  
mesk eun den gallo-idek meurbed hag  
eus ar re akuita, Jozef Chamberlain.  
Ne spontas ket Lloyd George razan,  
pell ac'hano ! kement a drouz a reas  
er Gambur ma voe, er c'hontrol, ar  
gouarnamant a voe spontet gantan.  
Eur wech zoken e voe reil e lakaat  
er-maez eus ar Gambur ha gantan tri  
c'hannad all eus Iwerzon.

Lloyd George a oa aet d'ober eun  
dro er C'hannada, evit studia stad ar  
vro-ze, pa voe disklêriet ar brezel  
etre Breiz-Veur ha « Boered » kreis-  
teiz an Afrik. En taol-man, hep mar  
ebet, e oa ar gaou gant Breiz-Veur  
pa 'z eo gwir e sailhe gant diou vro  
vihan n'o doa ken c'hoant nemet  
beva sioul en o frankiz. Kent-se, an  
darn-vaia eus an dud e Bro-Zaoz a  
oa a-du gant ar brezel. Re zivezad  
e oa da Lloyd George da zizarben an  
taol, hogen e reas pep tra evit dis-  
kouez n'oa ket dereat gwaska poblou  
bihan evel-se hag e oa red ober ar  
peoc'h ar c'henta ar gwella. Preze-  
ganou kaer a reas er Gambur diwar-  
beun ze, hag ivez e kalz a gêriou e  
pevar c'horn ar vro.

E bro-Gambre, e teraouas e Ker-  
varzin, hag e komzas evel-hen : « Pa  
na lavarfen ket, ar c'henta ma c'hel-  
lau, ez oun a-grenn a-eneb d'an taol  
fall-ze, neuze e kavfe d'in dianvaz  
Doue hag an dud. Ya, red eo d'in  
hen disklêria a-bouez va fenn, ha pa  
rankfen kimiadi henoz diouz Kervar-  
zin heb mignond ebet, goude tenna  
war va e-heia droukrans an holl ! »

Setu peseurt den e oa Lloyd  
George ! An dud a yae d'e selaou a  
oa a-du gant ar brezel, hag alies-  
mat ec'h esajont ober droug d'ezan.  
Eur wech, e miz kerzu, ez eas da  
Virmingham, e-lec'h e oa holl gêriz  
mignoned vras d'an aotrou Cham-  
berlain en doa graet e wir wella evit  
ma vije graet brezel. Mignoned Lloyd  
George a lavare e kollje e vuhez eno,  
hag, e gwirionez, tud e Birmingham  
o doa graet o menoz d'e laza. Lloyd  
George ne gemeras ket son hag ez  
eas di. Darbedik e voe d'ezan beza  
lazet gant an dud kounnaret.

Goude ar brezel, e labouras start  
evit ma vije trouc'het al lamnou a  
oa etre ar gouarnamant hag an Iliz  
protestant e Bro-Gambre. E Bro-  
Gambre n'eus ket, d'ar muia, eun den  
diwar dek a gement a vije ezel d'an  
Iliz « Anglikan » ; red eo, koulskoude,  
d'an holl para evit harpa an Iliz-se  
hag he skolioù. Setu amañ ar pezh a  
lavaras eur wech diwar-benn Iliz pro-  
testant Bro-Zaoz : « Laeret o deus an  
Iliz katolik, laeret o deus ar mana-  
tioniou, laeret o deus an aoteriou, lae-  
ret o deus tiez an aluzen, laeret o  
deus ar bacurien hag betek ar re  
varo !... »

Pa gabask Iliz Bro-Zaoz lakaat he  
c'hrabanoù war ar skolioù, Lloyd  
George a unnas ar vro a-bez en  
he c'h euep hag a reas kement a zroug

# AR POK DIWEZA

Kinniget gant doujans d'an tad Gouarnon.

Ar c'hanol kriz a ra e reiz war an dachen,  
An dir en eur darza 'ziframm 'koulz tra 'vel den ;  
An aezen 'zo mougus gant ar moked, ar poultz ;  
An tennou bouzaras a zeblant eun tanfoultr  
Dirolet da flastra, da zismantra ar bed ;  
Skei a ra ar Maro 'vel falc'h o trouc'ha ed.

War-lerc'h ar reiz setu an dasorc'hidigez :  
Ar bed maro 'zeblant adc'henel d'ar vuhez ;  
Ne glever mui nemet klemmou ar c'hloazidi  
Hag huanaad skrijus an dremenvandit...  
Dre an ooz dem-denval 'weler war ar bléneu  
Kellusk hanter-guzet ar gravazarterien.

E doun kleus eun dorgén eur zoudard 'zo stouet,  
Eur beleg 'zo a-zioc'h d'eun den kèz mac'hagnet.  
Eus ar gouli ar gwad a red, a red raz-tan ;  
Ar beleg 'wel 'tosta d'ezan an tremenvan,  
Hag e ro d'ar gloaziad, a-raok d'ezan mervel,  
Pardon Doue, an Nouen. O, peoc'h al lid santel !

— « Va Doue, grit ouzin hervez ho polontez !  
Ni 'zo 'tra ho taouarn ; d'ec'h-hu eo hor buhez. » —  
Ar gwad ne red mui ken eus ar gouli digor ;  
An nerz a ya dioutan. Emen breman toc'hor ;  
Hag ar beleg a ro d'ar muzellou sklaset  
Da boket ar groazig a denn eus e vruched.

TELEN ABER.

d'ar gouarnamant dre e brezegennou  
emtanet ma voe kement-se, moarvat,  
kenta abeg d'ezan da veza taoleet er-  
maez a gannad ar voterez war-lerc'h.

Nemet deut e oa da veza ker brud-  
det ma voe roet eul lec'h d'ezan er  
gouarnamant.

(Da heuilh). F. MOCAER.

## AR GWENANEREZ

Digoromp, eta, hor c'hestennou pa  
vezo brao an amzer, ha taolomp enno  
eur zell buhan evit gouzout e pe stad  
emaint. Arabat, avat, chom pell bete  
gout na yenfe ar goradou ; rak ma  
teufe ar re-man da yena, e c'hallfen  
mervel ha tenna klenvejou war ar  
gosten evel ma 'z eo al lok pe ar  
red-korf.

Merkomp war ar gosten pe war eur  
c'haier bennak stad pep-hini : « mat »,  
« etre an daou », pe « fall ». En doare-  
ze ne vezo ket red digeri ken ar  
c'hestennou nemet evit sikour ar re  
a zeufe da veza ezommek. Evit ar re  
vat, n'ez eus nemet o lezel e peoc'h  
da labourat.

Ar re a zo ezommek, pe a zo deut  
da veza, eo dleet maga anezo, hag ar  
gwella a zo d'o maga, pa na vez ket  
a vel, eo ar sirop sukr. Met, er  
bloaz-man, ne dalv ket sonjal : ar  
sukr a zo poan e gaout evit an dud.  
Red e vezo, eta, klask eun hent all.  
Ar re o deus kestennou, hag a zo re  
a vel ganto, a c'hallfe tenna diganto  
eun diretinnad bennak, da rei d'ar  
re o deus re nebeut ; met, evit an  
dra-ze, eo ret kaout kestennou tire-  
tennek, hag an holl n'o deus ket.

An dour, evel am eus lavaret, a zo  
red ivez d'ar gwenan. E-lec'h ez eus  
eigenennou pe waziou tost d'ezo, n'eo  
ket red en em emellout : ar-re-man a  
oar o c'havout anezo o unan. Met, e-  
lec'h n'ez eus nemet punsou doun ez  
eo red lakaat dour en eul laouer  
bennak e-barz ar weneneg. An dour-  
ze a dlefe beza sallet. Ouspenn-ze,  
evit miret ouz ar gwenan da vont da  
veuzi, e vez mat lakaat war an dour  
tammoù koad tano pe zoken plouzen-  
nou, d'ar gwenan da vont warno da  
zuna an dour.

Ar gwenan a implijo ar penn kenta  
eus ar bloaz da greki an niver eus  
al labourerezed, hag ar re-man a  
zalc'ho heb ehan da zastum poultz-  
bleun ha mel e-pad an nevez-amzer  
hag an hanv.

Koulskoude, pa zeuio an nevez-

amzer, ar vamm a chencho mod d'he  
dovet, pa welo e teuio d'ezi peadra  
eus ar maez. Neuze e teraouo dovi  
viou e-barz kavellou brasoc'h hag  
eus ar re-man e teuio pared, pe « ma-  
led ». Nemet, evel na labour ket ar  
pared, ne vezo ket kennebeut kement  
anezo evel eus al labourerezed,  
eun nebeut kanchou hepken e pep  
kestén, e lec'h ma vezo daou pe tri-  
ugent mil a labourerezed.

AR GWENANER.

Da heuilh.

## TALVOUDEGEZ

« lennegezh hag istor ar Gelled koz »

Tennet eus eul lizer digant eur  
mignon a zo mestr-kelenner, goues-  
tlet gantan e labour hag e vuhez da  
gentelia bugale Breiz, hag a oar mat  
evel-se petra a zerefe ar gwella ouz  
sperejou :

Aotrou ker,

Kalz a blijadur a gemeran o lenn  
an « Notennou diwar-benn ar Gelled  
koz » hag ivez « Krennadur kenteliou  
an aotrou Dottin diwar-benn lenne-  
gezh ar Gelled. »

Setu ar seurt lennegezh hag istor  
a dlempf deskri ha studia. Traou  
kaer, a zo diouz hor gouenn hag hor  
mennerez ! Ze a zo hon zra-ni ! E lec'h  
maga hor speur diwar eur boued a-  
ziavéz, deut d'imp peurliesha gant  
alouberien bro hor c'hendadour, e tle-  
mpf studia kement tra a zell ouz  
yez, danevellouriezh, lennegezh ar Gel-  
ted, a oa graet o skiant, o menoz evel  
hor re-ni. Int a zante, a veize, a gare,  
eveldomp ; pleg o spered a oa hen-  
vel ouz hon hini. Tud hor gouenn,  
hor gwad e oant ! O c'hadarnded, o  
herder, o c'hallonder didreclus a zo  
manet e-barz hor c'heiz, en desped  
d'ar pezh a zo bet graet dre heg pe dre  
gare evit o diwrizienn ennomp,  
dre deurel dismegans ha fae war hon  
amzer dremenet.

KELIER EUS AR VRO

GWENGAMP

Gourc'hemennou. — Hon gwella  
gourc'hemennou ha hetou a eurv-d  
d'hon lenner ker, Henry Menguy, a  
zo bet tidet e eured, dilun diweza,  
gouel sant Jozef, en iliz Gras. Doue  
d'e viro bepred e-touez risklou ar

brezel, d'ezan da c'hallout distrei,  
heb dale, gant loreou an Tre'h,  
davet e gerent hag e bried !

GWENED

Kano. — Tennet eus eul lizer  
digaset d'imp gant bon lenner ha  
kenlabourer ker « ar Gwenedour » :

Eur c'helou a ganv a zo deut d'in  
eus Gwened. Eur beleg mat, douget  
meurbet evit ar brezneg, a gare e  
vro, a skriva hon yez en eur doare  
brao-kenan, hag a rene e barrez gant  
evet ha karantez eur « maezer » san-  
tel, an aotrou abad Fulquerho, person  
Ploeren, a zo maro...  
Ra vezo Doue gant e ene !

Istor souezus eur paotr eus ar  
Faouet. — Eur pótr yaouank, Kaou-  
rintin Carré, ganet er Faouet, bro-  
Wened, a oa aet da zoudard, pa n'oa  
c'hoaz nemet 15 vloaz, o rei eur  
fals-hano. Medalennet eo bet evit e  
daoliou kaer ha hanvet da adjutant.  
Neuze e voe dizoleet e wir hano  
hag e oad. Seitik vloaz eo breman.  
Dalc'het eo bet en le garg a ra enor  
d'ezan ha d'e vro Vreiz.

MONTROULEZ

Eun den muntret. — Dilun diweza,  
an 19 eus ar miz, e voe dizoleet e  
lec'hid ar stêr korf maro Felix Gravot,  
eur paotr yaouank a 20 vloaz a oa bet  
hanvet epad ar brezel da baotr-lize-  
riou Lokunole. Gloazet e oa en e benn  
hag e kreder ez eo bet muntret ha  
taolet goude en dour.

TREDARZEK

Maro ar person koz. — An aotrou  
abad Congard, a oa bet person Tre-  
darzek, a zo marvet e Landreger  
e-lec'h en doa ranket en em denna  
gant an oad hag ar c'hlenved. Eur  
Breizad mat e oa anezan. Sent Breiz  
d'e zigemero e Baradoz an Aotrou  
Doue !

GOURIN

Bugale Breiz aet gant ar Vochea.  
— A-raok ar brezel, eun nebeut kerent  
eus Gourin hag ar vro tro-dro a oa  
bet digar ha digalon a-walc'h evit  
fiziou o bugale etre daouarn tud es-  
tren eus an Hanternoz da labourat e  
labouradegou gwer Arleux. Setu aet  
al labouradegou ze gant an Alamaned  
h-kaset ganto bugaligoù Breiz en Ala-  
magn ! Kerse a zo deut d'ar gerent ;  
re zivezat, siouaz !

Darvoudou. — Eun nebeut darvoud-  
du a zo digouezet e Breiz er zizun-  
vezioù diweza.

E Plouigno, Per Mari Lachiver,  
39 bloaz, mavel e ti an aotrou Jaouan,  
p'edo o kardellat, a voe troc'hliet e  
dumorel. Kask a reas distaga ar c'he-  
zeg, hag unan eus ar re-man a zias-  
tennas eur winkaden d'ezan, ma voe  
lazet war an taol.

E Skaer ivez, eur paotr bihan,  
Marsel Rousseau, a zo bet gwall-  
c'hoazet en e benn gant eun disgwin-  
kaden, p'edo o ker'hat eur gazez  
d'ar ger.

E Tonkedeg, Jozef Gwionnec'h,  
14 vloaz, eus Kêr-harz, a zo bet laz-  
et dre zarvoud o c'hoari gant eur fuzul  
koz a oa karget.

Yan Mari Lahy, 61 bloaz, o tis-  
kouitra gwezh war zouar an aotrou  
Kerouartz e Gwengamp, a zo kouezet  
diwar eur wezen ha laz.

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25), Imprimerie Saint-  
Guillaume, 27, Boulevard Charner,  
Saint-Brieuc

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bleaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
3 skoued evit ar bieloù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

**GOURC'HEMENNOU**

Hon mignon ha lenner ker, Alexis Goffic, eus ar Warch'at, a zo bet hanvet da zeriñt ha rôet dezau ar vedalen-vrezel gant ar mieneg ken enorus-man : « E-pad an asailh eus ar 4 a wengole, e voe gloazet e zeriñt. Neuze ar c'haporal Gallic a gomeras renadur an hanter-sektion. Noz-de, e-keit ma oad o reiz a traou war an dachen-ze, n'en deus ket paouezet da ziskouez ar vras skouer a barfedded hag a nerz-kalon »  
Hon gwella gourc'hemennou d'ezan ha de dud !

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar « Somme ».**  
Ar re-Unanet a zale'h da gerzet war-raok, daoust ma kavont breman muioc'h-mui a harz a-berz an Alamaned. Hon lennerien a welo pello-c'hik eul lizer digant hon c'henvroad ha mignon ker, G. Maz eas, o tiskleria e pe zoure truezus eman ar vro warlerc'h an euebomien. Ouspenn tana ar c'hériou war o c'hiz, e lec'hioù-ze o deus dic'hlaniet an doureier : kêr Lafere a zo bet bezet ganto evel-se. Kement-se n'en deus ket miret ouz hon zoudarded da c'honid tachen. Da heul emgannou eus an taera e talc'hont breman, er c'hreisteiz da Lafere, eur c'hoad eus ar c'hrenva hanvet « koad Coucy ».  
Doue da roy d'ezo an trec'h ha ra viro hon c'henvroiz a gerz breman en dizolo, oc'h en em ganna, kouls lavaret, bop kammed !

**War an talbezennou all.**  
Evel e oa bet lavaret ar zizun all, an dachennad c'hounezet a zo bet astennet en hanternoz da Vouastir, 2.104 a Vulgared a zo bet prizonet. Er Roumani, eun nebeut krogadou ha kanoliadeg.  
Dirag « Riga », war harzou ar Rusi, an Alamaned a zastum strolladou bras, evel pa vijent e sell da skei eun taol adarre diouz an tu-ze. Emehians, o dije c'hoant a-walc'h d'ober o mad eus dispac'h ar Rusi evit mont da Petrograd. Hogen, daoust m'eman an traou gwall-luziet, siouaz, gant ar Rusianed, n'eus nemet eur vouez en e zouez evit lavaret e tleer stourm da vat ha betek ar fin. Pell diouz o dingerza, an dispac'h en deus keatoc'h krouvaet ar sperejou ha trôet an holl galenou ouz ar brezel.

En Azi-Vihana, o armeon o deus gouezet tachen c'hoaz o tisken eus meazioù Bro-Berz war-za Bro-Vagdad da astenn dourn d'ar Zaozon.  
An Italianed a vije en gortoz eus eun argaden a vras war harzou o bro. heb dalé pell. En em lakaat a reout a du da herzel eus ar starta.

**War vor hag en aer.**  
Al lestr liouarnet « Danton » 18.500 ton ic'h, a zo bet goueledet gant eul lestr-splujer, an 19 a veurz, er mor kreizdonarek. Tizet e voe gant diou darzerez hag ez eas d'ar strad en eur ober tregont munuten hepken. Wardro 290 den a zo bet kollet gantan.  
Ki iz eus hon lennerien o devo dalc'het koun eus moredigez an « Danton » e Brest, e 1909. Chom a reas a zav e-kreiz e rouden etre an tintou hag ar mor, evel p'en dije bet aon rak an dour a dlee e lonka diwezatac'h.  
Ar Zaozon, diouz o zu, o deus kollet daou enep-turzer (pe « contre-torpilleurs »). Unan anezo a zo bet tarzet o skei ouz eur voest-poultr a oa aet war vordo e mor Breiz. Egile en deus stoket ouz eul lestr all.

En noz, etre an 20 hag an 21 a veurz, an Alamaned o deus goueledet eul lestr-klanvdi eus ar Zaozon, an « Asturias », 12.000 tonnell, enep pep gwñ ha did'agarez ouz an dud keiz gloazet pe glany a helle beza en e vourz. A drugarez Doue, n'oa ket ennan a c'hloazidi, nemet wardro 300 den eus servij ar c'hlanvdiou o tistre da Vro-Zaoz. Eun 80 bennak a zo bet heuz-it, gloazet pe gollet.

Kelou a zo eus ma-o eur prinis Alaman, ar prinz Frederik Charles, hag a oa nijer. Mab-bihan e oa d'ar jeneral Frederik Charles en deus graet kement a zroug e 1870. Gloazet e voe gant eun tean fuzul e keit m'edo war e nijerez, ha marvet da heul er c'hlanvdi.

**Hag ar Stadou-Unanet ?**  
An eilvet a ebrel eo e tle en em voda ar C'hendalc'h bras dindan renadur an aotrou Wilson, da ziviza diwar benn peoc'h pe vrezel.  
Da c'hortoz, an Amerikaned a ra o fourchas. Armet o deus o listri. Ar c'henta eus al listri armet-se, ar « Saint-Louis », warnan 33 a dreizidi, a zo digouezet e porz Liverpool, ar 26 a veurz, heb beza kavet splujer ebet war e hent.

**Diweza keleier.**  
Eul lestr trezatlantik all, an « Adriatik », armet ivez, hag er bourz anezan kalz a dreizidi, a zo erru e

New-York, an 29 a veurz, heb beza bet taget gant ar splujerien.  
Eul lestr-samm a Vro-Zaoz, an « Tyndarcus », warnan eur bataillon a zoudarded war droad, a zo aet d'ar strad, war aochou an Afrik, goude steki ouz eun « darzerez-goueled ». Ar zoudarded o deus diskouezet ar vrasa parfeted ha nerz-kalon, oc'h en em reanka sioul war ar bourz, ouz galv an trompilhou, e-keit ma veuze al lestr. Savetaet int bet hag ar roue en deus kaset d'ezo e c'hourc'hemennou kalonek.  
Daou gannad a oa aet da « Vapeume » da gas sikour da dud ar vro, rivinet gant an Alamaned, a zo bet lazet gant eun darzaden a zismantras an ti-kêr e lec'h e oant diskennet.  
Ar Zaozon o deus graet eur vras a gammal war-raok eus bro-Ejipt war-za ar Judea, oc'h argas dirazo arme an Turked. Digouezet int warhed eul leo hanter eur kêr Gaza, eur porz-mor bras war ar mor kreizdonarek, eun 20 leo bennak diouz Jeruzalem. En eun emgann a zo bet eno ar 26 hag ar 27 a veurz, e voe kemeret ganto da brizonerien 900 soudard gant e jeneral hag e holl ofiserien.

**KELIER EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL**

**Kelou eus hon mignon ker, G. Mazeas, hag eus hon mignoned all e talben an Hanternoz.**  
Eur pennad mat a zo e oamp hep kelou ebet eus hon c'henvroiz a zo breman o kerzet, en Hanternoz, warlerc'h an Alamaned o kila dirazo. Al lizeriou, am eus aon, a zo bet harzet epad eun eiz dez bennak. Setu brema ar c'heleier o tigouezout, a drugarez Doue. Al lizer-man da heul digant hon mignon G. Mazeas — hon gwella menoz d'ezan ! — a ziskouez arvat e pe stad truezus eman ar rannvro-ze a zo bet adc'honezet. Pedomp evit hon zoudarded ker a zo aet ermêz eus o foziou hag a gerz breman en dizolo, gant muioc'h a riskl evito, moarvat, nemet m'eman ivez etre o daouarn marteze, mar gallont derc'hel da vouta war an Alamaned, diskoulm ar brezel.

An naontek a Veurz, 1917.  
Aotrou ker,  
Enaomp o kerzet war roudou ar Voched abaoe tri devez. Aman n'ez eus mui a foziou. ... An enebour a

gil atao. Daoust betek pelec'h ez aio ?  
C'houec'h ugent a « sivilé » a zo deut ganeomp. War a leveront, ar Voched a c'hede kiza abaoe pemzek dez hag o deus kaset ganto an holl buotred ha plac'hed en tu-hont da bemzek vloaz.  
Penaos displega d'eo'h levezet an dud keiz-se ? Ne ouient ket pe Fransizien pe Zaozon e oamp, rak na ana-vezet ket hon gwiskamant c'hilas.  
Eun dez e kontin d'eo'h o zrubuilhou, rak gant kalz anezo em eus kaozeet. Al levezet a ra e d'ezo lenva, ha ni, ouz o c'hilevet, a ouele ivez.  
Ar Voched a laka an tan dre ma 'z eont ; ar gwez avilou a zo diskaret holl ; distrujet pep tra !  
Met unan bennak a gouez atao, hag em eus kollet unan eus va gwella mignoned. Breman Doue en deas e zisleet. ...  
An amzer a zo fresk diouz ar beure hag an abardaez. Gant-se ho po di-zamant, am eus aon, o lenn va zam-mij lizer, ... o c'hortoz hiroc'h.  
Holl e valeomp evit ar wech kenta a galon vat. Pedennou hon lennerien evidomp, mar plich !  
D'eo'h a wir galon.

**AR GWENANEREZ**

**Penaos e vez savet, er rusken, labourerezed, pared ha mammou**  
Gwelet hon eus, ar wech ziweza, penaos ar vamm a zova da genta, viou ma teue diouto labourerezed, ha, goude, eur wech tost et d'an nevez-amzer, viou a rôe pared, nemet e oa kalz rouesoc'h ar re-man.  
Dre ma kresk an niver eus ar gwenan, e kresk ivez ar pourveziou, rak ar gwenan a zo labourerien dispar ha, keit ha ma kavint lec'h a-walc'h, ne ehanint ket da zigas atao, heb sejal o defe re morse. Dizale e teuo an ti da veza re vihan. Neuze en em lakaio ar gwenan da zavel eun nebeut mammou.  
Ar viou ma teuo ar mammou anezo ne dint tamm ebet dishenvel diouz ar re ma teu al labourerezed. Koulskoude, o c'havel a zo dishenvel. Heman, e lec'h beza aet e-barz ar follen goar evel ar re-all, a zo, er c'hontrol, deut er-maez hag, evel pa lavarfen, a-ispilh outi, henvel ouz eur pod mez dero. Dre ar vagadurez a zo lakaet d'ar prenavig ganet er c'havel-ze, e-lec'h beza eul labourerezed, e teu da veza eur vamm.  
Setu, eta, tri seurt gwenan e-barz ar gisten : eur vamm hepken en he frankiz ; eun nebeut all en o c'havel, pomp, c'houec'h, dek, daourek, mar-

G. M.







IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skeud evit ar breien estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourion d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer an

Aluzennou da « Kroaz ar Vretoned » d'he c'has da zoudarded ar Vro

An aotrou Dyèere. .... 50 lur.  
Marietal al lojez Lorgil lière. .... 20 real.  
Kanolier Y. Lahellec. .... 20 real.

Trugarez, a greiz kalon, d'hon mignoned ker, o deus kavet an tu hag int war zervich ar brezel, da zioueret aluzennou ken madeleuz evit rei skoazel da gas « Kroaz ar Vretoned » d'o c'hamaraded ! Hon lennerien ger a welo pelloc'h, dre eul lizer er « C'heleier eus hon mignoned », nag a vad a ra an aotrou Dyèere d'hon yez ker, d'hon Bro ha d'hon martoloded dre rei d'ezo traou mat da leañ e brezoneg o tigas war eun dro magadurez ha dudi d'o spered. Trugarez d'ezan en hano Breiz !

GOURC'HEMENNOU !

Hon gwella gourc'hemennou d'hon lenner ker, August Coty, medesinkoazeller, ha d'e gerent er Warc'hat. Bet en devoa ar groaz-vrezel eur pennad a zo, hag emañ o paouez kaout, nevez 'zo, ar meneg-man ken enorus :

« E-pad asailh an Alamaned, an 31 a C'henvar diweza, en deus diskouezet eun nerz-kalon hag eur grad dispar, o suraat, e-pad ouspenn 30 eur dioustu, hep kemer diskuz ebet, eus ar gwella koulskoude, ar c'has ar re c'hloazet war an a-dreñv ha ar prederia ane. »

A-head-all, hon mignon J. Gourlet, eus ar g'vret war droad, a gas d'imp, el lizer da heul, hanoioù ken-vroiz all a zo bet medalennet war an talben. Enor d'ezo !

An 30 a viz Meurz, 1917.

Aotrou rener ker,

Mad eo ar bed ganitp hag emomp atao a-dreñv : abaoe an ugent a viz Genver. A-raok pell, a gredan, ez aimp adarre d'an talben evit kas kuit eus hor bro ar Voched kriz gant enoriou ar brezel a zo dleet d'o tallentez.

Dec'h hon c'habiten en deus rôet ar groaz-vrezel da dui eus va c'hamaraded :

Yann an Nsour eus ar Faouet (Bro-Wened) ;

Alan Pichavint eus Beuzeg Kap-Sizun (Penn-ar-bed) ;

Lusian Alan eus Kintin (Kostez-an-Nord).

Setu aman meneg heman : « Lusian Alan, soudard an darempredoù

(« agent de liaison »), en deus tennet ar zell warnan meur a wech dre e nerz-kalon hag e barfedded e-touez ar tisklou, dreist-oll an 20 a Wengelo 1916 ; gloazet eo bet en deiz-se en eur gas eun urz diandan eur fozuliadeg eus ar starta. Gloazet eo bet diou wech abaoe derou ar brezel ». Enor da Vreiz ha d'ar Vretoned !

Taolen ar Brezel

War dalben an Hanternoz

Derc'hel a ra an Alamaned war e linen nevez eus an Hanternoz. Evito d'ea em zifenn eno eus ar starta, ar re-Unanet a c'hounit tachen bennedez tamm-ha-tamm, ar Zaozon etre « Cambrai » ha « Saint-Quentin », — eun tri c'harit leo bennak n'int ken breman diouz ar gêr-ze, — hag ar Fransizien etre « Saint-Quentin » ha « Soissons ».

Ar meur, trivet a ebrel, hag en deiziou war-lerc'h, ar Fransizien a reas eul lamm war-raok adarre, war eun talben a drizek kilometr, dirok « Saint-Quentin ». Gounezet o deus eur vat a riblennad, hag e kroder na zaleo ket « Saint-Quentin » da goueza ganto, daoust d'al lec'h da veza gwall-greñvaet.

Er c'hreisteiz d'ar « Somme », war zaou ribl eun adstêr d'ez, an « Ailette », e c'heunezer tachen ivez war-ze « Laon », o kelc'hia tamm-ha-tamm war goad « Saint-Gobain », en hanternoz da goad « Coucy » a zo bet kemeret eur penad a zo.

Ar Zaozon, diouz o zo, ne baouezont ket da vont war-raok, dreist-oll en-dro da « Cambrai », abaoe an eilvet eus ar miz-man.

War an talbennoù all.

War dalben an Itali, an Aotrichianed o deus graet argadennoù en-dro da « Goritz ». Aner o voe d'ezo ! lêmeur bepred en gortoz eus eun asailh a-vras a-berz an Alamaned diouz an tu-ze, hag e vije digouezet, war a lavarer, ar jeneral Falkenhayn da ren an traoù.

War linen ar Rusi, krogadou start a zo bet en hanternoz da vro-Bologn en-dro d'eur gêr hanvet Branovitchi. Ar Russianed o deus ranket, da genta, distremae steir Chara a red dre ar c'horna-bro-ze. Bremau, avat, oc'h adkemeront o c'hronv eno. Eman an emgann oc'h adkregi war ribl ster stokhod.

Er Roumani ivez, en-dro da Foc-

sani, an Alamaned, o klask toulla, a gav harz da vat.

En azi-Vihana, e talc'h ar Zaozon diouz tu ar C'hreisteiz da Vagdad, hag ar Russianed, diouz tu an Hanternoz, da getzet an eil re war-ze ar re-all, e sell da beurwaska an Turked etrezo. Da skora ar re-man, a zo en argoll da vat, an Alamaned o deus kaset, war a greder, o jeneral Mackensen.

War vor.

Gwasa tael graet war vor gant an Alamaned, nevez 'zo, eo goueledigez an « Aztec », unan eus al listri armet eus ar Stadoù-Unanet. Lezet o doa da diemen daou lestr armet all, ar « Saint-Louis » hag an « Adriatik », evel da rei da gredi e oa o menoz tremen diouz an Amerikaned. N'o devo ket dalc'h et pell gant ar meaoz matse, rak setu-int o paouez kas d'ar strad, dirak aochou Eusa, an « Aztec », 3,503 tonnell. Al lestr gall, « Jeanne d'Arc » en deus savetaet 19 eus ar vartoloded a oa en e vourz. 28 martolod all a vije bet kollet gant al lestr. Eur mestaol ouspenn da boueza war bladen ar balanos, d'he stoui war-ze ar brezel etre ar Stadoù-Unanet hag an Alamagn !

Ar c'heleier eus ar Rusi a zo meneg ganto eus eur c'haer ar daol graet gant eun nijerez rusian war ar mor Du. Houman a oa eun nijerez-vor, stummet e deare da chom war neun war c'horre an deur. Ranket he doa en em boza evel-se war ar mor, tizet m'oa bet gant bouliji an c'neburien. A greiz-oll, an daou nijer, a oa war an evn bras gloazet, a wel e tout daveto eul lestr dre lien eus an Turked, hag hen armet gant mindrailherezed. E lec'h en em rei, e talc'h-jont penn d'an Turked, o tenna outo, eus o gwella, gant eur vindrailherez a oa war an nijerez. Kement ha ken bihan e rejont ma tec'has an enebourien war vagou al lestr, e lezel heman etre o daouarn. Gallet o deus distrei gant o treizaden da vro « Crimée », e-kichen Sebastopol.

Diweza, keleler An Amerik er brezel

Ar prezidant Wilson en deus lennet e brezege da zenedourien ha da gannaded ar Stadoù-Unanet bodet en eur c'hendalc'h bras. Gouleannet en deus diganto, neket disklieria ar brezel, emezan, hogen azaav hepken emeur e sta l a vrezel, o veza ma ra an Alamagn ouz ar Stadoù-Unanet gwall-daolioù-brezel evel goueled al listri. Eun dead eo d'imp, emezan ouspenn, ober diouz

herzel ouz ar stad a vrezel-ze hag he c'has buhan da benn beteg ar peoc'h dre drec'hedigez an Alamagn.

Ar zenedourien a voe galvet da genta da rei o ali. 82 mouez a voe evit ar brezel ouz 6 hepken a-enep.

Eman ar gannaded o paouez mouezia, int-i ivez : 373 mouez evit ar brezel ouz 50 a-enep.

Diwar-vreman, eta, eman ar Amerik a-du gant ar re-Unanet ! Bevet an Amerik !

En eur ziskenn da Zant-Herbot

Da Heri Bôd, soudard e Verdun.

En deiz-all, eur zoudard o tremen e Sant-Brieg, a bedas ac'hanou da ober eur werz war don eur zon goz : « Nec'h ha traon gant ar c'hoajou » kanet gwechall evit ar c'hontredans.

Setu aman va c'hanoouen. Petra na rafe ket an den evit plijout da rizennerien ar vro ?

Ar c'haner a dle kana eur werzen hag an diskaner ar memes gwerzen dioustu war e lerc'h, pe welloc'h ar c'haner hag an diskaner pep gwerzen diou wech pep-hini.

WAR DON : Nec'h ha traon gant ar c'hoajou.

En eur ziskenn da Zant-Herbot (diou wech) « Klevis o kana eur ruz-jot (1) (diou wech) Me 'zonj e lare war e vrak. Dre e notennou skiltr ha stank : « Ped start ar zant 'n e chapelig « Mar c'hoantêz kavout da goullig. »

A-boan m'en devoa ehuat, Me 'welas en hent o lammet Eur plac'hig koant, eur verjelen, He lagad glas, he bleo melen ; Skanv ez oa evel eun heizez, Gwisket evel eur varkizez ; Eun dudi e oa he gwalez ; E gwir, e troas va spered.

Petra d'ober, m'her goul ganech ? Me han assur, ne oan ket hep nec'h, Pa avizant tapout er c'hleuz, En eur blanten, eur bodig beuz.

Kemer a reas anezan En eur grena kalz lec'h-unan ; Ha me o tisklieria d'ez : « Mar ho koulfen da zemezi ?... » — « Perak n'hen larec'h d'in kentoc'h ? » — Biskoaz n'ez oun bet sederoc'h.

Kerket kroazjomp hon biz bihan, — Gant ar zonj-ze c'hoaz e tridan ! —

Arriet e-barz an iliz, E taoutinomp hervez ar c'hiz, 'N eur rei hep distro hor c'halon Evel koulmel er c'hoajou don, En eur doui n'em garfemp krenn E-pad hor buhez, hep termen







IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skeed evit ar bleizou estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIAND, 27, bali Charner, zigermer ane

Alazennou da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro

Serjant Godest..... 5 real.  
Marichal al lojeiz Nor-  
mand..... 20 real.

Mil bennoz-Doue d'hor mignoned  
a zigas aluzennou ker madelezus,  
hag int en talben-brezel, da zikour  
« Kroaz ar Vretoned » !

Taolen ar Brezel

Eun trec'h bras gant ar Zaozon.

Dilun, 9 eus ar miz, da bemp eur  
hanter dieuz ar beure, hag en deiziou  
war-lerc'h, ar Zaozon a zo aet war-  
rask war eun talben a bemp leo,  
etre Lens ha Sant-Kantin. Gounezet  
o deus eur riblennad vat a zouar, —  
etre tri ha pemp kilometr, betek  
8 kilometr zoken e lec'hieu-ze, —  
hag euni lec'hiennou eus an emzava,  
evel kriben Vimy, a c'hourc'hem-  
mener ac'hane war an holl bleaen  
tro-dro, hag e oa bet klasket en aner  
ke c'hemeret betek-ben. 11.000 a  
brizonerien a zo aet ganto, ha kant  
kanol. Eur brao a drec'h e gwir-  
ionez !

Da heul, ez eo strisaet c'hoaz ar  
c'helc'h en-dro da gêr Zant-Kantin,  
na zaleo ket da goueza etre daouarn  
ar re-Unanet.

War dalben ar Rusi, er Balkanioù  
hag en Azi-Vihana.

Evel ma oa bet lavaret ar zizun  
ziweza, ar Russianed, argadet war  
stêr Stokhod, o doa ranket distremen  
ar stêr-ze. Breman ez a war wellaat  
ganto, hag an holl argadenou renet  
outo gant an Alamaned a-hed o linnen,  
eus Riga d'ar C'harpatou, a zo bet  
dizarbennet.

Er Balkanioù, ar Zerbed hag an  
holl boblou all kouezet ganto e dalc'h  
ar Vulgared kriz, n'houlont ket gou-  
zanv ken ar vaz-yeo. En em zovel a  
reont dre-all.

En Azi-Vihana, armead ar jeneral  
Rusian Baratof, o tiskan war-zu Bag-  
dad dre Vro-Berz, he deus kejet gant  
hini ar jeneral saoz Stanley Maude,  
o paouez kemeret Bagdad. Diwar  
vreman ez eus dirak an Turked, d'o  
bouta war-drenv er-maez eus ar Vezo-  
potami, eun talbenad armet nevez,  
hed-ha-hed etre ar mor Du en Han-  
ternoz ha pleg-mor Bro-Berz ar  
C'hreisteiz.

En Amerik. War vor hag en aer.

Disklêriet ganto ar brezel, Stado-  
Unanet an Amerik a labour breman  
d'ober o fourchas e soudarded hag e  
listri. Da c'hortoz, e roint skoazel  
d'ar re-Unanet o kas d'ezo arc'hant  
ha pourveziou-brezel.

Evel p'o dije c'hoant da denna  
outo o-unan droukrans ar bed-oll,  
an Alamaned o deus goueledet  
adaire, eul lestr bras er maez  
a vrezel. An 3 eus ar miz, ar  
« Parana », 4.460 tonnelli, eus ar  
Brazil, Ameik ar C'hreisteiz, gant  
eul lestrad kafe, « vee kaset d'ar strad  
ganto e mor Breiz. Da heul ar mes-  
tael-ze ar Brazil en deus torret an  
darempredou ouz an Alamagn, en  
gortoz diskleria brezel. Eur stad all  
eus Amerik ar C'hreisteiz, ar Chili,  
a henilho, moarvat, skouer ar Brazil.  
A-hend-all, diou stad vihan, Cuba  
ha Panama, hag a zo e dalc'h ar  
Stadou-Unanet, o deus lavaret heulia  
ar re-man.

Er mor Kreizdouarek, al lestr « Er-  
nest Simons » eus ar gompagnunez  
« Kannaderez-mor » (Messageries  
maritimes) a zo ket goueledet gant  
eul lestr-splujer ; aa holl dud en e  
vourz a zo bet savetaet nemet unan.

An nijerezed o deus labourer start,  
a-raok argaden ar Zaozon en Han-  
ternoz, da spia an Alamaned ha da  
zizoloi o difennou. Biskez ne oa bet  
gwelet kemend-all a nijerezed war  
eun dro na kement a emgannou en  
aer. Ar wella skoazel o deus digaset  
d'ar Zaozon, da c'hounit o zrec'h  
kaer.

AR « PLOUK »

Duman, 'n hor bro gaer Breiz-Izel,  
Ar gwiskamant 'zo dishenvel  
D'an dud a boarg er parkeier  
Hag hini ar re 'jom e kêr.

Eur bragou bras, frank ha ledan,  
Eur jiletan hag eun turban,  
Gant eur chupen a-drenv flenchet,  
Gant meur a zen a vez douget.

'Lec'hiou all 'zo 'vez alaouret  
Gwiskamanchou brav ar baotied ;  
Dre-oll, avat, eun tokig du,  
Blouk ha boulouzen a bep tu.

Kalz Gallacoued ha fals-Vreiziz  
'Gav an dra-ze eun tamm iskiz,  
Ha, pa welont eur c'hêz kourieriad :  
« Plouk ! Plouk ! » warnan hopont  
[dalc'hmat.

Gant ar brezel ez omp mesket,  
Met ar c'hiz fall n'eo ket chenchet ;  
Mar domp-ni holl gwisket e glaz,  
Etre hor yez ez eus kemm e hoaz.

AR VRAN HAG AL LOUARN

Eun deiz, va c'homaer Bran, war eur wezen puchet,  
A zalc'he en he beg eur grampeuzen lardet ;  
Alanig al Louarn, o santout ar c'houez-vat,  
Gant eun ear grasius outi 'zo touseat.

DISKAN :

War don an tra tra la la,  
War don an tra tra la la,  
War don an tra tra la la,  
E la la la.

— « Deiz mat, va mestrezig, penaos ez eomp-ni ? » —  
— « Trugarez, Alanig ; me 'zo yac'h-pesk, ha c'houi ? »  
« Va bugale ivez, nemet ar bihana,  
« A zo gwall-siferniet gant an erc'h diweza. » —

— « Saprestol, va c'homaer, na c'houi 'zo gwisket klok ! »  
« E Brest pe e Pariz eo graet sur ho paltok. » —  
— « Ia, eme ar Vran ; c'houi a zo diviner ! »  
« Mar kirit, me 'roy d'eo'h hano va c'hemener. » —  
— « E leal, mar deo ho mouez ker kaer hag ho chupen,  
« Ne gavoc'h ket ho par e-touez ar ganerien. »  
« Kanit d'in, me ho ped, eur c'houblad, eun netra... »  
« En ho lignez, pell 'zo, an holl a oar kana. » —

Va zoden ker buan, heb beza re bedat,  
A gomman labuen bras « Chanson va dous Janed » ;  
Hogen, he beg digor, evel ma rank kana,  
E lez he c'hrampeuzen d'an douar da goueza.

Alan an tostenner, pini ne glasse ken,  
A zailh evel eur bleiz war an tamm krampeuzen,  
Ha ne hell ket miret da c'hoarzin, ar fripon :  
An tamm lip-e-bao a blij kalz d'e galon.

— « Na pebez tamm friko diwar ho koust a ran,  
« A lavar Alanig neuze d'e gomaer Bran ;  
« Evit ho krampeuzen me 'laro d'eo'h brema :  
« Ho chupen a zo vil, ne ouzoc'h ket kana ! »

Rouanez ar brini, paket gant Alanig,  
Goapêt a vezo sur gant pep laouenanig ;  
Ar Vran, karget a vez ha da gant ar goler,  
A gavas ar g-ntel koustet eun tammig ker.

Ar gentel a fell d'in da rei d'eo'h aman,  
C'houi holl, bikan ha bras, selauit, eo houman :  
« Pa vo leun ho kenou a gig pe a vara,  
« Serit ho porrastel ; ne dit ket da gana. »

AN ABAD PERROT,  
person Taole.

(Kanet en enez Eusa, ha digaset da « Groaz ar Vretoned » gant  
aotrou person Eusa. Trugarez d'ezan !)

Ar wir-Vreiziz a zo dre-oll  
'Vel o gweler e Rumeugol,  
Ha seniour kaer, gwerziou hor Bro  
A vez kanet uhel tro-dro.

— « Sell ! emaint o tibri kolo ! »  
A lar buhan ar paotr Gallo ;  
Gant dismegans 'deu da hopal :  
« Plouk ! Plouk ! serr 'ta da siminal ! »

Ma 'z oa gwechall 'raok ar brezel,  
Kemm etre liou, stumm ha mantel,  
Hor yezou 'zoug d'an esperans,  
Hag holl e tifenomp ar Frans.

Bevet holl zoudarded ar Vro !  
— Gallo ha Breizad en eun dro ; —  
Pep-hini 'n deus graet e zover  
Er Marn, er Somm hag en Yzer.

E Verdun an Alamaned  
A zo bet pelloc'h distoupet ;  
Er C'honprinz ez eus atao droug  
E vije c'hoaz Gallo ha Plouk !

Ra vevint ! Ra vevint atao !  
Va mennoz, va gwir mennoz eo.

Graet gant eur « plouk » :

YANN MARI NORMAND









IRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bleaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar bioeu estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigevær and

Aluzenno da « Kroaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro

An aotrou abad Guilou,  
aluzener. . . . . 20 real.  
An Dimezeller a Volz. . . . . 20 lur.

Bennoz-Doue, en hano Breiz, d'hon mignoned a zigas aluzenno ken madeleuzas da gas « Kroaz » d'hon zoudarded !

Ardameziou Breiz  
war arbanniel-ruz-gwenn-glas

Setu smañ eul lizer, hag a lakaio da dridal kalon kement Breizad e lenno evel m'he deus tridet kalon ar beleg mat e deus e skrivet eus an talbeu-brezel. Hon gwella menoz d'ezan !

Ar c'henta a viz Ebrel, 1917.

Ma mignon ker,

Ma c'habiten en deus komzet d'in dec'h eus eun dra hag en deus lakaet ma c'halon da dridal gant al levezenn.

C'hoant en defe da lakaat, e pena hon strollad Bretoned, eur c'haer a vanniel, livet warnan « ardameziou Breiz », an herminig hag ar ger-stur « Potius mori quam foedari » . . .

..... Emaomp a-nevez-ze e-kreiz an tan. Met fizians hon eus holl e vezo skubet, en taol-man, sparfilhi kriz ha didruez Lomnig ar Brus. . .

J. TRALAMOT.

Enor ha trugarez d'ar c'habiten en deus bet ar menoz mat-se ! Eus dra dleet eo, e gwirionez, ober lid d'hon Bro Breiz a ra he bugale kement a daoliou-kaer evit ar Frans. Pa baro sellou hon c'henvroiz, e-kreiz tan an emgann, war ardameziou Breiz hag he ger-stur « Kentoc'h ar maro eget an dizenor », en em gavint frealzet ha kalonekaet c'hoaz evit skuba « sparfilhi ar Brus » er-maez ar vro ! Evel-se bezet graet, gant skozaie Doue, arc'henta ar gwella, ha bevet hepred Breiz hag ar Vretoned !

Taolen ar Brezel

Eun asailh a-vras etre Seissons ha Reims

Dilun diweza, 16 eus ar miz, e voe graet eun asailh a-vras etre « Soissons » ha « Reims », a-hed eun talben a zek leo pe dost, ar brasa hini bet tizet en eun asailh betek-hen.

Da zeg eur diouz ar beure e voe

lammet er-maez ar foziou hag, a-benn div eur en endervez, e oa graet betek 3,000 a brizonerien. Dalc'het e voe da vont war-raok. Kemeret eo bet linen genta an enebour etre « Soissons » ha « Craonne », enni eul lec'h emzao hanvet « Hent an Itronezed ». Etre « Craonne » ha « Reims », e lec'hio a zo, ez eus bet kignet an eilvet linen. Eno ivez e talc'har lec'hienno eus an emzava, evel « Kamp Kezar », war eur beg-douar etre diou stêr. N'emeur ken pell diouz krenvlec'h « Brimont », en hanternoz da Reims, e stlape ac'han an Alamaned o bouliji kanol euz ar ger-ze hag ouz hec'h iliz-veur vrudet. Hiviziken, emichans, e vo diaesaet d'ezo ken oboer.

War-dro 10,000 a brizonerien a zo bet kemeret en deiz-se.

An Alamaned o deus eneb-stourmet meur a wech dreist-oll en « Ailles », war « Hent an Itronezed », hag e « Courcy », tost da grenvlec'h « Brimont ». Aner e voe d'ezo, avat !

Asailh er reter da « Reims ». Goundou ar Zaazon.

Antronez e voe graet eun asailh all er reter da « Reims », war eun talben a 15 kilometr. Kemeret e voe eno ivez linen genta an enebourien ha kignet an eil linen. Krenva lec'hien gounezet eo menez « Cornillet ». Kemeret eo bet eus ar brava gant « eur rejimant eus gwalarn ar Frans » gouez d'ar c'heleier. Enor adarre d'ar Vretoned !

An deiz war-lerc'h e voe dalc'het da vont war-raok war an talben-ze.

Niver ar brizonerien kemeret en tri deiz kenta-man a zav da 17,000.

Ar Zaazon-i o deus dizarbennet eun eneb-asailh eus an Alamaned e Lagnicourt, etre Bapaume ha Cambrai, ha gounezet eun nebeut keriadenno c'hoaz ; startaat a reont ar c'helc'h en-dro da Lens, kêr-benn ar mengleuzioù glaou-douar er c'horn-bro glaouus-ze. Graet o deus ar gont eus o goundou : en tu-hont da 14,000 prizoner ha 194 kanol.

War an talbenno all. En Amerik.

War an talbenno all nebeut a gemm. En Azi-Vihana, e talc'har general saoz Maude da argas an Turked war-ze an hanternoz.

En Amerik, Bro-Velvi he deus, d'he zro, torret an darmpredou ouz an Alamagn. Da gredi eo e vo heuilhet skouer ar Stadou-Unanet gant ar holl stadou all eus an Amerik nemet gant Bro-Veksig, a zo maget an dispac'h enni a bell zo gant arc'hant ha spierien an Alamagn.

An aotrou Wilson en eul lizer d'e genvroiz a ro d'ezo aliou mat evit

pez a zell labourat a-unvan, kriski ar pourvezioù hag erbed ar bevaus evit ar brezel. Heb dale e vo graet eur vodaden a bouez eus kannaded ar re-Unanet aet d'an Amerik da zaludi an aotrou Wilson ha d'en em glevet gantan. E penn kannaderez ar Frans eman an aotrou Viviani hag ar marichal Joffre.

War vor hag en aer.

Ar 17 eus ar miz, diouz ar beure, ez eus bet eur c'hrogad, ar c'henta eus ar brezel, etre listri alaman hag amerikan. Al lestr eneb-tarzer « Smith » eus ar Stadou-Unanet a zo bet taget gant eul lestr-splujer alaman en dounvor dirak port New-York. Gwell a ze, an darzerez « torpille » a dre-menaz ebieu d'al lestr. Ar splujer, dizollet hag aen d'eza, emichans,

rak kanolioù an Amerikan, a dec'has kuit.

An Alamaned, o devoa n'eus ket pell gouledet eul lestr spagnol, ar « Sant-Falgencio » ; setu emant o paouez en em gemer adarre ouz ar Spagnoled. Ar 14 eus ar miz o deus kaset d'ar strad al lestr spagnol « Tom », 4,000 tonnell, war e hent da Vro-Zaoz. Seitek den diwar e veurz a vije bet kollet gantan.

Tarzet o doa, ar zizun all, eul lestr-klaevli eus ar Zaazon, ar « Gloucester Casile ». Ar Zaazon o deus ben talvezet d'ezo o leuskel gant eur skouarnennad nijerien bombezenno ouz kêr Fribourg.

Diouz tu ar Fransizien ivez an nijerien a labour start ; eman an nijer brudet « Guynemer » o paouez diskar e 36 vet nijerez alaman.

AN ENE

Fulennig divarvel, alan an Douez,  
O chom en eun ti pri aezet e gas da get,  
Tremenad 'vit eun eur war draouien baour ar bed,  
Hogen ganet eun deiz barz ar Beurbadelez ;

Gwir Dra ha na c'hall ket gwelet hon daoulagad,  
Ha Buhez na c'hall ket ar maro he laza,  
Kevrin (1) n'hall ket tizout ar skiant lorc'husa,  
Douarel e chomlec'h, met doueal e stad ;

Perlezen brizius a golljed en Eden,  
Hag a voe adkavet ha prenet gant Jezuz,  
Nann gant aour hag arc'hant nag aberziou (2) touellus,  
Met gant gwad E galon gantan skuilhet a-grenn.

Monvelekaet diouz ar c'hambreeg, e Pontarlier 4 Ebrel.

F. GOURVIL.

Ar zizun all, er zon ker kaer « Kleier Pask » gant hon lenner J. Jacob, euz werzenn a oa benn mesket ar gerioù hag al lizerennoù er penn diweza anezi ; setu-hi aman reizet-mat :

El lanneg, en draouien ha war aochou ar mor ;  
da rima gant ar werzen da heuilh :

Kanit el levezenn d'hon c'henvroiz Arvor.

(1) Tra guz, sekred.  
(2) Sakrifizioù.

Buhez Lloyd George

Pevare pennad : Lloyd George ministr ar C'henwerz

Evel hon eus gwelet, gouarnamant ar « Virourien » a voe taolet er-maez a garg e 1905, ha Lloyd George, en doa graet kement evit se, a voe anat e tete beza unan eus ar vinistred nevez. Evel-se e c'hoarvezas

ivez ; hanvet e voe da ministr ar C'henwerz.

Kalz a gave ganto na vije ket poellek a-walc'h evit ar garg ken pouner-ze. Ar Gelted, ken tuet d'ar c'han, ken douget d'ar menozioù uhel, ne vijent ket barrek, gouez d'an dud-ze, da zirouesta traou luziet ar c'henwerz. Lloyd George a ziskouezas d'ezo n'eo ket eun dra fall, e traou ar c'henwerz voken, kaout menezioù uhel, ha pebe, ouz

sklêrijen ar seurt menozioù, e weler aesoc'h dalc'hamat ar gwella hent d'ober pep tra evel ma 'z eo dleet.

An holl a anvez al lavar-koz : « Ne vez ket savet ar c'hleuz diouz eun tu hepken. » Gant e spered lemm ha digor e c'houie ar ministr nevez anaout raktal « an daou du eus ar c'hleuz » ha, gant-se, unani ar sperejou pa zave tabut.

Kement-se a voe gwelet splann pa beoc'hias labourerien an henchou-houarn, a felle d'ezo ober eun arzaolabour (« grève », e galleg). Komz a reas d'ezo ha d'o mistri en eun doare ken dereat ha keu tur ma c'hellas dizarbenn an arzaolabour, a vije bet kollus ha risklus-bras da Vreiz-Veur a-bez.

Eun dra vat all a reas e voe lakaat sevel rolloù piz eus an holl war-c'hadouezioù graet er vro. Evel-se, e c'hellas ar gouarnamant hag ar micheriu gouzout ervat penôs ez oa ar bed gant traou ar c'henwerz hag anaout aesoc'h a ze petra d'ober evit o gwellaat.

Setu aman an tri zra bouezusa a reas :

Da genta, reizata kement a zelle ouz porz Londrez. Brasa porz-mor ar bed eo Londrez. Hogen, keu luziet e oa aet an traou ennan gant an amzer ken e oa red sevel d'ezan reizadurioù nevez. Eur bras a labour e oa ze, hag e renkas Lloyd George goulenn o ali digant kalz a dud akuit ha skiantek, ar pez a rae dalc'hamat pa veze eun taol-labour diaes bennak da gas da benn. Hen ivez a studias diouz e du, hag e voe kaset an taol

da vad, ma chomas an holl batet gant ar burzud !

An eil dra a-bouez a reas e voe ober d'an dud estren, bet rôet d'ezo ar gwir (pe « patente ») da werza marc'hadouezioù a zo, lakaat oberia ar marc'hadouezioù-ze er vro. A-raok-ze, e c'hallent lakaat oberia o marc'hadouezioù « patentet » er-maez eus ar vro, oc'h ober gaou ouz ar vicherourien hag o lakaat Breiz-Veur war var da gaout dienez eus traou a bouez, ma vije brezel ha torret pe ziaesaet an daremprejou etrezi hag an diavaez.

An trede tra e voe en em emellout eus stad an dud a vor. En eun enezen evel Breiz-Veur, ar verdeadurez ha kement a zell outi he deus eun dalvoudegezh dibar. Hogen, aman ivez ne oa ket an traou urziet mat. Reizadurioù hag a helle dereout e derou an XIXvet kantved ne oant ken eo o lec'h e derou an XXvet kantved.

Da genta, Lloyd George a reas en-dro d'ar vartoloded, hag e voe douget eur reizadur nevez diwar o fenn, da verka kement a zelle ouz ar bevans, ha traou all. Gourc'hemennet e voe ivez kaout war bep lestr an holl ijinou a zo rekis da zavetei ar buhezioù. Listri ar broiou estren a voe rediet d'ober kemend-all ; anez-se, o dije gallet espern frejou diwar ze ka goulenn nebeutoc'h evit o zreiz, oc'h ober gaou ouz listri Breiz-Veur.

Ne chomas Lloyd George nemet tri bloaz ministr ar c'henwerz betek 1908.

P. MOCAER.

(Da heuilh).

## AR C'HOADOUR

WAR DON SILVESTRIC.

Savet d'am breur, koadour, evit e frealzi pa oa o c'houzanv poan er foziou-brezel ; en e goun breman, p'eman dirak Doue goude bezan kouezet evit e dud hag e vro.

Na pelec'h eman du-ze ma C'hoad leun a frankiz,  
E-lec'h m'am eus tremenet bep nec'h ma yaouankiz ?  
O ma C'hoad, ma C'hoad karet, ha me da welo c'hoaz ?  
Mar doun hirie war ma mad, penôs e vin warc'hoaz ?

Kaer o deus ar c'hanolioù krozal gant trouz ifern,  
Hag an « obuzioù » sklokal a bep tu d'in a vern ;  
Kaer en deus an Ankou mud diskar tud en-dro d'in,  
D'am C'hoad bras e hirvoudan, d'am c'hoad e hirvoudin !

Kennerzet ez oun aman gant ar zonz anezan,  
Beure ha noz ma spered a nij betek d'ezan,  
A nij pell diouz ar brezel, du-hont betek ma C'hoad,  
E-lec'h ma kavan frealz, diskuiz, peuc'h hag eurvad.....

Frealz o c'houzout n'eus ket a vrezel dre eno ;  
Diskuiz, o tec'hel er-maez a dourni'n emganno ;  
Peuc'h, o vevan dibredet en-kreiz ma bro-Gerne ;  
Eurvad,..... N'eus enkreiz ebet o samma ma ene !

Ya, d'an de pa hirvoudan, d'an noz em hunvreou,  
E welan reiz dirazoun ma C'hoad, e zoareou ;  
Ped gwech n'eo ket digouezet ganin dihan, mantret,  
Troc'het d'in gant ar spouron hunvreou alaouret !

Hunvreou bevet ganin..... A garten c'hoaz beva,  
Hunvreou hag am laka meur a wech da lenva.....  
Nan, dan a gement n'eo bet er brezel euzus-man  
N'hall gouzout pegen frailhus eo gouzanv poan aman !

Dre-ze, pa c'hellan kemer hent ar C'hoad a garan,  
Adal ma franka warnoun, kerlent e gemeran ;  
Neuze, nag a levenez em c'halon a Goadour !  
Eun eurvez yec'hed hepken a ra vad d'ar c'hlanvour.

Hag e welan o tremen ma gwellan amzerioù,  
Karget a evursted, leun a blijadurioù ;  
Ha kavout a rin-me c'hoaz ma devezioù gwechall  
Pa vo echu d'ar brezel ha d'am reuz dre Vro-C'hall ?

Ha kavout a rin-me c'hoaz ma baleadennoù  
A-dreuz fargennoù ar C'hoad, a-hed e draouiennou ?  
Ha kavout a rin ennan ma zoug gi, Diek ha Benn,  
O kas war-lerc'h ar gadon o vont d'o diarbenn ?

Ha kavout a rin-me c'hoaz e vein-hir, peulvaned,  
Roc'h Seiz-Feunteun, an Ermit, Toull-ar-Chornandoned ?  
Gwelat a rin diwarnan, gant ar voren gluzet,  
Meneou Du hag Anez en dremwel morguzet ?

Ha kavout a rin-me c'hoaz ho tourioù, parrozioù ?  
Ha klevet a rin, d'an noz, mouez hoc'h anjeluzioù,  
Kallak, Pluskellek, Plourac'h, Kalanher ha Karnod,  
Sant-Servez koz ha Bulad, Sant-Nigouden, Duod ?

Ha kavout a rin-me c'hoaz ho ti digemerus,  
Holl vignonet tro ar C'hoad, holl vignonet karus ?  
Nag a ziviz grot ganime en kornig an oaled  
Dirak eur bannac'h jist tomm, pa gane ar skrilhed !

Ha kavout a rin-me c'hoaz, — O pebez levenez ! —  
Ma c'hoar ha ma mamm garet em c'hérig Kerbernez ?  
Kavout a rin ma breudaer, echu ivez o vro ?  
Doue, mirit ac'hanomp hag hon c'hasit d'ar vro !

Ha kavout a rin-me c'hoaz iliz koz ma farrouz,  
En he zraouiennig peuc'hus, gant ha bered didrouz ?  
Gant pegement a fizians e kimiadis diouti,  
Goude bezan goulennet ma mennad diganti !

Sant Servez, hon paeron mad, a harp e yugale ;  
A-raok kuitat e zour, em boa graet d'ezan le  
D'e g'rouz kalz ma tac'hjen heb gloaz diouz ar brezel ;  
Sant Servez ken galloudus n'hall ket ma dilezel.....

Doue, eta, ar Werc'hez, an aotrou sant Servez  
Am c'haso d'am Bro, d'am C'hoad, me a gred, eun devez ;  
Ar greden-za a viran gwrizeniennet start ennou,  
Ha hi, en-kreiz pep stourmad, eo a zalc'h ac'hanou.

Devez meurbet binniget, devez kaer an distro,  
Gouela, kanan ha c'hoarzin a rin o tont d'am Bro ;  
Sonjal a ra d'in penôs na garin ket a-walc'h  
Ma zud, ma c'hérig, ma C'hoad, daoust m'o c'harin ma gwalc'h !

Evursted ken tenner, pa hunvreen ennou,  
En em c'houlennan pegouez e kavin ac'hanout ;  
Pell bras e pad ar brezel,.... nag e padis pelloc'h,  
Ar gortoz hir, mar bez mad, ne vo nemet gwelloc'h.

Ra zeuio buan ganimp an trec'h hag al lore,  
Ma tistrotomp, soudarded, gant hon zud adarre ;  
Ma tistrotomp, Bretoned, da vro goant hon c'havel,  
Elec'h m'eo ken deus bava, ken frealzus mervel !.....

2 a viz Gouere,

AR YEODTE.

## MARO AL LOUARN

Da genderc'hel gant « Ar Vran hag al Louarn » eus ar zizun ziweza, setu aman « Maro al Louarn » a zo bet digaset d'imp gant eul lenner. Trugarez d'ezan !

Klevet ho peus kana ar malvran goapaet.....  
Me ya da gana d'eooc'h ar pez na ouzoc'h ket :  
Deac'h, en eur dremen dre gichen koad Serc'h,  
E kavis al Louarn reudet gant ar maro.

DISKAN :

War don an tra la la (diwech),  
War don an tra deridera, tra la la.

Hag e dad hag e vamm, e vreudeur, e gerent,  
Kluchet en-dro d'ezan, holl e huanadent.  
— « D'am zoug, m'eul louarn koz, en eur zavel e vouez,  
» Alan a zo maro gant eur c'hofad krampouez. » —

P'o doa gouelet dourek kerent Alanig kôz,  
'Voe sebeliet ar c'horf ha dougenet d'ar bez,  
An holl lern o kana, n'ouzon ket pad a oa,  
A zeue daou ha-daou 'n eur gana « libera ».

Arruet gant ar bez, pep-hini 'zaoulinas ;  
Neuze an aotrou maer 'n eur ouela a gomzas.....  
N'oun ket petra laras, met ar pez 'welis mad :  
An holl gant kil o fao a zec'he o lagad.

— « Setu, 'me ar malvran war eur wezen kludet,  
» Setu maro Alan ; me n'oun ket ankeniet ;  
» Laeret en doa d'in-me va c'hrampouezennig kôz,  
» Setu-hen gwall-varnet evit e c'hoaperaz ! » —

Selaout holl breman kentel va c'hanaouen !  
C'houi lern bihan ha bras, dalc'hit-hi en ho penn :  
Ma vije bet Alan louarn leal ha mad,  
Ne vije ket maro ken trist gant e gofad.

X.....

## KELIERE EUS AR VRO

BREST

Evit Brest porz-mor treuzatlantik.  
— Da c'hortoz Kamb ar Gannaded da studia ar mennad diwar-benn ober eus Brest porz-mor bras an Amerik, « Strollad Brest treuzatlantik » a zo en em vodet el lez-varn kenwerz, diriou diweza, 19 eus ar miz. En em guzulier ez eus diwar-benn al labourioù a vije d'ober evit kriski ha gwellaat c'hoaz hon porz-mor breizad.

MONTRoulez

Menegou-enor. — An aotrou kabiten Troadec eus kanolierez an Inizi, a zo bet lakaet, nevez zo, evit an tredo gwech, war an daolen-enor Yann Conan, brigadier en 13vet husard, a zo bet lakaet war an daolen-enor evit beza en eur ginniget da vont da anaout eur roudour war eur stêr, didan teñnadeg ar mindrail-herazed.  
Hon gouarc'hemennou d'ezo !

Ar Renar-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guilhaune





IRIZ AR CHOUMANANCHOU

10 roal ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.  
Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 93, rue St-Benoit,  
St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MEARD, 27, bali Charner, zigemer ane

Alazennon da « Groaz ar Vretoned »  
e he c'has da zoudarded ar Vro

Eur mignon ..... 2 skoad.  
F. Gwaz eger ..... 1 skoad.

Trugarez d'hon mignoned ! Bennoz Doue, dreist-oll, d'hon lenner ker, F. Gwareger, a zo hepred en eun hospital hag hen bet gwall-c'hloazet war an talben. Kenta tra en deus graet, p'en deus gallet sevel, e voe digas, a-unan gant eul lizer mat a weloc'h pelloc'hik, eur gaer a aluzen da « Groaz ». Doue d'hen talvezo d'ezan, dre rei en-dro d'ezan e nerz hag e yec'hed !

Taolen ar Brezel

War dalben an Hanternoz

Abaoe hon diweza « taolen ar Brezel », ar Fransizien o deus gounezet c'hoaz lec'hioù emzao, dreist-oll « Vailly », penn eur pont war stêr « Aisne » e-kichen « Soissons », krenvlec'h « Comté » er reter da « Soissons », hu kêr « Saney » en hanternoz da « Condé ». Er reter da Reims e talc'hont breman eus uhelen a bouez bras, hanvet uhelen « Moronvillers ».

Ar Zaozon, goude paouez eur pennadig, o deus argadet adarre, al lun 23 eus ar miz, a-hed daou ribl stêr « Scarpe », er reter da gêr « Arras ». Komeret o deus eno teir c'hériaden, « Gravelle », « Guémappe » ha « Roeux », daoust d'an Alamanned da stourm a-vas eus ar starta.

Antronoz, e talc'hjont da vont war-raok, er gevred da Arras ar wechman, war-zu stêr « Escout » a red dre « Gambrai ». Gounezet o deus a-nevez diou gêria-len, « Villers-Plouich » ha « Beauchamp », ha tizet ribl kanel an « Escout ».

En emgannou-se a zo bet eus ar c'harva, e voe harpet da vat ar Zaozon gant o c'hanolioù a zo mat-dreist, gant o nijerezed a ziskaras, en eur ober eun devez hepken, betek tost da 40 nijerez pe « silzigen » alaman, hag ivez gant o c'hirri-dre-dan bouarnet a hanver « tankou ». Ar re-man a gerz diac'h e-kreiz an deunadeg stank, o flastra vindanno losou an enebour, evel ma vez flastret ar c'hrogañh war an henc'hou gant ar tuilherez dre dan.

Evit d'an Alamanned enebi ha stourm gwelloc'h breman eget ma

raent a-raok, n'ez eus ket gredi e c'hallfent heizel pell hiviziken.

War dalben ar Ruz

Bez' e oad o c'hortoz an Alamanned da argadi war dalben Riga hag er porziou-mor ar « Baltik ». Brud a oa o doa c'heant d'ober o mad eus m'edo luziet an traou er Ruzi evit toulla o bent war-zu Petrograd. Nemet a-walc'h ha re zoken a zo d'ezo gant ar Fransizien hag ar Zaozon evit ma c'hellfent ober mann ebet a bouez a-hend-all.

War dalben an Itali ivez, e lec'h e kionigent mont war-raok a-vas, n'ez eus bet netra c'hoaz, en tu-hont d'ar ganoladeg ha d'eun nebeut krogadou gant an Aotrichianed war uhelen « Carso ».

En Azi-Vihana

Ar Zaozon, suraet d'ezo o bent diouz tu menezioù Bro-Berz gant ar Ruzianed a astenn o dourn d'ezo diouz an tu-ze, o deus dalc'het da gerzet war-raok a-hed ribl stêr « Tigre », en hanternoz da Vagdad.

An 23 eus ar miz-man, goude krogadou start, e talc'hjont ti-hent-houarn Samara, penn eul linennad hent-houarn a bouez bras, a oa bet digoret gant an Alamanned e sell da staga diwezatec'h broioù ar Zav-beol dre Gonstantinopol ouz an Alamagn. Eur c'haer a c'hounid eo ar gemeredigez-se evit hon c'henunanet !

War vor hag en aer

Ar 17 eus ar miz, an Alamanned o deus gouelede, e mor Breiz, daou lestr-klanvdi d'ar Zaozon, an « Donegal » hag al « Lanfranc ». War he-man e oa Alamanned gloazet a voe beuzet darn anezo.

En noz etre an 20 hag an 21 pemp lestr distrujer alaman o deus losket bombezennoù ouz kêr « Douvres ». Dizarbennet e voent gant daou lestr saoz, a reas d'ezo lec'h evit o buhez, goude kas d'ar strad daou anezo. En nozvez-se end-eun, an Alamanned o deus taolet bombezennoù ouz kêr « Calais » ha lazet enni eun nebeut tud dinnoz.

An 23, teir nijerez vor eus ar Zaozon a zo aet d'eur strollad a bemp lestr enep-tarzer (« contre-torpilleur ») alaman, a glasse mont en douvor dirak Seabrugues; gouelede o deus unan anezo.

Ar 25, eun nebeut listri skanv eus an Alamanned o deus tizet tostaat ouz an aod e-kreiz noz ha stlepel bombezennoù ouz porz « Dunkerque ». Er c'hrogad a zo bet evit o dizarbenn, eul lestr-tarzer (« torpilleur ») eus ar Fransizien a zo bet kollet.

En deiz-se ivez e teue kêlour dre

an orjalen e oa ar marichal Joffre hag an aotrou Viviani en em gavet en Amerik, goude eur veaj eus ar gwella. Heb dale, moarvat, e klevimp ganto eun dra bennak da laouennaat ar c'halonou diwar-benn ar zikourioù a vo digaset gant ar Stadou-Unanet da rei skoazel da beurachui ar brezel.

AL LIZER

Pell diouz e dud, pell diouz ar gêr,  
D'ar zoudard 'ra vad eul lizer ;  
Bemdez, pa deu an neventioù,  
Bervi a ra o c'halonou.

Pep hini gant e lizerig  
En em denn prim en eur c'hornig ;  
Brasa pennad eus an dervez  
'Zo stag ouz eur seurt lennegez.

A spered e veont neuze  
E mesk o zud, o bugale ;  
En o c'halon e teu tommder,  
O daoulagad a vez tener.

'Vit mignoned an avel Viz  
Lizer ebet e-pad ar miz...  
Ho pet evito karantez  
'Vel an denera maeronez !

— Gwreg Fanch a zo stao ker yac'h,  
Ha krenv ar paotr, koantik ar plac'h ;  
— Holl gerent Per 'deus esperans  
'Vo prest dishual hor bro Frans.

— Jakig den yaouank ar c'hlas dek,  
A lenn eul lizer hir ha c'houek,  
Deut war ziwaskel an avel  
Digant e zous a Vreiz-Izel. —

Holl ne resevont ket dalc'hmad  
Pez 'ra d'ezo kement a vad ;  
Pa chenchont lec'h war an talben,  
D'o c'haout na pebez abaden !

— Gant ma talc'hint du-hont er gêr ! —  
Ar zoudarded 'ray o dever,  
Kerent kenil ha miguonez,  
Mil gwech bennoz ha trugarez !

War an talben, 4 a viz Ebrel 1917.

Y.-M. NORMAND

KLEBER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL

Eur gwall-ganv : maro Bleimor ! —

Setu eur gwall-gelou o tigouezou  
ganimp : maro an is-letanant Calloc'h,  
hon c'henvroad ha kenlabourer ker,  
ar Biz mat « Bleimor », kouezet  
war an talben an 10 eus ar miz-man.

Eur c'holl pouner eo evit Breiz-  
Izel, ar pounerer hini zoken abaoe  
derou ar brezel.

Gant e 1888, en enez Groa, eus

eun tiegez mat a besketaerien, e reas e studi e Santez-Anna. Eno e kreskas c'hoaz e ziou garantez, ar garantez ouz e Feiz kristen hag ar garantez ouz e vamm-vro Breiz, a dies beza reolennoù e holl vuhez.

Ar vad en dije graet da Vreiz, ma en dije Doue lezet e vuhez gantan, a heller da veiza diouz ar pezh a reas er bloavezioù re verr ma kemeras perz en hon emzav brezonek. Gwall-izel e oa neuze Kaoz ar brezoneg : diskaret e oa bet « Strollad mirourien ar Yez galleouek » gant ar gwasa hag ivez ar galloudeka eus hon enebourien ; war zisleri ez ad bemdez « Kevredigez Breiz » hag a-boan ma krede c'hoaz « Uvaniez Arvor » sevel he fenn. Evit ar varzed ne gomzed anezo nemet evit o goapaat...

Neuze eo en em unanas « Bleimor » gant e vignon Diberder da groui eur gelouenn nevez « Celtia ». Eun taolkaer a yaouankiz e voe, a vanas h'n enebourien batet gantaa, a zihunas ar re vorgousket, hag a rôas da anaout e oa e Bleimor, ouzpenn eur barz hag eur skrivagner dournet-dreist, danvez eur Rener, a zo kaeroc'h !

Evel-se e voe ivez menoz e ofiserien diwar e benn, pa voe galvet da zoudard, pa 'z eo gwir e savas ken buan eus a zoudard da is-letanant. Eur gwir Rener e oa anezan, moarvat, evit ar re dindanan. Bretoned e oa e zoudarded eveltan, ha, bep zizun, e lakae evez mat ma tigouezje ganto eur pakadig « Kroaziou ar Vretoned », d'o frealzi en o foziou war an talben.

Eur zervich bras a oa bet laket d'ezan en e vro c'henidik, digwener diweza. Ar re ac'hanomp n'int ket bet evit mont, en em unanent a galon gant ar pedennou a zav evitan war-zu Doue, en deizioù-man, eus kalon e vamm ger hag e zud glac'haret ! Ra zigemerint holl hon gwella goure'hamennou a genganv !

Setu aman eun nebeut linennou eus diweza skrid Bleimor, enno eur gentel a bouez evidomp. Evel e destamant eo, skrivet gantan e derou ar bloaz 1915.

« Kent pell e vin el lazadeg... Pe arouez a zo war va zal ? Ha gwellet a rin da ziwaz-te, bloavez neuze ?

Ha petra 'vern ? Abred pa ziwezet, ha pa zono an eur da vont daved an Tad, laouen ez inn ! Jezuz a oar frealzi hon mammou.

Ra vezi benniget, bloavez neuze, hag e vefe, e-touez da dri-c'hanv pemp deiz ha tri-ugant, va deiz diweza !

Ra vi benniget ! Rak ouzpenn kant vloaz o deus tremenet war ar vroman, hep n'o dije anavezet nemet kounnar Doue, ha te, e vi estlammet gant E Drugeriez.

Gwellet a ri distro ar c'hanennou harluet, an Treec'h o tarm adarre

dindan plegiou banniel ar Frans, hag ar Vro adsavet da virviken.

Gwelet a ri va Breiz dishual a-benn an diwez, hag he yez enoret, evel p'edo beo he marc'heien evit he difenn.

Bloavez nevez ! Bloavez brezel ! Ra vi banniget, hag e tigasfes, ez mantel, a-gevret gant an Nevez-hanv evit ar Bed, ar maro evidoun-me !

Petra eo maro unan, pe gant, pe maro kant mil, gant ma vo beo ha brudet ar Vro, gant ma kendalc'ho ar ouenn !

Ha, pa varvin, laret ar pedennou, ha va beziet evel va zadou, trôet va zal ouz an enebour.

Ha na c'houlennit tra d'in digant va Dasprenour, nemet al lec'h diweza en e Varadoz....

O ya, moarvad, al lec'hig-ze en devo bet er Baradoz-Doue, na c'houlenne ken en eskemm d'e vuhez roët gantan a galon vat hag evel a-ratoz-kaer evit ar Frans !

Hon mignon ker Gourlet gloazet.

Eur gwall-gelou adarre ! Hon mignon J. Gourlet, a zigase ken aliez da « Groaz ar Vretoned » keleier eus an talben, a zo bet gloazet. Setu aman eul lizer da rei eus e gelou hon eus bet digant e vreur, hon c'henslabourer mat, Loeiz Gourlet, « Bodspenn » :

Rosporden, an 20 a Ebrel, 1917.

Aotrou ker,

Eur c'helou trist a gasan d'eo'h hirio. Va breur karet mad Jozel a zo bet gwall-c'hloazet nevez-zo, war-za B... gant mindrailh milliget an Alamanned. Red eo bet trouc'ha d'ezan e c'har zehou. E vrec'h zehou ivez a zo bet draihet e meur a lec'h gant ar skantennou « obus. » Eman breman en eun hospital, e Sant-Florentin....

Ra zigemero hon mignon war e wele a boan en hospital gwella gourc'hemennou ha kaloneka menoz « Renner koz » hag holl lennerien « Kroaz ar Vretoned » !

Gwallow'h kelou eus hon mignon ha kenvrôad mat, F. Gwareger.

Eus klanvdi « Tulle » e-lec'h m'eman bepred, hon c'henvrôad ker F. Gwareger, a skriv d'imp al lizer mat-man gant e zorn dehou. Ar wech kenta eo d'ezan gallout hen ober, pa ranke betek-hen skriva gant e zorn kleiz. Doue da raio d'ezan mont war wellaat bepred, d'ezan da zont heb dale d'ar vro da danva adarre aer vat Breiz-Izel !

Tulle, ar 24 a Ebrel.

Aotrou ha mignon ker,

Eur gur bepken evit rei deus ma c'helou a zo gwallow'h a drugarez Doue.

Dec'h e oan savet evit ar wech kentana. Mont mat a ran gant ma branelloù.

Aboue eun nebeut deziou en em zervijan eus ma dora deho, nemet nebeut a nerz am eus c'hoaz. Gouliou ma gar a zo en hent mat da barean, hag, a-benn eun nebeut, em eus esperans mont da welet ma bro Breiz.

Da c'hortoz, e reketan de mat d'ec'h ha d'am c'henvroiz a zo en tan, war an talben, o kas ar Boch milliget d'ar gêr.

Ho kenvrôad ha mignon leal.

F. GOAREGUER.

A-unan gant e lizer karantezus, hon mignon, evel hon eus laret c'hoaz, en deus digaset eur gaer a aluzen da zikour kas « Kroaz ar Vretoned » d'e gamaraded en talben. Eur wech c'hoaz mil bennoz-Doue d'ezan !

## Salud da Vrezelerien Breiz

De-lud bre-ze-lerien, paotred hor Breiz-Izel, a zalc'h  
soun ho panniell en tan ar brezel ! A-dreuz ar reuz euzus le.  
ped ar Vie-toned a stoum e-vit ar Frans evel le-o-  
nad Doue-doue war d'ezan, war d'ezan, e-vel ce-doe ar mor, en-dio  
d'ho tal e lufi eus c'helou a e. no ! da-lud bre-ze-lerien, paotred  
hor Breiz-Izel, a zalc'h soun ho panniell en tan ar brezel !

Salud, Brezelerien, paotred hor Breiz-Izel,  
A zalc'h soun ho panniell en tan ar brezel !

A-dreuz ar reuz euzus bepred ar Vretoned !

A stoum evit ar Frans evel leoned.

Soudard war droad, war varc'h, evel reder ar mor,

En-dro d'ho tal e lufi eus c'helou a eunor.

Salud, brezelerien, paotred Breiz-Izel.

A zalc'h soun ho panniell en tan ar brezel !

Dre-holl, 'hed an talben, ho kaver c'houi, Breiziz,

Gwazed n'int ket boazet da zont war o c'hiz.

Kouls e difenn Verdun hag en asailh ar Somm

N'eus ket par d'eo'h da rei d'ar Voched kaout tomm ;

Er rusta tachennou, pa vez spontus ar c'hrog,

Piou nemet ar Vreiziz a vez en a-raok ?

Salud, Brezelerien, paotred Breiz-Izel,

A zalc'h soun ho panniell en tan ar brezel !

Salud, rejimanchou Kemper, Brest, an Naoned,

Re Wengamp, Sant-Brieg, Roazon ha Gwened !

Siouaz, war an dachen, en draonien, roz pe koad,

Breiziz, priou 'oar ped gwech e ruilhas ho kwad !

Ankou dir ar Brezel start en deus bet fale'het....

Startoc'h ouz ar bleiz ho peus bet dalc'het !

Salud Brezelerien, paotred Breiz-Izel,

A zalc'h soun ho panniell en tan ar brezel !

Salud d'eo'h-c'houi, dreist-holl, a zo kouezet du-hont,

Gwazed e-kreiz ho prud, tud yaouanc dispart !

E peoc'h ra ziskuzo ho korfou paour maro !

Warnoc'h eo e savo kaeroc'h eost ar Vro.

Ha diouz ho Paradoz goulennt ouz ar Mestr

Ma flastrimp ar Voched, ma vimp digabestr !

Salud Anaon keiz, soudarded Breiz-Izel,

Kouezet vit ho panniell en tan ar brezel !

Brest, ar 5vet a veurz, 1917.

Eastig Kerviek.

Hon prizonerien o c'houzañv gant an naon.

Unan eus hon c'henvroiz, Arthur Bourdoulou, hag a oa labourer war ar moulerez a-raok ar brezel, en deus skrivet d'imp da rei eus e gelou eus Munster en Alamagn e-lec'h m'eman prizoner. Dre veska geriennoù brezonek e galleg e lizer, ez eo deut a-benn da rei da c'houzañv d'imp e oa ar bevans « gwall-tall ha treut kenan ».

Pa hallomp hen ober, kasomp sikour d'hon prizonerien ger !

## Pedi hon Zent koz

Setu o tigeri, gant an Nevez-Amzer, mare ar pardonioù.

Hon Zent koz a ra d'hon Bro-ni

'Vel eur gurunen,

Eur gurunen a zo ganti

Sked mil stereden.

Ha, dreist-holl, n'hen ankouna-c'homp ket, int-eeo deus savet hon Breiz ; krouerien, tadou hon Bro ez int ha, gant-se, ne baouezont ket da

bara outi eus lein an Nenv sellou a drugarez, da veza eviti e-kichen Doue an hanterourien ar gwella.

Ha breman hon eus 'barz an Né

Skoazellerien vat,

N'hon eus nemet goul digante

'Vit kaout hon mennad.

Muioc'h eget biskoaz e tleomp en em urbedi outo gant fizians, mont d'o gweladenni en o ilizou, en o chapelioù, en o fardonioù, hag o fed'i kalonek, ma raint o skoazell c'halloudus d'hon c'henvroiz en talben-brezel ha ma c'houlennit digant Doue rei termen, an abreta ar gwella, d'ar walenman a gastiz.

Eur geriennoù bennak ne vo ket a re aman ouz penn diwar-benn an amzer ma veve enai hon zent koz.

Gallaoud a zo, anezo tud desket-bras a-bend-all, nemet n'o deus ket tizet — pe brizet, am eus aon, — mont dounik a-walc'h e studi hon istor Breiz, hag a gav d'ezo e oa hon tadou koz tud gouez pe banter c'houez, « barbured » goez d'ezo !

— Gwir eo, eme an dud-ze, ho zent koz o deus graet burzudou :

diskouezet o deus d'ar bed skouerioù dispar a zantelez, savet o deus man-tiou a baras ar sklêrijen diouto a-dreuz an Amzer goz evel ma par an touriou-tan en tenvalijen a-us d'ar mor. A drugarez d'ezo ez oc'h bet, c'houi Bretoned, eunet da vad en hent reiz da veza eur bobl a vuhez yac'h hag a feiz krenv....

« Nemet, a stag kerkent ar fals-veulerien-ze, ho tadou koz hag ho zent, petra e vijent deut da veza, — tud gouez evel ma oant ! — pa-nevet ar Romaned, hon tadou ni Gallegerien, a zigasas d'ezo sklêrijen ar Sevenadurez ?... »

Gevier, ha netra ken, lennerien ger ! Ar re ac'hano'h o deus studiet an « Notennou diwar-benn ar Gelted koz » a oar ervat n'oa ket hon tadou tud gouez. Sevenaet kaer e oant er c'hontrol, gwelloc'h sevenaet e meur a genver eget ar Romaned. Ar roman politikerien digonstians, alouberien ha mac'herien boblou, a oa ken stag, dre o fallagriez-natur ha gwall-dechoù o c'halon, ouz fals-doueou ar baganed ken e rejont d'ar wir Feiz eur brezel didruez, eur brezel mantrus, a badas, n'eo ket bloaveziou, met kantvedou a-bez, o veuzi ar bed-oll, sujet dindan o zreid, e gwad ar verzerien. (Da heñth)

## An Dasorc'hidigez !

Da heul sôn ken kaer hon lenner mat, Gourvil, a rôs da zont d'imp, da vare Gouel Pask, eus ar re a gouez ken stank er brezel-man hag eus gloar ar Baradoz a zo ouz o gortoz, e vo brao gant hon lennerien, dreist-oll gant ar re a zo divrôet, kavout aman an Aviel a vez lennet en ilizou en ofren Pask, Aviel Dasorc'hidigez (pe « Resurektion ») hon Zalver.

En amzer-ze Mari Madalen ha Mari, mamm Jakez, ha Salome a brenas louzou c'houez-vat evit o lakaat ouz korf Jezuz ; hag, ar c'henta daiz eus ar zizun, e teujont d'ar bez baure mat da zav-heol. Hag e lavarent an eil d'eben : « Piou a ruilho d'eomp ar maen a zo e toull ar bez ? » Ha, pa zelljont e weljont penaos e oa tennet ar maen ; rak gwall-vras e oa. Hag, o vezan aet er bez e weljont eun den yaouank a oa azezet en tu dehou, gwisket e gwenn ; hag o doe aon. Hogen heman a lavaras d'ezo : « N'ho petket a aon. Jezuz a Nazaret a glaskit, a zo bet staget ouz ar groaz. Savet eo a varo da veo ; n'eman ken aman. Setu aman al lec'h m'oa bet laketa ennan. It, eta, ha livirit d'e ziskibien ha da Ber penaos e tiaraogo ac'hano'h e Galilea. Eno e weloc'h anezan evel en deus lavaret d'eo'h ».

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25); Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc

## KELEIER EUS AN VRO

SANT-BRIEG

Eur p'efred nevez. — Hantev eo bet da b'efred Sant-Brieg, war-lerc'h an aotrou Cornu kaset d'ar Puy-de-Dome, en Aovergn, an aotrou Boulle a oa p'efred e depart-mant an Tarn. Heman, war a lavarere, a vije ganidik a Zent Servant, e Breiz-Uhel. Gras d'ezan d'ober labour vat evit hon Bro !

MONTROULEZ

Philip ar C'hor, komiz e ti an aotrou Verant noter a-raok ar brezel, ha breman m'arichal al lojeiz er 24vet a dragoned en deus gounezet o eil meneg-enor.

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.

St-Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume





**I RIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skeed evit ar bioioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

An aotrou abad Perrot... 20 real.  
An aotrou abad Steunou... 20 real.  
An aotrou Mellac... 20 real.

Trugarez, a greiz kalon, d'hon c'henvroiz ha mignoned ker, dreist-oll d'an aotrone sbadet Perrot ha Steunou a zo o-daou klanvdiourien war an talben! Doue d'o miro ha d'o zikouro bepred da rei skoazel d'hon re c'hloazet!

**GOURC'HEMENNOU**

Setu eur mad a gelou o tigouezout ganimp. Laket eo bet war doalen a enor an « Division », gant eur meneg ar meulusa, an aotrou Commandant Lochereau, eus Plistin, ha rôt d'ezan ar groaz-vrezel.

An aotrou Lochereau, genidik eus an Normandi, en deus disket ar brezoneg. Lenn a ra bep sizun « Kroaz ar Vretoned », hag e tigas d'ez i a-wechou pennadoù lizer karantezus er brezoneg ar reisa.

Holl lennerien ha mignone! « Kroaz ar Vretoned » en em unan gant he « Rener koz » da gas d'an aotrou Commandant Lochereau o gourc'hemennoù kaloneka!

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar Viz-reter**

An 18 eus ar miz tremenet, ar Zaizon a zo set war-raok adarre war ribl stêr « Scarpe ». Evito da stourm kounnaret, an Alamaned o deus ranket koll kêriaden « Arleux », hag o tosiou-difenn er c'hreisteiz da gêriaden Oppy, en hanternoz d'ar « Scarpe » war eun talben a 1.500 metr. Eus ar c'hreva e oa an difennou-ze.

Ar Fransizien, diouz o zo, o deus graet eul lamm war-raok, an 30 a ebrl, en hanternoz da venez « Cornillet », a zo bet kemeret eur pennad a zo gant rejimanchou ar Walarn, en o zouez, moarvat, kalz eus heñ c'henvroiz. Digouezet int tostik ouz krec'hiennou « Nogent » ha « Berri », warno ar c'hanolioù alaman a loske bombezennoù ouz Reims. Derc'hel a reont ivez da vat uhelen « Morouville », eul lec'h eus an emzava.

Brud a zo dijean Alamane d'c'hoant da gila adarre. En abeg da ze, emi-

**DOUE HA VA BRO**

**AN ALC'HOUEDER**

Ar goanv 'zo tremenet; sôn skiltr an alc'houeder,  
Betek war an talben, a us d'hor fenn en ér,  
A lak en hor c'halon, 'kreiz trubuilh ar brezel,  
Eur vann evurusted a zoug war he askel.

Evnig drant! ken karet, daoust da veza dister,  
Teneraat 'rafes zoken betek sant Per;  
E-mesk hon nijerien alies me da wel...  
Ker buhan e kredfen, feiz! e vijes eun ael!

Alc'houederig Doue! te 'zo ivez kadarn:  
Bav! touez soudarded mesk an tan, an bouarn!  
Ya, dellezout a rez bennoz ha trugarez.

Ma teuan, en emgann, da vervel evel darn,  
Pa zoug d'hon ene eur estlammaus ar varn,  
Va blein, en eur gana, war-zu ar gwir Balez!

Yann Mari NORMAND.

E son goant « al Lizer » gant hon mignon ha kenlabourer ker, Yann Mari Normand, a oa bet moulet ar zibun dremenet, e oa bet mesket eun tammig urz ar pozioù: ar poz

'Vit mignoned an avel Viz  
Lizer ebet e-pad ar miz.....

hag all, a dlee dont a-raok ar poz

Holl ne resevont ket dalc'hlmad  
Pez 'ra d'ezo kement a vad.....

Hon lonnerien ger o devo reizet o-unan ar mank-ze.

chans, e lakont stêrioù da zie'hlania en-dro da Lens, da herzel ouz ar Zaizon da vont re brim war o lerc'h. E lec'hioù all e klevet tarzadennoù minou-poultr evel p'o dije c'hoant da zistruja kêriadennoù a larre kent kimiadi.

An 3 eus ar miz-man, ar Zaizon o deus adkroget gant o asailh; gounit tachen a reont bepred.

**War an talbennoù all**

War dalben an Itali en em zifre an Aotrichianed war uhelen « Carso », ken e kredet a-walc'h emaint oc'h aoz eun taol bennak.

Er Balkaniou, brud a zo bet e vije ar roue Konstantin o vont da rei e zilez.

Evel ma oa bet lavaret ar zibun all, ar Zaizon, o tout eus an Ejipt, a zo digouezet war harzou bro-Judea. Setu emañ an Turked o skraba an ilizoù e Jeruzalem, dre ma welont ez aio heb dale an holl Douar-santel gant ar Zaizon.

Er Vezopotami, en hanternoz da Vagdad, ar jeneral saoz Maude en deus fazet adarre an Turked, an 30 eus ar miz tremenet, hag argaset

anezo dindan dec'h pelloc'h c'hoaz en hanternoz.

En Arabi ivez, an Arabed en em zavet a wash start war an Turked.

**War vor hag en aer**

An 22 a Ebrl, eul lestr-dre-lien teir gwera-amerikan, ar « Percy-Berdsall », p'edo o vont eur Bourdell en douvor, a zo bet goueledet gant eul lestr-splujer. An holl dud war e vorz a zo bet savetaet gant eul lestr-geder a ziredas a-herr hag a lukas ar splujer da dec'hel.

Ar 25 a ebrl al lestr-samm saoz « Ballarat », o tigas da Vro-Zaoz soudarded eus an Aostrali, a zo bet goueledet gant eur splujer; an holl zoudarded a zo bet savetaet.

Eun emgann a zo bet etre eul lestr saoz, ar « Gena », ha nijerezed alaman. Ar Gena » en deus diskaret unan eus ar re-man a dennou kanol; hogen goueledet eo bet gant eur vombezen stlapet outan gant eun nijerez all.

Biskoaz c'hoaz n'o doa an nijerien labourer ker start hag ar miz tremenet. Betek 1.440 a nijadennoù a zo bet graet ganto en eur ober pevar

devez hepken. An Alamaned o deus kollet nijerezed dre ganchou.

**En Amerik**

Ar « Guatemala », eur vro viban eus kreiz an Amerik, enni 1.365.000 a vroiz, he deus torret an darempredoù ouz an Alamagn. Houman he deus ranket en em zigarezi ha kinnig dic'haou d'ar republik « Arc'hantek », eur vro vras eus Amerik ar C'hreisteiz da viret da gaout kemend-all eus he feurz.

Er Stadou-Unanet, ar marichal Joffre hag an aotrou Viviani a zo bet graet d'ezo eun digemer eus ar c'haloneka.

Ar zervij-soudard a zo bet votet gant an diou Gambir, hag e vo digaset, ez eus esper, eun armead krev da skoazia ar re-Unanet a-benn fin an hanv.

Trôt-mat eo an holl sperejou Stadou-Unanet an Amerik, bro ar Frankiz, ouz « Emrenerez » Iwerzonn. An aotrone Roosevelt ha Taft, bet o-daou prezidant ar Republik, ar C'hardinal Gibbons, ha meur a zen brudet all a bouez da harpa ar meannad-ze, evel m'her gweler dre pennadoù an « New-York World » hag an « Times ».

Ra zeuio Emrenerez Iwerzonn da veza sevenet heb dale, evit mad Iwerzonn hag evit kenta mad Bro-Zaoz ivez a gaso, p'he devo ar peoc'h a-ziabarz, gwelloc'h a ze ar brezel a-ziavaez!

**Buhez Lloyd George**

**Fempvet pennad: Lloyd George ministr an Dispignou**

Pa varvas an aotrou Campbell-Bannermann, a oa ministr bras gouarnamant al Liberaled, an aotrou Asquith a voe dibabet gant ar roue da gemer e lec'h, hag e voe hanvet Lloyd George da « Vinistr an Dispignou ». Bez e oa tud, a oa bet eneb d'ezan kent, hag a zonzje ez oa deut Lloyd George da veza siouloc'h. Fazio a raent.

Evel hon eus gwelet a-raok, n'emañ ket traou ar gouarnamant henvel e Breiz-Veur hag er Frans. E Breiz-Veur ez eus tud uhel ha pinvidik-mor a zo eun darn vras eus ar galloud etre o daouarn. Da ren ar vro ez eus diou Gambir: Kambir ar Gannaged a zo hanvet gant ar bobl, ha Kambir an IJheldi a zo hanvet gant an noblans. Ar re-man, aes eo her c'hredi, a ra pep tra evit difenn

o gwirioù, o arc'hant hag o madou. Kalz eus ar madou-ze a zo bet laeret, evel hon eus gwelet kent, digant an iliz Katolik hag an dud paour, pa zeuas Bro-Zaoz da veza protestant.

Ouspenn-ze, beteg eun nebeut bloavezion a zo, ar Gambre uhel a helle nac'h hec'h aotreadur ouz lezennou votet gant ar Gambre all. Kement-se a zispilje kalz d'al Liberealed ha muioc'h c'hoaz d'an aotrou Lloyd George a oa a-du gant gwirioù ar bobl.

Red eo gouzout ivez e oa bet Kambr an Uhelidi atao a-eneb ar Gelted. Hi eo a zo kiriek ma n'he deus ket tizet lwerzon da gaout ar peoc'h dre an Emrenerezh ha m'he deus ranket gouzanv kement a boanion. Eur wech bennak, Kambr izel ar vro he doa mennet rei he gwirioù da lwerzon, hogen an uhelidi rok o doa, bep gwech, graet o gwasa evit dizarben ar mennadou-ze.

Bez' ez eus eur walen euzus e Bro-Zaoz : an evachou krenv. Tud a zo ha n'evont tra ebet, nemet dour ha tè ; hogen bez' ez eus re-all hag a ev ma 'z e eun drouez, betek koueza maro-mik ha dispign o holl zanvez. Lloyd George ha tud all a felle d'ezo mirout ouz perc'hennet al labouradegoù e lec'h e vez graet bier hag evachou krenv ober diouz o youl ha skigna boazamanchou fall dre ar vro. Eul lezen a voe douget evit se, hogen ne fellas ket d'an uhelidi rei o aotreadur. Kemend-all o doa graet agentaou ouz eur mennad-lezen all diwar-benn an Deskadurez.

Gwasa taol a rejont, avat, e voe nac'h digemeret mennad-lezen an dispignou (ar « budget »), e 1909. Kement-se a voe re. Ar gouarnamant a rōas diou wech e zilez d'ar roue ; nemet kaset e voe en-dro da benn an aoterioù gant ar vooterien, ha Kambr an Uhelidi a voe nebeutet kalz he galload. N'helljou ket miret mui ouz al lezennou da dremen goude eur pennad amzer a voe merket.

Kaset e voe da benn neuze eub an uhelidi eun nebeut lezennou. An Emrenerezh a voe prometet da lwerzon ha lavaret da Vro-Gambre e vije lezet iliz protestant Bro-Zaoz d'en em zibab er vro-ze, hep beza harpet gant ar gouarnamant hag arc'hant ar vro.

Eul lezen all a reas Lloyd George kalz evit he c'has da benn eo an hini a rōas d'an holl dud paour, aet war an oad, eur « bansion » vihan, evit ma c'helljent beva hep beza war aluzen.

Evel ma weler, Lloyd George a oa bepred eur C'helt, eur Breton, a gare e vro, hag a oa d'ezan eur galon dener ouz an dud izel.

P. MOCAER.

(Da heuilh).

## AR GWENANEREZ

Diwar-benn an hedou-gwezan (Pennad diveza)

Andarn vras eus al labourerezed o veza aet da heul an hed kenta da furni eun tiad nevez, ar gestennad, he deus rōet an hed, a vezo, evit gwir, senn-ploc'h e-pad eur maread ; enni ar vuhez a zebianto beza dineret. Met arabat en em nac'h ! Bez' ez eus enni eur vamm yaouank, ha dizale, bemdez zoken, gwenan yaouank a zeuio dre ganchou, dre vilierou, er-mez eus o c'havellou. Dindan eun nebeut suñveziou ar gestenn-ze a veza adarre ken poblet ha diagent, rak ar viou a zo bet dovet e-barz gant ar vamm, a zo aet da heul an hed, a zigoro bemdez e-pad eun devez war-nugent,

## ANJELUS AN TREC'H

Kinniget d'an aotrou J. Chaussy, kure Legonna, brigader-kravazater er c'hanoierezh pouner, war an talben.

Eur c'hloc'hig er pellder a zon an Anjelus, Ha pep taol a ziskenn goustadik ha pouezus War galon eur zoudard azet o tiskuiza, Hag hen kommans laret an « ave Maria ».

E benn war e zaouarn e zonz a oa 'n e vro : Kerent ha mignoned a oa e hunvreo ; Tint ar c'hloc'h hen laka da zevel en e zà Evit lavaret c'hoaz eun « ave Maria ».

Eur skeuden a sklêrder war e dal more'hedus A zo deut da bara 'n eur bedi Mamm Jezus : Tec'het eo deus outan mammen ar velkoni, Hag hen da laret c'hoaz : « Me ho salud, Mari ».

Ar bedennig kaer-ze, bet silet gant e vamm, Gwechall da heul he laez, en e galon dinam, P'edo war he barlen krouadurig dister, Bremañ a gennerezo kalon ar Brezeler.

Ped gwech en e vuhez 'n deus bet he c'houbanet, En ti, er parker, oc'h ãsti, oc'h aret, Da vintin, da greisteiz kerkouls ha diouz an noz, Pa zone 'n Anjelus kloc'hidi an iliz koz !

Met biskoaz e ene ne oa bet ken uhel O laret da Vari komzun kaer an Arc'hael : « Me ho salud, Mari, Itron ar Viktorioù ; Rōit, rōit d'ar Frans an Trec'h gant hec'h armou ! »

AN GWENANER.

Neuze, avat, e vezo eur maread hant. Rag ar vamm yaouank ne zeuio er maez eus he c'havel nemet c'houec'h pe zeiz devez goude an hed Ouspenn-ze, beza e vezo c'hoaz pemp pe c'houec'h devez all hag alies ouspenn a-barz ma stag da zovi, hag, evel na zeuio ar viou-ze da wenan mat nemet eun devez war-nugent goude, setu ma tisteraio adarre an niver eun tammig eus al labourerszed.

An hed ivez ne hello konta, e-pad eur miz bennak, nemet war ar gwenan a zo aet gantan eus ar gesten, da lavaret eo ken na zeuio ar viou dovet gant ar vamm, en devezioù kenta, da zigeri, hag ar gwenan a zeuio diouto da labourat.

Nag an eil hag eban eus an diou gestennad-man ne rōio mel ar bloavez kenta, nemet beza e vefe eur bloavez dreist. Gwelet am eus bet a-wechou dre ar bloaveziou mat-tre hiniennou o rei. Met an hini en deus c'hoant da gaout mel arabad d'ezan kaout hedou, eun dra hag a zo alies diaes da virout. Ked eo evit se kaout kestennou bras ha diwall d'o lakaat al lec'h ma par an heol.

AR GWENANER.

## Pedi hon Zent koz

(Pennad diveza)

Evit pezh a zell espisial ouz ar studioù hag ar skolioù, n'o doa hon tadou koz ezomm ebet da veza sevennet gant ar Romaned. Ar c'hontrol eo. E-keit ha ma oa, en amzer wechall, e penn ar Romaned, eur strollad politikerien, hanvet « Sened » (« Senatus » e latin) en em ouestlet penn-da-benn da griski Rom dre laerezh broioù a-zivard-dro. — rak eue e oa ar pep gwella eus ratoz hag ijin ar Romaned, gwir Voched an Amzer goz ! — ar Gelted-i, hon tadou a oa en o fenn strolladou tud gouziek, arwenet ha fur, a hanved « Drouezed », « Veleted » (gouziezen) ha « Barzed », n'o doa ken labour na menad nemet sevel, maga hag euna spered o c'hevnoez. A drugarez d'ezo, kent donedigezh hon Zalver zoken, e oa stag hon tadou koz ouz kreansou kristen a zo : divarvelez an ene, gwennvidigezh an Nenv, an Anaon. Ar ger-man « Anaon », evel ar ger « Gwennvidik » (evurus en Nenv), a zo deut d'imp war eun eus an drouezed.

Skolioù e leiz a oa gant hon tadou

rez o bro, ne zilezent ket, evit se, ar yez hag ar studioù keltiek. Ar c'hontrol eo ! Int-i-o deus adskrivet meur a levrl koz a vije bet kollet peneveto, evel marvailh « Skraperez saout Couley », a zo bet moulet aman eur c'hrennadur anezan : diwar dour eur manac'h eo an dour-skriù anezan a zo deut beteg enoemp. E-touez ar reiz seurd a vistri-kelennerien a oa e skolioù kristen lwerzon, d'an amzer-ze, ez oa unan hag a dlee anaout, evit o diski dek levrl gouestlet d'ar « fo-choir », da laret eo da « Gelennadurezh ar vro » ; unan all a dlee anaout daouzek levrl ; re-all o'hoaz a oa karget da gentelia ar studierien war an Istor. Reiz ha Lezennou ar vro a veze ivez studiet kenan.

Harpet evel-se, evel war he diouhar-natur, war spered ar vro ha war ar spered kristen, ar geleannadurezh en lwerzon, hag ivez er broioù keltiek all a oa golost-oll a vanatioù evel lwerzon, a daolas frouez dispar a zevenadurezh hag a zantelez.

Ac'hane eo e teuas kelennerien hag abostoled da denna eus ar gouezoni an Europ, ha dreist-cill Bro-C'hall, gwasket ha diboblet gant ar Romaned ha kouezet, da c'houde, dindan dreid ar C'hermaned. Sant Koulm hag e venech a ziskennas en Douar-bras da zevel marati Luxeuil e Bro-C'hall, hini Sant Gall er Suis hag hini Bobbio en Itali, ha re all c'hoaz en-dro d'ezo, a voe evit ar broioù-ze gwirvammennou a sklêrijen.

Hon zent koz o deus graet an hevelep labour er vro-man, pa zigasont d'an Arvorrig, diboblet gant ar Romaned ha peurwastet gant ar Varbare, poblans nevez, ya'h ha krenv, hon tadou-ni Breiz-Izeliz, hon Yez vrezoniek hag hon Sevenadurezh keltiek, ha n'eo ket sevenadurezh vrein ar Romaned an hini eo.

Ya, hon zent koz a zo, e gwirionez, tadou hon Broadelezh keltiek e Breiz, hag e c'hellomp o fidi gant fizians d'he miret ha d'he diwall ouz taolioù fallak, kerkouls hag ouz dismegans ha gevier hec'h enebourien.

## KELTIEZ EUS AR VRO

PLOUZELAMBR

Kandow. — Dirioù, ar 26 a viz Ebrel, e oa bet lidet, en iliz Plouzelamb, obidou an itron Carlier, mamm an aotrou 'n abad Carlier, chaloni ha sekretour-meur an Eskopti, galvet gant Doue d'an oad a 94 vloaz.

Re vihan e oa an iliz, en dez-se, evit digemer an engoez a dud deut da renta an enor diweza d'an itron Carlier. Ugent beleg a oa eno, hag, en o fenn, an aotrou Vikel-vras ar Pennee, deut a-berz an aotrou 'n Eskob.

Eur gristenez eus an dibab e oa an itron Carlier, hag ar re o deus bet an eurvad da anavezout anezi a zalc'h o souj eus he madelez hag he c'hun-velez.

Goulenn a reomp d'e i pedennou hon lennerien hag e kinnigomp d'an aotrou Carlier hon doujusa gourc'hennou a genganv.

L. AR R.

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE  
(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F.<sup>s</sup> 3,25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieux.

CHOMIT ER GER ! Darvoudoù c'h arvevet gant eur Vretonez ead da glak... fortun da Bari, 0 fr. 30.

Ar Reneg-Merour : F. VALLÉE.

St Brieux. — Imprimerie St-Guillaume





**I RIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit *Breiz ha Bro-C'hall*.  
2 skod evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigamer ane

**ENOR D'AR VRETONED !**

Int-i eo o deus tizet da genta  
linen Hindenbourg

An aotrou letanant-koronek Gallois, o ren unan eus hon rejimanchou Breiz-Izel, a zo bet lakaet nevez zo war daolen-enor an arme, « evit beza kemeret gant e rejimant, eme ar meneg, eul lec'h eus an emzava a oa priziet zhel tre gant renerien ar bezel ».

An aotrou koronek Gallois en deus, liouz e du, trugarekaet e zoudarded, evit o c'haletder ouz ar gwasa skuizherioù, o c'halonder hag o zaerijen -kreiz an tan, hag ivez ampartz an holl ofiserien o deus o renet d'an trech'h.

« C'houi eo, emezan e dibenn e brezege, « ho peus tizet ar re genta linen vrudet Hindenbourg ! » —

Enor d'hon zoudarded a Vreiz-Izel !  
Setu aman eun nebeut hanoioù g-touez ar re anezo a zo bet meda-  
lennet.

Medalen ar zoudarded : Adjudant Jacob, serjant an Dez, kaporal Gallen ; Grall, Saliou, Riou, Kervella, Kerbrat, Roudaut, Prigent, Crean, Combot, Tanguy, Peron, Frellec, Keruzore, Pellen, Saout, Torillec, Croissant, Pencreac'h, Rolland, hag all...

Medalen-vrezel : Adjudant Jacob, serjant Cuffe, Thomas, kaporal Sazalen, hag all.

D'ezo holl hon gwella gourc'hemmennoù !

Hon gwella menoz d'hon c'hevouroz  
eus ar 71vet rejimant

Ar 71vet rejimant en deus kemeret eur perz bras hag enorus en emgannou diweza. Hon c'haloneka menoz d'hon holl c'hevouroz a zo ennan, en o fenn d'an aotrou Commandant Carrissan en em gav e-touez ar re c'hloazet !

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar viz-reter.**

An emgann a bad bepred en e daera war dalben ar viz-reter.

Adalek ar yaou, 3 eus ar miz, ar Zaozon a zo stag da asailhi ouz al linen eus an Alamaned, a zo bet hanvet ganto linen Hindenbourg, eus hano o jeneral brudet. Gounezet o deus tachen, ar yaou hag en deiziou war-lerc'h, e Fresnoy, Oppy, Quéant, Cherisy, o kignat linen Hindenbourg e meur a lec'h, dreist-oll dirak Quéant, e Bullecourt er walarn da « Quéant » hag e « Fontaine », uheloc'h en hanternoz,

An Alamaned a garfe en em denna war eun eil linen a zo pelloc'h warzu Douai, etre Drocourt ha Quéant, nemet n'eo ket peurgrenvaet c'hoaz. Gant-se e renkont, da c'hortoz, stourm a vras en dizolo, o koll tud, spontus ! E lec'hioù-zo, war-bouez teurel e-kreiz an tan tud a vil vein hag ober ouспен gant aezennou mougus, e tizont adderc'hel an difennou o doa kollet, evel e Chérisy hag e Fresnoy. Nemet aes eo gouzout e vezint flastret d'an diwez gant kanolioù bras ha strolaou niverus ar Zaozon pennek.

Diouz o zu, ar Fransizien o deus kemeret, ar 4 eus ar miz, kêr « Craonne » ha fozioù-difenn an Alamaned e Brimont, en hanternoz da Reims, war eun hed a eul leo hed.

An deiziou war-lerc'h e voe dalc'het da vont war-raok ha kemeret uhelen Craonne ha, pelloc'h war-zu Soissons, eur vat a dachennad dirak eur vilin, hanvet milin « Laffaux ». An holl c'hounezaden-ze a zo bet dalc'het d'ezhi daoust d'an Alamaned da adasailhi kounnarek.

**War an talbennou all.**

Meneg a zo o dije an Italianed asailhet a-hed o linen, nemet n'eus ket nemeur a gelou c'hoaz.

War dalben ar Rusi emeur e gortoz bepred e klasko an Alamaned toulla war-zu Petrograd. Ar jeneral Korniloff en deus graet war ze eun embann d'ar Rusianed. Betek-hen, n'ez eus c'hoaz nemet eun nebeut krogadon er C'halsi hag er Roumani.

**War vor hag en aer.**

Ar c'henta a vae, al lestr amerik an Rothingham a zo bet goueledet gant eul lestr-splujer. 23 eus an dud war e vourz o deus gallet douara en Iweron ; 14 all a zo bet kavet war eur vag e-kreiz ar mor, hag int dare gant an naon.

An 2 eus ar miz, e mor Breiz, eul lestr eneb-tarzer (« contre-torpilleur ») eus ar Zaozon a zo aet a-benn ouz «ur min-poultr war neun, ha tarzet.

Al lestr treuzatlantik « Rochambeau », war e hent eus New-York da Vourdel, a zo bet taget gant eul lestr-splujer. En em zifenn a reas a dennoù kanol, hag, a-benn ñun eurver emgann, e reas d'e enebour tec'het.

Al listri-rounderien « Verdun » ha « Marne » o deus graet ker-kouls-all, oc'h en em zifenn kanonek

e-pad eun eur kent beza goueledet gant eur splujer. Lakaet int bet war daolen-enor an arme.

An nijerezed a zalc'h da labourat start oc'h en em ganna en aer (pe o stlepel bombezennoù).

Evel-se, ar zizun all, e-kreiz noz, eun nijerez alaman a stlapas bombezennoù ouz kêr « Calais ». An aotrou Fuzilier, er ru Stephenson, dihuuet gant an trouz, a lammas er-maez eus e wele da welet petra a oa. Ha setu kerkeat eur vombezen, treuzet ganti an doën, o koueza war ar gwele e oa o paouez kuitaat !

Al lun, seiz a vae, eun nijerez alaman, he deus tizet digouevout e-kreiz noz a-us da Londrez ha stlepel peder bombezen o deus lazet pe gloazet eun nebeut tud.

Ar Zaozon o deus ijinet eun nijerez nevez war c'houec'h askel, e lec'h diou pe beder an nijerezed all, ha graet ganti taolioù-kaer. Ar c'henta a vae c'houec'h eus o nijerezed o deus bet eun emgann ouz 15 pe 20 nijerez alaman ; pemp eus ar re-man a voe diskaret hag ar re all a renkas tec'het. Eun nijer eus ar Zaozon en deus diskaret, e-unan, betek 40 nijerez alaman.

Ar marichal Joffre hag an aotrou Viviani a zalc'h gant o beaj en Amerik. Karantezusa digemer a gavont dre-oll, hag a zo gwell, pro ne-saou start evit armeoù ha sikourioù a bep sord heb dale.

**Peden ar Merdead**

Hor c'ha naou-en a zo  
dis-ter, Ni zo pes-ke-té-rien  
baour. Hor gwiskant ne dalv  
di-ner. Met hor pe-den a dalv  
aour.

Hor c'hanaouen a zo dister, Ni zo pesketaerien baour ; Hor gwiskamant ne dalv diner, Met hor peden a dalv aour.

Mesait hor bagig vihan !  
A-eneb ar wall-amzer ;  
Mar he diwallit, peb-unan  
A lavaro pemp Pater.

Hor selaouit, Gwerchez Vari ;  
Ni a zo ho pugale ;  
Miret na zeufemp da veuzi :  
Ni lavaro pemp Ave.

Ar pesketaer gant e vagig  
A die dont a-barz tri de ;  
Met alies ar reuzdig  
Er mor doun a gav e ve.

Mar deu an avel da grozal,  
Bezit mamm d'hor bugale,  
N'o deus nemedoc'h d'o diwall  
Pa na vezimp ket gante.

**DISKAN :**

Ar gwir hent d'en em asuri  
Eveus hor zilvidigez  
Eo beza d'ar Werc'hez Vari  
Devot e-pad hor buhez.

X....

**KREIZER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

**E-kreiz ar c'hrogad**

Pe n'o devez ken amzer da skriva, pe e vez daleet o lizerou, e teu breman gwall-rouez ar c'helc'her eus hon mignoned a zo er c'hrogad. Ho pedi a reomp da skriva pa dizint hen ober, rak nec'het omp aman, dreist-oll gant ar re anezo en em gav en emgann kriz a zo dirollet en H internoz. Setu aman eun nebeut linennou digant Yann Caroff, a ro da anaout pegan tenn eman an traoù ganto. Doue d'o miro bepred !

..... Emoun e-kreiz an tan, hag hirio gwasoc'h eget biskoaz, e-kreiz-tre ar c'hrogad bras a zo bouc'haet. A drugarez Doue, ma speread a zo bepred krenv. Met start eo bet d'eomp ar miz tremenet, ha kalz a reuz graet en hon touez.....

D'eoec'h ha d'an holl vignoned a wir galon.

Y. C.

**Hon re c'hloazet**

Evitan da ziwaska poanioù bras, pa en deus kollet eur c'har ha bet torret eur vrec'h d'ezan, hon mignon ker J. Gourlet en deus kavet an tu da skriva dimp eul linen bennek da rei eus e gelou. Eman gwelloc'h, nemet poan vras en deus bepred en e vrec'h ha n'hall ket c'hoaz dibri boued, nemet eva laez. Eur frealzigedez e voe evitan digemer war e wele klanvdi diou vedalen, hini ar zoudarded ha hini ar brezel.  
D'ezan gwella gourc'hemmennoù ha



# AR VUZULMANEZ KOZ

Kinniget d'an aotrou Dyèvre.

War dreuz he dor, mantret, ar Vuzulmanez koz  
A ouel hag a hirvoud, kuzet ganti he fenn :  
— « An estren a ziruilh, ar c'hanolou a groz,  
Allah ! deus eta d'hon difenn !

An estren a ziruilh, poblou kri ha traitour,  
Drastet gante pep tra ha devet meur a lec'h ;  
Pep gwir a gemeront, haer int evel an dour,  
Allah ! pelec'h ez out ? ... Pelec'h ?

Tud ar vro harluet, a gas holl diraze  
Chatal ha bugale hag eun nebeut druilhous ;  
N'ouveont pelec'h mont, pelec'h ober dale,  
Allah ! sell ouz hon trubuilhou !

Netra ne chom neb lec'h, peilhet eo bet pep ti.  
War an oaledig yen ar c'hi paour a gunud ;  
Flastret hon peadra gant gwelen a gasti,  
Allah ! na zilez ket da dud !

Ar vered a zo d'imp, d'imp-ni, Muzulmaeed,  
A zo bet labezet ; na moske (1) hon Tadou  
A zo eur marchosi... War zao, Sarazined !  
Allah ! entan da strolladou ! —

Ha dirak ar brezel, an harlu hag an draillh,  
Galv ar Vuzulmanez a zo muioe'h dalc'hus ;  
Gwech ha c'hlemmou a zav, gwech he c'halon a fraillh...  
— « Allah ! ro d'imp eun norz trec'hus !

Ne lezi ket, moarvad pobladou milliget  
Da vantri ac hanomp, da zaotra da zouar ;  
Eur bobl evel d'imp-ni n'hall ket beza pleget,  
Allah ! ha te a zo bouzar ?

Gwechall e eas didrec'h ha sonj mad a viran  
Eus hon brezelioù bras gonezet en pep bro ;  
An trec'h a oa ganit ha ganimp, pa laran !  
Allah ! moarvad n'out ket maro ?

Sonj mad am eus ouspenn eus an dud a goueze  
Dindan hon taolioù-ni war ar plénennou noaz ;  
Pinvidik-mor e oamp ha galloudus neuze...  
Allah ! o digas se d'imp c'hoaz !

Mar na zigasez ket, kerkouls eo d'in mervel  
Evel bezan sklavour en hon bro peurflastret ;  
Skuiz ez oun o c'hervel, red e vo d'in tavel,  
Allah ! ne vi ket diskaret !

Rak, n'eus mui nemedoun o c'hervel ac'hanout !  
N'eus nemedoun aman e-kreiz an dismantrou !  
Den, en diavaez d'in, n'en deus fizians ennout,  
Allah ! te a wel ma daerou ! —

Ar Vuzulmanez koz a davas eur pennad  
Hag a c'hortozas pell hep na deus netra.  
— « Hen ne c'houl ket, emei, pleal gant ma mennad,  
Da betra gavel ? Da betra ?

« Skrivet e oa » hep mar e rankchen em c'hozni  
Gouzany seurt dismegans a-raok ma zremenvan ;  
Pa n'am eus evit stourm nemet ma c'hasoni,  
Maro, deus ha bez ma dibon ! —

A-benn ma peurdavas stered a lugarne,  
Ho pa zavas, kcrniek, al loar war an noz yen,  
Ar Vuzulmanez koz a rentas hec'h ine,  
He malloz war ar vuntrerien... —

AR YEODET.

Diwar e notennou, e Vertekop, Sav-heol, an 28 a Wengolo, 1916.

Ar pezh-barzoniez kaer-man a zo bet savet gant hon rener, p'edo e bro ar  
Zav heol, diouz giz kanaouennou ar vro-ze, dirak dismantrou eur gêriadenn  
eus ar Vuzulmaned. Ar re-man a zo, evel ouzoc'h, disk'bienn ar fals-proted  
Mahomet. « Allah » eo an lano a reont eus Doue en o yez.

(1) Hiz ar Vuzulmaned.

adarre an holl vibien d'hon Tad eus  
an Neuv d'en eta zellet evel breu-  
deur. »

Da dostaat an devez-se hir-c'horto-  
tozet, an Tad santel ar Pab a gemer  
d'eomp pedi startoc'h eget biskoaz  
evit ar peoc'h; dreist-oll e-pad an  
daou viz beniget-man ; miz mae,  
miz ar Werc'hez, ha miz mezeven,  
miz ar Galon Zakr.

Staget eo bet gantan ouz litanioù  
ar Werc'hez ar gouleonn-man ;

Rouanez ar Peoc'h, petit evidomp !

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St-Briauc. — Imprimerie St-Gallawen

# KELSIER EUS AR VRO

SANT-BRIEG

Eur pengleuz g'noued. — Gant ker  
ha dibaot eman breman ar glaou-douar  
e ranker ober gant pep seurt glaoued.  
Kavet ez eus er Rozera, e kichen Sant-  
Brieg, dindan an tréz-mor, eur c'hoad  
bras a oa bet beuzet gant ar mor ha  
douaret eno diadan an tréz kantvloaz-  
ioù a zo. Keliou ha skourrou ar gwez,  
doro ha bezo evit an darnvuia, a zo  
aet d'eur seurt taouare'h, a vo mad,  
a greder, d'ober tan. Gwaz a ze n'eo  
ket bet graet ar gavaden abretoc'h e-  
pad ar goañv a zo bet ken garo !

Fur pouthouarn burzudus nevez.  
— Da espern ar c'heunneud hag ar  
glaou e rer breman, e meur a diegezh,  
evit ar geginerezh gant eur pouthouarn  
burzudus, hanvet « pouthouarn nor-  
vejian », a heller gantan darc'hel  
ar zouben da virvi hep kaout tan  
dindani.

Gwelet hon eus, e ti hon mignon  
ker Ivonig Picard, eur pouthouarn  
all, tan dindanan ar wech-man,  
nemet graet e vez gant eun danvez  
marc'had-mat, brenn-esken. Evit ken  
ober kemeret eur c'hoz kelorn, ober  
eun toull en e gostez tost d'an tal  
anezan, lakat en diabarz eur gwiskad  
teo a bri meleu, e leunia a brenn-  
esken, nemet eur siminal a vo graet  
e-kreiz gant eun tamm koad a dal-  
vezo da voul, hag eun hent etre ar  
siminal hag an toull eus ar c'hostez,  
a vo stummet gant eur pezh koad all.  
N'eus nemet lakat an tañ ennan gant  
tamou paper, hag e talc'ho ar  
brenn-esken da zevi pell amzer o rei  
eun tomder bras.

LOK-ENVEL

Eun erer. — Eun erer alaouret  
a zo bet luzet nevez-ze o Koad-an-  
Noz. Roue an evned eo an erer, hag  
arouez Gwilherm daou. Eun diougan,  
emichans, e vo diskaret heman heb  
dale !

# ROLL-GERIOU

(Kendalc'h)

Debuket, se dit d'un convalescent  
dont la santé s'améliore (Haut-Léon).  
Lac'heriet, martyrisé, torturé (par  
la misère, la faim, etc.), (Haut-Léon).  
Diadavi, manquer de souffle, (Léon).  
Ack, las, exténué de fatigue (Bas-  
Léon) (ôg, e Treger).

Oaz, zèle, dévouement (Léon).  
Oujeigneur, synonyme de Bazvalan  
(canton de Plabennec en partie et tout  
le canton de Ploudalmezeau).

Puka, est employé au sens de  
koage, gondoler, en Haut-Léon.  
Briminik, qui examine bien une  
personne des pieds à la tête, curieux  
de tout voir (Haut-Léon).

Raaiel-gar, synonyme de rod-lec'h,  
ornière, en Bas-Léon.

Azedet, synonyme de poulouden-  
net, qui a des grumeaux, qui est mal  
faite, en parlant d'une pâte (Haut-  
Léon).

Alfet, gourmand, qui avale trop  
vite sa nourriture. Ar marc'h a zo  
alfet (Bas-Léon).

Tuzum, qui a courte haleine, qui  
ne peut courir (Bas-Léon).

Fic'hilhou, en Bas-Léon synonyme  
de paronou, partie des harnais qui  
s'emboite dans le collier et qui tient  
les bouts avant des traits.

Deport, attendre. Deport ac'hanon,  
attends-moi. Dans le canton de Lan-  
divisau.

Pareui, en Bas-Léon, cuire, synon-  
yme de poaza en Haut-Léon.

Malamañt, gaspiller, détruire en  
Bas-Léon.

War an amboaz-se, à Landivi-  
siau, Haut-Léon, dans cette intention-  
nelle : war an amboaz ho kwelet yac'h  
eo ez ann en hent, c'est dans l'inten-  
tion de vous voir bien portant que  
je me mets en route.

LOKIZ AR FLOCM.

kaloneka menoz holl diegez Kroaz ar  
Vretoned ! Hag ivez d'hon lenner ker,  
F. Gwarger a zo ivez er c'hlanvdi,  
hag hen gwall-dizet.

Hon rener, an aotrou Bocher, a oa  
chomet klanv e Salonik, a zo breman  
en eun hospital e Lyon. Doue da roio  
en dro d'ezan a yec'hed ar c'henta ar  
gwella !

Kelou eus an aotrou Moal, eus F. Guédès

Tennet eus eul lizer digant an aotrou  
Moal a zo leun a spi e vo fin  
d'ar reuz heb dale :

... Aman emeur krog da  
veskan ivez evel a lec'h all. Koz ha  
yaouank a rank bale. Nemet e vo  
hemant an taol diwezan ! Mar ba bo-  
lante Doue, marteze e vo fin d'ar  
c'hastiz heb dale pell...

F. Guédès a zo bepred klanvdiour  
en eur c'hlanvdi war an talben. Tru-  
garez d'ezan evit e lizer mat !

Aotrou ha kenvroad ker,  
A bep sizun « Kroaz ar Vretoned »  
a vez evidoun eur frealz, evel eur me-  
lezour skeudennet ennan va Breiz,  
evel eun daeban e lec'h en em gav a  
spered mignonnet vat ar Vro, bodet  
an darnvuia anezo en he zieg-iz santel.

A drugarez Doue en em gendal-  
c'han yac'h mat bepred. Hogen, endra  
ma pad ar brezel, va labour aman ha  
va zrubuilhou ne reont nemet kreski,  
hag ar pezh a zo a wasoc'h c'hoaz,  
abaoe em eus kollet va Breiz, em eus  
kollet ivez alc'houez an buvreoù !

Boched e-leiz hon eus breman, nous-  
ped ! Labour a vez ganto Cheaz  
a-wechou e vez lakat Fritz da ruilha  
ar garrigel, ar pezh a skanva warnomp  
al labourioù all, ha n'int ket eus ar  
c'houeka... na sul nag ehan morse !

Da vihana, mar bija gwelet o luc'h  
er pellder mor bras Breiz-Izel, va spe-  
red ne vije ket goulo, moredus, klan-  
vidik. Hogen, p'am eus kollet lus-  
keller va yaouankiz, dre an deziou  
klouar-man a nevez-amzer ma reue-  
vez pep tra er bed, pa welan c'hoaz  
a-us d'am zellou an oablou glas-plann  
en em gavan adsavet pell diouz ar  
safari, tostoc'h d'au Nenv...

Gwech ha gwech e teu eun « Tau-  
be » da darchadenni an oabl...

En deiz-all e vo lidet aman dou-  
ridigez eun adjudant-nijer. Ean dra  
goant ha souezus e oa gwelet en aer  
eun niver bras a nijerien o tout a  
bep eil tro, evel sparfellet, a-us da  
vez o mignon nijer, ha laret d'ezan  
eur c'hiamid diweza dre eun hanter-  
dro ken divorfil ha distrei adarre  
herrus ha skanv...

## Eul lizer digant hon Tad santel ar Pab diwar-benn ar Peoc'h

Abaoe m'eo dirollet ar brezel, hon  
Tad santel ar Pab eo deus graet e wir  
wella evit digas termen d'ar walen a  
gastiz. Emao o paouez skriva eul lizer  
adarre diwar-benn ar peoc'h. Setu  
aman penna memoziou al lizer-ze.

Da genta, an Tad santel ar Pab a  
zigas da zouj en deus asteanet an in-  
duljansou aotreet gant ar Pab en e  
raok d'an tiegeziou en em ouest-  
let d'ar Galon Zakr. Kement-se en  
deus graet, emezan, gant ar spi e  
vije, dre ar spered a gunvelez (dous-  
der) hag a izelegez (humilité) o kriski  
en tiegeziou kristen, eñnet ha kom-  
petet an hent d'ezan da zavel e vouez  
betek renerien ar poblou o vrezeli,  
da gant d'ezo a beoc'h

Eur galz d'ar poblou evit ar peoc'h  
a vo graet gantan er c'henta deiz-  
ha-bloaz eus dislériadur ar brezel.

Ne voe ket selaouet, siouaz !  
Koulskoude, hon Tad santel ar  
Pab ne goll ket fizians, dre ma wel  
o kriski dre-oll, a-unan gant poaniou  
ar brezel, ar c'hoant d'ar peoc'h. —  
« Da eo gauen kredi, emezan, n'halle  
ken dalea pell an devez ma stago





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodet evit ar distoù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An sotrou H. MIARD, 27, balï Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Greas ar Vretoned »  
d'he c'has da zondard ar Vro**

Quennaou, soudard..... 20 real.  
Guelta..... 20 real.  
Eur mignon..... 10 lur.

Trugarez a greiz kalon ! Bennoz-  
deuc, dreist-oll d'hon lenner ker,  
Quennaou, en deus dioueret e wensien,  
hag hen soudard, da zikour kas  
« Kroaz ar Vretoned » d'e gamar-  
aded !

**GOUEL SANT ERWAN**

An 19 eus ar miz e tigouezze gouel  
sant Erwan, patron Breiz Pere'hari-  
ned a leiz a zo deut d'e bedi la b  
laot diouz Breiz ar walen a gasti-  
ha da viret hon c'hennoiz a zo er  
brezel. Eun dudi e oa gwelet ar pro-  
sion hag e tride pep kalon vrezad  
o klevet kantikou ar Vro. — Salo ma  
klevtemp ivez, en iliz-veur, da zeiz  
gouel sant patron Breiz, prezegennoù  
e brezonig ar Vro ! —

Sant Erwan, patron ha difenner  
Breiz mirit ha skoziit gant ho kwa-  
rez ken galloudek ho pro Breiz hag  
ho kennoiz Breiziz, er mare man a  
dreuzomp hag a zo ken kriz ha ken  
nec'hus evit hon Amzer-da-zont !

**Taolen ar Brezel**

**War dalbon ar viz-reter.**

Ar sadorn, 12 eus ar miz, ar Zao-  
zon a zo set a vras ouz daou lec'h  
krenv war linen Hindenbourg, Bulle-  
court ha Rœux.

Ar c'henat, Bullecourt, er gevred  
da stêr « Sausée » ha tost da  
« Quéant » e-lec'h ez eus bet c'hoaz  
emgannoù start ar zizun all, a zo  
anezan eur c'broaz-lient a bouez eus  
teir liennad fozioù-difenn alaman.  
Kemeret eo bet ha dalc'het, daoust  
d'an enebour da stourm ha da ada-  
sailh eus an taera.

Rœux, an eil lec'h kemeret gant  
ar Zaozon, a sko war ribl stêr  
« Scarpe », uheloc'h en hanternoz ;  
ar vered ha, dreist-oll, eun ti-labou-  
radeg a zo eno, a oa bet gwall-grea-  
vaet gant an Alamaned ha lenniet  
gant a vindrañhered.

voe, ouspenn, fozioù an Alamaned  
en hanternoz da « Sancy », tost da  
vilin Lafiaux, a zo bet gounezet ar  
zizun ell.

An Alamaned o deus adasailhet,  
en anei avat !

**War an talbennou all.**

An Italianed o deus staget da  
asailh ouz linennou an Aotrichianed  
etre Tolmino, war stêr Izonzo, en  
hanternoz da « Gorizia », hag ar mor,  
Diês-tre eo mont prim war-raok er  
c'horn-bro-ze a zo gwall-veneziek.  
Koulskoude, o zaol a zo deut da vat  
gant an Italianed. 6.432 a Aotri-  
chianed o deus kemeret da brizon-  
erien gant armou ha pourvezioù  
e leiz.

En-dro da Zalonig, ar Zaozon, ar  
Zerbed hag ar Frausizien, ouz o harpa  
Gresianed a du gant Venizelos, o deus  
gounezet tachen er menezioù. Ous-  
penn m'eo an dachen nevez-c'hon-  
nezet-se talvoudus evit ar brezel, an  
aer euni a vo yac'husoc'h d'hon zou-  
darded eget war ar plennouoù geun-  
iek ha terziennus en-dro da Zalonig.

**War vor hag en aer.**

Ar yaou, 10 eus ar miz, etre Bro-  
Holland ha Bro-Zaoz, e tigouezas eur  
strollad listri-evesaerien eus ar Zao-  
zon a-wel d'eur skouadrennad a 11  
lestr euep-tarzer alaman. Ar re-man  
o deus tes'het rak katoliadeg ar Zao-  
zon ; unan eus o listri-distrujerien  
hag eul lestr-splujer a vije bet  
gwall-dizet.

An Amerikaned o deus paket en  
eur roued tost da Newport-News,  
war aoc'hoù o bro, eul lestr-splujer  
alaman, an U-36.

Ar 14 a vae, listri-brezel ar Zaozon  
o deus diskaret e mor an Hanternoz  
ar « zeppelin » L-21. Unan koz e oa,  
bihanoc'h eget ar re nevez ; stlejet e  
oa gant peder rod-vins, eun nerz a  
240 a gezeg war bep-hini anez.

Er mor Kreizdouarek al listri-splu-  
jerien o deus goueledet eul lestr-  
spagnol « Carmen », a oa karget a  
win. Ar vartoloded anezan o deus  
gallet diskenk d'an aod. Eul lestr  
gall, ar « Medjerda », 1.918 tonn-  
ell, eus ar gompagnonez Touache, oc'h  
ober an treiz eus Oran en Algeri da  
Varseille, a zo bet ivez kaset d'ar  
strad ha kollet gantan eun nebeut  
tud ; war-dro eiz-ugent a vije salo.

Ar 5 eus ar miz, eul lestr all, ar  
« Gard » eus ar gompagnonez Treuz-  
atlantik, a zo bet taget gant daou  
splujer. En em zifenn a reas a den-  
nou kanol e-pad d'ou eurvez hag e  
teuas a-benn da dizout ar por-mor,

hag hen gwall-aozet gant bouliji an  
Alamaned. Unan eus ar re-man a  
vije bet tizet ivez gantou ha goue-  
ledet, war a greder.

Ar Stadou-Unanet o deus digaset  
eun nebeut listri-brezel a labouro a  
dugant ar Zaozon. Renet koz « Kroaz  
ar Vretoned », hag en deus kerent en  
Amerik, en deus bet diganto, nevez  
zo. eul lizer kalonek o lavaret e oad  
a-zevri gant pourchasen ar brezel hag  
ez eus fizians e vo gallet digas sko-  
zell heb dale pell.

**AN DAOU VIHAN**

Da envor ma breur, bet falc'het  
gant ar Brezel.

Me a oa eur bloavez kosoc'h,  
Hag hen eur bloavezig brasoc'h ;  
Dre-ze, pa gerzemp gant an hent,  
E oamp a-damdost memes ment.

Tri bloaz d'ezan, pevar d'in-me,  
Dorn-ouz-dorn ni en em harpe ;  
— « Deomp, breur, da glask bleunioù  
c'houez-vad  
D'al liorz, d'ar park ha d'ar prad. » —

Hag e tec'hemp gant ar beure  
Hep na ouie hon tud doare ;  
Hag e tizroemp war hon c'hiz  
Dorn-ouz-dorn bepred, ha ni skuiz,...

Klevet ganimp evned Doue,  
Ha kutuilhet bleunioù neve,  
Graet eun hun war ar yeod tener,  
Ha deut dre naon hepken d'ar gêr.

N'hallemp ket en em zioueret,  
Breudeur diou wech, breudeur karet ;  
Hon tud ne c'h'alvent ket unan.  
Int a c'halve an « Daou vihan » !

An « Daou vihan », ni bugale ;  
An « Daou vihan » c'hoaz da c'houde ;  
An « Daou vihan » pell e chomemp  
En koun an amzer a garemp...

Dre ma kreskemp hon-daou en oad,  
Ni a chome breudeur ken mad  
Ma veze laret d'imp bepred  
An « Daou boër » ha nan « ar bô-  
[tred] ».

Tremenet eo an amzer-ze ;  
Ma-unan e choman hirie ;  
Ar breur a gomen n'eman ken,  
Kouezet eo bet war an dachen ;  
War an dachen, pell diouz ar Vro,  
Trec'het gant enebour zaro ;  
Me a garfe warnan pedi  
Ha war e vez skuilh bokidi ;

Bokidi henvel ouz ar re  
A gutuilhemp gweball, beure,  
O vont hon-daou bugaligoù,  
Dorn-ouz-dorn da redek parkou...

Met n'hallin birviken, hep mar,  
Daoulinan war an tamm douar  
E-lec'h ma kouezas, o merzer !  
E-lec'h ma kousk, ar brourig ker !

Ra ziwno, da vibanan,  
Bokidi an envor warnan !  
Envor hon bugaleaj aour :  
Pelec'h oc'h-c'houi, « daou vihan »  
[paour ?]

Unan a zo dirak Doue,  
Egile a roull e vube  
War zouar, war vor, er brezel,  
Kaset, digaset, heb skoazel...

Alies hen a huanad,  
A skuilh daerou gant kalonad  
O soujal en e vreur kollet...  
Pegouls c'hoaz e vezo gwelet ?

E wec'h a rin er bed all,  
Hag hen seder evel gwechall ;  
Eno, dorn-ouz-dorn, heb ehan,  
E kutuilhomp bleun, « Daou vihan » !

A. Y.

**KLEBER EUS HON MIGNONED**

**A ZO ER BREZEL**

Pell 'zo n'hon doa bet kelou eus  
hon c'henel ha keavreur ker « Loeiz  
Herrieu », ar « Barz-Laboureur » mat !  
Eman o paouez skriva d'imp ar gar-  
tennig-man, da rei da c'houzout eman  
saly ha yac'h atao. Doue da viro anezan  
evel-se bepred, gant an holl genvroiz  
all a zo gantan breman ! D'ezo holl  
gwella menoz « Kroaz ar Vretoned ».

An 12 a Vae, 1917.

Kensil ker,

Pell 'zo n'em eus ket kavet an tu  
da gas d'eoec'h ma doareou. Koulskoude  
yac'h-pesk oun ha diwabagn.

Breman ez eus muioc'h a Vretoned  
a Leon hag a Gerne ganin ; al Letan-  
nant, hen ivez, a zo eus Plounour-  
Tréz. « Kroaz ar Vretoned » a zo,  
sta, digemeret gant brasoc'h levezeg  
egat araok.

Gwelet em eus aman eur « c'harr-  
houarnet » bras, en deus sikouret mat  
lukat ar C'hermaned da gila, hag a zo  
« Bretagne » o hano. Livet e oa  
warnan diou « erminig ». Plijadur  
vras en deus graet 'in gwelet se.

Ma goue hemennou gwella d'ar  
vignoned a welfet, ha d'eoec'h a wir  
galon.

L. H.

Hon mignon ha lenner ker « Penn-  
beuz », a oa distroet eus Salouk, hag  
hen gwall-glanv gant an derzien, a  
skriv d'imp al lizer karantezus da  
heul Trugarez a greiz kalon d'ezan  
ha gwelloc'h yec'had !



Aotrou Reuer,

Trugarez d'ec'h da vezan bet ar vadelez da zigas d'in bep sun ho kelouen vat, Kroaz ar Vretoned!

Ma yec'hed a ya kalz gwelloc'h breman ha distroet oon da zerviji adarre hervez ma galloud.

Breman ec'h oon e-kichen... o ren eur c'harr dre dan, met ac'han da bell nan in ken d'al talben, rak lakaet ec'h oon evit an eil gwech e-touez ar « skoazellerien ».

Kenavo, aotrou ker, ha kredet em c'harante leal. Ma gwellan gouro'hemennoù da holl lennerien aroz ar Vretoned.

Penn-beus.

AR BLUEN

Na kaera tra eo ar bluen! E-kreiz an dud, an anken, Drezi e c'hell ar c'halonou En em harpa gant ar skridou.

Abaoe m'eo deut ar brezel, Va fluennig da dud ar ger A gas buhan hor c'helc'her.

Diwar greiz ar binaz pevarzek Fin n'eus ket bet d'omp da redek; En talbennou, en emgannoù Alies n'em gavomp hon-daou.

Goude m'am bez war ar Voched Diskarget kant ha kant bouled, Va fluennig da dud ar ger A gas buhan hor c'helc'her.

O va fluennig pluennig drant, Na me az kav kaer-tre ha koant! Ouz da glevet du ze, em bro, Va dous viban, eur a delio.

Pa vez d'ez gallez komzet, Va fluennig a vez feuket; Oc'h her skriva, — ze a zo gwir, — Lar d'in gant huanadou hir:

— « Ar brezoneg, va mignon kéz, Ho peus 'ta c'hoant da gas d'ar bez? Koulskoude, ez viban, moarvat, D'it hen deskas eur vammig vat. » —

O selaou he mouezig ken flour, Va daoulagad a dro e dour: — « Vit ar Brezoneg hag ar Feiz Krogit 'n ho plusu, paotred Breiz!

Enor, meuleudi d'hor Zent koz A zo breman er Baradoz! War roudou kaer hor Barzed vat Kerzit ha skuilhit tér ho kwad!

P'hon dezo va gwin ar Voched Hor c'helc'her dir eur-ourlet, Pa ne vo mui 'barz en hor bro Nemet Franzizien 'vit eun dro,

Pluennigou bihan a Vreiz, Savit buhan, savit e leiz; Kanit Breiz-Izel, hor gwir Vro! — D'ez hor c'halon heb distro!

YANN MARI NORMAND

War an talben, 10 a viz Mae 1917.

Emrenerez Iwerzon

Evel ma oa bet lavaret war « Grouz ar Vretoned », abaoe m'eman an Amerik er brezel a-du gant ar re

Unanet, Amerikaned brudet bras, evel Roosevelt hag ar C'hardinal Gilbons, a zo deut a-du gant Iwerzoniz da c'houlenn digant Bro-Zaoz o « emrenerez » d'ezo.

C'hoant en dije an aotrou Lloyd George da zeveni o menoad, nemet harz a gav bepred digant eun nebeut protestanted aheurtet eus an Uister. Ar re-ze a fell d'ezo chom er-maez eus an « Emrenerez », o ranna evel-se Iwerzon, evel m'hen doa c'hoant Hennessy d'ober evit hon bro Breiz.

A-hend-all, nevez 'zo, en eur votadeg da henvel eur C'hannad, Ulsteriz o deus hanvet eur « Sinfeiner », da laret eo eur p'otr-arok eus an « Emrenerez », o tiskouez dre eno na fell ket d'ezo en em zisranna diouz Iwerzoniz all.

Pedomp, er sizun-man, sant Erwan, breutaer santel ar c'haoziou rouestlet, ma filizio ar guden-ze evit gwella mad hon breudeur a Iwerzon.

Keraouez war al liou du

Kalz eus an dourennoù a reer ganto d'ober liviou flamm a veze graet ha gwerzet, a-raok ar brezel, gant an Alamaned, o doa kavet an tu da denna anezo eus ar glaou-douar. N eo ket souez e santer brema an dienez eus al liviou-ze. Gwasa 'zo, diouz a lavar kelouennoù, e vije keraouez ivez war dourennoù all 'zo hag a dalv d'ober liou du da skriva. Heb dale, emezo, e vo red tremen hep liou du pe kavout an tu d'hen ober gant dourennoù all a gaver er vro. Eur gentel vad eo evit diski ober hon gounid eus ar p'indigeziou-natur a zo kent stank en hon bro-ni ha lakat anezo da dalvout kentoc'h eget prena marc'hadourez estren!

Stad ar Rusaned

Abaoe m'o deus diskaret o implaer, eman gwall-luziet o stad gant ar Rusaned. Eur gouarnamant o deus e Petrograd dindan renadur ar prins Lvof hag an Douma, pe Gambre ar Gannadeg. Nemet eur « gouarnamant da c'hortoz » n'eo ken. Meneg a zo da zovel da badout, pe eur rouantelezh gant eur roue o ren a-du gant ar bobl evel e Bro-Zaoz, pe eur republik evel hini Stadou-Unanet an Amerik.

Pe rouantelezh pe republik e vo ar gouarnamant nevez, sur mat ne vo ket kreizennet (« centralisé ») evel m'eman gouarnamant ar Frans. Kemeret e vo skouer diouz Stadoù-Unanet an Amerik, oc'h ober anezo stadou krevredet e doare m'he deus pep-hini euz gwir d'eo en ren hec'h-bunan. Diwar-yaeman pep surentez a zo bet rotet d'ar Finland, d'ar bologn d'al Lithuani, ha d'an holl vroadelezioù all dindan ar Rusi e c'hellfent miret hiziziken o yez, o spered hag o gizioù.

Ar « gouarnamant da c'hortoz » hag an Douma a zo a-du da zerehel gant ar brezel. A-eneb d'ezo eman eur strollad dispac'herien ha soudarded, savet e Petrograd. Diés gortoz netra a vad eus ar re-man, gant re a vesk hag a zizuz a zo en o zouez. Gwell a ze, emaint o paouez diskléria e felle d'ezo an em glevet gant ar gouarnamant ha labourat a-du gantan hiziziken. Unvaniez a ra nerz!

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE (5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (Fr. 3.25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charner, Saint-Brieuc

D'am muia-karet

Perak e vezan a-wechou Trist o c'hedal eus da gelou, Ha perak e nij va spered Beteg ennout, muia-karet?

Sevel a ra ar bokedou Hag ar bleuenn er gwez avalou; O c'hoez vad war-zu Breiz-Izel A vo pouezet gant an avel, Ha me, evel eur prisonier, A chom atao pell diouz ar ger!

An oabl 'zo glas a-zioc'h va fenn, Al laboused a gan laouen... Ar goz koukou em eus klevet, Da genta, e tu ar Voched; Goude kuz-heol, diouz hon tu-ni, 'Kleven 'n eostig o fredoni; Pa vez ar stered o para Eo mont d'e zelaou o kana.

E vouez ken flour ha ken dousik A ze henvel ouz eur muzik; Seul-vui ma vez sioul ar maeziou, Kaeroc'h-kaera 'vez e zoniou.

Tridal 'ra va c'halon em c'hreiz Gant frealzidigez e leiz, Hag eur bedan war-eun d'an Né A zav evel eun taol-kleze.

Goude beza bet kenerzet, Ez an diwezat da gousket, Hag e kustuman huyreal Eus al laboused o vragal, Eur ar stered ken dudius, Eus an eostig meulodius, Eus ar bokedou liou-arc'hant Aag ivez eus... va dousig-koant!

Y.-M. PAUL, Kaporal-telefoner..

REKERER EUS AN VRO

MONTRouLEZ

Gourc'hemennou. — Ad-hi Gouziou, kanolier, breur d'hon c'hoarier ha mignon ker Alexandr Goaziou, ar moulser Breizad, a zo bet lakat war an daolen-enor evit an drede gwech gant eur meneg eus ar meulosa. Hon guella gourc'hemennou d'ezan ha d'e gerent!

GWENGAMP

Dieveded. — Soudarded, o c'hoari gant poult war gae an hent-houara, o deus lakat an tan en eur c'had poult. Unan anezo, ar Moullec, 19 vloaz, a Bleubian, a zo bet devet d'ezan e zora kleiz hag e zremm; ranket en deus mont d'an hospital.

PLouNEVEZ-MOEDEK

Eur zoudard brazet. — August ar Roue, hag a oa soudard er 73<sup>vet</sup> rejimant koz, a oa distroet d'ar ger, hag hen glouzet, da baubarea. E keit ha m'edo o trouc'ha yeot en deus bet eur fallaen, red eo kredi, hag e kouezas e benn en eur waz-dour. Kavet eo bet eno, hag hen bezut.

LANDERNE

Mede'le net. — Dilun e voe roet, e Landerne, dirak soudarded yaouank ar bloaveziad 18, diou vedalen, hini ar zoudarded hag ar vedalen-vrezel, da Jerom Segalen eus an eilvet kompagnonez er 73<sup>vet</sup> rejimant war droad. Segalen a zo genidik a Blouider, kanton Lesneven. Hon gourc'hemennou d'ezan ha d'e dud!

KEMPER

Eur C'hannad war daolen-enor an arme. — An aotrou Bail, kannad ar vro e Kambr Pariz, a zo bet lakat war daolen-enor ar rann-arme e-lec'h m'eman o serviji evel is-letanant. Kaerat skouer evit kei lies a gannadeg a vez gwell ganto glabousat er Gambre eget serviji ar vro en talben!

BREST

Ha kemeret e vo da borz-mor an Amerik? — Tud a ze a fell d'ezo ma vo kemeret da borz-mor an Amerik Sant-Nazer e lec'h Brest. Respondet ez eus d'ezo gant gwirionez penaos porz ebet war aoc'hou ar Frans n'en deus kement ar zounder mor nag a aezamant a bep seurd evit al listri bras. Ouspenn-ze, tostoc'h eo Brest d'an Amerik eget Sant-Nazer, nebeutoc'h a ze a rielk d'al listri da veza goueledet war o hent gant al listri-pulierien.

Trous ha hann. — Gant an dud a bep bro a zo breman e Brest e sav dispac'h a-wechou e ruiou ker, ha kann ha mestolou da heul. En noz etre dizul ha dilun diweza, e-kreiz eur veskadeg a oa savet evel-se war leuren al « Liberte », eur « C'habil » a zo bet skoet gant eun taol kontel ha marvet da heul, eur pennadig goude.

Taniou. — Eun tan-gwall a zo bet, ar zizun-man, e Kemper, en eun ti dalc'het gant an aotrou Tanguy fornier hag an aotrou Perret liver. Di-c'haouet e vo ar c'holl gant asuransou.

E Kervalze, tost da Gemperle, an tan en deus pulluc'het eun ti-anez, eur e'hardi ha daou varc'hosi. Eur bras a c'holl evit ar perc'hen hag ar verourien!

El Lege, porz-mor Sant-Brieg, eun tan-gwall en deus losket eun darn eus eun ti-teuzerez e-lec'h e teuzer peziou potin evit an arme.

Beli-en a Dreger marcet er brezel.

— Meur a veleg a vro-Dreger a zo kouezet nevez 'zo war an dachen-vrezel: an aotrou abad Etienne eus Plien, an aotrou abad Arzur eus Kemper-Gwezennek, an aotrou abad Maigat, kure e Plozeal a-raok ar brezel. Doue da vo gant o ene!

ROLL-GERIOU

(Kendalc'h)

Eun. — Skei eun, frapper juste; skei etou, frapper à côté, manquer le but. — Ez eo hag ez eo end-eun, cela est certain (Léon).

En Cornouailles, pour affirmer, on dit: Ken gwir eo hag ez eo va hano..

Ar bagou a zo deut en aod leun a c'houlo, n'o deus ket paket eun drén, la pêche a été nulle. Douarnenez. X....

GHOMIT ER GER! Darvoudou c'h arvezet gant eur Vretonez est da gla-k... fortun da Bariz, 0 fr. 30.

PEVARE LEVR MARVAILLOU ovit ar Vretoned, 3 fr. 20.

TRUBUILLOU AN AOTROU GARGAM, pe Torrou-penn an deiz kentoc'h bloaz, pezig-c'hoari e daou arvest, 0 fr. 30.

AN TEIR C'HAD HAG AR MEVEL LAER, daou bez-c'hoari farsus, berr i ser, eas da c'hoari e pep leoc'h. — Evit bugale, pe tud yaouank: 0 fr. 30.

RIMADELLOU BREZONEK, Trede Lev'r Marvailhou evit ar Vretoned, 2 f. 20.

BUHE AN DEN EVURUS CHARLEZ BLEIZ, dug a Vreiz, gant Dir-Na-Dor, 70 pajen, Pritz, gant ar frejou-kas: 8 gwen-

PIPI GONTO, lev'r marvailhou nevez, gant Dir-Na-Dor, 184 pajen: Pritz: 6 real; 4 gwennege oupen evit ar frejou-kas.

TOG JANI HA POTR E VRAGOU BEB, daou bez-c'hoari eus ar bravan gant Dir-Na-Dor, en eul levrig a 50 pajen. Pritz, gant ar frejou-kas: 6 gwennege.

Ar Rener-Merour: F. VALLÉE.

St Briauc. — Imprimerie St-Guillaume





**IRIZ AR C'HOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodev evit ar broioù estren

**RENERIEU**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

**aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

Julvan Godest..... 16 real.  
Trugarez a greiz kalon d'hon  
mignon ha kenlabourer ker !

**GOURC'HEMENNOU !**

Enor d'hon c'henvroad yaouank  
Aogust Coty.

Al lizer mad-man hon eus bet  
digant hon c'henlabourer ker « Pen-  
houarn ». « Rener koz » hag holl  
tiegezh Kroaz ar Vretoned en  
em unan gantan da gas o c'haloneka  
gourc'hemennou d'hon c'henvroad,  
Aogust Coty, ha d'e gerent er  
Ware'hed.

Ar C'hoz-Varc'had, 20 Mae, 1917.  
Mignon mat,

Evurus ec'h oa kenan o kas aman  
d'oc'h izeloc'h an drivet meneg bet  
d'hon c'henvroad ker Aogust Coty, ...  
diou « citation » aboue e diweza tro  
da ziskuiza er gêr !

Urz an « division » niveren 198,  
eus an 13 a Vae 1917.

Coty Aogust, medesin, akuit-  
dreist, leun a c'hred hag a nerz-  
kalon, n'ea deus ket termet da vont,  
ar 17 a ebrel diwezan hag an deiziou  
war-lerc'h, e lec'hioù hag a oa skôet  
gant eur ganoliadeg ar stanka, evit  
gallout gwelloc'h a ze ober raktal  
en-dro d'ar re c'hloazet.

Aogust Coty en deus graet e studi  
e skolach Gwengamp. Diskibl eo  
d'an aotrou abad Clerc, hag, pa n'oa  
c'hoaz nemet eur bugel, en doa graet  
eun nebeut skridou e brezoneg o  
doa talvezet d'ezan meuldi digant  
an aotrou a Estourbeillon.

Bevet Breiz da virviken !

**PENHOARN.**

Sur c'henvroad da Ivonig Plead war  
an daolen-enor.

Hon c'henlabourer ker, Ivonig  
Picard ha, gantan, holl renerien ha  
miguoned « Kroaz ar Vretoned » a  
gas o gwella gourc'hemennou d'eur  
paotr yaouank eus ar Fouillez,  
Emmanuel Loiseau, ha d'e gerent.  
Marichal al lojeiz er vet rejimant  
a ganolier, Emmanuel Loiseau en  
deus dellezet beza laket war an daolen  
a enor gant ar meneg-man eus ar  
melusa :

« Rener eur pezh-kanol, leun a  
nerz-kalon hag a barfedet. An 22 a  
ebrel diweza, dindan eur ganoliadeg

start gant « obuzioù » teo, en deus  
diredet da zikour kanolierien ar  
strollad-kanolioù nesa, a oa douaret  
en o foziou dizac'het warno gant  
eun « obuz ». Gloazet eo bet pedo  
o ren ar zikourioù. »

Enor da zoudarded ar Vro !

**Eul lenner medalennet**

Unan eus hon gwella lennerien,  
Erwan Mari Callac, a Dregrom, hag  
a zo e-kreiz an tan aboue m'eo  
dirollet ar brezel, — bezan eo bet  
zoken e Verdun, — a zo bet roet  
d'ezan ar groaz-vrezel ar 16 eus ar  
miz diwezan. Da zigemero, hen  
hag e dud e Tregrom, hon gwella  
gourc'hemennou !

**Taolen ar Brezel**

**War dalbennou Bro-  
C'hall hag an Itali**

Daoust d'an Alamaned da stourm  
ha da adasailhi start, ar Zaozon o  
deus astennet o zachenad o terc'hel  
eur pennad mat eus linen vrudet Hin-  
denbourg, etre « Bullecourt » ha  
« Fontaine-lez-Croisille », e keit ha  
ma kemere ar Fransizien foziou an Ala-  
maned en hanternoz da venez « Gor-  
nillet ». Kouezet eo en o daouarn, ar  
meur, 22 eus ar miz, an diweza  
pikernioù ha kribennoù krenvaet  
dale'het gant an Alamaned a-us da  
draouien an « Ailette » gant teir re-  
gennad foziou er reter da « Chevreux ».

War linen an « Izonzo », an Ita-  
lianed o deus dalc'het o gounid er  
meneziou war ribl kleiz ar steir-ze,  
daoust d'an Aotrichianed da stourm  
ha da zigas strolladou-skoazel. Emeur  
e gortoz eus krogadeg start el lec'h-se  
war-lerc'h ar ganoliadeg a zo o ren.

**Er Rusi**

Er Rusi ez a an traoù war wel-  
laat, dreist-oll evit pezh a zell re-  
nerez ar brezel. Ar jeneral Kerensky,  
mioistr ar brezel, en deus disklêriet  
d'an arme e oa red da genta-oll kaout  
unvaniez etre soudarded ha doujañs  
ha sentidigez ouz an ofiserien. E gom-  
za a zo aet doun er speredoù.

**En Amerik**

Amerikiz a ra o fourchas da zigas  
war dalbennou Bro-C'hall eur rann-  
arme dindan ar jeneral Pershing.

Stadoù biban an Amerik, an « Hon-  
duras » an « Nicaragua », hag all, o  
heuilh skouer ar Stadoù-Unanet, a  
zo heligeñta ganto d'en em zistaga  
diouz an Alamag.

E gortoz emeur e tevio ivez heb  
dale, war o lere'h, a du gant ar re-

**JANNED ARK, GWERC'HEZ**  
**Kantik an Trec'h**

Plijadur a ray d'lon holl lennerien, er mare-man bloaz ma vez fidet goul  
Janned Ark, kana ar c'hantik nevez-man d'ar plac'h santel, da c'houlen di-  
gant skora gant he skoazel c'halloudek hon zoudarded en talben-brezel. Sa-  
vet eo bet gant hon lenner ha mignon ker, an Tad Trebaol, a zo breman alu-  
zener en arme Bro-Zaoz. Moulet eo bet gantan war gartennou-post eus ar  
brava, hag ivez eur c'hantik ken kaer all d'ar Werc'hez, a oa bet embannet  
warlene war Groaz ar Vretoned. Da gaout eun dousen eus ar c'hartennou  
nevez, kas eun nebeut timchoù (6 kweneg, mar plich, dre zousen) d'an Tad  
G. M. Trebaol, interpreter, Town Major's office, Estaires, Nord.

WAR DON : C'houi, pere 'zo kristenieu.....

Kanomp, kanomp holl, Breiziz, ha gloar ha meuldi  
D'ar Werc'h zantel 'roas frankiz da « Rouantelez Mari » ;  
Bennoz c'houek d'ar plac'h karet he deus, dre c'hras Jezus,  
Ar Frans, hor bro, diframmet eus eur sklavaj mezus !

Janned Ark, eus barr an Nenv, oh ! klevit hor peden !  
Pedit Jezus, hon Aotrou, da welet hon anken.....  
Ar Frans 'zo bras he enkreiz, hirio evel gwechall :  
Bezit hon difennourez, oh ! Jann, deut d'hon diwall !

Oh ! Jann, ma teuit adarre d'ar stourmad d'hor bleina,  
Ni 'vezo trec'h heb dale d'enebour ar vro-ma ;  
Ar zoudarded 'n em ganmo 'vel tud leal ha fidel,  
Hag hon Doue a roio an Trec'h d'hon banniel.

Pedit, Janned Ark, pedit evit hor zoudarded,  
Hag 'vito holl goulennit Baradoz pe yec'hed :  
D'ar re varo Baradoz, e Bro al Levenez,  
Ha d'ar re-all ho pennoz, er gêr en hon touez !

Fidel da zantez Anna ha d'hor Zalver Jezus,  
Ha d'an Itron Varia, holl ni 'vo aketus,  
Janned Ark, da ren 'veldoc'h eur gwir vuhez kristen,  
Hag holl ni 'varvo kentoc'h eget pec'hi biken !

Kanomp, kanomp a zevri da Janned a Loren  
Enor, gloar ha meuldi hirio ha da viken !  
Bennoz dreist oll d'an Dreinded, tri Ferson e Doue !  
Ra vo he Hano meulet e pep lec'h ha bemde !

Moulet gant aotreadur Eskopti Kemper.

Unanet eur stad vras eus Amerik ar  
C'hreisteiz, ar Brezil. Goueledet e oa  
bet d'ezan gant an Alamaned eul  
lestr ar « Parana », ha setu eman al  
listri-splujerien o paouez tarza, dirak  
aohou Breiz, eul lestr breziliad all,  
an « Tijuca ».....

**War vor**

Ar 15 a ebrel, eul lestr-samm eus  
ar Zaozon, ar « Cameronia », a zo  
bet tarzet gant eul lestr-splujer.  
War-dro seiz-ugent a dud kollet.

An 30 a ebril, al lestr « Colbert »,  
5.750 tonnall, a zo bet goueledet  
gant eur splujer alaman er mor Kreiz-  
douarek. 51 den a zo bet kollet gant  
al lestr.

Eur c'hrogad a zo bet, ar 15 a vae,  
er mor Adriatik a zo etre an Itali ha  
gourenez ar « Balkanioù ». Listri an  
Aotrichianed a zo aet da rouederien  
(« dragueurs ») ar Zaozon, hag o deus

goueledet 14 anez. An daou lestr  
saoz, an « Darmouth » hag ar « Bris-  
tol », a ziredas neuze da zikour, ouz  
o skora listri gall hag italian ha nje-  
rezed eus an Itali. An Aotrichianed  
a dec'has prima d'en em repui en o  
forz-mor Cattaro, bet gwall-aozet  
d'ere daou lestr-reder. Diouz tu ar  
re-Unanet, an « Darmouth » a zo bet  
skôet gant eun darzerez, nemet gallet  
en deus tizout ar porz, hag eul lestr-  
tazer gall, ar « Boute-leu » a zo bet  
goueledet. Savetaet eo ar pep brasa  
eus an dud diwar ar bourz anezan.

Eur c'hrogad all a zo bet, en noz  
etre an an 19 hag an 20 a vae, en  
dounvor dirak « Dunkerque », etre  
pevar lestr skanv eus ar Frans hag  
eur strollad « destrujerien » alaman,  
o kinnig tostaat ouz an aod, e sell  
moarvat da leusker bombezennou. An  
enebour en deus ranket tec'het.

Trouz ha kroaz a zo bet er Spagn gant

unan eus listri ar vro-ze, ar « Patricio », a zo bet taget ha gwall-aozet gant an Alamaned. Evel ez eus bet lavaret uheloc'h, eul lestr all er-maez a vrezel, an « Tijuca », d'ar Brezil, a zo bet goueledet gant an Alamaned, an zo a vae, dirak aochou Breiz. Eman ar Brezil o vont d'en em zistaga da vat diouz an Alamagn. Diwar vremen setu en deus diskleri-riet e tigemerfe en e borzion, d'o repui ha d'o fourvezia evel kevredidi, listri-brezel ar Stadou-Unanet.

### Emrenerezh Iwerzon

E Breiz-Veur, « emrenerezh » Iwerzon a ziskouez mont war-raok da vat. An aotrou Lloyd George en deus gouennet ma vo fiziet en Iwerzoniz o-unan sevel reizadur o « emrenerezh ». Eur vodadeg a vo graet evit se etre kement strollad a zo en Iwerzon : « Sinn-Feiners », « Broade-lerien », « Ulsteriz » hag all. Goulen-nomp d'ezo holl, oigant ar Spered-Santel, en e ouel eus ar Pantekost, furnez hag unvaniez.

### Diweza Keleier

An italianed a zo bet trec'h d'an Aotricianed etre uhelen Carso hag ar mor ; torret o deus o difennou ha paket tost da 10.000 anezo da brizonerien.

Pevar « zepelin » a zo aet adarre da c'hounnial a-us da Vro-Zar. Nebeut a zismantr, eun den lazet.

Ar Zaozon o deus kollet c'hoaz er mor Kreizdouarek eul lestr-samm, an « Transylvania ».

## KREIER RUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

### Enor d'ar Vretoned !

Setu aman eun nebeut linennou tennet eus eul lizer a zo bet skrivet d'imp gant G. Martin, kanolier, ha da drugarekaat evit kanaouennou brezonek. Diskouez a reont pegen bras plijadur a ra d'hon zoudarded ker kaout traou eus ar Vro, hag, ouспен, pegement e vez graet stad breman eus hon Breiz-Izel hag eus hon brezoneg gant ar Barizianed zoken !

En talben, an 19 a Vae.

Aotrou ker,

...Ho drugarekaat a ran a galon, ken evidoun-me, ken evit va c'hamaraded.

Ne deus netra da ober d'in muoc'h a blijadur eget kaout eun dra bennak ha gantau c'houez-vat Breiz-Izel, hor Bro muia-karet.

Bez' ez eus ganen aman eur Parizian, deus an Opera, hag a zo stag da gana « Bro goz va Zadou », ha me a assur d'ec'h penaos e vez selaouet mat, rak eur vouez vras an deus !

Ne deo ket breman evel tri bloaz a zo. Ar Vretoned ne vez mui sellet a-dreuz outo evel en amzer goz, hag, ouспен, ne dint ket ken lent. Rag ar re o devez c'hoant d'ober goap anezo pa gomzont brezoneg, gant-er ger e vez serret d'ezo o beg.

Digemerit, aotrou ker, gwella goure'hennou eur gwir Vreizad.

G. M.

D'hon mignon ivez, ha d'hon holl genvroiz a zo gantan, hon goure'hennou kaloneka !

Eur Breton o tapout daou ofiser da bri zorianen gant eur... voutailh.

Tennet eo al linennou da heul eus eul lizer digaset eus an talben d'an aotrou Picard gant unan eus e skolaerien, an aotrou Rallon, a zo breman is-letanant er c'hanolierez. Hon gwella menoz d'ezan ha d'e ganolierien, heb ankoanac'hât « paotr e voutailh. »

Eus an talben, ar 4 a Vae, 1917.

Va Mestr ker,

.....Dirag A..., an ..vet strollad kaouilo 58, — Bretoned holl, — a

# BOKED NEVE

## kinniget da bep bugel evit e Bask kentan

War don : Diskennit eus an Nenvou...

### DISKAN :

O devez ma Fask kentan, devez a joa gwirion, Jezus a zeu em c'halon dre ar Gomunion !  
Ma Jezus, chomet enni en-pad ma holl vuhe ;  
Gret d'in bevan en ho kras, ha mont d'an Nenv goude.

Eun de meurbed evurus eo d'ar bugelig koant  
Pa vez gwalc'het e ene gant dour ar Vadiziant ;  
Ha gant tad ha mamm gristen bezan maget goude...  
En Baradoz an douar e vez ar bugel-ze !

Dour santel ar Vadiziant 'n deus an ene gwalc'het,  
Met Jezus 'barz ar galon n'eo ket c'hoaz diskennet ;  
Da zevez ar Pask kentan, pebez da levenez !  
Jezus a zeu er galon gant e holl zantelez.

Bugel, c'houi 'e'h eus 'n ho kalon an tensor ar gwellan,  
Gwelloc'h 'vit holl enoriou, holl vadou ar bed-man ;  
Jezus-krist, gwir Vab Doue, Roue, Mestr bras ar bed...  
Drezan eo krouet pep tra, dre e urz 'kerz bepred.

Tostaet, o bugel mad, d'am c'hlevet, me ho ped ;  
C'houi 'zo o vont da grigi da vevan war ar bed ;  
Deut da zelaou ma c'homzou ha da zenti oute,  
Ha c'houi a vo evurus en-pad hoc'h holl vuhe.

Herve hoc'h holl skianchou karet bepred Doue,  
Deut bemde d'E zerviji gant fe ha karante ;  
Enoret ho tad, ho mamm evel ma 'z ec dileet,  
Hag evel-se gant Doue c'houi a vo binniget.

E-barz en oad yaouankiz pa vefet erruet,  
Ouz ar gwall-gompagnunez, me ho ped, diwallet ;  
Ar skouer fall a goll, siouaz, kalz a oud war ar bed,  
Tud a oa kristenien vad, ha net a bed pec'hed.

Et bep sul d'an oferen, ivez d'ar gousperou,  
Hentet hoc'h iliz-parouz, lezet an ebatou ;  
Pep plijadur disteal, m'hen lavar en gwirion,  
A zistruj en eur momez gwir furnez ar galon.

Dre bedennou a galon gouennet ouz Doue  
Ar c'hras da vevan bepred er gwir stad a vuhe  
En devez c'hoant e vefec'h evit E zervijian,  
Evit, goude ho maro, monet d'an Nenv gantan.

Kovesaet alies ha resevet gant fe  
Jezus er Gomunion, dre eur gwir garante ;  
Hag en-pad hoc'h holl vuhe bezet devot bepred  
Da Zoue da d'hoc'h el mad, d'ar Werc'hez venniget.

Karet ivez al labour bepred hervez ho stad,  
Ha deut bepred da beañal, dalc'hmata galon vad ;  
Hen kinniget da Zoue, ha gret vad d'ho nesant,  
Doue 'roy d'ec'h eul gloar bras, en Nenv, 'vit kement-man.

Hag en-pad hoc'h holl vuhe, me ho ped, diwallet !  
Rak an den a zo dinerz ha douget d'ar pec'hed ;  
An diaoul a gemer poun da goll an eneu,  
Met, mar trec'het anezan, c'houi 'yelo d'an Nenvou.

Me 'bed an Drinded zantel da zont d'ho pinnigan,  
Hervez ar c'horf, an ene, 'hed ho puhe aman.  
Peuc'h, Trec'h d'ar Frans er brezel ! Pev avrusted er bed  
Da heuilh gwir lezen Doue, 'vit ma vemp holl salvet !

JULIAN GODIST.

skoe dibaouez gant foziou ar Voched bombezennou askellek, eus ar re a hanver « torpilhou », ijinoù spontus d'ober dismantr. Ar 17 eus ar miz tremenet, beure mat, e voe divizet mont da welet penaos e oa kont. Ehanet e voe da denna, ha pemp pe c'houec'h paotr, gant peb a zion vombezennou, pe « grenaden », en em zilas er-maez. Dre vont dre an toullou « obuzou » e tigouez-jont evel-se betek nesa loziou an Alamaned war veven ar gêriaden. Boch ebet ! Dizac'het e oa ar foziou ha stanket doriou ar riboulou e-lec'h en em repue an enebour. Nemet unan a oa c'hoaz digor hag e stad vat da welet. Trouz a glevet en diabarz evel gant tud o prienti mont er-maez. Hon bombezerien a stlappo o bombezennou ouz an Alamaned ha, sioulaet an traou, a gerzas war-raok ; unan hepken a chomas ouz toull an nor. A-benn eur pennad, heman ha gwelet dirazan daou Voch o tiloupa en amc'houlou. N'oa arm

ebet gantan, stlapet ma 'z oa e vombezennou. Petra 'reas, nemet kregi en eur voutailh a oa war al lec'h, ha hi en he fezel dre vuzud, hag hec'h eün a he buka ouz ar Voched, evel pa vije eur vindrailherez. Ken saouzanet e voe an daou Alaman ken en em rentjont o hopal a-bouez penn : « Kamerad ! Kamerad ! « Eur gaer a dapaden en doa graet paotr e voutailh : unan eus an daou brizoner a oa kommandant hag egile kabiten....

Hon pôtr, e keit-se, a oa aet betek er penn all da A... hep kavout harz ebet war o hent, ha setu penaos e voe kemeret ar gêriaden-ze....

### Eul levr nevez diwar-benn Breiz

Nerz-kalon hon zoudarded war an dachen-emgann en deus tennet a bep tu ar zellou ouz hon bro Breiz. Gant-se, n'eo ket souez e vez savet penna-

dou-skriz ha levrioù zoken diwar he fenn : komzet ez eus aman eus levr « Dixmude », savet da vartoloded Breiz gant an aotrou Goffic, hag eus ar pennaou meuluz a zo bet gouestlet gant an aotrou Bazin eus Akademi Bro-C'hall da envor ar barz « Bleimor ».

Setu emeur o skigno, dreist-oll er skolioù « Lycées », e-lec'h e vo lennet gant hon yaouankiz, eul levr nevez « La Bretagne » gant an aotrou Gallouedec, enseller-meur aa Deska-durez.

Dudius a-walc'h eo al levr-man, ennan taolennou e leiz eus hon douar hag eus hon istor, nemet evitan da veza skrivet gant eur Breizad, — a hano da vihana, — divreizek eo pez a hall beza !

Evel m'hel lavare gwechall an istorier brudet La Borderie, eur Bobl eo Breiz, eur Bobl diouti hec'h-unan, d'ez i he stum-spered, he yez, hec'h istor, brudeta istor a zo, o veza ma tennomp war-eün d'ar Gelted koz-se o doa trec'het ar bed oll adalek an Azi betek ar mor Bras, hag a responte d'ar roue Aleksandr o c'houlou outo rak petra o doa aon : « Rak zetra, emezo, nemet dont a rafe an nenv da goueza war hon pennou ! » Ha n'eo ket kalouder hon Tadou, ar Gelted koz, a adven en hon zoudarded ker breman ? !

Ya, a-unan gant ar mor a denere-digez a zo bet skuilhet en ene breizad gant hon Zent koz, gredusa kelennerien ha gwella sayeria poblou a voe diskoaz, hag ivez gant hon barzed, a rae, dre hon gwerzio hag hon toniou brezonek, n'eus ket par d'ezo er bed-oll, « kana war o zela mouez uhela an ene » : « Llais ensaid ar ei thanau », evel ma lavarent.

Hag, evel da wiskamant aour d'hon spered keltiek dispar, hon eus ar brezoneg, yez ar galon, yez an dud vat,

Eur yez, me 'lar, hag a dalv ker  
'Vit pedi, gouela pe gana,  
Ha nan evit liva gevier !

Al levr nevez a zanter o sevel dioutan c'houez fall an dismegans estrea ouz hon Broadelez, a zo « hon Tra », tra hon Tadou, deut d'imp a rumm da rumm a-ziwar o lerc'h, hag e tleomp mervel, mar bez red, d'e zifenn ha d'e virout. « Hon Tenzor » eo ouспен, a tleomp da lakaat a-wel ha da dalvou, ha n'eo ket kepen evidomp, evit mad ar Frans hag ar bed-oll an hini eo, evel m'hen disklerie ar muziker brudet Bourgault-Ducoudray o koms eus hon toniou Breiz. Torfed Judaz e vije, e gwirionez, e deurel d'ar bera, evel ma fell d'an aotrou Gallouedeg !

Evel ma vo lennet kalz al levr, d'e zizarbenn e rainp aman eun nebeut pennaou diwar-benn « Sevenadurez hon Tadou koz hag ar Romaned », « Breiz ha rouane Bro-C'hall », « Breiz an Dispac'h », « Hon Amzer-da-zont ».

DA HEULH.

## KELIER RUS AR VRO

### SANT-BRIEG

Komunion ar Veljed vihan. — Evit komanion ar vugale, de goul ar Pentekost, ez eus bet kemennet d'eur beleg eus ar Veljed dont da Zant-Brieg evit ober d'ar Veljed vihan prezegennou e flamaneg, yez o bro. Pegouls e welfomp ober e Sant-Brieg kemend-all a anor da vugale Vreiz ha d'ar brezoneg ?

Ar Renner-Merour : F. VALLEE.

St Brieg. — Imprimerie St-Guilhaun





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, zigemer ane

**Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An aotrou Kommandant  
Lochereau..... 10 lur.

Hon lennerien o deus dalc'het sonj eus ar gourc'hemennou kalonek hon eus rôet aman, eur penad a zo, ken en hon hano, ken en hano hon zoudarded a Vreiz hag holl vignoned hon Bro, d'an aotrou Kommandant Lochereau, a oa bet laket war an daolean-enor gant eur meneg ar brava.

Deut a zavaez-vro da chom e Breiz, an aotrou Lochereau en deus rôet d'imp-ni Breiziz ar gwella testeni « garantez o tiski hon yez vrezonek. War an talben-brezel e talc'h d'ober stal eus Breiz ha Breiziz, hag e kemer plijadur o lenn bep sizun « Kroaz ar Vretoned ».

Setu eman o paouez digas d'imp eur gaer a aluzen. Mil bennez-Doue, d'ezan en hano « Kroaz » hag hon zoudarded !

Ha kerkeulz trugarez a greiz kalon evit al liver karantezus da heul en deus teurvezet skriva d'imp er brezoneg ar reisa !

Eus an talben, ar meur, 22 a viz Mae.

Aotrou Rener,

Trugarez d'eoec'h a wir galon evit ho kourc'hemennou am eus lennet war « Kroaz ar Vretoned » ar zibun dremenet.

Ya, karout a ran ho yez vrezonek, ken brao, ken pinvidik, met ivez ken diés ! N'oun ket c'hoaz barrek-tre ganti. Koulskoude, evel ma laret, e leunan bep sizun, gant eur blijadur vras hag ézet a-walc'h, « Kroaz ar Vretoned ». Eun didu eo evidoun, evit gwir, e-kreiz labourioù ar brezel-man ken hir ha ken skrijus.

Me a gred d'in, mar plij gant Doue, e welfomp fin ar brezel ar bloaz-man, ha neuze e vefomp laouen-bias o klevet « Anjelus an Tre'h ! »

Da c'hortoz, aotrou Rener, plijet ganech digemeret, gant ma aluzen-nig, ma gwella menoz.

L.

Doue da zevano kreden hon lenner enorus, ha da ray d'imp gwelet er bloaz-man fin ar brezel ! Ya, m'bel lar d'eoec'h, e vo brallet kleier Breiz da zeni « Anjelus an Tre'h » d'han zoudarded o tistrei gant al lore d'ar gêr, gant o ofiserien ken mat ha ken karet ganto, en c'fenn an aotrou Kommandant Lochereau !

**Taolen ar Brezel**

**War dalbennoù ar Za-zon hag ar Fransizien**

Merket eo bet, dreist-oll, an eiz deiz diweza gant asailho aner an Alamaned, a diweza anezo e bro-Champagn, en-dro d'eur menez, hanvet « menez Melegan », an 29 a vae. Dic'hoñid ha kollus-bras eo bet d'ezo.

Ar Fransizien o deus goumezet eur nebeut tachen en-dro da verez « Cornillet », hag ar Za-zon war-zu « Fontaine-les-Croisilles ».

**Talben an Italianed hag ar Rusianed**

An Italianed o doa staget an 12 a viz mae da vont war-raok. Da genta, e voe renet o asailho ganto en hantemoz da gêr « Gorizia ». Abaoe an 23 eus ar miz, e klaskont toulla o hent «tre « Gorizia » hag ar mor. Skoazell o deus evit se digant listri-brezel ar Za-zon a zo en em laket da ganolia start linennou an Aotrichianed a-ziwar ar mor, dreist-oll eur menez krenvaet hanvet « Hermada ». Gwella difenn eo ar menez-se da « Triest », porz bras an Aotrichianed war ar mor Adriatik.

Ar Rusianed a henvel laska da vont war-raok. Diouz tu ar Roumani emeur e goitoz eus eun dra bennak eus o ferz, heb dale pell.

**War vor**

An Alamaned o deus goueledet c'hoaz eul lestr spagnol, ar « Begona » war e hent eus Bro-Spagn da Vro-Zaoz. Kelou a zo e vije kollet eul lestr spagnol all, ar « C. de Eizaguirre », 4-376 tonnell, nemet n'ouzer ket c'hoaz pe tarzet eo bet gant an Alamaned pe aet a-bean ouz kerreg.

War aochou ar Spagn ivez, ar splujerien o deus goueledet al lestr norvejian « Unia », 3.586 tonnell, karget a vein-metal evit Bro-Zaoz.

Er mor Baltik, o deus goueledet pe arloupet nao lestr suedad.

Ar 26 a vae, diouz ar beure, eul lestr-klanvdi a Vro-Zaoz, an « Dover-Castle », 8.271 tonnell, a zo bet skôdet outan eun darzerez gant eul lestr-splujer alaman, heb ali na kement. Evel ma oa manet war vordo, e sko-jont outan eun darzerez all, ha neuze ez eus d'ar strad. A drugarez Doue, e oa bet gallet savetei ar glanvourien ; c'houec'h den a zo bet kollet.

**En aer**

Ar gwener, eus ar miz, 16 nijerez alaman a zo aet da c'hournijal Bro-

Zaoz. Losket o deus bombezennoù ouz kêrioù eus an aod, dreist-oll Folkestone, ha lazet 76 den ha gloazet 174. War o distro teir anezo a zo bet diskaret gant nijerezed ar Za-zon.

Antronoz, 26 a vae, an Alamaned o deus kaset adarre nijerezed da leuskel bombezennoù gant kêr Londrez. Lazet o deus 33 den ha gloazet eun daoungent bennak.

War a weler, e lec'h ober gant « zeppelinou » divent ha ken hewel ma n'hallont gournijal Bro-Zaoz nemet en noz dindan boan da veza diskaret kerket, e ra breman an Alamaned gant nijerezed. Ar re-man, peuz-diswel pa nijont uhel, a hell kas o zroioù da benn eun deiz, hag ober, dre ze, gwasoc'h dismantr.

**Maro eur paotr a Vreiz-Izel**

Hon lenner ker, ar « C'hog » eus Plouegat-Moysan, en deus savet ar zon-man d'eur paotr a Vreiz-Izel, en doa gwelet moarvat o koueza war an dachen. Evel ma lavar hon lenner e lizer, « lorc'h a vez ennomp pa w-lomp ez eus c'hoaz tud a galon e Breiz ! »

War an ton kos : Ar roue Gjalon.

— « Selaou 'ta, Yann, n'oun ket bou- [zar !

Ar c'hloc'h a zon, me a lavar.  
An tan, ma faotr, an tan, siouaz !  
Deomp da weler d'an daoulamm [bras... »

— « N em drompla 'ret, ma zonton [Yann.

Me'gred eo digor an Emgann...  
Red 'vo d'in-me, d'am mignonned  
Kuitât parkou ma bro garet.

Ar « Boch » a zo eur fall a zen,  
Met d'ezan ni 'dorro e benn !  
Ya, gant sikour ar Vretoned  
Ar bieiz, sur, a vo diskaret. » —

**AR C'HIMIAD**

Red eo d'imp mont kuit en hon tro  
Vit difenn gant kalon hon bro.  
Kenavo gwreg, bugaligoù,  
Lanneier, koajou ha parkou.

Kenavo, iliz ma farrez,  
Kenavo, ma mammig koz kèz,  
Kenavo c'hoaz, ma zonton Yann !  
Ma 'zistroio eus an emgann.

Ma ouelit ket, ma zudou kèz !  
Me 'm eus kalon, hag ar Werc'hez  
Am sikouro da zont d'ar gêr...  
Kenavo c'hoaz, Jannedig kêr !

**AN EMGANN**

Tostât a ran ouz an tennou,  
Met ne ran forz eus boulejoù ;

Ma el-mad 'zo a us d'am fenn...  
Hardi ! bac'had d'an anduilhen !

Koueza 'ra darn ma mignonned,  
Met me am eus kalon bepred,  
Ha, ma kouezan ivez d'am zro,  
Sur ma c'henvroiz am venjo.

**GLOAZET**

Setu du-hont ma c'habiten  
N deus tapet eur vouled 'n e benn ;  
Mont 'ran d'e gerc'hat, paour kèz den,  
Vit e lakat en douar yen.

'N ofiser ganen war ma c'hein,  
E santis 'oan gloazet em fenn ;  
Kouezet dindan an den maro,  
N'hellan finval ivez d'am zro.

**AR MARO**

Santout a raen em boa terzien ;  
See hed am boi ha poan em fenn ;  
Red 'vo mervel war an dachen  
Heb gwelet ma bro ken biken.

Kenavo, ma bugale gèz ;  
Setu me 'vont gant an Elez  
Kenavo d'it, ma Jannedig !  
Kenavo, ma bro c'henidik !

Pardon, ma Doue, pardon c'hoaz !  
Bet ouh ho pugel a viskoaz !  
Ma fizians ennoe'h a zo krav ;  
Me 'gred eo digor d'in an Nenv.

Gant kalon em eus difennet  
Ma bro ger ha muia-karet...  
Kenavo c'hoaz, ma zud, ma bro !  
Eun deiz 'n em welfomp en Nenvo.

War an talben, d'ar 17 a viz  
Mae 1917.

Ar C'hog, eus Plouegat-Moysan.

**KLEIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

**Hon renerien.**

Kelou a deu d'imp war eun dro  
eus an aotrou Moal hag eus an  
aotrou Bocher.

An aotrou Moal, hag a zo bepred  
en Hantemoz, n'en deus ket bet  
amzer nemet da skriva d'imp eun  
nebeut linennou, da laret eman yac'h  
atao.

An aotrou Bocher en deus skrivet  
d'imp al lizerig da heul, da rei da  
anaot em an o vont da vartolod.  
Doue d'e viro bepred war vor evel  
m'en deus e viret war zour e broiou  
pell ar Zav-heol !

Toulon, an 21 a vae.

Mignon ker,  
Setu me digouezet en Toulon,  
martolod war ma c'hiz. Ar brezel-

man a vezo souezus evit kalz. Dec'h soudard koloniad, hirie martolod, petra e vin warc'hoaz ?

Ar gwassan, « Kroaz ar Vretoned » n'eo ket deut d'am gwelet eun teir tûn a zo.....

A galon.

A. B.

Hon mignon ker, Gwareger, a zigas d'imp eus e gelou a zo gwella a drugare Doue. Paredigez buhan d'ezan, evit ma c'hall distrei da Vreiz !

Tulle, an 28 a viz Mae.

Aotrou ha mignon ker.

Eur gir bennak evit rei d'ec'h eus ma c'helou, a zo gwella a drugare Doue. Met nan oa ket c'hoaz pare.

En gortoz ec'h on da c'hench klanvdi, hag an dra-ze a rae d'in dalei da skrivan.

Karet am bje tostaat d'am bro Breiz, met ne c'hallan ket. Ne guitaïn ket ar « Corréze ».

Reseo a ran « Kroaz ar Vretoned » bep sùn. Lenn a ran darvoudou ar vignoned a zo er brezel. Siouaz, bep sùn e kavan banoniou ma c'henvroiz, ha zoken tud eus ma c'herent nesan.

Digemeret, aotrou ker, gwella gourc'hemennou ho kenvroad leal.

F. G.

Doue ra vezo meulet ! Setu o paouez digouezout ganimp kelou mat eus hon mignon ker G. Mazeas, a gredemp e oa laz, keit ha ma oa chomet hep skriva. Setu aman pennadon diwar e lizer. Greomp holl diouz an ali a zo en dibenn anezan ; pedomp an eil er evit ar re all, ar re a zo chomet en adrenv evit ar re a zo en talben ; dreist-oll, pedomp an Aotrou Doue, eman an Amzer da-zont etre e zaouarn, ma lako termen d'ar walen !

25 a Vae, 1917.

Aotrou ha mignon ker,

Emoun o tistrei a « permission » hag e kavan ho lizer ouz va gedal. Trugarez, ha va digarezit da veza chomet keit-all hep kas eus va c'helou. Diweza hini am eus kaset d'ec'h a zo eus hanter-ebrel.....

Eun nebeut devezion goude, omp savet d'ar menez C... Kement-man a zo kelou koz, ha n'emoun ket ar c'henta d'hel lavaret d'ec'h : a dra zur Eno omp chomet pevarzek devez el linen..... En eur zistrei edomp henvel ouz tud dizebeliet, hag, evel na c'heller ket rei da gompren e pe stuz edomp, ne zalean ket hirroc'h war ar poent-se. Penaos hor bje gallet skriva en eun hevelep stad ?.....

Kerkent dizro d'an adrenv, oun bet kaset e « permission » hag e tigouezis er gêr da zikour ober va c'haon, dre ma oan kredet maro. A drugarez Doue, emoun c'hoaz em zav hag e yec'hed.

Va mignon Loeiz Richard, mignon leal da « Groaz ar Vretoned », a zo gloazet ; dec'h, en eur dremen dre « gar » Ch..., e welis anezan en tren o c'hench hospital. War wellaat ez a.

Miossec a zo breman kaporal er 6vet kompagnunez.

Heb dale e kasin d'ec'h eur ger c'hoaz.

..... An holl ne zeblantont ket intent e tleer pedi Doue. Eno eman, koulskoude, ar zilvidigez. Peur e taou-lino ar bobl a-gevret e-harz treid ar Mestr ?

Da c'headal eur ger all, digemerit holl venozioù ho kenvroad leal.

G. M.

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

Frailhetoc'h e galon, poan d'ezan, nec'hamant.....

E vugaligou baour, e vugale viban,  
O zid o vrezeli, pell du-hont, pell ac'han !  
Piou a bourveze d'e dilhad, ti ha bara,  
Mar gall kement-hini kas gantan forz petra ?  
Dougen klemn ? Ne c'houl ket. Ne dalve ket ouspenn :  
Piou ouz an estren-ze a deufe d'e zifenn ?  
Hag e renk, hep eur grig, lezel tud da laerez,  
Da laerez bugale..... Tad-koz, pebez enkrez !

III

Koad ha plouz ha mais, kistin, yer ha denved,  
Kement a zo tommor, danvo, gwiskamant, boued,  
A zo mad d'ar zoudard..... Hen a gerz dierc'henn,  
Ha, daoust n'en deus netra, da bep tra eo perc'henn.  
Perak en em jali ? Mervel hirie..... arc'hoaz !  
Beva bepred ! Koueza ! Sevel ha beva c'hoaz !  
Breman buhe d'ec'h ; tanvaomp anezi,  
Nag he faefemp, siouaz ! gant eun tamm laeronsi !  
Laeronsi evit gwir, laeronsi divalo.....  
Kement e c'houzanvomp ! Piou hon tamallo ?  
Pec'hed eo, a dra zur, kemer mad an nesan,  
Med hon dienez-ni eo an hini wasan ;  
Ha, mar digouez ganimp trei kein d'ar Garantez,  
Piou a c'hall hon meina, mar goar hon faourentez ?

IV

Hag e klevemp bepred ar c'hoziad oc'h ambren,  
Hep intent e gomzou laret ea yez estren,  
Pa gontas dirazomp : Unan, daou, tri, pevar !  
En eur zisken e zourn hanter-hent d'an douar,  
Moarvat evit diskouez e oa pevar bugel  
Chomet gant o zad-koz da vaga, da zevel.....  
Hag e teuas tostoc'h, d'hon zoni, evit goulenn  
Ha ni hon doa ive bugale bleo melen,  
Bugale bleo melen en-dro d'o mamm bodet,  
O c'hulenn diganti pelec'h e oamp chomet,  
Bugale bleo melen, o pedi an zed !  
Da zigas eur wech c'hoaz o zad d'e vugale.

Ha mouez ar c'hoziad paour, e vouez velkonius,  
A deuas da vezan neuze ken dudius  
Ma tihunas ennomp, a-dreuz douar, moriou,  
An deneran daolen, ar gwellan envorioù.....  
Hen ne oa ken neuze tamm an hevelep den ;  
Dirazomp e save, henvel ouz eur skeudenn.  
An heol aour o tiskan a skede war e benn  
Hag a lake kaeroc'h e gurunen vleio gwenn.  
E zellou a baras warnomp karantez :  
Ar brezel, kouz ha d'imp, a oa d'ezan noazus.....  
Ha ne oa ket gwelloc'h unani hon poaniou,  
Ha distan eur pennad terzien hon ankenioù ?  
Sonj tud koz, bugale, mammou, gwraeg o klem,  
A lakas alies dastum kleze re lemm ;  
Brezel !... ger spouronus, kasti hon fallente,  
Nag a wad, nag a wad ! siouaz ! a skuilhez-te !!  
Ni holl, hag a c'houzanv reuz eur walenn ken gwaz,  
En em harpomp eta ! Ne vefomp ket a waz.....

V

Nan, a lavarjomp holl, ne dleomp ket miret  
Eun dra ha n'eo ket d'imp, eun dra ganimp laeret ;  
An tad-koz a zifenn bara emzivad  
A dle kavout skoazell ennomp, gwir zoudarded !  
Sonjomp en e drubuilh ; mar pouezomp hon hini,  
Evit e dudigou petra ne rafemp-ni ?

Hag ouz treid ar c'hoziad, sebezet ken e oa,  
Kistin hon godellou a red d'en em vernia.....  
Petra da lavaret ?... Bennoz pe trugare ?  
E zaerou a ruilhe, dilavar e oa tre.....  
Amzer a dremenas hag e oa c'hoaz eno ;  
Ha, pa oamp o tec'hel, skanvoc'h hon c'halon,  
E troas war-zu d'imp e zellou a goziad,  
Sellou a drugare, a vennoz, a gimiad.....

AR YEODET.

(Diwar ma notennoù, Yenitise-Vardar,  
24 a Wengolo, 1916).

## KELIER EUS AR VRO

### PLEGIEN (Plien)

Gourc'hemennou. — Hon gwella gourc'hemennou d'an aotrou letanant a Zant-Per a zo bet laket, nevez 'zo, war daolen-enor ar rann-arme gant eur meneg eus an enorusa.

### TREZENI

Kengano. — Hon gwella gourc'hemennou a genganv d'hon mignon ha kenvreur ker, an aotrou Gwilherm Corfec, a zo bet laz et vreur. Erwan, a oa marichal al loj-iz a ganolier, en asailh diweza ouz menez « Cornillet ». Chomet e oa an diweza d'ober endro d'e ganoliou, a ranked c'hench lec'h d'ezo, pa voe skôet gant eun « obuz » o tarza. Ar groaz-vrezel a zo bet rôet d'ezan evit an nerz-kalon en

deus diskouezet en emgann-ze e-lec'h en deus kavet e varo.

Doue da vo gant e ene ha da roio frealz ha skoazell en o glac'har d'e intanvez ha d'e vugale !

### MONTRouLEZ

War an daolen-enor evit an eil gwech. — Mab an aotrou Froger, rener an ti-bank, hag a zo mede-in-skoazeller en talben-brezel, a zo bet laket adarre war an daolen-enor, evit, eme ar meneg, « e c'hred hag e nerz-kalon da denna ar re c'hoazet war an a t'renv, e kreiz ar ganolia deg ». Hon gwella gourc'hemennou d'ezan ha d'e dad.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieg. — Imprimerie St-Gatthwan

## KISTIN AR C'HOZIAD

D'an aotrou Coroller, « Gweltaz ».

I

Bro ar Zav-beol bepred, war-lerc'h dek leo gerzet,  
Tomm-bervet an amzer, ha ni yost ha faezet !  
Eur c'houk war ribl ar stêr da c'hortoz an distan,  
Ha pep-hini, goude, da glask koad evit koan.....

Kavet koad evit koan, e gased d'ar gegin,  
Kavet ganimp ouспен eun toullad gwez kistin :  
— Hola, pôtre, dao d'ei ! Hijomp ha dastumomp !  
Phon eus kavet kistin, mad an taol..... kistinomp !  
Ha pevar da bignal ; sed int war ar skourrou,  
Ha baz ! a-dreuz, a-hed, ken ma strak ar barrou.  
Kogou a gouez pounner, ha gant ar stonz, ar pouez,  
A zigor war an dro, hag a stlabe o frouez ;  
Stank evel ar grizilh, kistin war al leuren !  
Darn a zo gell, darn gwenn ha darn-all briz-melen.  
Kargomp hon godellou ; pôtre, kargomp ané !  
Kistin tomm goude koan, ha gwin, hep mar gante !

II

Ha leun hon godellou, soudarded dibreder,  
E kuitaemp trouzus, e kuitaemp seder,  
P'en em gavas warnomp ar perc'henn, eur c'hoziad,  
Seblant poaniet warnan ha gleb e zaoulagad.  
Ne lavaras netra : abaf pe aon d'ezan ?  
Ha ni tapet, mezek, a chome dirazan.....  
A-benn eur pennadig e komzas evelkent,  
Ha hini ac'hanomp ne glaske ober fent.  
E vouez a oa stonket, e zaerou a ruilhe ;  
D'am c'hreden e komze d'imp eus e vugale.....  
Petra a lavare ? E boan ? E zienez ?  
Hep mar..... Ha, piou a oar ? e aon rak ar gernez !  
Rak, mar domp er brezel, e dud a zo ive,  
Hag en e diegez n'eo ket krenv an danve ;  
Soudarded a dremen hag a drailh hag a laer :  
Ne chom gantan nemet bara sec'h ha dour sklér !  
N'eus ket c'hoaz pell amzer e peilhent e liorz  
Hag e lazent e gi o harzal en e borz.  
E dachennad « mats » a zo hogos debret  
Gant hon c'hezeg lambrek ha kouls laret flastret.  
An eost evit ar bloaz a vezo difoun-tre,  
Hag hen, espernet mad, n'eus ket anezan re.....  
Penôs ober neuze pa deuo amzer fall ?  
Goulenn an aluzen digant tud ken paour all ?  
Siouaz !... Hag ar c'hoziad a zalc'h gant e zamant,





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

**GOURC'HEMENNOU !**

Unan eus hon gwella lennerien, Gwilherm Greiz eus ar Foulherz, — kenvroad eo da Ivonig Picard, — a zo bet nevez 'zo laket evit an eil gwech war an daolen-enor ha savet, da heul, eus « aspirant » ma oa arak, da is-letanant. Setu aman ar meneg meulus en deus bet :

« Ofiser leun a nerz-kalon hag a barfedded-spered. Karget meur a wech da anout lineun an enebourien, en deus digaset disklériadurioù freaz ha talvoudus kenan. »

Hon gourc'hemennou gredusa d'hon lenner ker, gwir vogel da venez Are, a ra ar brasa eor d'hon Bro Breiz-Izel, « Bro an dud vad ha kalonek »!

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar Fransizien hag ar Zaozon.**

An Alamaned a zalc'h gant o argadennou o kas adkemeret an dachen o deus kollet.

En deizioù divveza a viz mae, lineonou en uhelen « Moronvillers » a voe evel-se adkemeret gant an Alamaned ha kollet adarre ganto kerent.

Ar gwener, kenta a vezeven, e c'hoarvezas kemend-all er vilin « Laffaux ».

Disul, 3 a vezeven, ec'h asailhas adarre an Alamaned ouz uhelen « Craonne » ; kollus-bras e voe d'ezo an asailhou-ze, graet ganto a renkadoù stank, hep m'o dije gallet dere'hel tachen ebet.

Dimec'her, 6 eus ar miz, argadennou adarre gant an Alamaned, dreist-oll en hanternoz da « Heut an Itronezed ».

Diouz tu ar Zaozon, e voe staget disul da asailhi lineonou an Alamaned er c'hreisteiz da stêr « Souchez ». N'o deus ket gallet gonit tachen en deiz-se, gant adasailhou an Alamaned, nemet dimeurz e rejont eur gammed war-raok war stêr Souchez, ha dimec'her, e renjont, en hanternoz da stêr « Scarpe », eus argaden a zevas da vat ganto.

Dirion o deus staget da argadi uheloc'h en hanternoz, etre Ypres ha Armentières, hag ez eont war-raok eus ar gwella.

**Ar brezel gant an Italianed**

War dalben an Itali ivez e striv an Aostriac'hed da asailhi dibaouez da ad'honit an dachen o doa kollet.

Harz a gavont da vat a-berz an Italianed.

Ar re-man o deus disklêriet en he frankiz Bro-Albani. Ar vro-ze eus ar Balkanioù a oa bet pell dindan domani an Turked, Er bloaz 1914 e oa bet graet anezi eur rouantelezh dindan eur prinz slaman, Gwilherm a Wied. Heman en deus kuitaet e zujidi da vont da zerviji, er brezel, dindan e genvroad Gwilherm Daou. Abaoe, e oa bet gwall-wasket an Albani gant ar brezel, evel an holl vroioù eus ar Balkanioù. Heman disklêriadur he frankiz gant an Italianed o tigeri an hent d'ezi war-zu eun amzer-da-zont gwelloc'h.

**Hag ar Rusianed ?**

War dalbennoù ar Zav-beel e krog ar Rusianed d'en em zifreta.

Er mezezioù Karpas, war harzou ar Roumani, o deus kemeret eun nebeut forziou-difenn. War ar mor Du, eur strollad eus o listri-brezel skany o deus plavet ouz listri-dre-hen war o hent da zigas d'an Turked pourveziou a bep seurd, ha distrinet betek 147 anezo. E bro-Berz, ar Rusianed o deus kemeret kêr « Tonansir », er walarn da « Kermansha ».

Evit d'an traou beza luziet bepred er Rusi gant an dispac'h a zo o ren, ez eus da c'hortoz gwel en amzer-da-zont, da vibana evit ar brezel, gant m'eo bet galvet Broussilot, ar jeneral brudet, da rener-meur an armeoù.

**En Amerik. War vor hag en aor.**

Amerikiz a gerz da vad ganto o fourchas brezel : laket o deus war an tint eur skouadrennad diniver a vagou enep-splujerien ha nijerezed a leiz ; 3600 a vo prest, war a lavar, a-benn fin ar bloaz.

Eun nel-eut eus o listri-brezel a zo nevez-digouezet war hon aochou. Hon gwella gourc'hemennou d'hon lenner ker, an aotrou Dyèvre, a zo bet hanvet da ofiser an darempredoù ouz ofiserien-vor ar Stadou-Unanet !

Eur skoazell all a bouez bras o tont eus an Amerik ! Setu eman ar Breiz o paouez terri ouz an Alamagn. Breizil o deus graet o rann eus an holl listri-mor alaman a oa en o forziou ha votet, evit mizou ar brezel, eus dispiñ e 270 milion. Gallout a raint, emezo, lakaat war droad a-benn tri miz, 660.000 a zoudarded.

Dimeurz, 5 eus ar miz, listri-brezel ar Zaozon o deus kanollet

**AR C'HAVEL**

E-touez an traou a bep seurd bet skrapet gant an Alamaned pa rankjont kila war o c'hiz eus eur c'horn-bro a zalc'hent en Hanternoz, en em gave... kavellou. Ya, kavellou bugale vihan a laerent avit o gwerza ! War ze hon mignon ker. Yann Mari Normand, en deus savet ar zon gaer-man.

Piou n'en deus gwelet eur c'havel, E ti ar paour hag er c'hastel, E koad a briz 'vel e gwiel ?

Eun dra goant, eun dra dudius, Eun dra zantel hag enorus, Nerz eur bobl 'vit eur bed peuc'hus !

Pa gousk ennan sioul eun aelig, Ar vamm buhan 'daol eur zelig ; En he c'hreiz 'lamm he c'halonig.

Ha diouz an noz, fin d'an dervez, Pa deu an tad d'an abardaz, Oc'h e welet 'n deus levenez.

Met, deut ar brezel war hon bro, Gant ar Boch vil, kriz ha garo Reuz ha freuz n'ez eus ken tro-dro.

Tan ha kurun ne dint netra, Na vosen, na kernez kriza ; Setu ar walen ar gwasa !

Saotret ganto an hoil draou sakr, Hon enebourien, tud fallakr, 'Zo marc'hadourien aour pe nakr.

Kement 'blij da Fritz, da Herman, A zo raktal preiz Alaman : Skrapet deus kavellou bihan !!

N'eo ket hepken d'ar zoudarded Era ket ennan an holl Voched... D'hon bugale, kerent, merc'hed !

War zao er Frans hag e pep lec'h ! D'imp gant Doue 'vezo an trec'h ! Stardomp 'ta hor c'hleze 'n hor brec'h !

Ha gwaskomp t'er p'eb Alaman... Dao da Wilherm, ar Prusian : Deomp-ni hor c'havellou bihan !

En talben,

YANN MARI NORMAND.

porz-mor ha labouradegoù « Ostende », war vor an Hanternoz. En eur c'hrogad a zo bet etre listri skany ar Zaozon ha c'houec'h lestr-distrujer alaman aet en douavor e mor an Hanternoz, unan eus ar re-man, an S-20, a zo bet goueledet gant ar Zaozon.

Dimeurz, nijerezed an Alamaned o deus klasket adarre dont da c'hour-nijal Bro-Zaos. Losket o deus bombezennou ouz ar vro en daou du da stêr « Tamiz » hag ouz kêr « Essex », hep ober re vras dismantr : daou zen lazet ha 29 gloazet. Diou nijerez eus ar skouadrennad-ze a zo bet diskraket gant ar Zaozon.

An 29 a Vae, al lestr-dre-dan « Yarra », 4.259 tonnell, eus kompagnunez « ar C'hannadereziou dre vor » (Messageries maritimes) a zo bet goueledet gant eul lestr splujer er mor kreizdouarek. 36 den a zo bet kollet gant al lestr.

**KLEBER RUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL**

En eul lizer emomp o paouez kaout digant hon « Rener » ker, an aotrou Bocher, e kavomp eur mad a venoz : pedi Doue a zo red da gaout termen d'ar walen !

..... Souezus eo, a lavar an aotrou Bocher. Ar brezel o vont da veza o ren aboue tri bloaz, ne zeblant c'hoaz nag echui na tostaat d'an termen Mui-ouz-mui e tleomp trei hon zellou war-zu an Nenv.

Doue hepken hon dizammo. En diavaez d'ezan netra d'ober pe gwalle nebeut. Perak ne troump ket hon zellou ankeniet war-zu ennan ? Brezeli a zo dreist, pedi a zo gwel !

Setu aman eun nebeut linennou tenet eus eul lizer bet skrivet gant an aotrou Moal d'hon mignon Gweltaz :

D'eun ti distruj omp deut da chom, e kornioù tenval gollet mat evit herzel ouz an tennou kanol, da vibana ouz ar re zister. Emomp e-kichen iliz eur vouc'h dismantr. Linsel kanvou an iliz-se a zo bet digaset aman evit talvezout da stankan toull hon dor bet pulluc'het gant eun « obuz ». Gant se, ne gollomp gwech ebet ar gwel eus ar maro.

En-dro d'imp, plênennou bras beuzet aman ha du-hont, dismantrou bourc'hioù, kêrioù, kêriadennou ; eur yeotlen hesk ha kornennou dizac'het a c'holo ar vro. Kristen ebet, evel just, dreist-oll en de, ha sioul pap tra, nemet pa groz ar c'hanoù bepred war geñ da skei, da lazat ha da zistrujan.

Alies a-walc'h em eus gwelet ze, ha, koulskoude, an daolen-ze a garg eus c'halon bepred a velkoni...







**IRIZ AR C'HOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIAH, 27, bali Charner, zigemer aze

**ISTOR BREIZ**  
Gant Tivarez

Eul levr skrivet e brezoneg reiz, sklér hag aes, red e lenn da gement Breizad a fell d'ezan anaout e Dadou-koz hag e Vro.

E c'houlenn digant an aotrou Berthou, Kérkanaf, Pleubian Priz 10 gwenneg, ha pevar gwenneg ouspenn evit an timbchoù.

**Kevrin ar Varzed**

E ti an aotrou Berthou ivez e kavod al levrig « Kevrin ar Varzed », displeget ennan, freaz hag aes, penaos en em gemeret evit sevel skrijoù war rimou, gwerzioù, sonioù a bep sord.

Pemp kweneg al levrig ; eur gwenneg ouspenn evit ar frejoukas.

**Taolen ar Brezel**

Eur c'haer a drec'h gounezet gant ar Zaonon.

Ar zizun ziveza e lavaremp e dibenn an « Taolen-vrezel » e oa ar Zaonon o paouez kregi gant eun asailhadenn etre Ypres ha Armen-tières.

Diriou all, beure-mat, eo e voe graet an argaden-ze gant ar Zaonon war eun talben a 15 kilometr. Priadet e oa bet en araok dre eur ganoliadeg eus ar starta, hag ivez dre dennou-poultr, — ouспен eur million a lurioù poultr krenv! — a voe lakaet da darza war eun dro dindan difennou an Alamaned. Ker krenv e voe an darzaden ken e voe klevet betek e Bro-Zaoz gant an aotrou Lloyd George.

Eur wech toulet o hent d'ezo evel-se, e sailhas ar zoudarded saoz war-raok. Kemeret a rejont kêriadennoù « Messines » ha « Wytschaete » ha derec'hel ar gribennad krec'hieanou a bouez bras en em astenn etrezo. Goudeze, ez ejont d'an eil linen alaman, a voe ivez kemeret ganto war eun hed a bemp kilometr gant kêriaden « Ootaverne ».

En deiz-se hag en deizioù war-lerc'h e voe kemeret 7.342 a brizonerien, 47 kanol bras ha 60 kanol-bombezanner.

Er renk kenta eus ar zoudarded a asailhas ouz uhelen « Messines » en em gave Iwerzoniz. Katoliked ha protestanted an Ulster, eme ar c'helouennou, n'oa ken a zisparti etrezo; skeaz-ouz-skoaz, hag ivez kalon-

ouz-kalon eo e trec'hjont war an enebour. An unvaniez-se o deus diskouezet en emgann salo m'henn diskouezint ivez er peuc'h, da reiza ha da gompiza stad o bro ger Iwerzon!

An Alamaned o deus klasket adc'houit an dachen gollet dre adasailhi a vras gant stirolladoù soudarded fresk ha diskuiz-mat. Aner e voe d'ezo ! Pell diouz argila, ar Zaonon a zo aet c'hoaz eur pennadig war-raok dirak « Messines » ha war stêr Souchez.

**War an talbennou all.**

War an talbennou all nebeut a gemm. A-hed linen ar Fransizien kanoliadeg, dreist-oll war « Hent an Itronnez », hag eun nebeut krogadou aman hag a-hont. An Italiaed o deus dizarbennet en o menezioù argadennoù an Aotrichianed. Dalc'h'het o deus, e bro-Albani, kêr Janina, da harpa an armead o doa kaset er Balkanioù. War linen ar Rusi, eus an « Dwina » d'ar C'hahli, e kresk ar c'hrogadou ; an Alamaned o deus kaset nijerezed a-us da vae Riga, evel p'o dije c'hoant da brienti eun dra beanak diouz an tu-ze.

E bro-C'hres eun darvoud a bouez bras : ar roue Konstantin en deus rêet e zilez ha lezet ar gurunen gant e eil vab Aleksandr a vo a-du, ez eus fizians, gant ar re-Unanet.

**Labour vat an Amerik**

Goude-tremen dre Vro-Zaoz, setu emañ ar jeneral Pershing, rener-meur holl nerziou-brezel an Amerik, o paouez digouezout er Frans. Digermeret eo bet, e Boulogn, gant lidou hag ensriou bras. War eun dro e tigoueze ivez e Brest ofiserien all.

Da gompiza ar sperejoù er Rusi an aotrou Wilson en deus kaset d'ar Rusianed eul lizer, disklêriet ennañ gwirionezioù eus an uhela diwar-benn mennad ar Stadou-Unanet, a dlefe beza ivez diwar vremen, evit mad ar bed-oll, mennad an holl stadou : « Hon mennad eo, emezan, ma vo torret da vad galloud diharz souane hag impalaered, a zell ouz ar pobloù evel ouz e zra, d'ober evel a garont ganto, e lec'h e tle ar pobloù, bihan ha bras, en em reiza o-unan ha dibab o-unan o hent hag o amzer-da-zont. Eun dlead eo derec'hel gant ar brezelman ken na vo bet distroadet da vad an impalaered digonstians ha gwas-kerz-pobloù. »

Ar Frans ha Bro-Zaos o deus harpet komzoù pouezus ar prezidant

Wilson. Ha, da lakaat hec'h oberou gwelloc'h a ze a-unvan gant he lavarioù, mcarvat, eunan Bro-Zaoz o staga a-zevri-kaer gant al labour da rei da Iwerzon hec'h emrenerez.

Er Frans e vije ivez kalz d'ober en hent-se, da heul an « digreizennerien » hag ar « rannvroelieren ». Meneg a zo bet aman eus eur c'hendalc'h a zo bet e Pariz evit se hag eus ar mennadoù selledus, a zo bet lakaet a-wel evit an amzer-da-zont.

**War vor hag en aer**

Digwener all, 8 eus ar miz, da ziv eur diouz ar beure, al lestr treuzatlantik « Sequana » a zo bet skodet gant eun darzerez ha goueledet er mor Bras. Pemp kant hauter-kant a dud a oa er bœur anezan, en o zouez soudarded eus ar Senegal ha 100 martolod. Dek ha nao-ugent a zo bet kollet.

Dimerc'her, 13 eus ar miz, nijerezed alaman a zo aet adarre a-us da Londrez. Daouzek pe bemzek a oa anezo, ha ne voe gallet diskar nemet unan war o zremen, dre ma nijent uhel-tre. Lazet o deus gant o bombezennoù 97 den ha gloazet 439. Eun darn eus ar re dizet a zo bugale, o veza ma skôas unan eus ar boulijioù eus eur skol. Ar reus Georges a zo aet kerket da welet ar gerent, d'o frealzi en o glac'har.



**Splandder noz !**

An noz 'zo deut war ar bléne. En neave linter-mil stereden, Ha skedus a-us d'an douar Ec'h en em ziskouez ar c'hann-loar.

Na pebez gwel d'an daoulagad Gwir zouezon eur Mestr ken mat... Ha, dreist-oll, bali sant Jakez A led he mantel a berlez.

An heol kuzet, sioul an amzer, An askel-groc'h en hag glever ; Raok ar brezel en henchoù dou E kerze Soaz hag he mignon.

Ar seurt plijadur n'eman ken... Dre-oll melkoni hag anken ; Fin d'ar peuc'h, d'an euvrusted ! Ne zeller mui ouz ar stered.

Met an evnig war ar brankou, Heb fredoni 'chom a-wechoù ; War an talben ar zoudarded, Feiz ! ne garont ket ar stered.

E-pad in noz, war an henchoù Tremen kirri ha kanolioù ; Pa vez an oabl sklêrijennet, Kentoc'h a ze 'var diskennet.

Ar c'hirri-nij, gwir sparfilli, Fin n'o deus da droidelli, O klask eur c'hamp pe dinellou, Da skei outo bombezennoù.

Ar c'hêriou bras, Pariz erfin, O deus gwelet ar « zeppelin » ; Amiens, Compiègne, Troyes ha Chalons 'Zo bet saotret gant an « Teuton. »

Nozvezioù ker sioul a wechall, Diekennit 'darre war Vro-C'hall. Fin d'ar brezel, neuze bepred Ra vo an nenv sklêrijennet !

Hor c'halonou, ken trist breman, A vo, me 'gred, laouen kenan, Adkavet gwreg, bugel ha kar... Ra vo kalz splannoc'h ar c'hann-loar !

Yann-Mari NORMAND.

War an talben, 6 a Vezeven, 1917.

**KELBIER EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL**

Kelou eus an aotrone Bocher ha Moal.

An aotrou Bocher a skriv d'imp emañ e « permission » er gêr, o lakat war ar stern eul levr nevez. Dudius keuan e vo da lenn e « Notennou-brezel », kemeret gantan e bro ar Zav-heol, hag hon eus bet aman eun tanva anezo gant ar « Vuzulmanez koz » ha « Kistin ar C'hoziad. » Donedigez-vat d'al levr nevez, ha Doue da viro bepred an oberour anezan, hon « Renner » ha « Barz karet » ar Yeodet !

Al linennou da heul a zo tennet eus eul lizer digant an aotrou Moal, a zo yac'h atao, a drugare Doue, hag hen bepred e linen an tan.

... An amzer a zo gwall-domm, hag aman n'eus ket nemeur a zisheol. A-hend-all, n'eus ket da c'houzanv kalz a dra ; muioc'h e-klemmer war ar c'hoen eget war ar Voched. Bemde e tornont ar gêr a zo a-drek d'imp, e-lec'h o deus dizoloet, moarvat, kanolioù. Ar c'halolioù eo gwas amezeien a zo : e lec'h ma vent ne bad den na netra ! An dez-all e c'hoarvezas eur wall-dro : triouec'h lazet gant eun tól kouezet a-blom warne. Met eus ar seurt taliou-ze, a drugare Doue, ne ve ket unan dre vil...

Ar « Biotred dizoural » hag ar Vretoned

Setu aman eun nebeut linennou tennet eus eul lizer digant hou mignon mat, « Ar C'hog », diwar-benn paotred an nijerezed, brudet a-viskoaz evit beza « paotred dizoural », hag ar Vretoned.

Er zonzj eus va c'henderv G. N.

War fin ar bloaz pemzek, war dachen ar Champagn  
Ar stourmad a voe kriz a-er-eb an Allmagn ;  
Ar Voched, a dra zur, a renkas argilat,  
Met eus pet eus hon tud e skuilhas t'er ar gwad !

Eus pevar c'horn ar vro 'tiredas soudarded :  
Gallaoued ha Breiziz, zoken Morianed ;  
Ouz an enebourien e sailhont gant herder,  
O klask o zrec'hi kreenn, o c'has du-ze d'o c'h'er.

Holl ho peus atao sonj, n'em eus ket douetans,  
Eus Spenn a Vedegrarj, Tavarn an Esperans,  
Ferm ar Wack, Navarin, koad Souain ha Tabur  
Eus eun emgann gwadus a voe al lec'hiadur.

Henvel a rin d'eo'h c'hoaz, e-touez meur a vil,  
Mereuri ar Chausson ha Gorreg ar Mesnil,  
Dorn Massij kichen Perth, Hurlus bourc'hig vihan  
A welas e-pad pell eur stourmad dizehan.

En Tourb, evel er Suipp, diou stérig ken dister,  
E ruilhas alies estr eget an dour sklér ;  
Dirag an daoulagad, dre-oll, tud vac'hagnet,  
Brevet o izili, o dremmou drouklivet.

'Mesk ar rejimanchou, an naontek a linen  
'Reas dreist he dever e-pad an abaden ;  
O tiredek gant tiz e penn eur strollad tud,  
O va c'henderv Gwilhou, kavjout eur maro yud !

Dastumet ez out bet gant da wir vignoned,  
Hag e-kichen Somm-Tourb da gort 'zo er vered ;  
Eoc' kousk stok-oc'h-stok soudarded Frans dre gant,  
Ken diskenvel o oad evel o rejimant.

Goude eur zeurt emgann na pebez levenez !  
E kalz lec'hieu, siouaz, nag a dristidigez !  
Ar vamm a ouel d'he mab, ar wreg d'he fried ker ;  
Holl hon eus 'ta kollet eur breur pe eur c'henderv.

O c'houi, intanvezed, bugale emzivad,  
Pedit vit ho fried, sonjit bemde 'n ho tad ;  
Kerent keiz glac'haret, en ho stad truezus,  
Aspedit ar Werc'hez, hor Mamm vadelezus.

O va c'henderv Guilhou, e Palez an Dreinded,  
Ra vezl da viken 'kreiz an evurusted ;  
War da holl gerent ker, eus lein ar Baradoz,  
Tol eur zell a druez ; beilh warno deiz ha noz.

Pa zeuymp ivez d'hon tro, dindan falc'h an Ankou,  
Da guitaat pelloc'h hon traouien a zaerou,  
Deus, eta, d'hon ambroug gant sant Per benniget,  
'Touez ar Zent, an Aelez, vit hon digemeret.

Hag eno ne vo mui hano a zisparti,  
Unanet evit mad e-barz ar memes ti,  
O kana, o veuli 'doug ar Beurbadelez  
Hano Doue, Jezuz, ha hini ar Werc'hez.

Kenavo d'it, eta, o ma c'henderv Gwilhou !  
Da hano 'zeu bemde e-barz 'n hor pedennou.  
Evit da bried ker, da c'hoar, da holl gerent,  
Ha da vugaligou da gar ivez kement :

De profundis !

Y. M. N.

Gwelet em eus kalz a dud  
oc'h ober fae war an Aotrou Doue,  
ha, pa vezent tost d'ar maro, ne  
c'houlennent, evel an dud all, sikour  
nemet digantan. Kalon ar Breizad a  
zo chomet bepred start mat. Fizians  
en deus e Doue hag en e vro. Chomet  
eo bepred feal d'e bedennou, ha kan-  
teliou e dud koz a zo garanet doun  
en e spered.

Aman ez eus eur bern Parizianed,  
paotred ar c'hirri-nij, kanfarded hag  
a ra fae war ar Vretoned. Genaoueien  
geiz, lustrugennou, paotred-c'houezad,  
ne anavezont na galleg na brezoneg ;  
ne anavezont na Doue na diaoul, met,  
pa vez meneg da vont en aer, sin-ar-  
groaz a lakont, memes tra, en o  
c'here'hen.

Perak ober fae war ar Breizad ?...  
Abalamour ma kar e vro ? Abalamour  
ma lavar e bater ? Abalamour n'en  
deus ket « aksant » Pariz ?... Choue-  
zadennou tout ! Ha, pa vez meneg da  
vont war-raok, kalz a ra evel an azen,  
e lec'h ar Breton, e fizians e Doue,  
ha leun e galon e garantez-vro, a ya  
bepred war-raok. Me em eus gwelet  
kalz, teodet-kaer pa vezont a-dreuv,  
ha dindan tan ha dir ar Voched ne  
gredent lavaret grik.

Bebet Breiz-Izel hag he bugale !  
Gant sikour ar Vretoned ar Boch a  
zo bet harzet da vont da Bariz, ha  
gant o zikour adarre e vezint taolet  
en tu-hont d'ar Rhin, e-lec'h m'em  
an pa peoc'h evit ar Breizad hag ar bara  
KK evit ar Voched !...

Bebet Breiz-Izel ha d'eo'h a galon !  
AR C'HOG.

### Kelou eus hon re c'hloazet

Kelou mat hon eus bet eus hon  
c'henvroad ker F. Gwareger, a zo bet  
kaset eus k'er « Tulle », da « Uzerehe »,  
eur gerig eus departamant ar « Cor-  
reze », en eur c'horn-bro meneziek ha  
kaer, kement ha ma c'hellomp mer-  
zout diouz ar gwel eus « Uzerehe » a  
zo war garten hon migaon. Yec'hed  
d'ezan, ma c'hello hebdaled dont d'ober  
eun dro da Vreiz da welet ar Mene-  
Bre a vo bravoc'h d'ezan, moarvat,  
egret meneziou ar Correze !

Diwar e wele klanvidi, hon lenner  
mat J. Gourlet a skriv d'imp gant e  
zourn kleiz ar pennadig lizer da beul.  
Gwall-boanius eo d'ezan chom keit  
all amzer war e wele, hep gallout  
kerzet, zoken war flaiou, war vranel-  
lou. Setu aman e c'homlec'h : J. Gour-  
let, du 94<sup>e</sup> infanterie, Hôpital 70,  
Saint-Florentin, Yonne. Mat e rafe  
ar re eus hon lennerien ger o devez  
eun tammig amzer o skriva d'ezan  
d'e zizoania.

12 a vezeven, 1917.

### Aotrou ker,

Eur ger hepken, abalamour e skriva-  
van gant va dourn kleiz, ha n'hellan  
ket mort founus.

Va stad a ya gwelloc'h-gwell, a  
drugarez Doue. Koulskoude chom a  
rin c'hoaz tri pe pevar miz a-raok  
kaout va gar-goad. E-pad an amzer-  
ze, n'hellan ket kerzet gant diou vaz  
loaikek, abalamour d'am brec'h toriet.

Kavout a ran an amzer hir em  
gwele, ha n'eo ket echuet c'hoaz...  
D'eo'h a galon, ha yec'hed mat

J. G.

### Kelou eus hon prizonerien.

Nebeutaat a ra hon lennerien a zo  
prizonerien da skriva. Marteze ne  
vezont ket lezet d'ober. Dre vureo  
« ar Groaz-aour » e Sant-Brieg bon  
eus bet kelou eus Erwan Querou a  
Bloungver, — heman en deus skrivet  
d'in eur gartennig alaoe. — Houerou a  
Squiffec, Yann Cadoret, hag an  
aotrou abad « Erherve » a Vro-Leon

War a glevomp gant an itronnezad  
a ra aman da gas pakajou d'ar brizo-  
neries, n'eo ket asur kas d'ezo breman  
boestlou kig sezon evel ma raed a-  
raok. Gwelloc'h eo kas d'ezo traou  
all. Paour k'ez prizonerien ! En eul  
lizer bon eus bet, eur pennad mat a  
zo, digant Bourdoulous a oa miche-  
rou evit ar moulerez a-raok ar brezel,  
e ros da intent, dre geriennoù bre-

zonek mesket gant galleg e lizer, ez  
ae war wasaat ganto al labour nerz  
abevans. Doue da roy d'ezo nerz ha  
skoazel da badout betek fin ar  
brezel !

### Eur pennadig istor Breiz

Er « pennadig-istor » eus ar zizun  
diveza e oa bet meneg aman eus ar  
« mein-hir », da lavaret eo ar peulva-  
nion a gaver ker stank war zouar  
Breiz. Lavaret ez eus e oa, anat  
a-walc'h, ar mein-hir-ze « mein-  
envor », bet savet. n'eo ket kant-  
vedou, met « milvedou » a zo, gant  
eur heblad tud a veve er vro-man  
a-raok zoken donedigez ar Gelted koz.

War e hon mignon ker, Ivonig  
Picard, en deus hon aliet da lavaret,  
da heul, eur geriennoù bennak diwar-  
bena « ar c'hroazion keltiek ». An  
hano-ze a reer eus kroazion kosa hor  
Breiz : savet int bet en anzer hor  
zent hag hon tadou koz, adalek ar  
mare ma tiskenjont en Arvorig,  
beleg an amzer ma voe gwastet Breiz  
gant an Normaned.

Adalek m'edont c'hoaz o veva en

enez Vreiz, a-raok dont da ziazeza  
en Arvorig, hon tadou koz a oa ganto  
ivez ar c'hiz da zevel « mein-hir » da  
« vein-envor ». Nemet, e lec'h mein  
garo pe peuz-divrazet, evel m'oa ar  
« mein-hir » kenta, mein benet  
a-zevri, kizellet piz zoken, eo a za-  
vent.

Darn eus ar mein-envor-ze savet  
gant hon tadou a zo e doare pilierou  
round (evel hini Locoal-Mendon, e  
bro-Wened) ; re all a zo p'var-chor-  
nek (evel hini Plouagat), re all c'hoaz  
e weler divouedet warno roudennou  
hir (e Santez-Trifina, e kichen Goua-  
rec). An hano a « lec'h », eur ger  
koz hag a dalv da laret « eur maen  
luc'ha plad », a vez graet eus ar  
mein-envor-ze savet gant ar Vre-  
toned gwechall.

War eun darn eus ar re a zo c'hoaz  
war zav, en evez Vreiz dreist-oll, ez  
eus enskrivadurion e brezoneg koz,  
hag a zo talvoudus kenan evit studi  
hor yez hag hon istor. En evez Vreiz  
ivez, darn eus an enskrivadurion,  
e lec'h beta er skritur latin, a oa bet  
digaset gant ar Romaned, a zo e  
« lizerennou ogamek », da lavaret  
eo eun doare-skritur a oa bet ijinet,

pell araek ar Roma led evit doare,  
gant hon tadou o-uman.

Evel ma oa hon tadou kristenien  
eus ar gredusa, e teuas ganto ar c'hiz  
da engravi kroazion war al « lec'hieu »  
a zavent d'o anaon. Ar c'hroazion-ze  
a zo e doare ar c'hroazion brec'hiau  
ledan a haaver « kroazion Malt ».  
Eur groaz evel-se a weler engravet  
war « lec'h » Locoal-Mendon e bro-  
Wened. Evit lakaat ar groaz muoi-  
c'h a wel c'hoaz, e lec'h hec'h engravi,  
e kizelljont anezi en he fez, d'he finta  
war beann al « lec'h ». Evel-se eo e  
voe ganet stumam hon c'hroazion kel-  
tiek koz, gant ar sijennou teo anezo  
henvel pe henveloc'h ouz al « lec'h »  
gwechall, hag o brec'hiau ledan peur-  
vuia e doare ar c'hroazion Malt.

Kaerat ha santelat testenienou hon  
istor eo al « lec'hieu » hag « ar  
« c'hroazion keltiek » koz ! O enori  
hag o miret evel tensoriou a dlemp  
da ober, e gwirionez, evel ma ra  
Iwerzoniz.

Rag, en Iwerzon ivez e kaver kroa-  
zion keltiek, nemet brasoc'h ha bra-  
voc'h ez int eget hon re-ni, dre ma oa  
bet gwelloc'h miret gant Iwerzoniz  
ar spered hag an ard keltiek, dizalc'h  
ma oant manet diouz domani ar Ro-  
maned.

E kroazion Iwerzon brec'hiau ledan  
ar groaz, drs en em stoka, a zo deut  
da furmi eur c'hemlec'h, eur gurunen  
eus ar brava, en-dro d'ar c'hreiz.  
Peur-c'holoet eo ar zijan anezo hag ar  
groaz hec'h-unan a weadennou hag a  
ornadurion linennek leun a gened hag  
a faltazi. Ar seurt kroazion n'int ket  
hepken traou kaer, kaera traou a ou-  
fed da welet ez int evit gwir ! An hi-  
ni a skriv al linennou-man en deus  
bet an eurvad da arvesti outo, pell a  
zo ; ha breman c'hoaz, goude keit all  
amzer, e trid e galon en e greiz, o  
sonjal enno. Kement a zantelez, a  
gaerder hag a veurdet a zav dicuto,  
— santelez ar Groaz, meurdet ha  
kaerder ar Ouenn, — ken m'en em  
zanter, p'o gweler, evel beuzet en eur  
mor a bedenn, kent m'o dije zoken  
ar c'homzou amzer a-walc'h da zevel  
d'an diweuz !

Gwelloc'h « karourien-o-bro » ege-  
domp, Iwerzoniz a ra ar vrasa stad eus  
o c'hroazion keltiek. Ouspenn miret  
ar re goz, sevel a reont re nevez diouz  
skouer ar re vrasa, ar re vrudeta-  
anezo.

Pa voe digoret e Dublin, breman  
'zo dek vloaz, eun diskouezadeg vras  
eus micherion Iwerzon, bravoc'h dor-  
dal da balez an diskouezadeg-se ne  
gavjed ket eget diou groaz keltiek,  
unan a bep tu, ma tremened etrezo ha  
ma souble an holl o fenn outo o tout  
e-barz, evel ouz gwiriona arouez an  
Uhel vennad a verv e kalon kement  
Iwerzoniad, — hag ivez kement Breiz-  
ad — a zo : DOUE HAG AR VRO !

### Migaoned o tremen

dre di ( Kroaz ar Vretoned )

Ar blijadur hon eus bet da welet e  
ti « Kroaz ar Vretoned », ar zizun  
all, daou eus hon gwella migaoned,  
an aotrone Leon ar Berr. eus Kem-  
perle, ha Saveno a Wened.

Ar c'henta a oa o tout en-dro eus  
« Kendalc'h Kevredigez rannvroadel »  
Pariz a zo bet meneg anezan war  
« Groaz ar Vretoned ».

An aotrou Saveno-hen en deus kom-  
met d'imp eus al levriou en deus sav-  
vet e yez Wened, en o fenn eun Istor  
Breiz hag a zo eus ar gwella. Heb  
dale e vo komzet hirroc'h aman eus  
daou levr nevez gant an aotrou Saveno  
hag e vignoned, « ar c'hoar Tereza ar  
Mabig-Jezuz, hag « ar Vuhez devot ».

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.





**IRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar bioloù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 29, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charnet, zigemer ane

**Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

Gwelloc'h... 20 real.  
Jannin, s'adard... 10 kwenneg  
An Dimezel J. Lez... 8 real.  
An Dimezel A. Huerou... 8 real.

Trugarez a greiz kalon d'on mignoned ker a ro skoazel, dre o aluzennoù, da « Groaz ar Vretoned » da veva ha da vont bep zizun da frealzi hon zoudarded ! Bennoz-Doue, dreist-oll, d'hon mignon ker Jannin, n'en deus ket goulet tremen dre aman o vont d'an talben heb dont d'hon gwelloc'h ha rei e aluzen da « Groaz ar Vretoned » !

**Pennaos o vez bovet hon prizonerien**

En he lizer da zigas hec'h aluzen da « Groaz ar Vretoned », — trugare eur wech c'hoaz evit ! — hon len nerez ker, an dimezel A. Huerou, a gomz d'imp eus he breur, prizonier en Alamagn.

Dre geriennoù brezonek lakaet a-veak gant galleg en e ziweza zarten, he breur a zo deut a-benn da rei da anaout d'ez e ranke dibri linad.  
Mantrus eo !

**Taolen ar Brezel**

**Ar Zaozon oc'h araokaat, an Alamaned oc'h argila en hanternoz.**

Ar yaou, 14 eus ar miz, ar Zaozon o deus kemeret, er reter da « Mouchy-le-Preux », eur grech'hien a reont anezi e srozneg « 1. fantery-Hill », da lavaret eo « Krec'h an Droadegiez ». Evel ma 'z eo « Krec'h an Droadegiez » eul lec'h a bouez bras, e klaskas an Alamaned e adc'hounit, dreist-oll dilon diweza, 18 eus ar miz, diouz ar heure. Dont a rejont a-benn, en deiz-se, da adkemeret eun nebeut foziou. Nemet ranket o deus adkoll anezo en deizioù war-lerc'h.

War eun dro ec'h asailhe ar Zaozon uheloc'h en hanternoz, a-hed eur ganol-dour en em gav dirak ker « Messines ». Dalc'bet o deus, el lec'h-se, linen genta an Alamaned war eun hed a 11 kilometr. Kemeret o deus ospen, er walarn da « Bullecourt », a zo er c'hreisteiz da « Mouchy-le-Preux », eur pennad eus difenn brudet « Hindenbourg » a vane c'hoaz etre dsouarn an ebourien.

War a greder, an Alamaned a

deante a-dreñv o c'hanolioù pounner e lec'hioù 'zo dirak ar Zaozon, evel pa vijent o prienti ober eun argila-denn adarre.

**Gounid ar Fransizien e menez « Cornillet ».**

Diouz tu ar Fransizien, ez eus bet kemeret diwar asailh, dilon 18 eus ar miz, eur pennad eus an difennou alaman etre menez « Cornillet » hag ar menez « Melegan » war eun hed a bemp kant metr. Dizarbennet ez eus argadennoù dirag ar menezioù-ze hag ivez war « Hent an Itronnez » hag er « Vauxaillon ».

**War dalben an Itali.**

War o linen, an Italianed o deus dizarbennet argadennoù an Aotrichianed ha gounezet eun nebeut lec'hiennoù war an uhel. Dimeurz, an 19 eus ar miz, ez eus bet eur c'brogad taer war uhelen « Asiago ». An Italianed a voe trec'h ; dalc'bet o deus lec'hioù a bouez ha kemeret 936 Aotrichian da brizonerien.

**War linen ar Rusi. Stad ar sperejou.**

War linen ar Rusi, evel e oa bet meneg ar zizun ziweza, e krog an Alamaned da leuskel nijerezed war vae Riga, evel p'o dije c'hoant da brienti eun dra bennak diouz an tu-ze. Ar 15 eus ar miz, o deus stlapet evel-se 41 bombezou ouz linennou-kanolioù ha listri ar Rusianed.

Stad ar sperejou a ya war wellaat er Rusi. Komzou ha mennadoù a bouez a zo bet displeget, da heul dispac'h ar Rusianed, diwar-benn finveziou ar brezel, dreist-oll gant an aotrou Thomas, ar ministr, a zo breman er Rusi. An aotrou Wilson, diouz e du, en deus graet eun uhel a brezeged da ouel banniel ar Stadoù-Unanet. Ar voutinerien (Sosiálist) alaman, en em vodet e Stockholm, o deus renket anzav e tlie ar peoc'h beza diazezet war ar Gwir hag e vije red d'an Alamagn daskori he frankiz d'ar Veljig. Brasat kammed war-raok eun anzavaden evel-se a-berz an Alamaned !

Eun dra hag a ziskouez c'hoaz ez afe an traou war wellaat gant ar Rusianed eo m'o deus kaset er-maez eus o bro an dispac'h Grimm, a oa bet karget gant eun den bras eus ar Suis, Hofman, ministr war an traou a ziaevaz, da drei ar Rusianed war ober o feoc'h gant an Alamagn er-maez eus ar Unanet.

Da heul an taol-ze, ez eus savet trouz e bro-Suis, dianzavet ma 'z eo

dre-oll Hofman gant e genvroñz. Renket en deus rei e zilez a vistr.

**War vor hag en aer**

Eman « amiralded » Bro-Zaoz o paouez embann koll al lestr-samm saoz « Cameronian », 5,861 tonnall, er mor Kreizdouarek, an 2 eus ar miz. 63 den bezuet.

Disul, 17 eus ar miz, al lestr « Anjou », karget da zevel an tarzerezed war neun e mor Gaskogn, a zo aet a-stok ouz unan anezo ha gouledet. Seiz eus ar vartoloded a zo bet lazet gant nerz an darzaden.

An amiral Du vignaux a zo bet karget, an 17 eus ar miz, d'ober hiviziken e penn ar brezel ouz al listri-splujerien. Pa n'oa c'hoaz nemet kabiten, er bloaz 1915, en doa reizet ha renet mat-tre ar brezel-ze e mor Breiz. Fizians a zo e teuo an traou d'ar gwella etre e zaozarn.

Disul, 17 eus ar miz, « zeppelinou » a zo aet adarre a-us da Vro-Zaoz. Losket o deus bombezennou war eur riblennad-vro a-hed an aod. Tanet ha diskaret eo bet unan anezo gant an nijerien zaoz.

**En Iwerzou**

En Iwerzou, kaoz an « Emrenerez » a gerz war-raok da vat. An aotrou komt Plunket, hag a oa bet hanvet, en e harlu, da gannad e Kambri Londrez gant e genvroñz anaoudek, a zo bet prizoniet, n'eus ket pell, e Dublin e-lec'h e oa deut d'ober prezegennou.

Eur frealzidigez e vo d'ezan hag eur spi evit an amzer-da-zont klevet eman an Tad santel ar Pab o vont da lakaat war roll ar zent eun ezel brudet eus e diegez, Olier Plunket, arc'heskob Armagh, bet merzeriet gant ar Brotestanted er bloaz 1681.

Eus lein an Nenv ra gouezo bennoz ar zant nevez war Iwerzou, e vamm-vro, ha war an holl vroù keltiek da barea o gouliou ha d'o adsevel goude ar brezel.

**Tantad sant Yann**

DA F. BERREHAR

Kement paotrig bihan  
A gas bodigou iann  
D'ober tantad sant Yann,  
Gmet e-kichen ar groaz,  
E-kreiz ar blusen vras,  
En dishoal d'ar gwaz glas.

Kêriz, deuet an noz,  
Ha zoken ar re goz  
En eur gonta o c'haoc'h.

En em vod el leur-gêr  
Vit digor ar gouel kaer  
En parrez a reer.

Prest e vraller ar c'hloc'h,  
Hag heb gortoz pelloc'h,  
E wellit o tloc'h

Ar merc'h hed eus pep korn,  
O chapellet n'o dorn,  
Gwazed echu o c'horn.

Ar beleg en aoter  
A lavar eur bater,  
Ha goude e seller

Eus sant Yann ar banniel,  
Douget ploum hag uhel,  
An iliz o leuskel.

An tantad benniget  
Diousu vez elumet,  
Ha neuze 'vez klevet

Kan ar « Magnificat »  
Evit trugarekat  
E barr an Nenv hon Tad.

E tommer mezeven,  
Dindan al loar velen,  
Ra welor da viken

Kendalc'het en hor c'hreiz  
Giz koz ha mad hor Feiz !  
Hobdi Breiz ne ve Breiz.

IVONIG PICARD.

**Eur pennadig istor Breiz**

**Ar C'helted hag ar C'hermaned**  
Ar Gelted eo, evel ouzoc'h, hon tadou-koz-ni, Breiziz.

Ar C'hermaned eo tadou-koz an Alamaned breman.

Evit kaout, am eus aon, eun digarez d'an dismegans a reont ouz hon brezoneg, yez ar Gelted, Galloùed a zo a embann, dre gomz ha dre skrid, n'oa ar Gelted koz, hon tadou, nemet eun doare Germaned. Hervez an dul-ze, ne vijemp, ni Breiziz, nemet kendirvi gompez d'an Alamaned hag e vije graet mat d'imp o tiframma diganimp hon yez brezonek.

Evel-se e oa kon z, n'eus ket gwall-bell c'hoaz, gant eun aotrou a Bariz, hanvet Jolivet, a c'houlenne war ar « Journal de l'annon », mar plich, ma vije douget eur reizadur dioustu, « une mesure urgente » gouz d'ezan, evit difenn ouz Breiziz komz Brezonek.

Tud dereat eo ar Barizianed e gwirionez ! Pa gavont digemer mat e Breiz-Izel, evit hon trugarekaat n'ez eus netra a well ganto eget goulenn eur « mesure urgente » da lakaat hon yez d'ar maro.....

Kerentiez holl bobloù an Eurcp a zo bet studiet piz kenan en hon amzer gant an dud ouziek, a-unan gant

istor ar yezhoù. Setu aman petra a zo bet diskulhet evel-se diwar-benn ar Gelted hag ar C'hermaned.

Bro c'heridik ar Gelted koz e oa, evit doare, aochou mor an Haaternoz etre stêriou Rhen hag Elb.

Bro c'heridik ar C'hermaned e oa, anat a-walc'h, ar vro etre an Elb hag ar Vistul; amezien e oant eta d'ar Gelted.

D'ar c'houlz m'edo ar C'hermaned tost d'ar Gelted evel-se, e oa o stad gwall-izel, kement hag e'heller merzout diouz stad o yez, dizevenaet ha distreset-oll. Ar pep gwella eus o sevenadurez o doa ranket ampresta digant o amezien, ar Gelted, a-unan gant hinoiou an holl draou a amprestent. Rouden an amprestou-ze a gaver betek en alamaneg breman.

Diwezatac'h, etro an trivet kantved kent Hon Zalver, pell a-walc'h goude m'eo doa ranket darn ar Gelted, gant ar mor o c'hounit war o douarou, tec'het war-zu ar c'hreisteiz hag ar c'huz-heol, tadou-koz an Alamaned a reas brezel d'ar re anezo a oa chomet bepred etre ar Rhen hag an Elb. Rua taer a vrezel a voe d'ar c'houlz-se etre an diou bobl moarvat, pa gaver ar vro c'hoaz dismantrou an difeoa a oa bet savet gant ar Gelted da ziwall o douarou. D'an diwez, e voe trec'het hon tadou-koz, hag ar vro anezo laeret gant o enebourien.

Neuze eo e kemeras ar re-man an hano a C'hermaned, eus eur c'hornad-douar o doa dalc'het evel-se. Ar ger « German » n'eo ket anezan eun hano-pobl, met eun hano-bro, ha tadou-koz an Alamaned hen kemeras diwezat a-walc'h en istor, eur wech dalc'het ganto eul lec'h a zouge an hano-ze hag a oa araok d'ar Gelted. Setu perak e vez graet a-wechoù gant ar skrivagnerien latin « Germaned » eus pobladoù Kelted a zo hag o deus bevet el lec'h-ze a-raok donedigez an Alamaned. Met kement-se ne ziskouez e stumm ebet e vije kenetrezo an distera kerentiez.

Ha setu, koulskoude, petra en deus rôlet tro da « Jolivet » ha d'e vignoned da zibuna o gevier. En em harpa a reont ivez war eun henveledigez a vije etre ar yez keltiek hag ar germaneg..... ya, war o meno ! Rak, e gwirionez, et-maez eus an amprestou gerioù a zevenadurez hon eus komzet anezo, hervez an dud gouziek a ra o studi eus yezhoù an Europ ne gaver etre an diou yez henveledigez ebet a-hend-all.

Henveloc'h e oa ar c'heltiek, hervez an dud gouziek-se, ouz al latin hag ar gregach, ken e kav d'ezo e oa an teir pobl : Létined, Gresianed ha Kelted, owar eun hevelep gwirizien.

D'ar poblou sevenaeta eus an Amzer goz e oa, eta, kerentiek hon tadou, ar Gelted gwechall, ha n'eo ket d'ar C'hermaned gouez !

Da heuilh.

## Hunvre eus c'hoaz Chiminaou lakaet en rim gant ar barz koz « Penhouarn »

War don Gwader Lohitrek : Pebez  
kelou, o ma Doue, Am eus hirie  
resvet !

Deut holl d'am selaou, Bretoned ;  
Me 'gonto d'ec'h eun hunvre  
Am eus bet en noz tremenet  
Pa oan kousket 'n em gwele.  
Me a garfe, ma mignoned,  
Teufe ma hunvre da wir !  
Deut holl, eta, d'am selaouet ;  
Kredit c'hanon war ma gir.

'N em hunvre me 'zonje ganin  
E oa echu ar brezel  
Hag e oan awar ma daoulun  
Dirag an Tad Eternel.  
Me a rente d'ezan grasou  
Da vezan bet diwallet  
Kalz dimeus ma c'hamaradou  
Diouz boulij ar Voched.

Peurechu e oa ma feden,  
Paotr ar Post 'zo erruet  
Da zigas d'in ma c'helaouen,  
« Kroaz vihan ar Vret'ned ».  
Pa grogis gant ma lennadeg  
E oan evurus, laouen ;  
Da Yann-Batist, va amezeg,  
E lavariz evel-hen :

### II

O pebez kelou evurus  
A lennan er gazeten !  
Achu eo ar brezel euzus,  
Torret eo ar gorventen ;  
Hon zoudarded viktorius  
Bremaik a vo er gêr,  
Hag an « Te Deum laudamus »  
'Vo kanet gant kalonder.

Mamm ha gwreg vat a Vreiz Izel,  
Ehanit da skuilh daero !  
Ho mab hag ho pried fidel  
A zo war hent an distro ;  
Gonezet o deus al lore  
Ha Gwilhaou Daou, ar barbar,  
Breman, en diwez e vuhe,  
A zisec'ho gant glac'har.

Nan eus ket ewar ar bed-man  
Na prizon na galeou  
Barrek a-walc'h da gastizan  
Holl dorfejou Gwilhaou Daou ;  
Met Doue, dre e holl-C'halloued,  
E-pad an Eternite,  
A raio d'ezan da zantout  
Holl veurded e Vajeste.

### III

Tri bloavez a vo, ma Doue !  
Tri bloaz a vo da viz Est  
Ma plijas gant ho Majeste  
Rei da c'houzout e oac'h Meatr ;  
Da gastizan hon pec'hejou  
C'houi 'peus d'imp-ni digaset  
Eun eus ar gwasan gwalaenou  
A voe bet biskoaz gwelet.

### IV

Ar bed holl a oa dirollet,  
Ne oa ken spi en Doue,  
Ar malloz, al leoudouet  
A giveda a bep gaste ;  
Ar gasoni, an dallente,  
Memes etre breur ha c'hoar !  
Diés e oa en gwirione  
Bevan reiz war an douar.

Er Frans, an hon mamm vro garet,  
E oa erru gwan ar Fe,  
Er c'halonou hanter-skornet  
Doujans ebet da Zoue ;  
Nebeut a dud en oferen,  
Nebeutoc'h er gousperou :  
Koll't e oa gant ar Fransizien  
Fe gristen o c'hendadou.

Ar c'hoerdiere 'zo serret,  
Magerezoù beleien,  
Digant o ferc'hennou tennet  
Ha gwerzet d'an dud estren,  
Laezez ha beleien,  
Toll't er-maez o feadra,  
Da greski niver ar bevien  
War an hent o klask bara.

D'ar fin Doue 'zo bet skuizet,  
Hag evit hon c'hastizan  
War 'n Europ en deus distolet  
Eur brezel an euzusan ;  
Dre enkreiz an Alamaned,  
Pobl divergant ha barbar,  
E justis he deus kastizet  
Kalz eus poblou an douar.

Strailhet em eus ma spered  
Oc'h esât dont da gompren  
Da betra 'n deus Doue laket  
Ewar hon boull douar yen  
Tud ken kri ha ken didrue  
Evel mac'h eo ar Voched,  
Met kompren oberou Doue  
Er bed-man nan hellin ket.

### V

An torfejou an euzusan  
'Zo bet graet gant an dud fall  
Er Veljig, er Serbi vihan,  
Er Rusi hag e Bro-C'hall ;  
War Vro-Zaoz o deus digaset  
Zeppelinou, listri-ær :  
Kalz tud koz a zo bet lazet,  
Kouls war ar maez hag en kêr.

Ar bugelig krog en e vronn,  
'Sunna laez asgre e vamm,  
'Zo bet gant an dud digalon  
Muturniet holl tamm da damm,  
Hag ar vamm baour en he glac'har  
Tennet d'ei he bronnou. ....  
Biskoaz ewar hon boull-douar  
N'voe graet brasoc'h torfejou.

Templou Jezuz 'zo diskaret,  
Kouls iliz ha katedral ;  
Die-oll lec'h o deus tremenet  
O deus c'houezet an tan-gwall ;  
Netra n'o deus bet da espern :  
Merdead an Arvor  
Gant o splujerezed ifern  
Bet kollet en fons ar mor !

Ha c'hoaz e felle d'an dud foll  
Rei o sevenadurez  
Evit reolen d'ar bed holl,  
Met bras eo o dallentez,  
Rak Doue, gwir Rener ar bed  
Nan aotreo birviken  
E teufe tud ken diboslet  
War an holl boblou da ren.

### VI

Du-hont pell, ewar ar voten,  
Me a glev skrijadennoù ;  
O hekleioù, fonz ar zaonen,  
Nan int ket brao da zelaou :  
Merc'hed ar broiou-Unanet,  
En o fenn merc'hed ar Frans,  
War « Gaizer » an Alamaned  
En eur vouez a c'houl venjans.

Mall bras eo da Wilhaou skarzan  
Hag ober e bakaden,  
Pe gant merc'hed ar broiou-man  
N devo fest ar skubelen.  
Ar wreg keltez intanvezet  
A c'houlenn warnan malloz ;  
Muturniet eo bet ar pried  
A gouske ganti d'an noz.

Mammou ar Veljig glac'harset,  
Lazet d'eo o mibien,  
A c'houlenn ma vo dibennet  
Rener meur ar vuntrerien ;  
Ar vamm-goz saoez daoubleget,  
Lazet d'ei he mab-bihan,  
A c'houlenn ma vezo krouget  
An impalaer prusian.

Kouerez yaouank ha dimezel  
Dilerc'het da zimezi  
A c'houl ar gwalleur sternal  
D'impalaer ar Jermani,  
Lazet danvez o frijeou,  
Kollet gante esperans,  
Gant ar gwrage, gant ar mammou,  
Ewarnn a hop : « Venjans ! »

Me, o rener ar Vourevien,  
A gas d'it ma mil malloz,  
Rak daou dimeus ma nizien  
'Teus merzeriet a-ratoz :  
Ma zaer nizez, o c'hoarezed,  
Gant o mamm e korn o zan,  
En o daerou c'houero baUZet  
Gant keuz d'eo breudeur vihan !

O' choarezed an teneron,  
Ehanet da skuilh daerou !  
Loeizig hag ho preur hennan  
O deus tec'het ar maro ;  
Leun a yec'hed, dre c'hras Doue,  
Bremaik e vint er gêr  
O stardal pok ar garante  
Ewar ho chodou seder.

(Da heuilh) PENHOARN

## Eun arme nevez a Bologniz

Kalz a Bologniz, kouezet o bro  
dindan dreid an Alamaned, a oa deut  
da zerviji ar Frans. Hiziviken e vo  
graet eun arme anezo, ganti he ban-  
niel poliadi.

Eun enor eo graet gant ar Frans d'ar  
bobl galonek-ze, a vo disklêriet en he  
frankiz, hon eus esper, goude ar  
brezel.

## Diwar-benn « Pouthouarn buzudus » Ivonig Picard

Meur a lizer a zo digouezet ganimp  
diwar-benn « pouthouarn buzudus »  
Ivonig Picard, dre vrenn-eskenn, a  
a oa bet meneg anezan amañ eur  
pennad a zo.

Goulnnet ez eus ouzimp, dreist-  
oll penros ober ar siminal a zo  
e-kreiz ar brenn-eskenn.

Ar siminal-ze, ho petsonj, n'eo ket  
eur gwir siminal. Eun toull n'eo ken !  
Evit ken ober, da genta toulla  
strad ar poud. D'an eil, kemer eun  
tamm koad round hag e dremen dre  
doull ar strad. Goude-ze, e zerc'hel  
soun e-kreiz ar poud, e-keit ha ma  
vezor o lakaat ar brenn eskenn, start  
mat, en-dro, da leunia ar poud.

Eur wech leuniet ar poud, tenna  
an tamm koad er-maez hag e vezo,  
en e blas, eun toull treuz-didreuz  
d'ar brenn-eskenn ha da strad ar  
poud, d'an aer ha d'ar flamm da  
dremen drezan pa vo kroget an tan.

Eur seurd fornigell dre vrenn-  
eskenn a zo talvoudus en tier e-lec'h  
e vez dalc'hmat tan en oaled, da  
domma tra pe dra, souben, laez pe  
gafe. Gwelet em eus tommar ar c'hale  
aman, e ti eun amezeg, gant eur  
fornigell brenn-eskenn vihan a oa bet  
graet gant eur poudig « konfatur »  
houarn-gwenn : ha c'hoaz, war a  
lare an itron a di, e c'helle padout da  
rei tan peder pe bemp eur dioustu.

Gallout a reer c'hoaz ober gant  
brenn-eskenn brikennoù pe voulou  
mad d'ober tan, dre e veska gant  
pri melen ha ter-du (pe « goudron »)  
; aemet diés kenan eo kavout ter-du  
breman.

## ROLL-GERIOU

A-drag, subitement ; chomet ouz  
a-drag em gwele. — En Haut-Léon,  
de bon cœur ; an daou yaouank-man  
a zo a-drag an eil gant egile.

Eun den soret, qui a la démarche  
lourde, lambin, Haut-Léon. — So-  
rennet, endormi, lambin, Bas-Tré-  
guier.

Gwenec'hen, état d'une femelle qui  
ne donne ni lait ni petits ; ar vioc'h  
'zo gwenec'hen. — Kentoc'h « gao-  
nac'hen ».

Diboulla, Diboulla foenn, kolo,  
moué, hag all, transporter à bras  
ou à dos d'un endroit difficile dans  
un endroit plus facile où une voiture  
peut pénétrer. Diboulla foenn, trans-  
porteur du foie à dos jusqu'à un en-  
droit où une voiture peut le prendre  
sans s'embourber.

Beufig, bouvreuil ; jolie fille. Ar  
plac'h yaouank-se a zo eur beufig,  
c'est une jolie jeune fille. Carhaix.

Brigneu-bihan, petite jourbarde  
des murs.

Brichin, folâtre, volage. Bas-Léon.

Skleug, marchepied d'une voiture.

Skloagen, kramen, saburre ou en-  
duit coloré qui se trouve sur la lan-  
gue dans diverses maladies ; va zoad  
a zo skloagennet, kramennet. — Kra-  
men-east, en Bas-Tréguier, c'est le  
hâle des moisonneurs. — En gallois,  
« kramen » croûte d'une plaie.

Geot-ben, herbe fine et tendre qui  
pousse au premier printemps au bord  
des ruisseaux, des fontaines, etc...  
Haut-Léon. — Lano-ben, la lande  
que l'on coupe pour les animaux. (Le  
ben, taillie ; d'ou beau, tailler, (maen)-  
benerrez, pierre de taillie.

LOUZ AR FLOC'H (Da heuilh.)

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St-Brieuc. — Imprimerie St-Guilhem





IRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skodet evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, zigemer ane

ISTOR BREIZ  
Gant Tivarez

Eul levr skrivet e brezoneg reiz, sklér hag aes, red e lenn da gement Breizad a fell d'ezan anaout e Dadou koz hag e Vro.

E c'houlenn digant an aotrou Berthou, Kerkanañ, Pleubian Priz 10 gwenneg, ha pevar gwenneg ousspenn evit an timbchoù.

Kevrin ar Varzed

E ti an aotrou Berthou ivez e kavor al levrig « Kevrin ar Varzed », displeget ennan, freaz hag aes, penaos en em gemeret evit sevel skrijou war rimou, gwerzioù, sonioù a bep sord.

Pemp kweneg al levrig ; eur gwenneg ousspenn evit ar frejoukas.

Taolen ar Brezel

War dalben ar Fransizien, « Keo an « erouant » kemeret.

En hon diweza « taolen-vrezel » e oa meneg eus eun daer a asailhen gant an Alamaned e « Vauxaillon », en hanternoz da vilin vrudet « Laf-taux ». Abaoe, an enebourien n'o deus ket paouezet da asailh e meur a lec'h, dreist-oll en-dro da « Hent-an-Itronezed », e « Filain ha « Hurtebise », hag ivez war venez « Cornillet » ha war stêr « Aisne ».

Dizarbennet int bet en holl le-chiou-ze. An nebeut pennadoù forioù o doa tizet d'erc'hel e « Vauxaillon » hag e stêr « Aisne » a zo bet diframmet a-nebeudou diganto.

A zo gwell, dilun diweza d'an abardaez, ar Fransizien o deus kemeret diwar asailh eur « gentren », da lavaret eo eun difenn war-ruok eus an Alamaned, er walarna da Hurtebise. Eun taol-kaer eo eus ar c'haera, o veza ma 'z oa ar « gentren »-ze krenvaet kenan. Kleuzet e oa bet eno gant an enebourien eur c'heo, hanvet ganto « Keo an Aerouant », war 300 metr dounder ha 100 metr treuz. Leun e oa a vindraitbrezed hag a zoudarded, 340 eus ar re-man a zo ket paket da hrizonerien.

Ar Zaozon o tostaat da « Lens », kêr-benn ar mengleuzioù glaou douar.

Diouz tu ar Zaozon ivez, an Alamaned, goude d'ezo adargadi an aer war stêr Souchez, o deus raket koll eur vras a dachen, war dost

d'eul leo treuz hag eur c'hilometr dounder. Setu ar Zaozon, kemeret ganto eur gêriaden a bouez, « La Coulotte », digouezet breman tostik-tost da gêr « Lens », kêr-benn bio ar glaou-douar !

War an talbennou all.

War linen an Itali, an Aotrichianed o deus kollet o amzer hag o foan o klask adc'honit an dachen o doa kollet war uhelen « Asiago ».

Er Balkanioù, eun nevezenti a bouez ! An aotrou Venizelos a zo bet kemeret da vinistr-meur gant ar roue nevez. Diwar vremen ne vo ket steuet ken kamdroioù dre zindan da skei gant soudarded ar re-Uaonet a zo dirag Salonik.

War griski ez a bepred ar gano-liadeg er C'haliisi.

En Azi-Vihana, ar Rusianed a oa digouezet e Kanikin, eur gêr war harzou ar Berz dirak Bagdad, hag ec'h astennent ac'hane o dourn d'ar Zaozon. Nemet, gant an dizurz a oa en em zilet en o arme da heul an dispac'h, e voent dizarbennet gant an Turked. Setu emaint o paouez adkemeret o c'hrenv. Dalc'het o deus, nevez 'zo, diou gêr er c'hornad-bro-ze.

War vor. Eun taol-yud euzus a-berz an Alamaned.

Evel pe na vije ket a-walc'h d'ezo gant o splujerezed, an Alamaned o doa steuet dre zindan e bro-Norvej eur gavailhadeg vras a spierien, karget da zustruja al listri norvejian er-maez a vrezel.

E penn ar gavailhaden en em gave kannadour an Alamagn, ha dre ar val a dalv da zigas lizerou ar gouarnamant eo e teue d'ezan bombezennoù. Ar re-man a veze lakaet gant spierien an Alamaned e listri an Norvejianed e doare d'o zarza ha d'o c'has d'ar strad en dounvor. Ugent lestr norvejian a vije bet kollet evel-se, tud hag all.

Pa voe dizoloet an taol, e voe kavet etre daouarn ar spierien 120 bombezen, darn anezo lakaet e stumm brikennoù glaou-douar, d'o c'huzat gwelloc'h a ze e-kreiz glaou-douar al listri-dre-dan.

Mantret eo an holl sperejoù en Norvej gant an taol-yud-se ken fall-lakr a-berz an Alamaned.

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

Hunvre eur c'hoz Chiminaoz  
lakaet en rim gant ar  
barz koz « Penhouarn »

War don Guc'ader Lokirek : Pebez kelou, o ma Doue, Am eus hirie reaset !

(Pennad diweza)

VII

Daoust da fallagriez Gwilhaou, Ha daoust d'e holl rogentez, Straket eo d'ezan e gilbaou, Taolet eo kuit gant ar vez ! Ar Veljig 'vo dishualet, Ha Bro-C'hall a vo ive ; Kollet eo an Alamaned, Salvete eo al Liberte !

Gra da bakaden, o Gwilhaou, Rak setu erru da dro ! Koll'te teus da barti voullaou, Boutet-out er-maez hon bro. Mar bez red d'it mont d'ar prizon, Tra hudur, te 'fo an « trak » ; Ar glag'har a vo 'n ez kalon, Ha da viz... 'n eun tu bennak !

Arru 'zo diwez d'ar brezel, Fin a zo d'an trubuilho ; Ha war ar bed universel Ar peuc'h padus a reno ; An Alamaned 'zo faez-mik, Ar red-kof 'zo gant Gwilhaou ; Mar bez ar Rusi katolik Ec'h ay mat kenan an traou !

VIII

Displeget em eus, Bretoned, Displeget d'ec'h ma hunvre, Bet d'in en miz mae tremenet, Kouset mat en em gwele. Me 'garfe, pôtrid ma c'hontre, 'teufe ma hunvre da vad, Hag, en esper a gement-se, Gant ar joa e trid ma gwad.

Du-hont, kostez an « Ardennoù », Eman breman ma fizians ; Me 'glev trouz ar bombezennoù Stlapet gant kanol ar Frans ; Ar c'hanolier war e « geson » A hop d'e gamaraded : « Dao d'an dud barbar ha poltron En o zoullou konifid ! »

Ar mindrailher dre faltazi A lavar d'e gaporal : « Lakomp da c'hoari hon « mimi » Ha « zigouilhomp » an dud fall. »

Respont ar C'haporal :

Ma daou vreur 'zo gante lazet ; M'o c'hlev o c'houlenn vanjans. Dao, eta, d'ar Brusianed ! Bevet da viken ar Frans !

Skarzet eo an Alamaned Er-maez eus o zrancheoù, Ha war o lerc'h hon soudarded A heuli tost d'o zeulioù :

« Gortozet ac'hanomp, Boched ; Demp da c'hoari eur burti ; Ho kroc'hennou a vo toullet Gant beg dir hon « Rosali ».

Dao ha dao, ha dao d'ar Voched ! Piou a skoio ar c'hrenvan ? Dao atao d'an Alamaned ! Dao d'an hini diwezan !

IX

Hir eo 'benn breman, Bretoned, Hir hir da vad eo ma gwerz ; Koulskoude, ha daoust d'ar Voched, Hon eus c'hoaz buhez ha nerz ; Lavaromp holl peb a beden Deus a greiz hon c'halonou Evit goulenn ar sklêrjenn Eternel d'an eneoù

Deus pere ar c'horfou mortal, Siouaz, a zo bet lazet Du-hont war dalben ar brezel Gant boulejoù ar Voched, Pe skôet gant splujerezed Ha taolet da strad ar mor... Gant Porzier Palez an Drinded Evite goulimp digor !

Ha, pa blijo gant ma Doue Hon gervel ni davetan, An eneoù evurus-se Sur a bedo anezan Da rei d'imp eur maro santel Mac'h aimp holl d'e Varadeg Gant hon zoudarded Breiz-Izel D'hep azeuli de ha noz.

Eno ne vo ken a vrezel, Ne vo ken a drubuilho : Gant hon Zent koz a Vreiz-Izel Unalet ni a gano ; Gant hon Zent koz a Vreiz-Izel, Ar Gelted, hon c'hendado, 'Kreiz ar sklêrjenn eternal, En Doue ni a vevo !

PENHOARN

Diwar-benn ar C'hartennoù-post

Eman hon mignon, Fransez Gourvil, o paouez skriva war an « Union Agricole » a Gemperle eur mad a bennad-skrid diwar-benn ar c'hartennoù-post skeudennet.

— Biskoaz, emezan, n'ez ens bet e Breiz kement a ziaveziñ, mall ganto, pa zigouezont en eur c'hora pe gora ens hon bro, kas d'o zud eur garten skeudennet bennak, warni traou breizek, en envor eus o beaj. Eun taol-kaer e vije ze d'eomp, ma ve graet ar c'hartennoù skeudennet e doare d'ober enor da Vreiz ha da Vreiziz. Nemet ar c'hontrol eo a c'hoarvez peurliesha. Diotachou gwa-paüs d'hon gizon ha, gwass 'zo,







**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar bioiou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

Kloareg ar Wern..... 20 real.  
Kar-e-Vro..... 4 real.  
Frugarez d'hon barzed vat!

**GOURC'HEMENNOU !**

Hon gwella gourc'hemennou d'hon lenner ker, ar serjant Beetard, a zo bet laket war an daolen-enor gant eur meneg eus ar brava — « Eur skouer eo a goustiaz hag a nerz-kalon ; en em ginnig dale'hmata evit ar c'hefre'diou risklus hag al labouriou tenn ;... en deus renet e gravaterien diou wech dreist-oll, en X... , da zastum ar re c'hloazet diadan ar ganoliadeg stanka. »  
Enor d'ar Vretoned !

**Taolen ar Brezel**

Diou nevezinti a bouez : donedigez an Amerikaned, ar Rusianed oc'h adkregi.

Abaos hon diweza « taolen-vrezel » diou nevezinti a bouez bras o deus treet daveto sellou an holl. Ganto, fuzians a zo, e vo hastet fin ar brezel !  
Da genta, e meur a horz-mor a Vro-C'hall hag a Vro-Zaoz n'heller ket o henvel, ez eus digouezet, dre lestradou bras, soudarded eus an Amerik, prest da zont d'an talben da rei skor d'hon zoudarded.

Dimerc'her diweza, 4 eus ar miz, da lida gouel broadel ar Stadou-Uvanet, eun darn eus ar zoudarded-ze, neve-dilestret, a zo eu em gavet e Paris, e-lec'h e voe graet stad d'ezo gant an holl.

Heb dale pell, moarvat, e vezint gwelet o stourm skeaz-ouz-skeaz gant hon c'henvroiz a Vreiz en o fozioù-lifenn.

Eus ar Rusi e teu, war eun dro, keleier eus a gwella. Kerenski, ministr ar brezel, goude d'ezan adurcia a traou a oa bet gwall-gemmesket gant an dispac'h, en deus en em glevet gant ar jeneral brudet Broussilof evit ober eun asailh a vras ouz linen an enebourien.

Disul, ar c'henta eus ar miz, hag en deiziou war-lerc'h, ar Rusianed o deus asailhet er Volhyni hag er C'hassi, war-zu Lemberg, ker-benn ar c'horn-bro-ze.

Deut eo an taol da vat ganto eus

ar gwella. 15.000 a Alamaned, gant 40 kanol, a oa kouezet etre o daouarn a-benn dimeurz diweza. Toullet e oa bet ganto linen an enebourien war 5 kilometr dounder e lec'hioù 'zo.

En tu-hont d'ar gounid evito o-unan, ar Rusianed a roio dre an taol-man eun dispar a zizamm d'hon zoudarded.

**War hon talben an Alamaned o goll o foan.**

War hon talben, evel p'o dije c'hoant da gas an traou da benn prim-ha-prim a-raok donedigez an Amerikaned, e tale'h an Alamaned da skei taolioù dibaourz bed-ha-hed d'al linea, e Sant-Kantin, war « Hent an Itronezed », ha beteg e-kichen Verdun war ribl kleiz ar « Meuse ».

Dimeurz diweza, dreist-oll, d'an abardaez hag e-pad an noz, ez eo bet tomm an traou. Stourmet ez eus da vad ha dizarbennet an enebourien e Jouy, Cerny, Ailles, Kaliforni, dirak « Hent an Itronezed ».

Diouz o zu, ar Zaozon a strisa muioù-h-mui ar c'helc'h war gêr Lens, na zaleo ket da goueza ganto.

Eun dra hag a zikouez eman berr war Wilhelm ez eo e venn sevel eur guzuliadeg vras etrezan hag e vignoned diwar-benn ar brezel e kêr Vienna, kêr-benn an Aotrich.

**War an talbennou all.**

An Italianed o deus dizarbennet eun asailh eus an Aotrichianed war lenn « Ward », an hanternoz d'o bro.

Eus an Azi-Vihana ivez e teu keleier mat : ar Rusianed o deus graet eur gammed war-raok ha dalc'het eur gêr hanvet Peadjavin.

Er Balkaniou, Venizelos, hanvet da ministr bras roue never ar C'hres goude didronedigez Konstaatin, en deus torret an darempredoù ouz an Alamagn, en gortoz kerzet war an dachen-emgann gant ar re-Unanet.

**War vor hag en aer.**

An 22 a vezeven, an « Himalaya », eus ar gompagnunez « Kannaderez dre vor », lakaet da lestr-samm brezel, a zo bet goueledet er mor Kreiz-Iouarek.

Ar 27, al lestr-reder « Kleber », 7.700 tonnell, o tout eus Dakar da Vrest, a yeas a-benn ouz eun darzorez war-neun e-kenver da veg-douar Sant-Vaze, hag e voe goueledet. 38 den a zo bet bezuet.

An Alamaned, daoust d'o foan ha d'o splujerezed, n'int ket bet evit herzel da dremen listri an Ameri-

**BARZ, MIR DA SPI !**

D'am mignon « Ar Yeodet » ha da gement Barz a zo en talben.

N'ez klac'har, mir da spi da welet c'hoaz ar Vro  
Hag a dridas gwechall gant mouez verv da delen !  
Ar gwennili, o Barz, war-lerc'h goanv ha korven,  
Pa dav an avel genvy, a zeu laouen en-dro.

Eus pellder an dachen lec'h ma c'houzanvez gloaz,  
Lec'h ma skuilhez daerou, gwad ivez marteze,  
Lec'h ma wan da zivrec'h dindan samm ar c'hleze,  
Lec'h n'ez eus d'az souten 'met anken, boued divlaz,

Eus tachen ar brezel, dreist kromolioù ar mor,  
Hon eus klevet da vouez, ni da vweudeur garet,  
Ha gant holl nerz hon gwad d'az kalon diskaret  
E kriomp : « Mir da spi ! bugel mad Bro-Arvor ! »

Mir da spi ! Ar Breizad netra n'hall e ziskar,  
Pa vir c'hoaz en e greiz karantez sakr ar Ouan,  
Pa zell du-hont war-zu ar menez, an draouien  
A guz e iliz koant, e gornig-bro dispar.

Mir da spi, rak ni 'ghev, eus an eil darn d'eben  
Eus al linen-dan ruz a ra eur gouriz gwad  
En-dro d'hon bro garet, mouez kanol an argad  
O son, hogos seder, an harlu d'an estren.

Mir da spi, rak ni 'ghev eur vouez all hag a gan  
O tout eus lannou Breiz, sioul, tener ha karus,  
Eur vouezig eus hon Bro, gwechall ken glac'harus :  
Mouez kleier Breiz-Izel o tiston heb ehan.

En despet d'ar pellder, d'ar c'hurun, d'ar safar,  
E tarnij 'trezek d'imp he c'hanaouen, he geiz ;  
Mouez sklintin hon c'hleier a zigor d'imp hon c'hreiz  
Hag a voug 'us d'hon tal diougannou ar glac'har.

Mir da spi, Barz breizad ! En-keit ha ma stourmi,  
Pa zeuio an enkrez da derri d'it da nerz,  
Pa 'n em gavi bec'hiet dindan poan ha gwall-berz,  
Mouez Breiz a-bez a gan : BARZ BREIZAD, MIR DA SPI !!

ROC'HLANN.

kaned nag evit miret ouz ar re-man da zigouezout en Europ evit skora ar re-Unanet. Unan eus al listri splujerien o doa kaset ouz listri an Amerikaned a zo bet goueledet gant ar re-man.

Dimerc'her, 4 eus ar miz, an Alamaned o deus kaset adarre nijerezed, — en-dro da bevarzek a oa anero, — da c'hournijal a-us da Vro-Zaoz. Losket o deus bombezennou ouz Harwich, eur gêr war ribl ar mor en haunternoz da aber an « Tamiz ». Lazet pe c'hloazet o deus eun 50 bennek a dud. Diou eus an nijerezed-ze a zo bet diskaret gant ar Zaozon.


**Miz Gouere Miz santez Anna**

Miz santez Anna, patronez Breiz, eo miz Gouere. He fedi a dleomp ma c'houlenno digant Doue digas termen

d'ar walen, hag erbedi d'ezhi hon c'henvroiz a zo er brezel.

Setu aman eur pennad tennet eus lizer eur martolod a Vro-Wened a oa en em erbe let da zantez Anna hag a zo bet savetekt gant. Embannet eo bet e lizer gant « Kroaz » Pariz e miz Mae diweza.

Hon lestr-brezel, emezan, a oa aet en donnyor da ambrouz listri-drelien, daou lestr teir-gwern ha daou lestr all bihanoc'h.  
Ar meur... , p'edon war ma zroc'hed, war-dro hanter-noz, e voe skodet hon lestr gant eun darzerez er babourz (tu kleiz), en e greiz, e-kenver d'ar gaoter. Skrijus e voe an darzaden hag e koueza a trejou a bep seurt en-dro d'in. Radek a ris war-zu aroz (penn a-dreñv) al lestr, rak ar penn a-raok a vezuas kerent. Nemet, p'edon o vont d'en em deurel er mor, e welis dindanour ar rod-vinz a droe c'hoaz. Mont d'ar strad a rankis gant al lestr. Dont a ris a-benn da zavel war









**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bal Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Grez ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An Itron Blanc..... 4 real.  
An aotrou E. Lenormand. 20 real.  
Trugarez en hano hor zoudarded !  
A-unan gant hec'h aluzen, an itron Blanc a skriv d'imp, er brezoneg ar reisa eul lizer mat, ennan ar menoz man, a zo moarvat menoz kement gwir Vreizad divröet : « Eur blijadur vras evidoun eo lenn yez hor Bro, ha me ker pell diouti ! »

**Taolen ar Brezel**

**War hon talben an Alamanned  
a goll o foan.**

War hon talben an Alamanned a zalc'h da goll o foan. Kanolia ha taga a reont aman hag a-hont. Beteg an « Den-marø », hag a oa damzioul pell a oa, a zo bet dibonet ennan hekleo ar ganoliadeg.

Kerse a zo gant Gwilherm dre m'ea deus ranket koll « Hent an Itronnez ». A-hed an hent brudet-se en em gav eun nebeut lec'hiennou war an uhel hag a vije a bouez d'ezan adkemeret : krec'hien ar « Pantheon », mereuri ar « Boyère », spernen « Chevirigay », mereuri « Froidmont ».

Disul ha dilu diweza, an Alamanned, goude ren eur ganoliadeg ar stanka ouz ar penn-lec'hiouze, o deus asailhet a vras. Dic'honid, kollus kenan a zo gwaz ! ez eo aet an taol ganto : dizarbennet e voent dre-oll eus ar starta. Eur pennadig toziou hepken o doa tizet derc'hel e kreiz an talben-ze ; diframmet kerent e voe diout, ken n'o deus tennet trouez ebet eus o holl strivadennou !

**Ar Zaozon a zalc'h ganti en  
Hanternoz.**

Ar Zaozon a zalc'h bepred da gelc'ha strisoc'h-strisa war gêr Lens. Da gredi eo e ranko an Alamanned ober o c'hiladen adarre diouz an tu-ze. Uheloc'h en Hanternoz, eus kêr « Ypres » betek « Nieuport », war aod ar mor, ez a bemdez ar ganoliadeg war greski. An 10 eus ar miz, an Alamanned o deus agadet e Nieuport ha dalc'het eun nebeut eus an tuniennou traez en em led, el lec'h-se, war an teven. C'hoant o dije, evit doare, da argali adarre war stêr Yser. Harz a gavint da vat gant kanolioù bras ar Zaozon !

**Ar Rusianed a c'hounid eur  
c'haer a drec'h !**

Eman bepred sellou an holl ouz ar Rusianed o deus adkroget start da vont war raok.

Ar 7 eus ar miz o deus asailhet adarre er C'halsi ha graet eun eur mil beanak a brizonerien.

An 8 hag an deiziou war-lerc'h, Korniloff, unan eus o brudeta jeneraled, a zeuas a-benn da derri linen an enebourien en-dro da Stanislaou, er c'hreisteiz da Lemberg, kêr-benn ar C'halsi. Toulet o hent d'ezo da redek war-raok, marc'hegerien ar Rusianed, evel eur frou-dour dic'hannet, en em strinkas e-touez an Alamanned. Kemeret e voe da brizonerien 7.000 a zoudarded ha 131 ofiser gant 12 kanol bras.

Da heul, kêr Halicz war stêr Dniester a zo kouezet gant ar Rusianed gant 2.000 a brizonerien ha 30 kanol. Eur c'haer a c'hounid eo evit hon c'heneiled, rak, ouspenn m'ez eus e Halicz ponchou war stêr Dniester, en em gav enni ivez penn eun hent bras war-zu Lemberg, kêr-benn ar C'halsi. An 11, o deus kemeret eur gêr all, Kalusz.

A drugarez d'an holl drec'hiouze, ar sperejou, hag a oa aet eun tammig irel er Rusi gant an dispac'h, a dsav sauezus ! Gortoz a dleomp e pouezo kalz ar Rusianed hiviziken war zigouezioù ar brezel !

**An Amerikaned a zigouez bepred ;  
trouc'ha a reont ouz pour-  
vezerez an Alamagn**

An Amerikaned a zigouez bepred e porziou-mor war ar mor Bras n'heller ket o henvel. Ar re o deus o gwelet a zo a-unvan evit lavaret ez int stummet hag urziet dispar. Tud war-raok ha dilu e tiskouezont beza. oc'h ober o holl bourchasou prim-ha-prim, kuit d'en em amparvarzi en eur bern paperachou evel m'eman ar c'hiz er Frans.

Derc'hel a reont bremen piz-hapiz war ar stadou er-maez a vrezel, dreist-oll war ar « Sued », a zeue dre an hantererez anezo pourvezerez e leiz d'an Alamagn. Hiviziken e vo gwasoc'h gouzanvet c'hoaz en Alamagn gant an naonegez hag an dienez eus an traou reta evit ar brezel.

Da heul ez eo kresket an nec'hant gant an Alamanned, ken m'en deus gouzanvet Gwilherm eur c'hannad da Gambre Berlin, hanvet Erzberger, da gomz duag ar re-all, en eur brezegenn vras, eus ober ar peoc'h hep klask laerez traou an

nesa. Biskoaz kemend-all ! Red eo e ve ar Voched gwall-zigalonekaet.

**War vor hag en aer.**

An 19 eus ar miz tremenet, eul lestr splujer gall, an « Ariane », a zo bet tarzhet ha kollet er mor Kreizdouarek.

Disadorn diweza, 7 eus ar miz, eur strollad nijerezed alaman nive-ros, p'edo ennan 21 nijerez, a zigouezas diouz ar beure a-us da Loudrez. Leuskel a rejont bombezennoù ha laza 40 den ; tost da 150 a zo bet glozet.

En hevelep deiz, pe gentoc'h en noz etre ar 6 hag ar 7 eus ar miz, 11 eus nijerezed ar Fransizien o deus bombezet kêr « Trèves » en Alamagn, e-keit ha ma vombeze c'houec'h nijerez all kêr Ludwigs-hafen o lakat an tan war eul labouradeg vras eus an Alamanned.

Brava taol a zo bet graet gant eur marichal al lojeiz hanvet Gallois, a zo aet gant e nijerez betek a-us da di Krupp, en Essen, e-lec'h e vez graet kanolioù Gwilherm. Kuitaet gantan ar 6, da nav eur noz, e oa en-dro da beder eur ha kard antrojoz-beure, goude ober war nij tost da 200 leo ha bombeza stank kêr vrudet ar c'haolioù.

Diouz o zu, nijerien Bro-Zaoz o deus graet eur c'haer a daol : aet int betek a-us da borz-mor Konstantinopl, kêr-benn an Turked, dilu diweza, ha stlapet bombezennoù ouz al listri-brezel a oa heoriet ennan. Meur a lestr-brezel a zo bet tizet ha labezet ganto, en o zouez ar « Goeben », lestr-reder an Alamanned a oa en em repuet e Konstantinopl abaoe penn kenta ar brezel.

**MICHERIOU NEVEZ**

Gant ar brezel eur c'halz a dud  
A zo, me gred, kresket o brud ;  
Micherieu nevez 'vit an holl  
A vez graet en amzerioù koll.

Peb den a zo bremen soudard  
'Vit hon difenn diouz an trubard ;  
Holl e c'houezont mat ar vicher,  
War vor, war zouar, 'vel en èr.

Gloar hag enor d'hon zoudarded !  
Kaeroc'h 'vito n'eus ket er bed ;  
Mesk an trubuilhoù diniver  
Kalonekoc'h ze o c'haver.

Ar gadarnded, an ampartiz,  
'Touez ar C'hallaoued, ar Vreiziz  
A ya bemdez atao war gresk  
Ken 'vo hon bro dishual-ouesk.

Met va menoz n'eo ket, va zud,  
Komz eus an traou-ze a wir vrud ;  
Va fluen ne ouiche, moarvad,  
Ober eur seurt labour ervad.

C'hoant am eus 'ta, eur pennadig,  
Da gana d'eooc'h eur goz sonig  
War ar micherioù bihan-ze  
'Weler dre-oll noz ha beure.

Gall pe Vreizad, 'pad ar brezel,  
Eus eun toullig 'ra e gastel ;  
Pep-hini, gant e ouiziegez,  
Hen lak kaeroc'h-kaera bemdez.

'Vit envori gwreg ha douisig,  
Eun daolen vrag, eur skeudennig ;  
'Vel e psp ti reizet ervad  
E vo gwelet imach hon Tad !

Heb beza painter, orfeber,  
Met soudard bihan, artilher,  
Gant begou gwenn ar bouledou  
Buhan 'vez graet bizaouedou.

— « Eur bizaou d'am fried ken ker  
Sur a gasin, a lavar Per. » —  
— « 'Vit va deus bihan, Janedig,  
Unan a rin, eme Jakig. » —

Job, eun den a basianted,  
A labour tenn 'vit ar merc'hed.  
— « 'Vit va filhorez 'rin end-eun  
Eur chadennig vihan e reund. » —

Lod all a zo dornet ken mat  
M'o deus uhelloc'hik mennad :  
Eur braouig pe nijerez !  
— Kaset 'vint d'au ti-mirerez. —

Ped all gant « Kodak », « Photo-plait »,  
Traou estlammas 'do kemeret :  
Bez eur mignon kavet dre chans,  
Keneiled maro 'vit ar Frans !

Eun dea a skiant, desket-mat,  
A zalc'h tud poan 'n o daoulagad ;  
'Vit tremen buhan an amzer  
E reont kador, broust pe baner.

'Raok echui 've deréat  
Eus ar spered komz eur pennad ;  
Er foziou don, en tinellou,  
Petra 'rafed 'met hunvroù ?

Lod 'zo, me 'gred, a studi tenn,  
Re-all a skriv lizer pe 'lenn ;  
Kerdin ken skanv an delennig  
A vez stignet ivez prestik.

Piou n'en deus eur vicher nevez  
D'e frealzi fin d'an dervez ?  
Bebet ar micherioù bihan !  
Hon diskuiz 'reont diouz an emgann...

YANN MARI NORMAND.

**Kartennou-post**

Lennet em eus gant ar vrasan plijadur pennad Gourvil diwar-benn ar c'hartennou-post hudur, warne skeudennou breizek, skignet gant ar C'hallaoued dre hon bro







PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall. 2 skoez evit ar bioion estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER. Kas al labourion d'an aotrou Vallee, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ane

Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned » d'he c'has da zoudarded ar Vro

Y.-M. Normand..... 20 real. Trugarez a greiz kalon d'hon lenner ker, a gav an tu, hag hen en talben-brezel, da zigas da « Groaz ar Vretoned » eun aluzen ker madeleuz, a-unan gant a zoniou dudius!

Enor d'ar Vretoned !

Eman ar 410vet rejimant, ennan e leiz a Vretoned, o paouez beza laket war daolen-enor an arme gant ar meneg-man :

« Karget, ar 16 a ebrel diweza, da asailh' ouz « Marc'heien Courcy », eun taol eus an diësa dre ma oa krenvaet-tre ar grec hien-ze ha n'edo ket harpet ar rejimant, en deus, gant ar brava herder, kemeret al lec'h, o tispenn teir linenn alaman dioustu, ar pez a zigasas da heul eur gounid war-raok eus ouспен 1500 metr.

Ar 17 hag an 18 a ebrel, n'en deus ket termet, daoust d'e gollou pouenner, da gerzet war-raok evit dont da gejs gant ar strolladon en dehou d'ezan ha digas sikour, diouz an tu kleiz, d'eur vrigaden en argoll.

En deus miret e-pad eiz deiz an dachenn c'hounezet, oc'h astenn anezi dibouez gant eun dalc'husted dispar, o tizarbenn da vat an holl eneb-sailhou, ober eun arakaat a 500 metr dounder, kemeret en tu-hont da 400 prizonier, 1 kanol, 11 lombezenner, 12 mindrailherz ha biovion all e leiz, hag oc'h adc'hounit 3 kilometr-karrez donar, an hanter anezo er-maez eus an dachennad a os bet merket d'ezan. »

Gloar ha meuleudi d'hon c'heuvroiz a oar d'erc'hel ken uhel, en talben-brezel, brud-vat hon mamm-Vro, Breiz !

Taolen ar Brezel

Gounidou ar Fransizien.

Ar 14 eus ar miz, e-keit ha m'edod o lida e Pariz goul ar Republik, en em ganned start war an talben.

An Alamaned o deus asailhet adarre ouz Cerny, war « Hent an Itronnez ». Meur a wech e tremenas al linennou kenita, el lec'h-se, a zorn da zorn. D'aa diwez, e voe dizarbennet an enebour goude gouzanv kolion bras.

War eun dro, e save krogadour er c'hreisteiz da « Moronvillers », bro Champagn, er reter da « Reims ». Eno ez eus eun nebeut krec'hiennoù a ve a bouez d'an eil ha d'egile o d'erc'hel : « ar Menez uhel », « an Tok-houarn », « ar Vron », ar Menez melegan ». Ar Fransizien a zeuas a-benn, ar 14, da generer an difennou dirak ar « Vron » war 800 metr hed ha 300 metr dounder. Daoust da holl strivadennou an Alamaned, o deus dalc'het ar gounid-ze.

War ribl kleiz ar « Meuse », tost da Verdun, dirag ar grec'hien 304, an Alamaned, dre asailh a vras an 29 a vezeven, o doa kemeret eur pennad foziou-difenn. Diframmet eo bet diganto ar 17 eus ar miz, hag, ouспен, ez eus aet war-raok en o linen war eun talben a zacu gilometr hed hag eur c'hilometr donder. Kollus-bras e voe an emgann-ze d'an Alamaned.

War dalben ar Zaozon.

War dalben ar Zaozon nebeut a gemm. Ar c'hanolion hag an nijerezed eo o deus graet ar muia labour. An 12 eus ar miz, dreist-oll, e voe evit nijerezed ar Zaozon an terna, hag ivez ar brava deiz, abaoe digoradur ar brezel : betek 31 nijerez alaman a voe diskaret ganto en deiz-se.

Ar 15 hag ar 16 eus ar miz, an nijerien saoz o deus bombezet labouradeg vrudet Solway e Zeebrugge hag an henchoù-houarn tro-dro da « Ostende ».

Ar Rusianed er C'halsi.

En eur ober pemzok devez hepke t, ar Rusianed o deus tizet kemeret, er C'halsi, tost de 40.000 Alaman, en o zouez 850 ofiser, 93 pez kanol hn 400 mindrailherz. Digouezet e oant dirak menez Karpat, war ha zou an Aotrich-Hongri hag e kinnigent da vat difourka ac'hane e bro an enebourien.

D'o dizarben an Alamaned o deus galvet war al lec'h-ze skoazellou e leiz. Ranket o deus ar Rusianed, goude dilezel Kalucz, en em zastum en a-dreñv da stêr Lomnitsa a ra d'ezo eun lifenn-natur eus ar gwella. D'erc'hel a reont da vont war-raok el lec'hioù all eus an talben; kemeret o deus Novitsa er C'halsi ha Doucaiwetz war dalben ar Roumani.

Dizunvaniez en Alamagn.

Da heul ar brezel, dizunvaniez a zo savet en Alamagn. Gant an impa-

AR WENNILI

Dre ma 'z eus eur brezel ker rust, ker kriz, ken hir, War an talben an traou aet holl gant tan ha dir, E-kreiz eur seurt taolen lagad ar zoudarded A vez frealzet c'hoaz gant gwel al laboused.

Diouz bouled fia mindrailh pep-hini en em vir, Nan o chom er blenân, — va c'hredi 'rit, n'eo kwir? — Evel ar c'houezidi hag ar vila loened, En don eus an douar e renkomp 'n em guzet!

Met an evnedigou, evnedigou Doue, Daou ha daou vit neiza 'zo deut 'vel warlene; Bras sur o nec'hamant; netra n'eus manet ken...

Eur paour kez gwennili, seder, leun a vuhe, Ha c'hoant d'ezl sevel re-vihan adarre, Deus graet he neizig rond e kornig ma lochen.

YANN-MARI NORMAND.

War an talben, 8 a viz gouere, 1917.

laer eman an holl c'halloud; c'hoant he dije ar Gambr ma vije kresket gwiriou ar bobl, hag, ouспен, e klemm an holl war ar brezel. Da heul prezegen ar c'hannad katolik Erzberger, hon eus komzet anezi ar Zuzun ziweza, Bethmann, ar ministr bras, en deus roet e zilez. Ar « Chronprinz », gantao ar jeneraled Hinderbourg ha Lindenorf, en deus graet henvel war e lere'h eun den en o dourn, Michaelis, en eneb da Wilhelm war a greder. Emeur en gortoz eus digouezioù all a bouez.

War vor.

An 9 eus ar miz, e kreiz noz, ar « Vanguard », eul lestr-brezel eus ar Zaozon, 19 550 tonnell, e-pad m'edo heoriert er porz, a zo bet distrujet-oll gant e bourvezioù poultr o tarza. Evel-se e oa c'hoarvezet gant ar « Iena » e Toulon, eun nebeut bloavezioù a zo. Ar pevare lestr eus ar Zaozon eo a zo bet kollet dre dardadennou-poultr abaoe m'eo dirollet ar brezel.

Ar 16 eus ar miz, eun nebeut listri-kenwerz alaman, — eur 17 bennak, — hag a oa dalc'het en Holland, o deus klasket tec'het ac'hane da zistrei d'an Alamagn. Tizet int bet gant listri-skavv ar Zaozon, e c'houeledas pe a gasas d'en em goll en aod 8 anezo hag a gemeras daou all. Unan hepken en deus gallet tec'het ha kavout repu adarre e Rotterdam, bro-Holland.

Kenavo, eur wech c'hoaz !

Ar vuhe a zisparti hag a anken a renomp c'houec'h miz ha tregont a zo a laka ac'hanomp da garout gwel bro hon c'havel. Seul wech m'he c'huitaomp, seul wech e kimadidout diouti gant muio'h a c'hlac har.

Da bep krouadur savet-mat ha kalonek bro ar c'havel a zo tener. War-zu d'ei e tro hepred ar zellou ! Hi a vez dalc'hat klasket pa zeu amzer an dienez hag an nec'hamant. Ha, mar dalc'h tost pep krouadur da vro e gavel, tostoc'h e talc'h c'hoaz ar Breizad. Ar pez a zo dis-henvel en heman diouz ar grouadurien all eo, en gwiriou, ar garante-vro. E vro, hag a zo kaeroc'h, he deus dre eno muio'h a grog war e galon, hag e galon, a-bend-all, a zo teneroc'h.

Bro gaer! Kalon dener! Spered uhel! Petra a fell ouспен, gant ar menozion kristen, evit ober eur zoudard taer ha didre'h?

Kal e em c'houlen perak ez eo ar Breizad soudard mad. Setu aze perak ! Arabad klask tra-all, nag e lec'h all.

Ar Breizad a gar e vro. Ha penôs n'he c'harfe ket? Nag a gemm etrezi hag ar broiou all! N'em eus ket da zispleg he c'haerder. Anavezet eo hag an holl hen anavz hep poan. Eun dra all eo a garten komz anezan, anveet m'eo c'hoaz ervad; ar c'hrog bras he deus hon bro war-nomp, an evrusted a gavomp enni hag ar stern mad eo hi evidomp.

La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLEE (5<sup>e</sup> Edition)

# Chom e Breiz-Izel

Da L. Lalouet.

stern e-lec'h ma finvomp gant sezamant, hep daon rak netra.

N'ouzomp ket perak, met, adalek ma lak ar Breizad e droad war zouar e vro, e kav kerent eun diaze all ha dialani a ra ivez skanvoc'h. Aer hon bro a zo yac'husoc'h pell, ha n'eo ket yac'husoc'h, ho pet sonj, war zigare eo hon bro-ni, — kement-man a vefe barzoniez ! — yac'husoc'h eo abalamour n'eman ket enni kredennoù diboell ar broiou all ha n'he deus ket ivez da c'houzany o skoueriu fall...

P'ea em gavomp war hon c'hiz evit eun nebeut deveziou hepken, ar zonjou diboell a c'hoantis mezevenni hon skiant-vad, a dec'h anezo o-unan. Ar Furnez, — na welemp ken an dremm anezi, pe eun dremm ken kailharet ! — a zav adarre skedus dirazomp, hag, e lec'h ar c'houzou brein, ar vuhe fall hag an forfedou a bep seurd a heuilh ane, ne gavomp en-dro d'imp nemet tud o poanial noz-de, o hirvoudi war ar walen, o pedi evit o zad, beo ha maro, hag o c'hortoz, gant fizians kristen, ma plijo gant Doue sevel ar reuz diwarnomp...

O kelc'hia eun daolen ken frealzus hag a laka ar peuc'h er galon, ez eus neuze eur vro binvidik-mor, gant eestou puilh e-leiz ar parkou, avalou bec'h ar skourrou, foenn o teurel c'houez-vad ha loened, kezeg ha saout, o frinkal pe o vale pouezus gorrek er roziou hag er c'hozennoù leun a beuri.....

Taolen a beuc'h evit ar galon, a laran. Ya, hag a evurusted ivez, kankouls hag a zudi evit ar spered. Ne glevit ket o sevel a-ziwarni kan ar e dudoned er c'hoad uhel ha kan a hirnez hag a denneridigez an dartzunel en traouiennoù ?

Seul wech ma tigouez d'in distrei d'ar gêr eur-pennadig, seul wech e laran : Poent e oa !

Poent e oa ! rak sonj ma bro dispar ne oa mui, d'am c'hreden, bev awalc'h em diabarz. Poent e oa ! rak dinere em gavon, ha netz neve em boa ezomm. Poent e oa ! rak moren hudur loustoniou ar broiou all, — biken ne ziskuilhomp a-walc'h al loustoniou-man ! — am heuge hag a bellas dionzin kaerder, glanded hag sazen yac'hus ma Breiz. Poent e oa ! rak evit kenderc'hel em boa ezomm bevans neve, nerzus, padus.... ha ma Bro hepken a c'hall e rei d'in !

Ha, pa gitean anezi, e tec'han bepred frealzet, seditaet, kennerzet, krenvaet, ha gwelloc'h Breizad adarre.

Hon Breiz, Bretoned ha Bretonezad ker, a zo eur vro vuzudus !

Zevet harz ket ac'hanon, ken lies ma tec'han, da vezan poaniet, poaniet bras, ha da laret d'ei gant karante, tra ma welan eun tamm eus he douar : « Kenavo, eur wech c'hoaz ! Kenavo ar c'kentan, bro ma c'havel ! »

AR YBODET.

## KELER EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou mat eus hon daou Renner hag eus hon o'henlabourerien.

Kelou mat a zo deut d'imp eus hon daou Renner, an aotrou Moal, distroët war an talben goude tremen eun nebeut deiziou e kêr, hag an aotrou Bocher, a zo breman martolod e Toulon.

— « Setu me adarre distro war ma lestr, a skriv heman d'imp, warlerc'h diou nozvez hag eun devez hanter hent-houarn. Adalek ma c'hallin kaout dirazou daou wenne-gad amzer, e kasin c'hoaz eun dra pe dra da « Kroaz ar Vretoned. » — En hano an holl trugarez en a

Pa gousk ar c'han en neiz, pa zon ar c'hloc'h en tour,  
Am heol 'welan a-bell war-nes kuzat en dour,  
Ar bléne vorennet, ar roc'h gwialet e moug,  
Ar c'houmeul o redek 'vel oc'h en em ambroug ;

Me a glev er menez ar baotred o youc'hal (1),  
E giz ar Gelted koz, en amzeriou gwechall ;  
En-dro d'an torgennou, mouez al lern o c'harinat  
O kas ar c'honifed pe war roudoueur c'had ;

Me a zant en avel c'houez an douarou koz  
A ra pep tra gwelloc'h, a lavar d'in en noz :  
« Er-maez eus Breiz-Izel 'vi atao eun estren  
Dilezet, divroad, hiraezus (2) da viken ! »

(1) Giz youc'hal Kerneviz a die beza koz-koz, rak ma kaver anez gant Skoziz, eur bobl get'iek evelidomp, du-hont en Hauternoz.

(2) Hiraezus pe hirnezus a zo stad eun den, « hiraez » pe « hirnez » ennan, gant « keuz d'e vro » p'en em gav pell diouti.  
IVONIG PICARD

raok d'hon Renner ker, dreist-oll mar gallfe reiz, evit o moulz aman, e notennou-brezel a vije ken dudus da lenn.

Kelou mat a zen d'imp ivez digant hon mignon ha kealabourer ker, « Klaoda », a zo bepred oc'h ober en-dro d'ar « zilzigennoù », nemet en deus chenjet « secteur ». Setu aman e lizer. Trugarez d'ezan evitan ha Doue da roy d'ezan heb dale ha d'hon holl genlabourerien all ar c'hras da zont en-dro da labourat gant « Kroaz ar Vretoned » evit miret da Vreiz he Feiz, he Yez hag he Giziou mat !

War dalben ar brezel.

Aotrou ha mignon ker,

Eur pennad brao a zo n'em eus ket kaset d'oc'h eus va c'helou. N'eo ket, koulskoude, ma ankounac'han ar vignoned chomet du-ze e Breiz-Izel... Nan, pell ac'hano endeün ! Va spered a nij dalc'h-mat daveto hag en deiz hag en noz, ha mall am eus da zistrei da genderc'hel da labourat a-unan ganto adarre evit miret da Vreiz he Feiz, he Yez hag he Giziou mat.

Hogen, er brezel emaeoun. Labour a zo, tra pe dra dalc'hmat... Ni ne deomp morse e diskviz, nemet er goanv a-wechou.

Yac'h oou atao a drugarez Doue, Ma deraon mezeven eun bet oc'h ober eun dro er gêr, hag em eus bet ar blijadur da gavout va fried yac'h hi ivez. Brae eo tremen eiz dervet gant e dud ; hogen na buhan e tremenn ! .....

O goulenomp gant feiz digant Doue ma roie d'omp dizale an Trec'h hag ar Peoc'h ! .....

Va goure'hemennoù da holl lenne-rien « Kroaz ar Vretoned » ha plijet ganeoc'h hoc'h-unan, mignon ker, digemeret gwella envor he kenvroad

KLAODA.

Eul lizer mat hon eus bet digant Yann Choleau. Kavout a ra an tu beteg en talben-brezel da zestum notennou evit labouriou da zent. Doue d'e viro bepred, d'ezan da gerzet, goude ar brezel, e penn ar Vretoned a beanio da griski buhez ha pinvidigez ar Vro !

Trugarez a lavaromp aman ivez d'an holl vignoned o deus skrivet d'imp, nevez 'zo, ha n'omp ket evit diskriya o lizerou d'ezo hini ha hini evel a garfemp ober. Trugarez dreist-oll d'hon barzed nevez, diouanet er forziou-difenn, hag a zigas da « Kroaz ar Vretoned » labouriou ken kaer. Setu aman eur pennadig-lizer diwar o fenn :

« Reseyet em eus « Kroaz » disul diweza, ha warni daou bez kaer-kenan « Barz, mir da spi » gant Roc'hlan, hag « An diouz Vreiz » gant

Telen Aber. Eva am eus graet o c'houzou kentoc'h eget o lenn. Kalz frealz a zigasont d'am c'halon ha d'am spered e-kreiz trubuilhou ar brezel. Mil gwech trugarez d'ezo ha d'an holl varzed a skriv war « Groaz ! »

An hini a skriv al linennou-ze a zo e-unan eur barz-soudard eus ar gwella, gouestlet e bluen gantan da « Groaz ar Vretoned », Yan Mari Normand. Trugarez d'ezan ivez e-touez ar re genta !

## Eur gwalen all an Hudurniez

Ar zizun all e oa meneg aman eus gwalen ar Vezventi, a ra breman ar gwasa da drelati spered hon zoudarded ker, pa zeout en-dro d'an talben eus mont e « permission ».

Eur walen all, a skriv d'in unan eus hon leunerien, an ezuzas hini, eo gwalen ar wall-vuhez, an hudurniez dichadennet gwasoc'h eget biskoaz da heul ar brezel.

En holl gêriou, evit hon zoudarded yaouank, nag a wall-skoueriu evel eur mor diroll o klask lonka an eneoù da c'hortoz d'ar Vrohañ laza ar c'horfou !

Doue hag a oar tenna ar vad eus an droug a ro d'hon zoudarded ar wella skoalet ouz ar walen-man gant hon beleien a zo bet diframmet diouz o farroziou da vont ganto d'ar brezel. Ra 'n em vodo, ar muia ar gwella, hon faotred yaouank a Vreiz-Izel en-dro d'ar veleien vat a zo ganto en arme !

Ha pedomp ivez evito an evuruzez Janed Ark. Kent brezeli ouz an ene-bourien da zieubi dioute bro-Frans, e renkas an Evuruzez ober brezel, en ar-raok, d'an Hudurniez a rene en hec'h amzer evel ma ren breman, siouaz !

Digas a reomp da zont ivez e vez kaset « Kroaz ar Vretoned » evit netra da gement zoudard he goulen, da zidui e amzer ganti ouz he lenn ha tanva enni eur banne aer yec'hedus Breiz-Izel.

## Pardon santez Anna

Diriou e oa bet lidet pardon santez Anna Wened gant muioch a c'hred eget biskoaz en abeg d'ar brezel.

Kannaded ha senedourien Bro-Wened e doa skrivet en arak d'an aotrou n'eskob evit disklaria o doa graet o menoz da vont d'ar pardon evel renerien ar Vro, holl a-gayred.

E dibenn ar miz-man gouestlet da zantez Anna, pedomp-hi ma viro, hor c'henvroiz er brezel ha ma sello »

A bep korn a Vreiz-Izel  
Deuomp da zaoulina,  
Evit goulen he skoalet,  
Ouz treid santez Anna ;  
Hi 'zelaouo hor peden,  
Ar bedan virvidik  
A zav eus kreiz hon anken  
'Vit hor Bro reuzeudik.

Gwechall he deus teurvezet  
Dont e Breiz, e rator  
Digeri d'ar Vretoned  
Holl dennoù he bennoz !  
En hor yez, e brezoneg,  
E touds d'eur Breizad.  
Da Nikolazig, tiag,  
Rei d'imp-ni hor mennad.

Abaoe, nag a hini,  
En hec'h iliz vrudet,  
N'o deus ket bet diganti  
Grasou e leiz, yec'hed !  
Breiz, dre anaoudegez,  
A vennas dizale  
Hec'h henvel da Batronez  
War hec'h holl vugale !

Hirio, o santez Anna,  
Pa 'z oc'h ker galloudus,  
Hag ouz hor Breiz-Izela  
Bepred ken truezus,  
'Teuomp d'ho pedi 'kevrad  
'Vit hor Bro en anken...  
Oh ! mirit ho Pretoned  
Ha reit fin d'ar walen !

## Diwar-benn komzou soudarded

Gant « ar Zoudard koz »

Kredi a ran, goude va fennad-skrid diweza diwar-benn « permissionerien Breiz », e c'hellan peurechui va labour dre gomz eun tammig eus ho marvailhadennou er brezel.

Siouaz, ar Vretoned, koulz hag ar re-all, n'en em blijont ket o komz hepken eus a Vreiz, eus o labourio, eus o ziegezh. Ha, koulskoude, bebez leveznez a dlefe beza e kalon eur Breizad o komz eus an traoù-man : gwreg, bugale, parrez, parkeier, eost, loened, ar Vro hag hec'h amzer da zont ! Nan, gwel eo gant meur a hini, siouaz, kaout en o genou komzou divalo, komzou lous, komzou hudur, diwar-benn merc'hedoù ha ne zellezont ket e ve digoret ar genou evit komz anezo ! .....

Me hec'h ped, kenvroiz, taolit evez ouz ho komzou. Daoust hag er gêr e komzit evel-se ? — Nan, neketa ? Neuze, arabad eo, war an digarez emoc'h er brezel ha pell diouz ar gêr, tenna brud fall war hor Bro-garet. Laos-komp a gostez ar c'houzou hudur ! Bezomp aman ar pezh e vezomp er gêr, da lavaret eo, tud kalonek, tud a vrudivad, start en hor c'haranter-vro hag en hor c'hredennou kristen !

Ya, ma vefe lavaret d'oc'h diwez-atoc'h ho pesa brud fall en arme abalamour d'ho komzou, ne vefec'h ket laouen o klevet se. Ha, koulskoude, daoust ha n'eo ket gwir re allas ar pezh a lavaran ? .....

Rak-se, eta, va selaouit ! Breiz a zo brudet-mat. Stourm a ra he bug-de gant kalon. Dalec'hit da veza direbeck ! Etrezoc'h komzit eus ar pezh a ra plijadur d'oc'h, eus an traoù an tosta d'ho kalon : gwreg, bugale, kerent, ti-guez, labourio, parrez, bro Breiz. Met en em ziouallit diouz ar c'houzou hudur. Laoskit ar re-ze d'an dud difeiz !

E peb amzer hag e pep lec'h, greomp hor galloud evit derec'hel uhel brud-vad hor Bro-garet, Breiz-Izel !

AR ZOUARD KOK.

Trugarez d' « ar Zoudard koz » evit e alioù ker-fur ! Nemet, arabad ! hen ankounac'haat, ne vez peurliesha o ren an diviziou dibrenn ma komz hor mignon anezo nemet ar re a zizez o brezoneg evit en em rei d'ar seurt luehach a glever gant ar c'hallaoued. Dalc'homp d'ho brezoneg ! Hen hon difanno ar gwella ouz hudurniez ar c'hallerien.

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar bioiou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

**aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudard ar Vro**

Adjutant Souliman... 4 real hag eur c'houmanant.  
Trugarez a greiz kalon d'ho mignon ker a ro euz zikour ken talvoudus da « Groaz ar Vretoned » hag hon en talben-brezel !

**Taolen ar Brezel**

**Asailhou start gant an Alamaned war dalben ar Franzizien**

Ar zizun dremenet, an Alamaned o deus dalc'het da asailhi a-vras ouz « Hent an Ironezed ».

Ar 18-19 eus ar miz e klaskjont kemeret evel-se uhellenou ar « C'hevioù krenvaet » hag ar « Galiforni » er c'hornog da gêr « Craonne ». Dizarbennet e voent war an daou gorn ha ne tizjont gounit, er c'hreiz, nemet eur pennadig foziou peur-ziskaret.

A-benn an 22, o deus adkroget ganti, goude toulla an hent d'o zoudarded gant eur ganoliadeg skrijus eus o c'hanoliou brasa. Dre harp ar ganoliadeg-se e teujont a-benn da zerc'hel eur pennad eus al linennoù kenta.

An 24, al linennoù-ze a zo bet adkemeret en o lez gant ar Franzizien, ken n'ez eus manet gant ar « C'hronprinz » a-ziwar an holl asailhou nemet kollou tud eus ar gwasa !

Pelloc'h war-zu ar c'huz-heol, endro da « Cerny », an Alamaned o deus taget ivez meur a wech, hep gounit tachen ebet.

**War dalben ar Zaozon.**

War ribl mor an Hanternoz, an Alamaned o doa tizet gounit, ar zizun all, eun nebeudig tachen en tuniennou traez war-zu Newport. Abaoe o deus klasket astenn an dachen-ze. Dizarbennet int bet bep gwech gant ar Zaozon.

Ar re-man o deus dalc'het, an 23 eus ar miz, eun darn vat eus eur gêriaden hanvet « Arvon », er c'hreisteiz da « Lens », o strissat c'hoaz ar c'helc'h war ar gêr-ze.

**An dispac'h a ra gaou bepred ouz ar Rusianed.**

Ar Rusianed n'o deus ket gallet tenna eus o zrec'h diweza er C'halsi ar gounid e oad o c'hortoz o dije bet ; ha ze en abeg d'an dispac'herien : ar re-man o deus badet dizurz ha dizentidigez beteg en arme.

An 21 eus ar miz, ar zoudarded dizuj, o plega dirag an Alamaned, o

deus lezet anezo da vont war-raok. Da heul, setu kollet gant ar Rusianed diou gêr a bouez eus ar C'halsi, Stanislaw ha Tarnopol.

Da glask distrei an enebourien diouz ar C'halsi, jeneraled ar Rusianed o deus taget en hanternoz, en-dro da Dwinsk. Deut eo an taol da vad : toulet e voe linenn an Alamaned ha kemeret eur mil bennak anezo da brizonerien. Nemet an dizujidigez a oa en em zilet e-touez ar zoudarded a viras adarre da vont war-raok.

E keit-se, ministr ar brezel, Kerensky, galvet da vinistr bras, a boago a-zevri da zizamina e vro diouz an dispac'herien a zo en em vodet e Petrograd en-dro d'eur gwall-vesker hanvet Lenine, hag hen en em werzet d'an Alamagn. Salo ma teui a benn eus an taol-labour-ze a zo tremen koulz e gas da vat !

**War vor hag en aer.**

Eul lestr-dre-dan amerikan, an « Navajo », taget er mor Bras gant eul lestr-splujer, en deus goueledet anezan a dennou kanol.

An nijerien a zalc'h da labourat start. Eus an 11 d'ar 17 a c'houere, ar Zaozon n'o deus ket diskaret nebeutoc'h eget 88 nijerez alaman : 42 en emgannou-aer, 3 diskaret krak a dennou kanol, ha 43 ranket d'ezo diskenn goude beza bet tizet.

Disul, an 22 eus ar miz, en-dro da eiz eur beure, nijerezed alaman, eus 15 da 25 an niver anezo, a destas ouz aochou Bro-Zaos a-us da gêriou Felixtowe ha Harwich.

Digemeret int bet gant eur vombezadeg stank, ken ma rankjont en em zisranna ha tec'het war o c'hiz. Unan anezo a zo bet diskaret.

E kêr Felixtowe, e lec'h o doa lesket bombezennoù, ez eus bet 11 den lazet ha 26 gloazet.

**Eur vodadeg vras eus ar re-Unanet**

Eur vo ladeg eus ar re-Unanet a zo bet dalc'het e Pariz ar 25 eus ar miz. Renerien, jeneraled hag amiraled vrudet eus an holl vroioù kevredet ouz an Alamagn a ca diredet d'ar vodaden-ze. Komzet ez eus bet, dreist-oll, eus ar Balkanioù.

**LEVENEZ**

D'am breur karet A. N.

Tri bloavez 'zo, pebez anken !  
Straflibet 'voe kalon peb den :  
Holl e renkemp eta kuitât  
Bugale, pried, mamm ha tad.

**Tenner mouded Yun Elez**

D'AN AOTROU JONCOUR, SKEUDENNER

Da viz mae, mintin mad, en e veg eur c'hornig,  
Ha dindan e gazell peurvuia eur balig,  
Alies diarc'hen, e kerz war-zu ar yun  
E-lec'h ma vez kavet bep devez eus ar zûn  
En eun toull kailharek, kuzet beteg e choug :  
A-wechou ne weler nag e benn nag e c'houg

Eun dro, en eur ziskan eus a venez Forc'hen (1)  
Anavezet e Breiz en abeg d'e dorgen,  
E c'hoantaen klevet gant eun tenner brudet  
E petra e sonje en e boullou mouded.

— « Gouzout a ran ervat ez oc'h den galloudus.  
« Met bez' eo ho labour kement-se talvoudus ?  
« En eur vro paour e koad, pet hebdoun, er gêan.  
« A varvfe gant ar riou, na boazfe ket o c'hoan ?  
« Me a vefe evrus m'em befe mignoned ;  
« Perag, eta, ez oun gant an holl disprizet ?... »

« Kemeret ' vit eun teuz, eur morian, eun touseg,  
« Gwall-gaset gant e-leiz, gant meur a vabouseg,  
« Beteg da eur va fred, pa zebran va zamm kreun,  
« War vord va zoull mouded, pe e penn eur feunteun ? »

« Me a garfe beva e-touez ar re-all,  
« Vel eun den a zoare ha nan eun aveal...  
« Breman n'em eus, siouaz !  
« Met dispri, eur wech c'hoaz ;  
« Ha ' vit kompagnunez ar sparilli treitour  
« O plava misterius, pe evel eur barnour,  
« Ar garc'heiz dianket o repoz war eun troad,  
« O yudal en eabl briz eul labouz divroad... »

« Vel-se, pa gouez an noz war griben ar mein glas,  
« Tilezan va labour evit mont d'an hent bras ;  
« Ha bep gwech 'n eur bellât gant mall diouz Yun Elez,  
« 'N em gavan dizammet ha leun a levenez ;  
« Drant, va fenn a zavan, c'houibana 'ran d'ar bed,  
« Kana a ran d'an nenv, mousc'hoarzin d'ar stered ! »

IVONIG PICARD

(1) E Brenniliz, Menez Forc'hen a zo anavezet e Breiz abalaour d'e dorgen vrudet.

An den yaouank 'vit ar brezel  
A nij, buhan 'vel an avel,  
Karantez wirion en e greiz  
Evit ar Frans hag evit Breiz !

Ha goude rei, a-raok kerzet,  
Eur pok d'e gerent, keneiled ;  
En eur zonzal 'n e zous ive,  
E red evit kutuilh lore.

Met 'vit an den eun tamm en oad  
Na bras 'gwe, sur, ar galonad !  
Pa vez gwreg ha kalz bugale,  
Kalet 'kaver tremen dioute.

Dirag ar Boch vil ha treitour  
'N em strink mil ha mil brezelour.  
— 'Vit difenn hor Gouen hag hor Feiz,  
War zao ! dihunomp paotred Breiz ! —

War an talben, 'vit ar stourmad,  
Deut int, eta, bugel ha tad.  
— Hor Mamm d'comp-holl a zo e poan ;  
Flastromp e benn d'an Alaman ! —

Kalz ac'hanomp a gouez, heb mar ;  
Redek 'ra gwad war an douar !  
Met war hon lerc'h du-ze, er gêr,  
Gwreg ha bugel a jom seder !

Tadou a bemp, goude tri bloaz,  
A labour tenn hag a stourm c'hoaz.  
'Touez ar C'hallaoued, ar Vreiziz,  
Kent 'barz ar spi, an ampartiz !

Met d'it, o breurig ker, Alan,  
Digor eo pelloc'h hent Gwikan.  
— Ganet eo da c'houec'hvet bugel !  
Kerz d'e welet en e gavel. —

Eur paotr \* Alan, laouen, koantik ;  
Va Doue ! na kaer an aelig !  
Erwann, Leou, Fransez ha Yann,  
'Vel Mari 'deus eur breur bihan.

Kalz levenez evit an holl,  
Er Vouc'h, Kerilli, Feunteun-Boll.  
— Nan, ar Quen goz n'eo ket maro ;  
Bugale gaer a zav tro-dro. —

Gloar hag enor d'hon holl verc'hed !  
Kaeroc'h 'vito n'eus ket er bed.  
Gant kalz mammou a bemp pe  
[c'houec'h,  
Frans ! adsavet 'vi deiz an Trec'h !

'Mesk hon tud bez 'ta evurus,  
Da c'bedal ar joa peurbadus,  
War an talben, da vreur bihan  
A gavo kalz skanvoc'h e boan !  
War an talben, 11 a viz gouere 1917.

YAN-MARI NORMAND.

## KELIER RUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou mat a zeu d'imp eus an aotrou Moal gant eur mignon all, Souliman eus ar Merzer, a zo breman adjudant er 41vet rejimant, el lizer en deus skrivet da zigas e goumanant hag e aluzen da « Groaz ar Vretoned ». Eur wech c'hoaz, trugarez d'ezan !

Hon gwellan menoz ivez d'hon c'henvroiz eus ar 79vet rejimant koz, a skriv unan anê, hon c'henvroad ha mignon ker Jannin, al lizer mat-man da Rener koz « Kroaz ar Vretoned » !

En talben, ar sul 22 a viz gouere.

Aotrou Vallée ker,

Setu dija eur miz tremenet aboue em boa ar blijadur da dremen ebiod d'ho ti ha d'ho kwelet. Ma yec'hed a zo mat bepred, a drugare Doue, kenkous ha hini ar vignoned a zo aman evel don eus a Vreiz-Izel. ....

(Goude bezan tremenet eun nebeut deizioù en diskuiz, omp adarre el linen-dan.)

Ar ganoliadeg a zo stankaet diouz hon c'hoste ; startoc'h eo an traoù ! Koulskoude, an enebourien ne loskont ket kement a vombezennou ha ni, betek breman.

A drugare Doue, n'eus c'hoaz den tizet en hon zouez.

Digemeret, aotrou ker, ma gwellan gourc'hemennou.

J.-B. J.

Hon c'henlabourer ker, P. Mocaer, a skrive war « Groaz ar Vretoned » pennadou ken kenteluz diwar-benn « Bubez Lloyd Georges », a zo nevez-zistro da Vreiz. Heb dale e tigaso da « Groaz ar Vretoned » doare e veaj die Vro-Zaoz, Bro-Gambre hag Iwerzou. Ra vo deut mat en hon touez !

## Eur Pennadig Istor Breiz

### Eur ger diwar-benn « Relijion ar Gelted koz. »

Hon mignoned o deus lennet, an darnvuia anezo, an trede levrig eus an « Notennou diwar-benn ar Gelted koz », gouestlet da ziskleria petra e oa « relijion ar Gelted ».

Red eo hen anzav, gwall-nebeut a dra a anavezomp e relijion ar Gelted hag, en abeg da ze, am eus aon, eo e klevet diwar he fenn, kerkouls ha diwar-benn an drouizet koz, « martezeou » a leiz.

Kement-se n'eo ket difennet gant ma ve ar « martezeou » gwirhenvel ha diazezet ar muia ar gwella, war destinao a bouez.

En e levr « La Bretagne » a zo bet skrivet gantan, moarvat, da zidui kentoc'h eget da gelenn, an aotrou Gallouédec a zigouez d'ezan, pa gomz eus relijion ar Gelted hag eus an drouizet, gwall-gostez war du ar « martezeou » breskik ha diharp. ...

Kavout a ra d'ezan penaos ar Gelted, pa zoujont en Arvorig, a amprestas da genta o c'hreansou

## GWERZ DIWAR-BENN AR BREZEL

WAR DON GLAC'HAR AR WERC'HEZ.

Me ho ped, Treinded santel, Doue oll-c'halloudek,  
Gret ma rin eur werz wirion hag a vo talvoudek,  
O komz eus ar brezel 'zo breman war an douar,  
A laka dre-oll dismantr, ha spourin ha glac'har.

Alies 'savan ma mouez heb bezan selaouet,  
Dre ma 'z oun eun den dister hag izel a spered ;  
Koulskoude, Doue, pa gar, 'vit prezeg a gemer,  
Kerkouls ha mouez ar gouizieg, hini an dud dister.

An holl boblou a bep tu 'zeu d'en em zismantri :  
Ne glevan dre-oll er bed 'met klemm ha hirvoudi ;  
Bemdez kalz a vez lazet ha kalz a vez gloazet ;  
Madou, ousspenn, a vil vern dre-oll a vez flastret.

Daoust d'he c'halloud, d'he c'hounnar pobl ebet, koulskoude,  
Ne vo evit kaout an trec'h hep nerz ar gwir Doue ;  
Dre e urz-Hen eo e teu trec'h, gonid ha madou :  
Daoust ma lavar tud dife Doue eo an Aotrou !

Pep tu, moarvad, a garfe tizout da gaout an trec'h,  
Pellât diwarnan pep droug, heb anken ha pep nec'h ;  
Met Doue eo a reizo an digouez da gentan :  
Ar gonid a vo d'an tu 'vo bet merket gantan !

Rak-se 'ta, pa hon eus c'hoant, Breiziz, da gaout an trec'h,  
Pellât diwarnomp an droug, ar c'hollou hag ar bec'h,  
Elec'h dont d'E zisprizan, 'zo gwaz... d'E vallozi,  
E bedomp holl a galon da zont d'hon pardoni.

Hor pec'hejou tremenet goulenomp a galon  
Ma distaolo anezo, gant doan ho keuz gwirion !  
Ya, mar deufe pobl ar Frans da ober evel-se,  
Doue 'zeuy d'hon pardoni, da rei d'imp trec'h ive.

'Nem unanomp a galon, lavaromp holl bemde :  
« Ho pezet ouzimp truez, ni ho pad, hon Doue !  
Astennet ho torn santel ha deut d'hon dibanian,  
Ha ni 'zeuy d'ho serviji gwelloc'h diwar vremen !

Bro-Frans 'zo manet bepred merc'h henan an Iliz ;  
M'ho ped, gret en he c'henver burzudou bras-iskis ;  
War hon holl enebourien reit d'imp trec'h heb dale ;  
Gret d'imp holl bevan 'n ho kras ho mont d'an Nenv goude. »

JULUAN GODREST.

digant Arvorigiz. Ar re-man, emezan, a azeule (adore) nerzioù an Natur.

Neuze e tigouezas an drouizet. Diskar a rejont azeulerez an Natur ha lakaat en e lec'h doueou. Da enori an doueou nevez-ze e savjont sakrifisou-tud.

Nemet, kresket d'ezo o sevenadur, en em rojont muioch d'ar varzoniez ha d'ar prederia : kelennet e voe ar Gelted ganto diwar-benn gwirionezioù uhel evel « divarvelez an ene ».

An drouizet, eme c'hoaz an aotrou Gallouédec, a rde o c'henteliou e doun ar c'hoajou pe e kuz ar c'hevioù ; ousspenn ma oant kelennerien, e oa anezo ivez barzed, beleien santualou pe templou an doueou, ha sakrifisourien. ....

Skrivet ez eus bet aman meur a wech pennadou diwar-benn an drouizet, na oant na beleien santualou na sakrifisourien. Ar genta eus ar c'har-gou ze a oa fiziet en eun doare beleg hanvet « gutuatros » hag an eil a zelle hepken ouz ar « veles » pe « vatis », a oa, ousspenn ze, divinour, pa denne diouganou, pa lenne plane-dennou mar bez gwel ganeoc'h, diwar kourailbou an anevaled a lazet en enor d'an doueou.

Arabad ivez gwall-veska an drouizet gant ar varzed a oa dishenvel o stad hag o galvedigez.

Diwar-benn kelennadurez an drouizet, — na ou ket bet dalc'hmât rde e kuz, evit doare, — hon lennerien a gavo dastumet ar pep sura a heller da dizout er pempvet levrig eus an « Notennou », a zo gouestlet da « Ouziegeg ar Gelted koz ».

Evit pezh a zell mammen genta relijion ar Gelted, kentoc'h eget klask anezi en amprestou digant poblou estren pe, a zo gwaz, e faltazi an drouizet n'ant ket zoken beleien, e tiemp kredi o doa bet ar Gelted o c'hreansou a-zwar-lerc'h o gourdadou

« arian » evel ar poblou all a ouenn ganto.

An « Arianed » a oa eur boblad-tud a veve war-dro an XXVvet kantved kent Hon Zalver, hag a zo bet tadou-koz d'ar Gelted, evel d'ar Romaned, d'ar C'hresianed ha da benna poblou an Europ hag an Azi.

Dre eun dastum koz-kuz a gannaouennou sakr (ar « Vedas »), miret gant Indeziz, e c'heller kaout eun dampskeud eus ar relijion anezo, a oa eur seurt azeulerez darvoudou an Natur : kurun, luc'hed, korventan, kourmou, glao, hag all.

Eun den gouziek, Michel Breal, en eul levr « Hercule et Cacus », ha meur a hini all war e lerc'h o deus disklêriet anat penaos e oa deut eus ar c'hreansou koz-se ar pep brasa a bagañez ar Romaned hag ar C'hresianed.

D'an hevelep gwirizien e tle ivez tenna, moarvat, doueou penna ar Gelted koz.

Da gaout muioch a ziskleriadur war ar poent-se, lenn al levrig pempvet eus an « Notennou » a raemp meneg anezan o tigeri ar pennadman.

Ar re a chom e Sant-Brieg a zo aes d'ezo gwelet skeuden unan eus doueou hon tadou ar Gelted koz, « Taranis », doue ar c'hurun Eman bepred en he zav ha hi miret mat nemet dibennet eo bet, en eur gêriadenn hanvet ar « Rillan », etre Sant-Brieg ha Kintin.

### Diwar-benn ar C'hartennou-post

Ar pennadou a zo bet aman diwar-benn ar c'hartennou-post dismegansou da Vreiz o deus plijet d'an holl. Talvezet o deus da « Groaz ar Vretoned » eun niver a lizerou leun a venozioù hag a alioù mat.

E-touez ar gwella skouerioù a gartennou-post breizek, graet d'ober enor d'ar Yez ha d'ar Vro, eo d'imp

henvel ar re a zo bet savet gant hon c'henlabourer ker, Klaoda, evit hon c'henvroiz eus ar bempvet bataillon e-lec'h e oa a-raok.

En em glevet e oa gant kommandant ar bataillon-ze, an aotrou Kommandant Rouleau, d'ober moula eur c'hann-bale eus ar brava evit ar Vretoned. Hon lennerien o deus bet aman eun tanva eus ar c'hann-bale-ze :

A raok atao ! A-raok bepred !  
Torromp pennou lueh ar Voech !  
An neb a gouez war an dachen  
A vevo etrus da viken .....  
Mervel o tifenn gwir ar Vro,  
Daoust hag hen 'zo kaeroc'h maro ?

Da heul, setu ez eus graet karten-nou-post, ha warzezo ar c'hann-bale, an ton anezan ha skeuden eur zoudard en emgann.

Brao eo ar garten-man ha d'creat kenan da skriva d'ar zoudarded. N'ouzomp ket ha lakaet eo bet en gwerz. Hon lennerien a c'hello hen goulen digant hon mignon, Cl. Le Prat, 71<sup>e</sup> Cie Aérostiers, Secteur 102.

Hor gwella gourc'hemennou 'fezan evit ar skouer-vat en deus roet !

War-ze, e tigouez d'imp eur c'hellou mat. Setu eman an 248vet rejimant, hini Gwengamp, o vont da gaout ivez eur c'hann-bale e brezoneg. Savet eo bet eus ar brava gant « Laouenanig ar Roz » hag e vo moulet aman heb dale.

## Geriou brezonek ha keumraek

Digas a reomp da zonz d'hon lennerien zoudarded e vo kaset d'ezo evit netra al levrig nevez-man a zo talvoudek d'en em glevet gant Kambreiz (« Gallois » e galleg), ez eus kalz anezo en arme Bro-Zaoz.

Kambreiz a zo a ouenn ganimp-ni. O yez, daoust d'an diou pobl da veza dispartiet abaoe amzer hon zent koz, a zo henvel-tre ouz hon brezoneg. Netra aesoc'h, o'h ober impli eus al levr « Geriou brezonek ha keumraek », eget en em glevet etre Breiziz ha Kambreiz.

Goulen al levrig digant Rener koz « Kroaz ar Vretoned », an aotrou Vallée, 23, rue Saint-Benoit, Sant-Brieg.

Evit ar re n'int ket soudarded priz al levrig eo 15 kwenneg, daou venneg ousspenn evit an timbelloù.

## KELIER RUS AR VRO

LANISCAZ

Meneg a enor. — Hon gourc'hemennou da Aleksandr Rault a Laniscat ! Eman o paouez kaout ar menegman, a ra enor anezan ha d'e vro Breiz-Izel :

« An 3 a vae diwezan, p'edo e gad ouz eur vardel, e voe aet d'ezan gant an enebourien o leuskel dourennou entant. Graet en deus diouz dizarbenn anê o sevel war ar c'hleuz, d'ezan da skei ac'hane gwelloc'h a ze ar « grenadennoù » a oa gantan. »

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25), Imprimerie Saint-Guillaume, 27, Boulevard Charnay, Saint-Brieuc.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume.





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

46 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodet evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An 'Dimezell V. Nagard. 4 real.  
F. Quenaon, soudard... 20 real.  
Trugarez a greiz kalon d'hon mignoned ! A-man gant e aluzen ken madeleuz, hon lenner ker, F. Quenaon a skriv d'imp al lizerman a zo leun a geleannadurez :

... Aman, pell diouz Breiz, ez eo eul levenez brasoc'h c'hoaz kaout « Kroaz ar Vretoned ». Hon labour n'eo ket tenn, hag amzer da goll ez eus. Penôs tremen an amzer-ze ? Evidou-ma, lenn eo ma brasa plijadur. Soudarded all a welan ivez, o'h ehsaa aman a-dreñv an talben-brezel. Evit en em zienaoui e lennont ivez.

Levriou a-walc'h a vez kavet. Met peseurt levriou ! Ar gwel anezo hepken a lavar petra a zo skrivet enno. War ar seurt levriou en em stlap meur a hini eus hon c'henvroiz. Perak ? Marteze ablamour emaint pell diouz Breiz, ha n'eman ket ken beo enno kaerder ha glanded o Bro...

Evit ma 'z ay, dre « Groaz ar Vretoned », d'euz zoudard bennak eus ar re-ze eun tanva eus « aer yec'hedus Breiz-Izel », plijet ganeoc'h digemer ma aluzennig.

**ENOR D'HOR MIGNONED !**

Hon holl lennerien en em unano ganiomp evit kas hor gwella gourc'hennenoù d'hor mignon ker, Joseph Gourlet, breman en hospital Kempele, hag hen bet gloazet grevus, trouc'het d'ezan eur vorzed ha sounnet e vrec'h zehou. Eman o pouez kaout ar groaz gant ar meneg-man ken meuluz : « Leun a nerz-kalon, a barteted hag a c'hred. Diskouezet en deus ar brasa berder, an 11 a ebrl 1917, o vont kalonek dindan eur ganolideg taer d'ober ar gefridi a oa bet fiziet ennan. Gloazet grevus eo bet... »

**Taolen ar Brezel**

An Alamaned a gouez o meud en o dourn. Ar Fransizien hag ar Zaazon oc'h argadi en Hanternoz.  
An Alamaned a zo kouezet o meud en o dourn, pe, mar deo gwell ganeoc'h, a zo manet o fri

war ar gloued, gant o argadennoù e « Saint-Quantin », e « Moronvillers » ha, dreist-oll, war « Hent an Itronezed ». El lec'h-man ez eo bet tomm kenan an abaden, ken ez eus bet lavaret e oa « Hept an Itronezed » eun eil Verdun. Gwelet a reot pelloc'hik war ze lizer eur mignon.

Dimeurz diweza, 31 a c'houere, da 3 eur 58 munuten diouz ar beuve, ar Zaazon hag ar Fransizien o deus arsaillbet a-vras en Hanternoz.

Prientet e oa bet an traou gant eur ganolideg eus an taera, ha diwar ar 27 eus ar miz e oa bet savet ponchou a-dreuz d'an « Izer », 29 gant ar Fransizien ha 17 gant ar Zaazon.

Eure Nordschoote ha Boesinghe, en hanternoz da Ypres, eo e voe argadet gant ar Fransizien war eun talben a bemp leo hed Dalc'het e voe ar genta linea a oa bet peuraret gant ar ganolideg ha kemeret an eil linen ; toullet e voe betek Bixchoote en deirvet linen.

Diouz o zo, ar Zaazon o deus astennet da vat an dachennad a zalc'hent en-dro da « Ypres ». Kemeret o deus eun niver kêriadennou a-bouez, daoust d'an Alamaned da stourm start dirak Warneton, er c'hreisteiz da Ypres, e-lec'h e oa an dachen digompez hag emzao d'ezo d'en em zifenn. 3,500 anezo a zo bet paket da brizonerien gant ar Zaazon.

E-touez ar zoudarded a Vreiz-Veur a zo en em ziskouezet ar gwella eu emgan-ze e hanver rejmanchoù Kambreiz. Hon goure'hemennoù d'ezo !

**War dalbennoù ar Reter.**

Evel e oa bet lavaret ar zizun dremeret, ar Rusianed, da heul an dizurz silet en o arme gant meskerien en em werzet d'an Alamagn, o deus ranket kila.

A drugarez Doue, ar Roumaned, en em gav o arme er c'hreisteiz da hini ar Rusianed, a zigoll ar giladen-ze dre gouidou eus ar pouezusa a denn outo sellou an holl. Eus ar 24 d'ar 26 a c'houere, torret ganto talben an Alamaned war eun hed a 60 kilometr, e kemerjont kêriadennou e leiz ha 98 pez kanol.

E Petrograd, gant ar ministr bras Kerensky, ez a an traou war wellaet, hag heb dale pell, addeuet an urz da vat, e c'hello arme ar Rusi adkemeret he c'hrenv oc'h en em harpa war ar Roumaned.  
Bro-Finland he deus disklêriet

hec'h « emrenerez ». Nemet, evel m'he deus hen embannet fraez, n'eo ket, evit se, en em zavet da enebourez ar Rusi. N'he deus ket c'hoant na mennad nemet difenn he gwirioù a oa bet nac'het gant gouarnamant an impalaer. Pell diouz gwanaat ar Rusi, emrenerez ar Finland he c'hrenvate kentoc'h dre lakaat da ren enni muioc'h a lealded.

**War vor hag en aer.**

Eul lestr-reder saoz, an « Ariadne », 11,000 tonnell, a zo bet goueledet gant eul lestr-splujer. An dud war e vorz a zo bet savetaet, nemet 38 a voe lazet gant an darzaden.

Ar gwener, 30 eus ar miz diweza, nijerezed alaman a zo deut da c'hournijal a-us da Bariz. Ranket o deus tec'het buhanoc'h eget ma oant deut. An nebeut bombezennon o doa tizet leuskel er labourzioù o deus graet muioc'h a drouz eget a droug.

**MERC'HED BREIZ**

War don : *Kér Is.*

Allo ! ma zud, kanit uhel Enor da verc'hed Breiz-Izel ! - En tri bloaz-man int-i, heb mar, o deus labourret an douar.

Kuitet o zi, an holl wazed War an talben 'zo diredet ; Evit difenn ar Frans, hor mamm, Nikou n'en deus argilet tamm.

Met war o lerc'h ar parkeier. Ar c'hoajou don, ar foennsier Ne welañt mui na Fanch, na Yann O kerec'het yeod da bilat lann.

War ar blenen an ejan bras Dindan ar yeo koz a bleg c'hoaz, Met an dar, gant e vecher, A c'halv Erwan, Jakou pe Ber.

Evit treina hor c'hirri bras 'Weler kezeg du, yell pe c'hlas ; Ar skourjez ler ouz an ibilh A jom breman a itribilh.

Pa vez an edou melen-aour E ti ar piavidik, ar paour, Evit o zrouc'ha, o beruia, E chom Janed pe Franseza !

Ma komzer kalz eus ar Breizad 'Vit e ampartz er stourmad. Va c'hredit stard, du-ze er ger, Ar Vreizadez 'ra he dever.

Evit maga koz ha bihan, 'Kreiz ar parkeier hag al lann, Dre oll e weler marc'hed Breiz Krenv o divrec'h, kalon 'n o c'hreiz.

Goude beza roet d'ar Vro Pried pe vogel heb distro, Gant o labour i a fell c'hoaz He zvel uheloc'h warc'hoaz.

O c'hoi, Breiz ! pennou kalet, Karit start ho Vreizadezed ! Kaeroc'h 'vito n'eus ket, c'hoi 'oar, E neb lec'h 'bet war an douar.

Mirit ho spi war an talben, Daoust d'ar brezel da veza tonn ; Stourmit, Breizad ha Breizadez, 'Vit ar Feiz, ar Vroadelez !

Allo ! paotred, bezit dinec'h ! Gant gras Doue e teny an Trech... Bevet ar gwir Vreizadezed ! Ken badarn int hag o gwazed.

War an talben, 22 a viz Gouere, 1917.

Y.-M. NORMAND.

**KLEBIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

Al lizer mat-man hon eus bet ligant hon mignon ker, an aotrou Menguy (Pôr Guelo). Bet e oa aman, goude eureupi er Vro, gant e bried, ha ranket en doa eur pennadig goude distrei war an talben. D'ezan hon gwella menoz, ha Doue d'e viro bepred, gant an holl genvroiz a zo gant en « Hent an Itronezed », an « eil Verdun ».

War an talben, ar 26 a viz Gouere, 1917. Aotrou Rener ker,

Na gredit ket ec'h eo eun ankoua evidou, o vean chomet eur miz pe dost heb rei d'ec'h eus ma c'helou. Nan ! aboue em eus kuitaet ma Breiz karet, ma zud ha ma mignoned, bemde ma zontezonoù a oa evidoc'h holl, mes ma buhe a zo c'henchet krenn.

E lec'h « Bro goz ma Zadou », gant he mor ken kaer, gant hec'h evned ken laoen, gant he zfe, he lanneier alaouret, he c'hoajou glas, aman ne welaomp nemet donar kelpennet, gwez f'albet, tier diskaret. E lec'h kan flour an evned bihan ken dudius, ne glevomp nemet fraoaoul au nijerezed, he strakadennou skojus an terezezed. Ya ! eur c'haer « Retour de Noces », me 'lar d'ec'h !

Kenavo, ma Bro garet ! Kenavo, mignoned ker ! Kenavo, ti ma bugaleach ! Breman, e douan an douar, e-larz eur « creute » evel ma haover ar c'hevioù er vro-man, e vevomp evel gozed, e-pad hon amzer-repez,

berrik a-walc'h, rak kalz a labour hon eus d'ober en deziou-man.

« Hent an Itronzed » a zo evidomp enn « eil Verdun », gant asailhou an Alamaned a zigouez ken altes ha bemde...

Ar bevarzek eus ar miz, evel ma lavar ho « Kroazig », e oa bet start an abaden ; kemeret hag adkemeret e voe hon foziou-difenn ; ar stourm a badas meur a curvez. Goude eun daga-len spontus gant binviou a bep sort, « torpilhou », mindrailherezed, strikerezed-flamm hag aë flèrius, an Alamaned a zeuas war hon foziou-difenn. Goude beza kollet eur pennad tachen, hon zoudarded, a oa kalz nebeutoc'h ane eget an esailhourien, a adkemerer al loden vrasa eus an douar kollet. Pebez mindrailhadeg !

Pep tra a oa helpennet ! . . . .  
Aboue, hogz bemde, e ve ret derc'hel an daoulagad digor mat, ha Yann zoudard n'hall ket kousket eun daken en e doull. Nerz-kalon a zo ret evit padout gant eur vuhe evel-ze. Met Bro-C'hall a zo difennet mat ! Bezet sur, an trec'h a chomo ganimp !

Ha te, Breiz-Izel, ma mamm-Vro viha, sav da beun ! Da vugale, 'hed linen an tan, a dalc'h uhel da vanniel hag a denn d'it enor ha brud-vat o tifenn ar Frans !

Nebeut a Vretoned, siouaz, en em gav ganin aman. Mit, hen gouzout a ran, ar re a zo a ra o dever ervat ; o mestrou a veul ane. Pa dremen unan bennak ane goulet etre ma douarn, eur ger brezonek a ra plijadur d'ezan. Hon zonj a nij neuze raktal d'hon Breiz ha d'hon zud chonet du-ze, pell ! Oh ! ya, sur mat, seul pelloc'h e v'er diouz Breiz, seul vuioch he c'harer !

Aman, en hon zoull, pemzek kant metr bennak diouz ar Voched, ec'h omp en eur aer mouest, hag hon dilhad a zo gleb ; sklèrijennet ec'h omp gant an « electricité » ier gwech bemde. Ma levriou brezonek a ra kalz a blijadur d'in breman, p'am be eur moment da ziskuizan. Bezet sur, an amzer a dreinen prim o lenn ho « Kroazig » pe « Nozveziou an Arvor » gant Pluenzic, gant e varvailhou ken c'houek ! Ne ran ket eur grazaden avat, evel ma raen e-barz ar ger gwechall, beza 'zo eun daouzek vloa bennak, met, n'eus forz ! digas a ra sonj d'in eus ar paour kèz klaskerbara a zelaouen e korn an oaled....

Kelou mat bepred digant ma zri breur soudard...

Kenavo, aotrou Rener ker. Ma gourc'hemennou, me ho ped, da holl vignoned Breiz ha da lennerien « Kroaz ar Vretoned ». Ho mignon leal.

PÔTR GOELO.

## Perag e tleomp horzel betog ar fin ?

Mar domp holl skuiz gant ar brezel, — ar pez na hellomp ket miret, — em eus c'hoant da ziskouez d'hor mignoned ez eo red d'eomp stourm c'hoaz, betog an trec'h.

Er vro e-lec'h m'emoun breman ez eo spontus ar pez a zo bet graet gant ar Voched. Ne chom ken eun ti en e zav ; holl int bet pe zévet, pe zistrujet ha koufontet dre ar poultre krenv pe « dinamit ». Dous an iliz ne chom nemet ar peder moger ; an aoter vras a zo bruzezet imschou ar zent draillhet e mil tamm. Er vered, ar beziou a zo bet digoret, pe forset gant ar gizeit yen ; an archedou a zo bet torret, hag an eskern eus an dud varo a zo bet taolet war an douar tumau-tu hout.

Na pebez tra spontus ! Hag an Alamaned a gred lavaret ez int ar bobl choazet gant Doue. Ma a gredfe kentoc'h ez int pobl an diaoul ! Pebez

## HAG E VIROMP HON SPI...

D'IT, ROC'HLANN

Mir da spi ! a larez d'in ha da galz, Roc'hllann,  
Nag e ve start ar c'hrog ha startoc'h an emgann ;  
Mir da spi ! a larez : nag e ruil'fe ar gwad,  
Eur barz ne dle ket klemm p'eman er-kreiz argad !

Miret a reomp holl hon spi, hon nerz-spered ;  
Hon foaniou a zo bras ; ra vont brasoc'h diouz red !  
Gouzav poan n'eo netra, mar trec'homp an Draster :  
Ar pez hon dalc'h aman n'eo ket eun dra zister...

Hon Fe grenv, hon Bro gaer, hon Oaled, hon C'havel,  
Kement hon eus touet miret betek mervel,  
A c'houe'hemenn hirie o difenn hep krena,  
Nag e tigouezfe d'imp rei hon gwad d'o frena.

Ha, war zouar, war vor, a dost hag a bell-vro  
Kaset ha digaset, yac'h ha klav tro-ha-tro,  
E vrezelomp bepred war skouer hon C'hendadou,  
Da zerc'hel ar gwellan eus ar c'haeran madou...

Bro dishual, pobl krenv, dizispenn o herez :  
Bro ha n'eo bet biskoaz laket da sklavourez ;  
Pobl hag a zav he fenn daoust d'ar bed en argoll,  
A stourm, a drec'h, a varv, warni sellou an holl !

C'hoaz eur wech poanius eo, met, n'eus ket da laret,  
Red eo d'imp brezel pe vezan diskaret ;  
A drenv d'an dermerien war var d'en em werza,  
Soudard mat a dle mont, ha mont betek koueza !

Kalon ! ... Heb dalc' pell, spouren hon c'handiou  
A raio d'ar Gwasker diskouez d'imp e zeulio ;  
Harlu d'ar bobl-iferen, malloz war he hano !  
An tan sakr en hon c'hreiz... Hon Bro c'hoaz a splano !

Kent ar brezel, gwechall, setu hon diouganou  
Daoust ha ni, gwir Varzed, war zigare poaniou,  
A zilezfe a-grenn kement hon entana ?  
Ha ni gouzout eman eno ar wirions !

Kement-se a vefe trein kein, fall-galoni,  
Ha tenna warnomp holl dismegans, kasoni ;  
Penôs miret goude hon brud-vañ didamall,  
Mar spontomp rag ar c'hoaz ha mar kilomp gant mall ?

Ya, ya ! Heb dalc' pell, kleier drant hon touriou  
A gano ar Gouid, diwez hon glac'hariou ;  
Lorc'hus e vefomp holl o tont da Vreiz-Izel,  
Hon zal garlantezet a loreou brezel....

Hag e viromp eta hon spi, hon nerz-spered.  
Hon foaniou a zo bras ; ra vont brasoc'h diouz red !  
Gouzav poan n'eo netra mar trec'homp an Draster :  
Ar pez hon dalc'h aman n'eo ket eun dra zister...

## KINNIG

Mil bennoz, o Roc'hllann, evit da frealzou !  
Ma c'halon a dridas o klevet da gomzou...  
Pelec'h eman du-hont, kenvreur, « Mouez an Delen » ?  
O Breiz ! Amzer gwechall ! ... Trec'h oc'h c'hoaz d'ar walen !

AR YEODET.

kont da renta d'ar Mestr evit ar Varn diweza ! !

Nan ! en desped d'hor skuizder, ez eo red d'eomp stourm vuioch-mui gant nerz-kalon. Neuze, pa hon devoze uzet d'ezo o dent evit miret outo da gregi hiziviken, Doue, dre an trec'h, a lakaio da ren en hor Bro eun amzer a beoc'h, a liberts, hag a evursted. Ha ni, Bretoned evit trugarekaat hor Mestr divin, a ziskuezo, e pep lec'h hag e peb amzer, hor c'harantez evit e Galon ker karantezus.

Ar Zoudard, koz.

## NOTENNOU

I

War c'houlenn eun nebeut mignonned hag evit ober plijadur da lennerien « Kroaz ar Vretoned » e krogan hirie gant an notennou am eus kemeret en-pad eun nebeut mizioù war an daou dalben-brezel, hini ar C'huzheol (er « Sotom ») ha hini ar Zavheol (Masedoan ha Serbi).

An notennou-man, arabad hen an-kouaz, n'int ket eun istor. Evit skriva eur pennad istor eus ar brezel, forz pegen berr, ez eo red gortez an neventiou da dremen, dastum goude an holl zanveziou, sklèrijenni ane an eil e skeud egile, hag ac'hane pou-

nia l'ou renka herve reoladur ar c'hrogadou, an amzer, al lec'hioù.

Eul labour evel-se, eul labour a bouez, a dalvoudgezh, n'hall ket bezan savet gant ar zoudard, da vihanen, en an tar brezel.

Ar zoudard, en eur brezel evel heman, a zo re izel, re guzet, re zammet a spered hag a galon gant eur bern nec'hamanchou, hag ive re bell eus an urziou rôet, o vezan ma vev en-kreiz ar fornier, evit gwelet netra en diavaez eus ar pez a dremen endro d'ezan. Bezan eo eur benveg doujus, netra ken ! eur benveg a gerz war-raok, a deu war-drenv, heb gouzout peurliesan pe sort koll pe c'hoñid a dea d'ar vro eus o boan.

Karout kalz a rafe gouzout se, met u'heller ket hen diskuilh d'ezan. Ac'hane, ar c'hlemmou niverus, ar grosmoliou, an drouk-pedennou a zav a-wechou aliesoc'h eget bemde eus eur penn d'al linea d'egile eneb d'ar vistri, d'ar pennou bras...

Hag eno, koulskoude, ar vistri hag ar pennou bras a zo ken nec'het hag ive gwasoc'h nec'het eget ar zoudarded....

An notennou-man, eta, n'int ket eun istor. Bezan ez int hepen danevellou pe eun displegadenn bemeziek eus hon buhe hag hon foaniou er

foziou-brezel. Meur a dra enne, mar-teze, a c'hellfe bezan lezet a goste, met sonjet em eus o miret holl evit diskouez dre ar munidigou d'am c'hevnoiz a chom a-drenv ha n'hallent ket lakat en o fenn petra eo ar brezel, pegement e c'houzan ar zouad paour du-hont, noz-de, pell diouz e dud, e gerent hag e vro.

Kement-se ne lar ket eun dalc'h-mad hon zoudard oc'h ober gwad fall. Nann ! Na dleer ket kredi kennebeut n'ez eus ket du-hont pennañlou amzer vad. N'int ket stank ar pennañdou amzer vad ; tano-daonet eo ez int ; met, evel n'hallomp ket dalc'h-mat sonjal er ger nag er brezel, daoust ma vevomp gantan ; evel ma renkomp heu ankouaz alies, zoken en-kreiz an tan, ha m'en em goustumomp, — red eo ! — ouz ar vuhe heugus ha spouronuss-se, e sailhomp a galon vad, evel sodien pe gentoc'h evel bugale, war gement digare diduamant pe diskuiz a zo alies dister, o ya, gwall-zister ! Seul vuioch a ze e c'hoarzomp, kuit da ouela goude heb dalc' pell, ar pez a c'hoarvez ganimp kouls laret bemde.

Nag a hini hon eus gwelet o c'hoarziou ganimp pe oc'h ober fent gant eun « obus » o skokal, hag a welemp reut, mouget ennan e c'hoarzedu, eur vunudeunig goude !

Ma lennerien am digarezo ive mar digouez ganin tremen hep laret ma zonj diwarbenn meur a dra. N'em eus biskoaz dikriet ar vistri hag en em viret em eus a-viskoaz ive a rei tu d'o dikrial. Ar re-man o deus war o fenn ear garg ponner ! Meur a wech e lazioñt. Ha piou ne ra ket, dreist-oll en eur reuz ken gwaz ma renk an den implia war an dro e holl ijin, nerz, galloud, anaoudegezh, diskadurezh, skiant-prena, fileñ-fall, ha stourm sav-taol ouz eun enebour ken krenv hag hen hag, en-pad pell amzer krenvoc'h pegwir, evit e dreo'hi, e ziskar, hon eus kemeret diwarnan, gant e viaviou, e roare brezeli penna-da-benn ?

Netra a zouezus e tigouezfe d'e fazia ! Netra a zouezus e tigouezfe da grogadou prientet eus ar gwellan mont da fall, pe, da vihanen, talvezout nebeud a dra ha koustout ker. Ho mistri, evel ma laran, n'emaint ket o-unan. En tu-all, eneb d'eze, ez eus ive tud dihun, spered d'e, anaoudek eus ar brezel, ha disket gante o micher....

(Da heuilh)

AR YEODET.

## KELIER EUS AN VRO

### MONTRouLEZ

Enor d'eur c'henvroad ! — Disadorn ar jeneral Schielmans a stage ar groaz a enor war heultria unan eus hon c'henvroiz, an aotrou Ledan, Kommandant a Ijinez e Sant-Brieg. An holl a welo gant plijadur enori er c'hiz-se eun den leun a lealded, hag en deus tremenet e vuhez o labourat evit servij ar vro !

An aotrou Ledan a zo mab-bihan d'al Ledan koz, a rene e Montroulez eun ti-moulerer brudet e-lec'h e voe moulet kement a levriou brezoaek, hag en deus graet e-unan gwerziou a zo miret an dora-skrid anezo en hon levr di Montroulez.

Hor gwella gourc'hemennou d'an aotrou Ledan !

Ar Rener-Merour : F. WALLÉE.





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, a zigemer ané

**« Breiz » da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An dimezell Anna an Her. 4 real.  
An aotrou abad M'arvet. 20 lur.

En hano « Kroaz ar Vretoned » hag hon zoudarded ker hon c'haloneka trugarez d'hon madoberourien ! Holl vignoned « Kroaz ar Vretoned » o devo en o fedenn eun envor evit hon lennerezh ker, an dimezell an Her, a zo o vont da leanez en uiz Karmez.

An urz vrudet-se a zo bet santelaet c'hoaz nevez-ze gant ar c'hoar « Tereza ar Mabig Jezus », he deus graet, goude he maro, hag a zalc'h d'ober bemdez kement a vuzudou. Hon lennerien a vezo laouen ganto klevet eman an aotrou Seveno, ar skrivagner brudet a Wened, o paouez lakaat er wask eur mouladur nevez eus e levrig « Bubez ar c'hoar Tereza ar Mabig Jezus », lakaet e brezoned Léon Treger-Kerne. E c'houlenn digant an oberour, 3 ru Sant-Visant, Gwened.

**Taolen ar Brezel**

**War dalben an Hanternoz.**

Gant ar glao, ha na dav ket, ez eus bet harzet da vont war-raok da vat en Hanternoz.

An 3 eus ar miz, ar Zaouon o deus adkemeret kêriaden « Sant-Julian » a oa deut an Alamaned a-benn d'he derc'hel en eun adasaill. Tomm eo bet an traou ivez en-dro d'eur gêriden all hanvet « Holtbeke ». D'an diwez ar Zaouon a voe trec'h, astennet ganto o zachenad eur pennad mat. Gounit tachen o deus graet ivez dirak Lens, o strisaat c'hoaz ar c'helc'h war « Gêr-benn ar glao-douar ».

Ar Fransizien, diouz o zu, o deus astennet o gounid dirak « Tavarn Korteker », ar pal pella tizet ganto e trede linen an enebourien.

Etrezo, ar Fransizien hag ar Zaouon o deus kemeret 6.122 Alaman da hizonerien en Hanternoz.

**An Alamaned oc'h argadi en aner.**

An Alamaned o deus argadet taer, dreist-oll e Cerny, e bro an « Aisne »; dizarbennet int bet bep taol. Argadennoù o deus graet ivez, — en auzer bepred, — ouz ar « Grec'hien tric'hant-pevar », e-kichen Verdun, e « Vauxaillou » a zo en hanternoz da Soissons, en « ubelen Galiforni », ha beteg en Alzas.

**An Italianed o tistruji splujerien  
e porz-mor Pola.**

An Italianed o deus kaset eur strollad nijerezed da vombeza Pola, porz-mor hag arsenal bras an Aotrichianed. Daou lestr-splujer a vije bet distrujet ganto.

**War dalben ar Rusianed. Kerensky  
ha Korniloff lakaet da renerien-veur.**

Ar Rusianed, evel ma oa bet lavaret ar zizun dremenet, o deus ranket kila da vat, da heul an dizurz silet en o arme gant dispac'herien pennou brell. Diou gêr o deus kollet c'hoaz, « Czernowitz » ha « Kimpolung ». Nemet herzel mat a reont en-dro da « Brody » en hanternoz da Czernovitz ha gonidou a-bouez a-walc'h o deus bet eno zoken.

A-hend-all, e Petrograd, an holl strolladoù politikerezh, deut unvaniezh ha turnez d'ezo dirak an enebour o vont da argadi ar vro, o deus en eur vouez roet ar renerezh-dreist da zaou zen brudet, ar re wella a oufed da gavout e gwirionez, ar ministr Kerensky evit ar renerezh-diabarz hag ar jeneral Korniloff evit ar brezel.

Gant an dzou-ze en he fenn, fizians a zo na zaleo ket ar Rusi da addont en he floc'h ha da adkemeret he c'hrenv en talben-brezel.

**Bro-Sina o tont er brezel gant ar  
re-Uaanet. Pourchasou bras  
an Amerik.**

Bro-Sina (pe « Chin ») he deus disklêriet ar brezel d'an Alamagn a-du gant ar re-Uaanet. Eur skoazell hounnezh ha n'eus ket d'ober fae warni, o veza m'eo Bro-Sina ar bobleta eus holl stadou ar bed, hag ivez unan eus ar re binvidika, da vihana e danvezioù-pindidigez hag e labourerien.

Brud a zo o lije c'hoant an Alamaned da voulc'ha idarre kaozeadennoù diwar-benn ar peoc'h.

Nemet, da gredi eo, ne vije ket digemeret ar c'hinnigou-ze, dreist-oll gant an Amerikaned, graet ganto pourchasou eus ar c'hrena. Ouspenn soudarded, kanolioù ha listri-mor, nijerezed a vil-vern a vo digaset ganto heb dale pell d'an emgann, da gas prim an traou da benn.

**War vor.**

Eur splujer alman en deus goulet dirak Bilbao, e-kenver da aochou ar Spagn eur vag-pesketaerezh spagnol. Gloazet e voe an holl besketaeien hag unan anezo lazet. Bro-Spagn he deus savet klemmadenn.

**AR GWIR A-ENEP D'AN NERZ**

Da Herry Ansquer, rener ar « Penn-Baz ».

Pa vez kouezet an noz war ar bléne denval,  
Pa vez tavet an evn en e neiz er goudor,  
Pa ne glevan mui ken 'met ar c'hi o harzal  
Hag ar c'houmou o skei war gerreg an Arvor,

E karan-me chouka war dreuzellig va dor  
'N eur zonzal ennou-m'e en Amzeriou gwechall,  
En amzer hon Tadou, deuet a vro-Dremor,  
Kaset gant ar Zaouon betek harzou Bro-C'hall;

Er brezelioù dispar bet war an Douar-bras,  
Kenkous ha war ar mor, 'vit difenn o Madou  
Deuet a rumm-da-ruum digant o C'hendadou;

Er brezel-man euzus lec'h ma red gwasoc'h-gwas  
Gwad glan mibien hor Breiz evid an Denez  
Hag ar Gwir meurbet sakr enep d'ar Gouezerezh.

LOEIZ GOURLET (BOD-SPERN).

Bro-Arc'hantek ivez, en Amerik ar C'hreisteiz, a zav klemmadennou eus ar c'harva ouz mestaolioù an Alamagned. Setu da betra en deus talvezet d'ar re-man lakaet peb Gwir d'nean o zreiz : tenno o deus warno ar mou pe zroukrans ar bed-oll !

**KLEBER RUS HON MIGNONED  
A ZO RR BREZEL**

Eur lizer mat digant « Ar C'hog » eus Plouegat-Mozaag. Kartennou-post. Parizianed dizous.

War an talben, 27 a viz Gouere.

Aotrou Rener,

O tistrei eus « permission » em eus kavet ho « Kroaz », hag hel lennet em eus gant kalz a blijadur.

Fench Gourvil a zo ar gwir gant pa gomz eus ar c'hattennou hudor dismegansus da Vreiz.

Eur Breizad pe eur Vreizadez ne dlefeat morse rei o skeuden evit ober plijadur d'ar Gall....

Breizad, na ro ket da skeud n da gas da Vro-C'hall, e-lec'h ma vi gaopect gant an holl. Mar dout yaouank, dalc'h da skeuden evit diwezatoe'h ; mar doc'h koz, dalc'hit anezo evit ho pro hag ho mignoned

Lennit « Kroaz ar Vretoned », hag e katoc'h enni alioù ha kelenadurezh vat. Hor migaon Fanch Gourvil, kerkouls hag hor mignon, « Ar Zoudard koz », a zo prest da

rei d'eo'h ar gwella alioù....

En eur barrez vihan, war an talben, em boa gwelet, en devez all, eur « statu », pe eun imach da zantez Anna. Dindan ar skeuden e oa merket ar gerioù-man « Gouestlet da zantez Anna gant ar Vretoned eus an Xvet rejimant a linen, d'he zrugarekaat eus ar grasou bet diganti ».

Eur Parisian a zeus en iliz hag a c'hoapeas an imach hag ar Vretoned o lavaret n'oa den sotoc'h eget ar Breton : « Cela ne m'étonne pas des Bretons, emezan ; ils sont si bêtes ». An dour a zeus em daoulagad pa glevis eur seurt flemmaden. Parizian beg-sec'h, den divalo ha dizoue, pegouls ez po eun tamm ski int-vat hag eun tamm anaoudegezh evit ar Breizad ?

Chomomp bepred teal da Vreiz, kenvroiz ! Bevet atao Breiz-Izel hag he bugale !

D'eo'h a galon.

Ar C'hog.

Kelou eus hon c'hanolierien. An aezen flénius.

War an talben, ar 4 a viz eost.

Aotrou Rener,

Eur pennadig a zo aboe n'em eus ket roet d'eo'h eus ma c'belou. Beza e teuomp da veza evel diegus da skriva. Ze ne vir ket ac'hanomp da zonzal altes eannoc'h hag en hon bro Breiz.

Ma yeched a zo bepred kreny,

nemet e teuan e kavan hir an abaden.

Kuitaet em eus, eur pennadig 'zo. « Hent an Itronnez » ; goude 't omp bet da vont da ober eur c'hrogad all er grec'hien X.... Aman ar c'hrogad a zo aet mat-touez, heb semeur a reuz en hon touez, ha n'em eus keuz ebet d'am « Itronnez » koant....

Aman, ar c'hrogadou a zo stank, met ne badont ket pell. Mas ar « Voched » hudur ne ehanont ket da zigas d'eomp o aezennou lërius, hag o hini nevez a zo skrijus.

Ouspenn ma'z eus ennan traou d'hon mouga, ez euz c'hoaz eun dra all gwasoc'h, hag a zev ar c'hroc'hien evel an tan. Zoken o steki ouz eun delien c'hlas, e-lec'h ma'n deus tremenet, a zo a-walc'h d'ho tevi el lec'h ma stok. Eua ali mat da rei d'ar re a zav d'an talben, rak diou-zomp-ni, en deziou tremenet, ez eus kalz devet gant an aezen nevez. Ha den ne oar evit c'hoaz petra eo !...

Met kemeromp bepred fizians en amzer da zont, rak galloud hon Mesir a zo bras. D'an holl vignoned, ha d'eo'h, aotrou « Rener koz », a wir galon. Ho mignon.

Yann ar C'haroff.

Kelou, trist a-walc'h, eus hon prizonerien. An Alamanaed a c'hourdrouz herzel ar pakajout.

Unan eus hon c'henvroiz prizoniet en Alamagn, Arthur Bourdoulous, en deus skrivet d'imp eun hir a lizer war c'hourc'hemen an Alamanaed kriz. El lizer-ze e c'hourdrouz an Alamanaed herzel ar pakajout a oa kaset betek-hen gant « Kroaz ar Vretoned », hag a ernne da vad d'hon prizonerien a Vreiz-Izel, war zigareh na vije ket graet brao a-walc'h d'an Alamanaed a zo prizoniet er Frans.

Arthur Bourdoulous en deus kavet an tu da zila en e lizer, heb gouzout d'e visiri didruet, eun nebeut geriou brezonek, evit rei da c'houzout o devoa kalz da c'houzav gant an naon hag e oa an Alamanaed « loened gouez » en o c'henvr....

Kaset eo bet e lizer d'an aotrou Prefed, ouz e bedi d'ober ar pep gwella da zizarben ar mestral nevez-se onz hon prizonerien... Plijet gant Doue ma tevio an traou da vat !!

## NOTENNOU

II

### O c'hortoz mont

Dek devez e c'horromp e Lyon. A-wechou en em c'houlennoe » ha red e vo partia. Chom keit all d'ober n'etra !

Da c'hortoz bepred ez omp gwis-keta nevez-flamm penn-kil-ha-troad. — « Gwellat amzer, a laromp !... Er ger e renkomp paea hon dilhad, o faec ker. Aman gwisket evit netra, gwisket kuer ! Hevele dilhad ha hevelep kemeuer... Dan n'hall bazan gwarizius... Ha c'hoaz en em glem-momp ! » —

War an de, kaer an amzer o varvailhomp. Eus Sant-Loranz ez eus war ger Lyon, war-du ar « Rhon » hag o sellet ouz ar « Mene-Gwenn » a weler ar skeud anezan er pellder gius eun dispart daol-lagad. Pa zeu an abardevez, dabrad koan, e tec'homp en ker.

Eun nebeudig mat a Vretoned ez omp. Kalz a Vro-Dreger, eun toulhad a Vro-Gerne, darn a Vro-Leon hag una nik bennik a Wend. Anoudegez buban etrezomp ! Ha n'omp-ni ket galvet da vevan an hevelep tru-juilh, an hevelep anken, da c'hou-

## AR GROAZ A CHOM

En koun Lihu ha Lihons.

Ar Groaz a chom da-hont dindan an « obuziou ». Hag ar Zavier warni o vinniga hon tud ; N'eo torret na lizet... A-berz peseurt burzud E chom aze bepred, e chom abouze miziu ?

Ar gwez bras en-dro d'ei a zo muntret, lazet ; A-hoan e chom ane ar e bar noaz, skilhennek ; He c'huzet o deus pell, koumaeret ha pannek ; Maro ez int, gwe-paour... Ar Groaz n'eo ket kouezet !

Ar Groaz n'eo ket kouezet... Sevel a ra skedus. Dizolo eo breman, ha penn an Dasprener A zav splanoc'h a ze a-us d'an emganner Evel arouez an Treec'h hag ar Gwir peurbadus.

An enebour fallakr a c'hoanta he diskar Hag, a-hed devezioù, a goll e nerz warni ; Gouestlet en deus d'ez, gouestlet e gasoni ! Ar Groaz a chom bepred... O Prusian digar !

Ar Groaz a chom bepred... Ha ni, brezelourien, O tremen ouz he zroad, a c'houlen diganti Hon zikour da c'honid : n'hon eus ken nemeti Evit rei d'imp an treec'h war an enebourien.

Hag e pedomp anei gant eur fe virvidik, Hag e lakomp he zin war hon zalou nac'het, Hag e teuomp seder, hon zruuilhou tec'het, D'an emgann hep spourin ! N'omp mui tud kizidik.

Ar Gonid a vo d'imp : ar Groaz a c'hourc'hemen ! Karante ha galloud a garg c'hoaz hon bruched ; He miret a refomp soun dirak ar Voched. E-biou d'ei o malloz a yud hag... a dremen !

Ar Groaz a chom bepred... Onz he gwelet ive An dud, a zo kouezet dre aman a ganchou, A gerzas d'an emgann ; hag o motez a-wechou A lavar d'imp : « Groet oc'h gant hevelep danve ! »

Breman, en-dro d'Ezi o c'horfou a ziskuit, A ziskuit douaret er c'hoad hag en draouien ; Shuilhet o deus o gwad e-barz ar foziou yen, Ha ni a zont enne pa zeuomp war hon c'hiz...

Ar Groaz a chom bepred... Ha, bamde ha bennoz, A vesa war an dro tud veo ha tud varo ; Int a gouezas o stourm evit o Fe, o Bro, Hag ar Groaz warneze a zispak he bennoz...

Ar Groaz a chom bepred... Ne vo ket diskaret ! War zigareh d'Ezi en em zav ar Bed-oll ; D'ei an Treec'h koulskoude, d'hon enebour ar C'holl. Ra vi meulet ganimp, o Kroaz meurbet karet !

AR YRODET.

(Diwar ma notennoù.)

zav an hevelep poanion ha, marteze, da zastum, siouaz, an hevelep maro ? Amezegiez vat etrezomp eta ha karante ive. Netra ne dosta kalonou evel ar brezel !

En em gengerzi a reomp ive kenetrezomp. Tabudig eus ar gwasan a zav alies. Diwar-benn petra ? Ezomm ebet da c'houlen... « Taget e vefomp, eme unan. » — « N'ouvez ket eme unan all » — « Aboue m'eman ar brezel, eme eun driven, ha peuc'h ebet c'hoaz ! » — « Gwell eo sur kas ac'ha nomp d'ar ger da blanta patatez seme ar Pôtr-teo », eun ebeul a goste Lannou, hon laka bep gwech da sklokal o c'hoarzin. — « Ro peuc'h, genaoueg, a lavar neuze eur pôtr a Zant-Jili-Plijo pe a dost ; te a zo ive ken sot ha me... » — « Ken sot ha te ! eme egile... Fe d'am Doue ! ken sot ha te n'eus den... Me n'ouzon ket a c'halleg met brezoneg mad am eus desket ha te bepred n'ouvez na brezoneg na galleg... Heman. pôtrd a renk bezan eur Prusian bennak ! »

Hag e tirollomp da c'hoarzin, rak an tezennoù tentus-se, laret holl en brezoneg, a nije skav ha seder ha dinoaz war an dro.

An daou ganfar da gendalc'h d'en em hegasi eur pennad c'hoaz, betek ma lavar ar « Pôtr-teo » en eur dena eur chik a gartouren eus e c'hanou : « Ma, Kernevad penn-ra, sod a-walc'h omp hon-daou ; te muioe'h evidoun pell ! Met, mar karez, avat, paea eul litrad gwin breman, — sech'eo ma c'hosailhen, — sell, e vi neuze

ar furan eus an dud hag ar gwellan pôtr a zo aman... Ha d'hoaz, fe d'am Doue ! (houman e oa e gomz) ne ran ket goap ac'hanout ! »

Pôtr Sant-Jili pe war-dro, besteod eun tamm kag a gomz fall en gwirione, ne ra nemet c'hoarzin. — « Ar Pôtr-teo » man a zo eur c'hanfar, han ? — « Eur c'hanfar, eur c'hanfar, eme ar « Pôtr-teo » ! N'eo ket ze. Gwin eo a c'houleunan diganit... Met breman ne glevet ket... Ma ine ! n'out ket c'hoaz ken sod ha ma sonje ganin... »

A-wechou-al, e lec'h farserez, e sav trouz ha bec'h. Ar c'hazetennoù a zo kiriek peurliesan. — « Nemet gevier warni ! a bare unan, droug edan. » — « N'eus ket, eme eun all ; ar re-ze e fell goût lenn ane... Red eo gouzout tremen ha lezel... An neb a zo kustum a ra eun dibab hag a lenn oustpen etre al linennou... » — « Neuze, eme eun driven gant eur spereud goupaer, e welez warni ar pez na welan ket me. Diaoul, red e vo d'in evelout kemer ive eul luredou ! »

Hag a-wechou-all e krog an tan. — « Piou, a gav d'it, e zo kiriek d'ar brezel ? Ar Brusianed pe ni ? » — « Ar Brusianed o tout warnomp. Ni dre hon leziregez. Mar karche hon gouarnourien, e lec'h kousket e lec'h an dra-man, ... e lec'h an dra-z... » — Tamm ha tamm e kouezomp war ar bolitik, ha neuze, avat, eman an diaoul etrezomp. Met neuze ive e klevomp ar « Pôtr-teo » gant eun doazan all ha, goude eur c'hoar-zaden, e kasomp da stoupa ha brezel ha politik.

Hag e tremenomp an amzer evel-se o tabudal, oc'h ober gwad-fall, alies oc'h ober fent gant an disteran tra.

En kêr holl a vanden... Diagent pep-hini diouz e du. Breman, kouls lavaret, dorn-ou-dorn. Eur valeaden betek maerti ar « Brotteaux » evit gwelet neventioù ar brezel. Krogad bras Verdun a zo ha ze, evel ouzoc'h, a zell a hanomp breman Ni n'omp mui soudarded. Deut omp da vezan brezelourien.

Eun devez ez eo roet d'imp hon dilhad neve da gempenn, da storda warni ar boutonou, d'o flega, d'o dastum er zac'h. Difennet mont gante da vale da genlan, met, a-raok koan, eun urz all : lezel ac'hanomp da wiska an dilhad a blijo d'imp. — « Tost eman an termen, a laremp holl... Daou pe dri devez c'hoaz hag en hent ! »

Tri devez kepken. D'ar 25, beure mat, e kemerimp an ten.

Evit gwir, koulz eo, G-rtoz evel-se, bezan dalc'h-mat war « vetek-gout » a skuiz hag a lak ar spared klanv... Ar c'hoaz eman an devez bras !

AR YRODET  
(Da heuilh.)

## Diwar-benn ar « C'haritennou-post »

War an talben, 5 a viz Eost, 1917.

Ar « Zoudard koz » a fell d'ezan ivez sevel e vouez evit trugarekaat ha meuli ar re, evel Fanch Gourvil, a zeu da stourm a-eneb kartennou-post dismeagnus ouz hor Breiz.

Nemet pelloc'h ez in ! N'eo ket hepken a-eneb ar c'haritennou-ze e fell d'in stourm...

Aman, war an talben, e resevomp kartennou hudur. War lod, eur gwaz hag eur vaouez oc'h en em bokat, — an dra-ze c'hoaz a hell tremen ; — war lod all, merc'hed en noaz !... Na pebez loustoni ! Na pebez mez evit ar re a vout anezo ! Siouaz, soudarded 'zo a gav gwelloc'h prena ar re-ze eget ar re-all.

Red e ve difenn gwerza seurt traou ! Penos e tevio Doue d'hor zikour ma en em blijer ouz E ofansi ?

Plijadur am eus, da vihana, o welet ar Vretoned o chom heb o frena.

Kenvroiz ker, prenom kartennou eus hor Bro, pe kartennou eus ar brezel, ha lezomp ar re lous d'ar re na dalvont ket e ve komzet anezo.

AR ZOUDARD KOZ.

## KELIER SUS AR VRO

LANISKAT

Meneg a enor. — Hon gwella goure hemennou d'hon c'henvroad, Jozef Burlot, bleiner en 10vet skouadron eus Tren gweturioù an arme ! Gonezet en deus ar meneg-man eus an enorusan : « E-kreiz eur vombezadeg taer, dre e barfeted hag e nerz-kalon, en deus graet diouz miret an urz vat en e strollad gweturioù. »

## ROLL-GERIOU

Cheg, gite, terrier ched, Treger. Ober eun disglavi yen, bailler beau-coup (E kambreeg, dylfu gen).

Lugudus. Labour lugudus, travail de patience, minutieux.

Baltam, fronde. — Gwelloc'h « baltam », ha « taim ». Eun dalm gurun, un coup de tonnerre (Tréguier).

Baltami, insulter, calomnier. Konfilis, œuf contenant l'embryon d'un oiseau.

Diftraoul, débrailé, mal vêtu.

LOEIZ AR FLOCH.

(Da heuilh.)

Ar Rener-Merour : F. VALLEE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillem





PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broiou estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIAND, 27, bali Charner, a zigemer ané

Arzennou da « Groaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro

Ewan ar Bras, soudard. — 4 real  
hag eur c'houmanant.  
Serjant G. Golest. — 4 real.  
Serjant J. Gros. — 2 goumanant.  
Gwella. — 20 real.  
An aotrou Giliouard a Wened. —  
4 real hag eur c'houmanant.

Trugarez a greiz kalon !

Ar Vretoned war  
an daolen-enor adarre

Da heul eur c'hrogad start da ziar-  
benn an Alamaned o doa asailhet en-  
dro da Zant-Kantin, en Hanternoz,  
an 9 hag an 10 eus ar miz-man ar  
jeneral en deus lakaet war daolen-  
enor an arme an XIvet rann-arme,  
en he fenn an 19vet rejimant a Gem-  
per hag, ennan, batailhon an aotrou  
Kommandant an Helgouac'h.  
Bebet bepred ar Vretoned !

Enor d'hon lennerien !

Hon gwella menoz ha gourc'hemen-  
nou d'hon lenner ker, an Troadec eus  
an 71vet rejimant, a oa bet glozet er  
miz tremenet ! Evel m'hen gwelfet e  
lizer hon mignon G. Mazeas, eman  
o paouez kaout medalen ar zoudarded  
gant eur balmezen war ar groaz-vrezel  
en doa gounezet warlene.

Pedi a reomp hon lennerien eus an  
71vet rejimant da verka d'imp, mar  
plich, an hospital e-lec'h m'eman an  
Troadec, evit ma c'hellimp kas Kroaz  
ar Vretoned d'ezan d'e zidui war e  
wele a boan.

Eul lenner all, J. Toullec eus Len-  
non, en deus bet ar vedalen-vrezel eur  
pennad mat a zo. Gallet kon eus, en  
deiziou-man, lenn ar meneg a oa bet  
roet d'ezan neuze hag a zo eus an eno-  
rusa : En em ziskouezet eo barrek-  
tre, dreist-oll el labour pourvezi ar  
c'hanoliou. Ispisial ar 15 a Gerzu di-  
weza ez eo deut a-benn da dreuzi,  
gant ar c'hirri karget a vouliji da  
voueta ar c'hanoliou, eun dachennad  
a veur a gant metr skod gant kanolia-  
deg an Alamaned. Ranket en deus kas  
e-unan ar bouliji eus eun karr d'egi-  
le e pevar lec'h eus an hent a oa frez-  
zet-oll, ha ze dindan eur ganoliadeg  
ker stank ma en devoz gourc'hemen-  
net an hini a rene al labouriou paouez  
da zigas bouliji.

Taolen ar Brezel

En Hanternoz.

En Hanternoz, evit d'an amzer  
derc'hel da veza fall, ar Fransizien  
hag ar Zaozon unanet o deus argadet  
adarre an dek eus ar miz. Ar Fran-  
sizien a zo deut a-benn da astenn  
eur pennad mat o zachennad en-dro  
da « Longemark » ha « Bixchoote »,  
en hanternoz da « Ypres ». Ar Zao-  
zon-i o deus kemeret, er reter da  
« Ypres », eul lec'h eus ar c'hrenva  
war an uhel kanvet « Westhoek ».  
Tost da « Westhoek » ez int di-  
gouezet gant eur c'head a zo bet  
badezet gant Bretoned Breiz-Veur  
« Glencors », da lavaret eo, en o  
brezoneg, « Traouien ar c'horz,  
Traouien ar yeun gorzennek ». Kalz  
a Vretoned a Vro-Gambre (« Pays  
de Galle » e galleg) en em gav en  
arme Breiz-Veur hag e tigouez alies  
d'hon zoudarded a Vreiz-lzel kaout  
d'ober ganto. Digas a reomp da zonz  
e vo roet d'ezo evit netra al levrig  
« Geriou brezonek ha keumraek ».  
E c'houlenn digant an aotrou Vallée,  
rener koz « Kroaz ar Vretoned ».

Ar 15 eus ar miz, deiz gouel Maria  
hanter-est, ar Fransizien o deus  
adarre astennet o zachennad en-dro  
da « Vixchoote ». Soudarded ar  
C'hanada en arme ar Zaozon o deus  
gounezet, da heul eun asailh taer,  
eul linen eus ar c'hrenva d'an Ala-  
maned er walarn da Lens.

Argadennou an Alamaned.

An Alamaned o deus argadet di-  
baouez e meur a lec'h : e Sant-Kantin  
en Hanternoz, war stêr « Aisne », e  
menez « Cornillet », war stêr « Meuse »  
tost da Verdun. Bep taol ez int bet  
dizarbennet da vat !

En asailh an Alamaned ouz Sant-  
Kantin, an 9 hag an 10 eus ar miz,  
eul m'ho peus hen gwelet, ar Vre-  
toned a zo bet er boan, hag ivez en  
enor !

War dalbon ar Rusianed.

Ar Rusianed, da heul an dizurc  
hadet en e arme gant an dispac'he-  
rien, o doa kollet tachen e bro-C'hali-  
lisi, etre Brody, dirak Lemberg kêr-  
benn ar vro, ha Czernovitz, eur gêr  
e c'hreisteiz da Vrody hag o doa  
renket dilezel. Breman, reizet da vad  
an traou gant ar ministr bras Ke-  
rensky hag ar jeneral Korniloff, setu  
e stourmont adarre eus ar gwella.  
Kavet harz d'ezo diouz an tu-ze,

an Alamaned, dindan renadur ar  
jeneral Mackensen, o deus klasket  
neuze, a-unan gant an Aotrichianed,  
lakaat ar c'helc'h war arme ar Rou-  
maned en em gav er c'hreisteiz da  
hini ar Rusianed e-harz menezioù  
« Karpatou ». Eur emgann eus an  
taera a zo savet er c'horn-bro-ze en-  
dro d'eur gêr hauev « Focsani ». Ar  
Roumaned, deut d'ezo kanoliou bras  
eus bro-Japan, hag eus Bro-C'hall  
eun dibab ofiserien da ren o rejiman-  
chou, a vo breman darbar da vad d'an  
Alamaned. Kemeret o deus, en eun  
taol, betek 1.200 anezo da brizo-  
neria.

War a greder, diwar vremen eman  
fin d'an Alamaned da araokaat diouz  
an tu-ze.

War vor hag en aer.

War vor, ar Zaozon o deus kollet  
eul lestr-reder goueledet d'ezo e mor  
an Hanternoz. An Amerikaned o deus  
bet ivez eul lestr, ar « Champaña »,  
3.695 tonnel, karget a eol-douar pe  
« petrol », goueledet war e veaj. Al  
lestr gall « Radioline » skodet gant  
eun darzeiz e dibenn gouel e, n'oa  
ket ast d'ar strad. Ar vartolodet war  
ar bourz anezan, goude d'ezo rau-  
kout tec'het war o bagou, o deus  
gallet distrei, eur wech pellaet ar  
splujer, ha digas o lestr en-dro d'ar  
perz.

Eur Breizad, an aotrou amiral Sa-  
laün, a zo bet hanvet, nevez-ze, da  
rener ar brezel ouz ar splujerien.  
Gras d'ezan d'ober labour vat ouz ar  
gwall-vorlaeron-ze !

Nijerezed an Alamaned o deus  
klasket adarre, an 12 eus ar miz,  
mont da skei bombezennoù ouz kêr  
Londrez. Harzet e voent da dreman  
gant kanoliou ha nijerien ar Zaozon  
ha kaset war o c'hiz a-us da aber  
stêr « Tamiz » a dreman dre Londrez.  
Kont kuitaat an dachen-emgann, darn  
anezo o deus tizet leuskel o bombezen-  
nou war eur gêrig eus an aod hanvet  
Southend. Lazet o deus eno 32 den  
dinoaz ha glozet eun hanter-kant  
bennak.

Eul lizer digant Hon Tad  
santel ar Pab.

Eman Hon Tad santel ar Pab o  
paouez skriva eul lizer da renerien  
an holl vroioù er brezel da eüna  
anezo, eus e wella, war-zu ar peoc'h.  
N'ouzer ket c'hoaz petra a lavar  
an Tad santel ar Pab el lizer-ze, na  
vo embannet, da vat, evit an holl  
nemet ar zizun a zeu. En gortoz, e  
sav glabousadeg. Evidomp-ni, hon

eus fizians en deus kuzniet ar Spered-  
Glan aliou fur hag a-bouez evit  
Amzer-da-zont ar Bed-oll da Dad  
santel an holl Gristenien !

Gouel Maria Hanter-est

An « Ave Maris Stella » trêet  
e brezoneg

Salud d'ec'h hag enor,  
Mamm Doue, Steren vor ;  
O chom gwerc'hez bepred  
An Nenv a zigoret.

Saludet gant an Ael,  
Gant an Ael Gabriel,  
Reit ar peuc'h d'imp brema  
O trei hano Eva.

Dizammat hon pec'hed,  
Reit d'an dall ar gweled ;  
Pellaet an drougiou,  
Goulit an holl vadou.

Diskouezet oc'h hon Mamm  
O kas hon peden flamm  
D'an Hini, d'hon zalvi,  
'Zo ganet diouzoc'h-c'houi.

Gwerc'hez kunv, dispar-kaer,  
Pedit 'vit ar pec'her ;  
Goulennit d'imp pardon  
Ha glanded d'hon c'halon.

Ra vevimp dreizoc'h glan  
Ra vo an hent dibon  
Da vont betek Jezus  
D'al Levenez padus !

Gloar, meuleudi d'an Tad,  
Ha da Jezus dalc'h-mat !  
D'ar Spered-Glan ive !  
Tri ferson en Doue.

Tennet eus al Lev'r-oferen latin ha  
brezonek, aotreet gant an aotrou  
'n eskob David.

EVIT AR VRO !

« NERZ DRE UNVANIEZ »

Evel m'hel lavar gant kement a  
wirionez « Telen Aber » en e zom-  
ger da « Groaz ar Vretoned », Nerz  
dre Unvaniez o honnez eo reolen-  
stur ar Varzed !

Evit senti ouz o reolen hag en em  
grenvaat gwelloc'h a ze en sell eus  
Mad ar Vro hag hec'h Amzer-da-zont,  
setu eman ar Varzed hag ar Vretoned  
vat a zo chomet e Breiz o vont da  
adsevel « Unvaniez Arvor ».

« Unvaniez Arvor », evel ouzoc'h,  
eo hane eur vreuriel, a zo bet krouet  
e Breiz, eun nebeut bloavezioù a zo,  
gant Breiziz kalonek, hep ken c'hoant

# « Kroaz ar Vretoned »

Da Renerien ha da « diegez » Kroaz ar Vretoned.

Ar c'hleier, a bell 'zo, 'deus garmet 'n o skouriou  
O hirvoudou galvus, 'ziston c'hoaz er skouriou,  
Hag e tale'h start bepred enebour kriz ar vro !  
Startoc'h c'hoaz e stourmomp ouz e daolioù garo.

Gall, Breizad ha Norman, paotr a Lil, a Vourdel,  
Mesk-ha-mesk o veva, mesk-ha-mesk o vervel,  
An holl c'houzanv aman an hevelep poanioù ;  
Beleg ha koueried 'zo kadour (1) er foziou.

Nemet 'chomomp bepred, 'vel hon Tadou, ... Breiziz,  
E-mesk ar C'hallaoued, o stourm vit ar Frankiz ;  
Hag eun dra a ro'd'eomp kalz frealzigidez  
Eo sonjal en hor Breiz, en he zilvidigez.

Breizad, sav da zellou ! sav da zellou dispont  
War-zu da Vreiz-Izel hag hec'h « Amzer-da-zont » !  
Setu o tiwana diwar ar gwad breizek  
Eun eost puih a Frankiz evit da Ouen geltiek !



Ar Breizad o veva pell diouz e vro garet  
A zo evel eur pesk war an traez douaret ;  
Kerkent hag e tigouez gant eul lennig dour lor,  
E seblant d'ezan neunv e-barz an douna mor.

Gant ar Breizad ivez, 'n eur reseo tra pa dra  
O tont eus an Arvor c'hoarvez hevelep tra ;  
Petra 'zigas d'ezan gwelloc'h c'houez-vat e vro  
'Get Kroaz ar Vretoned, Mouez, Spered Breiz tro-dro?..

Goude hon tiegez du-ze e Breiz-Izel,  
« Kroaz » a zo evidomp eun « tiegez » santel ;  
Tiegz 'lec'h e chom ar vreurder dianav,  
Met ena ha kalon unanet en em gav !

Bodet 'n he « ziegez » ar Varzed a-gevred  
A labour evit Breiz, a stourm 'viti bepred ;  
'Vit difenn he gwirioù e stourmont holl hep mar,  
« Nerz dre Unvaniez » sed aze o lavar.

Breiz, setu o sevel 'us d'az « Kroaz » vroadel  
Spi da Amzer-da-zont ! Breiz, ne c'hellez mervel !  
Da yeze 'zo da vuhez : 'viti « Kroaz » dibredar  
A vculo gwech-ha-gwech rimou.

Telen Aber.

En Talben, an 9 a cost.

(1) Brezelour.

an hini diweza em eus bet al levenez  
da lenn al lizer kaer en deus skrivet  
d'eo'h.

Kerkent hag em boa resevet ar  
genta niveren e oa dleet d'in rei  
d'eo'h da c'houzout e oa ho kazeten  
etre va daouarn. Ar zonz-ze n'eo ket  
deut em spered nemet en deveziou-  
man. Ouspenn, an amzer a vank  
d'eomp a-wechou ivez ; rak el lec'h  
m'emomp breman e vezomp hegaset  
alies gant ar Voched.

Gouzout a rit marteze em « paotr  
e zoupennou ruz » en abaden  
vras a dremen en Hanternoz ! Emomp  
aman e-touez ar fank hag an dour.  
Met kement-se ne vir ket hon spered  
da drei war-zu Breiz-Izel. Ha n'ez eus  
gwelloc'h eget ho kazeten da zigas  
d'eomp ar zonz eus hor Bro garet ha  
da bellaat ar zonzou fall, pa vez eur  
pennad amzer d'hen lenn.

Da c'hortoz ma teuo ho kazeten  
beteg ennomp, plijet ganeoc'h dige-  
mer ma gwella gourc'hemennou. Eur  
Breizad eus « Penn-ar-bed ».

G. AR M.

Kelou eus hon c'henlabourer her  
G. Mazaes, eus hon lenner, an  
Trodec, a zo gloazet hag eus an  
71vet rejimant.

A-unan gant e zon ken kaer da  
Groz ar Vretoned G. Mazaes a gas  
d'imp al lizer-mat-man. Trugarez d'e-  
zan !

An 9 a eost 1917.

Aotrou Rener ker,

Salv hag e yec'hed bepred, bennoz  
da Zous !

Va mignon Trodec, a « diegez »  
Kroaz, bet gloazet e deizioù lemta  
miz gouez, a zo nevez-lakaet war  
daolen-enor an arme ha rot d'ezan

medalen ar zoudarded hag eur « bal-  
mezen » war ar groaz a vrezel en doa  
bet warlene.

Roet en deus eus e gelou diwar e  
wela hospital ; eur c'har a zo trouc-  
c'het dioutan hag ez a war wellaat.

A nevez-ze ez eus deut d'eomp eur  
c'olonel nevez, eur Breton ar wech-  
man. N'eo ket re abred e teufe eur  
Breizad e penn rejiman San-Brieg !  
Karet eo gant an holl. Evit gwir, ne  
beller ket kaout gwelloc'h egetan ;  
eur c'hristen eus an dibab a heuilhar  
gant kement a lorc'h ouz an daol santel  
evel d'an emgann.

Emomp atao er foziou, sioulig a-  
walc'h.

A wir galon bepred. G. M.

Trugarez da Y.-M. Normand evit  
e zon « Merc'hed Breiz » !

Hon rener ker, an aotrou Moal, eo  
a zigas an trugarez-se, — en hano an  
holl, moarvad ! — el lizer-man da  
heul :

9 a eost, en talben.

Aotrou ker,

Bet em eus « Kroaz » breman-sou-  
den, hag e lennet, evel bepred, gant  
plijadur.

Ma vijen bet er vro, em bije zoken  
goulennet diganeoc'h tennan war ba-  
perennou son Y. M. Normand en  
enor da « Verc'hed Breiz » evit he  
bruda hag he c'has e-touez an dud,  
rak plijout a rafe kalz dre m'eman ar  
wirionez anni penn-da-benn ha m'eo  
tapet brao war ar marc'had !

Me a zo bepred yac'h, a drugarez  
Doue.

Ma flijadur e vo ivez lenn bep zùn  
labour « ar Yeodet » war ar brezel.

Digemorit, me ho ped, ma meno-  
ziou mad.

E. ar M.

Penaos en em gemeret evit ober  
d'hon prizonerien distrei  
d'ar vro ?

Hiviziken ar bizonerien, ar re anezo  
a zo en Alamagn triwac'h miz a zo  
peuspenn a hello beza digaset en-  
dro d'ar gêr, gant ma vo graet eur  
goulenn evit se.

Setu aman, hervez an " Union agri-  
cole " a Jemperle, penaos e tleer en  
em gemeret d'ober ar goulenn-ze.

Skriva war baper ordial hano ar  
prizonier, e hano-badez hag e oad, e  
stad-vuhez (dizemez, dimezet pe in-  
tany), niver e vugale ; lakaat ouspenn  
e niveren rejimant ha da be vare ez  
eo bet tapet da brizonier. Kas ar ba-  
perenn-ze da vinistri ar brezel dre ar  
maer, a lako warni sil an ti-kêr.

An aotrou abad Bayon, « Job ar  
Glean », distro da Vreiz.

A aotrou abad Bayon, rener brudet  
teatr Santez-Auna-Wened, hag en  
deus savet, dindan al les — hano a  
« Job ar Glean », kement a beziou  
kaer o deus graet o zro — Vreiz,  
goude beza bet prizonier pell amzer,  
a zo nevez-digouezet er vro. Ra vo  
deuet — mat en hon touez !

## Glabouserien !!

Bretoned, daoust ha n'ho peus ket  
klevet, er foarion hag er marc'hajou,  
tud o werza traou dispar, mad meur-  
bet ouz ar boan dent, ar gwenter, ha ze  
evit eur priz bihan ? Eo ! Mad, aman  
ez eus tud hag a lavar an dra-man :  
« Me, pa vezin en « trancheou », pa  
gavin tro, en em rento d'ar Voched...  
Evel-se, echu ar brezel ! Evurusoc'h e  
vezin ! »

Glabouzer ! Rak dec'h diweza, e-  
pad ma oamp o labourat damdost d'al  
linen genta, ar Voched aasilhas. Deut  
a-benn da vont dreist al linen genta, e  
voent war ar poent da dapout al la-  
bourerien... Hag an hini a gomzan  
an-zan, kelc'hiet gant daou pe dri  
Boch, e lec'h en em renta, a redas  
kuit, m'hen asur d'eo'h... Ha mad  
a reas

Ar pez a lavar an dud-ze n'eo ne-  
met glabouzer. Eus a bell e lavaront  
a bep seurt ; tost da veza tapet, e  
te'hont kentoc'h eget en em renta.  
Allo, glabouserien, chomit peoc'h !  
Na dit ket, dre ho komzou diskomp  
da alia ar re-all da ober ar pez na rit  
ket hoc'h-unan, evel m'am eus her  
gwelet.

Ha ni, Breizad a galon, na zelaoump  
ket an dud-ze. Greomp hon dever,  
evit d'erc'hel bep tro hag e pep lec'h  
hor brat vat !

Ha, dreist-oll, n'em rentomp  
biken, nemet red-mat e ve ! Rak en  
em renta heb en em zifenn a zo ken  
mezus ha trei kein d'an enebourien.  
Mont atao war-raok setu aze ar pez a  
d'e beza e spered eur Breizad.

Loskomp ar glabouzer gant ar  
C'hallaoued ; met ni, kaozeomp nebeut  
ha labouromp c'houek evit echui bu-  
han ar brezel.

AR ZOUDARD KOZ

Waran talben, 12 a viz Eost, 1917.

Gwerziou « Bleimor » kurnet  
gant Akademi Bro-C'hall

Eman Akademi Bro-C'hall o paouez  
rei eur priz « Monthyon » da varzo-  
niezou brezonek « Bleimor », al le-  
nant Calloc'h, a zo bet displeget aman  
e vuhez roet hall da Vreiz, hag e  
varo glorios evit ar Frans war an  
talben-brezel !

Ar wech kentan eo da Akademi  
Bro-C'hall rei eur priz da oberou-  
skrid brezonek. Bravo'h a ze n'eo  
ken an enor graet ganti d'hon Parz  
« Bleimor » ha d'hon bro Breiz-Izel.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guillaume

na mennad d'ezo nemet labourat evit  
Breiz, er-maez eus pep tu politik.  
— Na « gwenn » na « ruz », Breiziz  
da genta ! —

A-raok ar brezel eur « zizunvez-  
labour », savet ganto en Henbont, a  
zeus da vad eus ar brava. Edod o  
pouchas ober eun eil zizunvez e  
Lannuon pa zivollas ar brezel.

Daoust d'ezha da veza bet gwall-  
wanset gant kanvou e-leiz, — nag a  
varzed a zo kouezet war an dachen-  
emgann ! — an « Unvaniez » he deus  
kavet an tu da gendere'hel gant he  
labour. Savet he deus he mouez a-  
eneb d'an aotrou Heanessy, pa fellas  
d'an « depute » dibouell-ze goulenn  
ma vije dismaret Breiz. Ar barz  
Abalor a zo aet da Bariz a-ratoz-kaer  
evit difenn wirioù hon Bro. « Un-  
vaniez Arvor » he deus roet ivez sko-  
zell da voula ha da skigna skridon  
brezonek, en o zouez hon « C'broaz »  
karet. Ouspenn, unan eus ar rener-  
rien anezi, Pep-Mocaer, a zo chomet  
pell e Breiz-Veur o studia stad ar  
broion keltiek eno, ha dreist-oll doare  
ar skolioù e Bro-Gambre, d'imp-  
ni da c'hellout diwezatoch, diwar skouer  
anezo, gwellaat stad hon skolioù a  
Vreiz-Izel.

Breman, da lakaat ar vreuriez en  
he flomm da vat, ar pez a ranker da  
gaout eo izili, memproù nevez, graet  
ganto o menoz start da labourat a-  
ouvan evit ar vro, — " Nerz dre  
Unvaniez " ! —

Souezus pegen kresket eo ar garan-  
tez-Vreiz aboue ar brezel ! Kement-se  
a zantomp da vat en hon " tiegez  
Kroaz ar Vretoned ". Daoust n'en  
em anavezomp ket holl, en em zan-  
tomp holl unanet, kalon-ouz-kalon,  
dre ar garantez-vro. Gant-se, hon eus  
fizians e vo selaouet ar c'halsvaden a  
reomp aman. Peda a reomp hon holl  
vigoned, an neb a hall, da rei o  
hano da " Unvaniez Arvor ". Ugent  
real eo ar skod bloaziek evit an izili,  
da gaout bilheji war an hent-houarn  
evit ar bodadegou ha da zigemeret  
al levr diwar-benn al laborioù graet  
e-pad ar bloaz.

Ar reeus hon migaoned ha n'eo ket  
rebounner d'ezolioeriet eur pezugent  
real a bedomp start, eta, da zigas o  
frot hag o hano da denzerien an  
" Unvaniez " : André Mellac, 54,  
rue de la Comédie, Lorient.

Hag holl e heuilhimp a greiz kalon,  
o rei skoazell eus hon gwella, al la-  
bour vat emeur o vont da voulec'ha  
evit ar vro.

Breiz da virviken !

## KALON RUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou eus hon Martoloded-fuzu-  
lierien an Hanternoz

Setu aman eul lizer mat digant  
unan anezo, G. ar Men, a zo eul len-  
ner feal da Groz ar Vretoned. Hon  
gwella gourc'hemennou hag hon me-  
noz kalonek d'ezan ha d'hon c'hen-  
vroiz a zo gantan en « abaden an  
Hanternoz » !

War dalben ar brezel, d'an 10  
a viz eost, 1917.

Aotrou Rener ker,

Eur pennad a zo e resevan Kroaz  
ar Vretoned, ar wella kazeten a hel-  
ler da gaout.

N em boa ket klevet hano anezi a-  
raok ar brezel. Dre berz va c'hen-  
derv, en deus graet e gonje e Sant-  
Brieg hag a zo atao soudard, em eus  
bet ar blijadur da gaout anezi. War





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar bioioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**  
Kas al labourioù d'ar notrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

En aotrou H. MIARD, 27, bati Charner, a zigemer an

**Taolen ar Brezel**

**En Hanternoz, ar Fransizien hag ar Zaizon a gerz war-raok.**

En Hanternoz, ar Fransizien hag ar Zaizon unanet a zalc'h da vont war-raok.

Ar Fransizien o deus gounezet tachen war ribl dehou stêr « Yser » e-keit ha ma kemere ar Zaizon kêr « Longemark » ha ma c'hounezent lec'hioù emzav war an hent eus « Ypres » da « Menin », er gevred da « Ypres ». Strisat a reont ivez bemdez ar c'helc'h war « Lens » gant soudarded ar C'hadada a gemer a hini da hini difennou an Alamaned er gwalarn hag en hanternoz d'ar gêr-ze.

**Dirak Verdun, ar Fransizien a c'hounid tachen da vat!**

Dirak Verdun, ar Fransizien o deus graet, dilun, eun asailh a-vras war daou ribl stêr « Meuse », a-hed eun talbea a driwac'h kilometre. Er riblennad vat o deus dalc'h et da heul, — eus eur c'hilometr hanter da dri c'hilometr a zounder, — gant lec'hiennoù eus ar pouezusa. Evel kriñnennoù an « Den-mar » bodit, hag, en tu-hont d'ar « Meuse », kêria den « Samogneux » gant ar greec'hien 344.

Tost da 8.000 a enebourien a voe kemeret da brizonerien, en o zouez holl ofiserien-veur eur rejimant, a voe tapet, evel lera, en o ribouloù kuz eus an « Den-mar ».

**Eun trec'h eus ar brava gant an Italianed.**

Disul diweza, an Italianed, goude prienti an hent d'o zoudarded gant eur ganoliadeg stank, o deus treuzet stêr « Isonzo » da vont da linennou an Aotrichianed. An taol a zo deus da vat ganto eus ar gwella! 14.000 a enebourien a zo kouezet etre o daouarn da brizonerien gant kanolioù ha pourveziou brezel e-leiz. An emgann a bad c'hoaz.

**War dalbeannoù ar Zav-heol.**

An Alamaned o deus kresket da boueza war holl linenn ar Zav-heol, adalek Riga, en Hanternoz, e-lec'h o deus kanobet forziou ar Rusianed, betek Focsani, war dalben ar Roumaned a zalc'h penn da vat!

Ar Rusianed ivez, paouezet ganto da gila, en em zifenn start dirak kêr « Kramenetz » a vije a bouez bras d'an Alamaned e c'hemeret.

Eun tao-gwall, kroget n'ouzer ket

penaos, en deus pulluc'het eun darn vras eus kêr Salonik.

**War vor hag en aer.**

Kelou a zo ez eo bet goueledet er mor Bras, ar miz diweza, al lestr bras dre lien « Cambronne » d'ar gompagnonez Bordes. An 21 den a oa er bourz anezan o deus gallet diraez an aod war eur vag. Ar c'habiten ha tri eus ar vartoloded, a oa bet gloazet, o deus bet peb a groaz-vrezel.

Ar 17 eus ar miz, e-kreiz noz, eur skouadrennad a 111 nijerez c'hall a zo aet da c'houarnijal a-us d'an Alamagn ha da vombeza krenvlec'hioù ha labouradegou-brezel.

An Alamaned, diouz o zu, o deus kaset « zeppeleioù » ha nijerezed adarre a-us da Vro-Zaoz, an 22 eus ar miz. N'o deus ket gallet tizout Londrez, nemet, e kêr « Douvres », war an aod, o deus lazet pe c'hoazet eun tregont den bennak.

**KEVREDIGEZ BREIZ**

**Kendalc'h-labour e « Châteaubriand ».**

(Eus an 13 d'ar 17 a Wengolo).

Daoust d'ar brezel, setu eman ar Vreuziezh « Kevredigez Breiz », diand anadur an aotrou Markiz a Estourbeillon, o vont da zével eur c'hendalc'h a labour e « Châteaubriand » eus an 13 d'ar 17 a Wengolo.

« Kevredigez Breiz » he deus graet kalz evit ar brezoneg dre ar c'hens-trivadegou bloaziek he deus savet etre ar skrivagnerien. Lusk he deus roet da vad ivez gant he diskouezadegou (« expositions ») da vicherioù ar Vro. Breman e c'hallfe poueza da vat, gant an dud vras a zo er penn anez, war euna an traou e sell a Vreiz el labour-digreienni (décentralisation) a vo ranket staga gantan heb dale, evit kriski pinvidigez ar rannvroioù hag espern gant an dud a garg, ha pa na ve ken.

En tu-hont da ze, ez eus savet e « Kevredigez Breiz » eur gevread nevez da studia piz war do ve al labour-douar e Breiz ha stad an dud diwar ar maez, evit o c'has war wellaat goude ar brezel.

Ar yaou, 13 a Wengolo, e vo digoret an diskouezadeg. Ar gwener, 14, e vo graet on iliz Sant-Nikolas eur servij d'ar izili eus ar « Kevredigez » a zo marvet er brezel. Boda-

dennou a vo, diouz ar beure, gant « Kevien ar Brezoneg » ha, goude kreisteiz, gant « Kevren Istor Breiz ».

D'ar sadorn e vo studiet war « Kevren ar maerchieuriou Breiz », diouz ar beure, hag, en endervez, war al labour-douar ha stad an dud diwar ar maez. Ar sul, e tevio tro e an Ijinou-kaer e Breiz ». Klozet e vo ar c'hen dalc'h en deiz-se.

An aotrou Marcel Cotteux, prizacher e « Châteaubriant », a zo karget da ren an diskouezadeg. D'ezan e leor kas an traou a zo c'hoant da lakaat a-wel. Fezjou ebet en tu-hont d'ar mizou kas-digas.

Eur genstrivadeg a zigor evit trespou (dessins) diwar-benn ar brezel graet gant bugale diand 15 vloaz leun. Kas an tresou, — daou d'ar muia evit peb bugel. — d'an aotrou Markiz a Estourbeillon, 10, Place de l'Evêché, Vannes. Ar vagale a reko sina o labour ha lakaat war eur bapereñ stag outan o oad hag a be gouzun ez int genidik. Eun niver pizhoù a vo roet d'ezo.

**KELERIEZ EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL**

Setu aman eul lizer mat digant hon mignon ker Jul Gros, a oa chomet pell amzer hep rei eus e gelou :

Ar 14 a viz Est 1917.

Aotrou Rener ker,

Didamallet ac'hanon mar don d'omet keit-man hep digas kelou d'ec'h, hogen aman am eus kement a labour hag a dorr-penn ken na ven dall ha meo 'vel ar yer en est.

Goude bean bet daou vloaz hanter en touleou gant ar 41 vet, ar vistri a zo deus da zont d'ê, a greiz holl, penôz e rajen labour talvoudusoc'h ma vijen laketa da jubenoù, da « interprète » (penegwir eo ma miche). Setu ec'h en deus kwit eus ma rejimant koz am eus lezet enoi meur a vignon mat hag a Vreton-kalonek. En rejimant neve, avat, n'eo ket stank ar Vretoned ha breman n'hallan ken komz brezoneg bemde-bemde 'vel ma ren arôk. Ar c'ontrol-lêr 'zo gwir : pad an de ne ran nemet drailha alamaneg gant ar Voched a ve tapet, ha trei en galleg al lizerou hag ar paperoù a ve kavet en o godelloù.

Kalz anê a'n em ro anê o-uned, dre ma veont arri kwiz gant ar brezel ha ma n'o deve ket trawadur a voued da zibri. Kaer a zo laret ha

kaer o deus gonid douar war ar Rusianed, ar zoudard led boch a zo dirakomp a zo yost, ha ne c'houennont ken nemet eun dra : ma vo sinet ar peuc'h raktal, rak gouzout a reont evrad n' hellont ket gonit warnomp ken.

De heuih.

**Dre ar Zin-man e vezi trec'h!**

Eun den klanv, ar poaniou a ziskouez a-ziavaez n'int nemet ar merk eus ar c'hlenved, eus an dizurz, a zo en e ziabaz.

Evel-se, ar brezel hag e holl boaniou a zesrevel d'an daoulagad ar fallagriez a oa er bed. Ar vroman, an Europ, ar bed a-bez a vage aboue pell amzer a bep seurt klenvejoù. Ar binvidigez hag al lorc'h, ken bras, ken kaer da welet, ne oant nemet eur zebtant touellus ; diand an oa torfedoù, gevier, kasoni, dismegansou.

Dismegans a oa, da genta, ouz Doue. An dud en em blije o welet e kreske o feadra, e kreske o flijadurioù, daoust ma veze lezet Doue war e du. En kalon kalz anê e oa savet ha gwriennet start ar greden-ze na oa ar relijion nemet gevier. Darn heñ lavare a vouez uhel ; darn all, ma n'hen lavaret ket, a veve henvel... Dilezet Doue ha relijion ne oa ket eur pec'hed, p'eo gwir ne oa, sur a-walc'h, na Doue na relijion. Kredet dishenvel diouz hini ar re goz, a oa ken piz war gement a zell ouz ar Feiz !

Erru an traou er pal-ze, ne gav ket d'ec'h e ranke Doue en em ziskouez, p'eo gwir eman bet hag e vo bepred, kaer a vo lavaret ? En em ziskouez a rae dre e garantez ha ne veze ket sellet outan ; n'helle ket, eta, en em rei da anaont nemet dre gastiz.

E-kreiz dismantrou euzus eur brezel hag eman holl ijin an iterennan, karantez Doue en em ziskouez c'hoaz, koulskoude, rak ne baouez da lavaret d'imp : « Pa garfet e vo fia ! »

Treuz en deus ouzimp o welet madou ar pinvidig, harp ar paour drastet pe lakaet d'ober armoù d'en em laza.

Treuz en deus ouzimp o welet an dud a beb oad, bet touellet gant speredioù diboc'h ha diaoulek, kaset da laza d'ar brezel, ar brezel eun dra ha na dlee ket c'hoarvezout !

Treuz en deus our poaniou an

holl grouadurien, gwasket pep-hini en e c'hiz; met n'hall ket beza gaouiad e-unan ha sevel ar bec'h-keit ha na vo ket anzavet eo ar Mestr.

Nemet kement-se da anzav, hag e vo fin ! En em zontet war ze, holl etrezoc'h, er gêr hag en dachen-vrezel, c'houi hag en e c'houlou dek gwech bemdez : « Pegouls 'ta 'vo fin d'ar reuz-man ? »

Badaouet e oad chomet gant ar c'hanolou o strakal d'au ampoent na gomzed ken nemet a bec'h war an douar. — « Dre benaos en deus gallet kemend-all c'hourezout, ken evurus evel e oad, ken mad ha ma 'z ae an traou ? Da berak brezel ?... »

Muzuliet, mar gallet, diouz grevusted ar poaniou a c'houzavomp, grevusted an droug, ar bern torledou a c'hoarveze bemdez dre ar bed, hag anzavet penaos ar brezel a zo eur c'hastiz.

Anzavet ez eus eun Doue, e vezor prest da zigemer digantan ar pez a zo d'ober evit terri ar reuz a zo warnomp.

An dra-ze en deus disklêriet d'imp aboute pell 'zo, hag a zo, koulskoude, nebeut anavezet.

El levriou istor hon eus lennet gwechall pa oamp er skol ne gomzed ket eus al leanez Marc'harit-Mari nag eus he gweledigeziou en Paray-le-Monial.

Koulskoude, e oa bet kaset kelou anê da Loeiz XIV, roue ar Frans en amzer-ze. Kalon Jezus a c'houlenne digantan, adalek neuze, ar pez a c'houlou hirie c'hoaz digantimp : « Da genta, ma vije lakaet skeuden ar Galon-Zakr war banniel ar Frans; d'an eil, ma vije savet, a-berz ar vro, eun iliz en e enor; d'an trede, ma vije gouestlet d'ezan, en iliz-se, ar vro a-bez. » Ar roue ne respontas grik ha ne reas netra.

Daou c'hañt vloaz goude, e strake an Dispac'h, ar « revolution » vras. Met komzou Doue a renk dont da wir. Laret en devoa Kalon Jezus da Varc'harit-Mari, eun dez m'en em drubuilhe dre na veze ket selaouet prim a-walc'h outi : « N'az pezh ket doan; me a vo Mestr hag a reno daoust d'am enebourien. »

An dispac'h, kaer en doa, ne harzas ket devosion ar Galon-Zakr d'ober he c'hresek er Frans hag er bed e-touez ar wir Gristenien.

Er bloaz 1720, e reas dre eur burzud eur gammet vras war-raok. E kêr « Marseille » e oa ar vosen : 40.000 den a oa bet marvet enni. An aotrou Belzunce, eskob, a roas d'an holl glanvourien skapuler ar Galon-Zakr hag a ouestlas d'ezan ar gêr a-bez. Ouspenn, e reas gant e veleien, dre ar ruiou leun a gnavou, eur prosesion, diarc'hen hag ar gorden en o c'herc'hen. Kerkent, e tec'has ar vosen ha ne varvas ken eur c'hristen diwar an eur-ze.

Pa voe prizoniet gant an Dispac'h, ar roue, Loeiz XVI, a fellas d'ezan ober ar pez a oa bet goulenet digant Loeiz XIV, gouestlan e rouantelez d'ar Galon-Zakr; met re ziwezat e oa pa n'oa ken nemet eur prizonier....

Dindan ar roue Loeiz XVIII, eul leanez santel, Mari a Jezus, en he c'houent en Pariz, a glevas digant ar Galon-Zakr an hevelep komzou he devoa klevet gwechall Marc'harit-Mari. Dre-ze, e c'houlenne ma vije gouestlet d'ezan bro-Frans. Graet e vije bet marteze, panevet e tiroillas eur reveulzi all, er bloaz 1830.

## AN AWEN HAG AR BARZ

HENVELEKAET DIOUZ LOEIZ TERBEL

### AN AWEN

Barz, kemer da delen ha lez da venozioù  
Da nijal en oabl glas betek porz an Nenvou;  
Deus ganen da gana, er gompezen seder,  
An traou skedus meurbet graet gant dour ar C'hrouer.

### AR BARZ

Ne hellan ket kana, o va Awen ker koant,  
Kanaouen dudius an noz hag ar c'houloump;  
Va zelen a zo mud, hag, en desped d'am c'hoant,  
Soniou va ben veg aour 'zo mesket gant daerou.

### AN AWEN

Sec'h da zaerou, mignon ! Sed an nevez amzer,  
An evned o kana kanaouennou tener,  
An heol madalezus a skuilh e vannou tan !  
Sec'h da zaerou, mignon, ha sell an Nenvou glan.

Pegen kaer eo beza dindan an derven c'hlas !  
Pegen flour e hiboud dourioù lirin ar waz !  
Pebez c'houez-vad a zo mesket en avelioù;  
Ha pegen balzamet bokidi ar parkoù !

### AR BARZ

Ne hellan 'met gouela da walleurioù ar Vro :  
He bugale breman oc'h emgann gwasoc'h-gwas  
Ouz an enebourien, paotred Gwilhelm garo  
Diredet a bell-vro evel bandennou chas !

Stigna ne hellan ket kerdan va zelen aour,  
Da zavel tonioù drant pa oueler en ti pri...  
Da bedi 'laran ket ! da bedi gant ar Paour,  
Da c'houlou euz Doue diwez d'ar walen gri !

Setu perak, Awen ! e c'houlou-mé ouzo'h  
Digarez pa renkan tremen hep ho heulia  
Er gompezen seder, da gana drant, er peoc'h,  
A bed skedus meurbet : noz, mor, loar, kement tra.

LOEIZ GOURLET (BODSPERN).

An dud dizoue o deus tizet betek-  
hen beza trec'h. Daoust da ze,  
devosion ar Galon-Zakr a'he deus  
graet nemet derc'hel da greski, seul  
vui a nerz ganti ma veze gwasoc'h  
stourmet outi.

Er bloaz 1870, zouavet ar Pab  
Pi Naonet a vos aotreet d'ê mont  
d'an emgann gant skeuden ar Galon-  
Zakr livet war o banniel.

An iliz goulenet gant ar Galon-  
Zakr a zo digouezet d'ez i vez beza  
savet, dre eun urz roet gant Mac-  
Mahon, prezidant ar Republik, diwar  
eul lezen votet er Gembr gant 382  
kannad war 520, er bloaz 1875. Eman  
a-wel, a-us da Bariz, war gre'hien  
« Montmartre » evel eun tron savet  
d'ar Galon-Zakr gant pobl ar Frans,  
gant aour ar pinvidik kerkouls ha  
gant gweneien ar paour.

Eur gomz a zo c'hoaz da lavaret  
da ouestla ar Frans d'ar Galon-Zakr.  
Ac'han da neuze e c'helle tec'het  
diouzimp fin ar brezel hag ar peoc'h.  
Evel se e vije bet disklêriet en gwe-  
ledigeziou nevez, re abred c'hoaz  
evit gallet lavaret ouspenn diwar o  
fenn.

Nemeta-walc'h a zo bet disklêriet  
betek-hen evit anaout eman Hon  
Zalver o c'hortoz ma vo anzavet  
gant an holl e Garantez divent. Ra  
baro dez evurus an Anzav-ze evit ar  
Frans an abreta ar gwella !

Eur zoudard d'ar Galon-Zakr.

### Deut gantimp, paotred !

N'eus ket pell e save trouz diwar-  
benn ar pleg kemeret gant ar zou-  
darded da lakaat en o zoullou, el  
linen gentan, skeuden ar Galon-Zakr.

Kement-se, eme an aotroue  
vras a gomze er Gembr, a zo eun dra  
difennet gant al lezennou, hag ar  
gouarnamant a harz, en pep stumm,  
na zeufe ar c'hiz se da vezan dige-  
met gant an holl.... Lezel a  
reomp gant ar zoudarded pep frankiz  
a greden, nemet ne c'houlomp ket e

tigasfe ar brezel d'imp en-dro ar pez  
hon doa kondaonet en amzer a  
beuc'h....

N'em eus ket-me, — dec'h soudard  
koloniad ha hirie martolod, —  
ganin, en-pad hir amzer, krogadour ar  
spontusan ha barnet, hep mar, da  
ruihal c'hoaz ar morioù en-pad pell.  
— nan, n'em eus ket a gentelioù da  
rei da baotred ken speredek, da  
baotred hag a dremen, dic'hoaz mat,  
amzer ar brezel e-barz ar Gembr  
vras....

Laret a rin d'ê, koulskoude, hep  
kasoni ha war-lerc'h skiant prena,  
paotred ker ganin !

— N'en em jallit ket, aotroue,  
Poanius eo evidoc'h, a dra-ze, war-  
lerc'h tri bloavez brezel, sonjal pe-  
naos, daoust da lezennou berniet  
ganech, ez eus c'hoaz tud, — ha  
soudarded zoken ! — o kredi da  
Zone hag o sevel o c'halon war-zu  
d'ezan.

Torfed an dud-ze, m'hen goar, a  
zo bras divent, ha n'ouzon ket kaer  
hag hen e c'hallont bezan absolvet  
ganech ha gant ho lezarnioù. Met  
ar pez a drubuilh anê an nebeutan,  
red eo laret, eo ivez hoc'h absolven  
pe ho pardedigez....

Gouzout a reont penaos, adalek  
m'emañt el linen gentan, n'o deus  
tamn da gontan warnoc'h.... N'eo  
ket c'houi a skanvaio nag a zistano  
al hec'h diwarne... Ne welont nerz  
ebet ar bed a gemont a c'halle o  
zikour pe derri diwarne reuz ar  
walen : Eno emaint gante o-unan,  
dinerz, dic'halloud, dindan grizilh an  
obuzioù, en kreiz an tennou, e-barz  
ar fank, ar vouilhan, skornet, devet,  
marnaoniet, ankeniet.... A drev  
d'ê, mouez ar vro hag urzioù garo :  
« Red eo ma difenn ! Red eo chom  
aze ! » Diraze, eur voger a dan :  
« Na zeuit ket hiroc'h, peotra-  
mant !... »

Hag an dud keiz, kaer o deus trei,  
distret, sellet a-drav hag a-raok n'o  
deus en-dro d'ê nemet douar loustou,  
anken ha maro... A-us d'o fenn hepken,  
eur sklêrijen, eur penestrig war ar

vuhez, eun taol-lagad war an oabl,  
eur c'hornig glas eus an Nenvou !...  
N'eus nemet se, netra ouspenn ! Ha  
kement-se evito eo ar fizians, ar  
frankiz, an dremwel evurus ma nijont  
davevan a ene hag a spered pell diouz  
spouronioù ar brezel.

Hag e savont o sellou war grec'h...  
Hag e kasont eun huand, da c'hor-  
toz eur bedon, war-zu an Tad a zo  
en Nenv... Hag e tougont war o  
bruched gant fizians hag e talc'hont  
en o c'hledourioù skeuden freaziuz ar  
Galon Zakr !

Ha piou a c'halle o zamall ?

Ar baotred a chom du-hont en o  
aez, e lec'h dont ganimp d'an « tran-  
cheou », ar baotred-ze a gousk hep  
nec'hamant, a vev hep dienez, a vale  
heb anken, hag a heuilh ar brezel  
hanter-kant leo en adrev bervez ar  
pez a lennont anezan, ar re-ze n'o  
deus gwir ebet da gomz evel-se d'ar  
zoudarded... nebeutoc'h c'hoaz da  
rei kentelioù d'ê war gemant-se.

Mar dint evurus ha dinec'h, e  
c'hellont lavaret trugarez d'imp.

Ha ni, evit kemend-all a c'hou-  
zanvou, a viro ar gwir, du-hont da  
vilhanan, — rak ne deont ket eno  
d'hon gwelet ! — da garout ha da  
bedi Doue evel ma plijo ganimp.

Int, dienez ebet d'ê, ne c'houlont  
ket anezan. Heb mar, ma teufe d'ê  
chom dindan kanoliadegon evel am  
eus bet gwelet, e rafemp ivez  
eveldomp.

Ya, deut ganimp, paotred !

AR YRODET.

### Paour kaez Frans !

Setu, eta, hon Tad santel ar Pab  
deuet da lavaret e c'her evit goulen  
ar peoc'h. Mad-tre, Bretoned ! Ha,  
dre zoujans outan, ez eo red sellet piz  
ouze e c'houlou : Ouspenn ze, ez eo red  
gwelet penaos e c'houlou a zo graet  
dre garantez evidomp, dre e galon  
dener, ha nan abalamour ez eo bet  
muzuliet gant Gwilhelm II pe Charlez  
Kenta. Ha, koulskoude, ar « journa-  
liou » a lavar ze. Perak ? Me 'grad  
ez eo dre m'eman ar Frans en eur  
stad ispisial e-kenver ar Pab.

An holl rouanteleziou all : Bro-Zaoz,  
Stadou-Unanet, ar Rusi, protestanted  
evit an darnvuia, o deus resevet lizer  
ar Pab. Ar Frans hepken n'he devo  
anezan nemet dre zaouarn Bro-Zaoz,  
p'eo gwir eman dispartiet diouz Rom.

Ar Frans,  
merc'h hena an Iliz, ne zigemero ne-  
tra digant Mestr an Iliz ! Ha ni e-  
kreiz ar brezel !

Hastomp, eta, goulen, en hanô ar  
Frans, ma vezo adarre eun den karget  
da zerc'hel al lec'h anezi e Rom. Eno  
eman an dalc'h, ar maen-fount evit  
kaout an Trec'h hag ar Peoc'h.

Ar Zoudard kos.

### KELIERE EUS AR VRO

#### LENNON

Kengenn. — N'eus ket c'hoaz  
gwall-bell e oa bet skôet an aotrou  
Denès, mestr-skol Lennon, gant eur  
c'hanv pouner : maro eur verc'h  
yaouank a zeitek vloaz ! Eman an An-  
kou o paouez skei eun taol kriz adarre  
ouz e diegez, o tifranna digantan e  
bried kare ! An itron Denès a oa  
c'hoar gær d'hon c'henlabourer Ivo-  
nig Picard, hag aman e Sant-Brieg,  
e-lec'h e oa deut da c'houlou ar pare  
digant ar vedesined, eo he deus kavet  
ar maro, siouaz !

Doue ra vo gant hec'h ene, ha da  
roio frealidigez, en o glac'bar, d'he  
fried ha d'he bugale ! D'ezo holl ha d'o  
c'harent, d'hon mignon-ker an aotrou  
Picard ha d'an itron Picard, e kinni-  
gomp, eus a greiz hon c'halon, hon  
gwella menoz hag hon gredusa gour-  
c'hennou a g'ganav.

Ar Renar-Merour : F. VALLÉE.

St Briauc. — Imprimerie St-Guillaume





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar biou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEDET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIAND, 27, ball Charner, a zigemer ané

**aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'ha c'has da zoudarded ar Vro**

An dimezell Maria ar Floc'h..... 4 real.  
Trugarez, a greiz kalon, d'hon lennerz ker evit hec'h aluzen hag evit al lizer mat, leun a c'hred hag a garantez-vro, he deus digaset d'imp a-unan ganti! Setu aman, distaget dioutan eur ger a veuleudi a drido gantan kalon neb a skriv war « Groaz ar Vretoned »:

« Gant pebez plijadur e lennan, bep sùn, ma « C'hroazig »! Pebez frealzidigez d'ar galon vrezad ar gazetenn vat-s, n'eo ket anavezet na badet a-walc'h en hon Breiz-Izel! A dra zur, gallout a ran hea laret, neb he lenn n' en em gav nemet gwelloc'h, e lec'h mont da goll ar spered hag ar galon gant kelouennou hudur ha dibell, marvel evit an ene..... »

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar « Meuse » ar Fransizien a c'honnid tachen**

Ar gwener, 24 eus ar miz, diouz ar beure, ar Fransizien a zo ast war-raok hag o deus kemeret diwar arsaill en uhelen 304, unan eus al lec'hioù krenva eus linen an Alamaned. An deiz-se hag an deiziou war-lerc'h o deus dalc'het da arakaat; ar 26, o deus kemeret c'hoaz « koad ar Fosiou » ha « koad Beaumont » war ribl debou ar « Meuse ».

Hon lennerien a welo pelloc'hik eul lizer digant unan eus hon c'henvroiz a oa en emgannou-ze gant eur rejimant a Vretoned. Digouezet e oant, pa skriva e lizer, tost d'eur gêriadenn hañvet « Les Chambrettes » — ar C'hamprougou, — er c'hoad Beaumont. Ra gaso kroaz ar Vretoned d'hon c'henvroiz ker hon gourc'hemennou kalonek ha gwella menoz Breiz-Izel!

**War dalben ar Zaozon**

Diouz tu ar Zaozon, ez eus bet krogadou stank a-hed o linen eus an Hanternoz, dreist-oll e koad « Glencors », « Traouien ar c'hoaz », hag a zo dalc'het gant Breiziz Breiz-Veur, hag en eur c'hoad all difennet gant Skozioz o deus hanvet anezan « Inverness » eus hano kêrbenn ar rann a Vro-Skoz e-lec'h e komzer ar yez keltiek.

Er c'hreisteiz da Lens, ar Zaozon o deus kemeret eur grech'ien c'hoaz. Diaes e vo d'an Alamaned miret pell hizviken ouz « Kêr ar glaou-douar »

da goueza etre o daouarn.

**Trec'h bras an Italianed war stêr Izenzo. 26,600 a brizerien**

An Italianed, treuzet ganto stêr Izenzo, o deus argaset an Aotrichianed diouz ar c'hrenvlec'hioù a zalc'hent war ar ribl kleiz Kemeret o deus, ar 24 eus ar miz, ar « Monte Santo », — ar Menez santel, — ha breman e c'hunvezont tachen war uhelennou « Bainsiza » ha « Hermada », e sell da doulla o hent dre eno war-zu Triest, porz bras ar mor Adriatik. Kemeret o deus 26,600 a enebourien da brizerien gant 75 kanol.

**War dalbennoù ar Rusianed.**

An Alamaned a gav harz breman war dalben ar C'halsi hag ar Roumani digant ar Rusianed hag ar Roumaned, adreizet da vat o armeou. Fin 'zo d'an enebourien da vont war-raok diouz an tu-ze.

Gant-se, e troont ouz linen Riga en Hanternoz a-hed ar mor Baltik. E gortoz emeur d'ezo da skei taolioù er c'horn-bro-ze.

En eur c'hendalc'h a zo bet savet e Petrograd, ar jeneral-meur Korniloff en deus distkouezet, en eur brezegezh d'an holl bolitikerien en em vodet eno, pegen red e oa en em unani ha poania start da zifenn ar vro. A drugarez d'ezan ha d'ar ministr Kerensky ez a an traou war wellaet bemdez er Rusi.

**War vor.**

E-touez al listri goulede, e welomp hanoioù an tri lestr-man dre lien a Vreiz: « Florentine » a Zant-Malo, « Havana » a Zant-Servan, « Général de Boisdeffre », 2,195 tonnell, a Naoned.

**Ar veleien war an talben**

D'an aotrou F. K., person ma farrez.

Daoust d'ar brezel da veza tenn, Derc'hel 'ra c'hoaz hon beleien; Kalz 'zo ané war an talben.

Adaleg ar c'henta devez, Ha kuitet ganto o farrez, Deut int da zifenn hor Mestrez.

War an d'chen n'eus ket, heb mar, Kalonekoc'h war an douar! O dever 'reont holl, c'houi 'oar.

'Mesk ar zoudarded a beb oad, Ar beleg atao 'zo eun tad; Holl her gouezar, pell-ze, ervat.

Gant e skouer-vat hag e gomzou, Ec'h entan krak ar c'halonou Dre-oll, du-ze en talbennoù.

Ha, pa gouez eun den mac'hagnet Dindan tennou treiz ar Voched,

Ar c'hrazvater a zired.

Ha, pa vez stanket ar gouli, Da c'heda ho kas d'ar c'hlanvdi D'eo'h laro c'hoaz komzou a Spi.

..  
Eur strollad tud a deodou fall, Tud n'int ket din da veza Gall N'ehanont marse d'o zamall.

— « War an talben ne welot ka Nan! a dra zur, beleg ebet; War an a-drenv ez int chomet. » —

D'o c'homzou me 'responto berr: — « Pa'z aint d'an arsaill vras, ember, 'N o lerc'h bezit kravazater! » —

Gloar hag enor d'hor beleien! A zo han stank war an talben: O dever 'reont a gadourien.

Ha c'houi, Iliz santel, hor Mamm, Daoust d'an amzer, ne wani! tamm; Ne blegit ket dindan ho samm.

War-zao, eta, Breizad ha Gall! Stankomp o genou d'an dud fall; Ar Frans 'renk beza dishual.

— An neb en deus aon d'Hon anzaou, D'Hon zro Me ivez hen nac'ho. — War zao, eta! War zao! war zao!

Gloar hag enor d'hor beleien, Ec parrezioù hag en talben! Ra vevint eta da viken!

Yann-Mari NORMAND.

War an talben, 24 a viz eost 1917.

**KALZ D'OBER I...**

Ar Vretoned ac'hanomp, da laret eo ar re a gar o bro hag en em drubuilh diwar vremen gant al labour a vo d'ober war-lerc'h ar brezel, a lavar d'alc'hmat na vo ket brao stourm da gentan ouz an droug a welomp dre-oll, hag e vo red krigi a laz-korf gant an « Emzao breizek ».

Eun dra souezus eo sonjal pegen birvidik eman ennomp ar garantez-vro hag ar garantez-yez, ha gwelet, war an hevelep tro, pegen dizeblant e chom an darnvuian en o c'henver. An darnvuian-ze a dlefe o difenn ha ne reont netra! N'eo ket, mar karit, yenien na dizeblanted. Nan! Leziregez hepken. Hag al leziregez-man, siouaz! a zo nozusoc'h pell eget kasoni. Neb a stourm a vev; e-lec'h ma 'z eus emgann, ez eus buhez! Netra d'ober nag a-du nag a-eneb eun den lezirek. Heman a zo maro, maro-mat, maro diwar e dreid, ar pezh eo ar gwasan, hag eun tarz-

kurun zoken, aon am eus, n'e zibunfe ket!

Diwallomp, Bretoned, da dapout ar c'hlenved-ze, kalz gwasoc'h eget ar maro. Ar maro, o sielli eur vuhez reiz, a zo skouerius hag a zoug frouez!

..  
Setu ar zonzezonoù a zeu d'ia, aman war ma lestr, o lenn goude lein eur gelaouen a Vreiz, kelaouen c'hallek-rik, heb eur ger brezonek, ha hi moulet, koulskoude, war zouar sset kaourintin en kalon Breiz... ha hi lennet, koulskoude, gant Bretoned, gant Bretonezed rik, a gomz holl brezoneg bemdez, a zonz en brezoneg hag a bed, bep beure ha bemnoz, en yez o C'hendadoù, en yez hon zent koz!

Mantrus eo!  
Hag an dud-ze, Bretoned ha Bretonezed, en em glemm, hen gouzout a ran, diwar-benn kement-se.  
Ken brao tro-spered a zo da zisplegan an nevezentiou d'eo en o yez, ken dudius e vefe o lenn, kenkouls e chomtent garanet en o c'halon, kement a blijadur a gemerent gante ma n'int ket evit kelaat en o spered e c'hallfent o klevet en eur yez all, en eur yez estren!

Eun nevezenti dreist-oll, — unan eus kaeran hardoniou hon Bro, darrempredet gant milieroù ha milieroù a dud, — a vije bet dispar er gelaouen, kontet en brezoneg. E lec'h-se, galleg, galleg penn-da-benn! Netra ne sklêrijen ar spered, netra ne domm ar galon, netra ne lak ar Breizad da dridat. E-kenverez, kontet en hon yez, pebez evrusted ha tenerat levezet en kalon pep-hi!

Ne dalvez ket nac'h, da betra? peb bobl he deus he yez, ha spered eur bobl a zo graet gant ar yez hag evit ar yez. Da betra neuze diroudenni eur vro ha diwizienni eur bobl? Pec'hed marvel eo! Pensaou ne welit ket an dra-ze, kenvroiz hag a dle hon hencha, hon ren?

C'hoant ho peus da c'houzout ar c'hemm a zo, evit ar Vretoned, etre ar galleg hag o yez?

An hevelep kemma a zo, kenvroiz ker, hag etre eur brezegezh c'hallek hag unan vrezonek. Kement eo bevus ar brezoneg, dudius, tener, reiz, kemend-all eo treut ar galleg, heugus, garo, kazus. Gwelet ho peus biskoaz eur zarmon c'hallek o tigas war dremm hon zud ar mouc'hoaz dudius a bar warne pa glevont eur gomz vrezonek a lak o c'halon da







**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

10 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skould evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**  
Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît,  
St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIAND, 27, bali Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Grez ar Vretoned »  
d'ha c'has da zoudarded ar Vro**

P. Losquin, aspirant . . . . . 20 real.  
Trugarez, a greiz kalon, d'hor mignon ker, a zigas d'imp, a-unan gant e aluzen, eur mad a lizer a voulimp ar zizun a zeu.

**Taolen ar Brezel**

Ar Fransizien a c'hounid taoben war « Hent an Itronnez ».

Ar gwener, 31 a eost, war dalben an « Aïsne », da heul eur ganoliadeg start, ar Fransizien a zo aet da linennou an Alamanned war eun hed a 1500 metr, dirag an ti-mereri brudet « Hurtebise » war « Hent an Itronnez ». Deut eo an taol da vad, p'o deus gounezet diwar al lamm kenta eun dachennad a dri-c'hañt metr a zounder pe dost. Dalc'het eo bet ar gounid-ze, daoust d'an Alamanned da enep-stourm eus an taera.

A-hend-all, ne gleyer hano, a-hed an holl dalbenn, nemet a ganoliadegoù hag a grogadou du-man ha du-hont.

**War dalbenn an Italianed.**

Bet faezet da vat war stêr Izonzo, an Ao trichianed a c'haly a bep tu skoazellou e-leiz. Eman an emgann en e starta en-dro da venez « Sant-Gabriele », er biz reter da stêr « Gorizia » Niver an enebourien paket da brizenerien gant an Italianed a zo en tu-hont da 27.000.

**E bro Salonik hag en Douar-santel.**

E bro Salonik, e stag ar re Unanet da vont a bep tu d'ar Vulgared. Ar re-man, pa n'o deus skoazell ebet da c'hortoz digant an Aotrichianed dalc'het war dalben an Itali, a vo diaes d'ezo stourm.

En Douar-santel, ar Zaizon a oa digouezet eur pennad a zo e kêr « Gaza », o deus graet adarre eur gammad war-raok, ken e rank an Turked tec'het rano ha dilezel kêr « Jaffa », eur pemzek leo bennak diouz Jerusalem.

**War dalben ar Ruel.**

War dalbennou ar Rusined hag ar Roumaned, ar re-man a zalc'h penn eus ar brava d'ar jeneral alaman Mackensen en-dro da gêr « Focsani ». Ar Rusianed, en em gav amezeien d'ar Roumaned kalonek-se en hanternoz da Focsani, gounezet emichans gant o skouer-vat, en em gann start ivez, o viret ouz an Alamanned da doulla o hent war-zu kompazennou edus kreisteiz ar Ruel, evel m'o dije c'hoant a-walc'h d'ober, moarvat.  
War dalben Riga, avat, laoskentez

rejmancheu-ze, touellet gant an dispac'herien, he deus roet tro d'an Alamanned da dreiza stêr Duina ha da lakaat ar c'helc'h war gêr Riga. Ha setu kollet, da heul, ar porz-mor-ze a bouez bras a oa en em zifennet da vat e-pad tri bloaz !

**War vor hag en aer.**

Disadorn diweza, diouz ar beure, e mor an Hanternoz, pevar lestroueder armet eus an Alamagna a zo en em gavet gant listri-brezel skanv ar Zaizon ; ar re-man o deus hanter-zistrujet anezo ha graet d'ezo mont d'en em deurel en aod e bro Danemark.

Dilun diweza, nijerezed an Alamanned o deus klasket adarre nijal a-us da Vro-Zaoz. A-boan m'o doa tizet ar aod m'o deus renket tec'het prim ; unan hepken, hag a oa digouezet a-us da gêr « Douvres », he deus lazat er gêr-ze, gant he bombezennoù eun nao den bennak. Dimerc'her, nijadeg adarre, betek Londrez ar wech-man, hag, evit doare, gant eun tamm muoc'h a zistruj.

Diouz o zu, nijerien an Itali a zo deut a benn da vont a-us da gêr « Vienne », kêr-benn an Aotrichianed, ha leuskel enni papereñnoù da embann trec'h an Izonzo.

War dalben an Hanternoz, an Alamanned o deus bombezet gant o nijerezed ar vro en-dro da « Dunkerque » ha da « Calais ». Nijerien ar re-Unanet o deus distroet o zorz d'ezo d'ar gêr dre stlepel 15.500 kilo a vouliji war gardioù-nijerezed ha henchou-houarn an Alamagn.

**KELBIER RUS HON MIGNONED  
A ZO KR BREZEL**

**Kelou eus an hospitalioù.**

Kelou mat hon eus bet digant hon c'henlabourer ker, P. Guédès, a zo bepred klanvdiour en eur c'hlanvdi war an talben.

**Aotrou ha kenvroad ker,**

Mar deo gwir e choman pell amzer hep skriva, *Kroaz ar Vretoned* ha Breiz-Izel n'int ket, evit se, nebeutoc'h ker d'am c'halon. Hirie, p'am eus eun tammig amzer, e teuan, eur wech ouspenna, da gas d'eoec'h eus va c'helou. Va yec'hed a zo bepred mad a-walc'h daoust d'an trubuilhou a gavan bemdez dre zigouez ar brezel. Chenchet em eus lec'h eun nebeut deiziou a zo. . . . . Da c'hortoz sioulc'h amzer evit kas diwezatoch pennadou da *Groaz ar Vretoned*, va c'hredit bepred ho kenvroad leal.

P. G.

Hon lenner mat, F. Goareguer, a zo

**Kenavo da LOUIS COAT  
maro evit ar Vro d'an 22 Ebrel 1917**

Soudard ker, lazet du-hont en eur stourm gant kalon, Loiz, nag a bed a ouel d'it : tad, c'hoar, breur, kar, migaon ! Mar deo bouzar da ziskouarn, ha da zaoulagad dall, N'eus forz, te hor c'hlev, hor gwel a spered ar bed all.

E-pad ma sav hor c'hlemmvan war anken-hor spered, En Ailly 'kousk da gorf paour e peoc'h doun ar vered, Met da ene 'zo savet diouz prizon ar bez yan Beteg ar Vro beurbadus, e-touez ar Verzerien !

Ya, e-touez ar Verzerien, setu hon esperans ! Rak c'houi, soudarded kouezet evit buhez ar Frans Dindan mestaolioù trubard ar c'hrisa enebour, Ho peus bet digant ar Mestr digoll eus ho labour.

Ni 'gred 'oc'h digemeret er Baradoz skedus, Ni 'gred gwelet al lore war ho tal lugernus, Hag e seblant d'eomp klevet diskan ho levenez O tiskan 'vel eun hakleo da vro hon dienez !

Ni 'gred, evel p'her gwelfemp dirazomp splann ha sklear, Ez oc'h, gouda an emgann, digouezet er wir Gear, 'Lech eur wech ma vimp bodet, ne vo ken dispart, An dispart hag a had er spered anken kri !

Evit dousât eun tammig krizder da zispart, Daoust ma c'houzomp na deuy ken betek trejou hon ti Da gorf paour merzeriet e founnez ar brezel, Hor zonzj eo eus hor familh e rez bepred ezel.

Hag e vevomp gant da zonzj dirag hon daoulagad. Evit esât kaout kalon e-kreiz hor c'halonad ; Hag e santomp ac'hanout tost d'eomp e gwirionez, Evel kent, pa oa er gear holl dud an tiegez.

Ni 'wel ac'hanout paotr fur, sentus, labourer start, Eur c'horf yac'h, eur spered eon, eur gwaz yaouank ampart. O ! ganit 'oa eaz beva ha, dre en em zikour, Skanv e tremene warnomp an deveziou labour !

Siouaz ! 'vel ma red en oabl rouden ar vogeden, Prim e tec'h war hon tamm bed levenez verr an den ! Hag ar brezel ruz 'zo deut da strakal dir ha tan ; O ! gwaz d'eoec'h, soudarded paour eman ho korf dindan !

Pignet out d'an emgann, Loiz, kerkent m'eo deut da dro, Da wad prest, heb en em glemm, da ruilh evit ar Vro ! Gant eun ene entanet e teus great da zevar, Da « Groaz a vrezel » 'zo test eus se, klanvdiour ker !

N eur zikour ar re c'hloazet, d'az tro ez out skôet ; Setu da vuhez yaouank euid da Vro rôet ! Salud d'it eat da greski niver merzerien Frans ! D'ar Vro gwad he zoudarded a zo eun esperans !

O Loiz, mab karet, breur ker, mignon mat, kenavo ! Da envor enomp bepred beo-buezek a vo ; Hag e peoc'h ar Vro wirion ni holl en em gavo Goude brezel ar bed-man ! . . . Loiz karet, kenavo !

EOSTIG KERINEK.

bepred en eun hospital du-hont pel e bro-Limousin. D'ezan hon gwella menoz, ha da zistroioù heb dale da Vreiz ! Setu aman e lizerig :

Aotrou ha kenvroad ker, Eur ger evit rei d'ec'h eus ma c'helou a zo gwel, a drugare Doue. Dalean e'tan da vont da Vreiz, e-lec'h em bi-je karet mont da beurbarean.



Renée a rau bep sùn gant plijadur  
Kroaz ar Vretoned...  
D'ec'h ha d'hon c'henvroz ma gwel-  
lan gourc'hemennou.

F. G.

Trugarekaat a reomp aman, a greiz  
kalon, hon lenner ker F. Riouallon  
evit e lizer ken kentelius diwar-benn  
an nijerien. Nemet n'hellomp ket e  
voula aman en abeg d'ar « barnere »  
a zo striz, dreist-oll, war draou an  
nijerez. Hag eun dra ret mat eo en  
amzer-man a vrezel !

## NOTENNOU

### KENAVO D'AR

(Ar pennad-man eus « Notennou »  
hon Renner ker, an aotrou Bocher, a  
dle dont a-raok an diweza moulet  
aman, ma konte ennan e giniad  
da ger « », evit mont d'an  
talben.)

Ar 15 a viz meurs 1916 e sav  
bec'h, er warnomp sou-  
darded oajet.

Ar evel ma onr kalz, a  
zo eur c'hamp bras ha neve, du-hont  
en departament an Ain. Ne dle chom  
er c'hamp nemet tud yaouank ar  
bloaveziad 17, n'int ket c'hoaz disket  
a-walc'h. Ar « koloniaded » koz,  
a-hend-all, a dle kemer hent « ».  
Eno e voint gwisket ha, p'en em  
gavo an urz, e kemerfont hent al  
linen-dan, er c'hornad ma vo gour-  
c'hemennet d'ê. Eur c'helou hag a  
ra d'imp fallgaloni. Ken evurus e  
oamp er

Tra zouezuz ! gwasoc'h e kav ar  
zoudard klevet eur c'helou evel-se  
a-dreuz, pell diouz ar bec'h, eget e  
glevet du-hont war an talben. Adalek  
m'eo hanvet da vont war-raok e galon  
a gren, a spont. N'eman ken c'hoaz  
en tan, pell ar-hane ! Met kredi a ra  
d'ezan klevet ker kent mouez ar c'ha-  
noliou ha beza ivez barnet d'ar maro.  
Netra mui ne ra plijadur d'ezan. A  
belec'h ? Barnet eo... Kalz a drec'h,  
pe a c'hoanta trec'h i war ar zonz-ze  
o klask diuamanchou all, evaj,  
dizurz, komzou hudur pe loustoni.  
Met an trouz a reont a ziskopez peur-  
vuian o deus muioc'h a ze a doan,  
hag e klaskont hepken beuzi pe an-  
kouaz o foan-spered. Siouaz ! tud  
diboell, e-lec'h beuzi anei, ne reont  
nemet he moredi ha, p'eman tremen-  
net d'ê, houman a zihun gwasoc'h  
eget biskoaz ; ha neuze an dud n'o  
devez mui na nerz na youl a-walc'h  
da stourm outi. Hag ez int, da  
c'houde, tud gwall-eruz...

Ar gwella eo c'hoaz kemer ar  
vuhez evel ma teu, en em gennet  
ha, ma Doue, lezel an traoù da  
gerzet !

Tremenet ar zonz fall, e tiwan  
goude eur zonz all er galon, eur zonz  
groc'h, uheloc'h, hag a zav an ene  
dreist an oablou beteg an Nenv :  
« Poanuz eo, ma Doue, met ho po-  
lantez bezet graet... Mar talvez ma  
foanion eun dra bennak, digasit poa-  
nion d'in... Mar goulennit ma buhez  
evit silvidigez ar Vro, kemerit anei.  
D'Ec'h eo !... En eur ger, grit ganin  
evel ma plijo gant ho Madelez ! »

Ha frealzet e kerz an deo nerz-  
soc'h. Mad eo ivez d'eun dra bennak.  
Ar Vro a gont warnan. Eun tamm  
lorc'h a zo ennan ! E zaerou a ruilh  
eur pennad evit dizamma e galon ;  
met ne ruilhont ket evit he distrema ;  
evit he c'hrenvaat, avat ne laran  
ket. Daerou o ruilhal a zistan hag a  
ra vad...

O ya ! da betra hen nac'h ? o kui-  
taat hent houarn ar dreist  
oll war-lerc'h an nebeut komzou

# AR PEURZORN

D'an aotrou Leon ar Berr.

An heol a zo izel, an deiz 'zo o koueza,  
Ledet eo war al leur al leuriad diweza,  
C'hoaz eur c'hrogadig all, setu echu ar boan.  
Eus chiminal an ti eur vogedennig voan  
A zav war-zu an nec'h, ploum, a-dreuz ar skourrou :  
Eman elum an tan dindan ar pilligou.  
Madalen 'zo eno, dillo, lemm he lagad.  
War bep tra eo brudet da veza dournet mat,  
Met da bourechas eur pred ha da aza krapouez  
'Vit war 'n hed pemp leo round n'he deus ket he farez.  
He c'hrapouez a zo poaz ha melen evel aour,  
N'int na sall na goular, met atô o deus saour.  
He dourn war ar rozal a red war ar billig,  
Atô he c'hrapouezen a zistag dibistig.  
Morse gant ar spanel n'he deus manket he zaol,  
Bewech 'man en o fez ar c'hrapouez war an daol.  
Met pelec'h 'man an den e pep tra direbech ?  
Madalen 'vel an holl he deus ivez he zech :  
He mignoned he deus, ha neuze n'eo ket souez  
E vez 'vit an dud-ze kalz drusoc'h ar c'hrapouez.  
Pa vezo ouz an daol azezet o tibri  
Eun den yaouank bennak hag a blijio d'ez.  
N'he deus muzul ebet ! Madalen 'zo focan...  
Met, a-hend-all, eo skragn ha piz war an aman.

Dre ma tosta an noz, Biel, ar mevel bras,  
A lop war al leuriad 'vel na reas biskoaz,  
Beuzet en e c'houzen ha war gorf e roched,  
Rampet 'vel eun touseg ha digor e vruched,  
Biel a sko atô heb diskuiza banne,  
Evel eun horz houarn pa gouez war an anne,  
E wall-freilh a zo graet gant eur skour dero koz.  
Eus an teva gwezen a zo e Koad an-Noz,  
Eus skour d'an nebeuta ken teo hag e voized,  
'Vel n'ez eus e neb lec'h etre daouarn gwazed.  
Ar greun dindan e freilh a strink evel kazac'h.  
— « Nag eurus eo ar vreg, nag eurus an ozac'h,  
'Deus dindan o zôenn eun hevelep mevel ! »  
A lavare Mari 'n eur ruza he rozal !  
— « Santez Anna ! eme Jaketa an ti-all,  
Pebez paotr dibikouz ! E bouez a aour a dal ! »  
Soiz gant he skuberez, Barba gant he rastel  
A chom sebezet-oll da zellet ouz Biel.

Skouarn Biel 'zo tano, hag e c'hellit kredi  
Ez eus fouge ennan o klevet e veuli.  
E freilh 'gouez pouneroc'h war al leuriad gwini  
Pa glev diwar e benn ar merc'hed o tiviz.  
Met ar pez 'lak e vrec'h da veza ken nerzuz  
Eo, dreist pep tra, ar zonz e vezo krapouez druz  
Dizale da zibri, krapouez druz ha melen  
Evel na weler ket, aozet gant Madalen !

BLEIZ NEVET.

## PEURZORN

Kent (1) terri al linen eus an diou gostezen  
O deuz a-hed an deiz dalc'het d'en em zouten.  
Ar freilhou war al leur, gant an taol diweza,  
A lakay an douar, ar c'branjou da gren.  
En despet d'ar skuizder, da verka ar peurzorn,  
'Vo graet eur youc'hadeg. Goude, e barz eur c'horn,  
E zec'hor ar c'houezen 'pad ma tired founnus,  
An Itron eus a di, en he dorn jistr bervus,  
'Vit treuzi al leuriad da leunia ar weren  
A ro kalon d'an den, 'neta ar c'hourlanchen.

Ar merc'hed a dosta gant o ferc'hier en aer  
Da gempen ar c'holo 'vel en-dro d'an aoter,  
E Rom, ar Vestaled, p'en dije ar roue  
Ronet al lidou sakr en enor da Zoue.

Neuze, holl a vesko c'hoarz ha kanaouennou  
Ken na baro en oabl skleuz ar steredennou.

IVONIG PICARD.

(1) A-raok.

laret d'imp gant ar c'habiten, ma  
daerou a ruilhe, nan gant tenere-  
digez, met gant keuz, gant nec'ha-  
nant, gant glac'har.

Kuitat eur porz gwaskedet evit  
mout da belec'h ? Eo-kreiz pe seurt  
korventen ! Dindan pe seurt arneen ?  
War betore mor ?

Kalz a c'hoarze, a gane ar « Mar-  
seillaise ». Me ne c'hoarzen na ne

ganen. Ma spered a oa e lec'h all.

A-raok noz en em gavomp en  
N'eman ket pell ; eun dek pe daouzek  
leo. An darnvuian a oa evet d'ê. Dre  
ar ruioù kanerez ! — « Bezan hon do  
anê ! » — « Barrek omp !... » Libou-  
dennou kër a c'hoarz hag a heuilh eur  
penned hiniennou eus ar zoudarded

kazel-ouz-kazel. Ar mestrou a ra trouz,  
a c'hoanta derec'hel o zud rengennet.  
— « Seir da c'hoüg, eme ar zoudar-  
ded... Tapet a ri sec'hed ! — « Hi !  
hi ! hi ! eme ar merc'hed ». Fentus  
eo. C'hoarzin a reont holl.

Eur wiac'h koz a-zivar he zreuzou  
a lavar kreñv : « Hag e talvez d'eo c'h  
c'hoarzin, paour kèz bugale ?... Ar-  
c'hoaz, marteze, e velet dastumet  
maro !... Ha c'houi ivez, merc'hed,  
a rafé gwel o senjal en ho preudeur  
eget o jolorial gant ar re-man...  
Pennou skanv ! »

Eur c'hoarzedan greñvoc'h a stou-  
vas he genou d'an hini gor...

Pelloc'h, ouz hon gwelet, gwraze  
pe intanvezed yaouank a ouele hag  
a gemere treuz ouziap.

Digouezet en kazarn Sant-Laoranz,  
a zo war uhelen ar Groaz-Rouz, e  
klevomp eun tammig sarmon ha nan  
gourdrouzou. Dleout a raemp bezan  
tud siouloc'h. Ne ca ket a zroug-  
koulskoude. Eun toullad deveziou da  
c'hortoz a-raok mont kuit. Amzer  
d'hon gwiska, da gavet urziou. Laret  
d'imp bezan fur. Frankiz da dec'het  
bemnoz gant digouezout en koulz,  
Den ne raio d'imp trubuilh na hegas,  
nemet e tell d'imp, c'hoaz eur wech,  
bezan fur ha chom an didrousan ma  
c'hallomp...

Hag e chomomp eno dek devez  
evel-se, didrubuilh a-berz hon mes-  
trou ha trubuilhet o c'hortoz ar c'houlz  
da vont war greec'h.

Da heulia.

AR YEODET.

## Unvaniez sakr ?....

Daoust hag an « Unvaniez sakr »,  
votet gant ar C'hannaded d'ar 4 a viz  
eost 1914, n'eo nemet eur « goz pape-  
ren » evel promesaou Gwilhaou II ?  
Her c'hredi a rafen a-walc'h, en des-  
pet d'ar gerion flour ma vezomp la-  
kaet ganto da vourgousket. Abaoe  
eun nebeut miziu ne zigouez war an  
talben nemet « notennou » da zifenn  
heuilh hor relijion, pe, da vihama, da  
zifenn dougen a-wel skeudennou sakr  
ha medalennou. En hano ar zoudar-  
ded e fell d'in sevel va mouez uhel  
a-walc'h da veza klevet. Pe p-hini e re-  
lijion, mar plich, ha peoc'h ! Loskit  
ac'hanomp da ober kempenn hor la-  
bour, da lavaret eo « kas ar Voched  
er-mañ eus ar Frans. » Met, en dis-  
tro, hon list ivez da bedi Doue evel  
ma karomp !

Ar Zoudard koz.

29 Eost, 1917.

## KELSIER EUS AR VRO

### PLOUESCAT

Kengano. — Eun tammig diwezat  
e teomp da ginnig hon gwella gour-  
c'hemennou a genganv da gerent hon  
c'henvroad, Josef Jaouen a Blouescat,  
si-letanant a c'hrenaderien, a zo koue-  
zet, d'ar 27 a vezeven, war an dachen  
a enor (Hent an Itronedez, Toull-an-  
Aerouant). Niz e oa d'hon c'henvreur  
ker, an aotrou Leon ar Berr, Barz  
« Abalor », rener an « Union Agri-  
cole » a Gempelle. Daou vreur en deus  
c'hoaz, Jord, a zo prizonier en Ala-  
magn aboue mezegen 1916 hag Alek-  
sandr, eil-major ar « C'holoniaded ».  
En em unani a reomp gant hon mignon  
Abalor ha gant e holl diegez da  
c'houlenn digant an Aotrou Doue ma  
vo gant ene an hini en deus galvet  
davetan, ha ma roio e skoazell d'e  
vreudeur a chom c'hoaz er brezel !

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE

(5<sup>e</sup> Edition)

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Guilhem





PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 29, rue St-Benoît,  
St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, balí Charner, a zigemer ané

Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zondarded ar Vro

An dimezellet a Volz, Ki-  
beron... 20 lur.  
An aotrou abad Uguen,  
Skol Sant-Visant Kemper. 20 real.

Trugarez a greiz kalon! A-unan  
gant o aluzen, an dimezellet a Volz  
o deus digaset da « Groaz ar Vre-  
toned » eul lizer leun a garantez-  
Vreiz, ennan ar mennad-man ken reiz  
a vo kavet mat, moarvat, gant an holl  
wir Vreiziz :

« Kroaz ar Vretoned e lar d'emb  
ker brau, bep suhun, penaus Breiziz  
a hone loreu en arme Bro-Gall ! E on  
en gorto e tigolour ar Frans Breiz,  
arlerh er Brezel, e rein d'ar Vretoned  
iouank skolioù leh ma vou disket  
len ha skriu hon lez kaer, er Bre-  
honeg... »

Taolen ar Brezel

Eur gammed war-raok adarre  
dirak Verdun.

Ar zadon, 8 eus ar miz, ar Fran-  
sizien a zo aet da linennou an Ala-  
maned war ribl dehou stêr « Meuse »,  
en hanternoz da Verdun, war eun  
talbenn da zaou gilometr hanter,  
etre « Koad ar Fozioù » ha « Koad  
Caurières ». Gounezet e voe tachen  
adarre ha dale'het eur c'hoad hanvet  
« Koad Le Chaume » hag eun uhelen  
e-kenver da goad « Caurières » En  
tu-hont da eiz kant a enebourien a  
voe paket da krizonerien. Daoust  
d'ezo da adstourm eus an taera an-  
tronoz, 9 eus ar miz, an Alamaned  
n'o deus ket gallet adkemeret ar pez  
o doa kollet.

Ar Zaozon ivez, diouz o zu, o deus  
dalchet en Hanternoz eun nebeut  
penadour eus foziou an Alamaned  
hag ez int aet war-raok, eur gamme-  
dig adarre, dirak kêr Lens.

En Itali hag er Balkaniou.

War dalben an Italianed e pad  
beped an argad hag ar stourm,  
dreist-oll en-dro da venez « Sant-  
Gabriel » a zo bet kemeret, kollet  
hag adkemeret al lein anezan, meur  
a wech, gant an eil rummad hag  
egile.

Er Balkaniou, e kresker da gano-  
liata ha da argadi. An 9 eus ar miz,  
ar Fransizien, aet war-raok, o deus  
kemeret peder gêriadenn.

Ar Roumaned a zalc'h penn eus  
ar gwella d'ar jeneral Mackensen ;  
an 8 eus ar miz, o deus dizarbennet

da vad eun arsañh eus an Alamaned ;  
kemeret o deus, an deiz war-lerc'h,  
uhelennou tost da gêr Kimpolung,  
war harzou o bro.

War dalben Riga.

Ouz talben Riga, en hanternoz da  
dalben ar Rusianed, eman troët sel-  
lou an holl.

Kemeret ganto kêr Riga, an Ala-  
maned o deus graet o menoz, evit  
doare, da vont ac'hano da Petrograd,  
kêr-benn ar Rusi.

Evit se, e renkint kemeret, da  
genta, eur gêr all, hanvet Dwinsk, er  
gevred da Riga, hag ouspan dere'hel  
aouchou ar mor Baltik da gaoù skoaz-  
zell dre vor digant o listri-brezel,  
e-keit ha ma kerzo kreizenn o arme  
ouz ar Rusianed en em zastumet en-  
dro da gêr « Pskow » war hent  
« Petrograd ».

Red d'ezo trederenni o nerziou  
etre ribl ar mor, Dwinsk ha Pskow,  
an Alamaned en em gav digren-  
yaetoc'h a zê, ha ne ve ket re ziaes  
d'ar Rusianed o dizarbenn... ya,  
gant ma vije an distera emgleo hag  
urz-vat en o zouez !

Ar c'hontrol eo a c'hoarvez,  
siouaz ! Kerensky, ar mjoistr bras,  
en deus tellet d'ezan goulen digant  
Korniloff lezel renadur an arme gant  
eur jeneral all. Ha setu Korniloff,  
droug ennan, o vont da Petrograd  
e penn e Gozaked. Paour kêz Ru-  
sianed ! evel pa na ve ket a-walc'h  
d'ezo gant ar brezel a-ziavaez, setu  
emaint oc'h aozha breman ar brezel  
a-ziabarz !

War vor hag en aer.

An 22 a eost, eul lestr-geder bras,  
ar Golo II, a zo bet goueledet er  
mor Kreizdouarek. 38 a dud war an  
257 a oa en e vourz, a zo bet  
kollet.

Ar 24 a eost, ar Parana, 6228  
tonnell, a zo bet tarzet ha goueledet  
er mor Kreizdouarek ivez. Seiz mar-  
tolod beuzet.

Ar 7 eus ar miz-man, eul lestr-  
splojer alaman en deus tizet tostaat  
s-walc'h ouz aouchou Breiz-Veur  
evit leuskel eun tregont bombezen  
bennak ouz kêr Scarborough. N'o  
deus graet nemet aemur a zismant.

An nijerien a zalc'h bepred gant o  
labour vat : ar c'habiten brudet  
Guynemer en deus diskaret e hanter-  
kantvet nijerez alaman, hag an is-  
letanant Nungesser e dregontvet.

Komzou an aotrou Lloyd George.

Er C'headalc'h Oll-geltiek a zo  
bet e Birkenhead, Breiz-Veur, e  
derou ar miz, an aotrou Lloyd

George, a rene ar vodaden, en deus  
graet eur brezegeñ a bouez bras :  
« Breiz-Veur, emezan, daoust d'ez  
da veza unvan a zo our hent ober  
peder broadelez, ken stag ha ken  
stag, o feder, ouz o gwirion hag  
o emreperez : Bro-Zaoz, Skoz,  
Kambre hag Iwerzonn... »  
Disklêriet en deus an aotrou  
Lloyd George e fizians e teulo heb  
dale an Trech hag ar Peoc'h. Doue  
da zeveno e ziougan !

KELRIER RUS HON MIGNONED  
A ZO KR BREZEL

Hon lenner ker, an « aspirant »  
Losquin, hag hon c'henvroiz  
all dirak Verdun

Setu amañ lizer mat hon mignon,  
an « aspirant » Losquin, na oa ket  
gallet e voula ar zizon dremenet, hag  
hon doa graet meneg anezan en eur  
drugarekaat hon lenner ker eyit e  
aluzen vadelezus da Groaz ar Vre-  
toned.

Ar zul, 2 a viz Gwengolo.

Aotrou ker,

Chomet oun eur pennad amzer hep  
skriava d'eo'ch, n'eo ket em gwallgeez,  
pa goueze stank en-dro d'imp « obu-  
ziou » ha « torpilhou ». Kalz soudard-  
ed a Vreiz a zo chomet war an da-  
chen-er « Chambrettes », « Koad  
Caurières » ha « Bezouvaux ».

Gwasa taol a zo bet ar 16 a eost di-  
rak Bezouvaux. Da heul, hon rejimant  
a zo bet lakaet war an daolen-enor,  
hag an darnvuia ac'hanomp a zo bre-  
man er... vet.

Emomp o tiskuitza en eur voure h  
vihan en a-dreuz d'an talben. Evit  
doare e kuitamp ar vro-man heb dale.  
Esperans am eus da vont e permission  
dindan pemzek deiz. N'eo ket red la-  
varet d'eo'ch gant pegment a blijadur  
e welin adarre va bro c'henedik ha va  
mignoned !

D'eo'ch a galon. P. L.

Kelou mat eus « Ar barz-labourer »,  
Loeiz Herrieu

Rei a reomp amañ, — e brezoneg  
Gwened, evel en deus hen skrivet, —

eul lizer mat gant hon mignon ker  
Loeiz Herrieu, e oamp chomet pellig  
amzer hep kaout eus e gelou. Hon  
gwella gour-hemennoù ha menoz  
d'ezan ha d'hont en c'henvroiz all a zo  
gant an du-hont en « Hent an Itronez-  
zed » !

Ar 7 a Wengolo.

Keneil a garante,

Pell-zo n'em es chet kavet en tu da  
gas d'oh men doare. Chanj d'ichan ne  
ve kén er vuhe-men ! Bremen e oun  
etal « Hent an Itronezed »...

Guelet om es ama ni Abalor, mede-  
sinour en arme, hag e labour par ma  
hel eit streuein karante Vreiz endro  
d'eon. Kavet em es eue unan a me sko-  
laerion brehonek, kanolier eil-leta-  
nant, en ur boed, leh ma oe geton  
livren brehonek. Guelet e hret, get  
en trau-se, n'hon es chet kollet hon  
amzer e labourat aveit Breiz hag e  
hes danne de seuel kevredigeheù ha  
d'ober labour-vat goude er brezel mar  
kar en ol un gleuet.

Iah oun breman, rak koh-fal oun  
bet un herrad. Didrous omb en tacha-  
dig-men.

Men gourhemennoù karanteus d'en  
ol vignoned e weleet ha d'oh a greiz  
kalon berpet.

Loeiz HERRIEU.

Kelou mat ivez eus an aotrou  
abad Perrot.

An aotrou abad Perrot a oa cho-  
met keit-all heb rei eus e gelou. Setu  
amañ eul lizer mat digantan. Tru-  
garez d'ezan ha Doue d'e viro be-  
pred, d'ezan da adkriji, pa vo fin  
d'ar brezel, gant e labour breizel dis-  
par e Sant-Vouga !

Ar 5 a Wengolo, 1917.

Aotrou ha mignon ker,

Yac'h oun bepred, a drugarez  
Doue ; ha gwelet a ran e tleit beza  
hoc'h-unan war ho tu, pa gerz eo-  
dro « Kroaz ar Vretoned » evel ma  
ra. Yann Mari Normand, va c'hên-  
vroad ha mignon, a zav, e-kreiz  
trouz ar brezel, gwerziou hag a dalv  
ar boan o lenn. Eur paotr yaouank  
eo hennez hag a raio labour-vat  
diwezatoe'k evit Doue hag ar Vro,  
pa zono eur venniget ar peoc'h !

Glaoda hag ar Yeudet a glevan  
hano anezo ivez bep an amzer, kouls  
hag Ivonig Picard, met Dir-nâ-Dor,  
n'eo bet get ebet diwar e benn eun  
nebeut sizaouezioù a zo. Kredi'ran  
eo yac'h ha dibistig daoust da ve. Ma  
tigasfec'h d'in e adres, da skriva  
d'ezan, e rafec'h plijadur d'in.

Kenavo, aotrou ha mignon ker.  
Kas a ran d'eo'ch va gwella gour-  
c'hemennoù. J. P.

Eur vad a skouer eo a ro an aotrou

abad Perrot o klask skriva d'ar Varzed all en em gav stabezet aman hag ahont da heul ar brezel.

« Dir-na-Dor » en deus tremenet eun nebeut eriuor aman, eur pemzek deiz a zo, o tout d'ar gêr d'ober an eost. Breman e tle beza en-dro war an talben : Y.-M. Le Moal, 79<sup>e</sup> Territorial, 5<sup>e</sup> Compagnie, Secteur 21. Gantan ez eus daou Vreton mat all : Jannin ha Henry de la Guichardière.

Hon mignon Yann Mari Normand, a zav gwerziou ken kaer, a zo marichal al lojez, A. L. G. P. 78-23, convois automobiles, dre Bariz. Glada a zo bepred er 70<sup>e</sup> aérostiers, secteur 102 ; an aotrou Bocher a zo breman martolod war an « Inconstant », Toulon. « Klanvidour » eman bepred an aotrou abad Perrot, ambulance 1/37, secteur 3.

Hon c'henlabourer « Laouik » a skriv d'imp al lizer-man.  
Trugarez d'ezan !

En armeou, ar 4 Wengolo, 1917.  
Aotrou ker,

Mezek a-walc'h oun o kemer ar bluen evit skrivan d'ec'h goude bezan chomet keit-all amzer heb hen ober. Fizians am eus e turvezfet ma digarezi. Gwall-lezirek e teuan da skrivan hag, en diavez eus ma c'herent, ma holl vigonned a glemm war ma lezh.

En ho kenver en em gavan kablus dreist-oll, rak, mar meos dilezet eur pennad 'zo ma mignonned, — bezet sar n'em eus ket o ankouaet ! — « Kroaz ar Vretoned » — hi n'he deus ket dilezet ac'hanoun. Bep zizun e tigouez ganin, hag aeven ar Vro a deu d'he heul.

Plijador en deus graet d'in kregi adarre da lenn pennadoù « ar Yeodet » ; alioù « ar Zoudard koz » a zo mad sur, hag evarus oun o welet barzed nevez o sevel gant ar brezel. Ezomm a zo ! rak meur a hini a zo koeuzet hag e vo diés derc'hel al lec'h anezo. Gant pebez glac'har em eus bet gouvezet mato Bleimor ! Dre « Gec'h sant Erwan » e ris e anaoudegez, ha gwelet a ris abred e oa deus ar gwir ouenn viezad. Gant pegement a galon e kane d'imp « Bro goz ma Zadou » ! Bretoned Sant-Denez a viro ar zonz anevan.

Breiz a gollas unnan unan eus he gwella bugale. Kaerat eo e « Beden ar Gedour » ! Kement Breizad a zo bet er fosiou en deus laret a bedenze en e galon an eil mare pe egile.

Bepred oun er-maez a riskl war bouez 10 pe 12 leo diouz an talben. Evit peget ? N'ouzon ket. Aboue tri bloaz hon eus bet amzer da gustumi bevan a ze da ze ha da gemer an amzer evel ma teu....

Kredit, aotrou ker, ez oun bepred a wir galon ganec'h.

L. AR MOAL.

Evit ar re eus hon mignonned a gatfe skriva d'ezan, setu aman « chomlec'h » Laouig : Adjutant Le Moal, 25<sup>e</sup> Infanterie, 34<sup>e</sup> Compagnie, Secteur 20 A.

## NOTENNOU

III

25 a Veur, gouel ar Werc'hez.  
— Dihunet da deir eur eus ar beure. Kate tomma. Eus huanaden. Eur beden. Ar zac'h prest aboue dec'h, n'omp ket pell o vezan war droad. Eur pennad gortoz. Da bemp eur, rengennet pevar ha pevar, gourc'hennet d'imp bezan didrouz, e kemeromp hent an hent-houarn, adreuz pe a-bed kêr, n'ouzon ket kaer.

Bezan didrouz !.... Ah ! ya, didrouz omp ! Eur vandennad ezen o vlej al ne rafent ket brasoc'h dourni. En meur a ru e tigor prenestrou, hag e laromp d'an dud, pôtred pe vere'hed ; « Deut ganimp eta, berroc'h e vo an amzer... Du-hont ez eus diduamant evid an holl ha jolori bemde... »

— « Alo... Peuc'h ! eme hon mestrou, ha mont gant an hent ! »

— « Peuc'h, eme eur strollad tommet d'ê aboue dec'h ; lezit ac'hanomp da huchal aman, da vihanan, gant aon n'halfemp laret netra dirag ar Voched... Hag, a-hend-all, hag e tihun amzer a zo, ha, moarvad, n'eo ket gwasoc'h d'ê eget d'imp.... Ha neuze, barrek omp !... « on les aura ! ! » —

Da seiz eur, e kemeromp an tren en diskean hent-houarn X... dre du ar varc'hadourez. Arabad eo diskouez soudarded d'an dud, rak ken nebeut a welont eun ugent miz a zo ma kemeromp ac'hanomp, moarvad, evit gleskered glas koeuzet diouz al loar war an douar, hag e tec'hfemp gant an Diaoul ouz hon gwelet !

En hent-houarn, evel kustum, n'eo ket echu ganimp c'hoaz ! Eun dale mat... Da belec'h e vetomp kaset ? N'eus ket laret d'imp. Gouzout a reomp hepken e tleomp mont d'ar X... vet koloniad, a zo, hervez klevet, en Hanternoz. Hiniennou, bet gant ar rejimant-man en « Massiges » warlene, a oar dre lizerou pelec'h eman. Ar c'hornad « secteur », emê, hervez klevet bepred, n'eo ket re drouzus na re vuntrous.

Kalz a drouz en ti hent-houarn. A dra zra, n'omp ket koloniaded evid netra. Dre lec'h ma tremenomp e kasomp brud. Meur a hini a zo evet mat d'ezo. Dec'h da noz, bet en kêr, e oant, an darnvuian anê leun ha sammet, leun o c'hoz ha sammet a vidoniadoù gwinn. Hag e ve dalc'het, evel ousoch, da eva bannac'hou tra ma pad ar bidoniad. Ne dalvez ket espern gwinn... Da betra ? pegwir war an hent e vo kavet da breman !

Ar gwasan, eur c'halz a zo a lonk re, kalz re. Kement o deus a zo dispignet. Meo hirie, arc'hoaz poanvleo. Sec'hed goude ha gwenneg ebet ! Ha c'hoaz e c'hoarzent... O Yann-zoudard !

A-raok digouezout en disken hent-houarn « V... », goude bezan tremenet hini « P... », e c'hellan, eus troad an dosen e-lec'h ma tremen linen an hent-houarn en tu-all d'ar stêr, gwelet dre eur sklériaden, o tremen evel eul luc'heden, touriou Fourvier, e-lec'h ma kleven an oferen bep sul hag alies ar gousperou, en iliz dispar-ze a zav uhel a-us d'ar gêr vras, en giz eur bennoz peurbadus hag a zo ken karet, ken pleustret gant tud ar vro.

Gwelet a ran ivez skeuden vras hag alaouret ar Werc'hez Vari, war lein an tour a gostez. — « N'am dilezit ket, o Mamm garet !... Astennit a-us d'in ho prec'h vadelezus... Mirit va brudeur a bep droug ha gloaz, ha frealzit, kennerzit ivez hon tud, chomet o-unan du-hont hep skoazell, tec'het m'e-momp, an tri breur a zo ac'hanomp, unan war vor, an daou all war zouar !... »

Ar c'himiad, forz da biou ha da belec'h, a zo posius. Keuz am eus da Fourvier en koun ar pennadou tremenet en iliz, ha ma c'heuz a zo kresket c'hoaz gant an nec'hamant. Da belec'h ez an ? D'ar brezel, d'an tan, d'an emgann !

Evel a-raoz e teu sonj d'in eus « Kimiad Lourd », war (ten to

## kimiad ar Zoudard da Gloc'hui e barrez

Gwintet uhel ha sounn dreist d'an tóennou glas,  
Gwelet a-bell tro-dro o sevel drant d'an nezh,  
O kas da beb avel kelou eured ha glaz,  
An tour dantelezet diouzin buan a dec'h...

Iliz ker va farrez 'vo dizale pell-bras,  
Rak, dre ma kerz an tren, muioc'h-muioc'h e tec'h,  
Hag an tour damguzet a zeblan va lueilh c'hoaz :  
« Kerz, mezan, ha dizro, ganez lore an Trech ! »

TELEN ABER.

breizek ha ken luskelles, hag e savan war an hev-lep ton eur « C'henavo da Fourvier » (1), kenarv hag a skriva eun tamm ma c'halon. An hent a zo ken hir, ken hirvoudus !

AR YEODET.

(Da heuilh.)

### Da vere'hed Breiz-Izol

Me 'gav d'in ez oun koz a-walc'h evit rei eur c'huzul bennek da vere'hed Breiz, goude beza rôet d'ar baotred yaouank ha d'ar zoudarded.

Da genta, eo red d'in-meuli anezo. Ma n'her gran ket, e vezin gwelet fall ganto, rak ar merc'hed a blij d'ezo ar c'homzou flour... Trugarez d'ec'h eta, merc'hed Breiz, evit an doare direbech ma rit hor holl labouriou war-dro ho touarou hag hoc'h atanchou. Ze a zo mat-tre ! Pase distinget ! !

Setu graet ho meuleudi. Breman eur c'huzul rôet dre garantez evidoc'h hag ho soudarded. Pa skrivoch d'ezo, ma teuit da glemm, — hag eun dra reiz eo ze ! — war hirder ar brezel, arabad eo huvoudi war ar boan ho peus o labourat ho touar. Arabad lavaret : « O, va mab, o va fried ker, na pebez poan hon eus-ni ! Pegen diæs eo beva ! » Mar grit ze, ar zoudard war an talben ne zonzjo nemet er gear, diæs e vezo e benn, hag e tevio neuze da goll e nerz a stourmer. Livirit d'ezan, eta, e labouroc'h er gear gant muioc'h-mui a youl-vat, d'ezan d'ober, hen ivez, en talben, e labour a Vreizad gant nerz-kalon, evit echui abretoc'h a ze ar brezel ha dont en-dro d'ar gear gant lore an Trech.

Grit ze ! Setu ho tever, merc'hed Breiz. Ha neuze ar Zoudard koz a vezo laouenaet e galon. Ha c'houi ho peus re bras doujans ouz ar rez goz evit ober poan d'ezo, ha pa vent eun tammig ravoder evelvoud...

AR ZOUDARD KOZ,  
War an talben, 6 a Wengolo.

### « Unvaniez Arvor »

Eul lizer mat digant eur c'hen-vroad en arme

Digas a reomp da zonz d'hon lennerien e vo graet eur vodaden eus izili « Unvaniez Arvor » e Pontivi, an 22 eus ar miz-man, d'en em welet ha d'en em gazulia kenetrezou diwar-benn traoù Breiz hag ec'h amzer-dazont.

Eun dra vat eo pleustri diwar-ve-man gant al labour a vo ken red ober, goude ar brezel, da lakaat en e floom hon Bro garet, ha da gas he stad war wellaet, mar bez gallet.

An holl Vretoned vat a dle rei skoazell evit se da « Unvaniez Arvor » dre gas d'ez i banoioù hag o froufou. Ugent real eo ar skoden-vloaz. Pedet e vez an holl izili d'ar bodadegou, ha rôet d'ezo bep bloaz eul lavrig, dis-

(1) Ar Wengolo-2<sup>e</sup>. Kenavo Fourvier a zo bet embennet aman war ar « Groaz » warlene, d'ar-c'huzul-man pe war-dro, an-pad ma oa ar Yeodet e-barz ifern ar « Somme ».

pleget ha moulet warnan ar pep gwella eus al labouriou graet e-pad ar bloaz. An aotrou Andreo Mellac, 54, ru de la Comédie, an Oriant, a zo karget eus kef ar skodou ha roll an izili ; d'ezan e tleor kas e hano hag e brof da zont da ezel « Unvaniez Arvor ».

Gwell a ze, e santer breman kalz gwelloc'h eget gwechall ez eo red-mat en em voda e sell eus hon « Amzer-da-zont ». Eus an talben-brezel zoken, meur a hini eus hon mignonned o deus kaset o gwella menoz hag o hano da « Unvaniez Arvor », en o zouez Ewan ar Fras, a zo bet meneg aman, n'eus ket pell, eus ar vedalen en doa gounezet en talben, hag ivez eur barz mat a vro Leon, e hano-barz « Saik Kerleven », breman « Aspirant » er 19<sup>vet</sup> rejimant. Setu aman e lizer, — bennoz-Doue d'ezan evitan ! Ous-penn m'eo leun a garantez vro, e roi d'hon lennerien kelou usan eus hon rejimanchou Breiz.

5 a Wengolo, 1917.

Aotrou ker,

Lavaret em eus kenavo da skol an « Aspiranted »... Goude eun nebeut deizioù ehan tremenet e Breiz, setu me dizro d'am rejimant. Gouzout a rit, marteze, n'emomp ken er fosiou : eur c'horniad bep ar mare a ra vid d'al labourer, ha d'ar zoudard ivez. Aboue dibenn eost e vevomp en eur voure'hig didrouz....

Meur a gamalad koz a gavan c'hoaz en 19<sup>vet</sup>. Rouesaat a reont evelato. Re niverus, siouaz, ez eo koeuzet va c'henvroiz war an dachen ! Ha breman, e lec'h Bretoned, e welan paotred deut eus pevar c'horn Bro C'hall. Perak lavaret d'ec'h, aotrou ker, no dalvezont ket Breiziz ? Her gouzout a rit mat-tre.

Laouen omp, koulskoude. Em c'her en e chom c'hoaz meur a Vreizad gwirion, hag a gomz hor yez karek, en desped da gounnar Galloued ar C'hreisteiz....

Da belec'h e vezimp kaset goude an ehan man ? N'eo ket da vodadennoù hor « Breuzierioù Breiz », siouaz ! rak mouez an Dlead hor galv adarre war an dachen.

Ar gwel eus al labour kalonek ha breizad a reer du-hont a ro d'eomp nerz-kalon. Kendalc'hit mignonned, evit ma kavimp, pa zuy an distro, kaeroc'h eget a-raok Breiz-Izel, ar c'hornig-dour ker d'hor c'halonou ! Breiziz an talben a zo ganeoc'h a galon hag a spered.

Hor beachou a verk d'eomp sklêr a'eus bro all kel leal, ker kaer ha Breiz !

Dalc'omp d'hor Feiz ! Miromp glanded Breiz ! !

Breizad bepred !

Saïk Kerleven.

## KELEIER EUS AR VRO

### KEMPERLE

Kengann. — Holl « diegez » Kroaz ar Vretoned en em unano gant pedennou e Varz « Blaiz Nevez », an aotrou abad Horellou, evit ene e vamm garet a zo bet galvet gant Doue. Ra zigemero hon mignon gant gwella gourc'hemennoù a kengann !

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Briac. — Imprimerie St-Guilhem





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skeod evit ar dieou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 28, rus St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIAND, 27, ball Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da Grez ar Vretoned  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

Yeun ar Go..... 6 real.  
An Tad Trebaol..... 20 real.

Trugarez a greiz kalon ! Eus lizer Y. ar Go, eur paotr yaouank leun a garantez-vro o paouez en em unani da diegez « Kroaz ar Vretoned », e tennomp al linennou-man ken skouerius : « Eur gwall-labour a vo da ober goude an drailh spontus-man ha niver al labourerien kalonek n'eo ket bras. Stourm kalet a vo red ! Met ar Breton a zo pennek hag e vennad a raak has da benn... Dre ar skridou, ar c'helc'hiou-studi, ar peziou-c'hoari brezonek eo e raimp ar muia vad da spered ar Vro. Her gwelet am eus. A-raok ar brezel e c'hoariomp e Pleyben peziou an talvoudusa. Ar bobl, leun a fouge o klevet hon c'hoarierien o tisplega e brezoneg traou buuzudusa a wechall goz, a zeue da anaout gwelloc'h a ze istor ar Vro ha doare-beva hon Tadou. Savet hor boa ivez eur c'helc'h-studi brezonek gant ma mignon Yann ar Floc'h, Kloc'her e Pleyben. Chomet eo an traou a istribilh abaoe gant ar brezel a zeus da zispartia zilili ar c'helc'hig. »

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar Veljig ha Bro-C'hall.**

A-hed an holl linen, kanoliadeg ha krogadou du-man ha du-hont, ar re daera anezo en hanternoz da goad « Caurières », en tu dehou da stêr « Meuse » biz-rieter da Verdun.  
Ar 14 eus ar miz e teuas an enebour a-benn da zerc'hel eno eur pennad eus linen ar Fransizien. Nemet e renkas tec'het primoc'h eget na oa daut, eun nebeut eurio goude. Antronz e'ch adstagas da argadi. Dizarbennet e ve ar wech-man heb gallout tostaat ouz al linennou.  
An 20 eus ar miz ar Zaonon o deus argadet en-dro da gêr « Ypres ».

**War dalben an Itali.**

Krogadou dreist-oll war uhelen « Bainsizza » e-lec'h m'o deus an Italianed dizarbennet arsaillou an Aotrichianed.  
War venez Sant-Gabriel e chom breman an diou arme kenver-ha-kenver war an eil tu hag egile, gant ar griben etrezo diberc'hen c'hoaz.

**War dalbennoù ar Roumaned hag ar Rusianed.**

War linen ar Roumaned, goude argadi dibaoez abaoe derou ar miz, ha c'houita bep taol, an Alamaned a chom sioul breman.

War dalben Riga edod e gortoz o dije kerzet prim war-raok, da heul an dizurz a zo o ren en arme ar Rusianed. Ar re-man, avat, daoust d'ezo da veza dizurriet, a zebiant d'erc'hel penn stard a-walc'h; taehen o dije gounezet zoken e lec'hioù-zo.  
Evel ma oa bet lavaret ar zibun diweza, ar jeneral Korniloff a felle d'ezan mont da Petrograd gant e « gozaked » da skuba er-maez ar « soviet », eur seurt kuzul a bolitikerien berrboell a-walc'h, a vire outan da reiza an arme. E daol n'eo ket deut da vat, dilezet ma voe gant e zoudarded. Setu eman Kerensky o paouez sevel ar republik er Rusi, gant eur c'huzul a bemp rener er penn anezi.

**War vor.**

Meur a splujer alaman a zo bet goueledet adalek dibenn miz eost : unan, ar 5 eus ar miz-man, e-kenver aochou Breiz, gant listri an Amerikaned a oa bet tiget gantou war o zremen, ha daou all e mor an Hanternoz. Beteg er mor Skornek ez a breman ar splujerien alaman; goueledet o deus er mor-ze, e dibenn eost, daou lestr, unan saoz ha rusian egile.

**Diwar-benn an « Amzer-da-zont. »**

Lizer an Tad santel ar Pab a zo bet meneg anezan e Kamb ar Gannaded gant an aotrou Ribot. Heman en deus lavaret e oad e gortoz eus ar respont a raio an Alamagn d'al lizer-ze, hag a die skéraat, emezan, an amzer-da-zont dre ziskuilha mennudou-peoc'h an Alamaned.

Ar respont-se eus an Alamagn a vo embannet, war a greder, an 22 eus ar miz-man.

Ar zibun a zeu e vo meneg aman ivez eus ar bodadennou a zo bet etre Bretoned e Breiz-Veur hag e Breiz-Vihan.

**Eur c'hannad a Vreiz tamallet d'ezan darempredou gant an enebour.**

An aotrou Turmel, kannad Loudeac, a oa bet kavet en e armel, er Gamb, kalz a vilheji eus Bro-Zuis. N'en deus ket gallet betek hen disklêria da vat penaos en em gave ar bilheji-ze en e gerz. Brud a zo savet souezus diwar-benn an taol-ze. Lec'h a-walc'h a ve da gredi en dije an aotrou Turmel roet e hano da genwerzourien diskrupol o tere'hel daremprejou gant an Alamaned dre hanterourez tier eus ar Zuis.

**KLEBIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

An aotrou Moal, bet eun nebeut amzer er gêr d'ober an eost, n'en deus ket gallet, daoust d'e c'hoant, ober

**Da gear Verdun**

Sed ouzit adarre an holl zellou a bar !  
Ar spi a zav, a gresk bemdez e pep kalon,  
Keit m'eman en-dro d'it, Verdun, reuz ha spouron :  
Ar c'honolliou a strak, a sklok, a laz heb mar.

Warc'hoaz tec'ho diouzit marevez an anken,  
Ha gant al levez e trido da galon...  
Pa vo trec'het ar Boch, poblad kriz a laeron !  
Brudet e vi neuze, ha brudet da viken.

'Harz da dreid 'kouezas tud a bep korn a Vro-C'hall ;  
Met eus he rannvoriou ha kavet 've bro all  
Da skuilh 'vit da frankiz 'vel Breiz kement a vad ?

Da zouar, o Verdun, ya beteg en e greiz !  
'Zo gwalc'het ha temzet gant gwad bugale Breiz,  
Ken n'ouzer mui pe out kear c'hall pe kear vreizad.

Telen Aber.

eur paouez war e zistro e ti Kroaz ar Vretoned. Setu aman eur pennadig lizer digantan da rei eus e gelou a zo mad a drugarez Doue.

Ar 17 a Wengolo, 1917.

**Aotrou Vallée ker,**

N'em eus ket kavet ma zu da zirei dre Zant-Brieg. Kerent am boa duman, hag an dornan a badas beteg an de a-rôk ma kimiadis.

En eur arruout em eus dilojet. Me 'gred 'omp deut da gemer hon lojeiz goanv.

hroaziou ar Vretoned a zo digouezet ganin en koulz, hag em eus lennet gant kalz a blijadur ar « peur-zorn », eun dolen ken reiz ha ken koant eus an amzer gwechall, pa veve an dud didrubuilh hag en peuc'h.

Ar Yeodet a zo bet ivez er gêr ; marteze emañ c'hoaz.

Bet em eus kelou digant an aotrou Estourbeillon eus goueliou Kastelbriant. Goulennet em boa digantan petra a zeus da veza oberou Bleimor.

Kenavo d'ec'h, aotrou ker, ha ma gwellan goure'hemennou.

E. ar M.

Oberou « Bleimor », a zo meneg anezo aman gant an aotrou Moal, a vo embannet heb dale gant an aotrou Mocaer.

En eur zigas da Groaz ar Vretoned eur gear a aluzen. — trugarez d'ezan eviti ! — an Tad Trebaol a skriv d'imp al lizer-man o rei kelou eus e labour evel jubenour pe « interprète » du-hont en Hanternoz.

E bro an Hanternoz, an 12 a Wengolo, 1917.

Aotrou Vallée ker,  
Bennoz-Doue d'ec'h evit hroaz ar

Vretoned, a zeu mat-tre beteg an-noun, bep sizun hag a lennan atao gant ar vrasa plijadur. Ra gendalc'ho an Aotrou Doue da rei d'ec'h yec'had ha nerz da labourat evit e c'hloar hag evit mad hor Bro garet Breiz-Izel !

..... Va labour-me ne jench ket kalz. Azaleg breman em eus hepken an eurvad da welet kalz aliesoc'h paotred Bro-Geumri.

Daoust d'in da veza evurus a-walc'h ha da veza bet espernet betek-hen gant boulij ha bombezennoù ar Voched, e tesaouan kavout eun tammig hir ar brezel, ha mall eo ganen en em sterna adarre d'am labour va-unan.

Da c'hortoz, e ran va gwella evit renta servij d'am c'henvroiz kerkoulz ha d'hor mignoned a Vro-Zaoz. Pedit evidoun, mar plich, evit ma skuilho an Aotrou Doue e vennoz war va youl-vat. Ha kredit e choman bepred ho mignon e Kalonou Jezus ha Mari.

G. M. T.

A-unan gant e bez brao « Da Gêr Verdun », hon mignon ha kenlabourer ker G. Mazaes en deus digaset d'imp al lizer-man, o rei kelou eman adarre e-kreiz an tan. Doue hag hon zent Breiz d'e viro bepred !

Ar seitek a wengolo 1917.

**Aotrou ha mignon ker,**

War va diweza lizer e komzen d'ec'h eus tostaat heb dale ouz ar foziou, met trummoc'h eget na zonjen un deut, rak eus ar wikadell e skriva d'ec'h, ha fenez marteze e tostaimp ouz ar Voched. Bolontez Doue bezet graet ha ra blijjo gantan hon miret evit « Amzer-da-zont » hor Bro !

..... Aman ne vezo ket amzer da gredi en dolen rak ar fuzul hag ar c'hanol a zon krenvoc'h. Evelato ez eus nebeutoc'h a zroug eget breman 'zo bloaz.

# EOSTEREZOU BREZEL

Du-ze, war ar maeziou, e-kreiz ar parkeier,  
Eostou puih ha melen a bep tu a weler ;  
Aman, 'baoe tri bloaz, a-hed an talbennou,  
Kel lies ha bemdez, arsaill, argadennou !

En dorgen, er bléne, falc'h dir al labourer  
A red touez ar gwiniz, laouen, drant ha seder ;  
Aman, ken didruez, gant falc'h kamm an Ankou  
Bemdez 'vez diskaret kadourien a ganchou.

Plijet eo gant Doue, en e Baurvadelez,  
D'an dud ha d'al loened rei o magadurez...  
'Vel Adam, Lusifer, ar Frans a lavar : Nan !

An ed hag ar yeod fall 'gresh kostez-oc'h-kostez ;  
Dre-oll war an douar falloni 'lec'h furnez !...  
O Frans ! bez 'ta pelloc'h divlam, sentus ha glan !

YANN MARI NORMAND.

D'eo'h ha da holl diegez Kroaz  
hoil vanoziou ho kenroad. G. M.

Trugarez d'an holl vignoned all o  
deus skrivet da « Groaz ar Vre-  
toned » da rei eus o c'helou : Ewan  
ar Bras, a zo breman nevez-zistro  
da Gemper, eus bro an Hanternoz ;  
Léger a zo tremenet en eilvet a ijine-  
rez, Yann-Mari Normand en deus di-  
gaset adarre soniou kaer, hag an ad-  
judant Souliman, eus ar Merzer, a oa  
gwechall unan eus renerien « Arvo-  
rig » gant an aotrou Moal. Setu aman  
eur pennad distaget diouz e lizer mat :

Aboue tri bloaz 'zo eman ar  
brezel o c'hoari ha prestik a-walc'h  
em bije ankouet « Kroaz ar Vre-  
toned » paneve « Ar Goeloard » a  
zeuas da zigas d'in sonj anezi.

Teir zûn 'zo bennak e figouez ganin  
aboue m'em eus kemeret eur gouman-  
nant neve, hag, en gwirione, laouen  
meurbet ez oun ouz he lenn, dreist-  
oll pa vezan tost da « Fritz ». Ous-  
penn an neventiou, e kavan warni ive  
kelou ma mignoned eus « Breuriez ar  
Brezoneg ». Bevet « Kroaz » ! Yec'hed  
mat d'he renerien evit he c'hender-  
c'hel ! Hag ivez d'he holl lennerien,  
dreist-oll ar re anezo a zo en talben  
pell a zo !

Eur mignon all eus ar Merzer, hag  
a zo prizonier, Yann B. ar Page, a  
zigas d'imp eur garten da rei eus e  
gelou. Lezet e vez breman ar pakajou  
da dremen, nemet ne fell ket d'an  
Alamanned e ve merket war ar c'har-  
teannou, a gaser da zina d'ar brizoner-  
ien pa zigemeront ar pakajou, roll an  
traou a vez e-barz, ... gant ar spi,  
emichans, e vo aesoc'h a ze d'ezo  
d'ober o ran warno !

Ar Page a gav d'ezan e vo graet  
heb dale eun eskemm a brizonerien  
Doue da zeveno e vennad ! Rak neuze  
kalz eus hon c'hevnoiz, dreist-oll ar  
re azo ganto bugale er gêr, a vije lezet  
da zistrei eus an Alamagn.

## BEZIT DIREBECH !

Goude ma lavarjed a'ez oun nemet  
eur « randoner », e rankan dont  
adarre da gomz d'ar zoudarded, d'ar  
re yaouank dreist-oll.

Abaoe m'emoun er c'hlanvdi em  
eus gwelet traou re zivalo evit chom  
hep komz anez. Tost d'hor c'hlanvdi  
ez eus eun tamm prad e-lerc'h e vez  
tennet taonwarc'h. Pa vezont se'h e  
vez graet tan ganto. Hogen, evit  
sikour ar vicherourien (pemp pe  
c'houec'h gwaz oajet), ez eus mer-  
c'hed yaouank eus ar vro. Siouaz, ne  
dalvezont ket kalz a dra. Chomet  
tost d'an talben abaoe tri bloaz, ar  
merc'hedigou-ze o deus gwelet meur  
a dra hag o glanded a zo paseet pell-  
zo. Bemdez, en-dro d'ezo ne weler  
nemet soudarded yaouank, ha siouaz  
Breiziz en o zouez ; ha neuze, ni sou-  
darded koz, ne c'hellomp ket mont  
da bourmen er c'hoad, a zo tost d'an  
dachen-labour, heb gwelet dirak hon  
daoulagad koulajou dizoast tu-mat  
tu-hont. Ze 'zo mad (?) d'an dud dife-  
iz ha divergant. Met, me ho ped,  
c'houi, da vihana, paotred yaouank

Breiz-Izel, bezit direbech ! Dalc'hit  
ho kalon a Vreizad, dalc'hit ho klan-  
ded evit ar plac'hig koant a fell  
d'eo'h kemeret da bried e Breiz.  
Bezit direbech ! Distro'it ho taoulagad  
diouz ar merc'hed dizonest, ha sonj  
er gear. Bezit direbech e pep tra, ha  
neuze Doue a vennigo ac'hanoc'h hag  
a skuilh e vennoz warnoc'h ha war  
an tiegez ma teuoc'h da furmi diwe-  
zatoc'h gant ar Vreizadez a geme-  
roc'h da bried.

AR ZOUARD KOZ.

## NOTENNOU

IV

26 a Veurz.

Goude bezan chomet betek deg  
eur-noz en « N... », — eno e oamp da  
bemp eur dec'h, — ez omp digouezet,  
viet ar beure abred, en eur gar vihan,  
ankouet ganin an hano anezi.

Diskenn a reomp. Teir eur dale  
aman. Yen spontus. Reo gwenn,  
skorn kalet. Kafé tomm d'ar bôted !  
Tri c'henvroad ha me a bren eur  
bannaec'h gwin evit digeri pe gen-  
troc'h evit dibikouzi hon daoulagad.

Ar zul eo. Eur zulvez hirvoudus !  
A-raok an noz e troomp Pariz hag  
en em gavomp er B..., e-lerc'h ma  
welomp eur vanden Aostralianed, —  
soudarded d'ar Zaon, — hag a ra  
kalz a stad ouzimp. Ni a youc'h d'ê :  
« Hip, hip, hurra ! » hag e c'hoar-  
zont. Ha ni ivez...

Hervez eul lizer, bet digantan da  
c'houde, ma breur a dremenas aman  
war ma lerc'h, o vont eus Kastel-  
Thierry da glask e rejimant. Perak  
n'omp ket digouezet a-gevret ? Ar  
wech diweza d'ê welet e vije bet  
d'in !

27 a Veurz.

Yen-mat bepred, pell yenoec'h eget  
dec'h ha seblant dour-erc'h war an  
amzer. Tostaat a reomp d'ar Hanter-  
noz, evit gwir. Pa zikunomp, hanter-  
skornet, e welomp a boan an de o  
tarza. Hon zren a zo benched a gostez  
da c'hortoz eun tréniad all a zoudar-  
ded a dle bezan staget war-lerc'h.  
Kuit a gafe tomm. N'eus ken ! Hag  
e prenomp eul litrad gwia hag a-  
raok !

Mar karjen em bije bet ma litrad  
gwin evit netra, kement a drouz hag  
a vesk a oa en-dro d'an ostiz. —  
« Hag e teus paet, eme ar pôtr  
teo ? » — « Sur avat, a laran ! »...  
N'eo ket moarvad, en eur vont d'an  
tap e krogin da laerez !

War-dro hanter-veure, setu-ni en  
penn hon beaj, en « gar » G... an  
diwezan hini a vromp er c'horn-  
man. An tren n'hall ket mont hiroc'h,  
pe a-hend-all e tapo tomm. Aman e  
vez diskarget an holl bourveziou,  
bevans, tud ha loened, kanolierez ha  
kement a c'houlenn eun arme o  
vrezeli.

Bodet omp a-nevez, ar zac'h poun-  
ner war hon choug, hag etrezeg ar  
vouc'h tostan, hini H...., eul leo  
dirazomp.

Ar c'hanoliou a groz. A bep tu, o  
vont leun, o tizrei goull, niver ha

niver a girri a bep seurd hag a bep  
ment. Ar c'hirri-dre-dan a zo anê  
eur stlejadedad a hanter-kant pe dri-  
ugent, karget betek terri. Skoaellou  
don ha kuz en hent. Fank a-leiz.  
N'eus forz ! Mont a reont buan, hor-  
jellet ken ma term o rojou, hag o  
gwelomp neuze o teuzi dirak hon  
zellou.

Eun nijerez alaman o fraonwal en  
oablou. Morguzet eo dreg eur gou-  
moulen. Kerkerent, eun nebeut skloka-  
dennoù lemm ha dipitus, — hon 75,  
— hag e wel mp en-dro d'ei, war-  
lerc'h strakadennoù se'h, evel ku-  
chenadennoù gloan gwenn o tispa-  
ka hag o chom pell en oabl, koant,  
tenner ha skanv. Met hini eus an ten-  
nou, — rak tennou ez int, — ne dos-  
ta d'an evn milliget, a nij breman  
hertan ma c'hell war zu e glud.

En H..., soudarded a vern o tis-  
kuizan. Sellet a reomp ouzimp-ni,  
tud nevez. Anavezout a reomp hin-  
nieunou. Hag e c'houlennont kelou  
eus ar vro, ar vignoned.

War-lerc'h chom eun devez war ar  
bléne eno dindan eur glao yen, —  
ar brezel eo ! — hag ober gant mil  
boan eul lapennadig kafe, e kaser  
ac'hanomp evelkent d'eur c'hardi  
bras, e-lerc'h ma tremenomp an noz...  
e-lerc'h ma tremenomp zoken tri  
devez, pegwir hon c'hompagnunez a dle  
dont heb dale a-dreñv.

28 a Veurz.

Ar c'houesad a zo bet fall. Eur  
c'hardi digor da bep avel, eun novez  
skorn hag erc'h .... Nag ez omp  
brevet ! Hon c'heginour, ar Rallec,  
a Blouiel, savet abretoc'h, a hop d'ar  
c'hafe, d'ar « jus » evel ma lavaromp.  
N'eus ket ezomm ouspenn. Ewel eur  
vandennet voc'h bihan o frikall e-  
mesk ar plouz, e savomp ac'hane.  
Pebez vad, gat beureou evel-se, a ra  
d'imp hon bannaec'hig kafe mad ! Rak  
mad eo ar c'hafe. En tu-hont d'an  
danvez rôet d'imp, ez eus ennun eur  
pakad pe zaou eus an esperniou a zo  
er zac'h. Keit ha ma pado ar stal,  
dao d'ei ! A-walc'h yun pa vez red !  
Betek ma komzan diwar-benn ar  
Rallec, heman a zo eur gwall-gegi-  
nou. Pep aotreadur da c'houec'h-

menn a zo rôet d'ezan. An holl a  
blego. Hen a vo mestr, .... ha  
keginour, keit ha ma vefomp aman.  
Hag hon tri devez a dremen evel-  
se, evurusik a-walc'h, rak aman eo  
arabad bezan ismigus !

Ni, Bretoned, l'emnoz d'ar peden-  
nou ha d'ar zalud d'an iliz. En iliz  
hepken eo e kavomp frealz ha ken-  
nerz. Aman, pôted, n'eus mui da  
vralansal. N'hon eus ken nemet eur  
mignon ... Doue ! Hon tud keiz ? Re  
bell. Hon mistri ? O dever d'ober.  
Hon c'henvreudez ? Gante o-unan !  
A-hend-all, enebourien, dir, tan,  
poaniou ha maro a bep tu. Spered  
paour an den ne vev ket gant a  
seurt ankeniour, daoust m'eo red  
d'ezan chom en o zouez, hag a rank  
neuze nijal gwech ha gwech-all betek  
e Grouer. Hen eo ar Zikour, Hen eo  
ar Frealz, Hen eo ar Mestr, hag Hen  
eo ivez an Tad madelezes. N'en deus  
ket klasket ar brezel, na goulennek  
zoken e teufe. Lezet en deus hepken  
hon frankiz ganimp. Ni hon eus  
grael impli fall anezi, hag e c'hou-  
zanvomp breman. — ar pez a zo  
reiz, — lezen an dizentidigez, kastiz  
hon pec'hejou. Skoomp neuze war  
boull hon c'halon ha pedomp an Nenv  
da gemer ouzimp truez.

Unan all, pôtr Sant-Jili pe a dam-  
dost, ha me, a ra hon Fask gant aon  
na zigouezfe ganimp mont re vuan  
d'ar foziou-brezel ha kavout eno eur  
maro trumoc'h eget na glaskomp.  
Red eo, evel ouzoc'h, pleal gant pep  
tra, hag ar c'henta tra, er brezel, eo  
mad an ene. P'eman paperou an ene  
war-eun ha siel ar Mestr warni,  
lezit heb doan ar c'horf da goueza ...  
Ar maro neuze n'eo netra. A vec'h  
eun dremenaden, ...

Petra laret diwar-benn H..., ar  
gériaden e-lerc'h m'emomp ? Netra.  
N'eo ket re zispennet al lojeiz enni.  
En iliz droug ebet. Goull eo a-  
ziabaz hag a-ratoz kaer. Da betra,  
p'eman dindan ar bec'h hag e ch'hal  
beza devet pe zispennet eus an eil  
devez d'egile, lezet enni traou a dal-  
voudegez, taolennou kaer pe binvidi-  
geziou all ?

(Da heuilh.)

AR YKODER.

## DA JANED ARK

War don : Sant Jozef evurus.

DISKAN :

O Jan d'Ark evurus, gwerc'hez ha merzerez,  
Miret hon zoudarded ! C'houi 'zo o fatronez. (Diou wech)

C'houi a zo bet galvet gant 'n aotrou sant Mikêl,  
Gant santez Marc'harid ha gant santez Katell,

Diouz ar Zaon gwechall da zieubi ar Frans.  
Patronez galloudus, ennoc'h 'man hon fizians !

Gent galloud-dreist Doue, dre zikour ar beden,  
Hoc'h eus salvet hon bro, ha dre ar binijen.

Diskennet d'hon difenn, hastet dont d'hon zikour  
Eneb d'an Alamagn, hon bran eaebour.

Gwechall ho panniel « Jezuz ha Maria »  
'N devoa trec'het ar Zaon, hon enebour gwasa.

Miret hon zoudarded hag hon martoloded  
Eneb d'hon enebour touet ha divorc'hed.

Difeuriet prim hirie, Janed, ho kleze dir,  
Eneb d'an Alamagn, er brezel spontus, hir !

PERSON TREDREZ.

## KELIER EUS AN VRO

MONTROULEZ

Gourc'hennou. — Hon gwella  
gourc'hennou d'hon lenner ker, an  
aotrou abad Désiré Goaziou, o paouez  
gounit e eil meneg a enor : « Bri-  
gadier gredus ha kalonek-tre, dare  
bepred d'ober en tu-hont d'ê zlead ;  
en deus tennet ar zellou dre gas da  
benn kefrediou riskus-bras... Ar 16  
a vae, 1917, a zo aet eus e benn e-unan  
hag ar c'henta war eun dachen dizolo  
ha kanoliet stank, da rei skoazel d'eun  
ofiser gloazet grevus ; digaset en deus  
anezan en eur gledouren gant eur

c'hravazater hag e zikouret en e  
dremenvan.

Gwail-gelou. — Eur gwall-gelou o  
paouez digouezout ganimp dre unan  
eus hon lennered : hon rener ker, an  
aotrou Bocher, a vije erruet er gêr, e  
permission, dres evit digemeret huan-  
nad diweza e vamm garet. Mar deo  
gwir ar c'helou, ra gredo an aotrou  
Bocher emomp holl aman, e tiegez  
« Kroaz ar Vretoned », a greiz kalon  
gant an en e c'hlar'har !

Ar Rezer-Merour : F. VALLÉE.

St Briac. — Imprimerie St-Gaillan-ne





**PRIZ AR C'HOUMANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoît, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Groaz ar Vretoned »  
d'ha c'has da zoudarded ar Vro**

An aotrou Colin a Naoned. 20 lur.  
An aotrou Mellac. 8 real.  
An aot. Guillo. 4 real  
hag eur c'hournamant.

Trugarez a greiz kalon en hano hon zoudarded! Mignoned all o deus digaset da « Groaz » eun nebeut koumananchou. O zrugarekaat a reomp ivez, rak ma roont skoazell dre eno da skignañ hon « C'hoazig » ha d'he harpa.

**Taolen ar Brezel**

**Eun arsañh a-vras gant ar  
Zaozon en Hanternoz.**

Ar yaou, 20 eus ar miz, diouz ar beure, ar Zaozon a zo aet a-vras da linennou an Alamanned, war eun talbennad a 15 kilometr, etre Longemark en hanternoz ha Hollebek, er c'hreisteiz da « Ypres ». Gounezet o deus eur vras a dachennad, enni lec'hiennoù abouez evel uhelen « Westhoek », a zo en he spi, en he dalc'h koulz lavaret, an hent bras etre « Ypres » ha « Menin » hag an holl gompezen tro-dro.

Erit d'an Alamanned ober adstourmadou taer dibaouez, n'o deus ket gallet miret ouz ar Zaozon da zerc'hel ar pep brasa eus an dachen o deus gounezet.

Ouspenn kanolioù, ar Zaozon o deus kemeret, en arsañh-ze, 3.243 a brizonerien en o zouez 80 ofiser.

Dimerc'her diweza, 26 eus ar miz, o deus adkroget da argadi; diouz ar c'heleier a zigouez e teufe da vat an raou ganto.

**Argadennou an Alamanned  
a-hed linen ar Fransizien.**

A-hed linen ar Fransizien argadennou stank-ha-stank gant an Alamanned. Gwasa hini a voe en hanternoz da Verdun, al lun 24 eus ar miz. Klasket o deus an enebourien adkemeret « Koad ar Soul » a oa bet diframmet diganto gant Breiziz, n'eus ket pell. Ranket o deus chom o fri war ar gloed, dizarbennet ma voent gant hon c'henvroiz. Enor d'ar Vretoned!

**War dalbennou an Itali  
hag ar Roumani.**

Bepred e pad an emgann etre an Italianed hag an Aotrichianed war uhelen Bainsizza.

Ar Poumaned a zalc'h da zitenu

kalonek-tre harzou o bro. Nemet, o veza n'iñt ket niverus a-walc'h, o defe ezomm a skoazell digant ar Russianed. Ar re-man avat ne reont taol-labour ebet e bro-C'halsi, ma c'hallfent aes a-walc'h astenn ac'hane o dour d'ar Roumaned.

**Hag ar Rusi ?**

Gant leziregezh ar Russianed setu eman an Alan aed o paouez kemeret kêr Jacobstad en Hanternoz. Ac'hane o c'hellint toulla o hent war-zu kêr Dwinsk, enni an ode da vont tre er Rusi.

Divorilet gant an taol-ze, ar Russianed a zo aet da linennou an enebourien er reter da borz-mor Riga. Deut int a-benn da adc'hoñt eun nebeut tachen, nemet gloazet e voe er c'hrogad ar jeneral Sokoloff a rene anezo.

E-keit-se e pad bepred an diru-vaneriez e Petrograd. Ar jeneral Alexeieff, a vije bet barrek da ren an traoù war-lerc'h Korniloff, en deus ranket rei e zilez. Gwasa 'zo, tabud a zo savet etre Kerensky ha daou all da c'hoñt pehini anezo a gemero stur ar republik! Petra a vad a hellfe dont eus cur seurd heligenta?

**War vor hag en aer.**

E-touez al listri bet gouezet gant ar splujerien e welomp unan, ha d'ezan hano eur Breizad brudet, an « Amiral Kersaint ». Taget a-eneb pep gwir, er riblennad-vez e dalc'h bro-Spaga, gant eur splujer alaman en em guze c'hoaz e-mesk bagou Spagnoled, an « Amiral Kersaint » en em zifennus kalonek. Dek eus an dud war ar bourz anezan a zo bet lazhet hag ar c'habiten prizoniet.

Ar 24 eus ar miz, d'an abardaez, e voe taget Bro-Zaoz adarre gant eur skouadrennad nijetred alaman. Darn anezo o deus tizet gourmijal a-us da Londrez. Gant ar bombezennou o deus silapet 5 den a voe lazhet ha 70 gloazet. Deut int en-dro an noz war-lerc'h, o laza pe o c'hloaza eun ugent bennak a dud.

Budeta nijer ar Frans, Guynemer, a vije bet lazhet, war a greter.

**An Alamanned hag o c'hevredidi  
o respont lizer an Tad santel  
ar Pab.**

An Alamanned hag eun darn eus ar stadou kevredet ganto er brezel, ar « Bavière », an Aotrich hag ar Vulgari, o deus kaset peb a respont da lizer Hon Tad santel ar Pab. En holl

responchoù-ze netra a bouez diwar-benn o mennadoù-brezel pag an amzer-da-zont! Moulet e vo aman diwar-benn-ze menozioù ken skiantek ar « Zoudard koz ».

**AN HARLUET**

Ar zon gaer-man a zo bet savet, e Bro-Spagn, gant eur Breizad yaouank, hag hen divroet eno abaoe ar brezel, o veza n'heller ket breman tremen harzou ar Frans. Lennet e vo gant plijadur gant an holl, ha dreist-oll gant ar re, — kel lies anezo breman, siouez! — a zo harluet eveltan.

Na trist eo, siouaz, planeden An dud harluet diouz o bro!  
Oh! livrit holl eur beden  
Evit ma vezint prest distro!

Setu, e-kichen ar mor bras,  
Harpet oc'h eur garreg tenval,  
Eun den, hag hen yaouank-fflamm  
Bec'hiet e galon, da e dal. Je'hoaz,

Sell! 'ra a-wechou du-hont pell  
Lec'h ma tisken an oabl er mor,  
Hag e huannad a vouez izel:  
« Peur c'hallin-me mont d'an Arvor? »

Gant ar brezel harzou Bro-C'hall  
A zo morailhet a bep tu:  
Didalvez e vezo va mall  
Ma na ve ar brezel echu. »

Hag e-kreiz trouz bras ar mor doun  
E kredas klevet eur vouezig  
A lare: « Trist eo da galoun,  
Met laouen e vezo prestik. »

Hag an Harluet, koulskoude,  
A chom tenval e zaoulagad:  
« Ar brezel garo, gwaz a ze,  
Ne echu ket c'hoaz, moarvad... »

Pegouls 'welin-me Penn-an-nec'h,  
Kouga-douar beniget va Bro;  
Oh! pegouls 'welin-me al lec'h  
M'oun ganet ennan peil a zo!

Ar gwez pin, e pere e c'houez  
Trist an avel e-pad ar goañv,  
Pegouls adgievin-me o mouez  
A vo ken flour d'am c'halon glanv?

Avel, ma c'houezez war-zu Bro  
An Harluet a lenv aman,  
Kas an tenera kenavo  
D'e vamm a c'hortoz anezan.

Kenavo d'am ziig gwenn koant  
Demguzet e-touez ar gwez fao,  
Hag an bije kement a c'hoant  
Da wel't eur wech c'hoaz, ...kenavo!

Da bep gwenojennig laouen  
'Oun tremenet enni gwechall,  
D'au benchou leun a sklêrijen  
Darempredet ganen koit-all,

D'ar parkeier ha d'ar prajou,

Dan draouien Toull-Zac'h glas atô,  
D'ar halaneier, d'ar c'hoajou,  
D'ar gwaremou lan, kenavo!

Che! setu aze traoù iskis...  
Fad-golouni! nan, nan biken!  
Eur Breizad oun, hag ar Vreiziz  
O deus fizians beteg ar penn.

Hevel int out dero o Bro,  
A chom atao uhel o fenn  
E-kreiz ar barr-amzer garo,  
Ha doun, difinv o c'hant gwizien.

Ha me, abalamour m'oun pell  
Dioe'h ar Vro e-lec'h m'oun ganet,  
N'oun ken begal a Vreiz-izel  
A red he gwad em gwazied?...

Sav da benn, Harluet, gant feiz!  
Bez fizians beteg ar maro;  
Rag adgwelet a ri da Vreiz,  
Adgwelet a ri da Vamm-vro!

JAKEZ KERRIEN.

**Evit hon « Amzer-da-zont »!**

**Kendalc'hiou Breiziz.**

Gant gwanaet eo bet Breiz gant ar brezel, gant tenval eman an dremwel dirazomp, n'eo ket souez e klasket ar Vretoned vat, chomet er gêr, en em voda hag en em guzulia diwar-benn amzer-da-zont hon Bro garet.

Tri c'hendalc'h etre Breiziz a zo, bet lerc'h-war-lerc'h, hag int a bouez o-zri.

**Kendalc'h oll-geltiek Birkenhead.**

An hini kenta e voe ar c'hendalc'h oll-geltiek, da lavaret eo eur vodaden etre an holl Gelted eus ar bed: Iwerzoniz, Skosiz, Breiziz Breiz-Veur ha Breiziz Breiz-Vihan. Digo-ret eo bet an 3vet eus ar miz e Birkenhead, Bro-Zaoz. An aotrou Diverès, eur Breizad mat hag a zo breman mestr-kelenner e bro-Gambre, a zalc'he ennan lec'h Breiz-izel. Deut eo an traoù da vat. Aozet e voe eno diaze eun Unvaniezh krenv etre holl Gelted ar bed-oll. Darempredou a vo etrezo, muioc'h eget na oa gwechall, dre hanterouez kannaded dibabet evit pep bro. Ouspenn-ze, Breiziz Breiz-Veur, hag a zo gwelloc'h kalz ganto stad o brezoneg er skolioù, o veza ma vez desket da vugale Bro-Gambre lenn ha skriva e yez ar Vro, a roio skoazell d'eomp evit ma vo aotret kemend-all ivez da vugale Breiz-izel.

Kendalc'h « Kevredigez Breiz »  
o Kastelembriant.

E Breiz, ar vreuriezh « Kevredigez

Breiz », renet gant an aotrou an Estourbeillon, he deus savet eur c'hendalc'h, ar 17 eus ar miz, e Kastelbrant, etre Roazon hag e Angers ».

Nebeudig a lec'h d'ar brezoneg er c'hendalc'h-ze. Lenne ez eus ennot gant an aotrou Ernault, da ziskleria al labour a zo bet graet abaoe ar brezel gant hon barded hag hon skrivagnerien, dreist-oll ar re anezo a zo en em vodet en-dro da « Groaz ar Vretoned ». An aotrou de Guényveau en deus harpet skrid an aotrou Ernault o tiskouez dre skouerier ar vad dispar a ra d'hon zoudarded ker ar paperennou hag ar c'helaouennou brezonek a vez kaset d'ezo en o foziou, du-hont en talben.

« Kevredigez Breiz », daoust d'an nebet a lec'h he deus roet ar wech-man d'hon « Amzer-da-zont », a zo galvet d'ober kalz a vad da Vreiz, ar babt heb ankounac'haat!

Da genta, dre he c'henstrivadegoù (« concours ») etre ar skrivaagnerien, hag a zo renet ken gouizieki gant an aotrou Ernault, e roio harp d'eomp da zével eul lennegezh (« littérature ») da vaga spered ar vro.

D'an eil, dre an dud a bouez a zo enni, e talvezo kalz da viret ouz Hennessy hag e gensorted da zis-mantra Breiz, pa vo deut ar mare da adsevel ar ranvroioù e lec'h an departmanchoù diskiant ha rivinus.

### Kendalc'h « Unvaniez Arvor » e Pontivi.

Talvoudusa kendalc'h evit hon amzer-da-zont, gant hini Birkenhead, eo bet kendalc'h « Unvaniez Arvor » e Pontivi, an 22 eus ar miz.

Eur wir gêr a Vreiz-Izel eo Pontivi, ken e oa eur frealz d'ar « gendalc'hidi », ar re anezo dreist-oll a reuk beva e Gall, alanan enni ar vat ar vro! Digemeret e voent eus ar gwella. Setu, da heul, eur zon a « zonedigez-va » a voe savet d'ezo gant an aotrou Thibault, mestr er c'helenndi, eur bugel da vro-Vende, a zo deut, e Pontivi, da wir-Vreizad ha... da Varz, a zo kaeroc'h!

### DIGEMER « Unvaniez Arvor » e Pondi d'en 23 a viz Gwenholon 1917

Mên e ma pautred Breiz-Izel? E mant duhont? kreiz er brezel E tibuen Frans, e tibuen Breiz, E terhel sterd, e vertel reih! Kentoh meriel eit em gousi; Spered er vro chomo disi.

Na hui — ardran — n des em gavet E-kreiz er vro en doé savet Ou zaden koh; hui e faut d'oh Me vo kanpennet ha braouh Ou zieghe, pe zeï endro Er ré e huéol hoah ou Bro.

— Ne veint ket anehé ré stank: Park en Ankeu e zo ker frank! — D'oh hag e ven 'n éléh derhel Parland ou Mam 'tal ou havel, Ni lar d'oh-hui: Deit ol én ti! Hui vo gulet mat é Pondi.

E. THIBAULT.

Eur brezegen a roan, da heul, hini an aotrou Leon ar Berr, Renner an « Union Agricole » a Gemperle, ha Sekretour an « Unvaniez », dre ma tiskouez splann a-walc'h wennadou hon breuriez.

Ar peza fell da « Unvaniez Arvor » eo adsevel buhez Breiz war ziatez hon yez vrezonek hag hon spered-bro. Evit se e rankor kaout digemerer-skoliou d'ar brezoneg, da genta

tra. Eno eman an dalc'h kenta! Lec'h a vo red ober ivez d'ar gelenadurez war istor ar vro, war al labour-douar, war ar micherioù. Ar re-man, labour-douar ha micherioù Breiz, a dle beza skoazellet e pep stumm, rak enno eman pinvidigez Breiz!

### Prezegen an aotrou Leon ar Berr Itronzed, aotronez,

Va aotreet, me ho ped. da lavaret, eur ger bennak e Yez ar vro, e brezoneg, p'emomp bodet aman evit labourat evitan. Unan all, eman ar zonj anezan en hon touez, a dleje prezeg em lec'h. Allas, an Ankou didreuz en deus e falc'het er miz du warlene. Karet e oa Jos Parker gant pep-hini ac'hanomp, hag eur boan vras eo d'eomp sonjal na welimp ken an denjentil ken dereat hon doa dibabet da Renner hon Unvaniez en hon bodadeg a Roazon 1911.

Ar glac'har a sko a daolioù stank gant Breiz-Izel! Arabad eo, koulskoude, koll merz-kalon! N'eo ket eun dra dleet d'ar re varo e chomfe dinerz war o lerc'h ar re veo, rannet d'ezo o c'halon, war zigare n'emaint mui ganto. O ene a nij atao a-us d'ho penn evit hon eunan da vad war hec'hou ar Wirionez. Ar Gwir a-eneb d'ar Bed!... A-eneb d'ar Fallagriez! Hogen a-eneb d'ar Fallgaloni ivez!... An holl gollou-ze, koll Ely-Montbet, ar c'hizellour dispar, hini Nedeleg a Gérardwe, ar Mab laouen da vro-Dreger, an holl wad a ruilh war an douar dismantret gant eun enebour didreuz a dle, er c'hontrol, sanka ennomp ar ratoz start da vont war raok bepred evit Breiz-Izel hag hec'h Amzer-da-zont. Breiz da virviken!

Ha breman e c'houlennan diganeoc'h, itronezed hag aotronez, en em unani ganen da gas eur menoz da « Unvaniez Breuriezou Kambre » en Abertawe (Bro Gambre). Pedomp an Aotrou Doue ma vevo da viken an Unvaniez kenetrezoemp, etre Breiz Breiz-Vihan, Breiz Breiz-Veur hag Iwerzoniz, evit ma vo lakaet heb dale termen d'ar brezel euzus-ze, a zo eur vez evit sevenadur an Europ!

Bebet an Unvaniez etre an holl Gelted!

Da genta, e voe komzet eus ar skoazell da rei d'al labour ha d'ar micherioù.

An aotrou Rousseau, mestr-skol e Ero-Wened, en deus studiet kalz war stad ar micherioù e Breiz. Eun dra anat eo, emezan, ez a ar micherioù war fallaat dre an diouer a zeskarded, a baotred-vicher. Eul labour eus ar pouezusa en deus lennet er c'hendalc'h diwar-benn an deskarded-vicher.

Eul skrid all a bouez a zo bet lennet gant an aotrou Colin a Naoned diwar-benn sevel eun ti-bank evit Breiz. Da rei lusk d'ar c'henwerz ha da vicherioù e Bro-C'hall, Napoleon koz en doa krouet ti-bank Bro-C'hall. Perak n'he defe ket Breiz ivez he zi-bank? An aotrou Colin, hag a zo akuit war ar poent-se, a ro pep disklériadur war ar peza ve d'ober.

Hon rener karet evit an « ijinou-kaer », Ely-Montbet, a zo, siouaz, kouezet er brezel. Gwasat koll evit hon Breuriez hag evit Breiz a-bez! Ely-Montbet en doa savet evit ar c'hizellerez-koad eur skol-vicher he dije graet d'ar vro eur vad dispar. An hini en deus kemeret e lec'h e penn an « ijinou-kaer », Maoris Facy a zigas eul labour diwar-benn eur skol-vicher nevez a vo savet heb dale gantan hag e vignoned e Kemper evit boda deskarded ha deskardezed, ha kentelia anezo war vicherioù ar vro: ar pouderez, ar c'hizellerez-koad hag ar brouderez.

(Da heuilh).

Ar Renner-Merour: F. VALLÉE. St Brieuc. — Imprimerie St-Gallawm

### Respont ar Voched d'ar Pab

En desped ma vevomp, evel ar gozed, ar foziou-douar, e c'hellomp, er memes tra, soursial eun tammig ouz ar peza e vez merket war ar gazetennou. Petra gwelloc'h, eta, eget lakaat eun tammig ewez ouz al lizer skrivet gant Gwilhaou II ha Charlez I d'hon Tad santel ar Pab?

Mad! kaer am eus sellet ouz ar respont-se, zoken beteg etre al linennoù, ne welan netra. Nan, netra!... Eur zebellant doujans, gerioù flour, ober neuz da lavaret evel hon Tad santel ar Pab, met respont skler ebet! Evel pa lavarient: « Ya, o Tad santel, gwir eo ar peza a livirit! Ni ivez a zonj evelloc'h. Ya, ar peza a ginnigit a hellfe beza evel eur maen-font evit ober ar peoc'h, ha lakaat eun termen d'al lazerez! Met, e gwirtermen, a-zindan ar gerioù flour-ze, n'ez eus nemet avel en o zamm-paper. Hon Tad santel ar Pab en e lizer a gomze skler eus an « Trentin » hag eus an « Alzas-Lorén » war ar poent-se Gwilhaou hag e vignon a zo dilavar. Ger ebet!

En o lizer fin ha flour ne gomzont nemet eus an doare da ren ar bed oll diwezataoc'h goude ar brezel. Lavaret a reont penaos kroui « Kevredigez ar Broioù » a zo bet atao o youl. Ya, evit ar Frans ar Gevredigez-se a zo maenfont ar peoc'h. Met ni a wel ac'hanoc'h o tont, Voched! Bezit dizoursi mar peus c'hoant da c'hoari ho louarn fin, ni a ouezo ho renta mezus evel louarn ar fablen pa voe tapet gant ar yar.

Dalc'homp start d'ez, Breiz! Kollat int Gwelet em eus lirio eur c'henvroad deut er gear goude beza bet daou vloaz gant an Alamaned. Int-i o-unan a lavare int kollat. Kalon, fizians ha patianted, etal! Doue en deus e eur. Ne zalec ket hiviziken da zavetei ar Frans. Pedomp ar Galou-Zakr ha, da c'hortoz an eur venniget eus an Trec'h, trugarekaomp hon Tad santel ar Pab, evit ar peza en deus klasket ober da lakaat termen d'ar brezel, ha goulennomp oigant ar re a zo e penn hor Bro muioc'h a zoujans hag a respont ouz Tad an holl Gristenien.

Ar Zoudard koz.

25 Gwengolo 1917.

### NOTENNOU

En Hanternoz. V 29 a Veurz.

Hevelep devez gant dec'h. Skorn hag erec'h! Amzer fall!

Graet em eus anaoudegez gant « aluzenner » eur rejimant a zo aman. Eur beleg eus ar vro eo. Anaout a ra eskob Sant-Brieg a zo a dimdost ac'han, hag hon c'henvroad, an aotrou ar Villerabel, eskob Amiens, da laret eo pastor an eskopit dispennet-man.

Eur c'helou kaer hag eun neventi evidomp! Kerkeñt ha deg eur noz e tleomp kanolia linennoù an Alamaned evit euna eun tamm hon re.

Hag e c'hortozomp hag e c'hevomp.

Da bemp eur e skok an tenn kentan hag e krog an dourni betek nav eur. — « Ar c'hanolion, eme ar re-all kustummoc'h egedomp, a zebllant pousterik eyt bezan hon re. » — Daro en em c'houlenn petra a dre-mea. Me a gmer plijadur hag a chom da zelaou ar ganoliadeg, evurus o sonjal e vo kleier mad war-lerc'h.....

Kleier mad?.. Siouaz, kanoljoù an enebourien eo a glevemp!.....

Dispennet o dot d'imp eul linen a-bez ha prizionnet diou gevrennad (sections) eus hon tud, eur c'habiten er penn! Fe, ya.....

Gwerzet ha distuilhet e oamp bet, herve. E lec'h hon gortoz, ar Bruzianed hon diarbennas.

War hent Roz... 30 a Veurz.

D'an abardaez, a teuer da zigemen d'imp e tleomp, goude serr-noz, mont d'hon c'hompagnonez (an 22vet) a zo distro eus an « trancheoù » hag a dle chom breman c'houec'h devez adreuz da ziskwizan.

Mont a reomp. Ar c'hanolion a groz. Gwech ha gwech-all, en dremwel tenval, eur « fuzen » a zav hag a bar en oabl evel eur gantol-c'houlou, gwenn ha sklerijennus. Eul luc'heden kerkeñt hag eun tenn-kanol. Goude, tennou all diouz an daou du, pouñner pe bouneroc'h an eil eget egile. Krog eo an dans pe ar c'horroll.

War bouez eun hanter-leo foziou-brezel ha garidennou ne-ve, graet herve ar gwellan duare, kamm-ijlamm evel just evit miret ouz strinkadur an « obuzioù », a hall tarza enne, da wall-dizout re a dud. N'eo ket ar re-man hon linennoù diwezan, daoust m'emaint pell-mat diouz an tan. A-dreuz, ez eus c'hoaz reoù-all, gant aon na zigouezfe d'imp kila.

Linen vras hent-houarn Pariz-Lil a dreuzomp. Dilezet eo aman, met n'eo ket dispennet.

En Roz...

Setu ni digouezet en Roz... Eur gerig vihan koant a walch hervez gwelet, rak nos eo. Nebeut a dud war ar bale. Al loden vrasan eusoudarded hon c'hompagnonez a zo seder. Tri-wac'h devez o deus tremenet el linen gantan dienez d'e, spouron, anken. P'emaint a-dreuz, eun toullad gwenein d'e, e kemeront eun tamm plijadur... e-barz ar gwin, n'em eus ket ezomin da laret.

Gwasat evarusted, hini ar brezelour paour, pa zistro war e giz diouz an toullou-ze ha pa wel dirazan adarre c'houec'h devez a vuhe frank, hep ne-chañtant, dindan heol benniget an Aotrou Doue!

Eur bannac'h gwin, eur varvailhaden, eur ganaouen, eur zoaden, eur ruilh pe zaoù war zigare gouden... Ma zud keiz, pebez lenev!

Ni, nevez-zigouezet en talhen, a vez diskouezet gantar biz... Sell, pegen kaer eo ar re-man!... Buan d'ar foziou, kanfarded, da labeza eun tamm ho tilhad re flamm... Han, ya, ar re-man a zo soudarden koant, pa laran d'ec'h!

Kalz a genvroiz a gavomp, — pegwir ar Vretoned a zo dre holl! — ha, da c'hortoz mont da gousket, e kemeromp, ni ivez, peurz en plijadur ar re-all. Diwar-vreman hon devo hevelep trubuilh, hevelep pouñner...

Red eo d'in larst c'hoaz e kavan ivez en o zouez meur a hini anavezet ganin en Lyon warlene, bot abous er pemp vat Kolonia ha deut breman aman.

Sevel a reomp diwezataoc'h eget kustum. Divoemmet eo hon fófred. Eun tammig poan benn, met ze a dremen. Hirie diboultradeg ha kanadeg dilhad. Ezom a zo!

Evidous, eun valaden en kêr. An iliz, nevez-flamm (diouz ar c'hiz roman), a zo disto hag boñ gwar he frenestrou, a dalvoudegez vras, a zo torret. Stronaden euz « obuz » kouezet en diabarz en deus graet al labour-ze. Eun « obuz »-all en eur gas gantan eun tamm eus korn an tour, a zo kouezet war eun ti pelloc'h ha pul-luc'het anezan. A bep tu dismantret ha drailh. Ha c'hoaz aman n'eus ket da glemm nemeur... Pegwir an iliz, truzes da wlejet, a hall tenna warni boullji an enebourien, ez eus savet eun tamm pelloc'h eur chapelig dister, unan goad. Eoni en em zastu-momp bennoz da bedi; enni e kle-vomp stank an oferen; enni e kavomp ar barran an amzer...





PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar bioiou estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit,  
St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigmer ané

Aluzennoù de « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro

An aotrou de Guényou. 20 real.  
Koulmig Arcoar ..... 4 real  
hag eur c'houmanant.

Taolen ar Brezel

Ar Zaizon a c'hounid  
tachen en Fanternoz.

Evel e oa bet lavaret en hon taolen-vrezel ziweza, ar Zaizon, aet war-raok adarre ar 26 a wengolo, o deus gounezet eun dachennad ec'hon a-walc'h, betek 2.400 metrad hed, euni kêr « Zonnebeke » hag eur c'hoad krenvaet hanvet « Koad al Leuren-ganolia » pe « Bois du Polygone ». Kelted Breiz-Veur Skoziz ha Kambreiz, o deus graet taoliou-kaer en engann-ze a voe ens ar starta. Da c'houde, Breiz-Vreuziz o deus dalc'h bet mat d'o gounid, daoust da stoumañdou taer ha dibaoezet an eñebourien.

An Alamaned o'h ergadi  
war linen ar Fransizien.

A-hed linen ar Fransizien, an Alamaned o deus argadet, dreist-oll war « Hent-an-Itronnez » hag en hanternoz da Verdun, e-lec'h er eus kalz eus hon c'henvroiz, lennerien c'hirs-dus da « Groaz ar Vretoned ». Dizarbennet eo bet da vat taoliou an eñebourien. D'hon c'henvroiz hon gwella gourc'hemennou hag hon gwella menoz !

War dalben an Itali.

An Italianed a zalc'h da c'hounid tachen war eun uhelen krenvaet hanvet « Uhelen Bainsizza ». Ader e voe d'an Aotrichianed klask adkemeret diganto ar pezh o doa kollet. Er c'hrogadou a zo bet al lec'h-se en deiziou kenta eus ar miz an Italianed o deus kemeret 2019 a Actrichianed da brizonerien, en o zouez 63 ofiser.

Er Rusi ?

Er Petrograd tabud bepred ha glabousadeg.

War dalben Riga ar Rusianed bozet en-dro da gêr « Pskov », da heul krogadou trec'h, o deus gounezet eur penad tachen, war-dro tri c'hilometr, war-zu Riga.

Daoust d'ar gounid-ze gant ar Rusianed, emeur e gortoz o klasko an Alamaned ober o mad eus an dizuz a zo bet hadet dre-oll gant en dispac'h, evit mont da Petrograd. Boda a rafent evit se nerziou bras dirag

kêr « Dwinsk », enni an ode da vont tre er Rusi. Brud a zo ivez o dije kaset o listri-brezel e pleg-mor Finland. ....

Memet arabat ober raksellou re brim war amzer-da-zont ar Rusi. Gant eur beradig skiant-poell o tont d'ezo, ha sikour geañv kalet o bro a drec'has gweznall war Napoleon goz, ar Rusianed a ve aes-tre d'ezo c'hoaz dizarben an eñebourien.

En Azi-Vihana, trec'h bras  
ar Zaizon war stêr Euftrat.

Abaoc kemeridigez Bagdad gant ar Zaizon ne glevet ken nemeur a gelou eus an Azi-Vihana. Setu eman ar jeneral saoz Maude o paouez ober adarre er vro-ze eur vras a gammed war-raok : kemeret en deus, er Vezopotami (ar vro etre stêrioù Tigr hag Euftrat), an 28 a Wengolo, kêr Ramadié gant 3.800 a brizonerien ha 13 kanol. Toullet en deus dre an trec'h-ze e hent war-zu eur c'horn-bro leun a eol-douar, pe « betrol », ha suraet mestroniez ar Zaizon war red stêr Euftrat, a zo doun a-walc'h da zougen o listri dre dan.

War vor hag en aer.

Er mor Baltik, ar Rusianed o deus kollet eul lestr-brezel, an « Okhotnik », goueledet gant eun darzerez war neun pe gant eul lestr-splujer alaman.

Er mor Adriatik, an 3 a here, eur c'hrogad a zo bet etre listri an Itali ha re an Aotrich. Peb a lestr eus an daou du, an « Novara » eus tu an Aotrich, hag an « Aquila » eus tu an Itali, a zo bet gwall-a-zet.

An Alamaned o deus kaset meur a wech o nijerezed a-us da Vro-Zaon, betek c'houec'h gwech en eur ober seiz devez. Gallet o deus tizout kêr Londrez ha leuskel waroi bombezennou o deus lazet adarre tud dinnoz.

Evit hon « Amzer-da-zont » !

Kendalc'h Pontivi

(Pennad diweza)

Ar zizon ziweza hon dea displeget aman petra a oa bet graet e kendalc'h Pontivi, e sell da harpa micherioù Breiz.

Labour vat a zo bet graet ivez evit ar brezoneg.

Goutizika den a zo war studi ar brezoneg. An aotrou Ernault, en deus disklêriet penaos e c'hellfemp ober

hon mad eus ar studioù gouziek evit gwellaat stad hon yez skrivet.

Brezoneg ar Grenn-amzer (moyen âge, e galleg) a oa pinvidikoc'h eged an hini-bremen. Kalz a c'herioù a gaver e skridoù an amzer-ze diwar-benn « traou an ens ». Eunn dra red e ve d'hen skrivagnerien o anaout hag o studia. An aotrou Ernault a ro, ouz-penn, d'an holl Vretoned desket an ali, pa gavint o zro, da zastum ar skridoù koz e brezoneg, a zo kollet hag ankounac'haet, kalz anezo, o-mesk dielloù (archives) hon c'herioù Breiz.

Evid ar brezoneg-bremen, gwaso harz d'e studia ha da zastum an holl binvidigezioù a zo ennan eo an diouer a c'heriadur (dictionnaire). Heb dale, hon eus fizians, e vo embannet eur geriadur navez, berr ha skler, a vo talvoudek kenan d'ar yez, d'hec'h unvani ha d'he reiz.

An aotrou Vallée en deus komzet eus eun nebeut levrioù gallek ha brezonek a zo bet savet evit hon skolioù Breiz : « Manuel à l'usage des Ecoles primaires » gant an aotrou Perrot, person Taole, (e ti Lefournier, Brest), ennan pennadou tennet dreist-oll eus an « Istor santel » da drei e galleg, hag eur geriadur e dibenn al levr; ha « Kentelioù brezonek » gant ar breur Constantius, en doa gouestlet e holl vuhez da gentelia ar galleg dre ar brezoneg (moulet e ti Lafolye, Gwened, e 1900). — E skeud labour dispar ar breur Constantius e voe graet meneg eus eul labour kenkoulz graet er c'hreisteiz gant ar breur Savinien, ha, dreist-oll, eus eun dezen evit an doktoriaz war al lizeradur (thèse de doctorat es lettres) « La Pédagogie régionaliste » gant an aotrou Aurouze (moulet e ti Seguin, Avignon) a dlefe beza etre daouarn an holl vistri aketus a Vreiz Izel.

Evit kentelia bugale Vreiz war al labour-douar, an aotrou Toullec, mestr-koł Hoelgoad, en doa staget ouz eul levrig « Manuel » embannet gant (eil mouladur, Kastellin, e ti Chavignaud, 1862), eun dibab kouchou ha goulennoù war al labour-douar, a dalvezfe ar boan o advoula. An aotrou koronel Bourgeois, a Vrest, en deus graet eus « Kentelioù war al labour-douar » ar breur Abel a Bioermel eun droidigez vrezonek a zo bet moulet war ar gazeten « Résistance » a Voutroulez, ha war « Groaz ar Vretoned ». Houman he deus staget ouz labour an aotrou Bourgeois « Kentelioù diwar-benn dere'hel an tiegez » evit ar mers'hed. Embannet e oa bet ar « C'hentelioù »-ze, evit ar wech kenta, war al levr « Mémoires de l'Association Bretonne ».

Da ziski Istor Breiz da vugale ar

Vro, hon mignon ker, Loeiz Herriou en deus savet evit ar skolioù eul levr Istor e yez Gwened, hag a zo eus ar gwella. An aotrou Seveno a Wened en deus skrivet ivez eun « Istor Breiz », lakaet berr-ha-berr en eul levrig na goust nemet pemp kweneg. Evit Treger ha Leon ne deus c'hoaz nemet an « daevellou » brezonek staget gant an aotrou abad Gall person Taole, ouz « Istor Breiz » gallek an aotrounez Du Cleuziou ha De Calan (e ti Prudhomme, Sant-Brieg).

Meneg a zo bet graet ivez eus daou levr all a bouez : « Istor santel » an aotrou Chaloni Buleon, person Gwened, lakaet e brezoneg Treger gant an aotrou abad Herry. — notennet eo bet an droidigez-se diwar-benn yez Leon gant an aotrou Ernault, — ha « Kroaz-Doue » an aotrou Ernault, da ziski lenn ar brezoneg hag al latin, a dlefe beza, gant ar c'hatekiz, ar c'henta levr lakaet etre daouarn ar vugale e Breiz-Izel.

War hon eus klevet gant an aotrou Bernard, enseller Akademi, e c'helle al levr « La Langue Bretonne en 40 Leçons » rei skoazell d'ar vistri en hon skolioù Breiz. Ar vadelez en deus bet d'e erbedi d'hon skolaerien. Trugarez d'ezan !

Komzet ez eus ivez eus ar pezh a zo bet graet betek-hen evit kaout digemer d'ar brezoneg er skolioù.

Diwar-benn skolioù ha kelennidou (Lycées) ar gouarnamant, goulennoù a zo bet graet gant hon c'henvroad brudet an aotrou Anatol ar Braz, p'edo mestr-kelenner e Kemper, ha gant an aotrou Guyesse, kannad ar Morbihan. An holl c'houlennoù-ze, hag i eus ar reiz, a zo bet dizarbennet gant ar ministr Doumergues, eur c'hreisteizad anezan.

Digant an eskibien e voe klasket ivez kaout eul lec'hig d'ar brezoneg er skolioù kristen. Er bloaz 1897, e voe savet zoken eun emgleo etre an aotrou Chaloni Allo, rener bras ar skolioù e Treger, ha « Breuriez Breiz » (Association Bretonne). Houman a roe d'ezan, ha d'ezan hepken, ha skoazellou evit ar skolioù, hag en eskemm, an aotrou Allo a roe e c'her da groui dre-oll an deskadurez vrezonek. Keraet promesaou ! Nemet, evel m'eman ar c'hrennlavar, e voe losk ar paemanchaou ! ... Eman bepred ar Vretoned o c'hortoz an aotrou Allo d'ober eun drag bennek evit o yez er skolioù kristen.

« Breuriez ar Brezoneg », savet gant hon Rener ker, an aotrou Moal, he deus graet, kerkouls ha « Dihunamb » e Gwened, labour eus ar gwella evit diski lenn brezoneg da vugale ar Vro. Unan eus mignoned ar Vreuzier, an aotrou abad Bozec, mestr-skol Sant-Nikolaz, a oa o vont

da lakaat er wask eul levr nevez gal-  
lek-brezonek evit ar skolioù, pa  
darzas ar brezel.

An holl labour-ze a vo da adkregi  
gant gant goude ar brezel Enebourien  
a vo ! Da stourm outo, savomp ubel  
ger-stur ar varzed : « Ar gwir a-eneb  
d'ar bed ! » Skoazel a gavimp ivez a  
veur a berz : digant Skol-veur Roazon,  
digant Unvaniez ar Gelted, ha dreist-  
oll digant hon zoudarded ker a zo di-  
goret ken frank o c'halon d'ar gara-  
ntez ouz o bro Breiz abaoe m'emaint pell  
diouti ! Arabad ankounac'haat skoaz-  
zell an Aotrou Doue na vanko ket da  
venniga hon mennad a zo ken reiz ha  
ken dleat d'ar Vretoned. Pec'hed e ve  
nac'h rei d'ezo o Gwir, p'o deus skuil-  
het ken kalonek o gwad war an da-  
chen da zifenn Gwir ar re-all !

## Galvaden d'ar Vretoned !

Breiziz, komzomp hon Yez ! Breiziz,  
komzomp Brezoneg !

Milieriou ac'hanomp, aboue tri  
bloaz, o deus skuilhet o gwad, o deus  
roet o buhez evit m'o defe Serbed,  
Roumaned, Pologniz, ha poblou all  
c'hoaz, bras pe vihan, stad enno gant  
o yeoz, pep frankiz d'o miret ha d'o  
c'homz...

Ha ni, Breiziz, ha mez hon defe eus  
hon Yez-ni ? Hag ankounac'haat a  
refemp eo-hi merc'h da Yez ar Gelted,  
brudeta pobl a vos er bed hag a zo  
deut war o lerc'h ar Zaouon hag ar  
Franzizien ?

Daoust hag ez eus er bed bravoc'h  
Yez eget hon hini ? Daoust hag ez eus  
eur bobl-dud dleotoc'h d'ezo ar fran-  
kiz d'he c'homz ?

Ar frankiz-se, petra a reomp-ni  
gant ?

Ar poblou ma varvomp evito  
daoust hag i a lavaro : « Paour kéz  
Breiziz ! N'ouzont ket petra reont.  
Hag i o vervel da zavetei bon Yezou-  
ni rag ar sklaverez hag ar maro, e  
reont fae war o Yez-i, a zo bravoc'h  
kant gwech, hag uheloc'h he renk, o  
veza ma 'z eo anezi Yez vrudet ar  
Gelted koz !

Breiziz, komzomp hon Yez ! Breiziz,  
komzomp Brezoneg !

## NOTENNOU

Roz... a zo eur vro binvidik. A-raok  
ar brezel e tlee bezan enni tud evurus.  
Gwélet a reomp enni labouradegoù a  
bep seurt, heskennerezed, mereriou  
bras, micheriu, met holl ez int dis-  
pennet hag ar peadra ané laeret. Man-  
trus eo !

### En Hanternoz.

VI

*Emgann nijerezed. — Testamant eun  
aluzener. — Al labour en a-dreñv.*

De kenta a Ebril.

Netra d'ober en-pad an de. Devez a  
ziukuz, a drugare Doue !

Eun tamm a-raok kuz-heol nij-  
erezed oc'h en em daga a-us d'imp :  
eur vochez hag eur c'hallez. Nec'h-  
amant ! Piou a drec'ho, en Alaman pe  
ni ? An Alaman, primoc'h benveg  
gant, a bign ubel. Hon hini a dec'h  
eus e wellan, met an enebour, p'aman  
a-us, a ziekarg outan e vindrailherez.  
Klevet e reomp ar strakadeg anezi,  
hag e c'hedomp poaniet...

Eur vogen denval... Oh ! a lava-  
romp holl !... Diou askell hon nijere-  
z a zistag, trouc'het gant an tan, hag a  
chom da c'houarnijal evel deliennou  
papier, endra ma welomp korf an ni-  
jerez o tout herrus war draou, en eur  
leuskel war e lerc'h eur vogen den  
henvel ouz eur stereden lostek.

Ne dalvez ket ar boan lavaret stad  
en den paour, eur c'habiten. Ne oa  
ket c'hoaz maro, met ne zaleas ket,  
devet m'oa bet ez veo ha brevet en  
eur goueza. Eur gwall-gold d'imp, her-  
vez. An enebour avat ne gollo netra  
evit gortoz, rak war ar vicher-se, da  
vihan, ez omp trec'h da bôtred  
ar Brus !

## SKOLACH SANT-VISANT

GWERZIG KLOAREGED KEMPER

D'an aotrou chaloni Uguen

War don : Ni, Breiziz a galon, karomp her gwir Vro.

Ya, Skol-veur Sant-Visant eo va c'harantez :  
M'he c'haro tra jomin en tu-man d'ar bez ;  
Ha goude, m'hen lavar, me c'hoaz he c'haro,  
Pa vezin en Nenv, va gwir Vro !

Holl, holl, kanomp buhez hir d'hor Skol !  
Tra ma vo Feiz  
En hor bro Breiz,  
Ra jomo grenn bepred hor Skol !

Er Skol-man 'm eus desket karet va Doue,  
Ha karet ar Werc'hez, Rouanez an Ne...  
Oh ! bennoz d'am mistri, 'deus great em c'halon  
Da Jezus ha d'e Vamm eun tron !

Da Skolach Sant-Visant bennoz c'hoaz, bennoz,  
Ma karan Breiz-Izel, Bro va Zadou koz,  
He gizioù, he glanded, hag he Brezoneg —  
Ar yez-ze ker kaer ha ker c'houek !

Oh ! Skol-veur Sant-Visant, nag eo kaer ama  
Labourat, ha pedi, hag ober pep tra,  
Heb enkreiz 'bet morse nag eun tamm anken —  
'Med plijoud d'hor Mestr bras hepken !

Ah ! skuilbit, va Doue, hor Mestr begarad,  
War Skolach Sant-Visant Ho pennoz dalc'h-mad :  
Ha, goude hor maro, en Nenv asamblez  
Oh ! lakit ar famih-bez !

G.-M. TREBAOL.

Ar c'han-man, ken kaer zo bet moulet war gartennou-post. O goullenn  
digant an Tad Trebaol, Town Major's Office, Estaires (Nord). 6 gwenneg  
eo priz an dousea kartennou.

2 a Ebril.

Gwalen ar brezel a bouez warnomp  
en eun doare mantrus. Doue hepken  
e c'hal he fellaat, he lemel diwar-  
nomp. E lec'h goulenn E zikour, e lec'h  
tenna E druez warnomp, e kendal-  
c'homp d'E nac'h, d'E zilezel, d'E  
zismegansi.

Mad d'eur rumm, mar na c'houlont  
ket, tremen hep mont d'an oferen ;  
met perak, pa na vank nag amzer  
na c'hoant, na lezer ket eur rumm all  
da vont ? Oh ! dallentez pe gasoni !

Forz a zo ! Eun oferen a zo c'hoaz,  
an hini ziwezan. Mont a reomp d'ez.  
Digarez a-walc'h, siouaz ! a vo da  
dremen heb oferen ha lidou an Iliz.

War-lerc'h, e ran anaoudegez gant  
aluzenner ar Koloniaded, an Tad  
Lenoir, eur Jezuit. Plijadur am eus  
o klevet gantan doareou ar brezel.  
Aboue an deiz kentan eman er bre-  
zel, hag eun dudi eo e glevet o tis-  
plegan ar c'hrogadou gwelket gantañ,  
pegwir, bep gwech, evel peb beleg  
kalonek, e kerz war an dachen da  
heul ar zoudarded evit o c'hennerzi  
ha, diouz red, rei d'e ar zikouriou  
hag ar frealzou diwezan. Ouspenn,  
e lavar d'in bezan dinec'h : dre  
aotreadur ha madelez an Tad santel  
ar Pab, e c'hellomp, ar zoudarded  
ac'hanomp a zo en-tal al linen-dan,  
digemer hon Zalver da bep koulz an  
deiz heb bezan war yun. Ar Gomu-  
nion, graet evelse, a ze evel ar  
Zakramant diwezan. Ha gwir eo evit  
kalz ! Arabat eo d'imp ankouaz  
penaos, en-pad ar brezel, hon eus  
bendez naontek kant chans ha pevar-  
ugent war gant da vezan lazet mik  
pe dizet d'ar maro...

Ar wech kentan hag ivez ar wech

ziwezan e oa d'in da welet ar beleg  
mad, ar jezuit gouziek-se. Marvet  
eo aboue (ar 4 a viz mae 1917), lazet  
a-greiz ma kase eur bannac'h dour  
d'eun den gwall-c'hoazet ha chomet  
war an dachen. En-pad ouспен tre-  
gont miz e heuilhas ar 4vet Koloniad,  
karet ha douget gant an holl.

E-touez e baperou a vo kavet eun  
nebeut linennou skrivet a-ratoz-kaer  
evit e zoudarded, a gare kalz, hag a  
zo evel eur c'himiad hag eur reolen-  
vuhez d'e :

— « Mar deu d'in mervel e laran  
kenavo d'am holl vugale garet ar  
4vet Koloniad.

A greiz va c'halon e lavaran d'e  
kenderc'hel da stourm ha d'ober o  
dlead, miret bepred brud-vad o rejim-  
mant ha mervel diouz red, heb  
gwana biken, evit difenn o bro.

A greiz ma c'halon a vignon hag a  
veleg, o fedan da bleidi gant silvidi-  
gez o eneou, o chom feal d'hon  
Zalver ha d'e lezen, hag o tigemmer  
Anezan, an aliesan ma c'hallint, en  
Sakramant an Aoter.

Hag e lavaran d'e kenavo er Bara-  
doz, e-lec'h m'en em gavimp evit  
biken er wir vuhez, er vuhez beur-  
badus graet evidomp gant Doue.

Er menoz-se, e kinnigan seder,  
evite, ma buhez d'ar Mestr mad, hon  
Zalver karet. »

Poaniet kalz ez oun bet gant kelou  
e varo. Karet e oa. Ar zoudarded a  
zigore d'ezan o c'halon. Ne oa ket  
spontik. Eur vad dreist en doa graet.  
Marvet eo evit e zoudarded, evit e  
Vro. Doue ken madeleuz eo devo  
salaouet e beden. Breman, eus lein  
an Nenvou, e pedo evit e dud, hag e  
welo hebdale an Trec'h o tic'haoui o  
foanou...

Nag a bed eveltan, dre o c'homz,  
dre o skouer, a vo bet kiriek d'hon  
zoudarded da c'hounit, hag o devo,  
dreist-oll, douget eur c'halz ané d'an  
Nenvou !

3 a Ebril.

Hirie d'al labour ! Ar brezel a zo  
eun dismantr traou : boued, dilhad,  
marchadourz a bep seurd, peadra  
hag all. Evit dorc'hel ar vrezelourien

eno c'halon hag o gwaskedi, e fell o  
bevan eus ar gwellan, hag o difenn  
rag an enebourz dre foziou-doun,  
krenvlec'hioù, garidennou, kledou-  
rennou. Kement-se a c'houlenn kalz a  
goad, a houarn, hag eur bern traezou  
all. A-damdost da Roz..., en eur  
vrikerez zispennet, ez eus savet eun  
heskennerez vras hag eur c'hilvize-  
rez. Di ar c'hirri dre dan ha dre  
gezeg a zigas heb ehan gwez bras  
diskaret dre ar vro tro-dro, hag o  
c'has, goude, trouc'het, kempennet  
ha kilviziet e doare treustou, stoc'he-  
nou pe blenken d'al lec'hioù ma 'z  
eus klask d'e, peurvuian al linen  
gant hag al linen-harp a zo a-  
drenv Hon labour, en pad an deiz,  
eo diskarga, dougen ar c'hoad du-  
man ha du-hont, hag adkarga ar  
c'hirri, rak ar re-man, hen lavaret  
em eus, ne ruilhont morse goulo.

Devez skuizus ha moreduz-tre.  
P'en em gavomp war hon c'hiz, noz  
anezi, ez omp faez-marzo. Kouezet  
ar ganoliadeg spontus a zo kouezet  
war hon linennou, gwel a ze hep  
nemeur a zroug ! eus deg eur da  
hanternoz.

Met ne fell na klamm na termal.  
Ar brezel eo !

AR YRODET.

(Da heuilh.)

## ROLL-GERIOU

Trolle, grandeur ; eun den a drolle,  
qui aime à tenir le haut rang.  
Kabalat, se dépêcher au travail.  
Fraoella, murmurer, gronder.  
Freskad, restants d'un bon repas.  
Kagal, crotte de moutons, de la-  
pins, etc.

Bogolier, qui aime à se vanter.  
Skarinok, homme grand et maigre.  
Skara, déguerpier rapidement.  
Buga, étendre, serrer, pousser.  
Chemm, avoir de l'initiative, ingé-  
niosité.

A-flec'hen, à foison, en abondance ;  
foenn a zo a flec'hen.

Chana, rester en panne : ar c'har a zo  
chanet er prad.

Eun teod lidour, un beau parleur.  
Buget a laou, a c'hoenn, plein de  
poux, de puces (On dit aussi  
Barbilhounet, même sens).

Ne c'hellau ober na kriz na poaz, je  
ne puis rien faire du tout.

Ober va c'har va-unan, se trainer  
avec peine.

Eun ard a zen, un sans-souci, aimant  
à jouer des tours.

A-greiz pep kreiz, au milieu de tout.  
Seach ha glas, vert et sec, qui ne  
respecte rien.

Tuna, voler ses parents.

LOEIZ AR FLOCH

Gallout a rit gouuit 20.000 lur

on eur ober vad d'he nesa.

Evit se, kemerit eur bilhed er  
c'hoari-sac'h, pe « loterie », a vo ten-  
net, ar 25 a Gerzu, evit ar Brizone-  
rien.

Prizioù all a bouez, — pemp a  
1.000 lur pep-hini, ha re-all c'hoaz,  
— a zo da c'hounit, en tu-hont d'ar  
piz kenta a 20.000 lur.

Pevar real hepken eo priz pep bil-  
hed. Kas an arc'hant d'ar « Comité  
interdépartemental du Secours aux  
Prisonniers de Guerre, 34 place de  
la République, Le Mans ». Lakaat  
en ho lizer eun timbr a dri gwenneg  
evit ar respout.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Briau. — Imprimerie St-Gallan





**PRIZ AL CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Greaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zondarded ar Vro**

*Eur mignon soudard.*..... 20 real.  
*P. Gourvil*..... 4 real hag eur c'houmanant.  
*Lahellec, telefonter.* 4 real.  
Truzart-z a greiz kalon d'hon madoberourien! Hag int soudarded, o deus kavet an tu da zioueret eun dra bennek da zikour kas « Kroaz » d'o c'hamaraded. Bennoz-Doue d'ezo!

**Son eur Breizad divroet**

Salud d'ec'h, o Breiz-Izel  
Kaera bro 'ao er bed!  
Perak n'em eus diou-askel,  
'Vit dioc'h-tu ho kwelet?  
Me a zo eur paour kéz den  
Leun a dristidigez.  
'Balamour na glevan ken  
Ho trouz-mor nag ho Yez.  
Kement komz 'glevan diouti  
'Lak fouge em c'halon:  
Maro-so ar velkoni:  
— Gallaoued, Breizad on!  
Ya, o va Bro gaer Breizig,  
Ya, kentoc'h d'in mervel  
Eget ho nac'h, va Douzig,  
Ha dont d'ho tilezel!  
Enor d'ec'h, va Breudeur géz,  
Mar dalc'hit d'hon roudou,  
Mar chomit leal d'hon Yez,  
'Tensor hon C'hendadou!  
J. GOURLET.

**Taolen ar Brezel**

**Emgannou-irec'h en Hauternoz.**

Ar 4 eus ar miz, ar Zaouzon a zo aet da linen an enebour a-hed eun bir a dalben, er viz-reter da « Ypres ». Gounezet o deus eur riblennad vat a zouar, — eus unan da dri c'hilometr led, — kemeret 4.446 prisonier ha skoet gant an Alamaned kollou eus ar gwasa, tost da 20.000 a dud!  
Ar meur, 9 eus ar miz, emgann adarre; ar wech-man, avat, gant ar Fransizien hag ar Zaouzon unanet.  
Ar Zaouzon o deus argadet war eun led a 8 kilometr, er viz-reter da « Ypres ». Gounezet o deus eun dachennad a dri c'hilometr pe ouspenn.  
Ar Fransiziea, diouz o zu, a zo aet da linen an enebouriea en hanternoz d'ar Zaouzon, war eun talben a zaou gilometr hed, en eur c'horn-bro diaes.

eno an holl vererion a oa bet krenvaet gant an Alamaned ha diou gêriadenn, « Mangelaere » ha « Weldhoek », ha da dizout beven eur c'hoad hanvet « Koad Houthulst ». War eun dro ganto e tigouete ivez er c'hoad-ze korn kleiz armead Breiz-Veuriz, ennan Kambreiz hag Iwerzoniz Breiziz, a zo ken stank en armead ar Fransizien, a vo en em gavet unanet, eur wech ouspenn, gant hon c'henvroiz a Vreiz-Veur war an dachen emgann!

**War dalben an Itali.**

Adalek derou ar miz, krogadou stank war uhelen « Garso » ha dreist-oll war venez Sant-Gabriel.  
Kaer o deus ober, n'eman ket an Aotrichianed evit adkemeret run ar menez-se diouz tu ar c'hornog, a zo dalc'het breman da vat gant an Italianed.

**War dalbennou ar Rusi hag ar Roumani.**

Nebeut a gemm e talben Riga. An Alamaned a gas war-raok, a-hed an aochou, nijerezed ha listri skanv, bep riskla, avat, ober man a bouez.  
War harzou ar Roumani hag er « Chalisi », setu eman ar Russianed oc'h adkemeret o c'henvro: dizarbenet o deus ar Vulgared ha tapet 800 a brizonerien en eur c'hrogad trec'h er walarn da stêr Sereth.  
E Petrograd, an emgleo hag an urz-vat a zeu war c'horre tamm-hatamm. Kerensky en deus savet eur stollad nevez a vinistred, an holl anezo tud a boell hag a bouez. Gras d'ezo d'ober labour vat!

**War vor. — Keleier eus ar stadou.**

An 2 eus ar miz, eul lestr-brezel a Vro-Zaoz, an « Drake », 14.000 tonnall, a zo bet tarzet en hanternoz da Iwerzon; gallet en deus tizout ar porz kent mont d'ar strad. Eun oliser ha triouec'h den a zo bet lazet gant an druzaden.  
An Alamaned, diouz o zu, o deus kollet eul lestr-reder, ar « Seeadler », o doa kemeret digant an Amerikaned war e veaj eus New-York da Arkanjel. Armet gant daou ganol ha 16 min-drailherez, ar « Seeadler » a oa bet kaset ganto war aochou an Amerik ha da inizi an « Océanie » da blaouia listri-keuwerz; kalz anezo er doa tapet, ken na voe taolet d'an aod d'e dro ha kollet.  
Brud a zo savet diwar-benn eul lestr-splujer, an U-263, a oa dalc'het e Cadix, Bro-Spago, hag a zo deut a-benn da dec'het kuit ac'hane. Da

ranket rei o dilez.  
An « Uruguay » hag ar « Perou » diou vro vras eus an Amerik, o deus torret o darempredou ouz an Alamaned,  
Ar « Finland » a zo en em ziskleriet republik diouti hec'h-unan, nemet en em glevo hiviziken gant ar Rusi evit ar brezel hag an holl gevrediou a-zivaez.

**Bolo, Tarmel, hag all; eur gentel!**

Eur rann-galon hag eur vez evit pep Breizad klevet en deus meudet eur c'hannad eus ar vro, an aotrou Tarmel, arc'hant bras digant an estren evit n'ouzer ket c'hoaz peseurt marc'hajou lous. Serret eo bet gant an itron Tarmel a droke an arc'hant-se en tiez-bank.  
Dizoloet eo bet dre skoazel an Amerik e oa paet Bolo gant an Alamaned evit prena kelaouennou bras Pariz hag o zrei a du ganto.  
Eur gentel a zo da denna eus ar skouer-ze evidomp-ni, Bretoned. Gwella skoazelli a zo da labourat evit an amze-da-zont eo ar c'helaouennou, nemet gouestlet e vent, e gwirionez, da vad ar Vro. Diou hepken, e Breiz, a welan o labourat e sell hon Bro garet: an « Union Agricole » a Gempelle, ha « Kroaz ar Vretoned », Eu-dro d'an diou-ze, kenvroiz, e tleomp en em voda, kuit da rei hon gwenneien hag hon fizians da bapereunou bras, c'hoant ganto dreist-oll gonit arc'hant. ha pa ve arc'hant flêrius e vije!

**Eiz dez a beoc'h!**

Daou viz int bet, e-kreiz an tan, O stourm ouz ar Boch heb eban; Gouere hag eost a zo bat start — Breman pelloc'h ez int ampart.  
Eun nebeut pennad en adreñv Int digasat, diner; ha krenv; Bras eo sur o syvurusted; Gant priz o gwad ez eo prenet.  
Evit diskuit diouz ar stourmad Netra ne ra muoc'h a vad! Kemerit 'ta holl a-unan Eun tamm renoz goude ho poan.  
Pa vezer bet, e-pad daou viz, Hegaset pell hag e pep giz, E komprenere aez-tre pelloc'h Petra d'alvez eiz dez a beoc'h.  
Evit kerzet o deus an hent, E lec'h fozioù vel diagent;

E lec'h orjal treiz, didalvez.  
E-kreiz ar c'hoad, a-hed an deiz, E kaver kraou kelvez e-leiz; Pebez plijadur 'vit an holl Tremen 'vel-se an auzer goll!

Dre ar prajou, al lanneier, Kamm-digamm 'red ivez ar stêr; A-hed he ribl war ar yeod glas Nag a huve ne r'er ket c'hoaz!

Eur voure'h vihan, eun ilizig, 'Weler pelloc'h 'n eur gichennig; Eno, dirak Jezuz, Mari, E karer dont evit pedi.

Goude beza chomet eiz dez Da veva stoul 'barz ar barrez, Evit dere'hel sonj ar brezel, Graet 've ar zac'h, pleget tinell.

Diskuit ar c'horf, yac'h an ene, Dispart 'z eont da gutuilh lore, 'Vit difenn o bro c'henidik, O deus Janed, Soaz, Annaik!

Soudarded ar Frans 'zo kadarn! Verdun, Yser, ar Somm, ar Marn E pleg he bannielou bepred 'Jomo skedus dirag ar bed.

Yann-Mari NORMAND.

**Evit hon « Amzer-da-zont »!**

**Eur ger c'hoaz diwar-benn Kendalc'h Pontivi**

Ar zizon ziveza, red d'imp krenna eun tammig hon pennad diwar-benn Kendalc'h Pontivi, n'hor boa ket gallet displega eur poent a zo, koulskoude, a bouez bras: Ar skouer-vad a vez rôt d'imp gant hon breudeur, Breiziz Breiz-Veur. Aet int primoc'h, ha pelloc'h kalz ivez egodemp, war an hent a fell d'imp kerzet drean: hent an Araokaat dre wellaat stad ar Vro. N'hellfemp nemet gounit e pep giz o studia o skouer-vad hag oc'h ober hon mad anez!

An aotrou Per Moeaer, — an hini a skrive, n'eus ket pell, war « Groaz ar Vretoned » istor Lloyd George, — an deus diskouezet d'ar Vretoned bodet e Pontivi eur bern labourioù-skrid, levriou, kelaouennou, papereunou a bep seurt e brezoneg Breiz-Veur, ha displeget, war eun dro, an doare m'o deus gouezet hon c'henvroiz a Gambre bevaat souezus o yez hag o spered-bro. Dere'hel a reont, dre-ze, dirag ar bed o renk a bobl, e lec'h beza eveldemp dindan dreid ar re-all.

Trugarez d'hon c'henvroad Per Moeaer, en hano Breiz, evit al labour vat en deus graet! Ouspenn studia en o bro o-unan skouer Kambreiz, en deus roet ar wella skoazell da







**PRIZ AN C'HOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, a zigemer ané

**Alouennou da « Groaz ar Vretoned »  
d'he c'has da zoudarded ar Vro**

An Itron Blanc ..... 4 real.  
Trugarez d' hon lennerez ker, a zigas d'imp, a-unan gant he frof da « Groaz ar Vretoned », eul lizer mat, ennan al linennou-man ken skouerius :  
« Eul levr-oferen e brezoneg a garjen da gaout aman... Divrôet omp bepred, hag, aon am eus, evit pell amzer e hoaz ! Mad a ra d'ar galon, ha frealzus eo evidomp pedi e brezoneg, p'emomp ker pell diouz hor bro Breiz Izel.  
« E kear B... ez eus kalz a Vorianed, a zo eul loden anezo renet gant va fried. Poania a reomp evit diski o yez, a zo diés ha garo. N'eo ket, siouaz, hon brezoneg ken kaer !... »

**Enor da vartoloded Breiz !**

Ar vartoloded fuzulerien, a ra ker kouls labour en Hanternoz, o rei dourn d'ar Zaozon da vont war raok, a zo bet laketaet, evit an eil gwech, war daolen-enor an arme.  
Enor da vartoloded Breiz

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar Frans  
hag ar Veljig.**

Ar gwener, 12 eus ar miz, ar Zaozon a zo aet war-raok adarre er Veljig, er viz-reter da gêr « Ypres ». Kemeret o deus eun nebeut lec'hioù krenvaet ha 943 prizonier. Nemet, gant fall eman an amzer ha leun oll ar vro a zour hag a fank, en em gavont harzet evit eur pennad.

A-heul linen ar Fransizien an Alamaned o deus graet argadennou stank, dreist-oll tost da Verdun, en uhelen 344 hag e « Koad ar Soul » (Bois le Chaume), e-lec'h eus kement eus hon c'henvroiz. Doue da roy d'eo bepred e skoazell ha nerz da zizarben an enebourien !

**War dalben an Itali.**

Krogadou dalc'hmat etre kêr « Gorizia » hag ar mor. Ar 15, an Aotrichianed, oc'h argadi goude kanoliata start, a zo bet dizarbennet.

**Er Rusi.**

E-keit ha m'eman ar bolitikerien o c'hlabousat e Petrograd, en Alamaned-i ne gollont ket o amzer. Diskennet o deus gant o listri-brezel nerziou bras en euz Oesel, rag-eneb da bleg-mor Riga, e sell, moarvat,

da gerzet ac'hane war-zu Petrograd pa vo deut en-dro an nevez-amzer. Nemet e teufe ar Rusianed da zivorfila d'aa diwez ! Gras d'ezo d'hen ober an abreta ar gwella !...

Eus euz Oesel setu an Alamaned o klask tremen en euz Dago, a zo ubeloc'h en hanternoz ha tostoc'h c'hoaz da Petrograd. Betek-hen ar Rusianed a zo deut a-benn d'o dizarbenn ; gouledet o deus d'ezo daou lestr-tarzee (torpilleur).

**War vor hag en ér.**

Al lestr-samm dre dan, « Médié », 4000 tonnall, a zo bet tarzet er mor Kreizdouarek, ar 23 a gwengolo. 250 den kollet gantan.

Brud a zo ez eus savet mesk ha dispac'h war vourz listri-brezel eus an Alamagn hag an Aotrich. Martolod an Alamagn en em zav ouz o ofiserien ; re an Aotrich n'houlont ken senti ouz an Alamaned a zo garo kenan ha dismegansus outo.

Bombezennoù a zo bet losket ouz « Dunkerque » ha « Nancy » gant an nijerien alaman.

**Gwall-brosezon.**

Trouz a zo gwasoc'h-gwas en-dro d'ar prosezou m'en em gav e-barz Bolo, Turmel, ha beteg eur ministr, an aotrou Malvy. Diwar-benn Bolo ez eus bet disklêriet gant an Amerik en doa klasket prena kelouennou bras Pariz, d'o zrei a-du gant an Alamagn, ha bet milionou evit-se. Evit ar re-all a zo tamallet ivez, nebeut a zisklêriadur betek-hen. Gortozomp !

**Diweza Keleier**

**An Alamaned war talben Riga.**

An Alamaned, goude derec'hel euz Oesel dirag Riga, o deus dalc'h bet pleg-mor Riga en e bez ; gouledet o deus ennan eul lestr rusian ar « Slava ».

**TAOLENNIC**

Pa vez digor-frank an Awen, Kemerit buan ho pluenn ; Ha loskit-hi da redek têt, Digabestr, laouen ha seder.

Karout rajen kana hirio  
Eur zon viban da dud ma bro,  
En eur ziskouez sklêr eun daolen  
Gwelet dec'h-vintin en talben :

Ar zoudarded war an hent bras,  
O zac'h ganto war o diouskoaz,

War e ganol an artilher,  
A-us d'ar penn sell an nijer !

Holl emaint 'ta, bras ha bihan,  
O tere'hel penn d'anAlaman :  
Dre-oll e reont dreist o dever  
War vor, war zouar, 'vel en ér.

Met dec'h-vintin, en eur dremen.  
Petra 'm eus gwelet er blien ?  
Eun hernach kezeg du ha yell.  
Eun alar koad, eun demezell !

Na kaera tra 'kreiz ar stourmad !  
Eun demezell, eun alar koad ;  
Eun hernach kezeg yell ha du,  
An douar deut da veza ru !

Dirag eur seurt taolen ker kaer  
Piou 'jomje pelloc'h dibreder ?  
An den war droad a zao e benn,  
Trec'hi 'zo red en abaden !

An artilher gant e ganol  
A rent d'ar Boch dek tenn 'vit taol ;  
Ar Frans a bez 'zo divarvel !  
Bevet alar ha demezell !

Ouz o gwelet petra 'reomp-ni ?  
— Ar Breizad n'jom ket da nec'hi, —  
Pa vez echu an dennadeg,  
Dao ! d'an alar ha d'ar c'hezeg !

Evel-se 'ta 'rôer d'ar Frans  
Nerz an divrec'h evel ofrans ;  
Gant an alar hag ar c'hanol  
'Kaver lec'h diadan an heol !...

Setu an ugentvet kantved,  
Gant e frankiz, e lealded ;  
Gant ar c'hanol 'lec'h an alar  
C'hoant 'zo labourat an douar.

War zao ! Pelloc'h, holl a-unan,  
Flastromp e benn d'an Alaman.  
Ra vo hor Bro Frans digabestr !  
Doue Lon Aotrou hag hor Mestr !

War an talben, 10 a viz gwengolo.  
YANN MARI NORMAND.

**Eur C'halvaden**

**evit « Unvaniez Arvor »**

Hor mignon ha kenlabourer ker,  
Telen Aber, a zo bepred en talben, a zigas d'imp, en e hano hag en hano holl zoudarded Breiz, divrôet eveltan, ar c'halvaden galonek-man d'an holl Vreiziz da zont da izili « Unvaniez Arvor », ha labourat a-unan enni evit hor Bro garet, Breiz, hag hec'h Amzer-da-zont !

« Kroaz ar Vretoned » a gomze, eur pennad a zo eus « Unvaniez Arvor ».

Peb Breizad kalonek, doujus d'e Ouenn, a wel ez eo eun dra eus ar gwella, ar vrentiez-se graet evit rei an doua da adsevel hon gwir Vro, hon Breiz-Izel, a-unan gant kement a emglevioù all ha kelouennou evel « Kroaz », an « Union Agricole », « Feiz ha Breiz » ken karet ha ken buhezek gwechall, plijet gant Doue ma adkrogo goude ar brezel !

Fizout a heller e vo selaouet galv « Kroaz ar Vretoned » evit « Unvaniez Arvor ». Keinent den a zoug eur galon en e greiz ne hall tremen hep karet e Vro ! Ar garantez-vro !... Ha piou ne anavez ket ? Marteze ar rederien henchoù a welomp en o c'hirri-gwele o tremen eiz dervez e Landerne, eiz all e Bourdel, kemend-all e Lyon ! Setu an dud n'o deus ket a vro. Met eun dea ganet er Vro, ma tremen enni e vugaleach, savet evelomp e traouiennou Breiz, lusket gant hec'h aochou, goudoret gant he c'hoajou, ne hell tremen hep karet e vro !

Ar Vro !... An tiig sionl ma kaver ennan goudor, peoc'h ha levezet !... An iliz gaer, gwintet warni eun tour dantelezet !... Ar vered e pelec'h e repoz hon tadou, hon holl gerent, ar bezig m'o deus daoulinet warnan, a-raok beza d'o zro moustret gant pouez hon daoulinou... Setu aze petra eo ar Vro !

Ar yez a glevemp war varlen hor mamm, ar gerioù kenta deuet war hon muzell, hag engravet abaoe en doun hor c'halon ; ar yez-se, hon eus gwelet disprizet er skolioù ha gwasoc'h c'hoaz en arme, setu ivez petra eo ar Vro !

Ha gizioù hon tadou ! O sevenadurez, o skianchoù ken dishenvel diouz re kalz broioù all ! O Feiz ! En eur ger o Spered-bro !

Hag ivez hon tad, hor mamm, hon tiegez, hon holl gerent, kement a zoug hor c'harantez, kement-se holl eo ar Vro !

Piou, eta, a zeuio breman da lavarret evel darn : « Me n'em eus ket a Vro ! » An den-ze a hallfe chomm bouzar ha dall e-kenver al labour a dle adsevel Breiz. Met an den e deus e yez, e c'hizioù hag e spered-bro, a dle harpa ha skoazia ar seurt emglevioù.

A-raok ma tirollas ar brezel euzusman, eun niver bras a dud a golle amzer ha galloud o trabasat a-zehou hag a-gleir, ha ne gavent netra a vat graet da blijout d'ezo, daoust d'ezo o-unan beza redet an doun peurliesha evit heñ ober. Unan a oa ruz, eun all glas pe wenna, hag, evit an distera

tra, an dizunvaniez a veze lakaet da ren... It neuze da glask ober eun dra beanak ! Kerkouls e ve a'eoec'h kas ho jao a-raok, pa droio eur marc'h a gleiz, eun all a zehou !

C'houec'h kantved a zo edo hevelep c'hoari, pa drôe darn a Vietoned a-du gant Montfort ha darn all gant Bleaz. Daoust ha n'eo ket lavar ar foll Salaün eo a dleomp-ni heuilh hirio ?... « Na Bleaz na Montfort, holl d'ar Werc'hez Vari ! » En em lakeomp, eta, dindan an hevelep banniel : « Na ruz na gwenn, holl evit Breiz ! »

Pell diouzomp an ijinoù a zizunvaniez a gollas hor Bro, hag he c'hollo c'hoaz ma na deoump d'o dizarben !  
Holl dourn ouz dourn ! Kerkomp evit mad Breiz, hor gwir Vro ! A-raok evit he gloar, he buhez, he meurded !  
Na ruz, na gwenn, holl evit Breiz !

TELEN ABBR.

Ya, heulomp holl ali hon mignon, ker ! En em vodomp, dindan banniel ar Vro, eo « Unvaniez Arvor ».

Kas an hanoioù, mar plich, da zekretour an « Unvaniez », an aotrou Mellac, 54, rue de la Comédie, Lorient.

## BREZONEG GWENED

### Karamb er brehoneg !

Aveit karein un dra é ret en anatein mat ; aveit karein ur ieb é ret en diskein erbat. Goaleurus é, Breihiz, mé kavér en hur meek tud ha ne ouiant ket mat ou lavar, tud ha ne lakant ket poén erbet eit en diskein, tud ha n'em chervijant ket anehon nameit pe n'hellant gobér ér mod aral, de laret é pe vé ret debé. Es é kompren nezé en em chervijant ag er brehoneg eun ur féson dijauj ha direih, en ur geijein gefon kouez gallek dilost ha diben. Ur véh é d'en dud-sé konz ken divalaù, ha méh en devéhé, hés mat, er ré é chéleu dohtë.

Miniù em es kleuet ur voéz é konz el-men é foér en Oriant : « Quel priziou fol e houlen en imbésiled-men eit ou moh ! Affreux é debé kaout kement a doupet ! »

!!!!

Laret d'ein mar nen dé ket ur véh konz ken diveintur ? !

Perak é laré er voéz-se girieu ken displeit ?

Rak ma ne houé ket éma er brehoneg ur lavar abéh, ur lavar hag en dés é girieu eiton, ha ledan erhoalh hemb bout d'ober de gestal ér lavariou aral....

V. ER VILIN.

(De héli).

## DIVUNADENNOU

Tarigos, tarigosik,  
Golbet a vilb osik,  
Ha du holl nemet e rer....  
Hennez 'zo eun tarigos kaer !

Respont : Eur vouaren.

Eun ozac'hig toullmouzer,  
Rouz ha moal ha miliner ;  
E wreg a zo toullmouzeréz,  
Rouz ha moal ha milineréz,  
E vugale toullmouzerien,  
Rouz ha moal ha milinerien.

Respont : Eun neizad logod.  
(Dastumet gant J. Gros, Serjant)

## SPERED EUR MARTOLOD

Eur martolod yaouank a Vreiz a oa o vont da zevel en eur vatimant evit ober eur veaj hir.  
Unan bennak a lavaras d'ezan :  
— Penós e kredit-hu en em avan-

turi war eur mor hag en deus lounket ho tad, ho tad-koz, ha meur a hini-all eus ho kerent ?

— Hag ho re-c'houi, e pelec'h int marvet ? a c'houlennas ar martolod.

— A zo marvet en o gwela....

— Hag e kredit c'hoaz, goude an dra-se, gourvez en ho gwela da gousket....  
Kl.

## NOTENNOU

En Hanternoz.

VIII

Eur beden galonek a gasan kerkent d'ar Werc'hez, hag unan-all da De-reza ar Mabig Jezuz, ar zantez nevez a garan kalz, a bedan dalc'had, hag a vo, en-pad ar reuziadou fall, ma harp, ma gwellan skoazell ha ma frealz. Mil bennoz d'ez ! Biskoaz n'em eus bet he galvet en aner. War-lerc'h eur beden kaset d'ez e choman bepred dinec'h en-pad ar gwasan kanoliadegou.... Nag a wech n'em eus ket laret d'ei ar bedennig-man : « Dalc'hit sonj mad eman ma fizians ennoc'h ha n'hellit ket lezel droug da zigouezout ganin... N'am ankouait ket ! »

Ha mil bennoz d'ez ! Ar zantez karet « Tereza vihan » he deus ma zikouret, ma difennet, ma diwallet bep gwech....

Hag e kerzomp, eta, d'an orjal, an eil war-lerc'h egile, didrouz-didrouz, hag e krogomp da neudenni an dachennig a zo divizet d'imp ober.

A-greiz-ell e tigor an oabl gant sklêrder eur « fuzen », tec'het diouz hon tu pe diouz tu ar re-all. Ploup ! hag ar baotredou holl war o c'hoi. evit miret da veza gwelet pe zizoloet. Hag e savomp kerkent ha ma varv ar skêrijen, hag e kouezomp war hon c'hiz adarre adalek ma par a-nevez. Met, kredit ac'hanou, er reuziad kentan, ne oa ken ma... fenn adrenv d'in ma-unan, na pell ac'hane !

En em gustumi a ran da heuilh ar re-all. Goude beza poaniet teir eur, pe war dro, e tistroomp da c'headal adarre en-pad div eur all.... ha, goude, avat, da gousket. Met, nag em eus kavet kevanézun an div eur gedal-ze en-kichen an deir eur tremenet war ar bléne, e-kreiz an tennou o tremen dipitus en-dro d'hon diskouarn !

Breman, red eo laret penós, mar na denn ket stankoc'h c'hoaz an eil war egile en-pad ma lakomp orjal, eo en abeg ma ra ar re-all svedomp. Mar tennent kalz war-zu d'imp, — rak n'en em welomp ket, — ni ivez a dennfe kalz war-zu d'e. Kement-se a zo, evel pa lavarfen, eun tammig amezegiez vad etre enebourien a renk ober hevelep labour d'an hevelep koulz war an hevelep tachen. Netra ken !

6 a ebrél.

Er foziou-brezel, pa na zigouez netra a nevez, e chom ar vuhez pemdeziek a-damdest hevel. Diouz ar beure ha war an de, nebeud d'ober en diabarz-al linennou ; war an dispak, avat, netra ! An eil a welle egile, hag an tennou a strakfe. Hogen da betra laza tud heb ezomm, heb gounid ? Tri pe bevar gedour hepken dre gevren (section), eilet bep div eur. Ar re-all a ziskuilz pe a gousk, a ra c'hoariellou, braoigou evel bizaoued hag all, pe a skriv. Skrivan eo brav du-duamant a zo. En keit-se, pep-hini a dremen gant e dud eun amzer dudiuz.

War dro nav eur, ar c'houiz da vont d'ar zouben. Daou ha daou, ha ebenchet bemde. Pep-hini d'e dro. Hervez ar c'hornadou ez eo eur blijadur pe eun anken mont d'ar zouben. Aman ez eo eun dudi. Tec'het eur pennad diouz an toullou a ziskuilz ar spered. Hon c'heginou, kuzet er vengleuz am eus komzet anezi. n'emaint ket gwall-bell, eul leo d'an biran, ha hent gwaskedet, da laret eo garen don, e-lec'h n'hall ket an enebour hon gwelet.

Nag a evurusted o welet dizro pò-tred ar zouben, sammet evel kezeg !

Dont a ra gante souben, rata, gwin (pinard), al lizerou, hag ivez ar c'helaouennou.... rak arabed sonjal n'ana-vezomp ket ni ar c'heleier aman.

An evurusa pennad evidomp eo koulz ar boued. Kement eo dilezet an den, kement eo ankeniet e galon, kement a boan hag a zizamanchou en deus ma n'eus mui evitan nemet eun die'haou, eur-frealz : dibri, boueta ! Evurus c'hoaz zpa hall terri e naon hep poan na gloaz. En diavaez da ze, evurustedebet ! Red eo koueza izel ha beza gwall-gaset, evelkent, a-benn dont eno !

Hag evel-se, gant koan c'hoaz war-dro pemp eur. — Ya, e-lec'h ma vez sioul ar bed ! — e tremen an amzer betek ma teu tenvalijen an noz. Neuze, hevel ouz d'houiled, pe broc'hed, e tec'homp adarre da skigna orjal, d'ober foziou nevez pe da adsevel reou gouezet, dispennet, pe c'hoaz d'ober labou-riou all adrenv, rak, war an talben, pa na vrezelomp ket, e kendalc'homp da boanial, d'an nebutan betek hanternoz.

Henoaz, a drugarez Doue, n'in ket da lakaat orjal. Stad a zo ennou. En-pad ma vo ar re-all war bléne e taolin evez evel gedour. Dac'h e oamp-ni war ar bléne, breman eman tro ar re-all.

Ya.... Met n'ouvezen ket petra a c'hortoze ac'hanou. Echu ma reuziad gedal ha krog da gousket, e teu ar c'haporal d'am dihun evit mont gantan d'ar « post bihan », eun toull stok da linennou ar re-all. Anavezet eo gante kenkoulz ha m'eo anavezet o hini ganimp, ha ken tost emomp a-wechou ma klevemp ané peuvuan o komz streze ha m'o gwelomp alies o vont hag o tout....

Tapet mat ar paotr adarre evit an eil novez !

### Badeziant an tan

Chomp a reomp eno, ar c'haporal ha me, peder eur hanter e lec'h div eur, ankouaet gant ar re a dlee dont war hon lere'h. Ar c'haporal, skuiz, a yeas diou wech d'e doull, hag am lezas eno ma unan.

An eil gwech, dre ma oant hegaset gant unan eus hon re, a gendalc'he, daoust d'an difenn, da denna warne eus hon linen gentan hag e tarbas d'ezan zoken tizout hon stignerien orjal.... an eil gwech, ar Brusianed a dennas ivez. Eur c'houec'h tenn bennak a dremenas a-biou d'in hag eun daou pe dri a zeuas zoken em c'hichen da vervel.

Ma-unan eno, glao a-bil, ne oan ket lorc'hus, kredit !

Ha ze ne oa c'hoaz netra. Prestik goude ma oan savet, o tistrei d'am zoull e-kreiz an noz tenval, e trois eun tamm a-ziwar ar wenojen jilgam-ek a dreuze hon steuaden orjal, ha war an dispak e oan ousspenn.... Kerkent eur sklokaden : 77 an Alamanez a oa krog da vlejaj, hag e « obuziou » a zeue da darza en-dro d'in.... Pelec'h mont, Gwerc'hez Vari ? Gwell a ze, e kavan izeloc'h eun toull doun mat. Ruihal a ran ennan buan.... Poent a oa ! Eur sklok sec'hoec'h, eun tarz muioc'h strakus kerkent.... Zim !... Poum !... Klak ! Klak ! Klak ! Hag an tammou dir a nij en-dro d'in, en eur traonwal, en eur c'houistellat, en eur yudal....

Ma Doue !... an « obuz »-se ha daou all eveltan a darz nao pe zek troatad hepken diouz. Bouzaret ou, met droug ebet ! Kalonekat peden a gasan d'ar Werc'hez, d'am « zantez karet », ha me eno, n'ouzon penaos, ma fenn er pri, war ma c'hein eur lec'h douar distaolet gant nerz strou-saden an tennou !

Eun diouzek « obuz » bennak (obuziou 88 aotrichian, hen gouzout a ris goude), a gouezas evel-se en-dro d'in, o strafilha hag o spouronni ac'hanomp holl.... ha me dreist ar re-all !  
En keit-se, ma c'haporal doniak a oa diredet d'e doull, ha lezet ac'ha-

noun d'en em zibab ar wech kentan en eur wenojen ha n'avezen ket, ma-unan dindan ar glao, e-kreiz an noz tenval-sac'h.... Koant e oan eno, m'han tou d'ec'h !

Bet em boa, heb goût d'in ha dize-blant, « Badeziant an tan ». An Ankou a oa bet tost, met eun dorn madeleuz bennak a droas e falec'h....

Skornet e oan arak dizrei d'am c'hlud ; met, goude avat, n'em boa ken a riou,.... na kennebet c'hoant da gousket ! Daoust da ze, n'am boa bet biskoaz aon nemeur rak mervel. Nan biskoaz ! Laret em boa : « Ho youl bezet graet, ma Doue ! » hag e c'hortozan pep tra gant fizians. Met gwasat spouron evelkent !

AR YEODET.

(Da heuilh).

## KELIER EUS AR VRO

### PLOULEC'H

Person neve. — Deut eo d'imp ar c'helou ez eo hanvet da bersou en Ploulec'h an aotrou Savidan, kure Ploubezr.

Kalz a gwan a vezo d'ezan en Ploubezr e-lec'h e oa karet meurbet :

Kerse 'vo ganech, Ploubezr,  
Antren breman en noc'h iliz,  
En noc'h iliz, en ho pered....  
Eur mignon mat ho peus kollet !

Ha c'houi, tud vat Ploulec'h, goude bezan bet glac'har d'ho pastor karet, marvet en ho touez, en em frealzit, rak kavet ho peus hirie e bar ! An aotrou Savidan a lako e holl nerz hag e holl boan d'ho ren holl war-zu ar Baradoz !

L. C.

### PONTIVI

Kanv. — Hon lennerien o devo dalc'het kouz eus ar zoniq a « zigermer-mat » a oa bet savet ker brao aman da izili « Unvaniez Arvor » o vont da gendalc'h Pontivi.

Ar Barz en doa savet ar zoniq, an aotrou Thibault, mestr-kelenner e Pontivi, a zo bet, abaoe, gwall-skôet gant maro e vab goude eur c'hlenved hurr ha poanuz.

Kas a reomp d'ezan hon c'haoneka gourc'hemennou a genganv. Ra vo an Aotrou Doue gant ene e vab ha da roio frealz d'e gerent en o glac'har !

### SANT-BRIEG

Eur gwall-goll evit ar Vro ! — An aotrou Bernard, enseller Akademi, a zo marvet aman ar zizun dram net.

Eun den leal e oa ha leun a galon ! Hen diskouezet en doa d'hon Renek koz, o tout, war e c'houl, da hanterouz, da zifennour, a larfen gwel, p'en em gae unan eus hon « Paotred-araok » set da vestr e-pad ar brezel, gwall-heskinet gant eur flater gallodek en abeg d'e garantez-Vreiz. Benniget e vo envor an aotrou Bernard e-touez ar Varzed evit ar mad-ober-ze !

M'en dije lezet Doue e vuhez gantan, en dije gwellaet souezus stad hon skolioù a Vreiz-Izel. Graet en devoa e venoz d'ober diski da vugale Vreiz ar galleg dre ar brezoneg. E Spered reiz hag uhel a rae d'ezan gwelet treaz petra a oa d'ober en hent-se a dle dont drezan kement a vad evid hon Bro. Gant ar grad a lakae en holl zleadou e garg, en dije, moarvat, kaset e venoz da bonn eus ar gwella.

Gwasat koll e varo evit Breiz-Izel ! Ra vo Doue gant e ene ha da roio d'imp war e lere'h unan hag a vo hevel outan !

ABHERVE.

Ar Renek-Merour : F. VALLÉE.

St-Brieuc. — Imprimerie St-Guilhem





PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoît,  
St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA  
KOUMANANCHOU

An sotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer anê

### Diwar-benn levrioù

Al levr « Dictionnaire de Troude » a zo diviet; n'eman ken e gwerz. Kavet e vez dre zigouez digant al levrierien o terc'hel al levrioù koz, evel Plihon, e Roazon, ha Durance, e Naoned.

« Levr Oferen » brezonek ha latin an sotrou sbad Gall, person Taole, hon eus goulnet digant an oberour, hag ivez digant an sotrou Salaün, e Kemper, hep kaout respont ebet. Pedi a reomp hon lenne-rien, ar re a hellfe hen ober, da gaout ar vadelz da lavaret d'imp penôs en em gemeret evit kaout al levr-ze, a vije ken plijus ha, war eun dro, ken talvoudus d'hon zoudarded.

Levr brudet Mstbalis, « Breiz Divarvel », a gaver e ti an oberour, G. le Rumeur, horolacher, 4, rue Thiers, Azay-le-Rideau (Indre-et-Loire). Priz 14 real.

### Taolen ar Brezel

En Hanternoz hag en Hent-an-Itronzed.

Difun diweza, 22 eus ar miz, ar Fransizien hag ar Zaozon unanet a zo aet war-raok adarre, er viz-reter da « Ypres », war eun talben a 7 kilometr 700 metr hed. Gounezet o deus eur vad a dachen war-zu koad Houtbult.

Antronoz, ar meur 23 eus ar miz, e voe graet eun arsaill a vras gant ar Fransizien en hanternoz d'an Hent-an-Itronzed. Deut eo an taol da va deus ar gwella. Kemeret e voe eur riblenad a dri c'hilometr hed, warni teir c'hêriadenn: Allemant, Vaudesson ha Chavignon, ha krenvlec'h ar « Malmaison », en e gichen eur eur c'heo ac'hon meurbet, war-dro c'hilometr hed war 300 metr led, hag e c'helle an Alamaned kuzat ennan betek 10.000 a zoudarded! Prizoniet e voe 8.000 a enebourien ha kemeret 30 kanol.

Er Rusi.

An Alamaned a zalc'h da c'honid ac'hon en ezezennoù ar mor Baltik: d'erc'hel a reont anezo hini-ha-hini. N'eo ket, avat, hep poan na koll! Ar Rusianed o deus en em zifennet start: gouelelet o deus unan eus listri brasa an enebourien, gwall-aozet daou all, ha distrujet pevar lestr bihanoc'h, rouederien pe darzerien. Gallet o deus ivez tenna o listri-

nemet ar « Slava », eus pleg-mor Riga a zo breman e dalc'h an Alamaned.

Diêz gouzout petra a raio ar re-man. Da gredi eo, gant garo e vez ar gouarn er Rusi, e rankint gortoz an nevez-amzer a-benn ober petra. Gant ma teuio, ac'hon di, eun nebeut poell da bolitikerien Petrograd a zo bet kaoz, dre m'o deus hadet dre-oll an dizurz, d'ar gwalleur da goueza war ar Rusi!

#### War vor hag en aer.

An Alamaned o deus tizet leuskel er-maez eus o forziou daou lestr-reder krenv ha herrek. Kelennet, war a greder, gant o spierien, ez ejont, gant an daou lestr-ze, e mor an Hanternoz, d'eur strollad listri-samm ha listri-marehadourez a oa anabrouget gant daou lestr-brezel skanv eus ar Zaozon. Ar re-man a stourmas eus o gwella o rei d'al listri-samm amzer da dec'h evit o buhez. Goude kas d'ar strad an daou lestr skanv na oant ket evito, an Alamaned a zistrujas al listri-marc'hadourez, eiz, anezæus an Norvej, ar Sued hag an Daemark; n'o deus ket teurvezet zoken rei sikour d'ar war toloded diwar o bourz a voe bezuet kalz anezo.

Ar seitek eus ar miz, al lestr-samm amerikan « Antilles », war e zistro d'an Amerik, a zo bet tarzet; 67 den, war an 167 a oa en e vourz, a zo bet kollet.

Al lestr-roueder « Renard » a Vrest a zo bet gouclelet o skei ouz eun dazerezh war neunv.

En noz etre a gwener hag ar zadon, 19 hag 20 eus ar miz, eur skouadrenn a zeppelinou, 13 anezou war a greder, a zo aet da leuskel bombezennou ouz Londrez. War o distro, kollet ganto o hent, e tigouezas unnek anezo a-us d'ar Frans. Pevar a zo bet diskaret a dennou kanol pe gant an nijerezed. Unan eus ar pevar-ze, an L-49, diskennet e Bourbonne-les-Bains, a zo en e bez. Eur « zeppelin » all, gwall-aozet ha dismantret-oll, a zo aet da goueza er mor Kreizdouarek.

### WAR AN TEVEN

Henvel digez diouz eur pebarzonier gant an sotrou D'Veignac, war ar « Breton de Paris ».

— « Ho sellou war ar mor du-hont, a War ribi an aod, petra c'hedit? »  
« Kriz an amzer, ha me a gont »  
« Ez eus gwall-arne d'omp o tont, »  
« Rak-ze, buhan n'em c'houdorit » —

Met ar vaouez-hi ne finv tamm; Evel ar c'herreg war he zro  
Ouz pere ar c'hoummou a lamm,  
Ken divrall eo ivez ar vamm...  
— « Eus piou e c'hedit an distro? »

« Eus ho pried pe ho pugel.  
« O mamm gredus ha kalonek?... » —  
— « Va fried... Ar mor a luskell  
« Anezan n'e gousk eternel  
« War varlen garo ar c'herreg.

« Evid ar vro, war an dachen,  
« Va mab hena a zo kouezet,  
« An eil mac'hagnet da viken;...  
« An trede n'em gann en talben  
« O Doue! m'ho ped d'e viret! » —

— « Petra c'hedit eta, mamm vat,  
« Pa na c'hejit ho pugale?  
« Pa na c'hedit muioc'h o zad,  
« Perak e par ho taoulagad  
« War ar gwagennoù glas du-ze? » —

— « Me c'hed gwelet a-bell du-ze  
« War ar mor glas, doun ha ledan,  
« Eur vagig skanv, sturiet bemde  
« Gant eur c'hoziad, drant koulskoude:  
« Va zad d'in-me eo a c'hedan... »

TELEN ABER.

### Miromp ar zonz anezo!

Aboue m'eo diskleriet ar brezel, setu evidomp ar pevare gouel an Holl-Zent. Nag a ganvou ledet war ar vro aboue an devez strafihus-se!

Den, d'ar c'houlz-se, n'en dije sonjet e padche keit-all ar reuz; ha, forz penôs, hini ac'hanomp n'en dije kredet komz a vrezel hir gant aon re sponta an holl...

Ha, koulskoude, n'eus ket da nac'h, aboue nao miz ha tregont leun en em gann ar zoudarded hag e kouezont a vilierou; aboue nao miz ha tregont leun, e vez o zud er brasa glac'har hag ar vro er gwasan nec'hamant.

Penôs hon eus gallet, ni soudarded, stourm keit-all? Hon zud d'erc'hel keit all? Ha kement-se hep fall-galoni, hep disperedi, hep dinerzi? Eur burzud hag a lak ac'hanomp ken souezet ma chomomp meur a wech da zonzal ennan!

Pebez amzer a vevomp evelket! Eur zell hepken war adrenv, hag e teu hon fenn da vezevenni, hag e spouron hon c'halon. Pelec'h eman breman an darnvuian eus an dud a dec'has an deiziou kent an viz eost 1914, hag i leun a yaouankiz, a nerz hag a yec'hed?

Kimiad kriz ouz o c'herent; kasoni zakr ouz eur boblad tud gouez a ziruilhe war o bro evel lano ar mor; fizians d'ac'hou buan ha da zizrei ker- kent! — « Kalon, a lavarent d'o zud!... Ar brezel en hon amzer

n'hall ket padout pell... A-benn an Holl-Zent, d'an hiran, e vetomp distro, trac'het ganimp al leoned fall, hag al lore war hon fenn!... »

Hag e tec'hent...  
Nag a bed anê ne weljont ket gouel an Holl-Zent ha n'int bet biskoaz aboue gwelet gant o zud!

Pelec'h eman breman o c'horfou paour, goude ar c'hanoliadegou estlammus a zo kouezet, ne oar den ped gwech, war an dachennad-douar e-lec'h m'int bet douaret?

« Requiescant in pace » a skrivomp gant feiz war hon mein-beziou. Korf ar re-man, stouaz! n'o deus kavet peuc'h ebet aboue ar c'houlz m'int kouezet. An « obuziou », al labourioù, an emgannou o c'has hag o digas eus eul lec'h d'egile heb lezel gante an disteran diskuiz... Kerfou dispennet ha drailhet, a vije bet ken didrouz en bered o farouz, ha ken frealzus d'ar gerent daoulina warnel!

Ha tud all a voe savet,.... hag e kemerent hevelep hent; hag e krede d'e ivez, gouel an Holl-Zent tremenet, dizrei d'ar ger tro an Nedeleg... Hag, evel ar re gentan, ez int kouezet... Ha tud all c'hoaz a veze savet tro-hatro, da vont d'an hevelep lec'h bepred. Ha gouelioù Pask en em gave, a dre-mene... Hag an amzer a garze c'hoaz beteg an eil gouel an Holl-Zent. Neuze kanvou nevez, ha glac'har war greski. Neb na ouele ket warlene, a ouel ar bloaz-man. An amezien a frealz ar re boaniet. Perak? O zro a zeuio war c'hoaz...

Ar brezel, evit gwir, n'eo ket echu. Tud a zaver bepred. Dre ma kerz an amzeioù, e tremen ivez ar remziou, remziou tud vaouank falc'het a-boan dihon d'ar vuhez!

Hag eun divret gouel an Holl-Zent a zeu Dre-oll, tiegeziou dispennet, tudou koz chomet o-unan, intanvezed eakrezet, emzivadep hep ekozell. Hag ar walen a gendalc'h spontusoc'h eget biskoaz. War-lerc'h unan, war-lerc'h tri, setu ar pevar gouel an Holl-Zent...

Breman ez eus tri bloaz e sellemp dirazomp gant anken, dizanaoudek ma oamp eus birder ar walen. Hirie, e sellomp war hon lerc'h, hag en em c'houlennomp dre belec'h ez omp tremenet, pelec'h emomp gant ar brezel, hag ivez pelec'h eman ar milieroù ha milieroù a dud kollet ganimp.

Paneved ar feiz, ez eus peadra da goll ar spared. Gwell a ze ez omp-ni Bretoned a gred, a gar hag a bed...

An dud karet, kollet ganimp, n'int ket kollet nemet evit eun amzer. Tec'h et zint. Gouzout a reomp da belec'h. An daerou, an daerou kristen a zistan, a gresk ar garantez hag hon tosta d'ezo...

Gouel an Holl-Zent ! Mar deo frealz  
zus en peb amzer, ha mar plij d'imp  
e lida dalc'hmaz, pegement breman  
ne dleomp ket e garout hag e ouestla,  
gant gouel an Anaon, d'ar gerent  
paour, breman ouz hon gervel hag a  
c'houlenn hon pedennou !

Tudou keiz, kenvroiz ker, n'an-  
kouamp ket, en bano Doue, hon zou-  
darded, kerent ha mignoned, kouezet  
du-hont evidomp ! Pep tra, o envor,  
al lec'hioù a garent hag a zo breman  
goullo evidomp, o gourc'hemenn diwe-  
zan, a gomz d'imp ane. N'ankouamp  
ket, — rak kement-se a chom gwir  
en despet d'ar fals-tezennoù, — ez  
int kouezet evit miret d'imp-ni, Bre-  
toned, ar c'haeran tenzor a zo ; ar  
frankiz da vevan dinec'h hag evurus  
war zousar hon c'havel, ha, dreist-oll,  
ar frankiz da viret hon c'hredennou  
ha da chom ar pezh omp a bell amzer  
hag e tleomp chom : kristenien ha  
Bretoned !

O vervel evid o bro, o deus heuliet  
skouer ar C'hendadou, a varve ivez,  
hep ma vije red, evit difenn hon he-  
rez sakr. Enor ha doujans d'ei !

Gouelomp d'ezo ! Hirie eman devez  
an daerou. Pedomp evito ! Rak an  
devez-man a zo d'e, ha goulenomp  
digant an Holl-Zent ha, dreist pep  
tra, digant sent koz hon Bro garet,  
pellaat diouzimp ar walen spontus,  
ma velimp c'hoaz heb dale amzeriou  
gwell !...

AR YEODET.

## KELRIER EUS HON MIGNONED A ZO KR BREZEL

Kelou eus hon c'henlabourer mat,  
G. Mazeas, hag eus an 71vet  
rejmant

Hon lenner ha mignon ker, G. Ma-  
zeas en doa bet kalz da c'houzant, a-  
unan gant hon c'henvroiz al eus an  
71vet, gant an aezennou flierius ; dié-  
zet, klanvet zoken e oa bet ganto.  
Gwell a ze, eman ya'haet ! Hon gwel-  
la menoz e zean ha d'hon c'henvroiz  
al eus an 71vet !

An naontek a hers, 1917, er  
foziou-difenn.

Aotrou Rener ker,

Goude dek devez diskuit, setu ni  
distroet a-nevez d'ar foziou, a-zehou  
d'al lec'h m'edomp tri-miz a zo.  
Aman ez eo siou an traou, ha kriz-  
der an amzer a re muioc'h d'eomp da  
c'houzant eget krizder an enebour hag  
e ijinoù.

Gwelloc'h eo breman ar yec'hed,  
rak gwall-gaset oun bet gant an aez-  
zennoù, pemzek deiz a zo. Na pebez  
buhez gant an aezennou-ze ! Ar boan  
a sko e pep lec'h eus ar c'horf ; n'eo  
ket hepken an diabarz, met ivez an  
diavaez eo a dizout.

Gant ar renoz hag al laer eo trec'het  
an droug e berr amzer, hag hirio  
emaoun ken seder ha biskoaz.

En hon diskuit e teuas prezidant  
republik ar Portugal d'hon gwelet  
gant an aotrou Poincaré hag eun ne-  
beut jeneraled.

Eus tiegezh « Kroaz » ne gredan ket  
e vije bet tizet den er 71vet, bennoz  
da Zoue !...

E talben ar Voljig, fank e-leiz.

Setu aman eun nebeut linennou di-  
gant hon lenner ker, Ewan Labeledec,  
diwar-benn ar Voljig e-lec'h m'eman :  
... Bet em eus « Kroaz ar Vre-  
toned » eus ar pevarek a hers, hag  
he lennet pean-da-benn gant plijadur.  
En eur c'hornad gwall-stard ez oun  
digouezet abous miz gouere. Daoust  
d'ar ganoliadeg da zerc'hel noz deiz,  
ar fank a zo gwaso'h evidomp  
c'hoaz !...

War vord eur ganol en em gavomp  
breman, Diwezatoch e skrivin hiroc'h  
d'eo'h !...

EWAN LAHELLEC.

## PA DINTO AR C'HLEIER

D'an itron Carrer.

Pell diouz tourni ar bed, diwar Roc'h Stumenven (1),  
Edon oc'h evezia, e dinaou ar zaven,  
Ouz poalladon an den el lannou Breiz-Izel  
Evit kreski e vad ha rei d'e vro skoaz-ill,  
Pa glevis, d'ar pardaez, e parroz Sant-Riwall,  
Eur c'hloc'hig o son glaz d'eur vaouez didamall,  
Marvet 'n eur oulioudi daou vugelig gevell,  
An navet ha dekvet a lakas da c'honel

Ar re a oa staget gant o labour neuze  
E-kreiz o douarou, war gostez ar mene,  
Rak-tal a ebanas, a laras eur bater  
'Vid ar vamm dremenet, merzerez d'ha dever...  
Ha, dre ma tostae an arched d'an iliz,  
E stoue d'an daoulin pep maeziad ha bourc'hiz,  
Deuet d'e ziambroug, hag, en hent, ar baotred  
A daoljou gwialen a harze o loened.

Ar c'hleier a dinto, eun devez, 'vidomp-ni,  
Pa zeuio d'hon gervel ivez an Ankou kri :  
Ra zantor eur gridien (2) en eur-ze, tre-war-dro,  
Ra bedo unanet holl Gristenien ar Vro !

IVONIG PICARD.

(1) E menez Braaspartz.  
(2) Daskran.

## Kur skouer vat ! Diskomp toniou ar Vro !

Hon mignon ker, Jozeb Gourlet a  
skrive pemzek deiz zo war « Groaz ar  
Vretoned » son ken kaer ar « Breizad  
divroet », a zo breman e Pont-  
n-Abad, hag hen dalc'het war e wele  
adarre. Hetai a reomp d'ezan parae  
buan ! A-raok, e oa e Kemper, en  
hospital, a-unan gant hon lenner mat,  
Ewan ar Bras, ha setu aman eur  
pennad eus eul lizer skrivet gant  
heman diwar-benn an doare ma  
kasent o amzer o-daou d'an abardaez.

Aotrou Rener,

... Plijadur a raio d'eo'h klevet  
penaos e tremenomp hon amzer en  
abardaez. Prenet em eus levr « Mouez  
meneziou Kerne », hag hon-daou  
asamblez e teskomp kana gwerziou  
ha soniou hon bro...

Sonj am eus, pa oan bihan, e  
klevet an dud o kana soniou ha  
gwerziou Breiz.

Na pegen kaer, na pegen laouen ne  
oa ket klevet an dud o kana er par-  
keier, diouz an abardaez-noz, o tis-  
trei d'ar gêr eus o labour, pe ar  
baotred zaoud o testum o loened !  
An holl a ouie neuze gwerziou ha  
soniou ar Vro. Breman ar voazamant-  
se a zo kollet, hag an dud n'int ket  
mui ken seder ; an dud yaouank a  
vez alies tenval o fenn, atao o hun-  
vreal er c'hériou...

Gourlet ha ma, e teskomp kana,  
evit diwezatoch lakaat ar re yaouank  
da gana ivez. Kement-se a zo unan  
eus ar gwella tu da lakaat an dud  
da garet hon Bro gant he holl  
gaider...

Alia a ran an holl dud yaouank a  
zo eveldeun en hospitalioù, e-lec'h ne  
deus netra da ober, prena soniou  
ha gwerziou hon Bro, evel levr  
« Mouez meneziou Kerne » a zo kaer  
kenan !...

Ya, eun ali mat eo, hag a vo heu-  
iet gant meur a hini !

Ar zizua dremenet, hon eus bet ar  
blijadur da welet aman unan eus hon  
gwella lennerien, L. Boulbin, klanv-  
diour, a zo d'ezan eur vouez eus ar  
brava. Pedet e vez alies da gana kanti-  
kou pa vez lidet gouelioù en iliz el lec'h  
m'eman. Evel Gourlet, hag ar Bras,  
n'ankoua ket toniou kaer hon Bro  
Breiz-Izel, hag e raio, hen ivez, al  
lans d'o c'hana, en hon touez, pa vo  
deut ar peoc'h !

BUHE AN DEN EVURUS CHARLEZ  
BLEIZ, dag a Vreiz, gant Dir-Na-Dor, 70  
pajen. Prit, gant ar frejou-kas : 8 gwe-  
nneq

PIPI GONTO, levr marvailhou nevez, gant  
Dir-Na-Dor, 184 pajen: Prit : 6 real ; 4  
gwe-nneq ouспен evit ar frejou-kas.

## NOTENNOU

IX

7 a Ebrer.

Devez hep nevezinti, D'an noz, e  
skignomp, evit ar reuziad-man, bon  
diwezan pakadennoù orjal dreinek.  
Me a chom c'hoaz er foz-difenn da  
c'hedal, evit dizamma diwar eun all  
a zo faez hag eun tammig aroueziet.  
Met kenkous e kavan ze. Biskoaz  
n'em eus gallet kousket mad na  
dinec'h a-walc'h el linen gentan.  
Nag a hini a gousk hag a zoro'h  
enni kenkous hag en o gwele !

Diouz ar heure, kousket fall gante,  
moarvad, ar Voched a zigas d'imp,  
heb droug d'imp, eun nebeut  
« obuzioù » mentet mat. Ne gol'ont  
netra. Hon gwiald 75, kouunar  
ennan, a gas o gourc'hemennoù d'e  
d'ar gêr. N'eus ket eveltan evit  
lemel ar boan-gof digante. War-  
lerc'h e yudadeg e teuont da vezan  
fur evel sent vihan, en-pad eur pen-  
nad amzer... Skiant-prena, ac'hanta,  
pôted !

Red eo ivez, evel outoc'h, rei da  
c'hoût d'e o deus d'ober gant kolo-  
niaded. Ar c'hornad-man, a-raok  
d'imp, a oa didrouzik a-walc'h,  
hervez. Breman, ken diés-all, ha war  
fallaet bemdez ! Piu a zo kiriek ?  
Ar Golon'sted ! Hon c'hanolion  
n'ehanont da zaoni warne, ha ni, el  
linennou, a renk o hegi noz-de.  
Aboue m'eman hon rejimant aman,  
eun daou viz a zo, eo droukaet  
pôted Gwilherm. Piz bihan o deus  
en eun tu bennak... Gallout a reont  
c'hoari o fenn, ni o dalc'ho hag a  
raio d'e paea, heb mar, an droug  
graet gante d'ar re a oa aman a-raok  
d'imp.

Mereri Lihu.

Ar c'hornad-man, brudet en amzer  
gentan ar brezel, a zo koustet ker  
d'imp. Aman emomp war zovar  
mereri vras Lihu, stok da Lihons.  
Lojeiz ar vereri a zo eo o toull, dis-  
mantret oll. Chom a ra c'hoaz eur  
c'hae, a zervij d'imp, ha pelloc'h  
moger dispennet eur c'hardi bras.  
Krenvaet eo bet ar voger-ze gant an  
enebournien ha leun eo c'hoaz a  
doullou mindraillerez, kuzet eus ar  
gwellan, hag a harzas ac'hanomp  
en-pad pell amzer da gemeret ar  
vereri. Ea-dro d'al lojeiz ez eus  
liorzou, en hiniennou ané bleuniou  
ha gwez frouez, en hiniennou all

gwez avalou draihet o skourrou  
gant an tennou. A damdost e trem-  
men hent Lihons da Vermandovil-  
lers. Met n'heller mui e anavezout,  
kement eo bet troet, distroet, dis-  
pennet, ha garidennet an douar  
war bep tu, a-dreuz hag a-hed.  
War ribl an hent, pe war ribl e-lec'h  
e oa an hent, eur Groaz houarn en-  
kreiz eur blokadig gwez. Komz a  
rin anezi. Ar gwez paour a zo  
dic'houget, tronc'het beteg an donar,  
draihet... Kroaz ar Zalver a chom  
bepred, skedusoc'h a ze, evel arouez  
an Tre'h, gwir frealz ha gwir gen-  
nez evidomp...

Dregomp, e-barz al liorzou, din-  
dan ar gwez-avalou, a-hed ar gerzier  
pe an dreilhouspern, e-leiz a vezion,  
bet kempennet brao, ha kempennet  
bepred, pa vez amzer, met goloet  
breman a yeod tener hag a vleuen-  
nou-hanv nevez-zigoret. Beziou ha  
c'henvroiz paour kouezet aman er  
c'hrogadou kentan, kouezet stank  
dreist-oll en-pad mizioù du 1914.  
Hervez, hon eus kollet, evit diframma  
ar vereri digant ar Brusianed, eun  
d'an nebeutan.

Gwir eo, int a gollas kemend-all pe  
vuio'h.

Mereri Lihu, hen laret em eus, a  
zo en parroz Lihons. Ar vourc'h-  
man ne chom netra azevi nemet  
dismantrou, berniou mein. He gwe-  
let a reomp a-boan ac'han a-dreuz  
al liorzou, rak eun tamm eus moger  
hec'h iliz a zav c'hoaz a-us d'ezu evel  
eur c'halvaden d'ruenez war-zu an  
Nevn.

Stok ouz Lihons eman ar c'hoad  
Ogée, ennan gwez bras Kalz ané a  
vez diskeret evid hon labouriou, met  
stank a-walc'h o k'ez, daoust da ze,  
evit miret ouz an enebournien da  
welet petra a dremen aman. Dre  
aman e teu bemnoz, da zigas bevans,  
pourveziou-brezel, houarn hag atre-  
jou all, ar c'hirri a welomp du-hont  
e Rozières. Evel al lec'hioù all, ar  
c'hoad a zo treuzet, didrenzet ha  
garidennet gant foziou douar ha  
d'ennet mad. D'ezan e plij d'imp  
dout, o vezan m'em'ean eun tammig  
hepen a-drev. Hevelsp kornad eo,  
met n'eo nag ar gentan nag an eil  
linenn, hag e kred d'imp neuze  
bezan dic'hloasoc'h ennan pa zigouez  
d'imp mont di d'ober eul labour-  
aner (« corvée ») bennak...

AR YEODET.

(Da heuilh).

## DIVUNADENNOU

Glas 'vel prad, gwenn 'vel erc'h,  
barvek 'vel bouc'h ?

Respont : Pour.

Fourdoulh, fourdoulh 'n eun toull du,  
Yec'hed d'an neb hen kondu !  
Mont a ra ha dont a ra,  
Yec'hed d'an neb hen laka !

Respont : Eur c'helora (eur zailh)  
o tisken er puns.

(Dastumet gant J. Gros Serjant)

## La Langue Bretonne en 40 Leçons

PAR F. VALLÉE  
(5<sup>e</sup> Edition)

3 fr. (F<sup>o</sup> 3.25). Imprimerie Saint-  
Guillaume, 27, Boulevard Charnier,  
Saint-Brieuc

TOT JANI HA POTR E VRAGOU BER,  
daou bez-c'hoari eus ar bravant gant Dir-  
Na-Dor, en eul levrig a 50 pajen. Prit,  
gant ar frejou-kas : 6 gwe-nneq.

Ar Rezer-Mercour : F. VALLÉE.

St Brieuc - Imprimerie St-Guillaume





PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 mal ar bloaz, evit Breiz ha Ero-C'hall.  
2 skoad evit ar biotou estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labouriou d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An sotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

Unan eus hon lennerien er Strollad a Enor (« Légion d'honneur »)

Eur pennad 'zo hon doa klevet penos unan eus hon lennerien ger. Erwan Callac a Dregrom, en doa bet, hag hen soudard simpl, ar groaz enor, evit eun taol eus ar c'haera, met ne ouieomp ket c'hoaz petra e oa. Setu hen disklêriet aman en « veneg a enor » hon eus bet ar blijadur da lenn hirie. Daoust d'ezan da veza kaer, an disklêriadur-ze a renk chom dindan ar wirionez, gant aon na glaskje an Alamaned hen talvezout d'hon zoudarded.

« Soudard e nerz-kalon dispar. En deus diskouezet, adalek derou ar brezel, eun herded dreist hag eur barfedet vras e-mesk ar risklou, dreist-oll er c'hrogadou en « Aisne », sbrél 1917. En diweza krogadou en deus a-nevez tenoet ar zellou outan o kemeret, hen e-unan penna, 5 enebour en em zifenna a-daoliou grenadennou en eur c'hariden. Gloazet ha bet lakaet eur c'hoaz war an daolen-enor. »

Hon gwella gourc'hemennou d'hon mignon, hag ivez d'e dad a zo merour en eur vereuri da c'hoar hon « Rener koz ».

Taolen ar Brezel

War talben ar Veljig ha Bro-C'hall.

War stêr « Aisne », da heul an arsailh a vras graet gant ar Fransizien, ar miz diweza, ouz linen an Alamaned, ar re-man o deus renket kila da vad, d'en em repui a-dreñv eur ganel a unan stêriou « Aisne » ha « Oise ». Kollou bras o deus bet er giladeg se, 11.000 prizoniet ha 120 kanol kemeret en eur ober tri devez hepken, eus an 23 d'ar 25 a here. Ar riblennad gounezet gant ar Fransizien a zav eus 6 da 7 kilometr a zounder, gant le-c'hiou a bouez : bourc'h ha koad Pinon, Pargny, Filain, hag all.

Er Veljig, daoust d'ar vro da veza breman dour ha tank-oll, ar Fransizien hag ar Zaouon a zalc'h da c'hanoit tachen. Ar re genta, treuzet ganto gwaziou ma save an dour enno beteg o diouksoaz, o deus kemeret, ar 26 a here, eur gêriadenn hanvet « Draai-bank », koad « Papegoed » ha meur a vereri krenvaet.

An 30 eus ar miz diweza, ar Zaouon a zo net war-raok adarre ha digouezet tost da « Paschendaë » war eun uhelen a bouez bras.

An Alamaned, diouz o zu, o deus argadet meur a wech, dreist-oll, e « Koad ar Zoul » (Bois le Chaume),

tost da Verdun, e-lec'h ez eus kalz a Vretoned. Ar re-man o deus o c'haset en-dro d'ar gêr bep taol ! Eor hag hon gwella mennoz d'hon c'henvroiz !

Er Rusi.

An Alamaned, dalc'het ganto an euzennou dirak pleg-mor Riga, ha pep surentez d'ezo breman er c'hornad-bro-ze, o deus kaset eun darn vras eus o arme eus talben ar Rusi war hini an Itali.

Da heul, setu didrousaet en eun taol linen Riga, e-keit ha ma krog adarre ar c'hanolioù bras en-dro da stêr Izonzo. War-ze an Itali eman trôet sellou an holl.

En Itali.

Ar 24 a here eo ec'h arsaillhas an Alamaned hag an Aotrichianed unanet linen an Itali. Dalc'het ganto kêr « Tolmino » war stêr Izonzo, e rejont d'an Italianed, n'oant ket evito, kila, o tilez uhelen « Bainziza », kêr « Gorizia » hag uhelen « Carso ».

Goude treize stêr Izonzo hag ar menezioù en hanterez d'ar stêr-ze, setu digouezet an enebourien er gompezen en em astenn er viz-reter da gêr vrudet « Venise ». Emmañ o kerzet eno war-7u « Udine », kêr vras enni eur groaz-hent a-bouez evit an henchou-houarn.

An Italianed, en eur gila, a stourm da vad. Ar re-Unanet a zired d'o zikour.

War vor hag en aer.

Ar 27 eus ar miz, ez eus bet eur c'hrogad war vor, e-kenver aod ar Veljig, etre 6 lestr enep-tarzer saoz pe gall ha tri lestr enep-tarzer alaman harpet gant seitek nijerez. An Alamaned o deus renket tec'het.

An 29 a here, d'an abardaëz-noz, e tigouezas adarre a-us da Vro-Zaos eur skouadrennad nijerezet alaman. Dizarbennet e voent raktal, heb galout mont tre er vro.

Ar Brezil o tont a-du gant ar re-Unanet.

Ar Brezil a zo eur vro vras eus Amerik ar C'hreisteiz hag a zo poblet gant Portugaliz. Bet tizet evel ar stadou all gant mestaolioù mor ar splujerien alaman, ha gounezet oupen gant skouer ar Portugal a zo deut er brezel, ar Brezil en deus, d'e dro, en em ziskêriet e stad a vrezel ouz an Alamagn, a-du gant ar re-Unanet.

Taoliou-kaer ar Vretoned

Ar c'helouennou a veneg, n'eus ket pell, eun taol eus ar c'haera graet

gant dragoned a Vreiz, da zifenn ouz eun arsailh taer an uhelen 304 dirak Verdun. An Alamaned o doa kaset war-raok eur batailhon a bez eus ar strolladou-ze dibabet o deus turmet a-ratoz evit an arsailh, hag a hanver « stoss-truppen ». An dragoned n'oa nemet 40 anezou. Ne vern ket ! Derc'hel a rejont start. Pa voe lâd d'ar c'hrogad, ne vane dioute nemet an hanter. Distrujet o doa avat diou gompagnunez eus an « stoss-truppen » ha graet d'ar re-all tec'het. Enor d'ar Vretoned !

Diweza keleler

En Itali, an Alamaned a oa o mennad lakaet ar c'belc'h war an Italianed en em gave c'hoaz en tu-hont d'an Izonzo. N'o deus ket gallet hen ober ; arme an Itali, en em dennet da vad adre o c'hrabanou, a zo aet d'en em repui a-dreñv eur stêr all, an Tagliamento. Eman an armead a skouzell kaset d'o sikour gant ar re-Unanet o paouez digouezout ganta. Daoust d'ezo da veza kollet kêr « Udine » hag ar gompezen tro-dro, n'eman ket re fall stad an Italianed, gant aes e vazo d'ezo en em harpa war ar stêriou a zisken en Itali eus ar menez Alpou, an Tagliamento, ar Piava hag an « Adige ».

E noz Kala gouarn, eun tregont nijerez alaman bennak, meur a skouadrennad anezo, o deus klasket adarre mont a-us da Londrez. Dizarbennet int bet, nemet teir a dizas tremen ha leuskel bombezennoù.

MERC'HED KEIZ

Pe ve an amzer tomm pe yen, Dra ar galon 'talc'het an den... Kent rei da vad ho karantez, 'N em virit diouz peb dallentez !

Adalek penn kenta ar bed Gwaz ha maouez 'deus 'n em garet ; Evit furmi Eva, hor mamm, Kemeret 'voe kosten Adam.

Rak-se' weler an dud yaouank Or'h en em garet stank-ha-stank ; An neb zeb' bara graet gant bleud 'N deus c'hoant dimei, kalz pe nebeud.

Ne weler ket war an douar Koz votez na gavje he far ; Forz peger fall e ve an den, Kaout 'ray atao eun hanterenn.

Met gant ar brezel-man, siouaz ! 'Zo bet lazet n'oun ket ped gwaz. Mamm, gwreg ha c'hoar géz glac'bare, Ho mab, pried, breur 'deus bevet !

Merc'hed e kaon, gwisket e du, A ouel dourek hag a bep tu ; Holl 'deus kollet mignon pe gar !... Glac'har, doan 'zo war an douar.

O c'houi, merc'hed, bezit dinec'h ! Mar dint kouezet, d'imp 'vo an Trac'h ; Ar Gwirioù sakr ha broadel A jomo atao divarvel !

Maro ar c'horf ne deo netra ! Mesk ar gwalleurioù ar gwasa Eun difennour ho peus en Nenv ; Kerzit dinec'h ha bezit krenv.

Mammou paian an Amzer gouz D'o mibien a lavare groz : « O tifenn ho pro c'henidik, R'ho kwelin trec'h pe varo-mik ! »

An holl merc'hed a c'hell lenva Eval bugale da Eva ; Met holl lignez ar verzerien 'Vezo dishual da viken.

Met c'hoaz goude eur seurt rummad Ped a zo gleb o daoulagad ? E-kuz hepken 'ouselont e-leiz, Merc'hedigou ha plac'hed keiz.

O c'halonou 'zo tener Er zonz eus Fanch, Yann, Paol pe Ber ; Met, 'vel na oant ket eureujet, Gouela 'n'hellont dirag ar bed.

Chom 'reont breman heb eur skouzell, 'Vel eun evnig torr e askel, Rak daou-ha-daou evit kerzet Krouet omp-ni, tud hag evned.

Ha rankout 'raint gant ar brezel Kemer roudou saintez Katell ; Morse 'welint diouz ar mintin Bugale goant o vouse'hoarzin !

Koulskoude, gant kalz karantez, Savet 'dije paotr ha paotrez, 'N eur c'houlen hepken gant Doue Ar c'hras da gaout kalz bugale.

Na reuzeudik ez eo o stad ! Evito pebez kalonad ! Beva 'rankint o-unan-tre Hervez gwir volentez Doue.

Kerzet a raint c'hoaz dre an hent, Skanv ha didrouz 'vel diagent, Met war o zal ne weloc'h mui Merk al levezenn, an dudi.

E-kenver breur, c'hoar dimezet E vevint gant pasianted ; Eun distin-goz 'n eun tiegezh A zo eur wir binvidigez !

Aotrou Doue, Krouer ar bed, Gwelit an holl 'zo glac'bare ; Rsit d'ezo peoc'h war an douar, En Nenv eur gurunen dispar.

YANN MARI NORMAND.

10 a viz Here 1917.







**PRIZ AN CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**  
Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, a zigemer ané

**Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

Ar Borz « Tredaner »... 20 real.  
Trogarez a greiz kalon d'hon c'hevreur ker en hano « Kroaz » hag hon zoudarded !

**Diwar-benn al levr-oferon brezonek**

O respont an noten a oa bet war « Kroaz ar Vretoned » diwar-benn eul levr-oferon brezonek, da c'houlenn penos en em gemeret da gaout unan. hon leuner ker, an aotrou Ollivier, medecin en arme, a skriv d'imp eul lizer mat, — trugarez d'ezan ! — Klaskot en deus, emezan, kaout e-unan levr-oferon brezonek ha latin an aotrou abad Gall, person Taole. Nemet n'emman ket e gwarz ken. Diviet eo, hag ar mouler anezan, an aotrou Salaun a Gemper, ne oar ket peur e c'hellio e adroula en abeg d'ar brezel.

Gwaz a ze evid hon zoudarded a Vreiz-Izel, a ve ken bras plijadur ganto kaout eul levr-oferon e yez ar vro. O lenn anezan e vijent en om zantet tost d'ar gêr ha d'o zud, a vihana a galon, ma n'emaint ket a gorf. Hag, ouzpenn, kalz anezo a wel seurt leoriou e yez o bro gant Flamanked, Anamiz, Malgached, savet a-ratoz-kaer evito gant Fransizien. Perak, ets, ne vije ket graet ker brao-all da Vreiziz ?

Da zic'haoui eun tammig hon c'hevrennoù, « Kroaz ar Vretoned » a voulo hiviziken, gwech ha gwech all, pedennou brava hag anavezeta an Iliz, trôet e brezoneg. Ar zizun-man e roomp an « De profundis », trôet evit ar wech kenta diouz al latin linen-ha linen, ha, kement hag ez eus gallet ober, ger evit ger.

**Taolen ar Brezel**

**War linen ar Veljig ha Bro C'hall.**

Ar 6 eus ar miz, da 6 eur diour ar beure, ar Zaouzon o deus kaset d'an arseilh ouz Paschendaele o soudarded vrudet eus ar C'honada hag, a-benn kreisteiz, e oa dalc'het al lec'h-se ganto.

Kribenn Paschendaele a zo en spi, en he dalc'h koulz lavaret, eur gompezen vras, hag ivez Becelaere ha Gheluvelt, lec'hioù krenv an Alamanned er reter oa « Ypres ». Eur bras a c'houid eo evit ar Zaouzon ar gemeredigez anezi.  
An Alamanned, evel e oa bet lva-

ret ar zizun-ziveza, a oa bet trec'het, er « Malmaison » ar 23 a here. Da heul, diésaet d'ezo en em zifenn war « Hent an Itronzed », setu-int o tiskregi diouz al lec'hioù a zalc'het c'hoaz war an hent brudet-se. En nozvez, etre ar c'henta hag an eil eus ar miz, o deus kilet o tilezel an holl dachen dirag ar wadour « Ailette », eur ribennad vat a zouar eus 20 kilomeur hed war eur c'hilometr led pe dost.

Argadennoù a zo bet adarre ouz « Koad ar Zoul », kichen Verdun. Doue da viro hon c'hevrennoù o stourm eno !

**En Itali.**

Bepred eman trôet ar zellou war-zu an Itali.

An Italianed, taget a bep tu gant an Aotrichianed hag an Alamanned unanet, o doa ranket kila a-drev an Tagliamento. E pean ar stêr-ze, er menezioù, ez eus eur c'hrenvlec'h haout Gemona. An Alamanned, dre drei dre an hanternoz, o deus gallet dere'hel Gemona, ha, da heul, diskeno e traouien an Tagliamento ha treiza ar stêr-ze. Nemet pevar devez en deus kemeret d'ezo ober o zaol, amzer d'an Italianed d'en em zibad ha da welet armeour ar re-Unanet o tigouezout d'o zikour. Fizians a zo e vo trôet pean d'ar vaz, diouz an tu-ze, heb dale pell.

**Er Rusi.**

Nebet a gemm. An Alamanned o deus en em grenvaet en enezennou dirag Riga, e sell, a greder da vont ac'hane da Reval ha da borzhoù all ar Rusianed, pa vo an amzer a-du. Ouspenn-ze, brud a zo e vijent o pourchas eun dra bennak euz an « Ukren », pe Rusi ar C'hreisteiz war ar mor Du.

**Ar Zaouzon en Douar-Zantel.**

Ar Zaouzon a c'houid tachen en Douar-Zantel. An 31 a here, ar jeneral Allenby a gemeras digant an Turked unan eus o lec'hioù krenv, Bir-Seba, gant 1.800 a britamerien ha 9 kanol.

Da heul, setu koezet, ar 7 eus ar miz-man, kêr « Gaza » etre daouarn ar Zaouzon : digor eo diwar-vreman an hent war-zu Jeruzalem.

Eun nebut Fransizien a zo en arme saoz, hag en o zouez Bretoned. Eman unan anez, ar c'haporal Serjant, o paouez skriva d'imp evit goulenn tra vo kaset d'ero « Kroaz ar Vretoned ». Setu hon c'hevrennoù oc'h ober o « Beaj Jeruzalem » evel « Kloareg ar Wern » pa skrivas e levr ken

brudet, nemet n'eo ket en hevelep doare avat !

E Bro-Vezopotami, en Azi-Vihana, ar Zaouzon a zo bet trec'h ivez d'an Turked en eur c'hrogad.

**War vor.**

Eun emgann-war-vor a zo bet, an 3 eus ar miz, e striz-mor Cattegut, a ro digor er mor Baltik, etre listri enep-tarzerien a Vro-Zaoz hag eul lestr-reder a skoazell armet eus an Alamagn, ar « Maria », 3.000 tonnell. Ar « Maria » a zo bet goueledet a-unan gant 10 lestr-geder armet a oa ganti.

War a lavar, an Alamanned o dije graet eun ijinaden nevez, — n'oa ket a-walc'h ganto, moarvat, eus o splujerien : — eul lestr heb den war-nan, lakaet en dro eus a bell gant an tredan, en hevelep doare hag an « telegraf diorjal ». Nemet tro wenn en deus graet o lestr-tredan-diorjal ar wech-man. Goueledet eo bet, ar 4 eus ar miz, gant ar Zaouzon dirag aouchou ar Veljig.

**Paour kêz tud !**

**Gouel an Holl-Zent !**

Eun taol-lagad war an dud na gredont ket, pe a fell d'ê chom amgredik.

Er vro man ez oun koezet mad hag evit gwelet, hag evit gouzout pebez islonk a lakont etre an Anaon ha ni, pegea goull e lezont ar galon, pegon ankeniet ar spered. Gwell eo tremen heb-goull eget dont war an douar da c'houzany poan, mar n'eus, evel ma lavar an diskianted-man, neira en tu-all.

Da betra neuze, speredoù diboell, mont d'ar berejoù da skuilh bleu-nioù, da staga kurunnennou, d'ober prezegennoù ?

Unan a zaou : pe c'houi a gred pe ne gredet ket. Mar kredet, anvavit ho feiz, diskouezet ho kreden ha heuilhit anezi. Mar na gredet ket, na likit ket ho treid er berejoù. Ar vered, evid an amgredig, a zo eul lec'h euzus, spouronius. Pa guita anezi, e kren e galon o sonjal hag a glac'har, a zaouzon, a geuz, a draou tremenet, a frailhentez a zo kuzet enni ! Sonjal e teuo eun devez eno ivez, en eun toull doun, tenval, din-dan eur maen pouenner... hag ebu !

Hen laret a ran, an neb na gred ket d'hañ ket tostaat ouz eur vered na gwelet anezi hep spoura.

Petra eo neuze ar c'houzoù goull laret d'an noz, gouel an Holl-Zent, gant ar « pennou bras » ha dizoue, war beziou ar Re-Varo, en darnvuia eus hon c'herioù ?

— Komzou a drugarez, a zoujana, a anaoudegez-vad, a envor hag a wir garantez, a vo laret d'in.

A dra zur. N'hellont ket bezan komzou all. Met, c'hoaz eur wech, mar na greder ket, da betra o laret, pa na reont nemet digas en-dro envorioù loskue, digeri eur goull kizidik, seul kizidikoc'h ma n'hall seurt komzou nag e yac'haat na digas d'e grizder an disteran frealz ?

Ha, mar laret komzou evel-se, ma teuer d'ar vered da ouel an Holl-Zent abalamour ma kreder, perak neuze dilezel pedennou ha gwir frealzoù an Iliz, pegwir, kaer sz eus sellaz ha klask, n'eus nemete a gement a rofe d'in alc'houez hon glac'har ha distan hon foaniou ?

N'eus ket daou stumm da zibonia ar Re-Varo : o c'harout ha pedi evite, pe o dilezel ha rei peoc'h d'ê !

An dud a gomzit ané, pôted, a zo maro, maro mad ha maro evit biken, emezoc'h...

Nag o defe graet aman ar brasan madelezoù, ar c'haeran oberou, renet ar gwellan kargou, bet ar gwellan speredoù... maro int ha maro evit biken, war o meno.

O ijin a laret d'imp, a zervijo, da vihanan d'ar re-all, d'ar re a zeuio war o lerc'h, hag e tleomp dere'hel sonj a gement-se...

— Ac'hanta, n'eo ket a-walc'h !

Da betra e talvezo, hen goulen a ran, holl ijin ha labourioù dispar an dud tremenet, holl ijin ha labourioù dispar an dud a vreman, holl ijin ha labourioù dispar an dud da zont, mar renkomp a bep eil, a rumm da rumm, a remzi da remzi mont holl d'eun toull doun ha tenval, mervel evit mad, mervel evit biken ?

Ne welan ket neuze e vefemp kalz dishenvel diouz al loened. Gwelloc'h hon devo bevet... Ya ! Met ar gwelloc'h beva-e ivez a ro d'imp muioc'h a drabuilh, a drabaz, a draith spered ha korf, a zroug, a wariz, a gasoni eget d'al loened. Hag, en holl d'an holl, gwisket gant ar grouadelezh, bevet gant frouezioù ar bed a glaskont en pep frankiz, al loened a zo neuze e hoaz pell evurucoc'h evidomp !

Mar n'eus, evel ma larit, buhez ebet en tu-all, perak neuze goulen digant ar ynouankiz, digant ar bobl, digant ar vro, ar gwasan sakrifisou, zoken hini ar gwad ?

Hon tremenaden en draouien-man n'eo ket neuze re hir, ha gallout a reomp hec'h espern hag ivez hec'h astenn hir an ma vo gallet...

Hep kontan penos, mar deo gwir ho komzou, ne welan ket perak e vefe prezaget d'imp an onestiz, na kalennet





# KROAZ ar VRETONED

## PRIZ AR CHOUMANANCHOU

10 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

## RENERIEN

### E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

## EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIARD, 27, ball Charner, a zigemer ané

## Alouennoù da « Kroaz ar Vretoned » d'he c'has da zoudarded ar Vro

Gwelthas..... 20 real  
An notrou Larher, eus  
Rosgo..... 1 skoad  
Emile Larher, marichal  
al Lojeiz..... 8 real  
Eur medecin en arme  
hag eur c'houmanant. 4 real  
Trugarez d'hon mignoned!

## Hon gwella gourc'hemennoù d'hon c'henlabourer ker Yann M. Normand!

Laouen bras e voe ganimp, hag e vo, maorvat, gant holl lennerien « Kroaz ar Vretoned », klevet en deus bet hon c'henskrivagner ker, Yann Mari Normand ar groaz a vrezel gant ar meneg kaer-man : « E-pad eur vombezadeg gant « obuzioù » eus ar re bounera, a zo aet er-maez eus e gledour, evit kas sikour da dud c'hloazet hag ober dougen anezo d'ar c'hlanvdi ».

Tri Breizad all a oa gant hon mignon, bet peb a groaz int-i ivez : N. Lavagen a Lœnaedern, Paol ar C'horr a Blougoulin ha F. Vallières a Vro-Wened.

Hon gwella gourc'hemennoù hag hon menoz kalonek d'bon mignon ker ha d'bon c'henvroiz a oa gantan!

## Taolen ar Brezel

### War talbennou ar Veljig ha Bro-C'hall.

Nebeut a gemm! Desadorn, 10 eus ar miz, ar Zaizon o deus arsailhet adarre, a-hed eun talben a zrou gilometr, en daou du d'eun hent en hant-ruoz da « Paschendale », a oa bet kemeret ganto ar zizun all. Gouezet o deus eun dachennad a 500 metr pe dost war-zu koad « Houlthost », a zo dalc'het darn anezan, evel ouzoc'h, gant hon c'henvroiz.

Diouz tu ar Fransizien, krogadou adarre e « Koad ar Zoul » hag en Alzas e-lec'h e oa sioul an traou eur penad a zo.

### En Itali.

An Italianed a zo en em ziazereet da vad a-hed stêr « Piava », en a-dreñv d'an Tagliamento. Eman an Alamaned o klask lakaat kelc'h warno adarre, diouz tu an hanternoz ma tifoup ac'hane o armeou eus ar menezioù dre an odeou hag an tra-

ouiennoù, hag er c'hreisteiz, diouz tu ar mor, e-lec'h e karfe Boroevia, jeneral an Aotrichianed, treiza ar « Piava ».

Betek-hen an Italianed a zalc'h penn da vad, dreist-oll war eun uhelen emzao, hanvet uhelen Asiago.

### Er Rusi.

Mesk ha dispac'h bepred! An dispac'herien, kouezet Petrograd en o dalc'h, o deus graet da Gerensky tec'het evit e vuhez. Gwell a ze d'ezan, en deus kavet skoazell digant eun darn eus an arme, en o fenn ar jeneraled Kaledin ha Korniloff. Krogadou a zo bet e Petrograd hag e Moscou. N'ouzer ket da vad c'hoaz penaos eman ar stad gant an daou du. Gant ma teuo Kerensky a-benn da zistrei da Petrograd ha da beoc'hia ha da urzia e vro! Mall, ha tremen mall eo!

### Ar re-Unanet en Douar-Santel.

Derc'hel a ra ar jeneral saoz Allenby da vont war-raok en Douar-Santel, e penn e rann-arme, enni, ouspenn Saozon, Fransizien ha Bretoned — Hon gwella menoz d'hon lenner, ar c'haporal Serjant, a zo en o zouez!

Eus an 8<sup>d</sup> an 11 a viz du 5.894 a Durked a zo bet paket da brizonerien; 1100 a zo kouezet c'hoaz, nevez zo, etre daouarn ar Zaizon. War-hed eiz leo pe war-dro n'emaint ken diouz Jeruzalem.

## Eun droig er Vro

### D'ar Zoudard koz.

Distro pelloc'h diouz ar stourmad, Na kaer 'kavan d'an daoulagad Ar maeziou drant, alaouret-oll Disdan bannou ar c'huz-heol!

Prestik goude, war hent ar gêr E kerzen gant Paolig ha Per; E-barz an trêr storloket-oll, Ne zonjen mui 'barz ar c'hanol.

Tremen a ris dre gêrioù bras : Nancy, Châlons ha ped-all c'hoaz! En-dro da Bariz 'ris er zell Ouz Montmartr hag an tour Eiffel.

Ha, goude-ze, 'vel morgousket, An holl gêrioù m eus tremenet; Met, pa welis pont Montroulez, Ma Doue! nag a levenez!

Ha setu me war hent ar gêr, Ma c'halon laouen ha seder; Gwellet a ran 'barz en dremwel Ar vourc'hi vihan an tour uhel.

A forz da vale heb ehan Oun erruet e bro Gwikan;

Eur barrez vat, a lavarer, Daoust da veza p'ill diouz pep kêr.

Ha kemeromp an hent bihan Hed ar prajer hag-al laun; Mesk an solec'h, ar peupli, Em eus kavet pelloc'h ma zi.

An holl gerent, amezaien, Ar mevel hag ar mitizien A lar, da heul ar c'heleier : « Erruet ar paotr Yann er gêr. »

Gant karantez da bep hini Eur pok 'roan 'vel testeni; Ar c'halonou a lamm e leiz O tigemer soudarded Breiz.

Hag a chenchamant 'zo er vro, Er vourc'h, er maeziou tro-war dro! — Tri bloavez 'zo, a lavaroc'h, Ar gwez uhel 'oa bihanoc'h.

Ha si ivez, paotred yaouank, Ne welomp neuze kleuz na stank, O kerzet war roudou ar c'had, O klevet ar chas o chilpat!

Ar yaouankiz sur, a zo krenv, Morse ne fell d'ei chom a-dreñv; Gant an amzer eun tammig poell A zo deut d'imp gant ar brezel.

'Vit eun eured, em eus-sonj mat Gant ma douzig treuzen ar c'load; O klevet trouz gant an deliou, Starda 'reomp hon daouarnigou.

Setu deut, siouaz! ar brezel : Du eman an oabl en dremwel, Met e kalon sur gwir-Vreizad Ar Spi a zo ken beo dalc'h-mat.

Tremenet 'm eus dre veur a vro Evel eur paour kêz « boudeo » ; O touara lec'h m'oun ganet, Ma c'halonig 'vez entanet

Er zonz deus bro goant ma c'havel, Hor bro ken kaer a Vreiz-Izel, E lavaran a-greiz kalon : Brevet Treger, Kerne, Leon!

'Vel hor c'herreg, hor menezioù, Er c'hoajou don hag hon aochou, E neb lec'h ne weler o far Nan, a dra zur, war an douar!

Tourig koant ma iliz-parre, Ouz du welet 'm eus levenez; Son ar c'bleier d'an Anjelus A zo eur zon ken dudius.

Er vered koz, 'tousez an ivin, Ez oun kouezet war ma daoulin; Eur beden c'houek 'laran e koun Ma c'herent keiz aet d'anaoun.

War an talben ar Maro kri 'N deus diskaret ma c'hendirvi; 'Pad ar miz-man dreist-oll, Breiz, Laromp start hon « De Profundis ».

Ha, goude chom 'pad dek devez Da ren evel-se ma buhez,

War an talben oun distroet... — Bolontez Doue bezet graet! — YANN MARI NORMAND.

## AN DIGREIZENNI

N'eus ket pell, an aotrou a Gergezeg a zisplege e Gwengamp mennadou reiz hag uhel diwar-benn Breiz : « Eun dra dleet eo, emezan, rei da Vreiz muioch a wir hag a frankiz eget gwechall, e sell eus hec'h amzer-da-zont, dre anaoudegez ouz taolioù-kaer dispar he zoudarded ha pa na ve ken! »

War ze ez eus savet kroaz e-touez enebourien Breiz, beteg e Pariz : El « Libre Parole » an aotrou Paul Verguet a zizarbenn garo a-walc'h an aotrou a Gergezeg.

Ha, koulskoude, evel ma lavar « Le Breton de Paris », n'eo ket hepken e Breiz, er Frans a-bez eo e c'houlenner muioch a frankiz e sell eus an amzer-da-zont.

E broioù an Hanternoz, da barea ar goulieu ha da adzevel an dismantrou graet dre-oll gant ar brezel, e ranke an dud gortoz grad-vat ministred Pariz. Ha netra ne zeue! Nemet prezegennoù goull, promesaou lask, tud e karg nevez, paperennoù a vil-vern!!

— « A-walc'h gant ar c'hoarize! » a skrivas neuze an aotrou J. Lebas, maer Roubaix d'ar « Petit Journal ». « Eman ar gouarnamant o tenna war e gein droukrans an Hanternoz a-bez. Mall, ha tremen mall eo ec'h intente ar vinistred n'int ket evit gourc'hemen e pep tra, evit ren kement labour a vez digoret, evit tizout kement korn-bro a zo er Frans. Ra lezent gant ar broioù o emenez evit adzevel an dismantrou! Anez an digreizenni, ne vo biken paret da vad goulieu ar brezel!! »

E-keit-se, eur skrivagner brudet, an aotrou Henri Clouard, a ziskoueze war an « Opinion » al labour frouezus kenna graet, nevez-zo, gant ar c'hêrioù bras — « A-raok ar brezel, emezan, red d'ezo gortoz aotre gouarnamant Pariz, ne rae ar c'hêrioù bras taol-labour vat ebet, kouls lavaret. Da skouer, Marseilh, ezomm d'ez i zigeri eul lenn nevez en he forz-mor, a renkas gortoz an aotreadur, a-benn staga gant al labour-ze, . ugent vloaz, ha hi o kinig kemer diwar he c'houst an holl frejou! » — Ha Brest, eta, evit he forz-mor treuzatlantik!!

Breman avat, eme an aotrou Clouard, harpet war vaerion akuit evel an aotrou Herriot e Lyon ha war e guzidiou-kenwerz e gouizieik, an holl ge-journez, hag a zo bet keit-all huaret, ampalvarzet, chadennet gant Paris, a ya war-raok souezus. Lyon, Grenobl, Karkasson, Rouan, Naoned a vo anezo, heb dale, keriou-penn e gwirionez.

D'imp-ni, Breiziz, da heulia ar skouerieu-mat-se ! En em vodomp kenetrezomp, er-maez eus ar politikez, e sell hepken eus hon Bro garet, da viret d'ezha da lakat da dalvout en amzer-da-zont bec'h holl denzoria : Yez ha Spered keltiek, ar brava hag an uhela s zo er bed, istor, gziou mat, ijinou-kaer, labour-touar ha magerezh-chatal, kenwerz ha micherioù.

Gwella d'ober evit-se, evel ez eus ket lavaret aman allies, eo dont da ezel e Unvaniezh Arvor. (Kas an hanoioù da Andreo Mellac, Sekretour-tenzorier, 54, rue de la Comédie, an Oriant).

Heb dale, war a glevomp, hon c'hevreur ker Yann Choleau, gouizieka Breizad a zo war traou al labour hag ar micherioù, a zigaso d'an « Union Agricole » eur pennadskrid a bouez war ar poent-se.

## Eur skouer-vat !

Kalz a baotred a Vro Anam a zo breman er Frans, deut darn anezo da glanydiourien en arme, darn all da vicherourien e labouradegoù-breiz. E Breiz ez eus anezo a-vern hag aman ivez, e Sant-Brieg e weler kalz diouto dre ruioù ker.

Ar peb desketa anezo a garte ober o mad eus m'eu em gavont er Frans evit tremen eksamin ar « baccalauréat ».

Nemet n'houlont ket eus eun eksamin, na yje ket a lec'h ennan d'eo yez, yez an Anam, an « anameg ».

Hag eman ar gouarnamant, dre anoudegez ouz ar vad a reont, o paouez rei d'ezo o mennad. An aotrou Ernault, hon c'hevroad brudet, eo a zo bet karget da ober tremen war an anameg paotred an Anam en eksamin ar « baccalauréat ».

Hun dr. reiz n'eo ken !

Nemet, o veza ma tie ar Frans d'ar Vretoned eun tammig muioù c'hoaz a anaoudegez hag a c'hrad vat ege, da baotred velen an Anam, daoust ha na yje ket ken reiz-all ober eul lec'h ivez d'ar brezoneg er « baccalauréat » ?

Hag an aotrou Ernault gouizieka den a zo er bed all war ar brezoneg, a ve dereat-mat outan, emichans, ar garg da ober tremen war ar brezoneg paotred yaouank Breiz-Izel !

## Ar Chavel

E-touez ar zeiz hag ar zatin  
Ar bugegig a zo ganet ;  
Hag eman kousket er minin,  
Aelig eus an Nenv diskennet.

Hag an holl tro-war-dro da zont  
D'eu em stoui war e gaval,  
Evit gw-let gant bras eston  
Doue ar c'hrouadur gouezet.

Peb-unan, evit az kwelet,  
Zizolo an danteleziou  
E-touez pere ez ont hunet...  
Goustadik, gant kalz eveziou.

Evit gwelet da izili,  
Da zournan ha da dreid bihan,  
Da ziouchod evel bokidi,  
Da zremmig ken siou ha diboan.

O ya! hun eta dibreder,  
O va mabig nevez-deuet !

Lakat a rez an holl seder...  
Va Doue, ra viot benniget !

Jh GOUKLET.

## BREZONEG GWENED

### Karamb er brehoneg !

(Eil pennad)

Più a zo abeg d'en dihouegha sa ken m'haer emesk er Vreiziz ar er brehoneg ?

Lios mat an tad hag er vam, rak ma ne gemennant ket d'ou bugale konz brehoneg reiz ha digreiz ; rak ma konzont dohte en ur feñon diben, el er vam-hout em bod klebet e koste Baud e buchat ar he-mab : « Jean mon petit paotr, veez vite manger ta chul-lad ! »

Skoarn ur broadur e zou finer ; klebet e hra konzou e vam, konz e hrei el ma konz e vam.

Più a zou hoah abeg d'en dihouegha sa ? Er skolieu, rak ma ne vé ket disket enné d'er vugalé gobér en difon-hétre er brehoneg hag er galleg. Ha je houio rah er vistr-skol a Vreiz er brehoneg, né vou ket mui klebet galleg kén dibalamort, na brehoneg kén divalaù.

V. ER VELIN.

(D. I. I.).

### Labouromp evit Breiz !

Setu aman eul lizer hon eus bet digant unan eus hon lennerien ger. Trugarez d'ezan ! Ha, dreist-all, greomp holl diouz e ali, hag em vodomp eus hon gwella da labourat evit ar Vro !

Eun dra gaer a rit c'hozi holl hag a zifenn ken kalonek gwirion hon Gouenn ! Boule-het mat eo al labour ganeoc'h, met, ziouaz ! ne ket kaset e hoaz an ero da benn. Red e voutourm gant nerz a-barz gwelet hon bugale o teski er skolioù hon brezoneg karet.

A-wechou e teuan da fall-galoni o welet pennoz e tisprizer hon yez, an tenzor sakr-ze a-ziwar-lerc'h hon Tadou ha deuet beteg-ennomp a rumm da rumm. Met ar zonzou fall a dec'h buan diwar ma spered pa deu envor d'in eus komzou kaer ar Barz :

Tra vo kerreg war vord ar mor,  
Kano ar Barz war dreuz e zoi.  
Bepred e yez koz an Arvor.

Nan, ar brezoneg ne varvo ket ! Allas ! e wella difennourien a zo kouezet du-hout dirag an enebour milliget, evit harpa frankiz ar poblon ma-c'het. Pebez koll evit Breiz !

Met, goude an drailh spontus-man, e savo adarre Breiziz yaouank da gemeret o lec'h. Fiziens am eus. Gwasa 'zo, ar peb brasa eus ar bobl a zo dian-naoudek. Ne or bat eman ar Vroa-delerien o labourat eviti. Red eo skigna dre bevar e horn ar Vro skrido evit digeri spered an holl. Red eo ivez lavaret da bep den emomp war var da goll hon broadelez ma na dao lomp ket muioù a evez ha ma na ene bomp ket gant nerz ouz ar gziou ha kustumou divroad.

AR C'HERNEVAD.

### Ar « Veni, Sancte Spiritus » trôet e brezoneg

Dek vloaz 'zo, an 8 a vae 1907, an Tad santel ar Pab, evit lakaat ar Gristenien da b-di ar Spered-Santel, en doa staget induljansou. — 300 deiz, a heller gounit d'an Anaon — ouz ar beden *Veni Sancte Spiritus* lavaret e n'eus forz pe yez.

Setu aman ar beden gaer-ze trôet e brezoneg, evel an *De Profundis* en deiz-all, linen ha linen.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉ.

— St-Brieuc, Imprimerie St-Guillevre

Deus, Spered-Glan, ha diskenn don  
E kalonou da dud wirion ;  
Tan da Garantez ennomp-ni  
Deus, Spered-Glan, da enaoui ;  
Deus, Spered-Glan, Krouer dispar,  
Da nevezi dremm an douar !

### Respont d'an divavadou ziweza

Dek ha pevarzek eo niver ar c'hlo-jiri en eil gompagnunez hag en eban.

Unan eus hon lennerien ger, ar Guelaff, a skriv d'imp eus an talben — trugarez d'ezan ! — penaos e terefe a-walc'h an divavadou « unan o toul-la » ouz ar zoudarded el linen ganta : unan o toul-la eo ar mengleuzier gant e labour ; daou o sellet toul-la eo an daou c'heber ; daou o selaou toul-la eo ar Voched en tu-hont d'al linen, o selaou en o zoull-ged ; unan o skei war an toull eo ar c'hanol, o klask skei boullji gant ar mengleuzier, e-keit ha m'eman o labourat.

Hag o konz eus an treou-ze, ken reiz, ken gwirion, ken anavezet hirie zoken gant ar re a zo kiriek d'ê, e tremen gant an amzer. Souezet omp ez eo deut ken bosn, hag ez eus stad ennomp. Sonjal e kemeromp plijador en eun toull ken tail, an ten-nou o tremen hep paouez en-dro d'imp !

20 a ebrél.

Fall kollet an amzer ! Glao adarre, hag hon... rouantelez leun a fank. Hevel omp holl ouz moc'h bet o tuilhal en eur poullad dou-pri.

Diouz ar heure urz da lezei al linen gantan gant diou gevren all, ha ni a-dreuz da labourat en-kreiz eul louston evel-se. Hag e kavomp kerse, kerse da vat. Met n'eus ket da c'hromolat, red eo senti ha meska fank ha bouilhen. A zo mad c'hoaz ! eman tur ar Voched... ya, pa n'hellont ket ober a-hend-all. Ar glao hag ar vorea a zall ané evel ma tallont ac'hanomp.

21 a ebrél (Gwener ar Groaz).

Noz-deiz war al labour. Gwener ar Groaz a zo. Devez santel. Gant muioù h'ha galon c'hoaz, e kinnigomp hon loan d'hon Zalver. Heu, ar Mustr, an Oan digailhar, a c'houzanvas ne oar de i pegeiment gwaz, ha kement-se evidomp. Kemeromp skouer dioutan, ha diskomp digantan ivez gouzanv hep klemm dre anaoudegez-vad ha dre garantez virvidik outan.

Hoá mestrou, a drugerezh Doue, a zozj eu devez benniget. N'eus ket a gig e vid ar bloaz, ha warlene, hervez, e oa er rejimant-izan. Mezus ha huder !

Diou nijerez alaman a dremen a-us d'imp, bet, a glevomp goude, o skei paperennoù war « Rozieres », e-lec'h ma tistroimp da ziskuiza, evit laret d'an dud e tevio diskul ar Voched da lida goueliou-Diskul d'ar gërig...

Gortozomp !... Na c'hoarizomp ket re... Gallout a reont laret gwir.

22 a ebrél.

Labour adarre, labour a-leiz ha glao bepred, ha glo mui-ou-t-mui. Stouvan a reomp foziou koz, ober a reomp foziou nevez, digeri a reomp garidennou, dispenn a reomp kle-dourioù, toullaa a reomp reou nevez, ha, kaer hon eus ober hag ober, diober hag adober, n'eban-nomp da boanial evel galeourien ha, pa gred d'imp ez eo echu, e fell mont adarre ; ha, pa n'hellomp mui mont, haoter-varo, e renkomp moot bepred...

Ya, ambrenn mat a reomp war ar mestrou, hon laka d'ober labourioù a halfé gortoz hep nozout tamn ouz hon difenn. Ne zka dalc'h ar zoudard o deus, kouskoute, eun termen. Pa n'hellomp ken mont, e chomomp. Ar mestrou, er gwasked en-o c'hledourien, ne dec'hont ket. Gho a gouez, pentonial ha pentonial. Ni ivez a gemer skouer diouto : ne gavomp ket...

Met, pa zeu an noz, e paomp ivez an amzer vad kemeret war an deiz. Red eo dispenn eus c'hledour koz, ha dougen pell dioutan an treus-tou koad a zo waran, Gwasat reuz !

Da heulia.

AR YEODER.

## NOTENNOU

XII

17 a ebrél.

A-dreuz c'houec'h devez a dremen buan. Poent eo adarre sonjal distrei d'al linen. Goude kreisteiz, en hent dre eun c'hariden lous spontus, Pri beteg an daoulin ha, war ar marc'had, glao war hon choug. Brae e vo, ya ! gedal ar Brusianed en ber !...

« N'int ket bet re zrouk, al loened fall », a lavar d'imp ar re-all, o tont a-dreuz.

« Plijet gante choñ evel-se keit-all c'hoaz, a laromp ! »

Labour a zo kalz d'ober. Met ar vistri, evel ar zoudarded, a zo di-c'hoantek-tre, Avel a zo en o fenn, avel da vat. E-lec'h ober labour fall pe diskepenn, eo hanvet ar c'he-dourien evit an noz hag ar re-all, gleb-dour, a glask o zammig plouz brein hag en em astenn waran. Doue a gouez bepred a-bil. Evurus. o tud kêz, n'outen laret pegen evurus an reb en deus toenn vad ha peuc'h da gousket diadani !

18 a ebrél.

Neventi ebet ! Brud fall a zo. Heb dale pell, a larer, e stako an treou. Kement-se a spouron an holl. Evel na garan ket diarbenn bec'h a-raok ar c'houz, e pedan ar vignoned da viret o nec'h. Abred a-walc'h e tevio ar c'hrôgadou, ha gwelet a-walc'h ivez e vezint o tostaat. Perak en em jali neuze ? Anaf eo e vo krogadou ; en sell emomp a ze, pegwir eo flastret hon douar gant an enebourien hag e vo red o zrec'h, da vihana mar gallomp, hag o c'has er-maez. Met ne gemeromp na re a spont, na re a drubuilh. Nag a wech n'hen eus ket klebet trouziou henvel heb bezan gwelet netri !

19 a ebrél.

Buhez hirvoudus a-walc'h war an deiz. Tennou kanol a bep tu, met tennoù dinoaz. En-kreiz an noz e tignonez d'in mont d'ar c'hledour e post e b'hañ gant eur Gwenedad, pètr a galon vat, ar Jau e nano. Karont a ran anezan dreist, abalamour d'e skiant-vad vreizek, abalamour d'e skiant-prena.

Evit tremen an amzer, e komzomp eun tamm a bep tra hag... eus ar brezel, ezom ebet da laret ! Pa be-tra koll ar penn evel ma ra kalz, inallori ha diskiant ? Ar wirionez, daoust m'eo kriz, a zo sklêroc'h, a laromp.





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, ball Cherner, a zigemer ané

**Evit kaout al levr-oufen brezonok.**

Daou lizer mat a zigouez ganimp war eun dro diwar-benn al levr-oufen.

« Kavet em eus da brema eul levr-oufen brezonek e ti an aotrou Derien, leoriere e Brest », a lavar d'imp eur mignon, medesin en arme.

« Da gaout levr-oufen an aotrou abad Gall, a skriv d'imp aotrou person Plounerin, — Trugarez d'ezan ! — a'eus d'ober nemet skrivva d'ezan e-unan da « Taule ». Me 'zo o paouez a c'houlenn eun nebeut touseñnou digantan evit bugale ar c'hatekiz. »

Alia a reomp ar re eus hon mignonel a hell hen ober da gas al levr-oufen brezonek d'hon zoudarded en talbenn. N'oufent ober gwel, e gwirionez, evit ma vezimp holl a-unan, ar re a zo en talben hag ar re a zo er gêr, o pedi Doue e yez santel hou mamm-vro Breiz-Izel. « Kroaz ar Vretoned » a roio skoazell d'ao obermad-ze, kerkent ha ma c'halle.

**Taolen ar Brezel**

**War dalben ar Zaozon hag ar Fransizien.**

Ar Zaozon, goude dizarben meur a argadenn gant an Alamaned, o deus kresket c'hoaz, ar gwener 16 eus ar miz, an dachennad a zalc'hont e Pasohendaele, Bro-Veljiq.

Ar meurzh, zo eus ar miz, diouz ar beure, o deus graet eun arsaill a vras e bro-Flandrez, etre Arras ha « Saint-Quantin ». Deut eo an taol da vad ganto eus ar gwella; eus 6 da 8 kilometr dounder o deus gounezet war eun talben a 10 kilometr, gant eun niver a brizonerien, a gauolioù hag a bourvezioù-brezel.

War linen ar Fransizien krogadon, en hanternoz da stêr « Aisne » e-lec'h e voe kemeret, an 21 eus ar miz, eur vegen a-bouez eus linen an Alamaned, hag ivez en-dro da Verdun e koad « Courrières » hag e « Koad ar Zoul ». Doue da viriñ hon c'henvroiz a zo stank el lec'hioù-ze !

**En Itali.**

An Italianed o deus dic'hlanet ar mor en-dro da c'henou stêr « Piava » da viret ouz an Aotrichianed da gemeret Kêr « Venise ». Ar gwener, 16 eus ar miz, e tizarbennjont an enebourien o doa treuzet ar stêr, o kemeret diouto 1200 a brizonerien. En hanternoz, war uhelen Asiago ha

war stêr « Brenta », e talc'hont penn ivez da vad, hag e harzont an Alamaned da dremen.

**Er Ruzi.**

Gwall-luziet an traoù bepred ! Diouz an diweza keleier e vije Kerensky dindan dec'h, pe varo. Paotred ar pal pella (« Maximalistes »), kouezet Petrograd en o dalc'h, n'int ken evit en em glevet kenetrezo. E-keit-se, ar jeneral Kaledine, e penn ar Gozaked, a vije o pourchas mont da skuba an holl dispac'h mezus-se. Hastet affo !

**En Douar-Santel.**

Ar Zaozon o deus kemeret Jaffa, kêr vras war ar mor ha penn-linen eun hent-houarn war-zu Jeruzalem. Eno eo e touaras « Klosreg ar Wern » pa reas e « Veaj Jeruzalem ». Pajennou dudius en deus skrivet en e levr war stumm Jaffaiz ha war gaerder al liorzou a zo en-dro da gêr.

Breman e tosta bemdez ar re-Unanet d'ar Gêr-zantel, na zaleo ket da goueza etre o daouarn.

**War vor hag en aer.**

Ar 17 eus ar miz, e mor an Hanternoz tost da enez Heligoland, ez eus bet eur c'hrogad etre listri skanv ar Zaozon ha re an Alamaned. Eul lestr alaman a zo bet goueledet ha meur a hini gwall-aozet, war a greder. Diouz tu ar Zaozon, n'eus ket bet a goll listri.

An 2 eus ar miz, eul lestr-geder, al « Lynx », hag a oa oc'h ambroug listri-marc'hadourez, en deus goueledet a dennou kanol eul lestr-splujer dirag aochou Breiz.

En eur brezege, an aotrou Lloyd George en deus dizolbet o doa ar Zaozon goueledet pemp splujer en eur ober eun devez hepken.

Nijerezed ar re-Unanet o deus bombezet ha gwall-aozet al lestr-brezel alaman « Goben », eoriet e porz Konstantinopl.

**LENNON**

*Eur shouer vad da heulia !  
Enor d'hor c'henvroiz kouezet war  
an dachen !*

Kuzulierien ti-kear Lennon, a-unan gant an aotrou Menn a zalc'h breman lec'h ar mear, o deus sonjet ober, o-barz en o gwered, eur skouden a enor, evit darc'hel sonj a-hed an holl amzerioù eus bugale ar barroz o deus rôet o buhez evit difenn ar vro. Ar meneg-se a ro enor da guzulierien Lennon

hag ar skouden a raio da viken enor ivez d'an holl barrezianiz a zikouro dre o aluzen sevel anezi.

Eur gest a vezo graet dre ar barrez, ha seul ma vezo bras ar gest, seul gaeroc'h e vezo ar skouden. An holl, paour ha pinvidik, a roio gant mall o aluzen, pep-hini hervez e c'halloud, evid eun ober ken kaer. E neb lec'h all ne c'hallfent ober gwelloc'h implij eus o arc'hant. An dud-ze, ken paour, ken pinvidik, o deus meritet e vo dalc'hiet sonj anezo. An arc'hant a vezo dastumet a vezo lakeat war leve, da c'hortoz ma vezo echu ar brezel, evit ma vezo lakeat hanoioù an holl war ar skouden.

Setu aman war-lerc'h eur werz vras digaset d'eomp a-ratoz gant hor mignon ha kenlabourer ker, an aotrou Henry.

**GVERZ**

*en enor da vugale Lennon  
ma c'et e-pad ar brezel bras*

**WAR DON :** C'houi pere 'zo kristenien.

A hed an holl amzerioù,  
Lenoniz, rumm-ha-rumm,  
Dalc'homp sonj eus ar skouerioù  
Deus rôet, e pep stumm,  
War dachennoù ar brezel  
Bugale ar barroz,  
Evit difenn Breiz-Izel,  
Bro-C'hall hag o zud koz.

Kalz 'zo maro merzerien  
E-kreiz o yaouankiz...  
Enor d'ezo da viken,  
Ha doujans e pep giz !  
Ar re-ze 'deus meritet,  
Kouls pinvidik ha paour,  
E ve o hano skrivet  
E lize-rennoù aour.

Rôet o deus o buhe  
War dachen an argad  
Da zifenn al liberte,  
Ar peoc'h hag ar gaez vad  
A eneb fallagriez  
Enebourien trubard,  
A glaska dre dreitouriez  
Dont da veza hor gward.

Evit darc'hel o enor  
N'hon touez divarvel,  
War eur skouden a enor,  
En hor gwered santel,  
Ni lakaio kizella  
War eur maen marbr kalet  
O hanoioù, da skolia  
Ar re 'zo da zonet.

Ar mammou, en eur dremen,  
Laro d'o bugale :  
« Dalc'hiet sonj da virviken  
Eus hano an dud-ze !  
Ar re-ze a zo maro  
Evid eur Gaoz santel,  
Maro 'n eur zifenn o bro... »

Dalc'h sonj, o ma bugel ».

Ar yaouankiz a vezo  
Kennerzet dirazi ;  
Ar re goz a zaoulino  
En-dro d'ei da bedi ;  
Hag ar re a zo da zont  
A welo war o hent  
Kadaroded an dud dispont,  
Nerz-kalon o c'herent.

Hi a vo an testi  
Eus ar garantez-vro  
Difennet heb damanti  
Tre beteg ar maro ;  
Hi d'an holl dud a galon  
A lavaro bepred :  
« Gloar da vugale Lennon  
Tre beteg fin ar bed ! »

J.-L. HENRY.

**KELBIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

**Kelou eus hon c'henlabourer ker  
G. Mazes hag eus an  
71vet war droad.**

War an talben, 16 a viz Du, 1917

Aotrou ha mignon ker,  
Emaon o paouez tremen teir zizun  
en a-dreñv, da layaret eo teir leo  
ac'haleñ, o studia war an ijinou  
nevez a zigouez ganeomp gwech ha  
gwech.

Dre-ze, « Kroaz ar Vretoned » ne  
zeue ket d'am gwelet, hag e kave  
ganin e vanke d'in eun dra bennak.  
Dec'h e resevis niveren an unnek.

Kaset em eus d'oc'h, eur miz a  
zo, hano eur mignon, gwir Vreizad.  
Ne lennas ket e-pad hir amzer hor  
c'helaouen vreizek, rak hen ivez a  
zo aet da greski niver spontus Mer-  
zerien ar Brezel.

N'ouzon ket c'hoaz e pe zoare eo  
diskaret, hag e c'hedan diwezatoch  
evit komz a gement-se, ha, war  
eun dro, e kasin d'oc'h eun nebeut  
kontadennoù brezonek dastumet gant  
ar paour kaez mignon. Doue da vezo  
gant e ene !

Amaz eo kriz an amzer, ha n'eo  
ket eur blijadur tremen an noz war  
zao hag e kamb ar stered. Gwella  
a zo eo e tosta ar berrmission, an  
eurvad da dremen eun nebeut deiz-  
e Breiz.

Da c'headal hiroc'h kelou, dige-  
merit holl venozioù ho kenvroad.

G. M.

D'hon c'henlabourer ker ivez hon  
menoz kalonek ! Ha ra zigemero an  
Aotrou Doue ene hon lenner, a zo

konezet nevez-20, eur Merzer oussann war roll ar wir-Vreiz hag ar varzed o deus rôtet o buhez evit ar Franz !

### Kelou aus hon prizonerien.

Kelou mat hon eus bet eus Y. Cadoret, breur hon c'henlabourer ker « Koumieg Arvor », hag eus A. Bourdoulous, a oa mouler a-raok ar brezel. Hemañ en deus klevet kelou, en e harlu, e oa chomet e c'hoar hec'h-unan war an douar, kollet ganti er brezel he fried hag he mab. En em unani a reomp a galon gant hon mignon Bourdoulous en e c'hlaç'har. Doue d'e frealzo en e brizon pell du-hont en Alamagn !

Trugarez a lavaromp, en hano « Kroaz » hag hon lennerien brizonerien, d'hon lenner ker, an itron Damany, he deus ar vadelez da gas d'ezo fourmach, graet ganti a-ratoz-kaer evito.

## AN DIGREIZENNI

Hon c'henveur ha mignon ker, an aotrou Leon ar Berr, Barz Abalor, en deus savet, ar zizun dremenet, war an « Union Agricole », eur mad a bennad-skrid diwar-benn mennad an aotrou a Gergezeg : ma vo graet bravoc'h hiviziken da Vreiz, d'ezhi da euna aesc'h ha gwelloc'h a ze hec'h Amzer-da-zont.

Hon mignon a gomz, er pennad-ze, eus eur gwall-damall, en deus kredet an aotrou Lefebvre, rener ar « Pensée Bretonne », skei gant ar Vretoned, e respont da vennad ken reiz an aotrou a Gergezeg. C'hoant a-walc'h hon dije bet da deval war ze, nemet, o veza m'eo bet skignet dre-oll ar « Pensée Bretonne », beteg e skolioù hag, e Sant-Brieg amañ, el levidi-kêr, d'an holl d'he lenn, e kav d'in ez eo eun dlead unani mouez « Kroaz ar Vretoned » gant hini an « Union Agricole ».

An aotrou Lefebvre a lavar, eta, en deus-hen dizolbet, er bloaz 1914, e oa menoz an Alamanez lakaat o c'brabanou war Vreiz. E-skeud ze, e kred ober eus ar vroadelerien, da lavaret eo eus kement Breizad a gar e Quenn, e Yez hag e Vro, treitourien, mevelien d'an impalaer Gwilherm !...

— Da genta, eme an aotrou Leon ar Berr, n'eo ket gwir ho pije bet, c'hoi, aotrou Lefebvre, an enor da zizol labour kuz an Alamanez en hon bro. Diskuilket e oa bet ar gwall-labour-ze, pell kent ar brezel, ha savet diwar e benn pennadou ganimp ni end-eñ a damallit, en hou c'he-laouennou breizek : « Le Pays Breton », « Ar Bobl », « L'Union Agricole ».

— Ha, pa weler ar wir-Vreiz o skuilh o gwad, evel ma reont, war an holl dachennoù emgann, e ranker beza, e gwirionez, gwall-zigalon evit kredi ober anezo mevelien Gwilherm ! Mevelien Gwilherm, Yañ Per Calloc'h (Bleimor), Jozef ar Bras (Dirlemm), Nedeleg a Gerangwe, Biel Lunuzel, Efflam an Enoret, August Bourdonnec, ar Bescoad, ha noused hini all eus hon barzed o deus rôtet o buhez evit ar Frans !

Hag an niver anezo a zo bet gwall-c'hlozet hag a chomo mac ha graet ar peur-rest eus o buhez ! Gwareger, a skriyas ken brao intor ar 48vet, ar zerjant Velly, E. ar Bras, Jozef Goulet, hep konta al liver brudet Le Mordant, a genlaboure war « Brug » a-raok ar brezel, hag a zo bet dalle

gant eun tenn en e benn ! Nag a bennad moulet war « Groaz », en amzeriou diweza, hag a zo bet digaset d'imp gant hon c'henskrivagnerien, skrivet ganto gant o dourn kleiz, pa n'hellont ken, da heul o gouliou brezel, hen ober gant o dourn mat !

Hag ar re eus hon barzed a zo breman e linen an tan oc'h en eun ganna kalonek, e keit m'eman an aotrou Lefebvre, en a-dreñv, ouz o dismegaosi war ar « Pensée Bre-

tonne » ! Jaffrennou, Choleau, Jul Gros, Bocher, Erwan ha G. ar Moal, Normand, Mazeas, ar C'hog, Yann Paol Telefoner, ar Zoudard koz, kant ha kant all a Vretoned vat endro d'ezo, ar re-ze a zo, emichans, mevelien Gwilherm !

Eur vez eo e c'hallfed dislonka ouz Breiz. — gwella soudarded ha difonourien ar Frans ! — tamallou ken disleal ha ken fallakr !

## GOUEL AN ANAON

An amzer 'hed aa deiz a zo mogidellus,  
Son ar c'hleier ivez trist ha melkonius ;  
An dud gwisket e du, kalz doan en o'balon,  
A zired eus a bell 'vit gouel an Anaon.

A-ked an amzeriou, e-mesk ar Gristenien,  
E talc'hed atao zonz eus kar, amezeien ;  
Met baoc ar brezel, evit hon tud varo  
Startoc'h eget biskoaz ar pedennou a zao.

Rak piou 'ta n'en deus ket, dindan fale'h an Ankou,  
Kollet pried pe gar, mignon a-wechou ?  
'Vito da veza bet kristenien kalonek,  
Eus ar Baradoz c'hoaz ne dint ket dellezek.

Rak-se, er Porgator, pep-hini renk d'e dro  
Renta e holl zlead, gouzanv poanitu garo ;  
Goude beza ganimp tremenet o buhez,  
En o c'henver breman chom 'rafemp didruez ?

Kement-hini, 'n deus c'hoaz eur galon en e greiz  
Ne c'hell ket evel-se dilezel e dud keiz ;  
Evit o frealzi, skanvat o ankeniu,  
Kinnigomp heb muzul sakrifiz, pedennou.

Eur Vamm holl-c'halloudek, eur Vamm drugarezus,  
A gavomp d'hor zelaou : ar Werc'hez glorius ;  
Mar gouzomp he fed, sur 'tgoro an nor  
D'hon tud keiz anaoudek ! Fin 'vo d'o Furkator.

War ar C'halvar Jezuz, hor Zalver benniget,  
Evit hon dasprena 'zo bet er groaz staget ;  
Dre zaouarn ar beleg, war an aoter ivez  
Ar memes sakrifiz a vez lidet bomdez.

Kinnigomp da Zoue holl veritou Jezuz,  
Evit tenna hon tud eus o stad truezus ;  
Pebez dudi en Nenv mesk ar Zent, an Aelez,  
O tigemer 'n o c'hreiz eur zant pe eur zantez !

YANN MARI NORMAND.

## Loden ar Stourmer

Va zudou paour, nebeud a amzer  
am eus hirio da skriva, rak bep nos  
e rankan mont da « Vilin ar Fale'h »,  
da gas a bep seurt traou, orjal, koat-  
tach, hag all, d'ar gamared a zalc'h ar  
fosiou-douar. Va labour, e gwirionez,  
n'eo ket re risklus, rak an dachen a  
zo sioul a-walc'h, a drugarez Doue.  
Met, diblaset war-dro peder eur eus  
an noz, ne vezan en-dro nemet etre  
deg eur hanter pe unneg eur. Kouls-  
koude, e vefen glac'haret ma n'hellfen  
ket rei va zammig skrid da « Groaz  
ar Vretoned ».

Eur ger hepken, eta diwar benn  
ar pez am eus lennet en eur gazeten  
diwar-benn « loden ar stourmer »  
(« la part du Poilu »). Ze a zo gwir.  
War an talben e vez kollet bep  
seurt traou : fuzulioù, mindrailhe-  
rezed, bombezennou... Ar zoudard  
ne daol ket evez. Perak ? Petra eo an  
traou-ze evitan ? Netra ! Aze emaint,  
aze e chomint ! Rak-se, nag a zan-  
vez kollet, nag a archant dispignet !  
Met, evel ma lavar ar gazeten, ma  
vefe rôtet d'ar zoudard eun tamm  
gwerz butun dre ma tigasfe eun dra  
pe dra, e c'hellfe, en eur c'houid  
eun draig hennak, savetei arnou a  
vilierou. Ma vefe rôtet, — lakomp  
4 real evit eur fuzul, 8 real evit eur  
vombezenn, 20 real evit eur vi-  
ndrailherez, — natra ne chomfe da  
goll.

Me a gav d'in na ve ket fall studia  
kement-se. Ne vezo graet biken re  
evit ar zoudard a zo, abaoe tri

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc — Imprimerie St-Guilhaume

bloaz hanter bremaik, o tifenn ker  
kalounek douar o Bro !

AR ZOUDARD KOZ.

War an talben, 19 a viz Du, 1917.

## Gourc'hemennou da V... ar Velin !

Tennaet eus eul lizer digant eul  
leoner a Dreger :

« Pedet, mar plich, pôtr Gwened  
da zerc'hel da skriva war ar « Groaz-  
zig ». Dintius e kavan e brnadou-  
skrid, hag evel-se e tiskin tam-  
ham e yez gantan. »

## KEMPER EUS AR VRO

KEMPER

Ton-gwall. — Ar zizun all an tan  
a grogas e Kemper e ti an aotrou  
Cornic, medesin kezeg, war ar mar-  
c'hallaç'h. Kollou bras a zo. Ugent  
tiegoz, a rao o annez en ti-ze, a zo  
breman hep ti nag aoz.

## NOTEENNOU

XIII

Beteg unneg eur, gleb ha leuo a fank,  
o stleja peziou koad dre c'haridennou  
louz ha moan e-kreiz eun denvalijen  
an denva. Daoust da re, pep-hini a  
gemer e boan evel m'eo diet. Truez-  
eus eo ! Ha neuze e laromp : « Ar-  
choaz emañ sul-Fask, arc'hoaz e vo  
diskuit hag ivez dic'haou... »

Henvel ouz eur bugel, ar zoudard

paour amañ a gemer evel eul levenez  
dispar, evel eur blijadur dreist, ke-  
ment tra a bella e spered hag e gorf  
diouz an « trancheou ».

23 a ebrel, sul-Fask.

Alleluia !

Perag, o ma Doue, n'eo ket heman  
« Alleluia » an Treç'h ?  
Kement-se a deuzio, a dra zur, met  
pegoùs ?

Ware hoaz e tiskuitfomp, a laren  
dec'h... Ya, pe flugez ! D'an bevel-  
lep eur gant an deziou all, d'al labour,  
paotred !

An amzer war-lerc'h deveziou al  
lousan, a zo dispar... An evned a  
gan, hag a zav o richan war-zu a ney ;  
ar bleuniou, hanter-zispak ha glizen-  
net, a ginnig o c'hentan c'houez d'ar  
C'hrouter... Ha ni, e groudurien,  
bet d'imp spered hag anaoudegez, ni  
gwasket gant an euzusan gwalen, ne  
gempomp ket zoken eur vunuten  
evit sevel beteg d'ezan hon c'halonou  
ankeniet...

Da laret eo, an darnuvien ac'ha-  
nomp a gas d'ezan o fedennig ; met  
hon mistri, dallet pe dizanaoudek, pe  
c'hoaz huallet gant ezommoù ha le-  
zen ar brezel, ne lezont ket ganimp  
an disteran amzer evit E veuli. O son-  
jal en kement-se, ma c'halon a skuilh  
daerou, daerou loskus.

Kierat devez eo sul-Fask dre du-  
man, daoust d'an hirnez a bouez  
warnañ eun daou vloaz a zo, ha pe-  
gen mantrus eo e dremen amañ !

Evit hon heugi oussenn, e ren-  
komp, n'ouzon ket evit petra avat,  
ober, eur c'hariden neve a dreg al li-  
nen gentan ; hag, en eur ober anezi, e  
tigouez d'imp troc'h dre an hanter  
eur c'horf maro douaret aboue pevar  
miz. — « Paouezit, a lavar d'imp an  
is-letanant ! Pec'hed eo trubuilhat  
hun diwez'n eur brezelou... Lakit  
ar c'hariden d'ober eur gildroen ha  
kempennet eun tamm bez an den  
kêz ».

Hag e reomp heb eur grig.

Goude kreisteiz ez omp savet hag  
e teuomp da Rozières. C'houec'h devez  
c'hoaz da chom a dreñv. Poent eo,  
goude bezan mesket kement a fank hag  
a loustoni !

Laret a reas ar Brusianed villiget  
teujent da lida sul-Fask da Rozières.  
Laret mad o doa. Int o-unan ne de-  
jont ket met o « viou pask » a daous,  
stankoc'h kalz eget n'hon devoa  
c'hoant.

A-boan dig uezet, klasket ganimp  
hon lojeiz hag o tanzen koania en eur  
goz solier, e-lec'h ma tlemp ivez  
kousket, e tarz er porz eun « obuz »  
a 210 eus o feurz.

Ha setu bec'h e-barz ar gambr evit  
gouzout piou a ziskeno ar buasan.  
Hag an « obuziou » a gouez hag a  
dartz er porz hag el liorz pevar ha  
pevar. Bern war vern, druilhag ha  
druilhag, en em vout an dud er vin ;  
hep sonjal e c'hallont he diskar hag  
en em diza holl...

« Kemarit hoc'h amzer tud dis-  
kiant, a huchan warne... Diskennit  
hini ha hini, an « obuziou » ne gouez-  
font ket warnoc'h kentoc'h a ze,  
ha, da vihanan, n'ho pezo ket a zroug  
gant ho tievested. »

Senti a reont. Hag e tiskennomp a  
beb eil, tra ma tarz dioustu-kaer tri  
pe bevar « obuz » en-kreiz ar porz.  
C'hoaz eun ugent bennak a gouez e-  
vel-se a damdost d'imp ; ar porz a zo  
karget a voged, leun a zismantrou  
hag a zeliou glas diframmet diouz ar  
gwez bras a rôt d'imp eno kement a  
zishool hag a freskadurez !

A drugarez Doue, n'eus ket re a  
zroug ! Daou zoudard a zo lazet en  
toul ar porz, hag unan all a zo gwall-  
c'hlozet. An daou lazet a oa deit,  
eveldomp, da glask eun nebeud da-  
veziou diskuit, hag o deus, an dud  
keiz, kavet an diskiuz peurbadus...

Plijet gant ar Mestr bazan gant e  
ena, ha frealzi er ger o c'herent  
paour !

(Da heulia.)

AR YEODET.





**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 93, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, hall Charner, a zigemer ané

**AR RE A OUELOMP**

WAR DON : Eürus an hini...

Kerent ankeniet, sec'hit ho taer !  
Ar re a ouelit nan int ket maro. (Diou wech)  
Nan, ne varver ket evit mont d'ar bez !  
Pa n'eur ket ankouet, emeur e buhez.....  
Ar re a ouelet o deus troket bro,  
Nemet o spered ganeoc'h a jomo.  
Evit o dever merzerien, heb mar  
O enoa kaer 'zo savet d'ar gloar.  
Ar re-ze 'zo net en eur vro gwelloc'h,  
'Lech 'z eus eürusted, karantez ha peoc'h.  
'Lech 'vez ket gweleñ brezelioù euzus,  
'Lech 'vez ket klevet met traoù dudius.  
En Eternite, o fenn kurunet,  
Emaint gant Doue, ar zent, an aoled.

HENRI

**Aluzennou da « Groaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

Albert Rozec, soudard. — 20 real.  
An Acquitier, klandiour. — eur  
c'houmanant.  
F. Goareguer, a Louargat. — 4 real  
hag eur c'houmanant.  
Trugarez, a greiz kalon, d'hon  
mignoned o deus digaset aluzennou  
ar zizun-man, hag a zo holl sou-  
darded ! Hon gwella gour  
c'hemennou d'hon o'henvroad ker,  
F. Goareguer, a oa bet glozet gre-  
vus, hag a zo digouezet en-dro d'ar  
ger, neve-ze, da beurbarea. Da rento  
buan d'ezan aer-vad ar Vro e yec' heb  
hag e nerz !

**Eul levrig ne vez Istor Burzudus  
ar C'hoar « Tereza ar Mabig-Jezus »**

Meur a wech hon eus bet da gomz  
aman eus al leorioù dispar savet e yez  
Gwened gant hon mignon ker, an aotrou  
Seveno, unan eus ar Vretoned a  
ra ar gwella labour evit ar Vro.  
Unan eus brudeta leorioù an aotrou  
Seveno eo e « Istor en hoér Tereza »  
a zo millieroù anezo war red e-touez  
Gwenediz. Eman o paouez kaout ar  
menoz mat d'e lakaat e yez Leon-  
Tregar-Kerne evit ar Vretoned all.  
Trugarez d'ezan ha ra raio al levrig e  
dro-Vreiz a-bez evel m'en deus graet  
e dro-Gwened !  
Goulen anezan digant an aotrou  
Seveno, 3, ru Sant Visant, Gwened.  
Tri gwenneg hepken eo ar priz gant  
ar frejou kas ; 16 real evit hanter-  
kant ; seiz lur dek k'wenneg ar c'hant.

**Taolen ar Brezel**

**Ar Zaozon dirak « Cambrai ».**

Evel e oa bet displeget ar zizun  
dremenet, ar Zaozon o deus gounezet  
en hanternoz eun trec'h eus ar brava :  
torret ganto linen vrudet Hinder-  
bourg, ez int digouezet, en eul lamm,  
dirak kêt « Cambrai ».  
Evit kas o zaol da vad, n'o doa ket  
prientant an hent d'o zoudarded gant  
eur ganoliadeg stank, evel ma reer  
peurlisia. Losket o doa en a-raok  
eun niver kirri-arsailh, pe « tankou »,  
a oa bet dastumet e kus, eur pennad  
a oa, a-dreg o linen, hag e voesoupre-  
net ganto an Alamaned : n'cant tamm  
ebet e gortiz a ze ! Ouspenn d'ar  
zoudarded war droad e voe graet en  
emgann-ze gant mat'c'hegerien, na  
glever ket nemeur komz anezo e

krogadou ar brezel-man. Marc'hege-  
rien ar Zaozon a doullas pell war-  
raok hag a roas sikour da zastum  
prizonerien. 9.774 Alrman, en o  
zouez 282 ofiser, a voe paket da bri-  
zonerien en eur ober pemp devez, eus  
an 20 d'ar 25 eus ar miz.  
Setu digouezet ar Zaozon e kêria-  
den hag e koad « Bourlon », war an  
uhel hag o kaout spi da vad war  
« Cambrai ». Mar tizont derc'hel al  
lec'h-ze, eiman sklér an abalea :  
« Cambrai » a chomo ganto heb dale  
pell ! N'eo ket souez e katfe en Ala-  
maned o diloja ac'hano. Krogadou  
start a zo savet, hag a bad c'hoaz,  
en-dro da « Bourlon », a zo bet ke-  
meret ha kollet meur a wech gant  
an eil to hag egile. Ar 27 eus ar miz,  
ar Zaozon, goude dizarbenn argaden-  
nou, o dius astennet c'hoaz an da-  
chea a zalc'hont eno, ha paket 500  
a brizonerien.

**War linen ar Fransizien.**

Disadoro, 24 eus ar miz, an Ala-  
maned a zo aet adarre d'ar Fransi-  
zien, — en o zouez kalz a Vretoned ;  
hon gwella menoz d'ezo ! — da glask  
lemet diganto « Koad ar Zoul ». Dizar-  
bonnet int bet da vad.  
Antronoz, 25 eus ar miz, ar Fran-  
sizien o deus argadet d'o zro en-dro  
da gêriadenn « Samogneux » er  
c'hornog da « Goad ar Zoul ». Daoust  
d'ar wall-amzer, avel foll ha kaou-  
dou erc'h, an taol a zo deut da vad.  
Kemeret e voe diou linennad fosioù,  
war 600 metr a zouder ha 3.500 metr  
hed, ha tapet enno 800 a brizonerien.  
Kalz eus ar fosioù kemeret a oa  
krenv keuan ha gwall-vrudet e-touez  
hon zoudarded. Eus c'haer a c'hou-  
nid eo !

**En Itali.**

Evel e oa bet lavaret ar zizun dre-  
menet, an Italianed a zalc'h penn da  
val a-hed stêriou « Piava » ha  
« Brenta » ha war uhelen « Asiago »,  
ma vironc ac'hano ouz an Alamaned  
da zifurka eus ar menezioù. Ar re-  
man o deus arsailhet adarre ar 27  
eus ar miz heb gallout gounit tachen.

**Er Rusi.**

Kouezet Petrograd e daouarn « pôt-  
ted ar pal pella », eman an dispac'h  
hag an dizurz o c'hoari o reuz eus ar  
gwasa er Rusi. Fiziet eo bet renadar  
an arme en eur pôtr haevet. Krylenko,  
bag lien « aspirant », da lavaret eo  
danvez-ofiser hepken. Gwell a ze, ar  
generaled n'emaint ket re duet da  
blega d'ar c'hatfard danvez-ofiser-ze.  
Salo m'en em gavte en o zouez unan

hag a ve krenv a-walc'h da gabes-  
tri an dispac'h !  
Setu eman an Alaman en em wis-  
ket e Rusian, a zo e penn an traoù-  
a-ziavaez, Trostky, eus e wir hano  
Bronstein, o paouez kinnig d'an im-  
palaer Gwilherm ober eun arzao-  
brezel. — « Ya laouen, en deus res-  
pontet Gwilherm gant ma lozlec'h  
ganin dioustu eur riblennad douar a  
25 leo treuz a-hed an holl linen,...  
da c'hortoz kaout ouspenn diwez-  
taoc'h ».  
War ze, broioù ar Rusi, c'hoant  
ganto marvat d'en em zispartia diouz  
Petrograd hag he fôred trelatet, a  
zisklêri a bep tu o emrenez. Eno  
maiteze, mar galle breman an holl  
vroioù-ze en em glevet ouz an dis-  
pac'h, e vije ar zilvidigez !

**Ar Zaozon en Dour-Sante!**

Kemeret ganto kêr Jaffa, bro al  
liorzoer kaer, penn-linen eun hent-  
houarn war-zu Jeruzalem, e tosta  
breman ar Zaozon prim-ha-prim d'ar  
Gêr-zaatel. Hervez ar c'hehler, e  
vije digouezet strolladou anezo war-  
hed diou leo hanter hepken diouti.

**Hag ar prosezou ?**

Breman, p'eman e penn ar vici-  
tred an aotrou Clémenceau, eur pôtr  
koz a dalv eur pôtr yaouank, kement a  
nerz hag a dan a zo ennan ! ez eus fizians  
e vezo diluziet an holl brosezou a zo  
o nec'hamanti, re bell a zo, an holl  
dud vat. Kaset eo bet prosez Turm al  
dirak barnerien an arme a zo brudet  
a viskoaz evit beza iskuit. Prosez  
Malvy a vo barnet gant e d-lez-uhel.  
Ra vezo graet buan ar sklêrjen ha,

da heul, eun taol-skubel, mar plich !  
E-keit ha m'eman hon zoudarded ker  
o stourm ken kalonek en talben, ra  
vezint assur n'eus ket a dreitourien  
en a-dreñv, d'o gwerza d'an Ala-  
maned !

**KELIER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

**Kelou mat eus hon mignon ker,  
Loeiz Herieu, « ar Barz-  
Labourer »**

En deiz-all, o respont an aotrou Le-  
febvre, hon doa ankounac haet, —  
kement a zo anezo ! — heñvel e penn  
honn barzed a Vreiz-Izel, a zo er  
brezel, hon mignon ker, Loeiz He-  
rieu. Setu aman eul lizer mat eus e  
berz o tigouezout ganin ! Hel lakean  
aman e yez Gwened, evel ma 'z eo  
bet skrivet ; evel-se, hon lennerien,  
en eur lenn, a vo aesoc'h d'ezo soujal  
eman « Loeiz » o kaezel outo, ha kas  
o gwella menoz, a-unan ganimp,  
war-zu ennan, du-hont en talben !

Keneil ker,

Chetu ni deit 20 leu ardran avat  
kemere un tammig repoz (ur miz be-  
nak e later). Erhat omp er gêrig vi-  
han-men : er goulan-men emañ aleih  
guél gampennet en tachen leñ ma  
lakèr er sudarded. Peb-unan en des  
ur gulé grocit get orsal ha koed ; ur  
holhadad plouz, un tres-plueg (pé  
kent-h, un tres-plouzeg) ur sab-hun  
liou guen, diù lenjot, ha chetu gulé  
er sudard... Ret é anzañ emañ guel-  
leit é stad doh en tu-sé.  
En ur vroig dru é hoñb, meit dilé-  
zet d'er vroiz anehi : ur ioh tiér e zo  
gouli rauk er brezel. Fé eüs nen des

chet mui : burhud é ma usler 3 pé d moéz en iliz d'er zul ! Na kem étre er vro-men ha Breih-Izel !  
Iah ouñ berpet, ha goulén e hran get sant Iouann hou koarn berpet éué hag er ré e garet. Doaréieu mat e zegoéh gesein diarben kendalh Pondi. Dañ é pas kol kalon, rak en han d'ho es tauliet a zornad e zereu kelidein...  
Kens, keneil ker, ha kredet atan é karante feal hou mignon koh.

L. H.

**Kelou eus an aotrou Moal**

Setu aman eur pennad lizer digant an aotrou Moal, a oa chomet keit all hep rei eus e gelou. D'ezan gwella menoz holl diegez e Kroaz ar Vretoned !

Ar 26 a viz Du, 1917.

**Aotrou Vallée ker,**

Eur miz 'zo bennak omp deut da chom e kêr, hag en em gavfemp evurus panevet ar Voched da herzel ac'hanomp a-wechou da gousket en noz... D.....a dap he lod alies.

Me a zo yac'h bepred, a drugare Doue. Esperé a ran oc'h yac'h ive.

Gwelet a ran, e « Kroaz ar Vretoned », eman ho sonj evel hon bini gant amzer-da-zont ar Vro. Deskomp e skol ar brezel dibab mad hon hent a-benn diwezataoc'h !

Kenavo gant gourc'hemennou ar gwellan. E. ar M.

**Skouer-vad Lennon**

Ar zizon dremenet e oa bet meneg aman eus ar skouer-vad rôet gant kuzulierien Lennon. Emaint o vont dalakaat ober eun daolen vaen-marbr a vo enskrivet warni hanoioù bugale ar barroz o deus rôet, er brezel, o buhez evit ar Franz. Eur gest a zo bet savet evit se e parroz Lennon.

Er bajen all ez euz eur pez-barzoniaez kaer, a zo bet digaset d'in gant an aotrou Henri a Lennon ha ne oa ket lat gallet e voula ar zizon dremenet.

**Trau gwelet**

Red eo d'in dont da c'houlenn digant lennerien « Kroaz ar Vretoned » am digarezi mar n'hellan ket dont bep sizun da gaozeal aman em yez ken karet. Evel ar vag war vor, a-wechou taolet ha distaiolet gant an tarziou, me ivez a vez kaset ha digaset tu-man tu-hont gant ar re o deus karg ac'hanouñ. Abalamour da ze n'em eus ket atao an amzer d'ober ar pez a zo em zonzj.

Petra, eta, a livirin d'eoeh hirio, lennerien ger, diwar-benn ar pez a dremen war an dachen a vrezel ? Nebeudik a dra... Hirio, eta, pa oan oc'h ober eun tammig pourmen, goude lein, en-dro d'an ti e-lec'h emaoñ o chom, e klevis a-zioch va fenn strakadennou ar mindraillherazed ouz ar c'hirri-nij.

Sellet a ris, hag e welis eul labouz alaman e tec'het peza belle... Siouaz evitan, ne voe ket skanv a-walc'h ; tapet gant hon hini, e voe red d'ezan dont d'an em bozi en eur parkad gouzer. N'en doa droug ebet, kouls lavaret. An hini a oa ennan, eur zertant, a voe tapet a-raok ma c'heilias distruja e garr-nij gant eur vombez. Al laboused-tud-se a zo fin, met finoc'h c'hoaz e voe hon zoudarded oc'h e dapa prest, hag o viret outan d'ober droug.

Uaan nebutoc'h da ober droug ! Met petra eo ze ? .. Ni ivez a ra droug, siouaz, met droug da Zoue, droug d'hon eneoù. Hag heb Doue, netra da ober !... Kalon, kenvroiz ker ! fúzians ! Pedennou kalonek d'an Doua boll-C'halloudek ! Aze eman an daloc'h, aze eman an Treec'h !

AR ZOUARD KOZ.

War an talben, ar 14 a viz Du, 1917

**Sonet, Biniou !**

Kan-bale evit soudarded an 248vet

*Exmp. de Marche*

O biniou ker a Vreiz-Izel,  
Sonit d'imp d'ho tro,  
E-pad dezioù rust ar brezel,  
Tonioù koant hon bro.  
Mibien ar Gelled kalonek,  
Ni a gar kanan brezoneg.

DISKAN :

O biniou, Sonet flourik hon soniou } diou wech

Pell, allas, diouz lánneier Breiz,  
Ha pell diouz hon zi,  
Kanet d'imp c'hoaz gwerzioù a-leiz,  
'Vit hon fitealzi :  
Hekleo ho mouezioù a ziston  
En kalon ar zoudard breton.

O biniou, Sonet flourik hon zoniou } diou wech

Komzet d'imp demeure kon zadou,  
Hon bugale géz,  
Hon gwraze paour hag hon mammeu,  
A ouel altes ;  
Met ma skuilhomp daerou tener  
En eur zonzjal 'n hon zud er gêr,

O biniou, Sonet flouroc'h hon zoniou } diou wech

Komzet deus hon aochou melen,  
'Lec'h ma trouz ar mor,  
'Lec'h ma tee'h ivez an houlen  
'N he gwasa fultur ;  
Komzet d'imp deus al lestrig glas  
'Zo luskellet war an dour bras.

O biniou, Sonet flourik hon zoniou } diou wech

Alies e nij 'us d'hon fenn  
Tan, poulr ha ludu,  
Mindraillou ha mil bombezen  
A yud en daou du ;  
Met pa vroad hon « Rozal » goant  
An treitour gant he beg arc'gant,

O biniou, Tavet mik gant ho soniou } diou wech

Allas ! war dachen ar brezel,  
'N eur difenn o bro,  
'Ve skôet pôtrez Breiz-Izel  
Gant falc'h ar Maro.  
'Pad ma toullder didrouz, d'an noz,  
Be hon zoudarded da repoz,

O biniou, Ganimp-ni skuilhét dae-rou ! } diou wech

Met pell diouzimp breman pep neoc'h,  
Brezelourien Breiz ;  
Bezomp dispont, divlamm, didreec'h,  
Kalon dir 'n hon c'hoaz ;  
Ha pa zistrofomp d'an Arvor,  
Ganimp loreou ar Viktor,

O biniou, Kanet d'imp c'hoaz hon zoniou. } diou wech

Laouenanig ar Roz.

**NOTENNOU**

XIV

24 a ebrél.

Devez a ziskuz war e hed. « Rozières » eus ar c'haerañ enkreiz he dismantrou. D'ar beure, d'an oferen. Dec'h, sul-Fask, e oamp el linennou. Ofereñ ebet eta ! Hirie e c'hellomp mont. Kovez ha komunia. Evurusted a-leiz !

Goude, e tremenan ma amzer en eul liorzig a gostez, war ar yeot glas ha tener, e-mesk ar bleuniou. Den nemet ar zoudard er brezel-man n'hall laret na displegan levenez eun devez nevez-amzer, devez lintrus a heol, sart a richannou, ha dudius a c'houezioù melus. Ruilhal a reomp evel diskianted e-barz al liorz, flastra a reomp ar yeod, kutuilh a reomp ar bleuniou ; hag e reomp kement-se euid ar blijadur da ruilhal, euid ar blijadur da flastra, euid ar blijadur da gutuilh...

Pec'hed eo, hen gouzout a reomp, met, ma Doue, hon dudi, hon levenez eo tini eun den bet dallet deut d'ar sklérigen, hini eur c'hlanvour kondaonet adkavet gantan ar yec'hed. Yeod tener flastret, kleuniou koant

kutuilhet, na gemerit ket a zroug ouzimp. C'houi a zo d'imp, ni ho kar ha, betek ma vo red d'ec'h tremen, tremenit eta, ni ho ped. en eur lezel ganimp, soudarded leun a zienez, envor eun devez evurus, eun devez nevez-amzer...

Ya, pa laran, kement a stad a zo ennoñp, kement a levenez ma na badomp ket aman, el liorzou dilezet-man, en o fennou tier dispennet, eun drez o gwelet ! ha bet gwechall ken koant ! Pelec'h eman breman o ferc'hen, an dud a veve enne ?

Kement-se ne harz ket ac'hanouñ da skrivan lizerou betek kreisteiz, lizerou goulnennet diganio an dezioù tremenet ha dilec'hiet. El linen e skrivan kalz ivez ; met, pa dosta d'imp kuitaat, e vez laret d'ar botred gortoz. Amzer a vo a-dreñv... Hag e renkan neuze, adaleg an deiz kent, krigi gant al lizerou...

— « Fe d'am Doue, ya ! eme ar Pôtr-Teo, pe me a welo... An hini goz du-man, hep lizer eur pennadig a zo, a zo krog d'ambren... Ma ene, kleo ! lar d'ez i bepred n'eo ket get ma c'hroc'ben gant ar Brusianed, ar wech-man c'hoaz !... »

Ar gwasan, a-greiz skrivan, e vez

red d'in o selaoù ha derc'hel kaoz gante. Buan e kollan ma neuden, hag e chom al lizer en kroug. Hag e laran d'e : « Ya, ya, kanfarded, met mar chom al lizer war-lerc'h, ho pezo ar vadelez, han, d'en em damall hoc'h-unan... Me, n'hellan ket kontan ha skrivan war-dro... Dre-ze, peoc'h ha lizerou ! pe tabud ha lizer ebet ! »

K'rkent e sav bec'h etre Pôtr-Sant-Jili hag ar Pôtr-Teo war zigarez gouzout piou a zo kiriek d'an trouz. Kement a vrud a gesont o daou ma renkan alies lezel paper ha plect da goueza evit c'hoaz...

Hag a blijadur a-wechou en-kreiz an euzusan spouronnoù !

25 a ebrél.

Devez didrast c'hoaz ! Eur redadennig a-dreuz ar parkou gant hon letanant. Ar fuzul hag ar zac'h a zo ganimp, met abred ez iot lakat d'an dour. Ha c'hoarioù ha diduamant war zao ! Redadegou, maen-pouez, hag all... — Gant na welo ket ar c'hommandant ac'hanoc'h oc'h ober netra, eme al letanant !

A-us d'imp e ternij stank nizezed an enebourien, deut, hep mar, da welet petra a dremen. Tennet e vez warne, ken m'eo eur blijadur sellet ; hag e kontomp an tennou dre an tammou « gloan gwenn » a welomp en oabl, hag a chom pell da c'hortoz, dispaket tamm-ha-tamm evel koumoul skanv.

Poan a ra d'imp gwelet penôs, kaer a zo tenna, ne vez tizet hini, siouaz ! Hag e vefemp evurus o welet unan hepken, unan vihan o tont war-draou ! Hini, forz a zo. Mont a reont en-dro, kelc'hiet ma 'z int a dost gant an tennou.

War-dro nav eur noz, o vale ma-unanik e-barz al liorz am eus komzet anezi, dindan eun oabl ar splanan, e welan, me hag ar re a oa war an dispak, eun dra souezus. Eur pennad a zo e kleven eun nizezed o traoñval a-us d'in, hep gouzout re da bion e oa, d'imp pe d'ar re-all. A-greiz-holl, a sav diwarni, ken buan hag kul luc'heden, evel eur volz-tan o skléria en oabl...

(Da heulia.)

AR YEODET.

**KLEVER EUS AN VRO**

**SANT-BRIEG**

Darcoud-mor. — Al lestr-dra-dan « Breiz », d'an aotrou Gwales a Vezobran, a zo aet a-stok d'ezan e mor Breiz eul lestr all. Unan eus ar vartoloded war ar bourz anezan a zo bet laz, unan all gloazet. Evit al lestr, ez eus bet gallet e ramoki en eur porz a Vro-Zaoz.

Diou Vedalen gounezet mat ; gourc'hemennou Breiz d'an aotrou Paturel ! - Eman Hon Tad santel ar Pab o paouez rei peb a vedalen Sant-Gregor d'an aotrou Perio, rener breuriez Sant-Visant a Baol hag ar Groaz-Ruz, ha d'an aotrou Paturel, maer Pordic. Eun enor dleet mat d'ezo e gwirionez ! Hon holl lennerien en em unno ganimp da ginnig, en hano Breiz, hon gwella gourc'hemennou d'an aotrou Paturel. Dre e bennaduskrid kalonek war *La Croix des Côtes du-Nord* diwar-benn stad vantrus ar brezoneg ha spered ar vro, e vo kaoz an aotrou Paturel d'eun nebeut Breiz d'en em unani da viret ha da zifenn o yez. Mar n'o deus ket gounezet nemeur betek-hen en hent-se, ez eus fuzians e vo grast gwelloc'h goude ar brezel... D'an aotrou Paturel eo e vo dleet kement-se evit eun darn vat !

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.

St Brieg - Imprimerie St-Guilhem





**PRIZ AN CHOUMANANCHOU**

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod evit ar biolou estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**  
Kas al labouriou d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charnier, a zigemer ané

**Aluzehoù da « Kroaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro**

An aotrou Doktor Lucas, a Gonh-  
Kerne..... A real  
hag eur c'houmanant.

Trugarez d'hon c'henvroad ker, an  
aotrou Doktor Lucas, en doa ar vade-  
lez, p'edo medisin an hospital, da rei  
Kroaz ar Vretoned d'hon zoudarded  
c'hlozet !

**Gouez'hemennoù « Kroaz  
ar Vretoned »**

d'hé c'henlabourerez ha Barzes ker  
Filomena Cadoret « Koulmig  
Arvor »

Eur c'helou hag a laouenno kalon an  
holl Varzed ! Eman hon « c'henvarrez »  
ker, « Koulmig Arvor » o paouez eureuji  
gant eur c'henvroad, eur Breizad mad a  
Gerne, stag da gerzet ivez war hent ar  
varzoaz : ar serjant Jozeb ar Vely eus  
Gronvel.

Tristidigez an amzer vremen hag an  
diouez eus eur breur karet, dalc'het pell  
du-hont prizonnier en Alamagn, o deus  
graet ober an traou didrouz. Lidet e voe  
an eured en iliz Bona dirag ar gerent  
an 28 euz ar miz diweza.

Trugarez d'hon c'henlabourerez ker da  
veza digaset, dre eul lizer karantez, ke  
lou eus hec'h eured da « Kroaz ar Vretoned »  
ha d'he Rener koz ! Ra zigemero  
gedusa ha kaloneka msoz holl die-  
gez « Kroaz », renerien, skrivagnerien,  
lennerien ha mignoned !

Ma vijamp bet en amzer a beo'h, hag  
a zou dudius ne vije ket bet savet gant  
hon Barzed d'an eured-man, d'he lakaat  
« seder o tregeni » havel ouz an hini a  
zo bet taolennet ken kaer el levr « Mouez  
Meneou Kerne » :

Kaniri ha koroll.  
Plijadur 'vit an holl !

Sionaz ! emaint « Barz an trancheou »,  
evel e Kanaouenn vras Jozeb ar Vely, a zo  
bet moulet aman. Meur a hini, gwir eo, en  
eur drement dre di ar « Kroaz », o deus  
kemeret ganto, en o zac'h soudard, al levr  
« Mouez Meneou Kerne », d'e lenn du-  
hont, da rei eskell d'o spered da nijal da  
ved ar Vro... evel hon mignon E. ar Bras,  
a skrive d'imp o oa o kana hag o tiski  
dre an envor kanaouennou al levrig, hag  
hen glozet war eur gwel hospital. Holl,  
daoust n'hellont ket kana ha sevel soniou  
d'hou « C'houlmig », evel m'o dije c'ho-  
ant, a zigas d'ez i ha d'he fried, dre vouez  
« Kroaz ar Vretoned », o gouez'hemennoù  
hag o gwella hetou a eurvad !

**Taolen ar Brezel**

**En Haut ernoz,  
war linen ar Zaazon.**

Eun taer a emgann a zo bet dirak  
« Cambrai », an Alamaned o klask  
adkemeret digant ar Zaazon an da-  
chennad a zo bet gounezet, nevez-zo,  
gant ar re-man.

Hon lennerien a welo pelloc'hik  
eul lizer digant an Tad Daniel, en em  
gav en arme Breiz-Veur. Doue d'e  
viro o-kreiz an holl emgannou-ze !

Betek-hen, daoust d'an Alamaned  
da arsailli a-vras hag a daolliou stank  
diwar ar gwener, 30 a viz du, n'o  
deus ket gallet bouc'ha da vad linenn  
ar Zaazon.

**A-hed linen ar Frausizien.**

War dalbea ar Frausizien eun ne-  
beut krogadou aman hag a-hont, war-  
zu Sant-Kantin, Reims, Bro-Alzas,  
hag ar Woevr, er refer da Verdun.

E neb lec'h an Alamaned n'o deus  
gounezet tachen.

**En Itali.**

En Itali, setu digouezet da vad hag  
en em vodet en hanternoz eus ar vro  
an arme-skoazell digaset gant ar re-  
Unanet d'an Italianed. Harp a vezo  
d'ar re-man hiviziken ouz argaden-  
nou a-vras an enebourien !

Mall e oa d'ar skoazell da zigoue-  
zout, rak setu an Alamaned o vont  
da loc'ha adarre. Ar meur, 4 eus ar  
miz, o deus argadet e meur a lec'h.  
Betek-hen e talc'h mad awalc'h linen  
an Italianed.

**Er Rusi.**

Er Rusi, mouezioù a zo savet a bep  
tu ouz an arzao-brezel kiinniget d'an  
Alamaned gant Trostky, Bromstein  
eus e hano gwirion, eun Aleman en  
em wisket e Rusion.

Eur gouarnamant nevez a vezo  
formet, ennan, ar wech-man, estr  
eget « paotred ar pal pella ». Fizi-  
ans a hellel da gaout c'hoaz e troio war  
an tu mat planeden ar Rusioned.

E-keit ha ma toule Trostky, an  
2 eus ar miz, kaozeadegoù gant an  
Alamagn, en em gualize ar re-Unanet  
en eur vodaden kenetrezo, a zo bet  
dalc'het e Pariz. Savet ez eus enni,  
war a leverer, mennadou a bouez  
bras.

**Er Roumani.**

Ar Roumaned n'iut ket bet lusket  
da heulia gwall-skouer ar Rusioned.  
Derc'hel mat a reont bepred a-hed  
o linen.

Gwella 'zo, soudarded eus ar Rusi,  
kaulierien droist-oll, gounezet gant

**MOUEZ AN DREMVEL**

Abaoe meur a viz, a-hed an talbennou,  
Ped gwech war an dremvel 'm eus talet ma zellou ?  
Traou kaer ha gwe' skrijus d'hon daoulagad skuizet  
Kbl lies ta bemdez a zo 'n em ziskouezet.

Er blenen bet gwechall ken karget a vleuniou,  
Breman ne weler mui 'met toullou ha foziou ;  
'Lea'h ne zave tra ken 'met edou alaouret,  
Gant eur maro ken kriz kalz tud a zo kouezet !

Gant eun daolen ken trist, du-hont 'barz an dremvel,  
Ma daoulagad ruziet a glask bro ma c'havel.  
— Eao 'man e hoaz hirio ma-holl garanteziou ! —

Peur e welin-me 'ta hor bro gaer Breiz-Izel,  
Gant he menezioù draat hag he zourioù uhel ?  
— Doue ! Gwerz'hez Vari ! set ho pugaligoù ! —

YANN MARI NORMAND.

o neuz-kalon, a zalc'h a-du ganto  
ivez. Padal, amjestr a-walc'h eman  
stad ar Roumaned, gant diaes eo  
d'ar re-Unanet kaout darempredou  
outo.

**En Douar santel.**

Digouezet ar Zaazon war-hed diou  
leo diouz Jeruzalem, setu e kavont  
harz breman gant strolladou stank  
an Turked en em grevaet war an  
uhel.

Ar re-man o deus argadet en noz  
29 a viz du hag en deizioù war-lerc'h.  
Betek-hen ar Zaazon a zeu a benn  
d'o dizarbenn ; paket o deus kalz anezo  
da brizonerien.

**War vor hag en aer.**

An Alamaned o deus kollet, an  
28 eus ar miz diweza, eul lestr-tarzer,  
set a-stok ouz eun darzeret war neun  
dirak West-Capelle, Bro-Holland.  
Beuzet eo bet an holl dud war ar  
bourz anezan, nemet daou.

Ar 5 eus ar miz, eul lestr-reder  
alaman ar Bothnia, a zo bet goue-  
ledet en bevelep gis.

Al lestr-beajourien saoz, an « Apa-  
pa » 7.832 tonnell, a zo bet goue-  
ledet gant eul lestr-tarzer alaman.  
Choac'h-ugent eus an dreiziou a zo  
bet savetaet ; pevar-ugent den  
beuzet.

Nijerien an Alamaned o deus los-  
ket bombezennou en-dro da gêr  
« Nancy » ha war « Dunkerque ».  
Eur 5 bennak a dud glozet. Hon  
gwella meoz d'an aotrou Moal en  
em gav breman e « Dunkerque ».  
Ar 6 eus ar miz 15 nijerez alaman  
a zo aet a-us da Londrez ; 4 ané a  
zo bet diskaret.

**KLEBER EUS HON MIGNONED  
A ZO ER BREZEL**

**Kelou mad eus an Tad Daniel.**

Setu amaa eul lizer mad digant an  
Tad Daniel, a zo bepred en arme Breiz-  
Veur, hag a oa chomet pell bep rei  
eus e gelou. Bet eo en emgannou bras  
a zo bet en Hanternoz, heb beza tivet.  
Doue da vo meulet, ha da zalc'ho  
d'e viret bepred !

26 a viz Du, 1917.

Ma mignon mad,

Daoust na ve bet stank ma lizerou,  
n'ankouean ket ac'hanoc'h. Trugare  
d'ec'h evit « Kroaz ar Vretoned » a  
rezevan betek war an talben.

Bet omp en eur skrapaden, ha meur  
a nozvez hon eus tremenet o trolat  
en bem-hou. Bepred oun war va ye-  
c'hed mad, koulskoude.

Chenchet 'zo rajimant ganin... Kuit-  
taet ganin an « Hussard », en em  
gavan ma-unan gant ar c'houec'h  
kant marc'heger-man. Kemer a ran  
ma frejou gant ofiserien an trede  
« skouadron », a zo jentil kenan, ha  
plijadur vras hon eus asambles.

Straka a ra an dre aman. A drugare  
Doue, eman an amzer vad o tigeri,  
ha see'h an traou... Da vibanan, e vo  
gallet kousket « war ar zec'h ».

P'nevet d'ar Boch, ha d'an tamm  
dourni hon eus bet gante, koste  
Cambrai, e vijen bet en permission  
eur miz 'zo beanak. P'en em gavin e  
Sant-Brieg, ne vankin ket da vont  
d'ho kwelet.

Eur bedennig evidon, mar plich !  
Poan a ve a-wechou, hag ar vicher  
a zo kazus.

Ho mignon leal.

S. D.

# « Me a chomo du-hont ! »

En koun ma breur karet.

Eun nebeudig e oant e-barz ar « post bihan ».  
Hag an tarzerezed a goueze heb ehan ;  
An douar a grene gant ar strouadennou  
Hag ar peziou houarn a yude en-dro d'ê ;  
Hag a-us d'o fennou  
Ar Maro a c'hede.....

C'hoaz eur pennad amzer ha ne harzje hini  
Ouz an tan, ouz an dir, ar c'hurun, an dourni ;  
Tro-ha-tro e vezent stlapet ha distlapet,  
Goloet a zour, gwall-gaset a bep tu ;  
Spontus e oant tapet,  
Dour a-bil, an noz du.

Ne oa ket da laret, mervel a vije red ;  
Mervel heb brezeli, — ar gwasan d'o spered ! —  
Mervel war an dachen, en diavaez stourmad ;  
Mervel ken diskiant, heb bezan douget frouez.....  
— « Gwell eo c'hoaz mervel mad ! »  
A lavaras eur vouez.

« Hon lezel holl aman, eo hon c'has d'ar maro ;  
« Ar c'habiten a c'hall ober d'imp a garo ;  
« Met poanuis eo sonjal e renkfec'h holl kouezan  
« Pa na fell nemet daou.... Mont a ran d'e gavet...  
« Me a laro d'ezan,  
« Hag e vefet savet... »

— « Daou, a lavaret c'houi ? D'am sonj, avat, eun den  
« A vo neuze a-walc'h eme ar c'habiten...  
« Distroit war ho kiz, lezit unan eno,  
« Digasit ar re-all a-drenv..... Lakit evez !  
« Ar bec'h a zistano  
« A-raok fin an nozvez... »

— « Lezel unan eno !... Ha me dont d'ar c'hledour ?  
« E lezel e-unan dindan an tan, an dour ?  
« Biken, ma c'habiten !... Int eo ma c'henvroiz ;  
« Ar skouer a dleat d'ê ; am c'harout a reont.....  
« Mont a ran war ma c'hiz.  
« Me a chomo du-hont !... »

Hag ar zoudard kadarn, en-kreiz an amzer fall,  
Sklerijennet euzus gant tennoù ha tan-gwall,  
A zeuas war e giz, a-ruz, d'ar « post bihan ».  
— « Distroit, emezan d'e dud paour spouronnet ;  
« Me a chomo ma-unan ;  
« A-walc'h unan barnet ! »

— « Ne chomi ket, ma fôtr, a lar eur c'henvroad,  
« Me a chomo ganit, a lodeno da stad ;  
« Aboue ar penn kentan ma c'houzanvomp-ni poan,  
« Eo pec'hed marvel d'in en em guitaat breman...  
« Me a chomo heb doan,  
« Me a chomo aman ! »

Hag e chomont o daou e-barz an ifern-ze...  
Tan ha treuz ha luc'hed, ha gloaz en-dro d'eze ;  
Ar reuziad a dremen, ha, pa zeuont en-dro,  
En em c'houler penôs emaint c'hoaz en buhe...  
N'int ket eta maro ?  
Mil bennoz da Zoue !

« Me a chomo du-hont ! » komzou eur gwir zoudard !  
D'in-me, ar c'haporal, al lse'h fall, an toull stard !  
Mar kouezan, e kouezin oc'h ober ma dever,  
Hag espernet e vo ma zud eur wech ouzpenn ;  
Mantrus eo koll niver,  
Pa c'haller diarbenn.

« Me a chomo ganit ! » Hon foan a vo henvel !  
Komzou eur gwir vignon, a gar betek mervel ;  
A gar evit karout, a gar hep klask hiroc'h,  
Hag a heuilh e vignon zoken el lec'h gwasan ;  
N'eus karantez kaeroc'h  
E-kenver an nesan !

A telec'h e trec'h warni Prusianed  
En-keit m'he do ar Frans d'ha difenn Bretoned ?  
Bretoned evel-se a oar en em ouestla  
D'ar Vro, d'o zed, d'ar Gwir, d'o mignoned, d'ar Fe ?  
D'e n'hallomp ket gouela,  
Rak int hon gourdroutze...  
AR YEODET.

Kement-man, kontet d'in gant ma breur, — a oa ar c'haporal, — a c'hoarvezas en eur c'horoad hanvet « La Villo-aux-Bois ». An hini a chomas gantan a reuk beza eus Kerne-Leon.

## EUN ALI MAT !

Er « C'hourrier » eus an deiz kenta a viz kerzu, hon kenvereur enorus, an aotrou Corentin, en deus graet eur pennad skrid eus ar gwella diwar-benn sevel e pe parrez a Vreiz-Izel, evit derehel koun heñ c'henvroiz mervet er brezel, pep eur bez pe eun daolenn-vaen gant hanoioù ar zoudarded laz, evel ma vo graet e Lennon.

— « Ra zeuic re-all, eme an aotrou Corentin, da ober evel kuzul ti-kêr Lennon ! Archant a-walc'h a vezo kavet ma na c'hortozet ket re ziwezat. Buan e teuer da ankounac'haat ; eur miz goude ma vezo echu ar brezel e ve re ziwezat ; gwelloc'h eo en em gemeret abretoc'h azalek brema... »  
Setu aman eun nebeut menozioù leun a furnez diwar-benn ar brezoneg displeget gant an aotrou Corentin da heul e ali kenta :

— « Hag an hanoioù, evel ar gerioù all e brezoneg, war ar maez !  
« Souezus ha mantrus eo ne gaver, er berejou a-ziwar ar maez nemet skritur gallek war beziou tud ha ne ouient, koulz lavaret, nemet brezoneg. An divroïdi o tremen a dle lavarout : « Ni a zonje beza e Breiz. Sur e faziemp.  
« Dale homp d'hor brezoneg ; ha, pa gavoc'h tro d'hen ober, bezit, maerioù ka kuzulierien, skouer ho kenvroiz war ar poent-se evel war pep tra ! Gwelout ac'hanoc'h o lakaat skriva e brezoneg war vez ar barrez a vezo eun dra a bouez bras...  
« Ne ve ket souezusoc'h lenn brezoneg war beziou Pariz eget ma 'z eo lenn galleg war ar maez e berejou Breiz. »

E Bro-Gambre (« Pays de Galles ») e-lec'h e vez graet muioc'h a stad eus ar brezoneg eget e Breiz, e vez lakaet brezoneg, neket hepken er berejou war ar maez, hogen er c'hériou ivez. Ouspenn-ze, ar varzed a zo ken stank ha ken gredus e Bro-Gambre, a zell evel eun dlead d'ezo hag eun enor sevel gwerzennoù da enskriva war veziou o c'henvroiz. Netra gwelloc'h da deneraat eur galon vreizad ha da drei an eneoù ouz Doue eget ar gwerzennoù brezonak-se skrivet war ar beziou, tennet ma 'z int ar peurvuia eus komzou ar Skritur-Sakr ha promesoù hon Zalver diwar-benn ar Vuhez-dazont !

## Eur zell ouz an Diabarz

Er zizun drem-ne, n'em eus ket gallet skriva d'am « C'hoaz » karet. Met, neket, al labour da genta ! Soudarded omp. Red eo senti ; goude, pa vezo echu al labour, hon frankiz neuze. Ar zizun dremez net a zo bet poanuis ; houarn marteze a vezo skanvoc'h...  
Eur ger hirio diwar-benn traou an diabarz, rak war an talben n'ebend a dra a nevez.

Abaoe pell amzer ne waler war ar ga zefennou nemet traou louz : aferioù Bolo, Goldsky, Malvy, ha kenseurted... En desped ma 'z omp soudarded, an traou-ze a zell ouzomp. E pad m'emomp o lakaat terri hor penn, lod all a zo o werza ac'hanomp !  
Eun den hepken en deus klasket digeri an daoulagad abaoe pell amzer. Tamal let en deus Malvy da veza gwerzet ar Vro, neket hepken en arsañh « Heñt an Itroned » e miz ebrel 1917, mes abaoe tri bloaz. Petra a zo arruet ? An aotrou Daudet a voe darbet d'ezan beza plantet en toall, hag egile beza lakaet uheloc'h eget Doue...

N'eo ket souez ! Met, evidomp soudarded, n'eo ket se ! An Trec'h, ar Viktor, pe netra ! Poanuis a walc'h ac'houzanvomp. An dreitourien ! Daouzek bouled en o c'hroc'h en ! An dud onest ia veza se laouet !  
Ni, emichans, a zo kig ha gwad evel to ! A bean ar fin, ar c'hlemmoù a reoko beza selaouet ; eme aman an dalc'h ! Eno eman diazez an Trec'h !

Ar Zoudard koz  
War an talben, 3 a Gerzu 1917.

## NOTENNOU

XV

Ar poulzer a baouezas kercent da drei evit adkregi eur pennadig goude, met en eun doare dreisoc'h. Hag e welen neuze an nijerez paour, eur sklérjenn hevel ouz tini eun tour-tan a-raok d'ez, o tiskenn d'au douar buan buan...  
Tizet e oa ? Droug a oa c'hoarvezet g'nti ? N'ouvezet ket war an taol. An deiz war-lerc'h, e klevan ar wirionez. An nijerez a oa alaman, ha red d'ezhi diskenn war hon douar, a-dreg hon c'hanoierien, da nav eur hanter eus an noz. Diou ofisour a oa euni, hag ar re-man, grounnet gant hon zoudarded, a vennas c'hoaz teona gant o mindrailherez. Tapet e oant bet memes tra, hag an eva loas da heul. Mezek a-walc'h e

oant, goude, o tremen dre « Rosières », ha fent a-walc'h ivez hon devoa gante. — « Kapout, kamarad ! Kapout ! »

26 a ebrel.

En-pad an deiz, labour ha labour tennoù. Eun estlamm eo gwelet al labourioù a vez graet dre aman eur pennad a ze...

Nag a goad dispennet evit ober kledourioù ! Stoc'hennou teo, pladennou don ha ladan, postou nerzus ha plench a vernioù.

Hag a houarn ivez ! Hep mar e prienter taol pe daol, rak kement-man, d'am c'hreden, a zo graet en sell ar c'hrog bras a vez komzet d'imp anezan hag a vo, a lavar kalz, ar c'hrogad diwezan...

Mad, mar de, paotred ! Met na gontomp ket re warnan c'hoaz... Eur c'hrogad bras, ya ! Met an hini diwezan ? Gortozomp...

Eur c'helou ar gwellan ! Ar Russianed a deu d'hon sikour. A-leiz eun nebeut listri ane a zo diskennet en Marseilh, ha c'hoaz e tenio, war a glevomp. Digemer mad d'ê ! Kalz a zo d'ober hag, er mizioù tremenet, o deus diskouezet, dre o gounidou en Azi-Izelan, ez int gouest d'eur dra bennak.

Daoust da ze, e kavan poanuis e renk breman Bro-C'hall gervel he mignoned d'he vikour ha d'he dizamma, bi hag a oa gwechall ar vestrez hag ar rouanez vras karet ha doujet gant holl vroioù ar bed...

Ya, met, d'ar c'houz-se ivez, e oa enni eur penn, eur mestr, eur roue, ha, betek ar brezel, n'eus met politikerien o ren anezi... Nag a dra da laret diwar-benn kement-se, panevet gouzout Petra ha piou !

27 a ebrel.

Devez divlaz. An Amzer a zo kaer, dispar. Eur valeaden a-raok lein ; frankiz betek an noz. Evl kustum, e skrivan evit ar re-all hag evidou ma-unan. Evit gwir, ne ran nemet se en-pad an abardevez. Keu hoaz eo ar re-all d'am gwelet o skrivan, pe o vont war ar c'hlaer gant paper ha pluen m'o deus les-hanvet ac'hanou e ar Skrivagner ».

Mad adarre, pôtred !

28 a ebrel.

Netra d'ober c'hoaz ! Ar re-all, emê, a laz an amzer. Pec'hed eo komz evel-se. An amzer a zo talvoudus. Implijomp anezi ervad ; n'eo ket re hir...

Hirie, diouz ar beure, ez eun chomet eur reziadig mat el liorz, o selaou eun eostig o kanan.

Hag a enoi tener a ziovan em c'h'alou ouz e glevet ! Elvor pardon karet Sant-Servez pa chomen, o tistrei dioutan, da zelaou hevelep kan a gleven neuze en daou du d'ar C'hoaz betek Kerbernez ; enor nozvezioù dudius tremenet en Koad Duod, en-pad miz mae, o honvreal gwechall ma-unanik ; enor gweziou, sonioù ha barzonegoù « Bleunioù Yaouankiz », savet an darn-vuan ane a-gervred gant kan an eostig-kuz, an telennou-noz, awennour ar Varzed !...  
A seurt enorioù a ra d'in ankouaz ar brezel, nijal ac'han... a spered, ha bevan eur pennad evurusted du-hont, war « ma Charreg », dindan Barr-Roz, en-kichen Kerbernez.

Siouaz ! Arabid hunvreal. Mueuz ar c'hanoioù a gleva fraez mad. Brezel a zo c'hoaz, ma fôtr !  
Kan bapred, eostig, ha luskel d'in ma enorioù, ma trec'hun d'an droug-hirnez !

Da heulia.

AR YEODET.

Ar Renner-Merour : F. VALLÉE.  
St Brieg. — Imprimerie St-Guilhem





PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.

Kas al labourioù d'an sotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An sotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

Aluzennoù da « Greaz ar Vretoned »  
d'ho c'has da zoudarded ar Vro

Eur Mignon kristen ha breizad..... 20 real.

A-unan gant e aluzen vadeleuz, bon mignon ker en deus digaset d'imp eul lizer kalenek : « Bloavez mat ha yec'hed digant Doue, d'ec'h da gendec'hell pell amzer c'hoaz gant al labour ken talvoudus a ret evid ar Vro hag ar Fe !... » En hano « Kroaz » hag hon zoudarded, mil bennoz-Doue d'ezan !

Enor d'an 19vet Rejimant war droad !

Klevet em boa lavaret, en devezioù etremenet, e tlie an 19vet Rejimant reseo ar « fourragère » evid al labour vad en deus graet abaoe penn kenta ar brezel. Dec'h ar c'helou a zo deut da wir. Ar jeneral Petain a zo deut d'hor gwelet.

Abaoe ar mintin ar glao a goueze puih, met, goude lein, e tavas. Koulskoude, koumoul teo a vouge bannou an heol.

Ar jeneral en em gavas war-dro diou eur. Pa ziskennas eus e wetur dre dan, muzik an 19vet, renet gant an sotrou Esvan a zo brudet dre ar bed-oll evid e ouiziegezh, a c'hoarias ar « Marseillaise ». Digemeret e voe ar jeneral Petain gant ar jeneral Capdepont. Hor mestr bras a reas eun taol-lagad war ar blenen, hag a zeuas war-zu ennomp. Bras eo ; eun ear yaouank ha mad en deus, nemet war e zriem e lenner an asken.

Ar jeneral Petain a reas ar « weladenn », ar « revue », en-dro d'ezan bannielloù an 19vet, 62vet ha 118vet rejimant. Pa voe ochu e dremen dirag ar zoudarded, ar c'holonel eus an 19vet a gemeras banniel e rejimant, hag a gerzas war-zu ar jeneral. Heman, seder evel eur paotr yaouank, a stagas ar « fourragère » en-dro d'ar banniel ha, goude-ze, war skoaz ar c'holonel. Hon ofiser, anezan eun den eus an dibab, a oa an daerou en e zaoulagad. Goude, ar jeneral a roas kroazioù d'an ofiserien, is-ofiserien, ha soudarded.

Pa voe echu, ar rejimant a dremenas dirag ar jeneral. Ar muzik a rōe kalon d'ar zoudarded da dremen direbech, souñ o fenn dirag o mestr bras.

War-lerc'h an dremenadeg, ar jeneral a gaozeas gant an ofiserien. Ar muzik a rentas an enor d'ar banniel, hag a c'hoarias ar « Marseillaise » pa 'z eas ar jeneral kuit.

Lavaret a raen ez oa ar jeneral eun den karet. Setu aman eur skouer. Eur zoudard, bet e ordrenans p'edo kolo nel ar 118vet, e Kemper, a c'houlenn

das kaozeal gant e vestr koz. Dirag an holl ar jeneral a gaozeas gantan evel eur mignon. O daou, soudard ha mestr, o daouarn en o godelloù, a varvailhas e-pad eur c'hard-eur. Ar jeneral Petain n'en deus ket ehanet morse da skriva d'e ordrenans eus an amzer dremenet. Meuleudi d'ezan !

Goude-ze, ar jeneral eus an Division a gomzas d'ar soudarded hag, en eur veuli anezo, a lavaras dreist-oll gant eur vouez nerzus : « Erfin, an 19vet rejimant a reseo an enor dleet d'ezan abaoe pell amzer ! »

War-dro peder eur, e tistroas ar rejimant e kear, hag, a-raok an disparti, e voe rentet adarre an enorioù d'ar banniel.

Devez enorus evit Breiz hag evit ar rejimant !

Va Bro garet, bez stad ennout gant da vugale !

Ar Zoudard koz.

War an talben, 9 a Gerzu, 1917.

Enor da zoudarded Breiz-Izel !

Taolen ar Brezel

Kemeredigez Jeruzalem.

Eur c'helou hag a drid gantan kalon an holl Gristenien : Kemeret eo bet Jeruzalem, dizalc'het diouz domani an Turked divadez zelc'h ar Basion ha Bez santel Hon Zalver !

Ar zul, 11 eus ar miz, eo e voe kaset da benn an taol-kaer-ze gant ar jeneral saoz Allenby.

Adaleg ar yaou, 8 eus ar miz, e oa aet d'an Turked, en em grenvaet war an uhel er c'hreisteiz hag er c'hornog da Jeruzalem. Dre ober d'ezo kila, e teuas a-benn da gelc'hia war ar gêr zantel ha da redia ar warnison anezi d'en em rei. A drugarez d'e ampartiz-brezelour, ne voe losket ouz Jeruzalem tenn kanol ebet...

Da drugarekaat an Aotrou Doue evid an trec'h-ze e voe brallet ar c'hleier ha kanet an « Te Deum » e Pariz hag e Londrez.

War talbennou an Europ.

En hanternoz, ar Zaozon o deus ranket lezel da zistrei gant an Alamanked eur c'hornig eus an dachennad a zalc'hont breman dirak « Cambrai ». Nemet e van ganto, evit se, ar pep brasa eus o gound !

War linen ar Fransizien kanohiadeg ha krogadon aman hag ahont. An Italiaard o deus kollet eur strollad menezioù, hanvet « Meletta », war uhelen vrudet « Asiago ». Derc'hel mat a reont, a-hend-all, a-hed o linen, gant ar re-Unsnet a zo diredet d'o zikour.

Ar Roumaned o deus ranket digemeret, int-i ivez, an arzao-brezel, dilizet ma oant gant ar Russaned.

Ar re-man, paouezet ganto da vrezeli, a wel breman o fazi, pa c'houlenn an Alamanked diganto, war a lavarer, o c'hêr-benn Petrograd, o listri-brezel hag o douaron edus ken brudet war ribl ar mor Du. Muntrret ar jeneral-meur Doukhonine gant an dispac'herien, e chom c'hoaz daou jeneral akuit e penn ar Gozaked, Kaledine ha Kornilot. An daouman a c'helle c'hoaz trei penn d'an traou !...

Dispac'h er Portugal.

Er Portugal, da heul eun dispac'h e Lisbonn, kêr-benn ar Vro, setu diskaret prezidant ar Republik, ha chechet ar gouarnamant. Nemet ne greder ket e pouezo an taol-ze war ar brezel.

Brezel war vor.

En noz, etre an nao hag an dek eus ar miz, e teuas a-benn an Italianed da zigas o listri skanv e porzmor Triest, brasa porz-mor brezel an Aotrich. Goueledet o deus ennan eul lestr-brezel d'an Aotrichianed, ar « Win », 5600 tonnoll.

An aotrou Caillaux tamallet.

Ar zizun ziweza, hon c'henlabourer ker, ar « Zoudard koz », a c'houlenne aman ma vije serret prim an holl dreitourien.

Setu eman, evel evit ober diouz ali hon mignon, ar jeneral Dubail, gouarnour Pariz, o c'houlenn digant ar Gambur ma vo rôet aotre d'ezan da c'hervel an aotrou Caillaux dirag ar c'huzul a vrezel.

Pell-ze o oa brud e tlee an aotrou Caillaux beza e kuz a-dreñv an holl drubuilherien-ze ma vez komzet kement anezo... Nemet ne grede hini e damall. A drugarez d'ar jeneral Dubail, setu graet an taol ar wech-man !

EX...

Pa vezomp e-kreiz an tan ruz, Oh ! ni ne vezomp ket etrus !... Pa ra glao, pa vez amzer fall. Pa welomp en noz an tan-gwa ll Pa vez freuz ha taba'h en ear, E teu da zoug d'in eus ar gear, Eus Bodiliz, boure'hig didrouz, Hag eus va mamm gant he c'hoef rouz, Eus va zad 'zo bet gant Goulc'hen Er brezel dek-ha-tri ugent, Eus va douzig koant ken seder, Loun a garantez em c'henver.

An holl draou-ze a deu d'ar red D'ober plijadur d'am spered.

Met... ar c'hanolioù e kounnar A lak da grena an douar, O skei yud war vourc'h X... Gwechall ken kaer ha Babylon, Gant he stréjou, he menezioù, Ar gwez-frouez el liorzou. N'eo ket souez eo bet hanvet Ar vro « Hent an Itronnez ». Ar brezel en deus chechet penn, Ya, chechet doare d'an daolenn ! Noz-deiz e tregern ar ruioù Dindan klemmou an obuzioù O trailha hag o tifoanti Kement gwezen ha kement ti. An tammou dir, an tammou houarn, A nij tomm en-dro d'hon diskouarn. Gwasoc'h eget gwesped en hanv, E flemm an tennou dre aman. Gouest eo ar c'hanolioù garo Da zihuna ar re varo.

Pell hag hir, ar ger X... A chomo skrivet em c'halon. Derc'hel 'rin souj 'hed va buhez Eus eur vourc'h ken dia a druez. YANN PAOL, Telefoner.

Pedomp sant Kaourintin !

An 12 eus ar miz-man e tigoueze goul sant Kaourintin.

Sant Kaourintin, kenta eskob Kemper en amzer ar roue Gradlon, gwechall goz, eo unan eus ar seiz sant o deus savet eskoptioù Breiz. Setu aman hanoioù ar re-all : sant Paol, sant Brieg, sant Tual, sant Patern, sant Malo ha sant Samson.

E tu-hont da zaou c'hant vloaz a zo e veve e Kemper eur plac'hig paour hanvet Ka ehl Danielou. Dilezet ha gwall-gaset gant he mamm a oa eil-zimezet, pa na ouie da biou en em erbedi, e pedas sant Kaourintin da zont d'he zikour.

Hag ar zant mat a zelaouas ouz peden ar plac'hig paour. En em ziskouez a reas d'ezl eur niver a wech, ken alies ha bemdez, kouls lavaret, d'he c'hentellia war wirioneziou ar Feiz ha d'hec'h euna e pep giz war hent ar vuhez Sklêrijennet gant e alioù, Katell Danielou a rôas harp eus ar gwella, dre he fedennou hag he finijennou, d'an Tad Maner da nevezit ar vro a oa bet gwalltel ha direzitet e pep giz gant brezelour kriz.

Eur wech, dre eur weledigez, Katell Danielou en em gavas dirag Hon Zalver, hag hen droig ennas gant an holl zizurzioù a vele oc'h ober o reuz e Breiz da heul ar brezel. Neeze e teuas sant Kaourintin da hanterouh hag e tennas war hon bro Breiz drugarez ha karantez Doue. Evel en amzer Katell Danielou







**PRIZ AR CHOUMANANCHOU**

46 real ar bloaz, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad evit ar broioù estren

**RENERIEN**

**E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.**

Kas al labourioù d'an aotrou Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieg.

**EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU**

An aotrou H. MIARD, 27, bali Charner, a zigemer ané

**Atuzennoù da « Greiz ar Vretoned »  
d'ha c'has da zoudarded ar Vro**

An aotrou Even, evit de-rou-mat ar « Groatig ». 2 skoad.  
Trugerez a greiz kalon d'hon mignon ker evit e « zerou-mat » ken madeleuz !

**ENOR**

**Da vartoloded Vreiz !**

Ar zizun ziweza, e tisplege aman « ar Zoudard koz » penaos e oa bet roet ar « fourragere » d'eur rejimant Vreiz-Izel, an 19vet war droad.  
Setu eman hon martoloded, eus rejimant brudet « ar Fusilierien a Vor » o paouez gouñt, int-i ivez, ar « fourragere », a liou gant medalen ar zoudarded.  
Enor da vartoloded Vreiz !

**Taolen ar Brezel**

**War dalbennou ar Veljig  
ha Bro-C'hall.**

An Alamanned a zo aet meur a wech adarre d'ar Zaozon, dreist-oll e Bullecourt, er gevred da Arras, heb dent a benn da vout ha da vad o linen.

War dalben ar Fransizien, eun nebeut krogadou aman hag about. Eur c'hrogad a zo bet adarre e « Koal a Zoul », e-lec'h ez eus kalz eus hon c'henvroiz. Hon gweñta menoz d'ezo ! Kanoliadeg start, a-hend-all, war ribl ar « Meuse », dirak Sant-Kantin hag en Alzas.

**En Itali.**

Kavet ganto harz da vat a-hed ar Piava hag ar Brenta e karfe an enebourien toulla o hent dre eur striz-douar en em astenn etre an diou stêr-ze. Diou arnead o deus eno : unan a Aotrichianed renet gant ar jeneral Krobatin, en eben Alamanned gant ar jeneral von B-low. Em-gannou taer a zo bet e penn « e Beretta », test da stêr « Brenta ». Betek-heo, an Italianed a zalc'h da vat, skoaziet na 'z int gant ar re-Unanet diredet d'o zikour.

**Er Rusi.**

Diés eo gouzout da wir petra a c'hoarvez er Rusi aboue m'o deus Lenine ha Trotsky, an daou Alamanned drouk-wisket e Rusianed, graet eun arzañ-brezel gant an Alamagn. Mesk a zo bepred e Petrograd dia-

dan « Paotred ar pal pella ». Ezebi a reout ouz izili ar gouarnamant nevez, dilennet gant ar bobl, betek serri ar reanezon 'int ket a-du ganto. Er-maez a Petrograd, e kavont harz da vat digant ar Gozaked : krogadou a zo, hag ar gwad a red. Eun drez !

**War vor hag en aer.**

En noz, etre an 12 hag an 13 eus ar miz, an Alamanned, kelennet mosvat gant o spierien, a zo aet, e mor an Hanternoz, d'eur strollad a 6 lestr-marc'hadourez, eus broioù Norvej, Sued, Danmark ha Bro-Zaoz, a oa ambroget war o zreizaden gant daou lestr-brezel skañv a Vro-Zaoz. Unan eus ar re-man, an « Partridge » a zo bet gouledet ; egile en deus gallet en em repui en eur porz-mor a Vro-Norvej. Evit al listri-marchadourez, hini anezo n'en deus gallet tec'hel kuit.

An 12 eus ar miz, da 4 eur ar beure, eur strollad all a listri a voe taget gant an Alamanned war aochou Bro-Zaoz ; tri lestr a zo bet gouledet.

An 18 eus ar miz, eun 20 nijerez bennak eus an Alamagn a zo deut adarre a-us da Londrez ; lazet o deus 10 den ha gloazet 75. Diou anezo a zo bet diskaret.

Ar 14 eus ar miz, al lestr-reder « Châteaurenault », karget a zoudarded, a zo bet gouledet er mor Kreizdouarek. An holl dud diwar ar bourz anezo a zo bet savetaet nemet seiz. Al lestr-splujer en doa e ouledet a zo bet tizet d'e dro gant hon martoloded ha kaset d'ar strad.

**GWERZ AR BRIZONERIEN**

War don : C'houi pere 'zo kristenien.

Breudeur, ni 'ghev ho klemmou  
Pell diouz ho pro Arvor ;  
D'ho monez ha d'ho euzommou  
Hor c'halon 'zo digor.  
Ni a rayo aluzen.

Dre bevar c'horn ar vro,  
E-touez an holl Gristenien,  
Ha d'eoñ ni o e liaso.

Diwar eur stourmad garo  
C'houi 'zo bet prizoniet ;  
Kalz a re-all 'zo maro  
Dindan taol ar Voched.  
Breman, pell diouz ho tudou,  
E-barz eur vro estren,  
Dalc'het oc'h a vilierou...  
Doue, pebez anken !

Dindan yeo ar C'hermaned

**MARO AR BARZ**

E koun A. Marec, lazet a-ziala ar « Gwall-di ».

An heol, a-rok sarr-noz, pa strink bannou lintroz  
Dre douez ar c'houmoul war ar bed,  
Pa deu, en oabl tenval, da bara lugennus  
War volz an nenvou-ar stered ;  
Pa led an noz war an douar kaon he mantel,  
Eus dounder ar fozioù-brezel  
Me 'zonz ennout, o Breiz-Izel !

Pa zigouez pred ar stourm, ha ma red didruez  
Skeud an Ankou, skeud an Anaon,  
Ma santer pegen bresk eo neuden ar vuhez,  
Trec'h d'imp ar spouzoù hag an aon,  
C'houez avel ar Maro, ha darnij e askal  
Pa laront ez en red mervel,  
Me 'zonz ennout, o Breiz-Izel !

Gant va gwad ma tigouez d'in ruzia an dachen  
Dre reuz eun noz a lazere,  
Ha ma torr va Ene e ubal da viken  
'Vit bava ar Beurbadslez,  
E par va zremenvan c'halvin bro va c'havel ;  
Skilasat e klozo va muzel  
War da hano, o Breiz Izel...

TELEN ABER.

Na reuzedika stad !  
'Vit nikun damant ebet !  
Na pebez kalonad !  
Al labour a zo ken tenn,  
Ar bevans ken dister ;  
Avel, glao ha yenien...  
Morse n'oc'h dibreder.

D'ar zul ha d'an holl c'houeliou,  
En eur park dastumet,  
Dirak sujidi Gwilhou,  
Gant tiz 'vec'h diskouezet ;  
Evel al loened gouez  
Dalc'het en eur gaoued,  
Gant orjal treiz, didalvez,  
C'houi 'zo dizarbennet.

Eus ho kêr, eus ho tudou,  
Traou sakr, traou banniget,  
Alies heb eur c'helou  
E vezit-hu dalc'het.  
En ho kalon 'z eus kalz doan,  
Ho poaniou a zo kri ;  
Dindan dorn an Alamann  
Pebez merzerenti !

En ho touez, tud dinerzet  
Gant eur vuhez c'haro,  
Ken stank ez eo ar c'hlenved,  
Stankoc'h c'hoaz ar maro.  
An dud keiz a jom c'hoaz,  
Goude n'oun ket ped miz  
A zo kazi e noaz,  
Truezus e pep giz !

Ar re 'zo gwall-vac'hagnet,  
Karget a c'houlou,  
Peurgaset gant ar c'hlenved

Du-ze, er c'hlanvdiou,  
A vez pelloc'h digaset,  
— Na pebez chenchamant ! —  
D'ar Suïs, bro gaer, ken karet...  
Fin a zo d'o zourmant.

Lod all, kadourien ampart,  
A dorr o chadennou,  
A dreuz an orjal trubard,  
A lamm dreist ar fozioù ;  
Goude pep seurt trubuilhou  
E-kreiz eur bobl estren,  
Ec'h errount war harzou  
Hor bro goant, al Lorèn.

C'houi pere 'zo kristenien,  
Ha ne glevit-hu ket  
Eur c'hri 'zo leun a anken  
Eus pevar c'horn ar bed ?  
Selaouit petra c'houlou  
Ho prauereur gwalleurus ;  
Evito grit aluzen,  
En han' Doue, Jezuz !

Ha c'houi, soudarded ar Frans,  
C'hoaz en taibennou,  
Sonj ho po, heb douetans,  
Eus kement a boaniou ;  
War ar Boch, vil ha treitour,  
Bec'h dre-oll, evit mat !  
Janed Ark deuy d'ho sikour,  
An trec'h 'po er stourmad !

Yann-Mari NORMAND.

S a viz Kerzu, 1917.



# KREIER EUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou eus G. Mazeas. — Maro eur barz.

Setu aman eul lizer mat digant hon mignon ker G. Mazeas. D'ezan hon gwella menoz, ha d'hon holl genvroiz all a zo gantan du-hont en-dro da Verdun!

Unan anezo, siouaz! a zo kouezet, nevez zo, warandachen enor: A Marec, an hini en deus Mazeas savet d'ezan e zon geer « Maro ar Barz ». Ya, eur barz a oa anzan, dourinet mat kenan da skriva en hor yez venniget! Ar pennadou sinet « Santou », a lennoe'h en niveren-man, a oa bet skrivet gantan evidomp; digaset int bet da « Kroaz ar Vretoned », goude e varo, gant G. Mazeas. Eur Barz ouspenn o rei e vuhes evid ar Frans, ... goude kel lies a re-all! Gant ma vo anaoudek, eun deiz da zont, ar Frans ouz Breiz-Izel a ro d'ez ar pep gwella eus he bugale!

Digant hon holl lennerien e c'houlennomp, en amzer-man a Nedeleg, eur bedennig d'ar Mabig Jezuz evit hon lenner ker, A. Marec, ar Barz « Santou ».

Setu aman lizer Mazeas:

Er foziou, an unneg a Gerzu.

Aotrou Rener ha mignon ker,

Dizo a « bermission » eur wech c'hoaz, e kasan d'eo'h eus va c'helou. Evid ar gwella bepred l...

Kavout a ris va mignoned er foziou en eur ziret ha, d'an nao eus ar miz, e klaskas ar Voched c'hoari eun taol d'hon rejimant, goude stlepel ganeomp eun niver tarzerezed « Minenwerfer ».

N'o deus gallet ober netra, hag o c'hellou a zo bet brasoc'h eget hon reni. Ouspenn-ze, ez eus chomet meur a Voch etre hon douarn. Aman n'eo mui ken sioul ha m'eo bet e-pad hir-amzer.

Red eo d'in lavaret eur ger diwar-benn al labouriou a welan o vont war wellaat ha war grek bepred e sell eus hon Amzer da zont.

Kasetennou a gomz kalz eus an « Digreizenno », en eur alia an dud diwar-benn ar « rapinvroadelez ». Ouspenn, e welan gant plijadur kelouennou evel ar « Chourrier » o startaet da labourat evit Breiz hag evid brasa mad ar brezoneg l...

Pegen reiz eo pennad « Corsetin » diwar-benn ar gwerejou! E ped farrez ne ve ket derestoc'h gwelet eur ger brezonek bennak war ar c'hroazlou, e lec'h ar « Cigil », eur ger ken divalo pa zontjer mat eman! Pa na gaver ket e gallet eur ger frealzooc'h egetan, klaskomp eta en hor yez hag en hor c'helou vreizad geriou hag a zihuno eun tamm gwelloc'h fizians er « Vuhed da-zont »!

D'eo'h ha da holl diegez « Kroaz » holl venozioù he kenvroad.

G. M.

Kelou eus Yann Mari Normand.

Meuleudi hon c'houlabourerien.

A-unan gant e werz kaer « ar Brizonerien », Yann Mari Normand a zigas d'imp eus gelaou — a zo mat bepred, a drugarez Doue — hag ivez eur ger a veuleudi evit hon holl genlabourerien, a labour ker kalonek evid Doue hag ar Vro.

8 a viz kerzu, 1917.

Aotrou Vallée ker,

Lennet em eus adarre gant kalz plijadur « Kroaz » ar zizun dremaet, enni kelou eus hor mignoned Loelz Herrien ha E. ar Moal.

Ar « Zoudard koz » a ro d'eomp atao kuzullou eus ar re wella, ha « Notennou » ar Yeodet a zo enno eun testi ken gwir eus koadarned ha feiz ya'h ar Vretoned war an holl dalbennou!

Parrez Lennan a zo deut gant ivez eur skouer vat kenan, ha gwerzioù an aotrou Henri a zo troet bras-dreist, ... Ya'h-pek oun atao, daoust d'ar yenien.

Reket a ran d'eo'h kemend-all, kouls ha d'an holl vignoned skignet e pevar c'horn ar bed.

Y. M. N.

Kelou eus E. Léger, tigozeuzout eus ker ar « fa munud ».

Kelou mat a zigouez d'imp eus hon c'henvroed ha mignon E. Léger, en doa kuitaet Sant-Brieg eur pennad a gant Bretoned all. Ra zigomero, hen ivez, gwella menoz « Kroaz », hag he netou mat evid eun « Nedeleg

laouen » d'ezan ha d'an holl genvroiz a zo gantan e « Ker ar fa munud »!

Ar 14 a Gerzu 1917

Aotrou ha mignon ker,

Va digarazit ma n'em eus ket skrivet d'eo'h eur pennad a zo. N'em eus ket bet amzer d'hen ober en desped d'am c'hoant. Chenchet em eus lec'h; emoun breman tostoc'h d'an « trancheou », dre gichen S., eur ger bras a-walc'h, anavezet mat gant ha « fa munud », ha bombezet c'hoaz a-wechou.

Bemde e weler ar « pothouarniou » boch o koueza war ar menezioù dirazomp. An nijerien alamaou a deu ivez d'hon bizita, daoust d'hor c'hanolioù. Koulskoude, n'omp ket bet bombezet c'hoaz, ha fizians am eus da zont en-dro d'ho kwelet evel ma mignon ker Loskin, a zo bepred gant an Amerikaned.

Ni a zo aman gant ar 6vet a ijineraz a Angers, a zo kalz a Vretoned ennan. Komzet e vez brezoneg kalz dre zunan. Ar blijadur am eus bet da g'avout aman mignoned o deus kuitaet Sant-Brieg a-unan ganin. Erfin, n'omp ket re wall-eurtus!

Digemeret a ran « Kroaz » bep zizun. Trugarez d'eo'h!

War an hini ziweza em eus lennet gant kalz a zudi ho pennad diwar-benn eured « Koulmig Arver » Kemeret em eus raktal ar frankiz da gas d'ez va gwella gourc'hennou... Chans vat d'ez va d'he fried!

Setu e tont gouelioù Nedeleg! Trist a-walc'h e vezint evidour er bloaz-man. Fizians am eus e c'hellimp tremen an Nedeleg goude er ger, echu da vat ar bezel l...

Gourc'hennou d'hon holl vignoned e Sant-Brieg. Ho mignon leal.

E. L.

Hon lenner ker Yann ar C'haroff e Salonik, gant kenvroiz all.

Hon gwella menoz d'hon lenner ker, Y. ar C'haroff, ha d'hon c'henvroiz all, o deus ranket kimiadi gantan, da vont da Salonik. Setu aman lizer Y. ar C'haroff!

Salonik, 27 a viz du 1917.

Aotrou Rener koz, kenvread ker,

Eur pennadig 'zo n'em eus ket roet d'eo'h eus va c'helou, rak ranket em eus kuitaet talben ar Fraus, evel kalz eus va mignoned.

Dre eun dennadeg d'ar zord etre teir rejimant ez eo digouezet warnomp mont kuit. Ha setu ni e Salonik, ar ger hanter-zévet... Ar veach a zo bet mat-tre, ha va yec'hed a chom bepred krenv.

N'em eus ket lennet « Kroaz ar Vretoned » eur miz a zo. Kalz a blijadur a rafe d'imp, ma c'hellfe dont betek aman...

En eur c'hortoz ar poent-se, d'eo'h ha d'an holl vignoned a wir galon!

Y. AR C'HAROFF.

Kelou mat eus hon mignoned eus an 79vet rejimant koz.

Eul lizer mat hon eus bet digant hon lenner ha kenskrivagner ker, J.-B. Jannin, a zo er 79vet rejimant koz gant an aotrou Moal hag ar barz H. de la Guichardière. Hon gourc'hennou d'ezo holl!

Ar pemp a viz Kerdu.

Aotrou Vallée ker,

Abous eur pennad-amzer 'zo emomp aman. Ar yec'hed a zo mat a-walc'h ganin, a drugarez Doue, hag ivez gant ar vignoned. Bemde e welan ma mignon, ar Moal. Hon daou omp er memes kompagnunez.

Dre aman an amzer a zo yeaet. Da vihanan, n'omp ken er foziou. Kredi e ran e tremenomp ar goanv dre aman.

Ho mignon.

J. B. J.

## Frankiz ha Labour!

Goude an 9 a Gerzu, devez ken enorus evid an 19ved rejimant war droad,

# GLOAR DA JEZUS !

## KANTIK EVIT NEDELEG

WAR BON : Elez eus ar Baradoz

Kanomp hirio, Kristenien, da Jezus hor Zalver, Navez ganet evidomp en eur c'hraouig distier; Kanomp holl a greiz kalon kanomp holl a samblez; Enor, gloar ha meuleudi, doujans ha karantez!

Jezus, Mab an Eternel, gwir den ha gwir Doue, Ni 'gred ez oc'h hon Aotrou, hor Mestr hag hor Roue; Pe war vrec'h ho Mamm zantel pe war ar plouz katel, Ni 'wel, stouët d'hon daoulin, hor Zalver benniget!

Bennoz bepred d'eo'h, Jezus, a zo deuet er bed-ma Evit tenna diwarnomp pec'hed hon tud kenta, Hag hon bleina holl goude war hent ar Baradoz... Oh! la pebez karantez! bennoz, Jezus, bennoz!

Siouaz, betek-hen, Jezus, hor c'halon baour atô Yen-sklaz 'zo bet 'n ho kenver ha kirieg d'Ho maro; Mez, gant skoazel gras Deuê, en amzer da zoned, Ni 'vo fidel d'Ho lezen, gant euz ouz ar pec'hed.

Ouspenn, p'è gwir e chomit ganeomp war an Aoter, Ni 'zeuy heb miz d'Ho reseo gant eur galon denier; Ganeoc'h, Jezus, 'n hor c'halon, ni 'vo pur ha santel, Ha gant aked ni 'hellio lezen an Aviel!

Enor, gloar ha meuleudi d'hon Doue benniget, Tad, Mab ha Spered-Santel, tri Ferson an Dreinded! Ya, gloar e barr an Nenvou d'hor Mestr holl-e halloudus, Ha gwir beoc'h war an douar da zikibien Jezus!

Ar c'hantik-man, aotreet gant aotrou eskob Kemper, a zobet moulet war gartennoù-post eus ar brava.

Da gaout eun-douzen anezo kas 6 gwennag timbehou d'an oberour, an Tad Trebaol, Town Major's Office, Estaires, Nord.

## FENTIGELLOU

Hent Landerne.

Eur wech e oa, ... en eur c'harr-dre-dan, eun aotrou hag eun itron gwisket-kaer o kerzet war hent Landerne.

Digouezet en eur c'hroaz-hent, an aotrou ne oar mui e pe du trei, hag hen mont da c'houlou e hent digant eur vaouez koz a ziwalle he zaoud war vord an hent.

— « Ha gwir eo, emeran, ez an hent-man da Landerne? » —

— « Fidandouen, eme an hi goz, ma'z eo gwir, n'ez a ket alies, Pemzek vloaz ha tri-ugent a zo hen darempredan, ha biskoaz n'em eus e welet o vont ac'helen.... »

SANTOU.

## TENNADEG

Ar c'hoari-sac'h evid ar brizonerien.

Ar c'hoari-sac'h (pe « loterie ») evid ar brizonerien, hon eus graet eun embann c'hoaz evitan, ar zizun dremaet, a vo tennet er 25 eus ar miz, hep mank.

Prizioù bras a zo da c'hounit en tu-hont d'ar priz kenta a 20.000 lur. Pevar real e kouz pep bilhed.

Digemeret e vo al lizerou da gaout bilheji ac'hann d'ar 24 a Gerzu, d'an noz. Skriva d'ar « Comité départemental de Secours aux Prisonniers militaires, 34, Place de la République, Le Mans.

Ar Rener-Merour : F. VALLÉE.

St Brieuc. — Imprimerie St-Gatillan

Ar zoudard koz.

War an talbenn, 18 a Gerzu 1917.





# KROAZ ar VRETONED



### PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloz, evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skoed evit ar hollou estren

### RENERIEN

E. AR MOAL, AR YEODET-BOCHER.  
Kas al labourion d'an aotrou Vallée, 23, rus St-Benoît,  
St-Brieg.

### EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An aotrou H. MIAND, 27, ball Charoer, a zigamer evit

## Aluzennoù da « Kroaz ar Vretoned » d'ho c'hañs da zoudarded ar Vro

Gw. Itoz... 20 real.  
« Ar C'hlanodour »... 2 skoed.  
An dimezell J. L... 8 real.  
An dimezell an Nagard... 8 real.

Trugarez d'hon mignonned evit o deroù-mat ken brokus da « Kroaz ar Vretoned » !

### Bloavezh mat !

D'he holl vignoned, leabrierien ha kenlabourerien, « Kroaz ar Vretoned » a ginnig he gwella hetou a vloavezh mat !

Ar bloavezh-mat a zo war e zibenn a vo let, siouez ! gwall-bounner da Vreiz. Hag a Vreiziz eus an dibab kouezet en dichen-emgann, evel Bleimor, ar Barz brudet, evel Marec, hon c'henskrivagner ker « Santou », a oa kelous eus e varo war hon niveren ziweza !

Ha n'eo ket hepken gant ar c'hanv d'he bugale eo rannet kalon Breiz. Eman gwallet e pep giz, seurt biskoaz, gant ar mor-ze da dud estren dieñlañnet warai da heul ar brezel, gant ar gwali-skouerion a zi-penn hon buhezegz kristen hag hon gizion reiz, gant ar spered gall a glask dre-oll mouga hon spered-bro. Batag « Kastel-Paol, — Kastel, Santel ! — » a skrive dec'h eur mignon da Ivonig Picard, spered ar brezel a ra e rouz, aag eun dristidigez eo gwelet ar merc'hed yaouank o tizezi a-vern gant distoladennoù...

Emomp breman er « gourdiziou », a oa sellet evel deiziou santel gant hon tadou, ar Gested kez. Bezomp holl unanet a galon, e pad an deiziou-ze, e tiegez « Kroaz ar Vretoned ». Goulenomp digant Doue pardon d'hon re-Varo, fin ar walen er bisaz nevez, hag e skoazel noll-c'halloudek da viret ha da zifenn da c'hamat hon Yez, hon Feiz hag hon Spered Breiz, diazezh hon Amzer-da-zont !

## Taolen ar Brezel

War dalben ar Fransizien  
hag ar Zaazon.

War dalben ar Fransizien krogadoun aman hag aont, d'eist-oll an 21, en Alzas, en Harimantwillerkopf. War-lerc'h eur ganoliadeg start e oa leut an Alamaned a-benn da zerc'hel eur pennad eus fozion-difenn al linen genta. Diload e voent achane ker-keñt gant kolloù bras d'ezo.

Ar 26, o deus argadet e koad

« Caurières », war ribl dehou ar « Meuse », hep gallout kaout gounid ebet.

War linen ar Zaazon eun nebeut kregadon a zo bet ivez. Brud a so e vije an Alamaned o'h soza eun taol bras bennak diouz an tu-ze.

### En Itali.

Harpet breman gant ar re-Uganet, an Italianed a zalc'h penn eus ar gwella d'an Alamaned ha d'an Aotrichined o klask teulla etre ar « Piava » hag ar « Brenta ». Alkereret o deus, an 24 eus ar miz, eun dachennad o doa kollet war uheloù vro let « Asisigo », ha saret dre eun o benn. Ne vo ket aes d'an eobourien he zreuzi hiziviken.

### Er Rusi.

Er Rusi eman an dispac'h o c'hoari e reuz bepred eus ar gwasa. E Petrograd ar zoudarded hag ar vartoloded, en em vezvet gant gwin-ardant o doa laeret er stalion, a zo ene m. rannet er rouz.

Bro-Ukren, manet er-maez eus an tousmac'h, a hallfe, war a greder, oc'h en em unani gant ar jeneral Kaledine, herzel ouz an dispac'herien ha trei penn d'na traou.

E-keit-se, Levine ha Trotsky o deus kaset da gêr « Brest-Litovsk », d'ober ar peoc'h, kannaded a-ziwar o dour. Displeget o deus o menad-peoc'h : « Na digoll-brezel, na goumid-douarou evit nep tu ». An Alamaned a ra an deuz da zelaou, c'hoant ganto hepken da stieja an traou ha da c'hoont amzer, d'ar Rusi d'en em zistruga gwasoc'h-gwas abezi hec'h-unan.

### E broiou ar Zav-heol

Ar Zaazon o deus astennet c'hoaz o zaciennad en Douar-Santel dre gemeret eun niver a gêriadennou en-dro da Jeruzalem.

E Salonik, ar jeneral Gaillaumat a zo bet hanvet da benn-rener an armeou, e lec'h ar jeneral Sarrail.

### War vor hag en aer

Eul lestr armet saoz, ar « Stephan Furness » a zo bet goueledet e mor Iwerzon. 101 den beuzet.

E-touez al liatri goueledet ar miz diweza e welomp eun bano ker da bep kalon vrezid : an « Itron Varia Rostren ». Eul lestr moruer eo a zo bet taget ha kaset d'ar strad, ar 27 a viz du, gant eur splujer alaman, pa oa war e zistro da Vreiz. An Alamaned o deus laeret an holl vorad kent e oueledi. Ar vartoloded war ar bourz anezan o deus gallet tizout euz Eusa gant o bagou.

An nijerien alaman o deus klasket

adarre dont da vombeza Londrez. Dizarbennet int bet, ar wech-man, gant ar ganoliadeg, heb gallout tostaat.

### Ar prosezou

Ar Gambr he deus rôet hec'h aotre ma vo barnet an aotrou Caillaux. Heman en deus kemeret da avokad an aotrou Demange, a oa bet gwechall avokad Dreyfus. N'ouzer ket c'hoaz pe dirag ar c'huzul-brezel pe dirag al lez-uhel e vo kaset ar gaoz.

### Evid ar brizonerien

Pell-ze e oa meneg eus digas en-dro d'ar gêr ar brizonerien goz. Ar wech-man war a glevet, e vo graet eun dra bennak. Ar brizonerien a 48 vloaz ha dalc'het en Alamagn abaoe ouспен triouac'h miz a vo digaset en-dro. Nemet tam-ha-tamm e vo graet ze. N'eus forz, eur bras a c'hoñvid eo evid hon prizonerien ger !

## BOKED A EURED

Kinniget gant doujaos da « Goulmig Arvor » ha d'he fried, goude hen kinnig, evel kentel vat, d'an holl brijou.

War eun ton dereat.

De-mad d'ec'h, daou zen a eured (diou wech)

Me ho salud gant joansted,  
Dardamp, dardanne;  
Salud ivez da bep-hini.  
Dardamp, dardi  
(Pep koublad evel-se).

Kement tra bev 'zo war ar bed,  
Pa vent yaouank, int g'ed bepred;  
D'e natur e chach pep-hini.

Pep planten frouez yaouank aman  
Ro deliou glas ha bleun en hanv,  
Met trouc'het 've gwirion d'zi.

An holl laboused war ar bed,  
Diau ha daou e vent unanet,  
D'ober o neiz ha da c'hoari.

Abaoe hon tad Adam ive,  
An dud yaouank 'zo evel se:  
-aiz ane a gar dimezi.

Daou zen, unanet gant Doue,  
Nou int nemet unan goude;  
Ar marv hepken ra disparti !

Met, n'eo ket a-walc'h dimezi...  
Vit beyan evrus en pep ti  
Fu vez ha pouval pep-hini !

C'hoant hoc'h eus, tud dimet ive,  
E van evrus 'hed ho pube,  
Klevet ganen-me eun ali.

Bezef fur en ho yaouankiz,  
Reit skouer-vat dre-oll en pep giz,  
Pedit Doue d'ho kannerzi.

Adalg devez hoc'h eured,

Bennoz Doue warnoc'h goulet;  
A greiz kalon deut d'E bedi !

Poniet 'n ho stad da labourat,  
Heb ober gwall-zispiga dalc'h-mat,  
Hag evrus 'vo ho stad-c'houi.

Reit aluzen d'ar paour ive,  
Bepred 'balamour da Zoue,  
Ha benniget e vo ho ti.

Ma ro Doue d'ec'h bugale,  
Gwir Gristenien savet ane,  
Dre skouer-vat ouz o c'hoñvid.

Neuze, er fin eus ho pube,  
C'houi yel da Varadeg Doue,  
Ha d'E garet ha d'E veuli.

Me a het d'an daou zen eured  
Chans, prosperite ha yec'hed  
Pae'h, evrusted da bep-hini !

JULUAN GEBEST.

## KLEGER BUS HON MIGNONED A ZO ER BREZEL

Kelou eus hon mignon Beulzee,  
hag eus an 248ved rejimant

Bloavezh mat hag hon gwella menez  
d'hon c'henvroiz eus an 248vet rejimant  
ha d'hon mignon ker, J. Boulez  
« ar Golead », en deus skrivet  
d'imp al lier karantezus-man.

Ar Merc'her, 19 a viz Kerzu

Aotrou Vallée ker,

A greiz kalon e tigas an d'ec'h ma  
gwellan hetou a vloavezh mat. Yec'hed  
ha hir vuhe da zerc'hel gant he labour  
evid ar Vro !

Trugarez d'ec'h evit Kroaz ar Vretoned  
a zigous ganin bep sizun. Deut  
mat eo bepred, breman dreist-elli e  
pad nozvezion hir ar goanv, ma vo  
amzer da leun.

Distroet eo adarre ma rejimant, an  
248vet, d'an trancheou. An dro-man,  
hon eus tapet eur « secteur » mad.  
Ne oamp ket bet ken mad all tiskoz !  
Evel ma laromp altes, aman ez eus ta  
da zerc'hel ha da vevan. Pep tra a-ze  
urziet ha reizet mad.

Evit gwir, n'hon eus ket laeret kement-  
man. Eun tammig digoll eo eus  
an tri « secteur » fall hon eus tremet  
dreze abaoe an hanvez diwezas.  
Toullou fall e-lec'h hon eus lezet,  
siouaz, kalz eus hon mignonned.

Arre eo adarre ar goanv kalet d'he  
c'havout. Ec'h ha skora 'zo war an  
douar; skourrou ha brankou ar gwe  
dero a zo gwenn-sin. Da vihanan,  
koad ne vank ket d'imp d'ober tan,  
pen-e gwir n'eus nemet koziou en-dro  
d'imp. Koulskoude ne vezomp ket  
lezet da ziskar gwe hon unan; met  
Jean-Marie Boch a zeu gwech an am-  
zer da fachen, hag a helpenn koad.

